

AL LIAMM 156

TAOLENN

Kanevedenn gant PER DIOLIER	3
Diaspora gant AN TOUSEG	4
Arzel Even gant PER DENEZ	5
Nenn Jani gant ROPARZ HEMON	44
Notennoù	55

Kanevedenn

Emañ ar plac'hig o tont eus ar skol,
c'hwitet he deus war he dever,
he sac'h seblant dezhi ponner,
liv an doan a zo gant an heol.

'Deus ket gortozet he c'heneilezed,
tec'het eo kuit leun a gerse,
o vont hec'h-un dre an hent-se
a ya e-biv da boull ar raned.

Ar c'hazh marellet war gein ar voger
a ya plaen e skinoù kreisteiz,
skeud parfet a evurusted
e peoc'h melen-aour an diskar-amzer.

Ar plac'hig voan he zavañjer c'hlas
a glenk buan he fri-lien.
He sell du paret war al loen.
e-kreiz he daeroù e splann ur minsc'hoarzh.

St-Servan 22-10-72.

DIASPORA

Tec'het o deus kuit pell diouzh ar fank hag ar glav
 Pell diouzh ar mallozhioù a bouez warnomp atav
 Hag ar c'halvarioù maen a ouel dour benniget
 War an dremmwelioù du ha bezioù ar vered

War an dremmwelioù du ha bezioù ar vered
 E plav an huñvreoù dilezet re abred
 Rak tec'het o deus kuit diouzh an traoniennoù glas
 Aet int da glask o chañs e tousmac'h ar gêr vras

Aet int da glask o chañs e tousmac'h ar gêr vras
 Er c'hrakparadozioù a vez stipet well-wazh
 Penntiez ha prajoù o deus laosket a-dreñv
 An HLMoù-hont zo tostoc'h ouzh an neñv

An HLMoù-hont zo tostoc'h ouzh an neñv
 Neb a gredo enebañ a ranko bezañ kreñv
 Tec'het o deus kuit pell gant ar c'heuz hag an naon
 O huñvreoù kaset re abred da anaon

An huñvreoù kaset re abred da anaon
 Hag an esperañsoù a glemm war ar varvskaoñ
 Talmiñ ra c'hoazh enno nerzh al Lavaroù hud
 Met avel an dezerzh war ar maezioù a yud

Ra vimp daonet troad-kil-ha-penn
 M' az tisoñjomp Jeruzalem

Ha sevel ray un deiz diouzh kalon an douar
 Ar bleunioù tan tarzhet diwar re a c'hllac'har ?
 Ha kavet vo un deiz dre nerzh al Lavar splann
 Ar rouantelezhioù kuzhet e frond al lann ?

Ra vimp daonet troad-kil-ha-penn
 M' az tisoñjomp Jeruzalem

ARZEL EVEN

Abaoe pell em dije dleet « sevel ur pennad diwar-benn Arzel Even », e-giz ma lavarar. Met, setu just : n' hellan ket sevel « ur pennad diwar-benn Arzel Even ». Etre mont ha dont, etre ober kentelioù ha reizhañ poelladennoù, e c'hellan sevel ur pennad diwar-benn kemmadurioù ar brezhoneg, pe ar « relativ » n'eus-ket-anezhañ-e-brezhoneg : met ur pennad diwar-benn Arzel Even, nann. En em adkavout gantañ dre an eñvor, setu ar pezh a c'hellan ober, ha neuze digeriñ an nor un tammig, d' ar re all da welout, ha da glevout hor c'haoz. Evitañ. Dre garantez outañ : evit ma vevo pelloc'h e kalon ar Vretoned, evit ma pado da vezañ, eñ, Arzel, Breizh-Uhelad, dre ar yezh en deus, da gentañ-holl, dibabet ha, goude-se, gouestlet e vuhez dezhi. Ya, an dra-se a c'hellan ober. Met n' eo ket war ar prim. N' eo ket gant ar soñj hegasus ez eus teir eurvezhiad hent etre Douarnenez ha Roazhon hag ez eo poent loc'hañ... Ret e oa gortoz : bremañ - spi am eus, spi am eus - e c'hellan kemer un nebeut devezhioù da soñjal, d'ober dezhañ sevel, bev-buhezek, diouzh latar va memor, ha kinnig d' ar re all, d' am mignoned disgwel hag alies dianav, skeudenn an hini a zo bet va c'hile.

* * *

Gwenno Piette, 9 bloaz, a skriv bemnoz ul lizher d' he mergodenned. Setu ar pezh a skrivas d'an 19 a viz Kerzu :

« Marwolaeth.

Arzel even Piette a wnaeth farw yn ysbyty Aberystwyth ar y 18 o Ragfyr (fy nhad) 1971.

Ar y noson honno aeth dwy olau allan ac roedd rhaid dod â'r lamp fawr i lawr. Mae wedi bod yna ers hynny. Roedd y cathod yn anesmwyth.

6

Yr oeddwn wedi bod i barti fy ffrind roedd pawb yn drist ond ni meddyliais amdano wedyn. Yna daeth fy Mam i mewn roedd ei gwyneb mor wyn ar galchen hyriodd fy i mewn i ystafell wely fy chwaer. Yna dywedodd bod pawb yn ofni bydd fy nhad yn marw dechreais grio ar unwaith yng nghol fy chwaer hynaf. Pan godais fy mhen roedd fy chwaer arall ac fy mam yn crio wedyn. Aeth fy nwy chwaer i'r ysbyty gyda fy mam ac fy ewythr a oedd yna ar y pryd nid oeddwn i eisiau mynd. Aros gyda fy modryb gwnais i. Daeth Tad John i fewn ac chwarae gem gyda ni ac teimlais yn well. Yna daeth fy mam yn ôl ac dywedodd fy ewythr : " He's gone ".

Eisteddodd fy mam ar un gadair ac fy ewythr ar gadair arall. Daeth fy chwaer hyna i eistedd ar y syti gyda Tad John a minnau ac eisteddodd fy chwaer arall ar y llawr. Criodd fy nwy chwaer a minnau yn dawel ac eisteddodd fy ewythr modryb ac Tad John yn dawel gan edrych ar ei gilydd. Nid oedd fy mam yn crio roedd y sioc yn gormod iddi. Nid oeddwn yn gallu bwyta dim. Wedyn pan roedd fy mam yn fy roi i 'r gwely yr oedd hi yn agos iawn i chrio. Pan roeddwn yn fy ngwely yr oedd fy chwaer yn eistedd wrth fy ochr yna pan cwmpais i gysgu aeth hi i ffwrdd. Ond deffrais wedyn a crais fy hunan yn sal.

ac dyna fy annwyl ffrindiau a ddigwyddodd ar y noson ofnadwy honno.

Felly ffarwel fy annwyl ffrindiau o'ch ffrind annwyl Gwenno Piette. »

TROIDIGEZH :

« Marv.

Arzel even Piette a zo marv e klañvdi Aberystwyth d' an 18 a viz Kerzu (va zad) 1971.

En nozvezh-se e varvas daou c'houlou ha ret e voe degas ar gleuzeur vras e sal an traoñ. Eno emañ-hi abaoe. Ne oa ket sioul ar c'hizhier.

7

Be' oan bet e ti ma mignonez evit he deiz-ha-bloaz trist e oa an holl met ne soñjis ket ennañ goude. Neuze e teuas va mamm en ti he dremm a oa ken gwenn hag ar c'hleiz gervel a reas ac'hanon da zont e kambr va c'hoar. Neuze e lavaras o doa an holl aon e teufe va zad da vervel. Kregiñ a ris diouzhtu da leñvañ e barlenn va c'hoar henañ. Pa savis va fenn e oa va c'hoar all ha va mamm o leñvañ. Mont a reas va div c'hoar d' ar c'hlañvdi gant va mamm ha gant va eontr a oa aze d' an ampoent ne fellas ket din mont. Chom gant va moereb a ris. Dont a reas Tad John hag eñ c'hoari ganeomp ha gwelloc'h en em santis. Neuze e teuas mamm en-dro hag e lavaras va eontr : " Tremenet eo ".

Azezañ a reas va mamm war ur gador ha va eontr war ur gador all. Dont a reas va c'hoar henañ da azezañ war ar gourvezvank e-kichen Tad John ha me, hag azezañ a reas va c'hoar all war al leur. Leñvañ a rae va div c'hoar ha me ivez hep ober trouz ha dilavar e chome va eontr, va moereb ha Tad John en o c'hoazez o sellout an eil ouzh egile. Va mamm ne leñve ket re vras e oa an taol dezhi. Ne c'hellis debriñ netra. Goude pa oa va mamm ouzh va lakaat em gwele e oa hi o leñvañ hep kuzhat tamm ebet. Pa oan em gwele e oa va c'hoar koazezet em c'hichen neuze pa gouezhis kousket ez eas-hi kuit. Dihuniñ a ris goude ha leñvañ betek klañviñ.

ha setu va mignonezed karet petra a c'hoarvezas en nozvezh spontus-se.

'Vel-se kenavo va mignonezed karet eus perzh ho mignonez feal Gwenno Piette. »

* * *

D' ar 7 a viz Genver, e-barzh kazetenn Aberystwyth, Cambrian News, e oa ur pennad hir : **Death of College Lecturer**. Dindan an titl-se, e anv, anv hor c'heneil, en e stumm ofisiel : Mr. J.R.F. Piette. Ken yen-se ha ken groñs-se. Du war wenn, sklaer, naet, e skritur-moul an diarvar, an diarvar n' eus ket tu d' ober kempenn ebet dezhañ, n' eus ket tu da zont en-dro warnañ. Hag e oa kement mañ da vezañ lennet :

« D' ar Sadorn 18 a viz Kerzu, en ospital Bronglais, en Aberystwyth, ez eo marv en un taol trumm ha dic'hortoz an Ao. J.R.F. Piette.

« Hanter-kant vloaz e oa, ha lenner war ar brezhoneg hag ar c'herneveg e Skol-veur Aberystwyth.

.

« Dimezet e oa bet e 1950, hag e 1952 e teue gant e familh da chom en Aberystwyth, dre ma oa eno al Levraoueg Vroadel, hag ivez dre ma c'helle kaout ur garg evel levraoueger ha troour e Kreizenn Gembreat ar Gounit Plant. Gantañ testenioù-arnodenn diwar-benn ar skiantoù hag ijin evit deskiñ ar yezhoù, ne voe ket pell oc'h en em varrekaat a-walc'h d' ober troidigezhioù skiantel diwar an darn vrasañ eus ar yezhoù europat, en o zouez ar rusianeg, kement ken ez embannas zoken un **Handbook for Librarians**.

8

« Adalek 1952 eo bet an Ao. Piette rener ur gelaouenn drimiziek e brezhoneg, **Hor Yezh**, eviti en deus skrivet pennadoù talvoudus-bras, ha kalz labourioù all a zo bet embannet gantañ dindan an anv Arzel Even, dreist-holl goude ma voe bet anvet e Kevrenn Gembraek Skol-veur Aberystwyth e 1959.

« Bez e oa an Ao. Piette un den gouiziek, ha reiñ a reomp d' ar ger-se e ster leun hervez an hengoun, un den gouiziek war galz traoù koulz ha war ur bern

yezhoù, un den dedennet gant ur rummad dibaot a-walc'h a imbourc'hioù Skol-veur ha spered, eus ar brederouriezh betek an dreistvedoniezh, eus ar science fiction d' un doueedoniezh espar ha d' ar sumboliezh relijiel. Gant e rummadoù kentelioù, e-maez-labour-Skol-veur, war an danvezioù-se, en deus diskouezet pegen ledan ha pegen dibar e oa e ouiziegezh, ivez pegen don e ijin. Unan pouezus e oa e-touez izili Kevredigezh Filmoù Aberystwyth, ur c'heginour ampart a oa anezhañ ivez, hag ul louzawour o karout kalz ar plant ; kustum e veze da lavarout ne oa anezhañ nemet ul liorzhour dister dre m' en deveze re a zoujañs evit al louzeier fall. En e vleud e veze pa veze gant bugale vihan, gouzout a ouie o diduiñ gant e varregezh en arz ar plegañ-paper hag ar sevel-modeloù ; skrivet en doa, evit ur c'hoariva mergodenned, pezhioù-c'hoari da vezañ diskouezet en ur vodadeg vugale.

« Leun a elevez e veze p' en em gave gant ar re all, ne denne ket ar selloù warnañ, ha dichastre e veze ivez evit pezh a sell ouzh mont war-raok er vuhez ; met leun a anaoudegezh-vat e oa e-keñver Kembre hag e-keñver he Skol-veur evit bezañ sikouret anezhañ da zegas e lodenn d' ar ouiziegezh vrezhonek en aergelc'h karadek ha skoazellus ur gêr e-lec'h ma c'helle sevel ha deskiñ e vugale en ur yezh keltiek.

« Niver bras an dud en e obidoù en deus diskouezet sklaer pegement a vignoniezh hag a zoujañs o doa evitañ e genlabourerien er Skol-veur hag ar geneiled a oa bet gounezet gantañ ha gant e familh en Aberystwyth.

9

« Lidet eo bet an oferenn interamant gant an Tadoù John ha Gregory Fitzgerald en iliz Katolik Roman Santez-Winifred, d' ar merc'her 22 a viz Kerzu. Pennadoù eus ar Bibl a zo bet lennet e brezhoneg gant an Ao. R. Helloko hag e kembraeg gant ar c'helenner Geraint Gruffydd. An Dr Bryn Roberts a oa ouzh an ograou. Graet eo bet an douaradur e bered Aberystwyth. »

* * *

Mair, e wreg, he deus skrivet din kement-mañ :

« Ne oa abeg mat ebet da grediñ e oa tost da vervel. Ha bremañ, pa sellan en-dro ouzh pep tra, e komprenan e ouie. (...)

« Penn-kentañ kement-se eo e tegouezhas e miz Here, gant kelennerien ar Skol-veur, ur c'helc'hlizher o kinnig dezho un asurañs nevez evit ar barradoù kleñved a badfe muioc'h eget bloaz. (...) Ma, fellout a reas da Arzel kaout an asurañs-se, ha dav oa dezhañ mont da welout medisin ar gevredigezh-asurañs. Lavarout a reas ar medisin e oa un tammig re uhel gwask ar gwad gantañ hag e tlefe bezañ louzaouet. Hor medisin-ni a gasas anezhañ neuze e miz Du da welout un arbennegour. Ne gavas ket hennezh e oa chalus e stad met erbediñ a reas da Arzel mont d' an ospital e-pad ur sizhun evit bezañ imbourc'het. Komz a rejomp hon-daou diwar-benn kement-se, ha divizet e voe ez aje da fin an trimiziad-skol - d' an 10 a viz Kerzu, evit bezañ distro d' ar gêr a-benn Nedeleg. Ne oa den ebet chalet, ne oa louzaouadur ebet da vezañ roet dezhañ.

« D' al Lun 13 e seblante Arzel bezañ evel kustum ha diwezhat e labouras en e vurev war rentañ-kont ul levr, betek goude hanternoz. D' ar Meurzh e lavaras n' en em sante ket mat - erbediñ a ris dezhañ mont d' e wele ha diouzh an endervezh pa zistrois d' ar gêr diouzh ma labour da 5 eur, e oa ankeniet hag enkrezet, pennfollet a-grenn - gervel a ris ar medisin, na ouie ket re vat petra 'oa, ne oa arouez sklaer ebet. Koulskoude, an deiz war-lerc'h e voe kaset d' ar c'hlañvdi, hag e chomis gantañ a-hed an deiz, ar merc'her e oa.

10

« Er mintin-se e roas din ur rollad-anvioù tud am boa da skrivañ dezho - c'hwi a oa war ar roll - evit displegañ ne oa ket bet mat e yec'hed ha ne oa ket bet gouest d' ober e labour evit Hor Yezh, evel ma oa kustum d' ober. Ne oan ket ankeniet c'hoazh. Goude holl, muioc'h a labour en doa bet en trimiziad-se ha kalz a veze d' ober dre ma tostae mare Nedeleg.

« Sur on bremañ avat e ouie e oa e varv o tont. Lavarout a reas din traoù na vezont ket lavaret ez-ordinal. (...) »

« Pa voe en ospital, e seblantas bezañ siouloc'h, mestroc'h warnañ e-unan, ha lavarout a reas na felle ket dezhañ gwelout kalz tud... »

« D' ar Yaou ez eas Lila da welout anezhañ da greisteiz hanter, izel oa e galon neuze, lavarout a rae : « Kollet on, echu eo din ». Brec'hed a welas anezhañ da ziv eur hanter, ha neuze e oa siouloc'h, habaskoc'h, o komz en un doare parfet diwar-benn stad e yec'hed - met kemmeskañ a rae neuze ar yezhoù a ouie, me fell din lavarout na implije ket ar saozneg hag ar c'hembraeg evel ma oa ret, o komz ouzh tud ar c'hlañvdi. Ar medisin yaouank, un den a liv anezhañ, a gomzas outañ e galleg. »

« Da 5 eur, pa zistrois eus va labour - war an hentoù e oan bet a-hed an devezh - e oad bet kroget da louzaouiñ anezhañ - louzeier enep-kaoulediñ -, da louzaouiñ anezhañ evit stankadur ar gwazhied-kas. D' ar mare-se e seblante bezañ didrubuilh, leun a fiziañs, lavarout a rae e vije er gêr a-benn Nedeleg. Me ivez a oa leun a fiziañs, soñjal a raen e oa e nervennoù a oa bet ar penn kaoz eus an arouezioù pennfollet d' ar Meurzh. »

« D' ar Gwener ez is d' e welout, ha goulenn ha karout a rafe gwelout Gwenno. An devezh-skol diwezhañ e oa, mont a ris d' he c'herc'hat diouzh ar skol. Dont a reas, gant tout he zammigoù labourioù, ar c'hartennoù Nedeleg he doa graet, hag ur gartenn skrivet warni « Deuit yac'h en-dro, tadig ! » - ur gartenn o tiskouez ar vro dindan an erc'h. Lila ivez a zeuas ha ni holl a c'hoarzhaz diwar-benn karned-notennoù Lila - ur c'harned mat gant un nebeut menegadennoù fentus. Brec'hed ha me a chomas gantañ betek an eur aotreet d' ar weladennerien, betek 7 eur hanter. Seblantout a rae bezañ yac'h hag evurus. Ar gomunion en doa bet en devezh-se - deut e oa beleg ar barrez da zegas ar gomunion da unan bennak all ha goulennet hag-eñ e karfe kaout ivez. « Ya, en doa respontet. Ur bern pedennoù am bo ezhomm a-barzh dont alimañ. » »

11

« D' ar Sadorn e sonas ar pellgomz da c'hwec'h eur vintin. Ne oa ket bet gouest ar wardourien-noz d' e zihuniñ diouzh ar beure. Dek munud goude e oan war al lec'h, a-raok ar medisin. Bez e c'helle digeriñ e zaoulagad neuze met e-giz respont d' am goulennoù ne c'hellas ober nemet « Nann ». Dont a reas ar medisin ha lavarout din chom hep e drubuilhañ. Pellgomz a ris da Alun ha d' an Tad Fitzgerald - ar beleg kembraeger a zo mignon bras deomp. »

« Da nav eur hanter en doe ar sakramantoù diwezhañ. Digeriñ e reas e zaoulagad neuze hag e seblantas kompren petra oa o c'hoarvezout. »

« Da greisteiz ez erruas Alun o tont eus Penybont. Lavarout a reas din neuze ne oa spi ebet. Sklaer e oa en doa bet un taol-gwad, un diwadadenn en e empenn, hag unan grevus. »

« Buan e sankas donoc'h-donañ en dizanaoudegezh, o tisonkañ gwad war-dro ar fin a erruas da eizh eur hanter diouzh an noz. » »

Evel-hen eo tremenet Jean Piette, en e hanter-kant vloaz, den mat hag a galon. Dindan geot ar vered gembreat, nepell diouzh Levraoueg Vroadel Kembre, a gare kement, emañ bremañ e gorf : eno on bet, da Bask, gant e wreg, Mair. Ur groaz keltiek a vo savet, da zegas soñj d' an dud ez eus aze ur Breizhad o repoz. »

Marv eo, Jean R. F. Piette, e barr e oad. Evidomp avat, tud e gosgor, tud Keltia Nevez, e chom, hag e chomo atav, Arzel Even. »

* * *

Anavezet em eus Arzel Even d' ur mare ma oa war un dro aes ha diaes bezañ Breizhad. Aes : peogwir e oa bet taolet en traoñ gant ar C'hallaoued an holl vogerioù paper savet gant ar Vretoned o-unan da rannañ o emsav e kemend-all a skourroù, is-skourroù hag ad-skourroù disheñvel, o paotañ dre an emzistrann. Doare ar C'hallaoued a oa eeun, ha yac'h goude-holl : plantañ an holl er memes sac'h, pe kentoc'h er memes toull ; ne oa mui kudenn ebet a rannvroelourien pe vroadelourien, gant an holl arlivioù a c'hell bezañ etre daoubenn ar ganevedenn vreizhat ; ne oa ket mui zoken, zoken ! kudenn ebet a zoare-skrivañ, hag ar zedacherien villiget en em adkavas gant an nann-zedacherien-vichigar ; ne oa ket mui kudenn ebet da vezañ a-du gant ar Placet d' ar Marichal-nous-voilà, pe a-enep ; unvanet e oa bet an emsav, da vat. Aesoc'h e oa ar vuhez er c'heñver-se, hag Alan al Louarn, a rafe kentelioù brezhonek hag enskrivadurioù a-du-gant-Breizh war al loar ma vefe kaset di, a gelenne brezhoneg e Kamp Margueritte, chomva hañv ar vroadelourien na oa ket bet tu da gavout bod dezho en toull-bac'h ; eno e lakae an dud da dremen, pegen arouezius, arnodenn « An Trec'h ». Er c'heñver-se, eta, e oa aesoc'h an traoù : « An holl Vretoned breudeur », evel ma lavare ar skritelloù e n' ouzon peseurt kendalc'h Breiz Atao. Eus an tu all, avat, e oa diaesoc'h : seniñ gant ar biniou a oa un torfed a-enep ar Republik ; nemet, marteze, e vije bet sonet gant ar biniou « mat », toniet e giz kozh Breizh, ha n' eo ket gant ar biniou « fall », toniet e giz bro Skos. Ha soñj am eus penaos en em adkavas daou vignon din, P. K. ha R. S., e ti komiser-polis Roazhon, dre un devezh-hañv kaer, peogwir e oant bet klevet o komz brezhoneg e korn ur ru : kaset e oant bet di, ma Doue, dindan gward soudarded amerikan, tud vat e oa an Amerikaned neuze, prest da dennañ war an amprevaned. D' ar mare-se e teuis da anavezout Jean Piette, a oa bet adc'hanet dija en emsav dindan an anv Arzel Even.

Penaos en em gavjomp ? N' em eus ket mui soñj. Eñ an hini eo a zeuas d' am zi. Me ne vezen ket kalz er-maez. Klañv e oan abaoe bloavezhioù, gwelet em boa va mamm, hag unan eus va c'hoarezed, o vervel, ha tost e oan bet, me ivez, da vont d' an tu all. Pa yaen er-maez, ne veze ken da welout ar medisin am louzaoue, e kreiz kêr Roazhon. Ur pennadig mat a hent a oa, rak deut oamp da chom, en abeg d' ar c'hleñved, en un ti bihan gant ul liorz : kemer a raen an tram e penn hent Foujera, ne vezen ket mat a-walc'h peurliesañ evit mont war droad. Ha me o soñjal e oan o vont da vervel, em boa bet c'hoant d' ober an dra nemeti a c'hellen ober, er stad ma oan, evit va bro : skrivañ e brezhoneg. Kroget em boa d' ober troidigezhioù. Arzel Even a oa bet fiziet ennañ un droidigezh bennak d' he divankañ, da gentañ, rak ret-mat e veze divankañ, ha, d' an eil, d' he skriverezañ. Evel-se e klevas Arzel anv diouzhin hag un deiz, goude an « darvoudoù », e teuas d' am gwelout. E 1944 e oa, a gredan. Ur paotr all a zeue d' am zi ivez : Roperzh Steven. N' ouzon ket mui penaos e oa deut betek du-mañ ar wech kentañ ; eo, kaset e oa bet gant an Itron Mée, a oa o chom e-kichen, er memes karter. D' ar Sul, goude ma oan krog da wellaat, e vezemp kustum da vont da vale war ar maez. A-wechoù ez aemp betek Sant-Laorañs, da welout an Aotrou Vallée kozh en e glañvdi. A-wechoù all e kasemp ganeomp da bourmen bugale Jord ar Mée, peogwir e oa Jord en toull d' an ampoent.

Bez e oa Arzel Even unan deut d' an emsav a-raok ar brezel, hag an aviel vreizhat en doa desket e pajennoù dispont Breiz Atao gozh. Merk ar mare-se a chomas warnañ atav, evel ma chomas war an holl re o deus hen bevet : sklaer hag eeun an traoù, ar gwenn a oa gwenn, an du a oa du, hag ar gwenn-ha-du oa ar banniel. Adkavet em eus unan eus e gaieroù-skol, implijet e 1938 war a seblant, hag ennañ e rae Arzel Even ar pezh a veze kustum an holl skolidi d' ober d' ur mare ma veze difennet outo livañ war ar mogerioù : skrivañ o sloganoù e traoñ pe e kostez ar pajennoù - goude ma oa bet implijet ar pajennoù-se evel ma oa dleet ober, rak pishoc'h eget bremañ e veze sellet neuze ouzh ar paper. Traoù « potach » a-walc'h a zo war gaier Arzel Even, traoù e-giz « à poil Teuf », Teuf o vezañ anv ur c'helenner bennak, brudet-fall emichañs. Traoù all avat a ziskouez ur spered digor war ar politikerezh broadel : « Vive Habib Bourguiba ! Vive la Tunisie Libre ! Vive le Destour ! Vive le P.N.B. ! P.N.B. vaincra ! Vive Debauvais ! (En toull-bac'h e oa Debauvais neuze pe o kuzhat.) Vive la Bretagne Libre ! » Hag e brezhoneg : « Evit ar peoc'h hag ar frankiz, savit ! Bevet Breiz

dishual ! Dec'h, Breiz dishual; hiziv, Breiz gwasket ; warc'hoaz, Breiz dieubet ! » Ha war ar bajenn gentañ an diskleriadur-mañ : « Me a labouro evit Breiz. Bevet Keltia. Evit Breiz digabestr, evit peoc'h ha frankiz, Breiz Atao ! » C'hoarzhin a ran un tammig pa welan Dewi Jones o komz eus ar « P.N.B. - Breiz Atao fascist ideas » (Planet, niv. 7). Arzel ne c'hoarzhas ket : kas a reas ul lizher da rener Planet evit lakaat an traoù war o zu reizh. Evitañ, evit an holl re yaouank Breizhgar er mare-se, e oa bet Breiz Atao ur galv d' ar frankiz. Ha netra all.

A-benn neuze - 1938 - e oa deut Arzel Even da c'houzout brezhoneg un disterig. Paotr speredek ha barrek e oa : e tri miz e teskas ar yezh da vat, goude echuiñ e arnodennoù bachelouriezh : da nebeutañ e teskas a-walc'h evit lenn kement tra a veze embannet e brezhoneg, hag evit sevel skridoù e brezhoneg. Tu en doa da gomz ar yezh p' en em gavas e burevioù ar Framm Keltiek hag e Kelc'h Brezhonegerien Roazhon.

14

* * *

A-nebeudoù, daoust d' ar pezh am boa divizet, e savan ar pennad-mañ. Aet on en-dro, abaoe m' am eus kroget da skrivañ diwar-benn va mignon, da Gembre, ha gwelet en-dro al lec'hioù m' en deus bevet, an ti e-lec'h m' eo bet o chom e-pad daouzek vloaz, gant ar plant iskis a blije dezhañ sevel, en o fodoù bihan war varlenn ar mell prenestr a zigor war al liorz. Unan anezho a oa marv : gwallizil e oa chomet atav, ha souezhet e oan bet e vije deut Arzel a-benn da lakaat unan da greskiñ en ur pod ; unan eus ar plant-se a zebr kelion e oa, gwelet em eus diouto en douaroù trenk ha gleborek e bro-Norge, n' ouzon ket o anv, gouezet em eus gwechall, gwechall, pa oan er skol eil-derez ; n' on ket evel Arzel, a oa gouest da reiñ anv pep plantenn e kembraeg, saozneg, brezhoneg ha galleg da nebeutañ, hag ivez e latin evit bezañ sur na vefe fazi ebet. Lezet em eus eta, oan o lavarout, va skrid e skourr e-pad ur pennad-amzer, ha bremañ e teuan en-dro da gomz eus ar mare ma 'z omp en em gavet e Roazhon.

Ur mare diaes e oa evit Arzel. Graet en doa studioù mat, e Lise Roazhon (1931-1938), ha gounezet ar vachelouriezh (lodenn gentañ er glaselezh, 1937, meneg Mat : eil lodenn er brederouriezh, 1938, meneg Mat a-walc'h), ha goude-se, en un doare souezhus a-walc'h, peogwir en doa tapet kaout ur vachelouriezh lennegel, e oa aet war e studi e Skol-veur ar Skiantoù : ar pezh a ziskouez, a-hend-all, pegen liesseurt e oa e zonezon. Eno, e Skol-veur ar Skiantoù, en doa gounezet, etre 1938 ha 1942, un aotreegezh gant testenioù Louzawouriezh (1940), Loenoniezh (1940), Strilhouriezh (1941) ha Douarouriezh (1942). Skol-veur al Lizheroù a veze gwelet enni bep an amzer, met ne oa ken evit kentelioù kembraek Per ar Rouz, hag evel nouspet remziad a studierien a oa aet da heul tourc'h Trwyth en e hemolc'hadenn. D' ar poent-se, anat eo, echu e studioù, an dra aes ha natur evitañ a vije bet mont da gelenner : kement hini gounezet gantañ un aotreegezh a veze sur neuze da gaout ur garg ; dreist-holl er mare-se a vrezel, pa veze kement a dud prizonidi. An hent kompez e vije bet, gant ur paeamant dereat, ur c'hresk ingal en e c'hopr a-hed ar bloavezhioù hag ul leve goude un tregont vloaz bennak o kelenn. Ar wenodenn divein ha didrez, petra. Nemet, taget e oa Arzel Even gant preñv ar brezhoneg : n' ouzon ket perak e lavaran preñv ar brezhoneg, aerouant ar brezhoneg a vije gwelloc'h lavarout, aerouant plaouius ha lontek ar brezhoneg. Dont a reas da vezañ sekretour er Framm Keltiek. Ur sekretour all a oa o labourat gantañ : Erwan Trañvouezh. E garg, da Arzel, a oa, dreist-holl, ober war-dro ar skridoù kaset da voulañ. Dister e oa ar paeamant. Met evit Breizh e labourer, ar pezh a zo c'hoazh ar paeamant gwellañ. E 1943 ha 1944 e labouras eno. Bezomp resis : d' an deiz kentañ a viz Here 1943 e stage da labourat evit ar Framm ha kerkent hag an hañv da heul ne oa mui Framm Keltiek ebet. E derou 1943 - dreist-holl e miz C'hwevrer hag e miz Meurzh - e oa bet klañv, klañv e skevent, hag e miz Mezheven 1944 e varve e vamm.

15

Marteze e c'hellan lavarout amañ, en ur dremen, eo bet heñvel a-walc'h hor planedennoù, da Arzel ha din-me : krediñ a ran he deus talvezet an dra-se da

stagañ ac'hanomp muioc'h an eil ouzh egile. Arzel Even, planedenour touet, a lavare ne oa ket souezh, pa oamp bet ganet en hevelep devezh. Gwir eo avat e oan deut-me er bed e Roazhon, hag eñ e Rijsel : eus du-se oa e dad, e vamm a oa Breizhadez, ha d' an oad a seizh vloaz e oa deut da chom e Roazhon.

Dilabour en em gavas eta Arzel Even e dibenn 1944, ha ne oa ket kaoz evitañ da vont da c'houlenn karg en deskadurezh. E-touez e vignoned e oa Fañch Kervella, Kervella-Koñvers a veze graet dioutañ evit e zisheñvelaat diouzh Kervella-Kongar, ar skrivagner. Morse n' eo bet berr Fañch Kervella evit sevel tiez-kenwerzh, tiez-bruderezh, tiez-embann, ha derc'hel a ra d' hen ober. D' ar mare-se en doa savet ur gevredigezh anvet S.A.B., da lavarout eo *Sélection Artisanale Bretonne*. Burevioù S.A.B. a oa en ur gambr deñval, marteze e oa div gambr, n' ouzon ket mui, en unan eus tiez kozh ar Ru Nasional : tost e-kichen e oa stal-labour ar mezeg a rae war va zro, hag ur wech bennak on bet o welout Arzel eno. Bez e oa o werzhañ a bep seurt bitrakoù evel asiedoù koad gant tresadennoù keltiek warno, hag ivez gant pennoù Bretoned ha Bretonezed, botoù-koad bihan livet ken breizhat all, dantelezh, ha me oar. Unan eus ar re a live an asiedoù hag ar boteier-koad a oa Gwilherm Bertou Kerverzhioù, ar barzh, diyalc'h ha diyec'hed, ha bezañ gwreg ha bugale da vagañ. Ur galon vat a zen e oa Kervella, ha labour a roe, pa c'helle, d' ar vignoned. Eus ar 16 a viz Genver 1945 betek ar 15 a viz Meurzh 1946 e labouras Arzel er sal deñval-se, panellet-teñval, poultrennet ha karget gant kinkailherezh a bep seurt, koad, ler ha danvez. Goude-se e klaskas en aner ur plas all, e ti Basset ar mouler, e ti Oberthür, er Gaz, e Skol al Labour-Douar, evit en em adkavout a-benn ar fin e servijoù an Asurañsoù Sosial, evel ma veze lavaret neuze, straed ar Chañ-Jaket : eno e chomas betek ar bloavezh 1948 ha neuze ez eas d'ober skol, aliet em boa anezhañ start da c'houlenn ur garg, ha kregiñ a reas da lojañ-dilojañ evel ma vez kustum d' ober an darn vrasañ eus ar re a ya en deskadurezh dre an nor vihan : Lise Cholet e 1948-1949, Lise Château-Gontier e 1949-1950, Lise Lannuon - Breizh erfin, ha Breizh vrezhoneger - e 1950. Ac'hane e tilojas c'hoazh e 1952. Evit mont da chom e Kembre, avat.

16

N' oufen ket mui lavarout hag-eñ e teuas Arzel Even d' am gwelout a-raok pe goude bezañ kroget da labourat e ti Kervella. Youenn Olier, marteze, en defe an diskleriadur-se en e zeizlevrioù. Al lizher kentañ am eus digant Arzel a zo warnañ an deziad-mañ : 10 a viz Here 1945. Met kement-se ne ziskouez ket e vefemp bet o paouez en em gavout : hon-daou e oamp o chom e Roazhon, en em welout a raemp d' ar Sul, ne veze ket ezhomm skrivañ. Abeg al lizher a oa just na oamp ket evit en em welout 'benn ar Sul da heul, hag en doa prometet Arzel degas din louzeier a klañv e oan, emichañs, diaes e oa evit abeg pe abeg kaout louzeier, hag eñ a anaveze ur studier war ar vedisinerezh en dije gallet pourchas peadra da bareañ va faz. Setu amañ ar pezh a skrive din, goude un nebeut linennoù o tisplegañ kudenn al louzeier :

« Emichañs ne din ket d' ho kwelout disul, rak mont a rin moarvat da Bempont. Ma vije cheñchet an traoù ez afen d' ho ti abred a-walc'h, e-tro div eur marteze. A-hend-all e rofen deziadur Coligny d' ho tad pe d' ho c'hoar en deizioù-mañ.

Bizskrivet em eus an hanter eus " Istor Gunnel ", echu e vo warc'hoazh.

17

H. en deus c'hoant - pe gentoc'h ezhomm - kaout ur re manegoù ler. Ne c'hellfec'h ket kavout an dra-se ?

Va digarezit ma verraan va lizher ; 9 eur noz eo, poent mont d' ar gêr...

Manpreme via,

Arzel.

G. S. Cat a zo distro er bidouf. »

El lizher da heul e lavar Arzel « te » din. Soñj am eus avat omp aet e-pad pellik amzer dre « c'hwi » an eil d' egile. Bremañ e welan mat an traoù : gant Roperzh Steven e oa bet kaset Arzel betek va zi, Steven e-unan em boa kejet gantañ e ti an It. Mée, eñ a gomze brezhoneg brav-tre, ur bam evidomp-ni, an nevez-vrezhonegerien a oa ac'hanomp, hag alies e teue d' am gwelout. Ya, en diskar-amzer 1944 hon eus graet anaoudegezh an eil gant egile, Arzel ha me, ha betek ar marv omp chomet mignoned - betek e varv.

Un nebeut traoù am eus da lavarout diwar-benn al lizher-se. Goulenn a ra Arzel diganin kavout ur rumm manegoù ler evit e vignon H. D' ar mare-se e oan implijet en ul labouradeg-kivijañ e Montreuil, nepell eus Roazhon. Ne oa ket aes ar vuhez, klask a raen degas un nebeut gwenneien d' ar gêr. Va c'hoar, hi, a rae ar vicher tokerez. Ar bloaz a-raok, war ali Roperzh Steven, em boa klasket kaout sertifikad kentañ an aotreegezh saoznek ; ne oan ket aet morse d' ar Skol-veur peogwir e oan klañv ; degemeret e oan bet. Hir e oa ar studioù avat, ha ker ar vuhez. An tamm labour-se em boa kavet er givijadeg. Daou pe dri miz hepken e chomis : n' em boe ket kalz a c'hounid diwar va amzer eno, un dra avat a c'hounezis, un dra dreist-priz, ober anaoudegezh gant buhez ar vicherourien. Peogwir e vezen a-hed ar sizhun e Montreuil e ranke Arzel kas kemenn din dre lizher diwar-benn e veajig d' ar Sul : ne zeufe ket d' am zi evel ma veze boas d' hen ober.

Da Bempont e oa Arzel o vont. Ne oa ket da bourmen. D' ar mare-se e oa dalc'het kalz Arzel gant preder ur relijion keltiek. Dre levezon Bertou-Kerverzhiou e oa deut da vezañ dedennet gant ar menoz-se : Bertou (Iaktimagus), Morvan Marchal (Neven Lewarc'h) hag Arzel (Natrovissus) a voe an dud pennañ en emsav-se goude ar brezel. Deziadur Coligny, nevesaet, a veze implijet ganto, deziadet e veze pep tra diouzh maread Mag Tured (penaos e oa deut Bertou a-benn da reiñ un deziad da emgann Mag Tured, n' on ket evit lavarout), hag hengeltieg, adsavet, anat eo, a veze implijet ganto el liderezh. Ar bloavezh 1947 dreist-holl a voe pouezus e buhez relijiel Arzel Even : lidoù keltiek a voe graet e Brekilien e miz Mae, e Koadeg Roazhon e miz Gouhere, e Chartrez hag e Langon e miz Eost, hag e miz Gwengolo e voe lidet, Arzel o vezañ « gudaer », eured Bodiokassa. G. B. Kerverzhiou a oa anezhañ ur spered merzheriet, ha dibaouez e tremene eus ar gatoligiezh an devotañ d' ur geltelezh ken devot-all. Marchal, eñ, a chomo betek ar fin enep-katolik touet : en em staget en doa ouzh ar frañmasonerezh, ken e savo zoken ul logell vreizhat, a zo anezhi atav a-hend-all. Evit Arzel, a-hed ar wech eo bet dedennet gant an traoù kevrinus.

18

E istor, e-keñver kredenn, a zo bet, e keñverioù 'zo, disheñvel diouzh va hini. Ar pezh a zo bet heñvel evidomp avat eo hon eus kemmet. Me a oa bet savet en un doare kristen-tre, gant ur vamm hag a veve he feiz en un doare gredus : d' ur c'holaj katolik e oan bet kaset da zeskiñ, daoust ma oa paour va zud ha ma rankent paeañ evit va c'helennadurezh ; evito, avat, an dlead, eeun-hag-eeun, e oa. Va zad, da heul va mamm, a yae d' an iliz. Me ivez : oferenn, gousperoù, ha Gwener kentañ ar miz. Evit Arzel ne oa ket bet memes tra : devot e oa e vamm, met digredenn, laik, e oa e dad ha d' al Lise e oa bet kaset-eñ da skoliañ. Tammig-ha-tammig goude bezañ en em gavet gant Bertou e burevioù Framm Keltiek Breizh - labourat a rae Bertou evit Gwalarn hag Arvor - e oa deut, hag eñ dedennet a-viskoazh gant kement furcherezh iskis a oa, da gemer perzh en emsav ar relijion keltiek. Kalz labour a reas, koulz war an dachenn yezhoniel (ret e oa adsevel ur c'heltieg kozh bennak evit al lidoù) ha war an dachenn gredennel (en Ogam, savet ganto, e skrive neuze). E darempred e oa gant emsavioù kevrinadel all e Bro-C'hall - gant Marius Lepage, da skouer, a chomas e vignon betek an diwezh. Ur pevar bloavezh bennak goude en em zistage Arzel diouzh e relijion geltiek. Me en em zistage diouzh ar relijion all. Evitañ evel evidon e oa bet hastet an emdroadur gant ur beleg. Er-maez eus pep preder kredennel e chomis-me diwar neuze. Arzel, tammig-ha-tammig, a zeuas da vezañ katolik : marteze e ranker lavarout, o soñjal en e yaouankiz-flamm gant e vamm : a zeuas da vezañ katolik en-dro. Dreist-holl goude ma voe aet da Gembre. War fin e vuhez e oa krog da vont da gomuniañ. Hag entanet, daoust d' e ziavaez sioul, evel ma

oa, on sur e oa e feiz unan don ha birvidik, ha n' eo ket un dra diwar-c'horre. Met un dra bennak, un dra bennak a chome en e galon eus keltelezh an amzer dremenet. En e vurev, e santual, e Skol-veur Aberystwyth, a-dal d' e daol-labour, e oa tachmeudet kement-mañ ouzh ar voger : ur gartenn Vreizh, ur banniel breizhat, ur gartenn-bost o tiskouez enskrivadurioù « Breiz Atao » hag un dresadenn eus an doue e vorzhol koad : *Sukellos, doue da*. Karantezioù e spered hag e galon yaouank. E garantezioù divrall.

19

Koulz eo komz amañ eus an doug a oa en Arzel d' an usvedoniezh, pe trevedoniezh, pe forzh peseurt anv all a garer reiñ d' ar skiant-se, skiant, skiant, piv 'oar, a ya dreist da anaoudegezh ar matari. Chalet e veze, evel ma 'z on bet me ivez, gant ar pezh a c'hoarvez goude ar marv - ma c'hoarvez un dra bennak. En un notenn diwar-benn e demz-spered e-unan e skrive : « intérêt extrême pour tout ce qui touche à la mort ». G. B. K. (Bertou-Kerverzhiou) , anezhañ ur mailh war ar blanedennouriezh, hag an holl istorioù a seurt gant hini Katie King, ektoplasm Crookes, pe hini kezeg Maeterlinck, pe me oar-me, en doa e atizet a-hed an hentoù arvarus-se. Setu ma voe kemeret ar pleg ganeomp da gaout abadennoù taoldroerezh em zi, d' ar Sul. Aze e veze G. B. K., Arzel ha me. Roperzh Steven a nac'he kemer perzh. A-wechoù e teue e c'hoar, Mona Steven, hag a-wechoù ivez Klaodina Mazeas. Tud all c'hoazh. Sirius-marv e veze G. B. K. : soñj am eus anezhañ o troc'hañ, gant ur gontell, goude an abaden, al liammoù a c'helle hor stagañ ouzh an daol, ha drezi ouzh ar bed all. Notennoù a gemere, ez aketus. Soñjal a ra din e veze sirius Arzel ivez diwar-benn an abadennoù-se. Met ken troet e veze d' ober goap, sioulik, warnañ e-unan ! Ur wech e rejomp un taol-arnod gant ur « benvegad Calligaris ». Ar benvegad-se a oa ur rummad mailhoù bihan e metaloù souezhus a zlee reiñ an tu da rakwelout ar pezh a oa o vont da c'hoarvezout ur pennadig goude : ne yae ket o vertuz en tu-hont d' un nebeut munutennoù. Digant Rafig Tullou, ur c'hevriour all, e oa bet amprestet ar voestad mailhoù. Ur c'hwitadenn e voe an taol-arnod. War gont ar yenijenn e voe lakaet. Setu, atav, an abeg a roas G. B. K., a oa evel ur mestr war an traoù-se, ha kalz koshoc'h egedomp, gant-se, e vije bet gallet soñjal, leugnoc'h a furnez pe da nebeutañ a skiant-prenet.

20

Em c'hamb e oa bet graet an arnodadenn : ar goañv e oa, troet e oa va c'hamb diouzh an norz, ha ne oa ket a dan. Adkavet em eus ur gartenn digant Arzel o kemenn e oa bet bet fiziet ar binvioù ennañ gant Tullou. An deiziad war ar gartenn a zo ANAG/AT/BMXIII. Da lavarout eo ANAGANTIOS ATENOUX. Anagantios, hen gwelout a ran o sellout ouzh ul lizher all, a glote mui pe vui gant miz Genver. N' em eus morse komprenet, daoust ma 'z eo bet displeget din meur a wech, petra oa ATENOUX. Evit ar bloavezhiad, anat eo ne glot tamm ebet gant amzervezh Mag Tured ; e c'hell bezañ e oant neuze gant amzervezh Ballon : aliesik e cheñche G. B. K. e soñj, ur wirionez nevez e zeue dezhañ bep an amzer, ken ha ken onest atav. Arzel, a sine a-wechoù, en-prevez, Artomagalos, en doa talvezet dezhañ e zoug d' an hengeltezh bezañ lesanvet, gant kalz a vignoniezh a-hend-all, Pietomaros. Deut-mat e veze gant ar merc'hed, pa c'helle displegañ istorioù dreist-natur ha lenn o dazont dezho e palv o dorn. Ar pleg d' ar gevriouriezh an hini a gasas anezhañ war hent ar science fiction. Eñ a reas din ober anaoudegezh gant Barjavel. Ul levraoueg vras, bras-tre, a zeuas a-benn da zastum war ar science fiction : seizh kant, eizh kant levr marteze. Kentelioù a reas war se en Aberystwyth : barrek e oa war e gevriouriezh hag e skiantvojenerezh evel ma veze barrek war gement tra a rae. Ha sirius, sirius. E blanedenn dezhañ e-unan a rae bep bloaz, o jediñ pervezh peseurt tonkad a oa aroueziet dezhañ gant ar stered. Gouiziek e oa, e gwirionez. Evel G. B. K. a-hend-all, er c'heñver-se. N' ouzon ket perak n' eo aet aet G. B. K., atav ken diaes ar vuhez evitañ ha ken berr gantañ an arc'hant, da ober ar vicher fakir : ur bern gwenneien en dije gounezet. Gouzout a ouzon en deus bet ar soñj-se, ur wech. Ma n' eus bet, en diwezh, fakir keltiek ebet ez eo, a gredan, peogwir e oa G. B. K. re sirius, re a-zevri, diwar-benn an traoù-se, ha n' oule ket o gwerzhañ. A-zevri e veze ivez Arzel. Me, hag am eus e anavezet ken mat, n' on ket evit krediñ na ouie ket e oa o vont da vervel. Pe, da nebeutañ, e riskl bras da vervel.

21

Dont a ran en-dro d' al lizherig am eus meneget. Komz a ra Arzel ennañ eus ur skrid anvet « Istor Gunnel ». Hag ez echu al lizher gant ar salud « Manpreme via ». « Manpreme via » a zo esperanteg evit lavarout, lakaomp, « deoc'h gant ur stardadenn-dorn ». « Istor Gunnel » a zo un droidigezh diwar ur skrivagner svedat, Pelle Molin, graet ganin diwar un destenn esperantek kavet er gelaouenn lennegel *Literatura Mondo*, embannet a-raok ar brezel gant Kolomano Kaloczay, e Budapest. N' ouzou ket piv an diaoul a zo aet da sevel, evit levrig diwezhañ an U.D.B., ar pennadoù diwar-benn an emsav kozh, a ziskouezer enno ar vroadelourien « traditionnels », evel ma lavaront, e-giz tud strizhsperedet staget o daoulagad ouzh o begel breizhat. Ur skeudenn lu ha karikaturel n' eo ken, na raio vad da zen ebet, hag a raio droug d' an U.D.B. Gwashoc'h eget un dra fall : un dra sot eo mont evel-se a-enep d' ar wirionez. Pa soñjan ez embanne Breizh Atao - a oa Yann Sohier, krouer Ar Falz, arabat disoñjal, ezel eus e guzul-ren - pa soñjan eta ez embanne Breiz Atao, ken abred ha 1928, en ur mare krignet gant broadelouriezh ar stadoù bras ha gant debron « glas-dremmwel » ar goude-brezel, ul levr anvet " Le Problème Breton dans son cadre européen " ; pa soñjan e oa Charlez Gaonac'h, sekretour ar P.N.B., sekretour ivez d' ur gelaouenn gouestlet d'ar broioù bihan " Peuples et Frontières ", savet e 1931, ar gelaouenn gentañ anezhi da vezañ lakaet berzh warni gant gouarnamant Daladier ! Mare ar Strollad Broadel a zo bet, evit Breizh, mare an digoradur war ar bed - ur gwir zispac'h e-touez ar Vretoned prederiet gant tonkadur o zud. Roparz Hemon, gant e gelaouenn *Gwalarn*, a labourere da zigeriñ daoulagad ar vrezhonegerien war ar bed bras, o lakaat da dalvezout ar pezh a skrive e Breiz Atao kerkent ha 1923. Roparz Hemon an hini a skrivas en esperanteg diwar-benn Breizh : sevel a reas ivez, e brezhoneg, daou levrig da zeskiñ esperanteg. Esperantegourien e teujomp da vezañ, Arzel ha me. Pe, gentoc'h, esperantegourien e oamp dija pa teujomp d' en em anavezout, hag ul liamm ouzhpenn e voe etrezomp. N' em eus ket keuz da vezañ bet desket esperanteg - daoust ma ran kalz nebeutoc'h gant ar yezh-se bremañ. Dre an esperanteg em eus graet anaoudegezh gant lennegezhioù Bro-Bolska, Bro-Vulgaria, broioù bihan an Unvaniezh Soviedel, da skouer. Kalz a levneze ha kalz a c'hounid he deus degaset din ar yezh kaer-se, gwevn hag heson. Troidigezhioù am eus graet diwar an esperanteg. Danevelloù berr, dreist-holl, atav on bet dedennet gant an danevelloù berr. « Istor Gunnel » a oa unan eus an danevelloù-se. M' he skrivereze Arzel e oa evit he c'has da embann. Marteze da " Avel an Trec'h ". Suroc'h : d' he lakaat er gelaouenn lennegel hollvrezhonek hor boa divizet sevel. Pa zeuas niverenn gentañ Kened er-maez eus ar wask e miz Mezheven 1946, a oa Istor Gunnel e-barzh.

22

Kened a voe hor strivadenn gentañ, war an dachenn foran, evit ar brezhoneg. Ne voe embannet nemet div niverenn. Langleiz a roas danvez da embann : mont a raen d' e welout. G. B. K. a roas ivez, anat eo : e *Kened* e voe embannet unan eus e varzhonegoù kaerañ : *Manos ha Bena*. Pas kerkoulz hag *Epona*, avat, d' am soñj. Ne voe embannet, a lavaren, nemet div niverenn. An unvaniezh a voe graet, buan, etre Tir na n-og, Al Liamm ha *Kened*, ha diwar an unvaniezh-se e voe ganet ar gelaouenn he deus embannet dija tost da nav-ugent niverenn, hag a embanno c'hoazh kalz re all, spi a zo da gaout.

E-pad ar mizioù-se e Roazhon, p' en em welemp ken alies, e voe skoulmet ar vignoniezh a badas atav etre Arzel ha me. Goude e voemp dispartiet : kenskrivañ a raemp. En em adkavout a raemp : a-wechoù ne gomzemp ket kalz. Ne dalveze ket ar boan : breudeur e oamp, o soñjal heñvel. Labourat a-gevret a oa da ober, ha n' eo ket komz.

E miz Gwengolo 1948 e kuitaas Arzel Roazhon. Evit mont da gelenner war ar skiantoù. Diwar va atiz ha war va ali en doa goulennet ur garg. E Cholet e voe anvet. Me a oa bet e Flers de l'Orne e 1947, e-pad daou viz. E 1948, pa 'z ae-eñ da Cholet, e oan-me kaset da Gemper : eno em boa goulennet mont, er pezh a oa evidon, en emskeudennadur va spered Breizhuhelad, kalon, kreizenn, santual na petra 'ta, Breizh. An devezh kentañ ma erruis e Kemper, marteze e c'hellan kontañ, ez is da brenañ un tamm pastez d' ober va lein e ti ar charkuter e traoñ ru al Lise. Brezhoneg a gomzis : anat. Kompren ac'hanon a reas emichañs an itron gozh a oa o servijañ, peogwir em boe va zamm pastez, met un tammig estren, gwall

estren zoken, e seblantas dezhi, 'm eus aon, va doare da gomz : evit unan eus al laezioù, eus al laezioù pell zoken, e tleas kemer ac'hanon. Hegarat e voe gant he fratik, avat. Unan na voe ket ken hegarat a voe an enseller-akademi pa grogis da gelenn brezhoneg el Lise. Ma, e Kemper e oan, hag Arzel e Cholet. N' hellemp ket bezañ, er memes akademiezh, pelloc'h an eil eus egile. Diwezhatoc'h e oan da vont pelloc'h c'hoazh, hag hep bezañ hen goulennet, met an dra-se a zo un istor all, da vezañ kontet d' ur mare all.

23

E 1949 e voe kamp ar vrezhonegerien , e Plonevez-Porze. Pe, da lavarout mat, Kamp (Etrekeltiek) ar Vrezhonegerien. « Etrekeltiek » e oa bet anvet ar c'hamp-se - hag etrekeltiek e voe e gwirionez - evit lakaat diaesoc'h d' ar pennadurezhioù difenn anezhañ. E Plonevez-Porze e voe ar c'hamp : er skol a zo aze, sellit en ur dremen, un tammig pelloc'h eget an iliz pa zeuer eus kreiz ar vourc'h, war an tu all eus an hent. Ur skol vihan gant ur porzh bihan. Bremañ, anat eo, e klasker skolioù gant « modern conveniences » e-giz ma lavar ar Saozon en o doare onest. Skol Blonevez ne ginnige ket kalz tra e-keñver aezamantoù ar vuhez modern, pe lakaomp hepken ar vuhez kempenn. Ha sebezet e tle bezañ bet Kembreiz gant an doare privezioù a veze kavet neuze e skolioù Breizh ha gant pegen discoursi e seblante bezañ an dud e-keñver implij an dour-red estr eget evit ober kegin. Daou c'hrignol a oa, unan evit ar baotred, unan evit ar merc'hed, ha plouz forzh pegement e-barzh. Laouen e oa an holl, Kembreiz koulz ha Breizhiz. Ur Gernevadez hag un Iwerzhonad a oa ivez, marteze muioc'h : an Itron de Bellaing, sekretourez aketus ar c'hampoù abaoe ar penn kentañ, a c'hellfe lavarout. Met Kembreiz dreist-holl a oa deut eus Keltia tramor : ur bagad brav anezho, ur bagad tud chomet feal da Vreizh, hag oberiant evit Breizh, abaoe at mare-se : D. J. Davies, Doue d' e bardono, Ceinwen Thomas, Delwyn Phillips, Eileen James. Deut e oa Arzel d' ar C'hamp d' ober skol vrezhonek. E-touez e skolidi e oa Mair Phillips. Er bloaz war-lerc'h e oant dimezet. E miz Mae 1950 e oa lidet o eured, eured Arzel ha Mair, en Iliz an Dizalc'hidi (Eglwys yr Annibynnwyr) e Kêrdiz. E miz Mae 1951 e oa lidet adarre o eured, ar wech-mañ en iliz-parrez Lannuon. Ur brezegenn gembraek a reas an Ao. Klerg dezho. Er bloavezh 1949-1950 e oa bet Arzel e Château-Gontier. E miz Here 1950 e voe anvet e Lanuon : tost outañ e oa an Ao. Klerg, hag en doe ul levezon vras warnañ. Da vare Nedeleg 1950 e teuas Mair da chom e Lanuon hag eno e voe ganet Brec'hed.

24

Daou vloaz war-lerc'h, e miz Gouere 1952, e kuitae Arzel ha Mair Bro-Vreizh evit mont da vevañ e Kembre. N' eo ket tamm ebet, a skriv din Mair, he dije en em zisplijet e Breizh. Tamm ebet : ur mare-buhez evurus-bras o deus bet e Lanuon. Met enk e veze an traoù gant an tammoù kelennerien vihan a oa ac'hanomp, hag Arzel, gwell a se evitañ, a gavas digor ha lengour e Kembre pa voe kinniget dezhañ ur garg a zeree ouzh e dro-spered hag e zonezonoù hag e ouiziegezh : e Kreizenn ar Plant, e-kichen Aberystwyth. Ne ouier ket, peurliesañ, ez eus e Kembre, savet gant Kembreiz, unan eus ar c'hreizennoù imbours'h brudetañ war an heiz, ar geot hag ar melchon. Eno, diouzh ezhommoù ha goulennnoù al labourerien-douar, e vez krouet seurtoù heiz nevez : evit douaroù sec'h, evit douaroù gleb, gant garoù hir, gant garoù berr, ha me oar ; seurtoù geot nevez a vez krouet ivez : dalc'het e vez deñved da beuriñ anezho, pouezet e vez al loened a vareoù ingal, muzuliet o laezh, prizachet o c'hig hag o c'hreouichenn ; heñvel labour a vez graet gant ar melchon. Bet on ur wech er greizenn-se, e Maner Gogerddan, sebezus a-walc'h da welout. Ha brav, va Doue... war hec'h uhelgompezennig etre ar mor hag ar menezioù. Aze e oa Arzel en e vleud, pe kentoc'h en e velchon. Karout a rae ar skiantoù, karout a rae ar yezhoù. Levraouegour ha troour e oa evit skiantourien ar greizenn. Ret e oa dezhañ bezañ gouest da lenn an darn vrasañ eus ar yezhoù europat : rusianeg a zekas evel-se, ken brav ken e voe goulennet digantañ reiñ kentelioù rusianek er Skol-veur. Japaneg a oa gouest da dreiñ ivez. Un den uvel e oa Arzel. Morse n' em eus bet gouezet gantañ da vat pet yezh a anaveze - trawalc'h atav evit o lenn ha treiñ diwarno. Un daouzek bennak a gredan.

Bevañ rae neuze, daou vugel dezhañ, ganet oa bet Lila abaoe, e Plas Hendre : Maner Kergozh a vefe, e brezhoneg, ma fell deoc'h. E laez ar grec'henn a ya eus Aberystwyth war-du Borth hag an Nort. N' eo ket en ti bras, er maner, e oa o

chom, met en un ti bihan e-kichen, ouzh traoñ al liorzha louzoù-kegin. Dalc'het e oa - hag emañ atav - Plas Hendre gant un den souezhus, Dafydd Miles, hag a veze graet outañ, hanter dre fent, Dafydd Milltiroedd. Ur c'harr kozh en doa - hag en deus c'hoazh emichañs ! - am beze atav aon o welout un tamm dioutañ o kouezhañ pa dostaen. Kozh, met lufrus ha leuc'hus, evel ma weler ken alies du-hont. Eñ hag e wreg a oa ganto ur seurt ostaleri, o ostizien a veze studierien dreist-holl, pe broadelourien war o vakañsoù. Eno e oant sioul ha didrabas, Arzel ha Mair, hag an div verc'hig, zoken ma ne oa ket gwall aes an ti gant bugale vihan. Diwezhatoc'h e tilojas Arzel evit mont da chom tostoc'h ouzh e labour, e Comins Coch, e-tal gweledva kaer ar menezioù : en un ti gwelloc'h met en ur c'harter o saoznekaat.

25

Forzh pegen barrek e oa Arzel war ar melchon ha war ar japaneg, gwelloc'h en doa da ober, evit Breizh hag evit Keltia, eget chom da louzaouañ e kemend-all a yezhoù : da lenner-skoazeller e Skol-veur Aberystwyth e voe anvet e 1959. Prizet e oa e ouiziegezh gant T. H. Parry-Williams ha J. E. Caerwyn Williams, prizet e oa ivez e skridoù, dreist-holl e skridoù en Hor Yezh. Kregiñ a reas neuze da gelenn e Skol-veur Aber, ar Skol-veur e-tal ar mor, savet gant youl hag arc'hant Kembreiz. Teir eurvezh brezhoneg a-vremañ, un eurvezh brezhoneg krenn, un eurvezh kerneveg, un eurvezh yezhoniezh hag un eurvezh hengeltieg hag hengembraeg. E-pad daouzek vloaz e talc'has gant al labour-se : e Bangor, hevlene, e teuas ur plac'h yaouank, Sylvia, da gomz din e brezhoneg : desket he doa ar yezh gant Arzel Even, dre lizher, bravañ 'zo ; lakaet en doa anezhi da dreiñ e kembraeg *An ti a drizek siminal*. Soñjal a ran e Beti Jones ivez, bet oc'h ober war-dro al levrioù brezhonek el Levraoueg Vroadel, hag en nouspet paotr ha plac'h yaouank a zo bet lakaet gant Arzel da zeskiñ ha da garout hor yezh.

Meur a wech hon eus bet tro d' en em welout e-pad ar bloavezhioù m' eo bet e Kembre : da geñver ar C'hendalc'hioù Keltiek, da skouer, ez-ingal. Deut eo ivez da chom en hon ti e-pad ma oamp ni en e hini. Alies e teue da Vreizh, da welout e familh eus tu e vamm, a oa genidik eus korn-bro Plouarzel. Setu perak en doa dibabet an anv Arzel. Derc'hel a rae start ha tomm d' al liammoù tiegezh : unan eus e familh en em yenaas outañ, en doare digomprenus ha sebezus ma c'hoarvez ar seurt traoù, ha kalz e c'houzañvas diwar-se er mizvezhioù a-raok e varv. Ur galon dener en doa. Ha pa gomzan eus va darempredoù gant Arzel, ez eo ret ober meneg eus al labour hon eus kroget gantañ a-gevret : embann *Hor Yezh*.

E 1954 e oa liesskrivet an niverenn gentañ. D' ar mare-se e oa ur menoz ouzh va chalañ dibaouez, alies e c'hoarvez din bezañ chalet evel-se ha, gwashañ 'zo evidon, buan e tro ar chal da ober : ne c'heller ket komz eus ur vuhez speredel e brezhoneg ma n' eus nemet ur gelaouenn pe ziv o tont er-maez bep ar mare. Me 'm eus aon emañ aze an namm, pe ez eus aze un namm : krediñ e vez a-walc'h kaout ur gazetenn bennak bep miz, lenn anezhi, a-wechoù klask ar fazioù enni an hini a reer, ha tremen ar peurrest eus an amzer gant ar galleg. Farserezh n' eo ken : ur seurt folkloracherezh dister ha diezhomm. Ret eo kaout e brezhoneg peadra da vagañ ur vuhez spered bennak, ha gwall skort, gwall gabac'h, eo ar vuhez spered a c'heller magañ diwar ur gelaouenn bep miz pe bep daou viz. Ret eo eta, ret-mat, kaout skridoù niverus, skridoù liesseurt, hag ivez skridoù arbenneget. Eus an tu all, aze 'mañ ar gudenn, omp re baour evit moulañ pep tra. D' ar mare-se em eus kroget da studiañ doareoù ha digoroù al liesskrivañ. Divizoù hir am eus bet war-se gant Jord ar Mée. Lizheroù hir am eus kaset war-se da Roparz Hemon. Tammig-ha-tammig ez eus bet ganet kelaouennoù liesskrivet. Hor Yezh a zo bet unan eus ar re-se.

26

Savet eo bet Hor Yezh e 1954. Ne c'helle bezañ eviti rener ebet dellezekoc'h eget Arzel Even. Labouret en deus kalz evit ar gelaouenn : n' eo ket hepken o sevel pennadoù eviti, n' eo ket hepken o respont d' al lizheroù, met ivez o skeiñ ar stensiloù. Ken paour e oamp, hag ez omp c'hoazh, daoust ma 'z eus bet gwellaenn d' an traoù, ma ne c'hellfe ket ur gelaouenn liesskrivet, zoken, derc'hel penn ma vefe embannet ez-kenwerzhel, da lavarout eo ma vefe ret mont da gaout, evit pep tra, evit liesskrivañ ar follennoù, evit koublañ anezho,

evit spilhennañ anezho, evit kas an niverennoù, h.a., tud a vicher, hag o c'hounit o buhez, evel m' eo dereat, dre o micher. Gant tud a youl vat e vez graet eta al labour : atav an darn vrasañ eus al labour, hag a-wechoù al labour penn-da-benn. E-pad pell amzer eta eo bet Arzel Even e-unan-penn o skeiñ ar stensiloù. Ur skriverez kozh, degaset gantañ eus Breizh, a implije : un deiz, n' ouzon evit pe abeg, pe gentoc'h, disoñjet 'm eus evit pe abeg, e kollas ar skriverez ar sifr 2. Marteze e oa bet lakaet un arouez all en e blas, marteze ne oa bet kavet den ebet da renkañ anezhi. Bezet a vezo, war veur a bajenn eus Hor Yezh e weler ar sifr-se skrivet gant an dorn : ur brouenn diarvar eo bet skoet ar stensil gant Arzel. D' am soñj e talvezas al labour-se dezhañ da vezañ anvet e Skol-veur Aber : n' em eus morse komzet eus an dra gant va c'heneil Caerwyn Williams, met, n' eus arvar ebet, gant e skridoù en *Hor Yezh*, liesseurt, poellek, gouiziek, eo bet anavezet barregezh Arzel war ar yezhoù keltiek. Rak bez e veze neuze kelennerien Skolioù-meur estren o lenn *Hor Yezh* ! Hag, anat eo, e-pad pell amzer e chomo e *Istor ar Yezhoù Keltiek*, daoust pegen dister hen kave Arzel Even e-unan, ar savadur brasañ en hor yezh war an danvez-se : al levr-heñchañ gwellañ war-du studiadennoù pervesoc'h. A-hed e 600 pajennad e tiskouez Arzel pegen ec'hon e oa e anaoudegezh eus ar c'heltieg. Goustadik e savas Arzel an oberenn, evel ma rae pep tra. Hag, ur wech echu al levr, pemzek vloaz goude bezañ kroget, ne oa ket mui gwall laouen gant ar pezh en doa skrivet da gregiñ. Ar c'hontrol an hini a vije bet souezhus. C'hoant en doa da skrivañ en-dro al levrenn gantañ. Peogwir avat e oa an dra-se da gemer mizvezhioù, ha piv oar bloavezhioù, e roas an aotre, da c'hortoz, d' hec'h adembann evel ma oa. Da c'hortoz ober gwelloc'h. Hiviziken, siwazh, ne vo anavezet skrid all ebet eus an destenn-se, ha difrouezh e chomo evidomp ar c'havadennoù en doa graet. Bez e c'heller ijinañ pegen talvoudekoc'h e vije bet an eil skridenn-se pa soñjer e oa deut a-benn da sevel un dezenn - da zont hepdale er-maez eus gwask Skol-veur Gembre - diwar-benn an amprestadennoù diwar ar galleg e brezhoneg-krenn, pa n' eus en e Istor ar Yezhoù Keltiek nemet un tregont pajennad bennak o tennañ en holl d' ar brezhoneg-krenn.

27

Bamet on bet atav gant gouiziegezh Arzel Even. Heñvel an eil ouzh egile e oamp en ur c'heñver : divuzul hor c'hoantoù. Gantañ ar c'hoant gouzout ar c'hoant deskiñ traoù a oa ar c'hreñvañ. Ne oa ket evit gouzañv e vije ur skiant bennak estren dezhañ, hag a-greiz-holl en em lakae da studiañ an traoù ar muiañ dic'hortoz. Ganin e oa ur c'hoant all a oa kreñvoc'h : ar c'hoant da reiñ d' am c'henvroiz, en o yezh, ar pezh a gaven brav. Ac'hane an troidigezhioù diniver, miliadoù a bajennoù, am eus graet, an darn vrasañ anezho diembann betek-hen, ha moarvat di-embann da viken. Nemet e teufe unan all bennak d' o adwelout ha d' o adkempenn. Un dra bennak fromus - d' am soñj -, fentus lakaomp - da soñj tud all -, a oa marteze er pleg-se da begañ prim-ha-prim er bluenn evit lakaat e brezhoneg skridoù a bep seurt - o vont eus romantoù Fenimore Cooper betek re George Eliot en ur dremen dre Emily Brontë. Aliet e c'helljen bezañ bet, hag on bet, a-wechoù hep nemeur a vadelezh, da zeskiñ da gentañ. Da zeskiñ gwelloc'h, lakaomp : evit bezañ jentil. Met atav em bez labouret, dreist-holl er penn kentañ, bremañ ne vezan ket mui chalet kement dre ma koshaan, atav em bez labouret gant soñj ar marv em spered. Gwelet em boa va mamm o vervel, gwelet em boa va c'hoar o vervel. Klañv-bras e oan bet, ha div wech war-nes ober ar splujadenn vras. Gant ar soñj eta e oa muzuliet va amzer din hag e oa ret din hastañ buan ma felle din ober un dra bennak evit pobl Vreizh : degas va maen, plantañ va gwezenn, e-touez mein ha gwez ar re all. Arzel a oa perc'hennet gant ar c'hoant deskiñ ha gant ar c'hoant gouzout : kelc'hgelaouennoù sabatuus a lenne, ha peogwir en doa un eñvor eus ar gwellañ, e teue a-benn da sanailhañ gouiziegezh a-vern. N' em eus anavezet, e-touez ar vrezhonegerien, nemet unan all par dezhañ er c'heñver-se : Roparzh Aodig. Taolomp evezh, avat : ma oa sebezus gouiziegezh Arzel Even, morse ne glaske sebeziñ an dud gant e ouiziegezh : ne gomze ket kalz, ne vrabañse ket, pa veze graet goulennoù outañ e responte sklaer, resis, evel ma oa ret : ha gant ur sasunadur eus ar fent a oa en e natur.

28

Derc'hel a reas 'ta Arzel Even da ober war-dro *Hor Yezh* a-hed bloavezhioù hir. War an diwezhadoù e teuas gorrekoc'h e labour. Marteze e oa deut da zivlazañ un tammig. Met, dreist-holl, ne oa ket sioul e spered, ne oa ket sioul

e spered tamm ebet, alies en em gave divi, ne zeue ket a-benn da echuiñ ar pezh a groge gantañ.

An dra-se a zo bet un taol spontus evidon pa 'z on aet, e geneil kozh e oan, da lakaat urzh en e baperioù : gwelout nag a draoù, talvoudus, dedennus, prizius, a oa chomet gantañ war ar stern, diechu. Un nebeut anezho a vo echuet marteze. Gwelloc'h lavarout : nebeut anezho a vo echuet. Gant pep den e vez e zoare dezhañ e-unan da labourat : da verkañ, dre ur ger, dre un arouez bennak, ar pezh en deus c'hoant da zisplegañ diwezhatoc'h ; da skoulmañ, a-raok harpañ evit ur pennad, neudenn e venozioù. Piv biskoazh a c'hellfe didoueziañ kement-se ? Kalz a draoù en deus lezet Arzel e skourr evel-se : e studiaden - a zlee bezañ diouti un dezenn vras - diwar-benn an darempredoù etre Breizh ha Kembre pa ne ve ken, ha den ebet ne c'hellfe echuiñ e labour, ha paouroc'h e chomimp da viken eus ar pezh en doa da lavarout. Distro on d' ar gêr, gwall-fromet, en ur douiñ ouzhin va-unan en em lakfen diouzhtu da echuiñ an traoù lezet war stern, a-raok kregiñ gant un dra bennak all... Peadra a vefe d' am derc'hel stag ouzh va zaol-skrivañ e-pad nouspet bloavezh... Siwazh, siwazh... N' en em cheñcher ket, 'm eus aon.

29

Gant e skridoù gouiziek, dreist-holl, e vo anavezet Arzel Even en amzer da zont. Met, evel ma vo gwelet pa vo embannet en *Hor Yezh* roll e oberoù, estr eget traoù gouiziek en doa savet. Unan eus an dud a sine *Lan hag Herve* e-barzh *La Bretagne*, e-pad ar brezel, e oa bet, da skouer. Fentus a-walc'h an heuliad pennadoù-se e kazetenn Fouéré. Hec'h anv, *La Bretagne*, em boa klevet evit ar wech kentañ un abardaez, ur Sul d' abardaez, pa oa tud ouzh he gwerzhañ war ar straed, e-tal ar sinema e-kichen va zi. Klav e oan, savet e oan bet da welout abeg an talabao. Ne veze ket prenet *La Bretagne* gant va zud : l'Ouest-Eclair, deut abaoe da vezañ l'Ouest-France, ne lavaran ket. Ur bann e brezhoneg a veze e-barzh *La Bretagne*, talbennet atav *Ar seizh Avel* ha sinet atav *Lan hag Herve*. Alan ar Berr a zle bezañ bet al Lan-se da gantañ. N' ouzon ket piv a zo bet an Herve kentañ. Bezet a vezo, buan e tle bezañ aet skuizh Lan hag Herve gant o fennad Lan hag Herve, ken ez eus bet, a-benn ar fin, nouspet den o skrivañ dindan al lesanv doubl-se. Mat e vefe da Alan ar Berr ober evidomp an istor eus Ar Seizh Avel aet abaoe gant an avel. Ur wech bennak, atav, eo bet Arzel Even *Lan hag Herve* : pemzek pennad en deus savet, sinet evel-se, e 1942. Da nebeutañ, soñj en doa eus ar pemzek pennad-se : ar roll anezho a vo embannet e-barzh *Hor Yezh*. Marteze en doa skrivet muioc'h. Ne ouie ket mui. Heñvel gant e bennadoù disin e-barzh *L'Echo de Lannion*, e 1951 ha 1952 : ne ouie ket mui pet, na pere, en doa skrivet. Ha n' en doa ket miret ar brouilhedoù. Setu aze danvez furcherezh evit studieren ar brezhoneg en amzer da zont !

Ar pennadoù-se, avat - ar re anezho atav am eus gwelet, tennet eus *La Bretagne* - hag int traoù kazetennerzh, ne oant ket c'hoazh traoù faltazi : morse ne veze gouest Arzel da zilezel, da zisoñjal, ar skiant hag ar studi ; displegañ traoù ha deskiñ traoù, sed ar pezh a gare. Kement-se n' eo ket lavarout ne blije ket dezhañ al lennegezh, dreist-holl al lennegezh nebeut-anavezet, pe ar seurt lennegezh a zo troet gant ar brederouriezh : troidigezhioù en deus savet. Fromet e veze, e gwirionez, gant ar gened, kened ar gerioù koulz ha kened ar sonerezh. Marteze e veze re zalc'het e spered gant ar furcherezh hag ar ouiziegezh, ar pezh ne vez morse mat evit al lennegezh : gwelit Roparz Hemon, paouezet en deus da skrivañ barzhonegoù meur abaoe m' emañ dalc'het da vat gant e c'heriadur istorel. Ha, koulskoude, petra zo talvoudusoc'h eget al lennegezh ? Krediñ a rae Arzel Even e talvoudegezh dreist al lennegezh. Da bep hini e vicher ! a lavare, avat. Da bep hini e vicher ! En un emsav evel emsav ar brezhoneg, e-lec'h m' eo pep hini, mui pe vui, ur Yannig ar vil vicher ! Piv a c'hell fougeal, en hon emsav, ez eo « skrivagner hepken » ? Tud a zo bet, hag o deus savet skridoù talvoudus, hag a zo aet diwar wel, evit abeg pe abeg, goude-se : soñjal a ran e Yann Eozen Jarl, e Y. V. Kerwerc'hez, e Jakez Kerrien, e Kaba.

30-31

Gallet en dije Arzel Even, evel tud all, reiñ un dra bennak d' hol lennegezh. Re zalc'het e oa, setu an abeg bras, gant e skridoù a ouiziegezh, ha dreist-holl gant e naonegezh d' an deskadurezh. Dre zegouezh, marteze dre redi, an hini en

deus en em droet ouzh al lennegezh, pa 'z eo bet hejet gant ar vuhez ha bountet er-maez eus kelc'hiad e studioù, e-pad mareoù berr-tre, gant prederioù all. Barzhonegoù en deus skrivet, barzhonegoù en deus klasket skrivañ. Div anezho hepken a zo bet embannet. Unan, kaset gantañ da embann, met dizanv. Eben, sinet, met, va c'hredenn eo, roet gant unan all da embann. Souezhus eo ar varzhoneg-se, moulet war un dro gant un droidigezh saoznek er gazetennig, pe gentoc'h war ar follennig varzhoniezh, anvet III, mar deo an dra-se un anv, ha moulet e Dulenn, hep deiziad ebet : e 1966 pe 1967 a gredan. Atav, hel lavaret em eus dija meur a wech, eo bet dedennet Arzel gant an traoù divoutin. Unan eo honnezh eus ar barzhonegoù anvet « concrete poems ». Setu amañ anezhi, evel m' eo bet embannet. Savet eo bet gantañ evit daou zen yaouank, eus touez e vignoned, a oa e karantez an eil gant egile. Hag, evel ma tisplegen, n' eo ket gantañ eo bet kaset da embann.

Eus ar mare a c'hellfen envel mare e yaouankiz, e c'hellan degas ar barzhonegoù, pe tammoù barzhonegoù, -mañ :

AR STER-HUD

« Takenn ha takenn eo deut va c'harantez evel ur stêr don. »
Impalaer Yôzei.

En dour pur da zaoulagad
E fellas din 'n em velezourañ ;
Gwelout a vennen a-dreuz da valvennoù
Skeudenn va ene dizic'hoantadus,
Ha gwelc'hiñ va selloù
Eus kement kailharder ar bed digar
Er stêr lor lezirek ha lent
Evel pa ve ur vuhez rin war gellid enni.
32

Trubard avat e savas an dour em zro,
Mitaouik, o kanañ din sonioù boemus.
Ha richan ar stivell e oa da vouezh,
Ha 'm skiantoù trevaret ne ouient ken,
Hag evañ 'raen da vouezh,
Ha selaou 'raen kensonadeg da zaoulagad
Ha 'z muzelloù, bleuñv ar c'hlann,
Ha 'z plev disent, par da c'heot an dour.

Ha kollet ar sond ganin !
Ha beuzet on en dour ganas da garantez
Silet ennon takenn ha takenn,
A te heñvel ouzh ar stêr hudvoemus hag arvarus.

An deiziad merket ouzh traoñ ar varzhoneg-se a zo 7-4-44. An hini nemeti eus e varzhonegoù - eus ar mare-se - a zo echu mat. Setu amañ unan all, peuzechu, peuzchu hepken :

KANENN-ABARDAEZ

« D' an hini a oar evit piv eo. »

O laka fenozh ur wech c'hoazh
Plac'hig da lagad boull dizrouk,
Da zivrec'h en-dro d' am gouzoug
Flour ha klouar o gwennder noazh.

Na lavar tra, na lavar ger
Lez-me, va fenn war da vrennid,

Da selaou, gwasket start ouzhit,
Kan da galon ... ha tener.

Ra dañvin war da ziweuz ruz
Ar frouezhenn hud a laka
Ar gour d' ankounac'haat pep tra,
Ha da selaou ouzh ar Galv kuzh.

33
Dispak da vlev ha ra skuilhint
War va zal o frond di...
Ma adkavin c'hwez hirankouaet
Ar mor ha 'r c'hoad ha 'n avon sklint.

Divi on. Tec'hout a fell din
Diouzh morc'hed, gloaz hag azrec'h.
Da vinc'hoarzh ... ra vo trec'h
War c'hoarzh yud ur bed ... ha krin.

Hag aet diouzhit pan vezin
'Kreiz avel yen-put ar vuhez
E chomo frond da garantez
Aergelc'h kuñv ... en-dro din.

6-10/IV/44.

Ar gwennoù, bet lezet gantañ er varzhoneg ouzh hec'h eilskrivañ
bloavezhioù goude, a ziskouez an onestiz a oa ennañ ouzh ar gerioù. Aes e vije
bet klokaat, ha tapout an hesonerezh a oa ezhomm. Evitañ, avat, pep ger a oa
gwirionez : ne oa ket tu da c'hoari. Gwenn e chomfe ar pezh a oa chomet gwenn,
gwechall, da vare ar from hen awene.

Houmañ ivez, hag hi hep deziad, a denn d' an hevelep mare, evel ma
c'heller gwelout diouzh ar skritur ha diouzh doare ar paper. Stag e oa kalon
Arzel outi, sur-mat, rak hec'h adskrivet en deus, diglok ha dizibenn. Ur
reizhadenn en deus graet enni diwezhatoc'h, gant ar c'hreion-bilh, hag a
ziskouez emdroadur e soñjoù diwar-benn ar yezh : ar ger *douar* en deus lakaet an
eil poz e-lec'h ar ger *tir* a oa bet skrivet gantañ da gentañ. Setu anezhi :

IRINENN

Da L..

Tremenet ez out em buhez
'N ur vousc'hoarzhin ur pardaez
Serc'hleun da darzh an nevez-hañv,
Ha bruzhonet gant da sell drant,
Gant da c'hoarzh skiltr ...
An arched a vougen ennañ.

34
War an douar, e gig frailhet,
'Dan pok kriz Sulis dirollet
A fu dioutañ pep galloud,
Va ene, ez tan loskidik
A ziskouez din pep boud digig
Oa en dic'hoanag, â C'houzoud !

Beajour faezh 'n doa kantreet
'Hed hentoù serzh dizarempred,
Trema touellwel ar C'hevrin,
Gwadet e dreid ouzh ar ...

Hep tostaat tamm e vezoud og
Ouzh askre an dra anterin,

War ...

Levezon G. B. K. a welan war yezh ha war arouezioù ar pozioù-se. Setu amañ
daou all, savet abretoc'h, disheñvel o stumm, ha freskoc'h :

AR PONDALÉZ

Mamm an eñvorennoù, mestrez ar mestrezed
O te va holl dudi, o te va holl dever,
Koun az pezo eus kaerder hon allazigoù
Ha douster an oaled ha boem an nozvezhioù,
Mamm an eñvorennoù. mestrez ar mestrezed.

Nozioù sklerijennet gant ar glaouennoù bev,
Ha nozioù war ar pondalez,
Na flour oa da zivronn, na mat oa da galon !
An traoù divarvus a lârjomp alies
En noz sklerijennet gant ar glaouennoù bev.

Kement-se zo eeun ha yaouank, evel ar barzhonegoù a savas Arzel e galleg
a-raok bezañ desket ar yezh. Met ne ya ket pelloc'h. Ha mut e chomas ar
varzhoniezh ennañ pell amzer : betek ar bloavezh 1951. Ur varzhoneg, staget outi
an deiziad 13-3-1951, am eus kavet e-touez e baperioù. Skrivet eo gant ar
mekanik, hag o varn diouzh doare ar skriverez e kav din eo bet skoet an destenn-
se un nebeut bloavezhioù hepken : ar gredenn am eus en doa lakaet Arzel en e
benn 'zo neuze krouiñ un oberenn varzhoniell. Met e 1951 e oa bet savet ar skrid,
hag embannet en Ogam, hep sinadur ebet, e miz Mezheven. Un nebeut mizioù a-raok
e oa marv Kerverzhioù.

35

Ar varzhoneg a zo anezhi un eñvoradenn koulz hag un emfrealzadenn. Un deiz
bennak e vo studiet oberenn Arzel Even, Kerverzhioù hag ar strolladig a labouras
ganto goude ar brezel, evit pezh a sell ouzh ar Gredenn Geltiek, adsavidigezh,
ma c'heller lavarout, ar c'heltieg kozh evit ezhommoù al liderezh, hag ar
furchadegoù e tremened istorel ha marzhel ar Gelted, a zo bet an atiz kentañ da
grouidigezh ar gelaouenn Ogam. Tost-meurbet e oa bet atav Arzel Even ha G. B.
K., breudeur e oant bet dre ar menozioù hag ar faltazioù, daoust da G. B. K.
bezañ bet a-hed ar wech gwall-hedro, ha dezhañ ur vlizidigezh un tammig
klañvidik. Hejet-spontus e oa bet Arzel gant marv trumm, dic'hortoz, e vignon. E
Lanuon e oa neuze. Klevet em eus gantañ pegen diaes e oa bet saveteiñ paperioù
ha dihelloù e geneil, hag en un den aketus, o terc'hel teuliadoù klok ha
pervezh. Goude an obidoù e skrivas e varonad. Hag eñ a-benn neuze en hent
tremaik ar gatologiezh, e kav, evit eñvoriñ e geneil, ar gerioù a oa bet o
gerioù un amzer oa bet :

MARONAD

Diskiant neb a verk un emwel hep kounaat an emwel gant an Ankou.

- Perak e leñvit din, â Vreudeur ? Leñvit deoc'h-hu, ha c'hwi hep gwelout
c'hoazh ar vag strink ha na zeu ket en-dro.

E-kreiz an noz e oan kousket, ha deut eur d' am dihunañ,

Evel ma tihuner kent tarzhañ an deiz ur beajour ret dezhañ kemer penn un hent
hir ;

Flour e oa e vouezh evel ar mez, ha kreñv eveltañ. « Deus, emezañ, pa ouzon ez

out darev da zont,

« Me eo da vreur henañ, engehentet evel dout gant Bleiz Meur ar C'hornog, -

« naren ur relegenn flaerius en he liñsel brein, evel ma kred d' an dud aonik ha dizeskoni,

« hogen ar C'hannad gwenn a vlegn ar Gedern ha'r Furien peurzesket ganto o c'hentel.

36

« Deus ezaon. Heñvel va bag ouzh kof ur vamm, hag ez out o vont da vezañ ganet

« da viken etre divrec'h ar Vamm a hirvoudes Dezhi keit-all. »

Nav zonn bremañ etrezomp ha 'n aod. Gwer ar mor, glas an oabl, gwenn-kann an heol a-us dimp.

Kenavo, va Bro. Gwer da vor ivez, ha gwer da dir ; glas da oabl ha da zourioù, gwenn an heol pa bar war da venezioù.

Tir a c'hlac'har, din-me out bet skeud an Tir a Levenez, ma tarev dibaouez Avaloù ar Skiant,

ar Skiant hag a zo Karantez ivez, boued diheskus, ezamzerius ;

ma kan mouezh ar Vamm en pep eienenn voull, ma sked daoulagad ar Vamm en pep bleunienn.

Kenavo, va breudeur. Dorn-ouzh-dorn omp bet o kantren er c'hoad. Abretoc'h egedoc'h em eus damwelet an heolienn, ha redet en he bete ;

Na gredit ket evelkent em eus ho tilezet, na gredit ket oc'h kollet en noz ar c'hoad.

Emañ Tir na n-Og en ho kreiz - hag eñ nav gwech brasoc'h eget Litauia, kuzhet eo en don ho kalon.

Mar mennit, mar selaouit ouzh ar gentel a ganan deoc'h, evel ma selaouan-me dija ouzh telennadeg an nav c'hoar,

e reot, hep bag na blenier, an immram emañ-me oc'h ober, trema 'r menez ma weler ar Rod o treiñ en-dro dezhañ.

Leñvit deoc'h-hu, â Vreudeur, ha c'hwi bepred er Glen dizistro.

13-3-1951.

Ar garantez ouzh ur mignon, ar youl da chom gantañ, da virout anezhañ, hag eñ aet kuit, a zo er varzhoneg. Hag ivez enni, ma fell deoc'h, ma fell deoc'h, un heklev eus ar *Sketla Segobrani*. An dra-se, avat, a zo lennegezh, ha n' eo ket mui kalon Arzel o talmañ tomm. Ma, komzomp eus lennegezh neuze. Un deiz bennak - c'hoazh ! - e vo ret-mat studiañ peseurt levezon o deus bet ar *Sketla*, hag an den, taer ha start, en deus o skrivet, Meven Mordiern, war an emsav etre an daou vrezel : war e yezh, war e venozioù, war e gredennoù. Ar skrivagnerien wellañ a zo bet levezonet gant ar *Sketla* : gwelit Roparz Hemon, hag e " Aotrou Bimbochet ". Gwelit Youenn Drezen, hag e " Gan da Gornog ", siwazh ! Ar gredenn geltiek, marteze, ne vije ket bet diouti hep ar *Sketla*. Nag an dudi nevez en henistor ar Gelted, en henezhoù ar Gelted, na kement a reer hiziv war an dachenn-se. Traoù mat-tre a zo bet er *Sketla*, ha traoù ivez na oant ket mat tamm ebet. Taolet er-maez eus ar pemdez gant marv e geneil, ne c'hell ket Arzel lavarout kenavo dezhañ en arouzelezh ur feiz na oa bet morse o hini d' ar mare ma oant breudeur e Tarzh un Deiz Nevez. Evit e saludiñ war an hent dizistro ma oa o pennadiñ, e

kav Arzel, en eñvor e yaouankiz, barzhoniezh ar gredenn a oa bet o c'hredenn - marteze, en-wir, ez adkav ar gredenn hec'h-unan - hag e wel en e gimiad un Distro d' ar Vamm dindan gwarez an Doue Da. Ne soñj ket din en dije karet Arzel kaout, goude e varv-eñ, diwisket pep seblant, maronad all ebet estr eget hennezh.

37

Ur pemp pe c'hwec'h vloaz bennak a-raok e varv e seblant Arzel bezañ dibabet sevel un oberenn a varzhoniezh. Dibabet n' eo ket ar ger mat. Seurt traoù ne vezont ket dibabet. Un dra bennak a c'hoarvez er galon, un dra dister, un dra bouezus, piv oar, ha neuze en em santer barrek, pe youlek da nebeutañ, da lakaat da badout, kizellet e mein ar gerioù, ur prantad tremenidik eus ar vuhez. Gant pep skrivagner, gant pep barzh, e vez e zoare dezhañ e-unan da labourat. Gant Arzel ne c'helle bezañ nemet un doare skiantel hag urzhiet. Ar pezh a seblant, diouzh ar c'hentañ gwel, kontrol a-grenn da spered ar varzhoniezh. A seblant. D' ur mare bennak en deus lakaet Arzel war baper ar roll eus ar barzhonegoù en doa c'hoant da sevel : 17 anv a zo er roll-se. Ur varzhoneg hepken a zo bet echu da vat, dezhi un anv brezhonek war ur skrid : *Huelenn-c'hwerv*, hag un anv kembraek war ur skrid all : *Chwerwlys*, an daou anv o talvezout memes tra, anat. Pemp all a zo, mui pe vui, dam-echu. Ar re all n' eus anezho nemet notennoù n' int ket bet kalfichet tamm ebet. Setu, da skouer, an notennoù a zo evit ar varzhoneg a oa da vezañ anvet *Doueez wadek* :

Gwad ar goulmig dinamm
Ne c'hlizhenno ken da aoter
A ziskianted ma 'z omp !
Hor gwad-ni eo a fell dit.
Gwad ar werc'hez, priz ar blijadur.

Gwad ar wreg, priz he ...
Gwad ar vamm, priz ar vuhez nevez.
Ruz out !
Kemer 'ta gwad va c'halon.

38

War ar seurt steuenn e labourere. Ul labour micherel, kalvezel-rik. Gant honnezh, n' eo ket aet pelloc'h. Met pa gendalc'he gant e striv, e klaske, a drevell bras, lakaat e yezh da respont d' e venoz, lakaat e soñj d' en em zisplegañ ar gwellañ ma oa tu en e brezeg, harpet war al luskoù a ro d' ar varzhoniezh he doare kevrinel. Hag un den gouiziek e oa Arzel war ar yezh ha gant ar yezh : termenet e veze pep ger gantañ n'eo ket hepken e-keñver ar gerioù all en implij er mare-mañ, met ivez e-keñver ar re bet en implij gwechall. Karget eo ar gerioù evitañ gant nerzh ar c'hantvedoù, an nerzh berniet enno gant ar rummadoù bet, gant istor o eurioù hag o drougeurioù, gant o istor, gant istor o zrec'h, deut da wir er gerioù, kentoc'h eget gant istor o faezhidigezh. Ur stumm barzhoniezh eo bet dedennet kalz gantañ eo hini Kembre : stumm ar « c'hengan », a gaver aspadennoù anezhañ en hor barzhoniezh krennvrezhonek, hag a chom bev-mat e-touez « hor breudeur tramor ». Labourat a ra : tammig-ha-tammig en em zispleg ar wiadenn nevez a zo endalc'het enni from ar barzh koulz ha from an amzerioù, stegnet war galloud-hud chadenn ar prezeg. D' an neb a soñj ez eo ar varzhoniezh awen dreist-holl, bez ez eo awen da gentañ, anat eo, e karfen degas da soñj ar pezh a skrive Caerwyn Williams, en e levrig *The Court Poet in Medieval Ireland, Oxford 1971*, diwar-benn barzhed kozh Iwerzhon, ha Kembre, en em sparle, en o c'hambrou, hag en deñvalijenn, da sevel, dre hir aked hag hir amzer, o barzhonegoù. Don-souezhus ez a ar seurt barzhoniezh e buhez ar gevredigezh. Gant G. B. K., gant Roparz Hemon, eo bet implijet e brezhoneg an doare kembraek da werzaouañ. Arzel, na ouie ket derc'hel gant e striv, n' en deus peurgempennet netra er stumm-se. Setu un nebeut pozioù eus ur varzhoneg a oa bet anvet gantañ *Teir en unan* :

Dit, e-kreiz ar bed,
'Tre frankiz ha ret
'Vel gwezenn seder,
'Tre douar ha neñv

Liamm bresk ha kreñv
Reizh en o c'heñver.

.

39

« Houmañ, me a gred,
(Balc'hat he c'herzhed)
Dellezek edi.

- Mab, ur gurunenn
Driek war da benn
Tri bed a reni. »

.

Da zaoulagad gwer
A luc'h gant kuñvder
Ha rin ar werc'hez,
Met ivez ken pur
Ha ... dreist mezur
Da oad, ar furnez.

.

A Wenvidigezh
Din e taskorez
An Unded rezet ;
Em ene ha 'm c'hig
Paün, kaouenn, koulmig,
Ra vi benniget.

Arouezelezh an tri labous : paün, kaouenn ha koulm a zo bet andon ar
varzhoneg-mañ, ha n' eo ket echu, siwazh. N' eus nemet ur varzhoneg a vo deut
betegomp en ur stumm peurgempenn, hag un all en ur stumm peuzechu : hini anezho
n' eo bet savet avat hervez ar c'hiz kozh. An hini gentañ a zo bet meneget
dija :

HUELENN-C'HWERV

Tout cela ne vaut pas le poison qui découle
De tes yeux, de tes yeux verts...
Beaudelaire

Diamantoù du aourstrewet,
Mein-safir habaskaus
A sil er galon vrevet
Ar peoc'h dizezrevellus,
40

Didec'hit ! Faezhet ho kremm
En em fenn d' ar c'hwek'h avel
Gant bannoù gevellek lemm
Div verilenn skorn tanel.

Blaveola, rouanez,
Bleuñv c'hwek, dour-louzoù goular,
Roit lec'h d' an doueez,
Huelenn-c'hwerv ar glac'har.

Berzhet mezeglenn da weuz
Ouzhin gant gwalenn ha grat,
Va droug-hirnez en em veuz
E kil gwer da zaoulagad.

23-2-66.

Eben a zo:

FONS IUUENTUTIS

My glass shall not persuade me I am old
So long as youth and thou are of one date.
Shakespeare

Ya, me a grede din e oas un doueez
(Neb am laka da foll, hennezh n' az anav ket)
O vale an douar gant un dezo kuzhet -
Na ve ket din sevel gouel ar gevrinez.

Met bremañ e ouzon na dout divarvelez,
Rak an den zo ken ... da barañ e selled
War verc'h an neñv ...
.

E vloavezhioù a bren an eurvezhioù dibriz
Tremenet war harzoù Douar ar Yaouankiz.
Met te, boem ha balzam, a vuhez eienenn,

Te a c'hoursez 'vidon red an traezh didrugar,
Te a lodenn ganin da yaouankted klouar ;
.

41

Un dra a blije kalz da Arzel, komzet hor boa eus kement-se ugent vloaz a zo ! a oa ar frazennoù bihan a veze kustum da lakaat, *en exergue*, ouzh penn e skridoù, ha barzhoniezh, ha skiant e vefent. D' am soñj, ur seurt framm a gave er frazennoù-se d'e venoz barzhoniel. Un harpell. Barzhonegoù zo, a-boan boulc'het, hag o deus evel-se o zokig sebezus. Gant an doug a oa ennañ d' al lenn ha d' ar furch, n' eo ket souezh en dije diskoachet arroudoù e skrivagnerien nebeut anavezet, nebeut anavezet din, atav, ar pezh a lakae atav Arzel da c'hoarzhin, evel Berenger de la Tour d'Aubenas pe M. Scève, hag a oa anvioù pemdeziek evitañ sur-mat, pe e yezhoù ken disheñvel hag ar rusianeg, an italianeg, al latin, ar gresianeg, ha me ' oar : ... *têi kalêi tô mêlon* a zo skrivet e penn ar varzhoneg *Teir en Unan*. Div varzhoneg troet e brezhoneg am eus kavet en e baperioù, unan diwar ar galleg, eben diwar ar saozneg. N' eo ket, anat eo, gant La Fontaine ez eo bet dedennet, evel gwechall kemend-all a bersoned pe gureed e Breizh-Izel gozh : ar varzhoneg c'hallek a zo gant Augusta Holmes, ar varzhoneg saoznek gant P. M. Hubbard. Ganto o-div e oa bet fromet e galon, ha muioc'h c'hoazh e spered. Hini ebet anezho n' eo bet peurechuet gantañ. Setu amañ an droidigezh diwar Augusta Holmes.

ROSA BENEDICTA

E don ul liorzhus fresk, leun evned ha bleunioù,
Ma red stivell hon daeroù, dibaouez,
Luskellet er ganevedenn bresk he livioù,
Edo Kupris, rouanez an hoaloù, o kousket.
A-daol-trumm o vresañ ar bod-roz kounnaret
Un Estren 'n em ziskouezas er goulou-deiz
E dal a lugerne warnañ ur sklerijenn neñvel
E dreid merzheriet a ziwade c'hoazh.

Kupris a savas he daoulagad leun a serc'h hag a spont
Davet ar Boud mezevellus e weled,
Emezi : « Piv out-te ? Piv az kas davedon,
Davedon, ar Gadourez tener ?
Lâr din da anv, den yaouank ruz e vlev,
Kaeroc'h eget mesaerien Humettos,
Te hag a ra da weled d' an daoulin krenañ
Ha da rozennoù va fenn dizeliañ. »

42

« Me eo 'n Hini a zoug ennañ an holl doueed,

Me eo an Hini a c'hourc'hemenn : Karit !
Savet e voe ar bed gant Va gwad gwenvidik,
Eros kroazstaget, Me eo !
Na te, bleuñvenn va gwad skuilh,
Kened, frealzerez diharz,
A zaskor d' ar c'halonou marvel o faradoz kollet,
Ra vezi, Rozenn doueel, benniget ! »

Daoust ha degas a rin da soñj hor boa roet an anv Kened d' ar gelaouenn savet ganeomp, e pegoulz, ma Doue ? ur pemp bloaz warn-ugent bennak zo, pezh a ziskouez na cheñch ket kalz an den a-hed e vuhez. Barzhoneg P. M. Hubbard a zo bet embannet e Punch e 1956, enni en deus Arzel adkavet e from skiantel dirak sav ar vuhez :

ANADYOMENVS

Dour zo nav davedenn vuhez : drezañ e treuzvev,
E lusk, e wered, e kresk kement buhez zo,
A 'r bronneged bet' ar garvevion disterañ
N' eus 'met ar ouizieien a daol evezh outo.

Golc'hedet-klok en dour, buhez nevez c'hanet
A harzh ouzh ankoe sec'h hag a zesk e vuhez
O tougen, 'vel-hen e kelenn an Emdroadur,
Un doare schnorkel e-kreiz he begel.

Serc'h, 'me ar varzhed, a savas kaer diouzh an dour
A lintre war he c'hroc'hen satin.
Ha donemat ar bed a dregernas gantañ ar runioù o c'hortoz.

Nann 'vat : serc'h a stlejas er-maez, ez-c'hrobis,
War al lec'hid ; hag a gerzhas gant pezh a oa bet un angell
Hepken, hag a glevas an tav gant he brenkoù.

Bez ez on bet o furchata e-touez skridoù va mignon. Reizhet em eus, nevez zo, amprouennoù e skrid war an amprestadennoù gallek e krennvrezhoneg : na divarrek en em gaven dirak e zeskadurezh ! Rannet eveltañ etre ober ha studi, sebezet e choman bepred gant e ouiziegezh. Gant ar ouiziegezh a zo aet da get. Klasket e vo saveteiñ ar pezh a vo tu da saveteiñ eus e skridoù desket. Marteze ne rin ket me. Tud yaouank avat a zeuio, war e lerc'h ha war va lerc'h, a stouo war e baperioù, evel am eus graet, gant karantez ha gant doujañs. E niverennoù da zont *Hor Yezh*, e niverennoù da zont *Al Liamm*, e vo un nebeut traoù. Pezh am eus klasket lakaat er pennad-skrid-mañ eo ar pezh a oa an tostañ d' am c'halon, ha d' e hini. Lakaat Arzel da vevañ, evit tud all, evel m' eo bet, evel m' emañ, evidon, evit e wreg, evit e vugale, evit e vignoned : muioc'h eget ur gouizieg, muioc'h eget un arbennegour, muioc'h eget ur Breizhad kar e vro ha kar e yezh. Muioc'h eget unan a ouie skrivañ. Un den.

43

Nepell diouzh al Levraoueg Vroadel, ha douetañs am eus ez eo hoal al Levraoueg Vroadel en deus kaset ac'hanout da Gembre, emañ bremañ o repoz, Arzel. Glas eo an dachenn war da dro, glas evel ma vez beredoù Kembre, dianav dezho ar savadurioù greunvaen ponner a gaver bremañ e Breizh ar vourc'hizien. Glas eo an douar a gares kement, a gares evit e vuhez douar kement hag evit e gened. Teuzet out bremañ er vuhez-se, o repoz. Kened ar vro en em vag diouzhit. Sur on e kavez dudi er menoz-se, ma c'hellez c'hoazh kaout menozioù. Soñj ac'h eus - perak e komzan evel-hen : soñj ac'h eus ? - penaos e oamp merzheriet gant ar goulenn bras : hag un dra bennak a zo goude ar marv ? Gant an emc'houlenn-se omp bet kaset, a-gevret, war hent studioù iskis an dregorfoniezh. Pa oamp yaouank, Arzel, pa oamp yaouank... Te ac'h eus adkavet frealz ar Gwenna, galv Tir na n-Og, surentez un dazont baradozel. En em gafunet, pe en em zispleget,

ac'h eus, n' ouzon ket, e feiz ar vuhez da badout da viken. Me, o pennañ hentoù all, ne gredan ket - ne gredan ket ken. Nann, ne gredan ket mui : evel Roparz Hemon, ez on " Pirc'hirin ar Mor ". Ha koulskoude, pa soñjan ennout, pa soñjan en da gorf paour gourvezet du-hont er vro a zo bet evidout, hag evidon ivez, un eil bro, un vro ziogel, un vro huñvre, ne c'hellan lavarout dit nemet : Kenavo, breur !

Ma breur ! Kenavo.

Nenn Jani

PENNAD 2

Ur vaouez, bihan ha treut, a ziskenne gant ar ru Amiral-Linois, war-dro dek eur diouzh ar mintin antronoz. E du e oa gwisket. Ur boned intañvez, du gant ur vandenn wenn, a oa war he blev. Daoust d' an amzer domm e touge ur chal, ha manegoù-meudek neud a oa war he daouarn.

Kerzhout goustadik a rae a-hed ar riblenn en tu dehou, o sellout gant evezh ouzh talbennoù an tiez, evel o klask un dra bennak. Degouezhet dirak dor ti Nenn Jani, e chomas ur pennad o termal. Neuze e skoas lentik war an nor.

Kentañ soñj a zeuas e penn Nenn Jani pa zigoras eo e oa c'hoazh un itron o tont d' he fediñ da aozañ ur pred. Raktal avat e verzas ne oa ket ur vourc'hizez a oa dirazi.

« Va digarezit, » eme ar vaouez vihan. « Ha c'hwi an hini eo a zo bet ken madelezhuz dec'h evit va mab ? »

« Ho mab ? »

« Va mab Ernest. »

« Ar paotr a zo bet amañ, a oa gouliet e c'har ? »

« Deuet on d' ho trugarekaat. »

« Ne dalveze ket ar boan. Nemet deuit tre. Penaos emañ ho mab ? »

Koumoulek e oa an oabl ar mintin-se, ha ne oa ket bet ezhomm da zerc'hel serr ar stalafioù. Nenn Jani a wele mat dremm ar vaouez he doa pedet da azezañ war ar gador-vrec'h, tro ma edo ouzh ar preneustr. Un dremm uzet, ha ne oa ket gant ar gozhni, rak ne c'halle ket hounnezh bezañ en tu-hont da hanter-kant vloaz. Louet e oa he daoulagad, uzet ivez, dindan he gourrennoù damvelen. He blev a oa bet hep mar melen ivez, hogen kollet a doa o liv. Roufennet-don oa he c'hroc'hen, nemet war he daou askorn-jod e lufre evel porselen.

45

He mab, emezi, a oa gwelloc'h. Hogen gant an derzhienn e oa bet e-pad an noz, ha ne oa ket c'hoazh aet diwarnañ.

« Ha galvet ez eus bet ur medisin ? » eme Nenn Jani.

« Nann. Esper am eus ne vo ket ezhomm. »

Nann Jani a gompene. Ur medisin a rank bezañ paeet.

« Bugale all hoc'h eus ? » a c'houlennas.

« Seizh krouadur am eus bet. N' eus nemet pemp a chom bev. »

« Me 'wel ez oc'h intañvez. »

« Kollet em eus va gwaz warlene. »

Chom a rejont o-div un tachadig hep kaozeal, an eil o sellout ouzh eben.

« Ernest, » eme ar vaouez neuze, « a zo paotr mat. N' eo ket unan da ober trouz, na d' en em gannañ. Er porzh e labour, c'hwi 'oar. Dec'h edo gant kamaladed. Ne glaske ket tabutal. Ne ouzer ket penaos e c'hoarvez seurt traoù. »

Anat oa e felle dezhi difenn he mab.

« Paotr mat eo, me 'zo sur, ha savet-mat, » eme Nenn Jani.

Souezhet e oa un tammig gant ar vaouez-se, ur vaouez eus ar bobl, hag a gomze koulskoude evel un itron. Karet he dije gouzout hiroc'h diwar he fenn.

« N' oc'h ket eus Brest ? »

« Me 'zo eus Montroulez. »

« Me zo eus Kastell. »

Ha setu ul liamm etrezo : div estrenez e kêr Vrest.

« Ma ! » eme ar vaouez, « ur wech c'hoazh e lavaran deoc'h trugarez. Kalz hoc'h eus d' ober, moarvat, ha ne fell ket din ho tirenkañ pelloc'h.

« Amzer am eus. »

Komz a rejont ur momedig c'hoazh, a-zivout an harz-labour, na seblante ket bezañ tost da echuiñ.

« Ret eo din mont d' ar gêr, » eme ar vaouez. « N' eus den da ober war-dro Ernest, nemet e c'hoar Lizig, ha n' he deus nemet trizek vloaz. »

Pa 'z eas Nenn Jani d' he ambroug betek an nor, e oa takennoù glav o kouezhañ, hag e oa teñval an oabl. « N' eus ket a zisglavier ganeoc'h ? »

« Ne ra forzh. »

« Me 'zo o vont da brestañ deoc'h un disglavier. Daou am eus. »

Mamm Ernest a voe plijet. Gwisket he doa he dilhad Sul da ober he gweladenn.

46

« Kas va merc'h a rin, » emezi, « da rentañ deoc'h ho tisglavier. »

« N' eus ket a vall, » eme Nenn Jani.

Ha neuze, oc'h argrediñ un nebeud :

« Me 'garfe mont da welout ho mab. »

Ar vaouez a chomas da brederiañ.

« Plijadur a raio da Ernest ho kwelout, me 'zo sur, » emezi. « Emañ hon ti e traoñ ar ru Kre, an nor e-kichen an ispiserezh. Hingant eo hon anv. »

* * *

A-boan aet ar vaouez en he hent m' he devoe Nenn Jani keuz. Boas e oa da vevañ he-unan-penn, hegarat ha mousc'hoarzhuz e gwirionez ouzh an dud a geje ganti, hogen distag diouto. N' he doa ket a vignoned. Intañvezed kozh evelti a vourre o taremprediñ o amezeien hag o amezegezed, a veze dalc'hmat e ti pe di o kafeta, a yae da azezañ gant o stamm war ar bankoù e plasenoù hag e liorzhoù kêr da gomerezañ. Hi ne rae ket. Pa ne veze ket o labourat war he micher geginerez pe o tevezhiañ, e vane er gêr, hag e kave bepred peadra da ober : renkañ, skubañ, diboultrennañ, purañ, gwalc'hiñ, gwriat, ferriñ, hep ehanañ tamm.

Bremañ he doa prometet mont da welout tud. Hegasus e oa. Abalamour d' ar re-se e oa bet strafuilhet he feoc'h. Ya, betek bezañ stlejet dirak ar c'homiser-polis ! Peoc'h, peoc'h. ne c'houlenne ken !

Ur bromesa koulskoude a oa ur bromesa.

« Ma ! Ur wech n' eo ket atav eo ! Ar buanañ graet, ar gwellañ, ha goude e vezin kuit ! »

Setu ar pezh a soñje, en endervezh-se end-eeun, o vont etrezek ar ru Kre. Goude ur barrad-glav pounner e lintre an heol adarre etre ar c'houmoul. Ne oa ket kalz a dud. Ar vicherourien, trec'het en derc'hent, a oa chomet er gêr. Diwallerien an urzh a oa war evezh evelato. O tremen e korn ar ru Traverse hag ar ru Siam, Nenn Jani a welas archerien ha fuzuilherien-vartoloded oc'h ober ged, ha muioc'h a oa hep mar kuzhet e porzh ar Prefeti-Mor. Diskenn prim gant ar ru Suffren a reas ha pignat gant ar Ru Vras ha straedig an Tri Filer. Ar blasenn Sant-Loeiz a oa tost goullou, un nebeut paotredigoù hepken o c'hoari an deñv ha plac'hedigoù o c'hoari lamm-kordenn ha troadig-kamm, rak ne oa ket a skol en deiz-se, ar Yaou. E-kreiz talbenn an iliz, plat evel ur mell follenn gartoñs plantet-serzh dirak an oabl, an horolaj a verke div eur hag ugent.

47

D' an eur-se e oa prenet ar c'hoc'hu, nemet dirazañ e oa stalioù-red ma werzhed frouezh ha bleunioù. Nenn Jani a brenas ul livr kerez, a voe lakaet en ur c'horned paper. Ha ne voe ket pell o tizhout ar ru Kre.

Aet e trepas an ti e-kichen an ispiserezh, e chomas nec'het. An nor a oa digor-bras. Al leur bavezet a oa digompez. Plastr ar mogerioù, diskantet al liv melen warnañ, a oa krafignet ha goloet-holl a dresadennoù graet gant bugale. Dorioù a weled, kartennoù tacht warno, pep hini o tougen anv an annezer, hogen ne oa ket tu da lenn gant a vihan ma oa al lizherennoù. En tu kleiz e oa diri pleñch gwenn, uzet-holl, hag ur renkad boestoù-lizhiri a bep seurt hag a bep ment. Ur re votoù-koad faoutet a oa bet lezet e troad an diri. Un ti paour, ennañ c'hwez ar c'hozh hag an dienez.

Ma rankas Nenn Jani mont er stal da c'houlenn.

« An Itron Hingant ? Er porzh, en tu dehou, » a voe respontet.

Bras a-walc'h e oa ar porzh, leun a skeud, rak uhel oa an tiez tro-war-dro. Ouzh ur vaouez, a oa o lakaat dilhad war ur gordenn da sec'hañ, e rankas goulenn adarre. Ar vaouez, hep tennañ an daou wask koad stardet etre he muzelloù, a astennas he groñj etrezek an tu dehou pellañ.

En ur dostaat, Nenn Jani a welas ur plac'hig blev melen o lakaat he fenn en ur prenestr a-rez-douar, o sellout outi, o treiñ war-zu an diabarzh, ha kerkent mamm Ernest o lakaat he fenn en ur prenestr all.

O-div e teujont da zigeriñ an nor e-kichen. Pedet e voe ar chikolodenn da zont tre.

« Digarezit an dizurzh. N' ho poa ket lavaret pegoulz e teujec'h. »

Ne oa dizurzh ebet, nemet drailhennoù mezher a oa skignet amañ-ahont, war an daol, war ar gwele bras, war ur gador. Ha war ar mekanik da wriat, e-tal unan eus an daou brenestr, e oa un dra bennak a-ispilh, a seblante bezañ ur jiletenn-waz diechu. Naet oa ar gambr, frotet-lufr stern ar gwele kerez-gouez, nevez walc'het ar ridezioù o tiskenn e plegoù ingal diouzh ar stel peg ouzh al lein. Ar paper-moger avat a oa dislivet, hag en ur c'hogn e weled linennoù gwagennek rous graet gant al leizhder. Gant ur pallenn linoleom e oa goloet ar plañchod damziverket ar bleunioù moulet warnañ er plasoù skrabet aliesañ gant an treid. Dirak ar siminal e oa ur fornigell garrezek houarn-teuz, sanket ar gorzenn anezhi en un toull graet er voger.

« Azezit, » eme ar vaouez. « Ez an da lavarout da Ernest oc'h deuet. »

Hag o tigeriñ un nor e kuitaas ar gambr.

« C'hwi 'zo c'hoar Ernest neuze ? » eme Nenn Jani d' ar plac'hig.

« Ya. »

« Pe oad hoc'h eus ? »

« Trizek vloaz. »

« C'hwi 'zo bras evit ho oad. »

Brazik a-walc'h e oa, glas he daoulagad evel he breur, eveltañ treut he izili. Daou blañson blev, pep hini stardet en traoñ gant ur skoulmig rubanenn wenn, a gouezhe betek he dargreiz. He c'horfig moan a oa paket en ur sae gotoñs ruz ha du. Gwisket e oa c'hoazh evel ur bugel.

« C'hwi 'ya d' ar skol ? »

« O nann. Me 'm eus bet va sertifikad warlene. »

« C'hoarezed hoc'h eus ? »

« Nann, n' em eus nemet pevar breur. Charlez a zo martolod. Ernest a labour er porzh. Ivoñ a zo e ti ur peruker. Herri a ya d' ar skol er ru Michelet. »

Ar vamm a zistroas eus ar gambr e-kichen.

« Deuit dre amañ, mar plij, » emezi.

Teñval oa ar gambr-se, sklaeriet hepken gant ur prenestrig. Enk e oa ivez, ha da gentañ ne welas Nenn Jani nemet ur pikol gwele koad. Neuze, en tu all, astennet war ur gweleig houarn, e welas Ernest. Gwisket e oa penn-da-benn, nemet hep e gravatenn.

« Penaos emañ, va faotr ? »

Ar c'hrennard a glaskas sevel en e goazez.

« Arabat fiñval, Ernest, » eme e vamm.

« Va zroad a ra droug din, » emezañ.

« E c'har a ya gwelloc'h, » eme ar vamm, « mes flastret eo bet e droad. »

« Ya, hag ar boan a vez santet gwashoc'h en devezh war-lerc'h, » eme Nenn Jani. « Pareañ a raio. »

Ne gave netra all da lavarout, ha forzh penaos, ne vije ket bet evit komz pelloc'h. En un taol e voe stanket he c'horzailhenn, ha moustret he askre evel gant ur pouez plom. Aze dirazi e oa paourentez. El lojeiz-se, bihanoc'h eget he lojeiz, e oa pemp den o vevañ, rak ar mab henañ, ar martolod, sur-mat ne oa ket er gêr.

Klask ober ur mousc'hoarzh laouen a reas koulskoude, o santout ar gleb o tont d' he daoulagad. He c'hornedad kerez, he doa dalc'het en he dorn, a lakaas war ar gwele.

« Dalit. Amañ 'z eus kerez evidoc'h, » emezi o stourm ouzh he fromadenn.

Ur paotrig gant bragoù berr hag ur c'haldrav-skol en em ziskouezas e toull an nor a-greiz-holl, hag a sellas estonet ouzh ar vaouez dianav.

« Pelec'h oas-te chomet, Herri ? » eme ar vamm. « Te 'oar e rankez mont gant Lizig da gas an dilhad d' ar c'hemener. Ha lam da voned, mar plij, dirak an itron ! »

Herri a lamas e voned. Koantik e oa, ront e zremm, krak e zaoulagad, e vlev gell-du troc'het-berr.

An div vaouez a yeas er gambr all adarre. Edo Lizig o sachañ ur vouest-kolo plat a-zindan ar gwele. Lakaet e voe ar voest war an daol. Ar vamm a savas ar golo, a bouzgas a-gostez un tamm lien koaret. Nenn Jani a welas e-barzh jilettenoù mezher pleget-kempenn. O vezañ kontet anezho, hag adrenket an tamm lien koaret, ar vamm a adserras ar voest.

« Ha bremañ, bugale, » emezi, « prest da di ar c'hemener a-raok ma vo glav. »

An daou vugel, o tougen ar voest etrezo, a yeas kuit, Lizig o treiñ da vousc'hoarzhin seven ouzh ar chikolodenn gozh.

« C'hwi 'wel, » eme ar vamm, « labourat a ran evit ur c'hemener. A drugarez Doue em boa desket gwechall e Montroulez ar vicher jiletennerez. Evel-se em eus gallet chom er gêr da ziwall va bugale. »

« Warlene, » eme Nenn Jani, « hoc'h eus kollet ho kwaz ? »

He sell a oa aet war ur pikol luc'hskeudenn en ur stern alaouret a-ispilh ouzh ar voger a-zioc'h ar gwele. Brasaet e oa bet, anat, diouzh ul luc'hskeudenn vihan. Warni e oa un den yaouank, du e vlev, en e zilhad-eured, hag ouzh e gostez ur plac'h yaouank vihan gwisket e gwenn, war he fenn ur c'hoef Montroulez. E-kichen e oa skeudennet un tous izel, warnañ ur pod krag hag er pod un torkad rozennou.

« Ya, warlene. »

Daoust hag ar chikolodenn-se a ouie ? Daoust hag an anv " Hingant " en doa degaset un eñvor d'he spered ? Nann, ne ouie ket. Hi eo, Emili Hingant, he doa lavaret dezhi e oa marvet he fried er bloaz kent.

50

Pep karter eus ur gêr vras a zo, evit an dud vunut a vev ennañ, evel ur bed damgloz. Nenn Jani, ken brudet e karter Karmez, a oa dianav e karter Sant-Loeiz, da vihanañ e-touez ar vicherourien. Emili Hingant n' he doa morse klevet komz eus Nenn Jani. Ha Nenn Jani n'he doa ket sur-mat dalc'het koun eus an darvoud, o lakaat e vije aet betek he divskouarn, en doa esmaet an holl etre ar ru Vras hag ar ru Faotraz. ar ru Algesiras hag ar ru Keravel.

En un davarn eus ar ru Faotraz, etre soudarded trevadennel ha micherourien, e oa savet tabut. Mezv-dall e oant. Ur micherour en doa tapet krog en ur voutailh, friket anezhi war benn ur soudard, ha sanket un tamm en e gorzailhenn e seurt doare ma oa bet lazhet. Ar micherour, bac'het e ti-polis ar maerdi, a oa bet kavet antronoz vintin krouget ouzh unan eus barrinier ar prenestr war-bouez e c'houriz-ler na oa ket bet, dre zievezhded, lamet digantañ. Hennezh, ar micherour-se, Jozeb Hingant, a oa gwaz Emili.

A-berzh an amezeien er ru Kre, ne oa bet e-keñver an intañvez neuze nemet madelezh. Da ziskouez doujañs ha kengarantez, holl e oant deuet d' an interamant. Hogen kalon Emili a oa debret gant ar vezh, pergen abalamour d' he bugale. Klasket e oa bet kuzhat ar wirionez ouzh an daou yaouank, Lizig hag Herri. Mes klevet o doa buan gant ar vugale all er skol penaos e oa marv o zad.

« Ya, warlene, » he doa respontet d' ar chikolodenn, hag aon he doa bet na raje goulennoù.

Spered Nenn Jani avat a oa aet war un hent all.

« Ho merc'h » emezi, « a sikour ac'hanoc'h ? »

« Ober a ra, ha ne ra ket. Poent eo dezhi deskiñ ur vicher. N' eo ket gwall greñv. Klañv-diglañv eo bet e-pad ar goañv. Bremañ ez a e ti ur gemenez. Mes n' eus ket a labour atav, ha ne zesk kazi netra. Ha bremañ, va mabig Herri a ranko kuitaat ar skol. Ur paotrig speredek eo, hag e vestr a lavar kas anezhañ d' ar skol-vicherioù. O lakaat en defe ur yalc'had-studi, me n' em befe ket peadra d' e vagañ ha da brenañ dilhad dezhañ. C'hwi hoc'h eus bugale ? »

« N' em eus ket, » eme Nenn Jani.

C'hoant bras he doa bet da gaout bugale. Souden e soñjas e oa bet eürus. N' he doa da soursial nemet outi he-unan. Klask kompren a rae petra oa chom intañvez gant krouadurien.

« Ur vicher vat en doa ho kwaz ? » a c'houlennas.

« Micherour oa er porzh. »

51

« Ur bañsion hoc'h eus marteze ? »

Emili a reas " nann " gant he fenn. Nenn Jani a verzas e oa strafuilhet o sellout ouzh he daoulagad, a oa tremenet warno evel ur ouel. Edo ar chikolodenn o soñjal : « Ur mab martolod, ur mab deskard-micherour, ur mab komis, daou vugel na c'hounezont netra, ur vamm intañvez hep pañsion, oc'h ober labour hep mar paeet-fall. Petra a rafen-me en he lec'h ? »

Taolioù kalet a voe skoet war dor an ti.

« Deuit tre, » eme Emili.

Ur paotr mentek en em ziskouezas. Nenn Jani a anavezaz ar micherour yaouank a oa bet o harpañ Ernest en derc'hent. He anavezout a reas-eñ ivez.

« C'hwi eo ! » emezañ. « Penaos emañ Ernest ? »

« Gwelloc'h, » eme ar vamm. « It er gambr aze, mar fell deoc'h kaozeal gantañ. »

« Ne zirenk ket ac'hanoc'h ? »

« Tra ! Tra! »

Ar paotr a yeas da welout Ernest. Emili a serras an nor war e lerc'h gant un aer hegaset.

« Hennezh a oa dec'h gant ho mab, » a lavaraz Nenn Jani a vouezh izel.

« Me 'oar. »

« Paotr mat e seblant bezañ. »

« Ya, paotr mat a-walc'h. »

« Er ru-mañ emañ o chom. »

« An dra-se en deus lavaret deoc'h ? Ya, gwir eo... en un doare. »

« Pe anv en deus ? »

« Kaourintin Gourvest. Hennezh a zo sekretour sindikad ar vicherourien. »

Nenn Jani a zivinas ne oa ket ar C'haourintin Gourvest-se tre e paperoù mamm Ernest.

« Ma ! » emezi. « Poent eo din mont d' ar gêr. »

Mouezh kreñv ar micherour a gleved. Edo o farsal hag o c'hoarzhin. Emili a zigoras dor ar gambr vihan.

« Ernest, » emezi, « an itron a zo o vont kuit. »

« Kenavo, » eme Nenn Jani.

N' eo ket ur c'hornedad kerez a oa deuet gant Kaourintin da brofañ da Ernest, met ur pakad sigaretennoù, ha leun oa dija ar gambr gant c'hwez ar butun.

* * *

52

« Ho tisglavier ! »

An div vaouez o doa kimiadet an eil diouzh eben, hag edo Nenn Jani o tiskenn etrezek ru ar Maerdi, pa glevas mamm Ernest o c'hervel en ur redek war he lerc'h.

« Ho tisglavier, ho poa prestet din dec'h ! Disoñjet em eus e rentañ deoc'h ! »

« Edon, » eme Nenn Jani o kemer an disglavier, « o soñjal en ho merc'h Lizig. Mar fell deoc'h he lakaat da zeskiñ ar vicher gemenerez, me 'gav din e c'hallan ober un dra bennak eviti. Me 'anavez kalz tud, c'hwi 'oar. Ne brometan netra, mes klask a rin. »

« Ho trugarekaat, itron. »

« Ar Skourr eo va anv. An holl a ra Nenn Jani ac'hanon. »

Micherourien a oa bremañ deuet er-maez er ruioù. Kalz a gerzhe a-hed ru ar Maerdi etrezek ar ru Siam. Ne oa ket un dibunadeg. A vagadoù bihan ez aent. Kenwerzhourien a serre o stalioù, o stagañ ar panneloù koad war ar gwerennoù. An darn vuiañ avat e chome war dreuzoù o dor, hep gouzout petra ober, hep kompren pezh a c'hoarveze. Nenn Jani a gavas furoc'h, evit distreiñ d' ar gêr, tremen dre ar blasenn La Tour d'Auvergne hag ar ru Sant-Erwan : seul gentoc'h treuzet ar ru Siam, seul welloc'h. Eno e oa micherourien e-leizh ivez, nemet lod a yae war-zu ar Prefeti-Mor, lod all war-zu plasenn ar Porzhioù. Lod a vane a-sav a-wechoù, oc'h ober ur c'helc'h, a veze torret diouzhtu gant archerien. Kerkent e veze aozet ur c'helc'h all kant metr pelloc'h. Hag an archerien da redek pennfollet en ur huchal. Ar vicherourien o doa plijadur. Lakaat paotred an urzh da bennfolliñ a oa o dezo end-eeun. Desket o doa en derc'hent e oa follentez en em strollañ holl, da vezañ taget ha flastret gant ar varc'hegerien. Divizet o doa hegasiñ, flemmañ Leon al Lezenn evel gwesped, a bep tu.

Ma vije bet Nenn Jani er gambrig gant Ernest ha Kaourintin, he dije klevet e oa an dra-se e oa sekretour ar sindikad o tiskleriañ d' an deskard-micherour, en ur stlakañ war e vorzhed hag en ur c'hoarzhin leizh e gof.

* * *

He-unan-penn evel boaz en he zi bihan en abardaez-se, azezet e-tal ar

preneustr, Nenn Jani a selle ouzh ar glav o kouezhañ. O tidoullañ ul loer e oa bet, nemet re deñval e oa deuet da echuiñ he labour. Diegi he doa da vont d' he gwele. En desped dezhi, ne rae nemet soñjal ha soñjal en dro he doa graet er ru Kre, o keñveriañ he flanedenn intañvez ouzh planedenn an intañvez all. Paour oa hounnezh, kalz paouroc'h egeti. Ha pinvidikoc'h koulskoude, pinvidikoc'h he buhez, gant un toullad bugale en-dro dezhi.

53

« Lakaomp, » a brederie, « e vijen-me en he flas, hag e vije Lizig va merc'h, hag Ernest hag Herri va mibien, ha c'hoazh an daou all n'anavezan ket, ar martolod hag ar peruker bihan. Bugale din-me ! »

En abardaevezhioù hir-se a viz Mezheven e veze hegaset alies gant krouadurien ar c'harter o krial en ur c'hoari betek serr-noz er ru, o kinnig terriñ gwerennoù he frenester gant o bolotenoù, o kanañ, o lammat, o redek, o tabutal. Er gêr, avat, e oant chomet er pardaez-se, gant ar glav bras a rae. Ha c'hoant he dije bet d' o c'hlevout, netra nemet da argas an digenvez a sante, lemmoc'h eget biskoazh, en he ene.

« Bevañ war an douar, hep kar na par. »

Hep kar ? He eñvor a nijas trumm betek Kastell-Paol. Abaoe pemp bloaz ne oa ket aet di, ha c'hoazh n' he doa tremenet eno nemet daou zevezh neuze, e ti Katell he c'hoar. Alies a-walc'h koulskoude e oa bet pedet da vont. Katell ne skrive dezhi nemet da Zeiz ar Bloaz, hogen bep tro e lakae war he lizher « esper am eus e vezi gwelet e Kastell hevlene ». Katell n' he deveze ket amzer da vont da Vrest. Re a labour a oa er stal-besked, emezi. Perak eta n' he doa ket Jani dalc'het muioc'h a zarempred gant he c'hoar yaouank ? He gwaz Marsel a oa un den hegarat. Hag o daou vugel, Malvina hag Aogust ? Pe oad he doa Malvina ? Jani a reas ar gont en he fenn. Pemp bloaz warn-ugent. Hag Aogust neuze ? Tri bloaz warn-ugent. Malvina a oa skolaerez. Aogust en doa echuet e servij, hag e oa implijad er " Pontoù ha Chaoserioù ". O zad hag o mamm, hag i kenwerzhourien, a oa bet gwelloc'h ganto o lakaat da labourat dindan ar gouarnamant. Estrenien e oant, koulz lavarout, d' o moereb.

Ouzh taboulinadeg ar glav, en amc'houlou, e trote ar menozioù evel ur bagad konikled en he spered. Hag e soñjas adarre e mamm Ernest. Un dra ne oa ket deuet a-benn da gompren : perak e oa hounnezh en he dalc'h hag he c'homzoù evel un itron ? He bugale er c'hontrol a oa anat bugale eus ar bobl, daoust na oant nag hardizh na savet-fall. Un itron ne oa ket sur. War he luc'hskeudenn-eured e touge koef Montroulez. Bremañ ez ae e tog. Hogen se ne oa ket eston. Kalz merc'hed, goude dont e Brest, a zileze o c'hoef hag a yae e tog pe e blev. Ha mat e oa he yec'hed ? Koshoc'h e hañvale bezañ eget he oad. Labourat kalet a rae, derc'hel kempenn he ziegezh, stourm ha strivañ kalonek ouzh an tonkadur. Ha koulskoude, koulskoude, e tivine Nenn Jani, pe e krede divinout, e vanke dezhi ar pezh a ra da dud 'zo trec'hiñ war ar wallchañs : an nerzh-bevañ. Eus an nerzh-se, an tammig chikolodenn he doa ouzhpenn he lod. E plas mamm Ernest, e vijen deuet gwelloc'h a-benn d'en em zibab, a soñjas.

54

Marteze, a soñjas c'hoazh, n'eo nemet fouge eus va ferzh. Den ebet ne oar petra a rafe e lec'h unan all.

Sevel a reas da serriñ he stalafioù. Chomet e oa pell, beuzet en he soñjoù. Deuet e oa an noz.

(da genderc'hel.)

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Jord KLERG hag e wreg a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Nolwenn, d' an 11 a viz Kerzu 1972 e Allaire.

Bernez ha Marzhina GESTIN a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Riwanon, Marc'harid, Noela, d' ar 16 a viz Kerzu 1972 e Plougonven.

Anne-Marie AUDREN ha Jean-Christophe BOZEC a zo laouen o kemenn deoc'h int bet euredet e Montroulez, d' an 20 a viz Kerzu 1972.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' hor mignoned.

Kañv

Philippe LE GOUAILLE a gemenn deoc'h ez eo aet da anaon an Itron Joseph Le Gouaille, e Laval e miz Kerzu.

Hor gourc'hemennoù a gengañv a gasomp d' he ziegezh.

Hor c'houmananter Gwion LETARD - " MORLIGUEN " a zo aet da anaon d' ar 14 a viz Genver e Brest. Anavezet e oa mat gant Bretoned Pariz ha dreist-holl gant mignoned Kêr-Vreizh. Darn eus e varzhonegoù a oa bet embannet war niverenn 50 " Kannadig Kêr-Vreizh " warlene.

Hor gourc'hemennoù a gengañv a gasomp d' e vignoned.

Mantret-bras omp bet o klevout e oa bet lazhet Anna-Vari KONAN hag he merc'h Ivona en ur gwall-zarvoud e Laval-des-Rapides (Montreal, Kanada) d' ar sadorn 3 a viz C'hwevrer. Edont o vale war riblenn an hent pa 'z int bet diskaret gant ur c'harr ha lazhet o div. Douaret int bet e Perroz d'ar sadorn 10.

An tiegezh Konan a-bezh, a oa aet da vro-Ganada un 20 vloaz bennak 'zo, met Ivona a zeue tost bep bloaz en-dro da geñver Kamp ar Vrezhonegerien. Edo e Kemper en hañv-mañ o kemer perzh, evel bep bloaz, e renerezh ar c'hamp. Ur vrezhonegerez dispar e oa, hegarat ha prest atav da rentañ servij.

Ur c'holl bras eo adarre evit an emsav, rak Ivona a oa en he soñj distreiñ d' ar vro hepdale hag hor skoazellañ el labour divent hon eus d' ober.

En degouezh dic'hortoz ha rangalonus-mañ e pedomp hor mignon ha kenlabourer Jakez Konan, e vibien Erwan, Herve ha Gireg da grediñ e kemeromp perzh en o foan.

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e-kerz an daou viz diwezhañ :

Miz Du :

L. Orhand, 10 lur ; Y. Ar Gall, 10 ; Y.-V. Bouessel du Bourg, 50 ; M: J. Marot,

20.

- War un dro : 90 lur.

Miz KERZU : L. Andouard, 200 lur ; P. Rolland-Gwalc'h, 10 ; C. Barbotin, 10 ; V. de Bellaing, 50 ; J. Rivoal, 10.

- War un dro : 280 lur.

E 1972 ez eus bet profet 3.438,73 lur d' AL LIAMM.

Hor c'hef evit 1972

DISPIGNOU

Moulañ :

niv. 150	3.630,87	
niv. 151	4.734,87	
niv. 152	3.909,67	
niv. 153	3.682,84	
niv. 154	4.218,14	
niv. 155	3.862,51	
		24.038,90
bandennoù	177,35	
Mizoù-post	370,50	
Bruderezh	310,80	
Diseurt - Kenstrivadeg	524,00	
War un dro	25.421,55	

ENKEFIADURIOU

Koumanantoù	16.092,80
Niverennoù gwerzhet	2.222,30
Chomlec'hioù kemmet	19,00
Profoù	3.438,73
Diseurt	200,00
War un dro	21.972,83

STAD AR C'HEF

Gounid ar bloavezhioù all	+ 823,75
Dic'hounid 1972	- 3.448,72
Un toull er c'hef, d' an 31 a viz Kerzu 1972	- 2.624,97

An toull 2.624,97 lur a zo er c'hef er bloaz-mañ a c'hell bezañ displeget aes a-walc'h. E 1972, hon eus, evit ar wech kentañ, lakaet moulañ 1.000 skouerenn eus " Al Liamm " bep taol. O vezañ ma 'z eus 727 koumananter, e chome bep gwech 273 skouerenn, ar pezh a ra 1.678 skouerenn a re er bloaz. Ar re-mañ avat, a vo gwerzhet, tamm-ha-tamm, en doare ma teuio an arc'hant en-dro er bloavezhioù a zeu. Goulenn a reomp digant ar re a vank skouerenoù dezho o frenañ buan hag evel-se e rentint servij d' ar gelaouenn hag e vo lakaet dizale stad ar c'hef en he flomm.

57

727 Koumananter

Kontañ a raemp 727 koumananter e dibenn miz Genver, lodennet evel-hen :
Aodoù an Hanternoz, 113 ; Penn ar Bed, 187 ; Il ha Gwinum, 78 ; Liger Atlantek, 35 ; Mor Bihan, 50 ; Rannvro Bariz, 132 ; Departamantoù all, 66 ; Afrika an Hanternoz, 1 ; Afrika Du, 4 ; Iwerzhon, 11 ; Kembre, 12 ; Skos, 1 ; Bro-Saoz, 5 ; Sveden, 1 ; Alamagn, 6 ; Helvetia, 3 ; Izelvroioù, 6 ; Italia, 1 ; Belgia, 4

; Stadoù-Unanet, 2 ; Kanada, 4 ; Haiti, 1 ; Kaledonia Nevez, 1 ; Aostralia, 2 ; Japan, 1.

Kresket en deus un tamm niver hol lennerien abaoe miz Here diwezhañ (722 e oant neuze). Ar c'hresk a zo brasik e Aodoù an Hanternoz (113 : 103) hag e Penn ar Bed (187:176) e-lec'h ma tostaomp ouzh 200. Bez' ez eus un digresk er c'hontrol evit Il ha Gwinum (78 :87) ha Rannvro Bariz (132 :143). E gwirionez, hon eus bet kalz muioc'h eget 5 koumananter abaoe 3 miz. Hogen ul lod a zigoumanantidi hon eus ivez, ha tud hon eus ranket lemel o anvioù a-ziwar hor rolloù, rak ne zeuemp ket a-benn da gaout skodenn o adkoumanant. Kalz eus hol lennerien a cheñch chomlec'h ivez hag e-doug ar bloavezhioù diwezhañ, un toullad anezho a zo distroet d' ar vro.

Fellout a ra deomp kenderc'hel, gant skoazell an holl, da ziskoachañ lennerien nevez da astenn levezon ar gelaouenn.

58

Niverennoù kozh " Al Liamm " da werzhañ

Evel just e chom ganeomp c'hoazh kalz a skouerennoù da werzhañ, setu ar roll anezho adarre :

1, 2, 4, 5, 6, 7, 25, 29, 30, 32-33, 36, 37, 43, 53, 62, 63, 64, 65, 67, 69 betek 153 (nemet an niverennoù 98 ha 100 hag a zo diviet).

Priz an niverennoù a zo :

- 1, 2, 4, 5 : 4,00 lur ar pezh ;

- an niverennoù all : 6,00 lur ar pezh (nemet an niverennoù 32-33, 62, 65, 126, 151 hag a goust 8,00 lur ar pezh). Tu a zo da gaout ar bloavezhioù klok-mañ :

- 1959 (72-77) ; 60 (78-83) ; 61 (84-89) ; 62 (90-95) ; 64 (102-107) ; 65 (108-113) ; 66 (114-119) ; 67 (120-125) ; 68 (126-131) ; 69 (132-137) ; 70 (138-143) ; 71 (144-149) ; 72 (150-155).

Kalz a dud o deus prenet niverennoù kozh er mizioù diwezhañ hag o zrugarekaat a reomp.

Ar goulennou a zo d' ober da : P. LE BIHAN, 16, rue des Fours-à-Chaux, St-Servan, 35400 Saint-Malo. An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù-kas.

Hol lennerien a skriv

Digant an Dr. Tricoire : « Meur a wech, el LIAMM, evel e kazetennoù all, e komzer diwar-benn ar gitar (benveg sonerezh). Hag e lennan war hon niverenn 155 : « oc'h en em eilañ war e c'hitar ». Koulskoude, koulz e geriadur Gregor a Rostren, koulz hag hini Ar Gonideg e vez graet « kitar » (ar gitar) eus ar benveg-se. Peogwir e oa anavezet ar ger gwechall, ha brezhonekaet mat, o kemmañ dres evel kador, ar gador ne welan ket perak chom hep adkemer ar stumm brezhoneg kozh. Nemet, evel just, n' emañ ket ar geriadurioù kozh etre daouarn pephini. »

NOTENN : N'eus ket ezhom da gaout ar geriadurioù kozh, e gwirionez, n' eus nemet kemer hini Roparz Hemon, embannet e 1970 gant " Al Liamm ", evit kavout ar ger kitar. Prenit eta ar geriadur " brezhonek-gallek ", ennañ 848 pajenn an hini brasañ a gaver e gwerzh.

*

Digant R. R. eus Laruen : « Pell 'zo dija e fell din ober bruderezh e kelaouennoù Breizh evit ar pezh emañ oc'h ober. Da gentañ, skrivet em eus da V. Debré evit reiñ dezhañ da c'houzout ne felle ket din mont d' an arme. Meneget em eus emglev 1532, ha goulennet reoiadur eneberien ar servij soudard a zo bet

kaset din, evel just. (Bez' vo ur prosez a-benn un nebeut mizioù etre an eneberien hag ar gouarnamant).

Ne vefe ket fall ma nac'hfe kalz tud yaouank mont da ober o servij soudard (Bretoned yaouank).

Da c'houde, emeon o vevañ gant va gwreg hag hor poupig Gwendal en ur gêriadenn hon eus prenet gant mignoned. Emaomp o tiffraostañ an douaroù hag oc'h adsevel an tiez kouezhet en o foull. N' eo ket evit an douristed evel just. Amañ eo e fell dimp bevañ hep arc'hant ar C'hallaoued.

59

Ya, diaes eo bet dimp arboellañ peadra da baeañ koumanant-bloaz ho kelaouenn - an hini diwezhañ evidomp, sur a-walc'h.

Bez' ez eus tud yaouank all o vevañ dre amañ 'veldomp, e-kichen Laruen.

Pa vimp niverus a-walc'h, e vo tu dimp da nac'h ouzh an tailhoù, evel m' hon eus nac'het ouzh an arme.

Setu an daou dra am boa c'hoant da vrudañ e-touez tud yaouank va bro. »

*

Digant Bernez an Nailh : « Er pennad am boa kaset deoc'h eus Su-Amerika (hag eñ savet war ar prim) em eus kavet un nebeut fazioù am boa graet. Marteze e vefe tu da reizhañ an traoù ?

- pajenn 485, linenn 23 : « Appolo 17 » e lec'h « Appolo 1 6 » ;

- pajenn 487, linenn 22 : « prohobido » e lec'h « prohibido » ;

- pajenn 490, linenn 24 : « 1714 » e lec'h « 1707 » (feur-emglev stagidigezh Alba ouzh Bro-Saoz) ;

- pajenn 491, linenn 16 : « 1772 » e lec'h « 1672 ».

*

« ... Plijus eo atav " Al Liamm ". Met, dreist-holl e teu a-benn, bloavezhioù goude bloavezhioù, d' ho stummañ ha d' ho lakaat gouest da zerc'hel penn, d' ho kevredañ ivez. Trugarez deoc'h eta evi ho labour talvoudus... » - J. B.

*

« ... Gwir eo. Ar brezhoneg a zo kentañ arm an dispac'h evidomp. Arabat eo disoñjal kement-se. » - A. A. B.

*

Setu amañ al lizher hon eus bet digant Vefa de Bellaing war-lerc'h douaridigezh Ivona Konan hag he mamm :

« Keneil ker,

Setu ni distroet d' ar gêr goude an obidoù ken trist se. Lavaret ur c'henavo diwezhañ da Ivona Konan ha d' he mamm.

Ha merzet hoc'h eus penaos, er vered, e chome an holl - kozh ha yaouank - dilavar, dindan samm du ar glac'har.

Nijal a rae e spered pep hini, eñvorennoù miret gantañ eus Ivona. Darn a soñje en he hegarated, en he zemspered sioul ha poellek, darn all en he c'hanaouennoù un drugar o c'hlevout, darn all c'hoazh en he c'huñvelezh drant, hag an holl, o prederiañ war tonkadur mab-den, a lavare enno o-unan : « Perak ? Perak int o-div, p' he doa Brelzh ezhomm diouto ? » Daoust hag ar respont a vefe : « Peogwir ne c'hell ket skouerioù 'zo padout pell ».

Evidon-me, ne welen Ivona nemet eizh deiz bennak hep bloaz, da vare Kamp ar

Vrezhonegerien.

Soñj hoc'h eus ? A-wechoù e kemenne-hi dimp en a-raok, an deiz ma errufe er c'hamp. Gwechoù all ne lavare netra, hag a-daol-trumm e rede ar c'heloù : « Ivona a zo erru ! », hag an holl da zeredek daveti evit he c'havout e porzh ar skol, ur mousc'hoarzh tener war he muzelloù, he malizenn bounner en he c'hichen, eürus d' en em gavout ur wech c'hoazh en hon touez, treuzet ganti ar Mor Atlantel evit adkejañ gant he mignoned bodet e K.E.A.V.

60

Hor skoazellañ a rae er renerezh e-pad ar C'hamp, ha prest e oa da gemer muioc'h a giriegezh pa vije distro da Vreizh evit mat. Kontañ a raemp warni, rak gouzout a raemp e oa-hi ur plac'h d' he ger.

Bras eo hon doan, Ronan, dimp-ni renerien, ha da izili hor C'hevredigezh. Ar re-mañ o deus kollet ur c'hoar karet-dreist, ha ni a goll ur genlabourerez dispar.

Ne glevimp ket mui mouezh Ivona en hor beilhadegoù, ne welimp ket mui he dremm mousc'hoarzhus, met bepred e chomo e K.E.A.V. an eñvor eus he emzalc'h karantezus evit pep hini ac'hanomp.

Ra vo Jakez Konan hag e vibien, frealzet, m' az eus tu, gant al liamm a gengarantez a welomp en-dro dezho ! »

Barr-Heol

Niverenn 75 Barr-Heol a zo degouezhet ganeomp. Un niverenn fonnus eo peogwir ez eus enni 79 pajenn ha pennadoù a bep seurt. Meur a hini anezhe skrivet gant an Ao. Klerg e-unan, en o zouesk ur gontadenn Nedeleg skrivet brav-tre. A-hend-all ez eus studiadenoù, keleier a bep seurt ha barnadenoù. Unan a zo ivez diwarbenn " Al Liamm ". Tamall a ra hor mignon (qui bene amat bene castigat, na petra 'ta !) d' " Al Liamm " yezh an notenoù hag ar « perlez » a gaver enne e-keñver skritur pe kemmadurioù (nebeutoc'h koulskoude eget a vioù-koukoug e " Barr-Heol " !). Un digarez avat a zo : an notenoù a vez alies savet buan ha kaset d' ar mare diwezhañ d' ar mouler. Klemm a ra ivez, gant gwir abeg, ouzh ar stumm ma vez skrivet anvioù Breizh-Uhel 'zo. « Ret e vefe da vihanañ da genlabourerien " Al Liamm " kaout etre o daouarn levrig T. Jeusset embannet gant Al Liamm end-eeun, pe sellout ouzh geriadur Roparz Hemon ». Gwir eo. Siwazh ! levr Jeusset zo peurwerzhet pell 'zo abaoe hag an anv " Plemet ", n' emañ ket er geriadur.

Trimiziek, koumanant : 20,00 lur. Revue " Barr-Heol ", c.c.p. 24M-53 Rennes.

Hor Yezh

Niverenn 81-82 Hor Yezh a zo skrivet penn-da-benn gant Gwennole Ar Menn. Ur studiadenn ouziek diwar-benn an anvioù-lec'h. Savet eo bet goude bezañ lennet levr an Ao. Falc'hun : " Les noms de lieux celtiques ".

Peder niverenn : 20,00 lur. P. Denis, c.c.p. 1499 51-M Rennes.

61

Gwiadenn ar Vuhez - Studi hag Ober

Emañ " Studi hag Ober " (niverenn 15) o paouez embann strobard barzhonegoù Benead. Ar re-mañ, 21 anezho a zo bet skrivet etre 1942 ha 1972 ha lod anezho a zo bet embannet war " Al Liamm ". Ur blijadur eo kavout dastumet barzhonegoù

kizidik Benead. Diskouez a ra enne he c'harantez evit pep tra krouet gant Doue, al loened, kizhier hag evned dreist-holl, hag an Natur a vez diskrivet brav bep gwech.

An darn vuiañ eus ar barzhonegoù zo relijiel, an taolennadurioù eus an Natur o klotañ gant stad ene ar barzh, karantez Doue, stourm an ene, drein ar vuhez, kozhni, hiraezh d' ar vuhez all. Nann, ar wiadenn n' eo ket disneuz na digened tamm ebet, evel ma laver Benead gant re a uvelded, ur feunteun a freskter ne lavaran ket.

Ul levrenn 31 pajenn, roneoskrivet : " Studi hag Ober ", Keresperzh, 22 Louaneg.

Breizh pop

E Kembre eo krog mat, pellik zo dija, ar ganerien yaouank da entanañ ar yaouankizoù ouzh ar yezh. Dafydd Iwan, an hini brudetañ anezho, zo bet meur a wech en toull-bac'h dre m' emañ ivez e penn Cymdeithas yr Iaith (Kevredigezh ar Yezh). A-founn e vez kavet pladennoù pop kembraek da brenañ er stalioù. Ha ken niverus all eo ar festivalioù pop a vez gwelet enno bouchadet stank ar re yaouank. Ha n' eo ket hepken tonioù luskellerezh karantez a vez kanet enno met kanaouennoù engouestlet ivez e buhez ha poanioù ar vro vihan-se. Kembre o tihuniñ diwar ganañ. Ha diougan zo e Breizh da welet hevelep tra ? Ur mare zo bet ne veze klevet anv nemet eus Glenmor. Hag a-greiz-holl setu ur strobard kanerien all o tiwanañ. Hag o tapout brud buan a-walc'h. Brud en o bro evel just. Evit lod anezho eo aet o brud d' an estrenvro. Hag int, war he lerc'h ! Siwazh deomp.

Un ti embann pladennoù zo bet savet e Breizh. Kelenn e anv (embann a ra ivez levrioù a-hend-all). Ha setu deut er-maez a-zindan ar wask un toullad pladennoù. Embannet ez eus bet gantañ nevez zo teir bladenn all. Hor prof kalanna. Unan anezho zo gant Diaouled ar Menez : un hanter dousennad paotred eus a gostez ar Menez Du a lak ar vombard da genglotañ gant ar gitar hag an akordeoñs. Sonerezh diaoulek ken ez eo zo ganto. N' eus nemet goulenn gant ar re a zo boas ouzh ar festoù-noz evit klevet e vez buhez en dro zañs ha skañv ar pazioù pa vezont o kas ar c'horoll en dro. (Diaouled ar Menez " En dro, Ton doubl ", ur bladenn 45 tro.)

Gant Gweltaz ar Fur eo bet graet ar bladenn all. Unan oa bet aozet gantañ dija e derou ar bloaz. D' hor meno eo gwelloc'h homañ. Aet eo war wellaat e vouezh. N' eo ket kerkoulz ar sonerezh avat. Gwir eo e oa bet harpet ar wech kentañ gant ar strollad seniñ An Dilenn.

62

An trede pladenn deut er-maez zo unan vras 33 zro. Aozet eo bet gant ur strollad sonerien eus Naoned. *Tri Yann an Naoned*, pevar anezho evel just. Ober a reont gant mouezhioù ar gitar, an armonika, ar bandjo, ar violons, ar fleüt, al loaioù ha me 'oar me... hag o mouezhioù dezho o-unan evel just. An tonioù zo eus Breizh-Uhel dre vras. Tonioù divroet - war-lerc'h an dud - kalz anezho, hag adkavet e Bro-Gebek a-wechoù. Div ganaouenn war an disk zo e brezhoneg ; n' int ket ar re wellañ siwazh.

Ur bladenn zo deut er-maez ivez gant hor mignon Youenn Gwernig. Un arzour penn-kil-ha-troad eo ar paotr-mañ. Dont a ra kenkoulz gantañ ur c'hrav d' ur gitar hag un dro gant e bluenn pe un taol kizell. Ur barzh gwirion. Test da boanioù ha gouestloù e bobl. « Tap da sac'h breur kozh » zo unan eus e ganaouennoù, « da glask labour eo ret monet » : an divroañ, kudenn beurbadel gouenn ar Vretoned. Met n' eo ket ar barzh mouezh an dic'hoanag ; bez' eo ivez an hini a galoneka, an hini a « wel » ar beureoù sklaer a savo arc'hoazh : « Ni hon unan » eo e eil sonenn. Un troc'had mat a zen, un troc'had mat a venozioù hag a galonegezh. Sed Youenn Gwernig. N' eo ket eus gouenn ar re, brammet ganto un tammig uheloc'h eget o reor, ken eo bet klevet an trouz e Pariz, n' int ket bet evit miret a vont da ziskouez o fennoù a-dreñv war leurennoù ar gêr « Gapital ».

Gant ma vo c'hoazh brammoù all e Breizh met reoù na vo klevet diouto e Pariz nemet ar c'hwez.

L. K.

Kelenn : 21, plasenn Baratoux, 22000 Sant-Brieg.

Pa oa an Havr-Nevez war hent Breizh da Vreizh-Veur

N' eus ket keid-all zo c'hoazh ez aed aliesik a-walc'h dre an Havr-Nevez evit kas kaol-fleur eus Breizh da Vreizh-Veur. An hent berrañ sur mat. Ne oa ket da souezhiñ pa ouezer, ha Breizh mor en he zro, ne oa he c'henwerzh ezhporzhañ dre vor nemet 1,6 % eus hini Bro-C'hall. Ha ne oa nemet 5,3 % eus he c'henwerzh diavaez a veze graet gant Breizh-Veur.

Arabat lavaret eo cheñchet penn e ar vazh. Hogen ur c'hammed kentañ zo bet graet evit digeriñ an hent reishañ a zo etre al ledenez hag an enezenn da lavaret eo an hent war-eeun. Dre ma 'z eus bet aozet ur porzh-mor don e Rosko ez eus bet tu da sevel ur gompagnunez karriou-ferry etre Rosko ha Plymouth e Kernev-Veur.

" Kerisnel " eo anv al lestr kentañ a zo war vor abaoe derou ar bloaz. Unan all, " Penn-ar-Bed " e anv, zo war ar chanter evit c'hoazh. Ne vez kaset betek-henn nemet kamionadoù boued. A-benn an diskar-amzer emeure soñj degemer beajourien ivez hag o c'hirri-tan. Emañ ar gompagnunezh gant ar meno da sevel ul linenn all etre Breizh hag Iwerzhon.

A-raok fin ar bloaz eta e vo tu da vont d' ober un dro da Vreizh Dramor dre vor hep bezañ rediet da dremen dre Cherbourg pe an Havr-Nevez. Ur c'heloù mat evit ar re yaouank stankoc'h-stankañ a vez gwelet bremañ a-hed an hañv o strañ o vakañsoù dre hentoù Breizh o hendadoù.

L. K.

Ha pareet eo ar CELIB ?

Darn a lavare e oa gwall glañv. Ur pennad zo e veze tamallet outañ sevel kinnigoù hep dont morse a-benn da lakaat anezho da zont da wir. Abeg e oa outañ dre ma chome re stag ouzh ar gouarnamant. Aes eo da gompren, eme dud zo, ne yafe ket Pleven, rener anezhañ, da sevel enep ur gouarnamant ma 'z eo, eñ e-unan, ministr anezhañ.

Hag un emvod meur e Pondi d' an 29 a viz Gwengolo. Lakaet e oa bet an afer da vrudañ en a-raok. Ken e c'hortoze ar Vretoned nuspetañ taol burzhud a vije da c'hoarvezout eno.

Diouzh a seblante, en deiz war lerc'h, n' o doa gwelet ar re a oa bet atizet da vont di na burzhud na taol dispac'h ebet. Cheñchet ar mestr (lakaet e Penn an Ao. Lombard, maer Brest), divizet sevel ur program labour war ur bloavezh, aet tud an tu kleiz er maez, setu berr ha berr darvoudoù an devezh. Hag e skrive c'hoazh ar c'heiaouennoù : Pareet eo ar CELIB ?

Tri miz zo abaoe. Daoust hag aesoc'h eo deomp respont bremañ ? Meur a dra zo da welet. Mennet ha mennet mat eo ar re a zo e penn ar CELIB da gas ar strollad war-raok ha da gas da benn al labour a zo bet lakaet war ar roll evit ur bloavezh. C'hoantoù gwirion pe komzoù flour ? Diouzh o youl da stourm ha da chom dibleg e vo an disoc'hoù. Rak arabat eo disoñjal eo gwanoc'h ar CELIB bremañ dre m' eo aet darn er-maez dioutañ. Tud o deus kavet gwell, a-raok ar votadeg, tec'hout diouzh ur strollad a zo bet re bell e interestoù stag ouzh re tud ar

c'hreiz pe an tu dehou. Met gwelet e vez dija darn anezho o tont da c'houlenn sikour en-dro gant ar CELIB. Marteze e vint gwelet en-dro e-barzh goude ar votadeg.

Hep an tu kleiz hag ar sindikadoù e vo diaes d' ar CELIB dont en-dro da vezañ ar pezh e oa er bloavezhioù 61 ha 62. Da lavaret eo nerzh an holl Vretoned unanet da lakaat ar gouarnamant da blegañ evit gwellañ mad ar vro. Soñj hoc'h eus eus ar bloavezh 1961 ma voe miret ouzh ar gouarnamant lakaat priz an trenioù da greskiñ e Breizh. Kresk a oa bet divizet dre ma ne oa ket tu d' ober kement a c'hounid amañ hag e lec'h all. Renet e voe ar « Brezel ar railhoù » -se gant holl labourerien hor bro, ar CELIB en o fenn.

Ar CELIB, avat, en deus boulc'het labour dija. Emvodoù-studi niverus zo bet gant an holl gevrennoù anezhañ. Ha kevrenn ar yezh hag ar sevenadur n' eo ket prest da vezañ an hini sioulañ. Renet eo bremañ gant hor mignon Per Denez. Savet ez eus bet ganti ur roll goulennoù a vo klasket lakaat da dalvezout gant ar CELIB.

Diouzh he labour hon eus barnet dija kevrenn sevenadurel ar CELIB. Gant ma vimp gouest hep dale da stagañ hevelep barnadenn war ar strollad a-bezh. Rak ezhomm bras zo eus seurt talbenn e Breizh.

L. K.

64

A-zivout arnodennoù nukleel ar C'hallaoued er Mor Habask

(Ergerzhadenn un Aostraliadez yaouank e Pariz.)

Lec'h an arvest-mañ zo Palez al Luksembourg, ti ar Sened gall war ribl kleiz ar Saena. 2 eur 1/2 goude kreisteiz eo.

An dimezell Willesee, merc'h ar senedour aostraliat Willesee, a zegouezh dirak ar gael. Ur gefridi he deus, klask skoazell evit an enebadennoù aostraliat e-keñver arnodennoù nukleel ar C'hallaoued er Mor Habask. Ar gefridi-se a zo skoazellet gant Kuzul ar Sindikadoù micherel aostraliat, Kuzul Bed an Ilizoù, strolladoù studierien ha kevredigezhioù merc'hed.

Klasket he deus en aner, gwelout ar prezidant Pompidou hag ar Penn-ministr Chaban-Delmas. Setu hi neuze o klask kaout sikour ar senedourien. Ne dalvez ket ar boan, evel just, mont da gaout Gaullisted o vezañ ma harp ar re-mañ (a-bell, 349 war 459, niver-muiañ kannaded ar Parlamant) gant o holl nerzh, ha zoken en un doare diboeall-tre an arnodennoù nukleel. Siwazh, François Mitterand, penn-rener ar sokialourien, a zo e Vienna (Aostria), o kemer perzh en ur vodadeg politikel, ha setu ez a da welout ar gomunisted, ar re-mañ, dilennet gant 24 % voter Bro-C'hall.

Ar strolladoù sokialour ha komunour a zo krenn a-enep an arnodennoù. Ar senedour komunour Roger Gaudon a resev anezhi seven-tre en e vurev ha diskleriañ a ra dezhañ he c'hefridi dre hanterouriezh ur jubennour - daoust hag e c'hellfe an eneberezh sikour anezhi da lakaat war droad ur vodadeg pe ur vanifestadeg e Pariz ? Ar senedour Gaudon a sav e zivrec'h d' al laez gant glac'har. «Dimezell, emezañ, emañ ar Parlamant o vont e koñje warc'hoazh ha ne zeuio ket en dro a-raok miz Gwengolo ».

Ur mare fall.

Ur mare fall eo evit klask lakaat war droad bodadegoù pe vanifestadegoù. Emañ an holl e Pariz oc'h ober pakadoù evit mont d' ar mor pe d' ar menezioù. Lavarout a ra d' an Dimezell e vo prestik an Emsav evit ar Peoc'h o kerzhout dre Bariz evit enebañ ouzh brezel ar Viet-Nam. Moarvat e vo honnezh an displegadeg diwezhañ ac'han da bell. Goulenn a ra raktal an Dimezell hag-eñ e c'hellfe kerzhout a-gevret ganto evel enebourez an arnodennoù nukleel - marteze zoken gant ur

skritell ?

Hejañ a ra ar senedour e benn ha lavarout a ra : An dra-se a vefe diaes tre da aozañ rak bez ez eus an Emsav-se 48 kevredigezh hag e vefe ret en em glevout gant pep hini da gentañ. Ha neuze, ouzhpenn se, displann e vefe an traoù ma kerzfe a-gevret eneberien an arnodennoù nukleel hag eneberien brezel ar Viet-Nam.

Aliañ a ra anezhi neuze, da vont da welout renerien an Emsav gall evit ar Peoc'h. Ar re-se, emezañ, a c'helife, moarvat, sikour anezhi da aozañ ur vodadeg kelaouennerien pe un emwel. War se, pellgomz a ra da Emsav ar Peoc'h ha setu ma vo tu da gaout un emwel an hevelep deiz.

Mont a ra goude se gant he jubennour da Gevredigezh al Labour, hini vrasañ Bro-C'hall. Ar Gevredigezh he deus 2.000.000 ezel, holl a-du gant kefridi an Dimezell. Gant ur c'hruz divskoaz, avat, e tisklerjont ne c'hellent ket, siwazh, ober kalz a dra eviti. Komzoù hegarat he doe, ha netra ken, ur wech muioc'h.

65

Kejañ a reas, diwezhatoc'h, gant kelaouennerien en aerborzh Orly hag ar re-mañ a voe digalonekaüs tre. Sellout a rejont outi eus krec'h d' an traoñ gant fae hag e c'houlennjont hag-eñ e c'hoarie tennis evel Dawn Fraser. Hag i da c'hoarzhin pa lavaras an Dimezell e oa he c'hefridi un dra sirius. Ur c'hwitadenn penn-da-benn eta, eo bet beaj Geraidine Willesee (fentus a-walc'h " Willesee " = fellout a ra din gwelout) peadra da vezañ heuet gant doare ober ar C'hallaoued.

Roland PULLEN, kelaouenuer aostraliat.

Diskleriadur Arzhourien Vreizh

Abaoe un nebeut bloavezhioù eo deuet war wel, gant kresk ar stourmoù e Breizh, un hent nevez evit ar ganerien da labourat. Kement-se en deus lakaet kanerien, barzhed ha sonerien Vreizh d' en em unaniñ.

Dleout a ra pep kaner breizhat skoazellañ stourmoù Pobl Vreizh evit he dieubidigezh bolitikel, armerzhel, sevenadurel ha kevredigezhel (Joint Français, Batignolles, Oraly e Gwidel, Kaolin e Plouvael, prosez an FLB, manifestadegoù evit ar yezh...).

Da heul e tleomp bezañ ivez kengret gant kement stourm, heñvel ouzh hon hini er bed a-bezh. Setu perak e harpomp stourm an holl bobloù hag an holl vihanniveroù a-enep an impalaerelezh, ar gevalaouriezh ha kement gwaskerezh politikel ha sevenadurel a zo (Bro-Euskadi, Katalounia, Korsika, Iwerzhon, Vietnam, ar Gurded hag all).

Merzout a reomp :

- e vez mouget nerzh krouiñ ar bobl gant ar mass media evel ma vez implijet gant ar vourc'hizien (kelaouennoù, skinwel, skingomz, tiez-embann ar pladennoù...) ;

- e vez gwasket lusk ar reizh evit tennañ gounid anezhañ (kanaouennoù karantez, balioù evit degas arc'hant).

A-ratozh e vez graet kement-se evit gounid arc'hant.

Nac'hañ a reomp d' an embregerezh diotaat-se, renet gant ar show-business ". A-viskoazh omp bet ha da viken e vimp un arm e servij Pobl Vreizh.

Flessala d' an 12 a viz Du 1972.

Mikael Basire, laz-seniñ ar Bilhaouerien, Fulub Bonnier, Jil Cardon, Gerard

Delahaye, laz-seniñ Diaouled ar Menez, Padrig Even, Ferrec, Glenmor, Xavier Grall, Alan Guel, Youenn Gwernig, Gweltaz, Paol Keineg, Serj Kergiduff, Evgen Kirjuhél, Kristell ha Lama Meur, Erwan ar Brenn, Rene ar Marer, Padrig ar Mañson, Youenn ar Menn, laz-seniñ La Jeune Garde, Myrddhin, Yann-Ber Piriou, Youenn Roussel, laz-seniñ Rowling Gamblers, Jil Servat, laz-seniñ Son ha Dispac'h, laz-seniñ Tri Yann an Naoned, Yann-Ber ha Mikael.

66

Kemennadur

Skourr Brest o tilezel ar Strollad " Breizh Yaouank " .

Skourr Brest " BREIZ YAOUANK " a zo a-enep krenn d' ar menozioù-stur ha d' an doareoù-ober a zo bremañ re ar Strollad " BREIZH YAOUANK ", menozioù ha doareoù hag a zo bet diskouezet splann e Pondivi d'ar 26 a viz Du 1972, da geñver an Devezh evit ar Brezhoneg.

Setu perak en deus Skourr Brest roet e zilez eus ar Strollad d' an 23 a viz Kerzu.

Izili ar Skourr a roio da anaout diwezhatoc'h an doare-stourm o devo dibabet.

Skourr Brest o tilezel eus ar Strollad.

Sonadeg evit bombard hag orglez

Ne oa ket bet ret gortoz donedigezh Yann-Glaoda Jegad da c'houzout e oa ar vombard ur benveg gouest da vezañ heson. Ouzhpenn 10 vloaz 'zo endeo e oa graet ar brouenn-se gant Kristian Hudin da skouer war ur bladenn 45 tro embannet gant Kevrenn Roazhon ha bamus a-walc'h er feur-se. Ha piv n' en deus ket anavezet e-un un talabarder donezonet gouest da dennañ eus e venveg notennoù flour ? Brudet eo a-bell 'zo a-hend-all er sonerezh uhel c'hoari a-gevret an drompilh hag an orglez. Boas e vezer ivez da glevet en ilizoù son ar biniou. N' eus ket da souezhiñ re neuze ez eo bet klasket kevredañ ar vombard gant an orglez. Mat eo an degouezh ha dreist zoken pa vez kont eus arzourien evel Yann-Glaoda Jegad ha Loeiz Ihuel. Tro am eus bet d'o c'hlevout en iliz Parame d' an 28 a viz Kerzu. Hag evel darn vrasañ an 250 bennak a dud en em vodet eno on bet gonezet. Kavout a ra din ez eo marteze muioc'h en e vleud Yann-Glaoda Jegad war an tonioù-koroll eget war ar c'hantikoù. Tonioù gwenedat a oa dreist-holl ha displeget o deus ivez an daou soner daou bezh savet gant Loeiz Ihuel, ograouer dall, ha plijus-mat o-daou. Ar c'houbl nevez a zo deut da vezañ brudet bremañ dre ar skingomz ha dre o fladennoù, a zo bet embannet endeo teir anezho, hag ar Pellgent diwezhañ, lidet en iliz Merlevenez, a zo bet kaset en-dro ar sonerezh anezhañ ganto o-div. Setu c'hoazh un doare o tiskouez liesdremmoù Breizh oc'h adc'henel ha nerzh-krouiñ he mibien oc'h adkavout o bro. Kement-se a zo mat ha konfortus ouzhpenn evidomp war an hent pell a chom d' ober. Met ur bobl oc'h adkavout he sonerezh a vo gouest da adkavout hec'h ene.

P. A. B.

67

Bruderezh evit ar Brezhoneg

Ur brezegenn diwar-benn ar brezhoneg a zo bet graet e Sant-Malo, e sal Santez-Anna, d' ar 14 a viz Kerzu, gant Per Denez.

Aozet oa bet gant Kreizenn Sevenadurel Sant-Malo. Ur 80 bennak a selaouerien a oa deut ha bev ha dudius e voe ar brezegenn hag an diviz da c'houde. Daou studier eus Roazhon o doa digoret hag echuet an abadenn gant bommoù kan an diskan. Ouzhpenn, un toullad kaer a levrioù o doa kavet gwerzh (reoù Per Denez hag embannadurioù " Al Liamm ").

Kemennadenn

Here 1972 - Prosez Breizh : un deiziad a-bouez en istor ar stourm evit Breizh.

Skipailh ar gelaouenn SAV BREIZH n' eo ket bet a-walc'h dezhañ teurel ur sell sioul ha dibreder war an darvoudoù. Adalek an harzadennoù kentañ en deus kemeret perzh oberiant er skoazell bolitikel d' ar vac'hidi.

Hiziv eo poent tennañ ar gentel eus an darvoudoù hag evit se eo aet SAV BREIZH ouzh an holl re o deus « graet » ar prosez : bac'hidi, alvokaded, kuzulioù-harpañ Breizh ha Pariz, testoù, kelaouerien...

Frouezh al labour-stroll-mañ eo niv. 12 SAV BREIZH, un niverenn ispisial anezhi, gouestlet penn-da-benn d' ar prosez, a zeuio er-maez war-dro fin miz Genver. An niverenn-mañ ne vo ket tu da dremen hepti pa fello d' an den kompren prosez an F.L.B. Bez' e vo anezhi hiviziken an diell diazez, an testeni diarvar nemetañ d' an nep piv bennak a rayo e doare pe zoare war-dro ar prosez.

Goulennit anezhañ hep gortoz ken, pe, kentoc'h, koumanantit. Dreist-reol e vo kaset SEIZH niverenn evit priz c'hwec'h (30 lur) da gement hini a goumananto a-benn embannidigezh an niverenn 12.

SAV BREIZH - B.P. 96 - 29103 Quimper - C.C.P. 525-59 Nantes

Evel just ez eo gant plijadur e kasimp deoc'h ur skouerenn eus an niverenn-mañ kerkent ha ma vo embannet. Ho trugarekaat hag ho pediñ a reomp, Aotrou Rener, da grediñ e chomomp a galon atav ganeoc'h evit Breizh.

Mennadoù-diazez - Kuzul " Yezh ha Sevenadur Breizh " ar C.E.L.I.B.

Setu amañ ar roll-mennadoù diazez a zo bet savet gant Kuzul " Yezh ha Sevenadur Breizh " ar C.E.L.I.B., en e vodadeg eus an 2 a viz Kerzu. Un 60 den bennak, o tont eus perzh un niver emsavioù disheñvel, a zo bet bodet d' an devezh-se e Skol-Veur Breizh-Uhel e Roazhon, ha ganto eo bet savet ar rollad a vo kavet amañ da heul. N' eus ket tu da gemer da ziazez nebeutoc'h eget ar rollad-se. Ar seurt rollad mennadoù, ma vefe degemeret ha lakaet da dalvezout gant ar galloud, a ziskouezfe, diouzh un tu, en deus paouezet ar galloud gant e youl da zistrujañ yezh ha sevenadur pobl Vreizh ha, diouzh an tu all, a rofe tro da ober labour talvoudus evit adsevel yezh ha sevenadur pobl Vreizh. Degemeret eo bet an destenn-se evel roll-mennadoù ar C.E.L.I.B. e bodadeg ar C'huzul-Meur, d' an 18 a viz Kerzu, e Sant-Malo.

68

Deskadurezh uhel.

1. Aotreegezh keltiek. Meur a wech eo bet goulennet an aotreegezh keltiek gant Kuzulioù Skol-Veur Breizh-Uhel ha Skol-Veur Breizh-Kornog, gant ar sindikadoù, gant an emsavioù studierien ; atav eo bet nac'het. Ma vije krouet an aotreegezh-se, e vefe tu da reiñ d' an danvez-kelennerien war ar brezhoneg deskadurezh koulz hag an hini a vez roet d' an danvez-kelennerien war ar skiantoù all.

2. Kevrenn ar brezhoneg er C.N.R.S. Diouzh al labour-enklask a vezo graet e vezo

kelennadurezh ha deskadurezh ar brezhoneg. Bez' e tleer kaout, er C.N.R.S., ur gevrenn gouestlet d' ar brezhoneg oc'h ober labour a-stroll hag o prederiañ dreist-holl gant an tri danvez-mañ : 1. Sevel ur geriadur eus ar brezhoneg skrivet ; 2. Dastum teñzor ar brezhoneg komzet, hervez reolennoù ar yezhoniezh a-vremañ ; 3. Aozañ doareoù-kelenn nevez hag a-vremañ evit ar brezhoneg.

3. Kelenn ar c'heltieg e Skol-Veur an Naoned. Meur a wech ez eus bet goulennet ma vefe kelennet ar brezhoneg e Skol-Veur an Naoned ; da gentañ eo ret kaout eurvezhioù-kelenn, d' an eil ur gevrenn. Kantadoù studierien o deus sinet, e 1972, ur goulenn evit-se.

4. Kargoù nevez ar c'hevrennoù keltiek. Dister-truezus e chom niver ar c'hargoù-kelenn e kevrennoù keltiek ar Skolioù-Meur. Da skouer, e Roazhon, 3 den o kelenn evit 500 studier. Ret eo kaout kargoù nevez evit ar c'hevrennoù keltiek.

Deskadurezh eil derez, teknel ha labour-douar.

1. Ar brezhoneg yezh vev. Bez e tle ar brezhoneg bezañ kelennet evel ar yezhoù all, an eurvezhioù brezhoneg a zle bezañ lakaet war roll-labour ar skol, paeet ar gelennerien evel evit an danvezioù-all.

2. Ar brezhoneg er vachelouriezh. Un arnodenn vrezhonek, heñvel ouzh an holl arnodennoù all, a rank bezañ er vachelouriezh. An arnodenn-se a zle bezañ anezhi en holl rummadoù ar vachelouriezh.

3. Kelennerien war ar brezhoneg. Koulz e tle bezañ ar c'hentelioù brezhoneg hag ar c'hentelioù gwellañ war an danvezioù all. Gant se e tle ar gelennerien war ar brezhoneg kaout devezhioù-studi, skolioù-neveziñ-gouiziegezh, kuzulierien hag ensellerien war ar c'helenn. Un C.A.P.E.S. keltiek a rank bezañ krouet, evit digeriñ un hent d' ar gelennerien en-o-c'harg war ar brezhoneg.

4. Arnodenn vrezhonek er B.E.P.C. hag er brevedoù ha C.A.P.-où a bep seurt. Ar brezhoneg a zle bezañ kinniget evel danvez en holl arnodennoù-se.

5. Arnodenn vrezhonek evit mont e-barzh c'hwec'hvet klas al liseoù. Ar brezhoneg a zle bezañ kinniget evel danvez d' ar re yaouank o deus da dremen an arnodenn-se.

69

Skolioù kentañ derez ha skolioù-mamm.

1. Ar brezhoneg er skolioù kentañ hag er skolioù-mamm. Rankout a ra ar brezhoneg kaout e lec'h en deskadurezh kentañ hag er skolioù-mamm, diouzh an doareoù-kelenn nevesañ.

2. Deskiñ skolaerien ha skolaerezed. Un deskadurezh a-ratozh a rank bezañ roet, devezhioù-studi, skolioù-neveziñ-gouiziegezh a rank bezañ aozet.

3. Arnodenn vrezhonek er C.E.P. Un arnodenn e brezhoneg a rank bezañ kinniget er C.E.P.

Skingomz ha skinwel.

1. Skingasadennoù. Goulenn a reer evit ar skingomz, teir gwech keleier bemdez, ha div eurvezh skingas brezhonek bemdez ; evit ar skinwel, div wech keleier hag un eurvezh skingas brezhonek bemdez.

2. Sekretourva brezhonek. Ur sekretourva brezhonek, oc'h ober war-dro ar skingasadennoù brezhonek, stag ouzh renerezh an O.R.T.F. e Roazhon, a rank bezañ savet.

Istor ha Sevenadur.

O lec'h a zle bezañ roet da Istor Breizh ha da Sevenadur Keltia en deskadurezh

hag en ensavadurioù-sevenadur. Aozerien ha monitourien barrek war Sevenadur Breizh ha Keltia a rank bezañ lakaet e servij an Tiez-Yaouankiz, an Tiez ar Sevenadur, hag all.

Buhez foran ha buhez ar Stad.

1. Ar brezhoneg en arnodennoù kargidi. Ar brezhoneg a rank bezañ unan eus an danvezioù kinniget en arnodennoù goprañ kargidi dindan ar Stad pe dindan aozadurioù stag ouzh ar Stad.

2. E lec'h a rank bezañ anavezet d'ar brezhoneg er vuhez foran hag e buhez ar Stad. Echu e tle bezañ da vat gant an doare ma vez dianavezet pe izelrenket ar brezhoneg er vuhez foran. Ar gwir a zle bezañ anavezet d' ar vrezhonegerien da ober gant o yezh en o darempredoù gant ar velestradurezh. (Da skouer, pannelloù-hent divyezhek a rank bezañ savet a-hed an hentoù e Breizh.)

Al levrioù

" Dialann Deorai " gant Dónall Mac Amhlaigh, - 178 p. - Embannet gant An Clochomhar Tta, Dulenn, evit an 3-vet gwech e 1969.

Talbenn al levr gouezelek-mañ a dalv kement ha : " Deizlevr un estrañjour ". Un estrañjour ? Ya da, peogwir ez eus kaoz ennañ eus un Iwerzhonad aet da labourat e Bro-Saoz. A zo muloc'h, hon Iwerzhonad a zo ur Gouezel anezhañ ha, war un dro, ur skrivagner ha setu perak en deus savet ul levr e yezh e vro evit kontañ d' e genvroiz e vuhez e Bro-Saoz.

70

Evel skrivagner, n' eo ket Dónall dianav da lennerien " Al Liamm " peogwir e voe komzet, amañ end-eeun, m' am eus soñj mat, eus ul levr all savet gantañ : " SAOL SAIGHDIURA " (Buhez ur soudard).

Ganet eo hor skrivagner e Cnoc na Carra, war-dro ul lev diouzh kêr C'halliv, er Gouezelva eta, er bloaz 1926. Kuitaat a reas ar skol d' e bemzek vloaz evit mont da labourat en ur vilin eoul, e kostez Kill C'hinnig ha goude, er Gouezelva adarre, e vereuri un eontr, hag en ostalerioù Galliv. Skuizh, moarvat, d' ober e Yannig Mil Vicher ez emouestlas en Arme iwerzhonat hag, el levr meneget a-us, e kont e vuhez e-pad an tri bloavezh a dremenas er batailhon gouezelek. Ur wech disoudardet, avat, ez en em gavas adarre dilabour ha dic'hopr betek an deiz ma kavas implij en ur c'hlañvdi eus Northampton, e Bro-Saoz.

Ma 'z eo eta Dónall Mac Amhlaigh ur skrivagner ez eo ivez un ermaeziad divicher anezhañ evel kant miliad eus e genvroiz a vez laouen da ober al labourioù kaletañ na fell ken d' ar Saozon ober. Rak-se, e c'heller, a gav din, lakaat keñver-ha-keñver, en ur mod bennak, ermaeziadeg Iwerzhoniz e Bro-Saoz gant hini an Aljerianed e Bro-C'hall. Ur sellour mat eo ivez Dónall eus er-maezidi e vro ha setu pezh a ro un dalvoudegezh vras d' e levr a grog e 1951 evit echuiñ e 1957. Un testen, o tont eus an diabarzh, diwar-benn an ermaeziadeg-se, setu petra eo " Dialann Deorai ".

Ur wech kuitaat an ospital ez eas Dónall da duriañ douar ha setu penaos e tanevell e zevezh kentañ en e vicher nevez : « Neuze e tiskouezas Maidhc Ned din penaos ober (al labour) ervat hep sevel kement ar bigell, dre c'hoari gant ar penn anezhi ha chom hep mont amañ hag a-hont ganti. Dont a reas gwelloc'h ganin goude hag e talc'his gantañ rak n' em boa ket c'hoant e lavarfe ar baotred all " Peseurt den eo hennezh ? N' eo ket barrek ". Labourat a rejomp eta ha pa erruas an ehan, da zek eur, e oa klogorennoù ganin em daouarn ha ken klañv e oa va c'hein ma vije bet lavaret e oa bet ur paotr ouzh en kannañ gant ur vazh » (p. 28).

Gwelet hoc'h eus, dre ar bomm a-zioc'h, ez eo eeun yezh ha doare-displegañ

Dónall. Displegañ an traoù, hag an darvoudoù evel m' o gwel, sed aze e bal. Hag o vezañ ma klask bepred kompagnunezh e genvroiz ha dreist-holl, ar Ouezeled eveltañ, war ar re-mañ eo e vez e sell o parañ peurliesañ.

Da gentañ-holl ez eo souezhet o welet pegen niverus eo Iwerzhoniz e Bro-Saoz. E kement lec'h ma 'z a e kav anezho kement ha ken bihan ma tiskler meur a wech, e vez klevet muioc'h a ouezeleg e lec'hioù 'zo eus Bro-Saoz eget n' eus forzh pelec'h en Iwerzhon (i).

71

M' hor bize muioc'h a amzer e c'hellfemp ober ur poltred klok eus Iwerzhoniz gwelet gant Dónall. O c'hortoz kement-se notomp gentañ e vezont re alies douget-kenañ d' ar boeson (ii) ha d' ar c'hoari (ii). Merkañ a ra ivez o spered kannus (iii) hag an tech o deus, lod anezho, da heñvelekaat ar Saozon (p. 8). A-wechoù, avat, e chom bamet dirak o c'halonegezh, o drantiz, o boaz hag o stumm da farsal, o c'harantez e-keñver o zud. Merzout a ra ivez e c'hellont ivez, a-wechoùigoù, ober berzh (s.o. ar baj. 44 pezh a skriv dwb. Lowery).

Amañ hag ahont e skriv ivez pezh a soñj diwar meur a gudenn evel an implij eus ar gouezeleg gant an ermaezidi pe eus ar saozneg er Gouezelva, pe diwar ar relijion, ar breuriezhoù-labour h.a. Merkomp ivez e veno diwar-benn Kembreiz, a zo souezhus a-walc'h : « Setu ar vrud o deus e-touez an holl dud ez eus anezho tud na c'heller ket kaout fiziañs enno... » (p. 143)

Ne vefemp ket prest da echuiñ ar pennad-mañ ma notfemp kement tra pouezus, heverk, pe dudius a zo el levr-mañ. Evel just n'hell ket Dónall chom hep keñveriañ stad Bro-Saoz hag hini e vro ken e skriv, da skouer, ar bomm heverk-mañ :

« N' eo ket alies on-me bet da Zulenn pe da Limnac'h (Limerick, e saozneg) nemet pep gwech m' on bet eno em eus merzet ar beorien gwisket-fall a veze gwelet (eno). Hag evit pezh a sell ouzh va broig kozh Galliv, liv ar baourentezh a zo warni. Bez' e c'heller kompren, evel just, n' hellomp ket bezañ ken pinvidik ha Bro-Saoz hogen emamp ken pell diouzh broioù bihan all evel an Danmark, ma rank bezañ un dra fall bennak (ganeomp) en un tu bennak » (p. 35).

Pezh a skriv diwar-benn stad ar medisinerezh en e vro hag e Bro-Saoz (p. 62) a zo ken souezhus ma talvezfe bezañ troet penn-da-benn e brezhoneg. Evidon a zo aet meur a wech en Iwerzhon n' hellan ket kadarnaat e veno rak n' am eus ket darempredet mezeged Iwerzhon.

A-walc'h am eus lavaret diwar-benn " Dialann Deorai " evit diskouez, a gredan, talvoudegezh al levr-se ha n' on ket souezhet ez eo studiet er skolicù-meur rak ez eus danvez ennañ da veur a studiaden.

Merzout a rin-me, evit klozañ ar pennad-mañ, n' hon eus levr ebet heñvel ouzh hemañ en hon lennegezh vrezhonek. Da nebeutañ n' anavezan hini ebet. Klask a reas, koulskoude, Meven Mordiern reiñ unan deomp gant " Eur Breizad er C'hanada ", embannet gant " Gwalarn " e 1933. Ne gredan ket, avat, e teuas a-benn eus e vennad. Da gentañ, daoust d' an Tonturier bezañ bet ur Breton mat ne oa ket heñvel, tamm ebet, ouzh an darn vrasañ eus hor c'henvroiz a zo bet ret dezho divroañ evit gonit o bara (1).

(i) O komz eus e diegezh e skriv (p. 173) : « Emañ Caolmhin e Daventry, Nollaig en Hampshire, Brian e Sussex ha Damhnait, hor c'hoar nemetken, e Londrez. Evel-se emañ e kalz tiez eus ar gêr-mañ hag en Iwerzhon a-bezh » ha, p. 142, da skouer, « Ur strollad a hanter-kant gwaz a zo o labourat evit Proctor, eus Manchester, hag ez int, an holl anezho, eus Enez Akla (Achaill e saozneg) eus ar penn betek ar c'heginer ».

(ii) Da skouer, e skriv p. 11 : « Epañ a ris ur banne... hag e welis ul lod mat eus ar baotred mezh-dall (caochta ar meisce) ».

(iii) p. 24, da skouer : « alies e vez " pitch and toss " o vont en-dro er-maez

eus er c'hclub pa vez echu ar c'horoll, pe e vez kann eno ; muioc'h a zudi a gemer ar baotred en traoù-se eget er merc'hed ».

(1) Le Tonturier, ganet e Krec'hen, « a yeas d' ar C'hanada ez-vihanik, nebeut amzer goude brezel 1870-1871. Dont a reas da vat-tre e studioù gantañ e Reter ar C'hanada hag er Stadou-Unanet. Kelenner e voe e meur a lec'h en Ontario... » (EUR BREIZAD ER C'HANADA, p. 7).

73

Da c'houde, pegen talvoudus bennak eo e lizhiri ne deont d' ober nemet a-boan an hanter eus al levr a zo 138 pajenn ennañ, ar peurrest o vezañ a-ziwar bluenn Veven Mordiern e-unan. Kentoc'h eget testeni un ermaeziad, ha nebeutoc'h c'hoazh unan war ermaeziadeg ar Vretoned, ez eo lizhiri an Tonturier « un daolenn wirion ha pizh... eus an harzoù hag an diaesterioù a gav un estranjour er C'hanada », evel ma lavarar el levr e-unan.

L. ANDOUARD.

" Le loup rouge " : romant gant Morris West - Fayard 1972

Anavezet mat eo ar skrivagner-se ha kalz ac'hanomp o deus lennet gant dudi levrioù evel « L'Avocat du Diable » pe « Les Souliers de Saint-Pierre » ha meur a hini all moarvat.

Gant e romant diwezhañ : « Summer of the Wolf » lakaet e galleg dindan an titl : « Le Loup rouge », ez eomp da hanternoz Bro-Skos.

A-raok skrivañ e levr en deus bevet Morris West meur a sizhun er vro-se ha plijet eo bet a dra sur ! Sellet en deus en-dro dezhañ gant daoulagad lemm ha digor-frank, ouzh ar gweledva evel ouzh an dud. Lavaromp diouzhtu ez eo ar romant un istor a garantez - hag a gasoni - diazezet, frammet start en ur vro geltiek : disheñvel, dister ha boutin e vefe bet an istor en ur vro all bennak, setu ar pezh a ra talvoudegezh al levr. C'hwezhañ a ra an avel war an torgennoù moal, harzhal garv e ra ar mor ouzh ar reier. Gwelout a reomp an deñved o kantreal war ar vruged, ar skreved o souchañ e don irvi an taouarc'heg pa vez an noz kevrinus o tont ! Hag e pep lec'h, kaerder ar menezioù ha kened nerzhus ar plac'hed. C'hwez an douar gouez a sav diwar ar pajennoù, c'hwez an douar keltiek. Danvez ur barzh a zo e Morris West !

Karet en deus ar skrivagner ar vro, se 'zo anat. Karet en deus an annezidi, tud feuls ha lezirek war un dro an darn vuiañ anezho. Taolet en deus evezh ouzh o doare-bevañ : ne guzh netra, nag o ferzhioù-mat, nag o sioù ! Dedennet eo bet gant o yezh, ha ne zisplij ket dezhañ diskouez dimp en deus prizet ar gouezeleg, ha meur a c'her a zo en danevell ha lakaet e poent mat !

N' en deus Morris West ijinet netra : n' eus nemet lenn, er pajennoù kentañ, an nozvezh « laouen » dalc'het en ostaleri Fort Augustus war ribl al Loch Ness ! Ar re o deus bevet seurt nozvezhioù en ur vro geltiek bennak a adkavo an aergelc'h dibar ha dibreder na vez tañvaet nemet er broioù-se !

...Ur romant eo eta, hag ur romant a garantez. Ne bismig ket Morris West war ar gerioù : ur pok a zo ur pok, ur flouradenn a zo ur flouradenn, met n' omp ket feuket : n' eo na hudur na gadal, yac'h e chom an istor...

Ar Bleiz ruz en deus roet an titl d' al levr. Ur floder eo, ur bigrier, ul laer-mor disuj, kriz met speredek. Ne vez ket bepred displijus an den : savet mat ha hegarat e c'hell bezañ a-wechoù, lubanus zoken ! Met « a wolf must die in his own skin », a laver M. West war bajenn gentañ e romant.

73

... Un daolenn wirion eus an dud hag ar vro ez eo al levr-se. Diskouezet en deus

Morris West en doa komprenet kizidigezh ar Gelted : n' eo ket alies e c'hoarvez kement-se.

Ul levr da lenn e-pad nozvezhioù hir ar goañv, n' ho po tamm ebet : emañ « The Wind of Keltia » o c'hwezhañ ennañ.

JORD KLER.

Levrioù ha kelaouennoù

Kaset eo bet deomp ar gelaouenn e nederlandeg " **Dietsche Warande en Belfort** ". Enni e kaver ur pennad gant Jan Deloof diwar-benn levr Yann-Ber Piriou " Défense de cracher par terre et de parler breton " bet embannet gant Oswald. Da heul ar pennad ez eus troidigezh un nebeut barzhonegoù tennet eus an dastumad. Jan Deloof a zo oberour an dastumad barzhonegoù troet e nederlandeg diwar ar brezhoneg ha bet embannet e 1969 dindan an anv " Maar Nog zingt Bretagne ". - D. W. B., Poste Restante, 3000 Leuven 4. Belgie.

Kaset e vez deomp abaoe ur pennadig ar gelaouenn sizhuniek " **L'Echo Breton** ", 3, rue Brisson, Kemperle. Embann a ra bep ar mare pennadoù war ar ganerien vreizhat a ra o reuz er mare-mañ. Un diviz gant Youenn Gwernig a zo bet embannet. A-wechoù e vez zoken pennadoù e brezhoneg ha keleier eus an Emsav. Studiadennoù a vez ivez war armerzh ha kudennoù ar c'hornad. Rouez a-walc'h eo gwelout kelaouennoù lec'hel dedennet gant pep tra breizhek, koulz ar vuhez sevenadurel hag ar vuhez kevredigezhel evit menegiñ " L'Echo Breton ".

Yann Brekilien a zo ur skrivagner puilh. Deut eo er-maez nevez zo " La Bretagne qu'il faut sauver ". E teir lodenn ez eo rannet al levr : saveteiñ korf ar vro (ar c'hoadoù, ar maezioù, ar savadurioù, an tro-war-dro dre vras), saveteiñ hec'h ene, saotradur spered ar bobl sunet ha goapaet, an trede tra zo ar spered (yezh, sevenadur, arallekadur). - Ul levr 320 pajenn. Priz 27,00 lur. 38, rue Jeanne-d'Arc, Kemper.

Emvodoù diwar-benn ar skritur

Pedet omp bet da embann kement-mañ war-lerc'h bodadeg ar 17 a viz Mezheven e Karaez :

« E-doug ar seizh bodadeg dalc'het abaoe bloaz hanter etre kelennerien skolioù meur Brest ha Roazhon, re Kevredigezh an Deskadurezh Nevez hag Emgleo Breiz, eo bet studiet an disheñvelerioù a zo etre an daou zoare-skrivañ implijetañ evit ar brezhoneg.

A-benn ar mare-mañ ez eus bet kavet gwellaennoù da zegas en daou zoare-skrivañ evit o zstaat an eil ouzh egile. An dileuridi eus kostez KDN a zo bet a-du evit kinnig lakaat **b**, **d** ha **g** e-lec'h **p**, **t** ha **k** e dibenn ar gerioù hervez an deveradur, hep diforc'h ebet etre an anv-kadarn hag an anv-gwan : gleb, kaled, mad, droug, brezhoneg, hag all...

74

Dileuridi Emgleo Breiz a zo bet a-du evit kinnig ledanaat tachenn implij ar **c'h** (ar c'hi e-lec'h ar hi), skrivañ **-mp** e-lec'h **-m** er verboù (gwelomp), alies **-añ** e-lec'h **-a** (gwellañ e-lec'h gwella), **un** (ger-mell) e-lec'h **eun**.

War gudennoù all, n' eus ket bet kavet a du, betek-henn, da geneunañ ar menozioù.

An holl dud bet en em vodet evit studiañ ar c'hudennoù-se a vije laouen o kaout

evezhiadennoù hag alioù ar vrezhonegerien. Kas ar respontoù da :

- Kevrenn geltiek Skol-veur Brest : Skol-veur Breiz-Izel, B. P. 860, Brest ;
 - Kevrenn geltiek Skol-veur Roazhon : Section de Celtique, Université de Haute-Bretagne, Villejean, 35000 Roazhon ;
 - Kelennerien Emgleo Breiz : Per Honoré, Run-Avel, 29254 Plourin-Montroulez ;
 - Herve Daniélou : K.A.B.E.S.K. al Likes, 29000 Kemper ;
 - Kevredigezh an Deskadurezh Nevez : Lukian Kergoat, Leurneven, 29136 Plogoneg.
- »

An Tri Yann An Naoned

An tri Yann-se a zo pevar, o stummañ ur c'henstroll a-zoare, brudet bremañ e Breizh ha pelloc'h. Kanañ a reont, pep unan d' e dro pe holl a-gevret. Seniñ a reont ha meur a venveg a vez implijet gant pep hini, ar binvioù o vont eus ar gourrebed-boud, ar violoñsel, ar banjo, an armonika hag ar gitar-folk betek an dulsimer, ar bodhran (taboulin iwerzhonat), ar fleütenn iwerzhonat hag al loaioù. Ouzhpenn, c'hoarierien int, en un doare diardoù ha youl ganto d' ober brud evit Breizh, n' eo ket gant an arouez BZH war o binvioù-seniñ pe o c'harrtan hepken, hogen ivez dre gomzoù o displeger Yann-Loeiz Josig.

E galleg, e saozneg, e brezhoneg e kanont : tonioù henc'hizel eus Breizh, Keltia, Bro-Gebek, unan anezho o tont zoken eus ar Grennamzer. Modern avat eo an doare : evel Stivell o deus roet buhez nevez da sonioù kozh. Gredus int. O fladenn, mat-tre, a zo bet embannet gant " Kelenn ", ha kavet o deus plas war roll an hit-parade gall -- a venek kanaouennoù brudetañ ar mare - gant o son « dans les prisons de Nantes ». Mar deo mat selaou o fladenn, ez eo gwell mont da sellout ouzh o arvest evit muzuliañ resis o zalant. Evel-se am eus graet a-gevret gant 300 bennak a dud deut da sal c'hoariva Sant-Malo da welout strollad heverk an Tri Yann-se, dellezek eus ur vodadeg fonnusoc'h. E-touez an dud-se, 95 dre gant a re yaouank pe dost, entanet-mat hag o tañsal er sal ouzh ton an 2 ganaouenn diwezhañ. Met petra 'ra da sadorn da noz « er rannvro », an dud a oad etre pe goshoc'h ?

An arvest a oa aozet gant Kreizenn Sevenadurel Brezhon Sant-Malo hag e lodenn gentañ anezhañ e oa bet klevet kanerien all : Eddie Falone eus Sant-Malo, barzh ha sonaozour ; Klaoda ar Rouz, eston a-walc'h he mouezh ha dibabet-kaer he rollad ; Alan Gallet, sonaozour ivez, 4 soner gentañ, modern a-grenn danvez e ganaouennoù koulz hag ar stumm-displegañ ha da geñveriañ e zoare ouzh hini lazoù-seniñ brudet a Vreizh-Veur pe Amerika.

75

Hogen n' emañ ket en hor soñj komz hiroc'h eus an holl arzourien-se, a dalvoudegezh a-hend-all, breizhat evelkent, met oc'h ober gant ar galleg hag o venel ouzhpenn war ribl ar froud nevez ha kreñv endeo a sonerezh hag a ganiri hag a zo merk hewelañ Breizh oc'h adc'henel.

P. A. B.

Skingomz ha Skinwel

AN DEIRVET CHADENN.

Skrivet hor boa d' an Aotrou Griveau, rener ar Skingomz ha Skinwel rannvroel e Roazhon, war-dro ur miz zo, evit goulenn digantañ lavarout dimp en un doare resis doareoù an deirvet chadenn evit Breizh. Pa c'houlennemp muioc'h a vrezhoneg er c'hasadennoù pe zoken, ul lec'h brasoc'h d' ar c'hasadennoù gallek diwar-benn kudennoù pe istor hor Bro, e vije respontet : « Chomit sioul, rak

prestik ho po an deirvet chadenn ha neuze e vo tro da reiñ deoc'h ho kwalc'h. Daoust ma 'z eo chomet mut an Aotrou Griveau, tu hon eus bet da c'houzout un dra bennak a-zivout ar chadenn a zlee, sañset bezañ ur « chadenn aour » evit trevadennidi ar vro-mañ, peogwir, evel ma ouzer, ez a en-dro e Pariz (evel just !) en Elzas ha war harzoù Belgia, abaoe derou ar bloaz-mañ. Perak servijañ da gentañ a lavarot, sitoianed ar Reter hag an Hanternoz ? Ar respont a zo aes tre, rak gouzout a reer pell zo, e kav da jakobined ar gouarnamant e selaou kalz re Elzasiz ha Flandreziz kasadennoù ar broioù amezeg. Arvarus kenañ eo an afer-se kompren a reer, war ribloù ar Roen, rak, piv a oar, dre forzh selaou morganezed al Lorelei e c'hellfe bezañ dic'hallekaet a-grenn Bro-Elzas ar pezh a vefe un dra spontus evit unanded Bro-C'hall. Ma ne gredit ket, goulennit menoz an Ao.Ao. Sanguinetti ha Michel Debré. Bremañ roomp un taol sell ouzh ar programmoù hag e welomp ez int an hevelep re evit ar C'hwec'hkogn a-bezh. Emrenerezh o deus ar skinlec'hioù hepken un eur bep miz, evit ur skingasadenn diwar-benn ar c'hudennoù ekonomikel rannvroel. Menegomp koulskoude ur c'hasadenn sizhuniek savet dre genlabourezh etre ar skinlec'hioù rannvro a-zivout aferioù lec'hel, met ar c'hasadennoù-se a zo an hevelep re evit an holl skinlec'hioù.

Hag ar brezhoneg a lavarot din ? Siwazh, paour-kaezh lennerien, ger ebet diwar e benn, ha setu ni reuzeudien, ur wech muioc'h gant hor fri war ar gloued. Kredit ac'hanon, n' eus netra kemmet e menozioù ar jakobined abaoe de Monzie !

Evel just ez eo bepred renerezh an O.R.T.F. e Pariz a ziviz diwar-benn ar filmañ hag a zo mestr war an arc'hant. D' hor meno ne vefe nemet un tu da lakaat Aotrounez Pariz da blegañ, nac'h paeañ hor skodennoù keit ha na vefe ket kemmet an traoù. Ar gwir hon eus e Breizh da welout hon arc'hant implijet evidomp ha nann dispignet en despet dimp, evit divrezhonekaat ha dibersonela hor bro muloc'h-mui.

76

Mar deo avat ar skingomz hag ar skinwel benvegoù dispar etre daouarn gouarnamant Bro-C'hall evit distrujañ hor pobl e c'hellfent ivez bezañ benvegoù ken dispar all evidomp evit advrezhonekaat anezhi ur wech tapet krog enno. Holl d' al labour a-raok ma vo re ziwezhat !

LAENNEC SKRIVAGNER BREZHONEK.

D' ar meurzh 23 a viz Genver e vo skignet war an eil chadenn, da 20.30, ur c'hasadenn diwar-benn Laënnec ar mezeg meur brudet dre ar bed holl, ganet e Kemper ar 17 a viz C'hwevrer 1781 ha marvet d' an oad a 45 vloaz taget gant an droug-skevent, ur c'hleñved en doa stourmet outañ al lodenn vrasañ eus e vuhez e-touez klañvourien an ospitalioù. Ar pezh ne anavezer ket peurliesañ eo en deus an den-meur-se skrivet un toullad mat a werzennoù brezhonek, chomet, souezhus a-walc'h eo, hep bezañ embannet betek an deiz a hiziv. Daoust hag e vefe tu da adkavout anezho ha d' o embann e 1973 ? D' ar furcherien da respont.

AR GOMEDIENN DOUEEL GANT DANTE E BREZHONEG ?

Un Itron alaman a skriv dimp kement-mañ :

« Daoust ha ne c'hellfec'h ket goulenn digant ur barzh breizhat treiñ e brezhoneg ar " Gomedien Doueel " gant Dante, pe da vihanañ ul lodenn. Gallout a rafen embann an droidigezh-se en " Deutsche Dante Jahrbuch " (Bloazlevr alaman Dante). Me eo a ra war-dro ar bloazlevr-se a vez lennet ivez en Italia. »

Ha bez ez eus e-touez hol lennerien un italianeger bennak a vefe barrek d' ober al labour-se ? Ra skrivu neuze da Skingomz ha Skinwel, 18 bis, straed Duguay-Trouin, 22000 Sant-Brieg.

KENSKRIVERIEN E BREZHONEG.

Lennerien ar gazetennig-mañ a garfe kenskrivañ gant ur brezhoneger pe ur vrezhoneger e c'hell skrivañ ivez d' an hevelep chomlec'h. Reiñ dimp neuze da c'houzout oad, micher ha danvezioù a blij ar muiañ : yezhoniezh, sonerezh,

istor, beajou, h.a.

Kas, mar plij, ur golo-lizher timbret evit ar respont.

*

Karout a rafemp kalz resev lizheroù digant ho lennerien diwar-benn ar skingomz hag ar skinwel. Trugarez en a-raok. Na ankounac'hait ket kas ur gerig d' hor mignon Charlez ar Gall ha d' e genlabourerien gwech ha gwech all, evit lavarout dezho an danvezioù a blijfe ar muiañ deoc'h er skingomz hag er skinwel. Ober a reont o seizh gwellañ evit plijout dimp hogen n' eo ket aes atav. An dud diwar ar maez a vez atav dedennet, sklaer eo, gant labourioù, an douar pe an aod. An holl e kêr ha war ar maez a gar kanaouennoù brav met, evel just, ne c'heller ket kanañ hepken ha ret mat eo ivez plediñ gant kudennoù ar vuhez pemdeziek, dreist-holl hiziv an deiz, pa gemm ken buan pep tra.

A. OMNES.

77

AN DARVOUDOU E BREIZH

Notenn diwar-benn ar c'heleier.

Savet eo bet an notennoù kelaouiñ-mañ gant skolidi eil rummad Skol An Emsav, kreizenn Kreisker Roazhon ; ar brezhoneg a implijont n' eo ket difazi evel just, dre ma ne ouzont ket mat a-walc'h ar yezh c'hoazh. Reizhet e ve ar fazioù gant ar c'helenner hogen diaes a-walc'h eo reizhañ lavarennoù ha n' int ket enep d'ar yezhadur, da skañvder ar yezh ne lavaran ket.

Goulennet eo bet ivez gant lennerien zo eus " Al Liamm ", na vefe ket re bolitikel an notennoù-se o vezañ ma stourmomp evit mad ar Vretoned hag evit mad an dud ne c'hallomp ket chom diseblant dirak darvoudoù a ziskouez splann e vez gwasket hon fobl ha meur a bobl all war an douar. Ret mat eo dimp diskouez n' eo ket reizh kement-se ; ha ret mat dimp ivez diskouez eo reizh kement ober a ya a-enep d' ar gwaskerezh-se.

An harzoù-labour e Breizh.

Diaes eo lakaat ar batroned da gompren e fell d' ar Vretoned bevañ en un doare dereat er vro-mañ. Setu perak e kendalc'h ar stourm a-enep korvoerezh labourerien Vreizh da vont war-raok. Ar wech-mañ eo ar merc'hed a grog da stourm :

- e Gwidel : merc'hed al labouradeg " Oraly " o deus paouezet labourat e-pad ur pennad mat an amzer e miz Du rak al labour a oa re start pa veze keñveriet gant ar gopr reuzeudik a veze roet dezho ; bremañ avat, pa 'z eo echu an harz-labour ganto e klask ar batroned skarzhañ ar merc'hed taerañ ;

- e Sant-Brieg c'hoazh : implijidi ar stal vras " Mammouth " (merc'hed dreist-holl) o deus nac'het labourat evit an hevelep abegoù, e dibenn ar bloaz 1972 ;

- e Foujera : micherourezed ar S.P.L.I. a stourm abaoe tri miz evit ma vefe roet dezho goproù dereat.

E Gwidel hag e Sant-Brieg o deus bet al labourerien un toullad gwellañ ; e Foujera avat n' eo bet gwellaet netra c'hoazh.

Pegoulz e c'hallimp bevañ evel tud e Breizh, ha n' eo ket evel chatal ?

Nicoud ho Hourmant e Brest.

E miz Du eo bet dalc'het e Brest ur vodadeg vras gant ar genwerzhourien, aozet

gant ar CID-UNATI. Nicoud oa deut. C'hwitelladegoù a oa evitañ ha stlakadegoù daouarn evit Hourmant en em ziskouezas ur wech ouzhpenn a-du mui-pe-vui gant Breizh, emskiantek d' an nebeutañ eus ar c'hudennoù zo a-zifoc'h e Breizh.

Glac'haret e voe an " Telegramme " hag " Ouest-France " : « luskad ar genwerzhourien o koll eus e nerzh a lavarjont ». Re c'hilac'haret e gwirionez o welout emskiant ar Vretoned o tiorren.

78

Arzourien Vreizh o skoazell ar stourmoù e Breizh.

Da heul an diskleriadur o deus sinet, ez eus bet savet e Pondi, d' an 28 a viz Genver, gant arzourien Vreizh ur gala evit skoazellañ Rene Vautier en deus echuet e harz-debriñ en ospital goude ouzhpenn 30 devezh a yun. O vezañ ma oa bet divizet sevel ar gala-se nemet tri devezh a-raok ar sul, n' eus bet graet tost bruderezh ebet. Leun-chouk e oa ar sal memes tra, gant an 1 200 bennak a dud diredet eus pep korn Breizh. Tu zo bet dezhe klevout Vautier o komz, dre ur " Magnetoskop ", diwar-benn kudennoù a sav evit e filmoù gant an eveshaerezh politikel. Da heul eo bet klevet 15 den pe strollad a oa deut dibae. Siwazh evit kanerien " breizhat n' eus bet nemet daou o kanañ e brezhoneg hag unan hepken komz brezhoneg ouzh ar mikro. Enrollet eo bet ar gala en e bezh gant an U.P.C.P. (Production Bretagne) hag ur gest zo bet graet a-raok an disparti evit paeañ ar sal hag harpañ Vautier.

Kaoc'h gant an arme.

Pa voe galvet ar paotr Le Picart eus Landreger da vont evit tri devezh da gamp soudard Gwengamp, ne gemmas ket e zilhad a oa war o gorre forzh erminigoù, arouez a beoc'h ha livadennoù all. Nac'hañ a reas ar goprigez a vez roet eno : « Ne fell ket din mont da c'hast evit ken nebeut, » a lavaras. D' un ofiser a c'houlenne digantañ e pe arme e felle dezhañ mont e tisklerias ne felle ket dezhañ mont da soudard. « Objecteur e fell deoc'h bezañ, » eme an ofiser. « Ma vije bet arme Breizh em bije laret ya met ganeoc'h n' em eus netra da foutr ».

Setu pezh zo bet kontet deomp gant ar paotr e-unan. Petra a c'hoarveze gantañ ? Sur ne lezo ket an arme un intrudu a-seurt-se digastiz.

An F.L.B. n' eo ket marv.

Goude prosez an F.L.B. e Pariz, ne seblant ket ar strollad kuzh-mañ mennout chom mut. Lakaet eo bet da darzhañ kreizenn an tailhoù e Sant-Brieg ha sinet F.L.B. an taol. Hogen ar wech-mañ c'hoazh n' eo bet displeget nag ar perag nag ar penaos ; ha n' eo ket bet anavezet an taol gant ar strollad, ha n' eus forzh piv a c'hell lakaat un dra da darzhañ ha sinañ an oberenn gant ne vern peseurt anv.

Pezh-c'hoari : « Le Printemps des Bonnets Rouges » gant PAOL KEINEG.

Daoust m' eo bet skrivet e galleg ha c'hoariet e Pariz eo mat lavarout un dra bennak diwar-benn pezh-c'hoari nevez Paul Keineg (e hini kentañ eo). Barzhonieltre eo doare skrivañ Paul Keineg, ha diaes da gompren eo bet kavet ar pezh-c'hoari-se gant burutellerien ar c'helaouennoù gall " Nouvel Observateur " ha " Le Monde ". Keuz hon eus n' eo ket bet displeget ar pezh-c'hoari, hag eñ diwar-benn ar Bodedoù Ruz, en hon bro da gentañ.

79

Dilennadegoù ar Gannaded da Barlamant Pariz.

Kroget mat eo ar bruderezh evit an dilennadegoù (a vo dalc'het d' ar 4 hag d' an 11 a viz Meurzh). Bemdez e vez distaget komzoù flour pe c'harv gant ar re a gleiz hag ar re a zehou er skinwel koulz hag er skingomz. Hag-eñ ez ay ar maout gant an tu kleiz gall er " c'kwekorn » ? Sed aze an dalc'h. E Breizh e welimp moarvat muioc'h a dud o vouezhiañ evit an tu kleiz en abeg d' an holl ziaesterioù zo bet gant al labourerien ar bloavezhioù tremenet. Hogen, kinniget e vez tud da zanvez kannad gant strolladoù breizhat ivez :

- Strollad Ar Vro a ginnigfe 25 danvez-kannad, en o zouez Yann Fouere a stourm a-enep Pleven e Dinan ;

- An U.D.B. a ginnig 5 hepken, e Brest, Landerne, er Faouet, en Naoned hag e Roazhon ;

- Ar " Front Breton d'Union Populaire " krouet a-ratozh evit an dilennadegoù a ginnigfe 1 danvez-kannad, Pierig Gwerinel, e Redon.

Hogen daoust hag e kemmo kement-se un dra bennak e Breizh ?

An dilennadegoù (bis).

C'hwi oar moarvat e vo un e darvoud bras » er « c'hwekorn » e miz Meurzh ; kouviet e viot da zibab kannaded.

Piv a c'hellit dilenn ?

E Bro-C'hall ez eus un emgann etre an tu dehou hag an tu kleiz gant un tu etre o klask en em silañ etre an daou, na petra 'ta.

Komzet e vez kalz eus stumm ar stad hag eus galloud ar prezidant h.a. Hogen n' eus ket kalz a blas evit an traoù pemdeziek hag evit hon bro-ni ; pelec'h emañ kudennoù Breizh e seurt divizoù ?

Strolladoù breizhat a laka o fri e-barzh ar c'hoari ivez : an U.D.B. ha S.A.V. N' int ket a-du etrezo met krediñ a reont e vo tu d' ober kemmoù bras e Breizh gant al lezennoù, pezh n' eo ket sur.

Erfin, penaos mouezhiañ ?

Naren mouezhiañ pe vouezhiañ evit an hini drochañ, evel ma lavare ar gall Clemenceau. Ne raio forzh a gav din.

Bro-C'hall

Iskis eo ar " Justiz " e Bro-C'hall. Buffet ha Bontems zo bet dibennet : Buffet dre m' en doa lazhet daou zen, ha Bontems dre m' en doa anezhañ.

Overney zo bet lazhet gant Trameni ; met Trameni a oa paeet gant Renault evit lakaat urzh el labouradeg, ha n' en deus tapet nemet 4 bloaz toullbac'h. Forzh penaos, Overney ne oa nemet ur c'hleizelour.

Kudenn : - Piv en deus desket da v-Buffet ha da d-Trameni lazhañ ?
- Den ebet, an natur a respontfec'h...

Marteze, met bet int o-daou soudarded e-barzh al " Legion "...

Oksitania : uhelgompezenn Larzag.

War uhelgompezenn Larzag (Bro Oksitania) ez eus ur c'hamp soudardel, evel maz eus un toullad e Breizh. Hogen fellout a ra d' an arme gall brasaat anezhañ ha, dre se skarzhañ un toullad mat eus kouerien ar c'horn-se, gant o loened ha tout... Hogen ne fell ket d' ar gouerien-se kuitaat o douar hag ez eus reuz ha freuz. Huchet eo bet kalz ha zoken eo bet kaset deñved eus Larsag da beuriñ war ar " Champs Elysée " e Pariz. Kouerien zo aet da Bariz gant o zractorioù da glemm, met kement-se n' en deus servijet da netra kennebeut. E-keit-se, prefed ar c'horn en deus diskleriet e oa ar c'hamp-se " d'utilité publique " da lavarout eo e servij da vad an holl evel an dour " Evian ", na petra 'ta ? Oksitania - Breizh, memes stourm.

E dibenn miz Kerzu, pa oa sioul an traoù e Norziwerzhon eo bet tizhet Republik ar Su gant ar feulster (e Dulenn ha tri lec'h e-kichen harzoù Bro-Ulad).
Mc Guinness, rener an I.R.A. dibadel e Derry, zo bet harzet e Su-Iwerzhon war-lerc'h daou zen eus ar re bouezusañ en emsav iwerzhonat, Sean Mc Stiofain ha Roy O'Brady.

E 1972 ez eus bet lazhet 465 den en holl ; niver ar re lazhet a gresk a vloaz da vloaz.

Ar stourm e Bro-Euzkadi.

E miz Genver eo bet dalc'het e Burgos (Bro-Gastilha) prosez un toullad brogarourien euzkarat, tamallet dezho bezañ " kidnapet " rener ul labouradeg en doa skarzhet un darn eus e vicherourien. Lod eus ar vrogarourien-se zo bet kondaonet d' un nebeut bloavezhioù toull-bac'h, lod all dieubet.

E dibenn miz Genver eo bet " kidnapet " rener ul labouradeg all na felle ket dezhañ plegañ da c'houlenn e vicherourien evit aesaat o labour. Kement-se zo bet graet gant E.T.A., Arme Euzkadi Dieub.

Gant E.T.A. ivez eo bet lakaet da darzhañ ti-bank Bro-Spagn e Pariz, kement-se evit enebañ ouzh an div vro a wask Euzkadi : Bro-C'hall ha Bro-Spagn.

Viet Nam.

Pa 'z eo bet skrivet an notenn-mañ, e oa bet sinet ar peoc'h, hogen an emgannoù zo ken taer du-hont c'hoazh. Ar gudenn a van eo hag e vo unvanet ar Viet-Nam ha penaos e vo graet. Pobl Viet-Nam he deus gouzañvet ar brezel e-pad 30 vloaz, ha zoken ma tav ar fuzuilhoù hag ar c'hanolioù n' eo ket sur e vevo en ur vro dieub hag unvan. An Amerikaned a ya d' ar gêr goude bezañ distrujet un darn vat eus an dud hag eus an traoù ha moarvat, un tamm mat eus ene ar bobl-se.

Yod-Kerc'h.

Deut eo er-maez niverenn 5 Yod-Kerc'h e miz Du. Tennen ez eus bet eus an niverenn-se 1 000 skouerenn (kement hag " Al Liamm "), ha ne van ket kalz. Neuze ma n' oc'h eus ket prenet anezhañ, hastit da glask anezhañ, rak evel just n' eus chomlec'h ebet evit ar gelaouenn. A-raok " Yod-Kerc'h " ne veze skrivet nemet traoù sirius pe diotachoù e brezhoneg ; gant " Yod-Kerc'h " eo bet stouvet un toull e-barzh hol lennegezh. Pep tra e brezhoneg !

AL LIAMM 157

TAOLENN

Gwreg an Toer gant TANGI MALMANCHE	84
Treiñ da wir huñvre ur bed marzhus gant ANDREV GWEGEN	103
Yud gant Erwan KERVELLA	107
Ha Verkingetorix a lavar gant J. KAPLINSKI	108
Gwerz ar Guardia Civil Espanola gant F. G. LORCA	110
Nenn Jani (kendalc'h) gant ROPARZ HEMON	114
Kevrin Lord Pennejen gant S. B. LEACOCK	124
Penaos gounit ur milion a zollarded gant S. B. LEACOCK	131
Un Alarc'h, un Alarc'h tre mor gant PER PENNEG	136
Istor Breizh (kendalc'h) gant LABORDERIE (tr. R. Hemon)	140
A-hed an deizioù gant YOUENN OLIER	146
Notennoù	157

DEIZ-HA-BLOAZ

Ugent vloaz 'zo, e miz Meurzh 1953, e varve Tangi Malmanche e Klichy.

Hon dramour brasañ en doa skrivet seizh pezh-c'hoari e brezhoneg : Gurvan ar Marc'heg estrañjour, Ar Baganiz, Gwreg an Toer, Marvailh an Ene Naonek, An Antekrist, Buhez Salaun lesanvet ar Foll hag An Intañvez Arzhur.

An daou bezh diwezhañ-mañ a oa chomet diembann betek-hen.

A-drugarez d' an Itron Malmanche ha d' he merc'h e c'hellomp embann, da geñver ugentvet deiz-ha-bloaz marv an oberour, an daou bezh-c'hoari diembann ha kinnig d' hol lennerien hiziv ar pezh-c'hoari " Gwreg an Toer " bet embannet war ar gelaouenn SAV e 1942.

War un dro e vo kavet amañ un nebeut skeudennoù dianav hag ur pennad diwar-benn Tangi Malmanche gant Andrev Gwegen a ra war-dro e oberennoù hag e eñvor gant aked ha doujañs.

GWREG AN TOER

Drama en un arvest

Anaoudek on ouzh Al Liamm hag ouzh e rener Ronan Huon evit bezañ kaset da bennvat ha buan an embannadur eus oberennoù va zad, dres da geñver ugentvet deiz-ha-bloaz e varv.

Graet en deus Tangi Malemanche e lodenn, ul lodenn frank anezhi, da binvidikaat al lennegezh vrezhonek. E pep frankiz hag evit e vro garet eo e reas al labour-se, evel ma skrive e raklavar " Gurban ", hag hervez ar spered-se eo am eus goulennet digant Ronan Huon ober war-dro an embannadur-se.

A. M. STOCKMANS-MALMANCHE.

85

Tud ar C'hoari

TOMAZ, un den war-dro pevar-ugent vloaz, pounner hag habask diouzh gwelout. Komz a ra sioul ha poellek, nemet techet eo un tammig da brezegenniñ. Gwisket eo gant dilhadoù glas ar vicherourien.

ELEN, gwreg Tomaz. Eus 25 da 30 vloaz eo, koant a-walc'h, hogen rust he dremm, ha kintus. Brizhwisket eo, evel ma vez bremañ ploueziadezed Breizh : ur vrozh c'hall ha koef ar vro.

GWILHOM, 25 bloaz, skouer ur brabañser diwar ar maez. Dougen a ra dilhad un eilmestr eus ar verdeadurezh-vrezel.

KATOU, 18 vloaz, matezh e ti Tomaz. Gwisket e-giz ur goueriadez.

UN DEN.

86

Ar gambr-annez e ti un toer diwar ar maez. A-gleiz un nor o skeiñ war ar straed, hag ur prenestr. A-zehou un nor all. E goueled al leurenn, binvioù a bep seurt eus micher Domaz, ha dreist-holl kerdin a-ispilh ouzh ar voger. Kempennet e vo an annezadur evel a garor, - pe hervez ar c'hiz kozh : ur siminal bras tumennek, ul listrier skultet, un daol hir e prenn fetis, - pe hervez ar c'hiz nevez : ur fornez, ur bufed prenn gwerniset, un daol grenn goloet gant ul lien koaret. Ne vern pe c'hiz, e vo un armel vras er goueled.

Pa sav ar ouel, emañ Tomaz en e goazez dirak an daol, oc'h echuiñ e adverenn bara hag amann. Elen, en he sav, a spi outañ, hep pasianted, anat eo. A-daol-trumm, e tenn an asiedad amann diwar an daol.

TOMAZ. - E, gortoz c'hoazh ma 'm bezo ur begad amann c'hoazh, 'vit peurzebriñ va bara ! Na petra 'ta ! N' eus pres ebet ! An tren a ya kuit da c'hwec'h eur, ha peder a zo o paouez seniñ !

ELEN, ken bev ma werzh he goanag. - Mont a ri da Vrest henozh ?

TOMAZ, goapaüs. - Ne din ket, feiz nann ! D'ober petra ez afen e kêr d' an eur-

se ? Al labour-noz, evit an dud yaouank eo ez eo mat. Met pa m eus gwelet kement a vall ganez, me 'gave din ez oas-te, evit kemerout an tren.

ELEN, nec'h en he mouezh. - Peseurt istor eo hennezh adarre ?

TOMAZ. - N' eus istor ebet e kement-se. Met ur vaouez, pa vez froudenn ganti d' ober un dra bennak, n' eus ket da herzel outi tamm ebet. Neuze, pa n' eo ket da venoz kemerout an tren, seul well a se ! N' eus ket lec'h d' am hastañ.

ELEN. - Pe ide 'zo ganez, a-benn ar fin, emañ ouzh da hastañ . Te eo, avat, ez eo mall ganez bemdez echuiñ da verenn, evit mont d' az labour en-dro ! Ha te 'pezo un tamm bara 'darre, 'vit peurzebriñ da amann ?

87

TOMAZ, kompez e vouezh. - N' am bo ket, feiz da Zoue ! Leun eo va c'hof bremañ. A-walc'h a zo mat ; re avat a zo fall. Ar gwechoù all ez an d' al labour en-dro, 'blamour d' am dervezh na vez ket echuet. Hiziv, avat, 'm eus kroget ganti e doare, ma ne deus ganen netra ken d' ober.

ELEN, en un doare dipitus. - Ne di ket d' an iliz bremaik evel-se ?

TOMAZ. - Alato... Mont a rin memes tra, met n' eo ket da labourat eo ez in ; da zstum va binvioù ha tra ebet ken. Paneve 'n Aotrou Person a gavje un aner bennak din-me da ober ; kement-se ne ve ket souezh, pizh evel ma 'z eo hennezh.

ELEN, nec'het. - Anez se 'teufes amañ adarre diouzhtu ?

TOMAZ. - Heu... Paneve c'hoazh ez afen gant ar velo betek Gwiproñvel, da selout evit ar c'hrañj nevez a zo kont ganto da sevel... Ur c'hoant a labour, ha paeet mat, war am eus klevet. Hogen pemp lev a zo ur pennad-hent ! Me 'grogfe gant hounnezh, ne gav ket din e ve posupl distreiñ d' ar gêr bep noz.

ELEN. - Va Doue, kemend-all a zo 'n em gavet a-wechoù dija... O vezañ ma talv al labour ar boan hen ober...

KATOU, a zeu tre a-herr. - Bez' ez eus ar vuoc'h a zo deuet foll en un taol... Terriñ he c'hordenn he deus graet ha setu-hi bremañ o wastañ ar panez, un druez he gwelout !

TOMAZ, hep bezañ strafuilhet. - Hopala ! A bian 'ta, mar deo bet torret ar gordenn gant ar vuoc'h, se a ziskouez anat premieramant ne doa ket ar gordenn ker kreñv hag ar vuoc'h !

KATOU. - Eo 'ta : kreñv a-walc'h 'oa ar gordenn ; met ur vuoc'h fuloret evel-se, 'vit doare eo aet an Diaoul e-barzh !

88

TOMAZ, o c'hoarzhin. - An Diaoul ? Ac'hanta ! Dal, me 'm eus soñj : e Ti Glas edo unan, ur vuoc'h, hag a oa deut fuloret evel-se, ma kave d' an holl ivez ez oa aet an diaoul e-barzh. Memes e oant evit mont da gerc'hat an Aotrou Person gant e stol glas-ruz hag an tramblamant 'vit ober dezhi un eksersiz, 'vel a lârer. Setu neuze Fañch gozh eus Kerango a lâr da dud Ti Glas : « An Diaoul, n' eo ket en ho puoc'h eo emañ ; er waremm grec'h ne lâran ket. 'C'h eus 'met mont da welout, mar kirit ». Ha tud Ti Glas ha mont d' ar waremm, ha petra o deus gwelet aze ? Tarv Rugonan a oa bet achapet eus ar gêr. Neuze o deus kaset an tarv d' ar gêr en-dro, hag ar vuoc'h a zo deut sioul adarre 'vel 'n ur c'hraou Nedeleg. Penaos 'ta 'z poa staget ar vuoc'h ?

KATOU. - En-dro d' he c'herniel, 'giz eo kustum d' ober.

TOMAZ. - Kustum ar re sot a zo ar c'hiz fall. 'Vit stagañ ur vuoc'h, pa vez ganti faltazioù, me mont da ziskouez dit ar c'hiz vat.

Tomaz a ya da gemer ur gordenn hag a ra ur ur c'houlm-red enni.

TOMAZ. - Gwelout a rez ? Ur c'houlm-red a ri d' ar gordenn hag e laki anezhi d' ar vuoc'h en-dro d' he goug. Seul-vui e tenno war ar gordenn, seul-vui e vezo-hi taget, hag he devezo diaezamant, ken a baouezo tennañ, 'benn ar fin. (Reiñ a ra ar gordenn da Gatou.) Komprenet mat 'c'h eus ? La. Bremañ eo poent din mont kuit.

Tomaz a ya kuit.

ELEN, da Gatou. - A bian, petra emhout o c'hortoz ?

KATOU. - Selaouit, Len... Bez' ez eus un dra... N' am eus ket kredet lârouit d' an Tomaz gant aon na rafe trouz. Ar gordenn bet torret gant ar vuoc'h eo an hini nevez bet prenet gantañ e kêr en deiz all.

ELEN. - Perak ivez 'poa kemeret hounnezh ?

89

KATOU. - 'Blamour e-touez ar c'herdin kozh n' oa hini hir a-walc'h evit ar vuoc'h da beuriñ en hec'h aez.

Katou a ya da gerc'hat ar gordenn he deus lezet a-dreñv an nor.

KATOU. - Ha setu houmañ torret bremañ ! Daou vetrad re verr eo da nebeutañ ! Drol eo, alato, ur pezh kordenn 'vel-se, ha tev ha nevez ha tout...

ELEN, o sellout ouzh ar gordenn. - Drol eo evit sur. Ne gave ket din e ve ur vuoc'h kement a nerzh gant he c'herniel. Erfin, graet eo pezh a zo graet. Ma teu Tomaz da remerkañ, sur e kano an oferenn dit !

KATOU. - Marteze e viro ar priz ouzhin diwar va gopr ? Lirit 'ta, Len : N' hellfec'h ket arañjiñ an dra, ma chomo Tomaz hep gouzout ?

ELEN, kintus. - Peseurt 'fell dit ec'h arañjin ? N' hellan ket pegañ ar gordenn moarvat, nag he hiraat kennebeut !

KATOU. - Sur n' hellit ket. Koulskoude, c'hwi 'c'hellfe ober da vihanañ ne ve ket remerket an andred torret ?

ELEN. - Evel pa vije fasil d' ober ! Ur berrwel e welfe hep lunedoù !

KATOU, mitaouik. - Selaouit 'ta, Len. Bez' ez eus traoù amañ, un dall 'vit sur a ve kapabl d' o gwelout, me 'alato a ra en un doare ma ne c'hall Tomaz remerkañ.

ELEN, cheñchet, mall warni. - Gortoz. Ro din un tamm sifel. (Tra ma klask Katou ar sifel, e troc'h penn dispilhet ar gordenn.) La. Hag er c'hiz-se bremañ. (Frotiñ a ra penn ar gordenn war zouar al leurenn.) Panevet ur gourhed en dorn n' anavezo james eo bet torret houmañ !

90

KATOU. - Na c'hwi 'zo jentil ! (E kuzulik.) 'Mañ egile o c'hortoz e-kichen, en dibid Laouenan. Ez an d' ober sin dezhañ dont d' ho kaout.

Katou a ya kuit a-zehou. Elen a roll ar gordenn gant aked.

ELEN. - Evelato... Ur pikol kordenn evel-se ! Peotramant e vije fall hounnezh ?

Istribilhañ a ra ar gordenn ouzh moger ar goueled. Klevout a reer klicked an nor gleiz. Elen a ya buan diouzh an tu-se, hogen chom a ra kerseet pa wel Tomaz o tont tre.

TOMAZ. - C'hoarvezet ez eus 'vel am boa lâret. Ma ! n' am boa ket komañset dastum va binvioù, ez arru 'n Aotrou Person gant e lagad treuz-maen. « Arsa 'ta, Tomaz, » emezañ, « a-benn d' az labour out deuet ? » - « Resped deoc'h, Aotrou

Person, » emeve, « n' eo ket d' ar penn met d' al lost eo ez on rentet, n' hoc'h eus 'met sellout, mar kirit. Un doenn hoc'h eus war ho sekretiri hag a welo hoc'h interamant, ha pa 'z afec'h betek kant vloaz. » - « Feiz, » emezañ adarre, « degouezhet mat eo p' ac'h eus echuet, o vezañ ma 'z eus e moger an tour ur maen disielllet hag a zo dañjerus evit an dud, a ve ret e lakfes anezhañ en e lec'h. »

ELEN. - Setu aze ul labour ! Daoust hag hennezh a vo paeet dit ouzhpenn ?

TOMAZ. - O vezañ ma vo graet al labour em dervezh, paeet e vo va dervezh ha gweneg ebet ouzhpenn.

ELEN. - Ken a ranki sevel ur chantier all, implijañ simant, uzañ da zilhad hag all evit ar c'hloar hepken ? Imbisil ma 'z out !

91

TOMAZ. - An hini a ren ur vokasion a dle mirout enor d' e vicher hag ober ar gwazh evel ar gwell. Va zad-kozh, - Doue d' e bardono ! - (ober a ra sin groaz) en deus kavet e varv 'n ur gouezhañ eus beg an tour, 'blamour d' ur gordaj a zo bet torret. Hag antronoz, va zad, oadet a bemzek vloaz, en deus krimpel 'n e blas war an tour ha laket ar c'hog a-sonn. A ra n' eus ket bet nep mezh, e deiz an interamant, gant lignez an Domazed, toerien an iliz a rumm da rumm aba m' eo bet savet. A-hend-all, 'vit an danvez n' implijin tamm ebet, peogwir e kasin ar maen en e blas hep e siellañ ; hag ar pezh a sell ouzh ar chantier n' am bezo ezhomn nag a chafod nag a skeul, peogwir e rin en holl gant ur gordaj staget ouzh kili kambr an tour, a ziskennin a-hed da rez ar maen ; goude al labour graet, n' am bezo 'met va lezel da risklañ betek an traoñ. 'Vit se 'z eus a-walc'h gant un hanter-urvezh, hag ur mous 've gouest d' hen ober. (O prederiañ.) ' Vel-se 'ta, daouzek metrad uhel... daou vetrad 'vit stagañ... (Sellout a ra ouzh e gerdin hag e tibab ar fun dorret.) A, houmañ a vo evit ar gwellañ.

ELEN, en un emlusk. - Marteze e ve gwelloc'h ganez...

Troc'het eo he frazenn outi gant an nor gleiz o tigeriñ trumm ha Gwilhom o tout tre.

GWILHOM, divarc'het o welout Tomaz. - O, va iskuzit... pa 'z on deuet e-barzh hep skeiñ... N' ouzon ket petra 'n deus graet se, 'm eus disoñjet a-grenn skeiñ ouzh an nor !

TOMAZ, en un doare a vo goapausoc'h-goapausañ betek fin ar rannarvest. - N' eus ofañs ebet, Lom. Er poent-mañ, aes da gompren ez eus ganez ez penn prederioù all.

GWILHOM, o faziañ hag oc 'h en em zifenn. - Prederioù all ? Peseurt prederioù a fell dit da lâroul ? Me n' em eus preder all em fenn, e gwirionez !

TOMAZ. - Koulskoude, 'n hini a vez gantañ permission ur miz hag a zegemer krenn dipech da zistreiñ goude pemzek deiz hepken, ha c'hoazh da zistreiñ, neket da Vrest, met da Doulon, hennezh a gav din a zo komprenapl ez eo gantañ e benn en tu gin !

92

ELEN, strafuilhet, da Domaz. - Peseurt emaut o kontañ ?

GWILHOM, da Domaz. - Penaos ? Klevet 'c'h eus dija on galvet en-dro ? 'M eus bet an dipech un urvezh 'zo a-boan, ha n' em eus komzet a se da zen ebet c'hoazh !

TOMAZ. - Nemet da Yann ar Gall a 'n em gave ganez e ti Laouenan, ha bremañ, evit sur, en deus embannet ar c'heloù da bevar c'horn ar bourk. Ma oa da venoz ober ur sekred a se, degouezhet fall out gant ar seurt labours !

GWILHOM. - Ur sekred ? N' eo ket evit sur, va menoz ober... Ha memes, 'vel ma

c'hellez gwelout, te eo ar c'hentañ a gasan keloù dezhañ, ma kimiadin diouzhit en hevelep tro.

TOMAZ. - " Ni " eo ar re gentañ, a fell dit lavarout : peogwir va gwreg Elen ha te a zo anaoudeien vat a-walc'h, ma kimiadi diouti ivez. (E sell a zo manet ur pennad war zremm raz ha toutek Elen.) Evel-se, ur pennadig amzer a vezo, kent ma teui dre amañ adarre ?

GWILHOM. - Ur bloavezh sertenamant.

ELEN, outi hec'h-unan. - Ur bloavezh !

GWILHOM. - Ha c'hoazh, gant ma chomin hep ambarkiñ... Un taol ez ambarkin e skouadr, daou vloaz eo a rankin gortoz, an nebeutañ-tout, kent ma tapin permission.

ELEN, mantret. - Daou vloaz !

TOMAZ. - Panevet e teufe-eñ evelkent, bep sul, war e velo !

C'hoarzhin a ra pounner.

ELEN, o tarzhañ. - Paouez 'ta d' ober goap outañ ! Bez' ez eus e baour kaezh tud o devezo doan vras pa ne zeuio ken d' o gwelout !

93

GWILHOM. - O, ar re-se, kustum int da vezañ ambarket. (O klask lakaat da ankounac'haet ar sotoni emañ o paouez distagañ.) N' eus forzh, doan o devezo ac'hanon memes tra. Bep tro ma teuen d' ar gêr, evito eo e raen, neket evit re all a dra sur !

TOMAZ. - Ha pa vijes deut evit re all ! Kae 'ta ! Ar re-se ne vezi ket pell vit koll an eñvor anezho du-hont ! E Toulon, hervez 'm eus klevet, 'z eus peadra da 'n em zizambetiñ. Fumeled leun da wele, ha mar bezez paotr koant, 'vit ar blijadur hepken eo. Lâr 'ta, Lom. Kentañ mignonez az pezo, lak' evezh da gas deomp he foltred, a vo ganeomp un dudi e welout.

Blasaat a ra war zremmoù krizet Gwilhom hag Elen efed e c'hoaperezh ; goude se, dousoc'h e gomz :

Ur banne gwin a garfen ofr dit-te, 'vit trinkañ kent dispartiañ : met poent eo din mont d' am labour. Trinkañ a ri gant Len memes tra, 'vit na vo ket lavaret gant mab Paol Jestin ez eo aet eus va zi a-enep d' e c'hrad.

Tomaz a astenn e zorn da Wilhom, leal.

Arsa, Lom ; beaj vat a souetan dit ; ha ma c'hoarvezfe ganez fortunañ du-hont, eurvad deoc'h, prosperite ha tiegezh dilogod !

Mont a ra er-maez, en ur gas ar gordenn gantañ. Elen, kasoni leizh he dremm, a sel dre ar prenestr evit bezañ sur ez eo aet Tomaz kuit ; neuze e tro a-daol-trumm davet Gwilhom.

ELEN. - Perak n' ac'h eus ket lazhet anezhañ ?

GWILHOM. - Sur, ar c'homzoù en deus lâret, kalet eo d' un den o c'hlevout. Met abalamour dit em eus graet. Evelse 'ta, eus pezh a zo etrezomp e ve anaoudek ?

ELEN. - Bez' eo pe n' eo ket ; un dra 'vat a zo serten : emañ ar c'hwen en e ziskouarn. Kompren 'ta : en ur c'hozh vourc'hig 'vel amañ, daoust ma lakaer evezh kenañ, emeur atav war deod an dud. Ha disfiziañs am eus ouzh ar vatezh, aba ma teuez amañ bep enderv. Nag a reuz 'm eus gouzañvet, gant e soñjoù a-zindan ar penn, hag e gomzoù daou du ! Ergentaou c'hoazh, pa ne zeue a-benn eus e verenn, ken a baken chalamant, - 'n ur soñjal e oas o c'hortoz, - daoust hag

eñ n' en deus ket goulennet dre c'hoap, ha me 'oa evit kemerout an tren ?

94

GWILHOM. - Terrupl eo evit sur, bevañ gant ar seurt den !

ELEN. - Ya... Daoust ha me 'oa 'evit mont da Vrest gant an tren, en deus-eñ goulennet 'vit c'hoarzhin goap ouzhin, dre ma kav dezhañ ez on staget amañ ur gordenn em c'herc'henn, 'vel ur vuoc'h en he c'hraou !

Chom a ra ur pennadig dialanet, berr warni ken taeraet eo ; ha neuze, trumm :

A bian 'ta, m' e gemero, an tren ! Mont ac'halen, mont kuit, se a fell din ober ! Peogwir ur vuhez 'vel houmañ n'eo ket ur vuhez eo ; un ifern ne lâran ket ! Me a zo va youl kuitaat an den-se ha mont ganez-te, va Lomig, da chom e Toulon asambles... a-vremañ da viken... Lâr din, Lom, te 'zo kontant da gas da Lenig ganez ?

GWILHOM, gant ul levenez wirion. - Moarvat ez on kontant ! O, Lenig, te 'rafe kement-se abalamour din-me ?

ELEN. - Ya sur e rin, hag hep tamm keuz, nebaon ! (En em stardañ a ra ouzh Gwilhom.) Peogwir te eo a garan, va Lomig ! Egile, avat, kas 'm eus outañ ! kas 'm eus outañ !

Elen en em ziframm a-dre divrec'h Gwilhom, ha redek d' an armel, ha tennañ diouti ur valizenn ha neuze dilhadoù a vern enni buan-ha-buan, en ur ventañ he jestroù gant drailhennoù frazennoù.

Gortoz 'ta, Tomaz va fried ! Te 'c'hall broudañ ac'hanon gant da wall deodadoù, me ne ran forzh ebet, peogwir va gwaz diwar-vremañ, Gwilhom Justin n' eo ken !... N' eo ket evidout e poagnin da zerc'hel an tiegezh... En e zivrec'h avat eo e kouskin bep noz...

95

GWILHOM a sell dre ar prenestr. - Lâr 'ta. N' eus ket riskl e teufe 'n un taol-kont ?

ELEN, bervek atav. - Ha pa 'rafe ? 'M eus ket aon razañ !

Leun eo ar valizenn bremañ, ha re leun, rak ne c'hell ket dont a-benn d'he serriñ. Sioulaat a ra un tammig.

Alato, evomp ur banne gwin asambles, pa 'n deus lâret ober. Evel-se ma teufe, ne gavje ket drol da gavout.

Degas a ra ur voutailh ha gwerennoù. E-keit-se e sell Gwilhom diaked ouzh ur gazetenn a zo war an daol.

GWILHOM. - Lennet 'c'h eus ar gwall-dro bet degouezhet e Gwiseni ? (Den a ra nann dre sin.) Ur maltouter en em gave en un dibid gant keneiled, ma tiskouezas dezho ur bistolenn nevez edo o paouez touchañ...

ELEN. - Me a zivun fin an istor. Ar bistolenn a oa karget ?

GWILHOM. - Just evel-se. Hennezh avat a grede start ne doa ket, o vezañ m' en doa diskarget anezhi en derc'hent da noz. E wreg eo he doa adkarget en e c'houde, gant aon rak al laeron.

ELEN, dievezh. - E c'hall bezañ. Met kement-se n' eo ket ar memes tra.

GWILHOM. - N' eo ket ar memes tra evel petra ?

ELEN. - Me 'felle din lâroust... Ur bistolenn a zo un dra... Arabat eo d' ur

vaouez ober en-dro... Dal, ur bistolenn... Tomaz ivez en deus unan.

96

Katou a zeu tre.

KATOU. - Setu ar patatez evit koan. Ma vije ho madelezh kignat ar re-se, Len ? Peogwir ganin-me 'emañ c'hoazh tout al lien sec'h da zastum...

ELEN. - 'C'h eus ket ur pennadig kordenn, 'vit sifelañ ar valizenn-mañ ?

KATOU. - N' eo ket a gerdin sur ez eus diouer amañ.

ELEN. - Sur 'vat ; met ar re-se a zo re hir ; pec'hed e ve o zroc'hañ.

KATOU. - Gortozit 'ta. Bez' ez eus ar pennad torret. Henezh 'ray an afer a-grenn.

Mont a ra da gemer ar gordenn a-dreñv an nor dehou, hag he degas da Elen.

GWILHOM. - Da vat ! 'Vit ur valizenn, brave sifel eo hounnezh !

ELEN. - 'Vit ur valizenn, moarvat... Met evit un dra all ? (Astenn a ra ar gordenn da Wilhom.) Te hag a oar diouzh ar re-se, lâr din 'ta peseurt a gav dit gant hounnezh ?

Gwilhom a sell gant aked ouzh ar gordenn.

GWILHOM. - Petra 'ta 'garfes ober ganti ? (O farsal.) D' en em grougañ 'michañs eo ac'h eus c'hoant ?

ELEN, sirius, goude ur brederiadenn verr. - Eo, c'hoant am eus d' en em grougañ, lakomp.

GWILHOM, o farsal atav. - P' emañ ar stal evel-se, kordenn welloc'h n' helli kavout.

ELEN, gant un tammig kerse. - Houmañ neuze a zo ur wir gordenn vat ?

97

GWILHOM. - Eo, evit pezh a sell ouzhin da vihanañ, rak ar seurt kordenn-se, kerkent ha te krouget, kerkent hag hi torret !

ELEN, berv en he mouezh. - Te 'zo sur e torro ?

GWILHOM. - Ar gordenn-mañ, diwar welout, ar finañ paotr a vo tromplet. Met un timonier mat ne vo ket. (Dispilhañ a ra kreizenn ar gordenn.) Hemañ a zo falskanab, evel a anver. Pa vez glebiet ne sec'h ket ken, hag un taol ma vez brein, foutu eo. Mar kerez ec'h erein ar valizenn ?

ELEN. - Ket diouzhtu c'hoazh.

En em lakaat a ra da beilhat ar patatez.

GWILHOM. - Alato... Oc'h ober se, ne vo ket re a zale dit ?

ELEN, war varteze. - Dre ma 'z an kuit, se n' eo ket un abeg 'vit lezel koan hep he c'hignat ! A-hend-all, gwelloc'h e ve, 'gav din, n' arrufen er gar 'met d' ar poent diwezhañ.

GWILHOM. - Se a zo serten. Ha c'hoazh, kaer az pezo ober, ne vezi ket hep bezañ remerket.

ELEN. - A gav din-me ivez. (Tevel a ra ur pennad mat.) Moarvat, goude bezañ pouezet holl, e vije gwel ganen mont kuit dindan ur pennad amzer, 'blamour d'

ar gwall-gomzoù. Hag ouzhpenn, ma c'hoarvezfe ganen 'n em gavout diere...

GWILHOM. - Penaos, diere ? Petra 'fell dit lâroust ?

ELEN. - Da lâroust eo... heu... e c'hallfen marteze 'n em glevout gant Tomaz, ma 'm bezo da vont kuit e c'hrad-vat...

GWILHOM, en arvar. - Mar be posupl, evit sur e ve furoc'h. Un taol-penn a zo graet en ur predig : ar c'heuz avat a bad ar vuhez holl.

98

ELEN. - O ! evit pezh a sell ar c'heuz... Keuz d' e reuz, den n' en deus !

GWILHOM. - Koulskoude un tiegezh mat a zo dit, ha kement tra 'c'h eus en da souet.

ELEN. - Enep se n' hellan ket lâroust. Kement tra 'm eus ezhomm ne vez ket refuzet din james.

GWILHOM. - Du-hont, avat, e Toulon... Ker-kenañ eo ar bevañs, am eus klevet ; hag un eil mestr, her gout a rez, n' eo ket gwall-stank ar pae gantañ. (Klevout a reer pemp eur o seniñ en iliz.) Pemp eur dija !

ELEN, evel outi hec'h-unan. - Na gorrek eo an amzer !

GWILHOM, souezhet. - A gav dit ? Me avat a zo ret din mont d' ar gêr hep dale, da gimiadiñ diouzh va re gozh. Evel-se 'ta, ne zeuez ket ? Graet ar stal ?

ELEN, krenn, goude ur brederiadenn verr. - Nann, ne dan ket. Gwell eo gortoz. Un taol e vijen libr, me a werzho ti hag all, hag am bezo arc'hant 'vit mont d' az kavout du-hont.

GWILHOM, sebezet. - Te 'werzho, emezout ?

ELEN, oc'h en em zifaziañ. - Gwerzhet e vo, a fell din lâroust... peogwir e c'houlennin va divorz... ma vo graet foar evit rannañ tout. (Teurel a ra he skouarn da selaou er-maez.) 'Glevez ket ur safar war-zu amañ.

GWILHOM, goude bezañ selaouet. - N' eo 'met ar vugale o tiskoliañ.

Tevel a reont ur pennad. Elen a chom strafuilhet, stennet he spered war-zu an diavaez.

GWILHOM. - Neuze, p' emañ an traoù evel-se, n'em eus 'met kimiadiñ diouzhit. Kerkent ha ma vo nevezinti n' az po 'met kas din ul lizher : Monsieur Guillaume Jestin, second-maître timonier, Dépôt des Equipages de la Flotte, à Toulon. Gortoz 'ta, me mont da lakaat kement-se dre skrid.

99

En em lakaat a ra da skrivañ. Elen, dievezhiet muioc'h-mui, a sell bremañ dre ar preneustr, o treiñ kein da Wilhom. Hemañ, peurskrivet gantañ, a c'hortoz ur predig.

GWILHOM, evel pa rebechfe. - A bian, peseurt emañ oc'h ober ? Er poent ma 'z on 'vit da guitaat, me 'gav din n' ac'h eus ket kalz a zamant din-me.

Elen a dro, krizet he dremm.

ELEN, o terc'hel war he mouezh virvidik. - Eo 'ta, Lomig ; damant am eus dit ervat.

GWILHOM, diskredik. - 'N ur sellout ouzh ar chas o c'hoari ?

ELEN. - Va doare damantiñ n' out ket evit hen anaout... (Mont a ra davet

Gwilhom, hag e stardañ etre he divrec'h.) Ar pezh a ouezi hepken, va Lomig, eo emañ o koll va ene abalamour dit... Gant va eurvad ganez war an douar, emañ o prenañ va ifern er bed all !

D' an ampoent e skoer ouzh an nor gleiz, Elen a bella buan diouzh Gwilhom. Disleberañ a ra he dremm hag e ra un « A ! » spouronet, heñvel ouzh ur ronkelladenn.

GWILHOM, a sell ouzh Elen gant souezh. - Petra ' c'hoari ganez ? Da gentañ, n' eo ket Tomaz eo 'n hini a zo aze, pa 'n deus skoet ouzh an nor.

ELEN. - An dra-se eo just... Dre ma 'n deus skoet hennezh !

GWILHOM. - Arsa, digor 'ta ! Peotramant e vezo kredet traoù... (Elen a gendalc'h da dermal.) Pe c'hoazh eo gwell ganez ez afen kuit ?

100

Elen a ra ya dre sin. Gwilhom a dec'h dre an nor dehou. Elen a ya da zigeriñ an nor all.

UN DEN, ouzh toull an nor. - Tomaz n' emañ ket er gêr ?

ELEN, evel abatet. - 'Mañ ket.

AN DEN. - Moarvat en em gavo da vare koan ?

ELEN. - Me n'oun dare !

AN DEN, dibasiantet. - Dont a ray poent pe boent evelato !

ELEN. - Me... n' oun dare.

AN DEN. - Erfin, kerkent ha ma teuio, lirit dezhañ dont d' an ostaleri Jaouen ar c'hentañ 'r gwellañ 'vit ur reparasion. Hep mank ebet.

An den a ya kuit. Elen, abafet atav, a serr an nor goustadik ; neuze, pa zistro, en em gav tal-ouzh-tal gant Katou, a zo deut e-barzh dre an nor dehou.

KATOU, skrijus. - Len, degouezhet ez eus ur gwall-dro !

ELEN, o krial. - Nann, se n' eo ket gwir, se n' eo ket gwir !

Redek a ra Elen er-maez a-zehou. Katou a sell outi o vont kuit, ha n' eo ket hep souezh. Tomaz a zeu tre hag a sell dre ar sal.

TOMAZ. - Elen n' emañ ket ?

KATOU, diaezet. - Ket. Emañ o paouez mont kuit.

TOMAZ, nec'het un draig. - A !

101

KATOU, goude bezañ termet ur pennadig mat. - Selaouit 'ta, Tomaz. Un dra a zo din da gontañ deoc'h ha na ray ket deoc'h c'hoarzhin.

TOMAZ, nec'het da vat. - Peseurt ez eus 'ta ?

KATOU. - Me 'm boa staget ar vuoc'h er c'hiz m' hoc'h eus lâret. Ha setu hounnezh neuze ' deus diframmet ar peul hag a zo tec'het kuit, n' ouzon da b'lec'h !

TOMAZ, disammet evit gwir. - Kaerañ taol !

KATOU. - Neuze, Len, diouzhtu m' he deus klevet, kollet he deus he skiant,

sañset, ma 'z eo aet kuit d' ar c'haloup vras. (O leñvañ :) A, va Doue, pebezh gwalleur !

TOMAZ. - Kae 'ta kaezhig ! Arabat 'n em zoaniañ ! Pa vo fin gant he follentez, ar vuoc'h a zistroio d' he c'hraou anezhi hec'h-unan. (Kouezhañ a ra e selloù war an tamm kordenn dorret chomet war an daol.) Piv 'n deus torret ar gordenn-se ?

KATOU. - Ar vuoc'h eo, Tomaz, ne vezit ket fachet. 'M boa choazet an hini vras-se, 'vit m' he defe peadra en he zro da beuriñ en hec'h aez.

TOMAZ, o tispilhañ ar c'hanab, outañ e-unan. - Bremañ e komprenan pe 'vit tra eo 'n em gavet re verr...

Kenderc'hel a ra da sellout tro-war-dro hag e wel ar valizenn dindan an daol. He digeriñ a ra, ha teurel evezh ouzh ar pezh a zo e-barzh. Dre e jestroù dilavar e tiskouez bezañ komprenet ar pezh a zo c'hoarvezet e-pad m' edo kuit. Neuze, hep adserriñ ar valizenn zoken, en em lez da gouezhañ war ar gador, dirak an daol, hag e chom mantret, e benn etre e zaouarn.

Elen a zeu tre goustadik dre an tu kleiz. Merzout a ra ar valizenn digor, gwelout a ra Tomaz, ha kompren ez eo dizoloet pep tra. Chom a ra a-sav e-kreiz al leurenn, e-keñver Tomaz, ha menel pleget ha distourm, betek ma sav-eñ e benn.

102

ELEN, he mouezh o krenañ. - Adpaket eo ar vuoc'h. Kavet 'm eus ar sakrist o kas anezhi en-dro.

TOMAZ, goude bezañ sellet hir amzer ouzh Elen, gant e vouezh habask, ha war un ton madelezhus-tre. - War a welan, gwreg, tomm eo bet dit gant ar vuoc'h. Ha din-me ivez eo bet tomm gant ar c'hast a gordenn. Met 'n Aotrou Doue 'n deus arañjet tout en doare mat. (O tiskouez ar gador en e geñver :) Alo, azez amañ, hag evomp un taol asambles, da c'hortoz koulz koan !

GOUEL

Treñ da wir huñvre ur bed marzhus

« Huñvreet em eus ur wech e oan ar Roue Arzhur, tokarnet skedus, oc'h erruout war an dachenn emgann, ar sonadeg o vezañ en he bravañ. Hogen, souezhusat tra, ne seblante den teurel pled ouzhin. Oc'h atersañ a-greiz-holl ur c'heneil din, redek a ris d' e vete. Hogen goude bezañ taolet ur sell diseblant war va zokarn ez eas gant e hent en ur vourkomz « Sell 'ta, gouel 'zo hiziv gant paotred-an-tan ?» (1)

Tu 'zo da chom souezhet dirak seurt diskleriadenn graet gant Tangi Malmanche war-lerc'h ugent vloavezh purgator gouzañvet gant e oberoù, o c'hortoz bezañ embannet ! Da lavarout gwir, an hir a gousk-se a zo bet torret gant un dezenn savet gant an Itron Kerdraon-ar-Gov e Rijsel (1960) hag ivez gant un toulladig abadennoù ma 'z eo bet c'hoariet e bezhioù enno. Kounaomp tri bloavezh Lokorn (1963, 1964, 1965) pa veze diskouezet brav *Gurvan ar marc'heg estrañjour* gant strollad C'hoarierien Vreizh renet gant Yann Moign, hag an abadenn dreist graet gant strollad Loeiz Andouard, o tiskouez *Gwreg an Toer*. Berzh o deus graet warlene e Breizh, ha zoken e Pariz. Embann ur pezh a zo ar c'hammed kentañ a-raok c'hoari anezhañ. Hetañ a ran evit hor c'hoariva hag evit hor plijadur ma vo striv embannadurioù Al Liamm hag o berzh mat un diougan diouzh ar c'hentañ.

(1) " Buhez Salaun, lesanvet ar Foll ". Perrin, 1921, XII.

Hervez Youenn Drezen, chomet keneil da v-Malmanche, e oa « ken brudet hag a oa dianav ». Ganet en un tiegezh bourc'hizien, bro-Angoulem o orin, deut da anezhañ e Brest abaoe an 18-vet kantved, e ziv vamm-gozh a c'hoantae evitañ ar Verdeadurezh vrezel. E 1892 e kuitaas lise Brest, re zister moarvat, evit mont da Golaj Stanislas e Pariz. Hogen, a-benn ar fin ez eo e Roazhon, lec'h e voe diskibl da Jozeb Loth, ma krogas gant studioù war... ar gwir. E Pariz e c'hounezas e vachelouriezh, ha bloaz war-lerc'h, e 1898, an aotreegezh. Abaoe o donedigezh da Vrest, tud Malmanche o devoa graet berzh er " Royale " ; unan eus e dad-you-kozh avat a voe maet Brest, ha dibennet a-gevret gant 25 eus e genseurted, merourien departamant Penn-ar-Bed, d' an 3 " prairial " eus bloaz ar Republik, evit bezañ nac'het adneveziñ e garg e 1791. Heug en devoa Tangi rak ar politikerezh ha gwelloc'h e voe dezhañ ar vicher a c'hoarivaour, ur c'hoant deut dezhañ marteze digant e dad-you all, Per, a savas Ti-C'hoariva kêr-Vrest, bet distrujet e-kerz tangwall 1919.

« Pa voe ret din mont diouzh maner ar Rest, em eus degaset va dilhad ganin em arc'h, ha va bed-me em fenn. Diwezhatoc'h e fellas din mirout hemañ etre follennoù paper, ma c'hoarvezfe ganin koll va fenn » (1),

Ar follenn gentañ, ur barzhoneg, a voe embannet e miz Here 1898 er gelaouenn " An Erminig " renet gant Loeiz Kerzilin (Louis Tiercelin). Kontañ a ra ennañ Tangi Malmanche an diviz etre ur bugel hag un delwenn c'hreunvaen. Sant Yann Valanant a zo ur sant breizhat o tremen e vuhez vaenek en ur chapel vihan war douar parrez Plouvian, nes da vaner ar Rest e Plabenneg. Ar bugel, anezhañ ur seurt doareenn-oabl o redek ar maezioù, an oberour an hini eo en e zomani a lanneier, mein ha chapelioù.

Ho ti a gren gant ar c'hozhni
Drez en ho pered, ha kinvi :
Mogerioù kozh, kalonoù seac'h
Gante, dilez hag ankounac'h

Yann ! Yann Gwenn ! Ho tivrec'h torret
Gant un dizoujus a zo aet

Ha setu war ho penn en drez
Un evnig en deus graet e neizh.

(1) " Buhez Salaun; lesanvet ar Foll ". Perrin 1926. VII.105

105

Embannet e vo daou varzhoneg all e-barzh an Erminig : en hevelep bloaz, e miz Kerzu ur " werz Nedeleg " ; hag e miz Gouhere 1901 " Lenn ar Rest ". Hogen gant ar varzhoniezh-huñvre, ne zeue ket Malmanche a-benn da dreiñ da fetis bed marzhus e vugaleaj. E-barzh niverennoù miz Here, miz Du ha miz Kerzu 1900 an Erminig, dibabet e vo da vat, gant ur gontadenn e div veilhadeg ar stumm a ray gantañ diwar neuze, ar C'HOARIVA : « diwar an hengoun kozh a laka an Anaon gaezh da zont en-dro d' ar gêr, d' o c'hoan e noz Gouel an Hollsent (1) Tangi Malmanche a savas *Marvailh an Ene naoniek* ». Da dudennou, en devo kouerien e vugaleaj, oc'h ober gant o yezh eeun ha kalet en devoa-eñ desket diganto. Ha pa oant bet ganet diwar huñvre, e oa ret o lakaat da adkavout o dremm bemdez ! Da noz Gouel an Hollsent 1901, e sal vras maner ar Rest, Urien Goant, ar miliner a eure an Ankou hag e wreg, Mari ar Rouz ar vamm ; roll Yann Vareg, an " tasmant " a oa dalc'het gant Tangi Malmanche. Abadenn gentañ un huñvre den hag a voe hini diwezhañ bed marzhus ar bugel.

Pevar bloaz diwezhatoc'h e voe adkemeret an oberenn-se gant Gaston Esnault en Athénée-St-Germain, gant c'hoarierien vreizhat. Berzh a reas. Neuze e voe savet gant Tangi Malmanche un eil doare d' e bezhig, pouezus-kenañ evitañ. Lec'h Yann Vareg, tasmant an doare kentañ, a voe kemeret gant an *niv. 202* tec'het kuit diouzh galeoù Brest da noz Gouel an Hollsent. E dec'hadenn dre vaezioù bro-Leon a echuo e ti ar vamm. Edo-hi o c'hortoz he mab, ha dont a reas, amzer dezhañ da lonkañ un asiedad soub tomm ha da vont davet ar re all, o c'hortoz anezhañ e-maez !

(1) " Buhez Salaun, lesanvet ar Fou ". Perrin 1926. LXIV.

106

Er c'hontrol, ne voe biskoazh embannet na c'hoariet " An Intañvez Arzhur ". Gwir eo ne oa ket ar pezh-se, livadenn dost d' ar vuhez kriz, poblek-kenañ ar yezh anezhañ, tre diouzh temz-spered an oberour, barzh ha lennegour ma oa anezhañ ! Soñjal a rae da Dangi Malmanche, ha gant gwir abeg, e vefe bet barnet evel ur fazi yaouankiz ma vije bet embannet a-raok da beurrest e oberennoù bezañ anavezet. Hogen, al luc'hskeudenn-se eus ene Breizh a-vremañ, lezober a-walc'h dirak an tonkadur daoust d' e c'hoantaennoù nac'hañ an araokaat, Malmanche a soñje dezhañ e oa ret he c'haout da beurglokaat an Trifezhiad, e-kichen **Gurvan ar Marc'heg estrañjour** hag **ar Baganiz** (1).

Kaset kuit abaoe pell gant e vammoù kozh, ober a eure e venoz e 1907 mont larkoc'h c'hoazh gant e vennad, ha dont a reas da vezañ... mestr-gov e Kromhent (Courbevoie), e bannlev Bariz. Evel-se e teuas ar 7, ha goude ar 4eil straed Adelaid da vezañ lec'h repu unan eus hor brasañ skrivagnerien.

(brezhoneg gant Andreu LATIMIER)

(1) dielloù dastumet e ti an oberour.

NOTENN :

Anv Malmanche e vez skrivet a-wechoù Malemanche. An doare-skrivañ-mañ a zo bet implijet evit ar wech kentañ en embannadur " Gurvan ". Kavet e vez ivez war un adskrid en doa tad Malmanche goulennet e 1866 digant Armorial Général de France. Dibabet hon eus, a-benn ar fin, skrivañ Malmanche, hep " e " dre ma 'z eo an anv douget gant e familh, dre ma klot gwelloc'h gant distagadur ar brezhoneg hag ivez dre ma 'z eo an doare-skrivañ en doa dibabet evit embannadur e oberennoù e dibenn e vuhez.

Yud

Skrivañ 'raen va anv
gant lizherennoù ar soubenn
war vord feilhañs un asied dantet

Mirout 'raen gwerzennoù diheson
en ur c'haier-skol glas
breset ha prisius

Pegañ 'raen war mogerioù va c'hamb
skeudennoù divlaz ha koll-o-liv
broioù kevrinus

Tresañ 'raen en traezh
d'ar skreved da c'hoarzhin
enkrezioù disouezhet

Engravañ 'raen er c'hoad tener
gant ur gontell laeret
karantezioù dispi

Livañ 'raen war dremmwelioù louet
ar baradoz arnevez
trelat va dic'hoanag

Me eo ar bleiz digenvez
hag aet on skuizh
Me eo ar bleiz digenvez
hag aet on da greviñ

HA VERKINGETORIX A LAVAR

HA VERKINGETORIX A LAVAR : gallout a rez, Kaezar,
kemer diganeomp an douar e-lec'h emaoomp o vevañ,
met an douar e-lec'h omp marv n' heller ket e gemer.

Stlepet em eus va c'hleze d' az treid :
evel-se on, evel-se va fobl ivez.
Me oar ar pezh 'zo o c'hoarvezout.
Marv eo hirio
ar re a zelleze bevañ e bro an Arverned
ha gant ar re a chom
ne fell ket din bevañ

Gouzout a ouzon dija, gwelout a ran anezho
o teskiñ yezh o mistri, oc'h ankouaat hini o zadoù,
gwelout a ran ar vezh ganto en abeg d' o daoulagad glas,
d' o zud ha d' o langaj teñval ;
o gwelout a ran aet da Romaned, o santifikadoù keodedouriezh

war o c'halon.

Ra vezo, o Impalaer, dre da impalaeriezh a-bezh,
ur yezh hepken, ur feiz hepken hag ur vroad hepken.
Ra vezo lakaet e kerz da soudarded,
da varc'hadourien, da lakepoded,
un hent unanet ha diriskl
betek an Thule Diwezhañ,
betek ribloù ar Styx.

Emaon o vont da vezañ skourjezet er C'hapitol,
met va c'harantez ha va c'hasoni
ne c'heller ket o lazhañ.
Va c'hasoni a chomo e kevioù-kuzh ar bloavezhioù
evel ur gaouenn o c'hervel an dismantr
warnout ha war da gêr varlonk,
o Kaezar.
Diwar pismoc'h da volontez da-unan
emañ da gastiz o vont da greskiñ evel un dervenn.

109

Da impalaeriezh a zo o tont hag o vont.
Kreskiñ a raio an ed war ar marc'hallac'hioù
ha war ar forum e peuro ar givri.
An dorn o skeiñ a vo va hini
hag hini va fobl lazhet.
Kleze ar Vandaled a zo etre va daouarn.

Dont a ra ar mare ma c'hello ken lorc'h ar Roman
terriñ ur geotenn war hent an aloubadegoù.
Dont a ra ar mare ma tarzho gwallc'hoantegezh Roma
evel ul laouenn-goat dindan taolioù-dorn ar re deut
eus ar Reter, an Norz hag ar Su.

Hogen gra diouzh ma karez.
Gouzout a ran emañ ar peul hag ar c'hleze o c'hortoz ac'hanon,
rak an holl re a zelleze bevañ e bro an Arverned
a zo marv hirio.

Diwar un droidigezh c'hallek gant Jean-Luc MOREAU.

110

FEDERICO GARCIA LORCA

Gwerz ar Guardia Civil Espanola

Ar c'hezeg, du ez int.
Hern ar c'hezeg, du ez int.
War o c'habelloù o luc'hañ
pokardoù liv ha koar.
O fennoù marv a zo plom
setu perak ne ouelont ket.
Gant o ene ler gwerniset
ez ont dre an hentoù.
War o lerc'h e tiwan
ur sioulder a beg-gwez du
hag ur spont a draezh munut.
Tremen, ma fell dezho tremen,
ha kuzhet en o fenn

ur steredoniezh diresis
a armoù difetis.

O ! Kêr ar C'hitaned !
E pep korn, bannieloù.
Al loar hag ar sitrouilhez
gant ar c'hignez e boestoù.
O ! Kêr ar C'hitaned !
Piv az kwelas az tisoñjo ?
Kêr a c'hilac'har hag a vousklenn
gant da dourioù kanell.

Pa ziskennas an noz,
noz a nozo 'hed an noz,
ar C'hitaned er govelioù
a rae heolioù ha biroù.
Ul loen kezeg gwall skoet
a c'houlenne digor en tiez.
Kigi gwer a gane
e Jerez de la Frontera.
An avel yen ha noazh a bak an den
e korn ar souezhenn,
e-pad an noz arc'hantek,
noz a nozo 'hed an noz.

111

Ar Werc'hez ha Sant Jozeb
a gollas o sklakerezioù,
ha klask a reont ar C'hitaned
evit gwelout hag int o c'havint.
Ar Werc'hez a zo ganti
ur wiskamant a vaerez,
e paper chokolad
ha kolieroù kraoñ alamandez.
Sant Jozeb a fiñv e zivrec'h
dindan ur c'habell seiz.
A-dreñv Pedro Domecq
gantañ tri sultan a vro-Bersia.
Al loar nevez a sone
ur goursav a c'hwibon.
Bannieloù ha leternioù
oc'h aloubiñ pep pondalez.
Dirak ar melezour o tifronkañ
dañserezed digroazell.
Dour ha skeud, skeud ha dour
e Jerez de la Frontera.

O ! Kêr ar C'hitaned !
E pep korn, bannieloù.
Lazh da c'houleier gwer
'mañ ar Guardia o tostaat.
O ! Kêr ar C'hitaned !
Piv az kwelas az tisoñjo ?
Lezomp anezhi pell diouzh ar mor
hep krib ebet evit he blev.

112

Tostaat a reont daou-ha-daou
ouzh ar gêr el levenez.
Ur safar divarvel
ac'h aloub ar seier-tennoù.
Tostaat a reont daou-ha-daou.
Daugement nozel lien.
An neñv zoken zo deut da vezañ

un diskouezadeg kentrou.

Ar gêr, dianken a-grenn,
a zigore bras he dorioù.
Daou-ugent eus ar Guardia civil
a wastas anezhi.
An horolajoù a ehanas,
evit kuzhat an diskred,
ar c'hognag er boutailhoù
a deuzas en miz Du.
Un nijadenn youc'hadennoù
a savas eus ar gwiblennoù,
ar c'hlezeier a droc'h an avel
diskaret gant hern ar c'hezeg.
Dre ar straedoù d' an amloar
ar merc'hed kozh a dec'h
gant kezeg hanter-gousket
ha jarloù leun a bezhioù.
Dre ar straedoù a-serz
ar wall c'habelloù a bign,
ha war o lerc'h e lezont
luc'hed prim ar sizailhoù.

E kraou Betleem
ar C'hitaned a zo bodet.
Sant Jozeb, leun a c'houlivoù
a sebeilh ur plac'h yaouank.
Fuzuilhoù lemm ha pennek
a-hed an noz a zasson.
Ar Werc'hez a louzaou ar vugale
gant halo ur steredenn.
Met setu ar Guardia civil
a had glaouiadennoù,
e-lec'h eo entanet,
yaouank ha noazh, ar faltazi.
Rosa, merc'h ar C'hamborios,
a hirvoud war he zreujoù
he divronn troc'het
pozet war ur plac.
Ha merc'hedigoù all a rede
argaset gant o flañsonennoù
en un aer lec'h ma tarz
rozennoù poultr du.
Ur wech deuet an toennoù
da vezañ en douar ervennoù
an deiz o sevel a luskellas e zivskoaz
en un drolinennadur veinek.

113

O ! Kêr ar C'hitaned !
Ar Guardia civil a bella
dre ur riboul a sioulder
hag an tan en-dro dit.

O ! Kêr ar Chitaned !
Piv az kwelas az tisoñjo ?
kavet e vi war va zal
c'hoariell loariet ha traezh.

(tr. Rivanon KERVELLA.)

Nenn Jani

KENDALC'H

« Me 'anavez kalz tud, » he doa lavaret o prometiñ d' ar vamm klask ober un dra bennak evit he merc'h Lizig.

Gwir e oa ez anaveze kalz itronezed er c'harter. Ur ger digant hini pe hini anezho, ha kemeret e vije ar plac'hig da zeskardez en ul labouradeg-wrierezh. Se a grede da vihanañ.

Antronoz vintin, er ru Traverse, e welas div itron o vont gorrek a-hed ar riblenn, uhel o fri, ken meurdezus ha doueezed diskennet war an douar, gwisket diouzh ar c'hiz diwezhañ. O-div e oant gwiragez ofiserien-a-vor. Nenn Jani he doa keginet evito.

O saludiñ a reas, hag un hejadennig-penn a rejont dezhi.

« Ho tigarez, itronezed... »

Gant ur sell souezhet e chomjont a-sav.

E berr gomzoù, ar chikolodenn a reas he reked. Ha kerkent e verzas he fazi. P' he dije goulennet diganto al loar, ne vijent ket bet brasoc'h estonet. Unan a grizas he zal. Eben a gammas he beg.

« It da welout person parrez Karmez. »

« Pe leanezed ar Retred. »

Hag e kendalc'hjont gant o hent.

En un taol he doa Nenn Jani spurmantet an islonk a oa etre ar bourc'hizezed-se hag ar bobl. Keit ha m' o deveze ezhomm eus he servij evel keginerez e vezent seven en he c'heñver, o tiskouez zoken un doare doujañs. Hogent int rentañ servij dezhi ! Bevañ distag a raent, evel en ur c'hastell serret-kloz. Dall e oant ouzh ezeved ar re a boanie en-dro dezho evit gounit pep kreunenn vara a zebrent, pep tamm truilhenn a lakaent war o c'hein.

« Setu aze div, » a soñjas Nenn Jani, « na dañvaint ket buan eus va c'heusteurenn ! »

115

Un tamm furnez a oa evelkent en o lavar. Koun a zeuas dezhi e rae ar veleien hag al leanezed eus o gwellañ evit skoazellañ krennarded ha krennardezed da gavout micher. Bez' e oa ivez itronezed a roe darn eus o amzer da blediñ gant ar patronajoù hag « an oberoù ». Ar chikolodenn gozh, avat, na vanke morse da vont d' an oferenn d' ar Sul na d' ober he fask ur wech ar bloaz, n' he deveze darempred ebet gant ar re-se. Ne oa ket eus rumm an « troterezed-iliz » nag ar « raned-piñsin-dour-binniget ». Goap a rae anezho.

Dre e welas ur beleg o tremen. Hag hi da sellout outañ ken start ma savas e dog d' he saludiñ. C'hoant he devoe da dostaat ha da ober he goulenn. Dalc'het e voe gant ar soñj e oa Lizig eus parrez Sant-Loeiz, ha ne rae ar beleg-se nemet war-dro tud parrez Karmez.

Abaoe ma oa keginerez, n' he doa mui Nenn Jani ezhomm evel gwechall da zevezhiañ a-hed ar sizhun. E daou ti ez ae hepken, d' al Lun ha d' ar Gwener e

ti an Itron Tomazi, d' ar Meurzh ha d' ar Sadorn e ti an Aotrou Baruel.

Feal e oa chomet d' an Itron Tomazi abaoe meur a vloaz, ha da labourat eviti ez ae ar mintin-se, d' he ranndi vihan er ru Jean-Macé. An intañvez-se, eus he oad, ne oa ket pinvidik a-walc'h da gaout matezh, na zoken da baeañ un devezhourez bemdez. Poan he deveze o kerzhout, hag he c'hamb, he c'hegin vihan hag he saloñs-sal-debriñ ne vezent ket dalc'het re gempenn. Tremen he amzer oc'h ober dantelezh. Karzennoù, kelc'hiennoù, bandennoù dantelezh a oa dre-holl, war an taolioù, keinoù ar c'hadorioù, rizennoù ar siminalioù hag ar prenester, ha c'hoazh e oa leun he armelioù a rolladoù dantelezh na vije kavet implij dezho birviken.

Dek eur e oa, ha pa zigoras an nor da Nenn Jani, edo o paouez sevel eus he gwele, he blev gwenn a-fuilh en-dro d' he fenn, ha pikous he daoulagad.

Nenn Jani en em lakaas evel boaz da fichañ dezhi he dijuniñ a-raok klask stourm ouzh ar boultrenn hag an dizurzh.

Prederiet ha ma edo c'hoazh gant soñj Lizig, e lavaras :

« Me 'anavez ur plac'hig trizek vloaz a fell dezhi deskiñ ar vicher gemenerez. »

Sebezet e voe gant respont an Itron Tomazi :

« Komzet em eus dec'h gant div zimezell a zo o klask un deskardez. A, nann, n' eo ket kemenerezed int. »

« Piv ar re-se 'ta ? »

« An Dimezell Lila hag an Dimezell Zita he c'hoar. C'hwi 'oar, ar c'habellerezed nevez. »

116

« Pelec'h emañ o stal ? »

« Er ru-mañ 'ta ! »

Er ru Jean-Macé, n' anaveze Nenn Jani nemet div stal gabellerezed, hag hini anezho ne oa dalc'het gant dimezelled.

« O, n' eo ket ur stal. E kambr e labouront. Un tog o deus graet din. Aze emañ war ar gomodenn. »

Nenn Jani a daolas ur sell ouzh ur boned-intañvez pintet direspect war grec'h ur voullenn wer, enni ur Sant Jozeb e plastr.

« Ezhomm o deus eus un deskardez ? »

« Ya, gant ma vo ur plac'h savet-mat. Bez' e c'hellit mont d' o gwelout ha lavarout e teuit eus va ferzh. »

Ar chañs a oa troet a-du gant Nenn Jani, pa c'hortoze nebeutañ.

Hag ar chañs a droas a-du ganti c'hoazh antronoz, ar Sadorn. En deiz-se e labourere evit an Aotrou Baruel. Hemañ, un den tregont vloaz, en doa ur ranndi er ru Jean-Macé ivez. Nenn Jani a gave aes e servijañ, rak ne oa ket dimezet, ha peurliesañ n' edo ket er gêr pa zeue. Edo en e vurev er porzh-kenwerzh, rak bez' e oa eilrener un ti paramanterezh-mor.

Ober ar gwele en e gambr vihan, dastum an tammoù sigaretennoù a-stlabez en e sal-studi, skaotañ e dasenn er gegin, reiñ un taol-skub dre-holl, tremen un torchouer pe ur barr-pluñv war an arrebeuri, kement-se a veze graet buan hag hep poan. An aotrou ne oa ket figus. Ul lojeiz-paotr, a soñje Nenn Jani, a zo

baradoz un devezhourez.

Tost echu e oa he labour, pa glevas an alc'houez o treiñ er botailh. Ar mestr a zeuas e-barzh.

« Klevit 'ta, aotrou, » emezi. « N' eus ket er porzh-kenwerzh ur plas evit ur paotr daouzek vloaz ? »

« Daouzek vloaz ? »

« Ya, ha speredek, a gav din. »

« Ma ! Hor mousig-ni er burev a vezo triwec'h vloaz dizale, hag a zo o vont da vartolod. Ret e vezo deomp kaout un all. Daouzek vloaz 'zo un tammig yaouank. Kasit eñ evelato da 'm gwelout. Pezh a c'hellin ober a rin. »

O tont er-maez eus an ti, Nenn Jani a welas un dra n' he doa ket merzet c'hoazh. E-tal ar porched, ur blakenn gouevr, engravet warni div rozenn, hag etrezo, e lizherennoù stouet : « Lila ha Zita. - togoù ».

* * *

117

Ret e vije dezhi distreiñ da di ar ru Kre.

D'ar Sul goude merenn, e oa prest da vont en hent, pa voe skoet war he dor.

Ha setu dirazi un dimezell yaouank, gwisket-kran, un tog-plouz kanotier war he fenn. Mousc'hoarzhin outi a rae.

« Demat, tintin Jani ! »

« N' eo ket posupl ! Malvina ! »

N' he doa ket anavezet diouzhtu he nizez.

P' he doa he gwelet ar wech diwezhañ, e oa Malvina tost da vont d' ar skol-vestrez e Kemper. He blev du hir a leze neuze da gouezhañ, dalc'het gant ur pikol spilhenn-alc'houez, war he c'hein, e-giz ur plac'hig. Bremañ e oant torkadet. Kresket e oa he ment. He askre, dindan he bolero, a oa hini ur vaouez. Stardet oa he dargreiz gant ur gouriz ler gwenn. Ha ken berr e oa he brozh ma chome dizolo traoñ he botinezoù ler melen.

« Feiz ! Me ' oa o vont er-maez. Mes n' on ket preset. Deus en ti 'ta, ma raimp un tamm kaozeadenn ! »

Goude reiñ keloù eus he zad, he mamm, he breur Aogust, e komzas anezhi he-unan. He moereb Jani a ouie e oa bet skolaerez e Landudeg, ha neuze e Sant-Tegoneg. Bremañ e oa bet anvet e Kerber, ya, e-kichen Brest, e Kerber-Gilbignon ! Hag hi ken yaouank, bezañ lakaet da vestrez-skol tost d'ur gêr vras !

« Ha deuet out da welout da skol nevez ? »

« Nann, n' em bezo ket amzer. Forzh penaos, ne grogan nemet goude ar vakañsoù bras. »

« Petra a rez-te e Brest neuze ? »

Malvina a zisklerias e oa deuet eus Sant-Tegoneg er mintin-se da gemer perzh en ur vodadeg skolaerien. D' he moereb e voe ken iskis he c'hlevout ma krede a-boan edo aze he nizez, ar plac'hig lent, tavedek he doa gwelet e Kastell gwechall. Komz ha komz a rae, en ur fiñval he bizied dibaouez, ur bervig a vare

da vare en he daoulagad du. Ha ne intende ket ar vaouez kozh an holl c'herioù a zeue ganti. Meneg a oa eus sokialouriezh, eus ar rekis ma oa da grouiñ ur gevredigezh nevez, da ziskar galloud an arc'hant, da reiñ deskadurezh d' ar bobl, da grouiñ ur skol gant ezhommoù an ugentvet kantved, da vont skoaz-ouzh-skoaz gant ar broletared e pep bro.

« Ma ! » eme Jani pa gavas he zro da droc'hañ ar gentel, « sur a-walc'h ez eus dienez a-walc'h e Brest bremañ gant an diskrog-labour ! »

118

Hag e lavaras e oa o vont da welout ur micherour yaouank gouliet e displegadeg vras ar Merc'her.

« Ur micherour gouliet ! » eme Valvina. « Ha me a c'hell mont ganez ? Amzer am eus. Da bemp eur hepken e kemeran an tren. »

Nenn Jani a asantas. Gwelout he nizez a oa bet dezhi ur blijadur dic'hortoz, mesket gant displijadur avat o soñjal e vije ret dezhi marteze daleañ he c'hefridi da di mamm Ernest.

Hag int o-div o vale a-hed ar ru Siam, hogos goullo e peoc'h an endervezh Sul, e kontas da Valvina abadenn ar Merc'her, ha penaos he doa graet anaoudegezh gant an dud-se.

« Un ti paour eo, te 'oar. »

Aon he doa na vije feuket an dimezellig mistr he dilhad oc'h en em gavout en un ti micherourien, daoust d' he c'homzoù brav a-zivout ar bobl. Estonet e oa c'hoazh gant ar brezegenn he doa klevet diganti. Ne oa ket sur gant he zad Marsel Losouarn, na gant Katell he mamm, marc'hadourien vihan en ur gêr vihan, prederiet hepken gant o c'henwerzh, he doa desket katekiz ar Re Ruz.

* * *

Pevar den a oa e kambr vras ti ar ru Kre pa errujont.

Da gentañ, e oa Ernest. Gwellaat a rae d'ar c'hrennardig, ha lakaet oa bet war ur gador-vrec'h, e c'har c'houllet astennet hag harpet war un dorchenn. Drouklivet e oa c'hoazh e zremm, nemet bev oa e zaoulagad glas pa vousec'hoarzhas ouzh Nenn Jani.

Edo e vamm oc'h ober kafe, hag o paouez lakaat peder bolenn war an daol.

An daou all a oa gweladennerien : Kaourintin Gourvest adarre, ha gantañ ur vaouez war-dro tregont vloaz.

« Pelec'h emañ ar vugale all ? » a c'houlennas ar chikolodenn.

« O ! aet da bourmen ! Koulz dezho bezañ er-maez gant an amzer vrav a ra. »

Muioc'h a urzh a oa er gambr eget en deiz ma oa bet Nenn Jani eno evit ar wech kentañ. Ne weled mui a zrailhennoù mezher neblec'h, ha lakaet oa bet ar golo koad war ar mekanik da wriat.

119

Degaset oa bet gant ar vamm div volenn all, hag aet e oa en ur gambrig, pe gentoc'h un toull, a dalveze dezhi da gegin, o lezel ar re all da gaozeal evel ma karent. Ne ouient ket tre petra lavarout, ha goude komz eus an amzer e voe graet meneg eus an darvoud bras, an harz-labour. Ernest ne lavare mann, ha dizale Nenn Jani hag ar vaouez yaouank a rankas tevel da selaou Kaourintin ha Malvina, deuet helavar. Ul liamm a oa savet etrezo, p' en doa diskleriet Kaourintin e oa sekretour sindikad ar vicherourien, ha p' he doa diskleriet Malvina e oa-hi sekretourez strollad ar skolaerien lik.

« Fenez, » eme Gaourintin, « ez eus bodadeg vras. Ne garfec'h ket dont ? »

Se en doa lavaret en ur farsal. Ne oa ket ar c'hiz en amzer-se d' ar merc'hed kemer perzh e bodadegoù politikel. E zaoulagad a selle seder ouzh ar plac'h yaouank koant, hag e c'hoarzhe, krizennoù bihan o roufennañ dre-holl e zremm gaer.

« Karout a-walc'h a rafen, » eme Valvina. « Mes ret eo din distreiñ da Sant-Tegoneg. »

Nenn Jani, un tammig hegaset, a oa mall dezhi ober he c'hefridi.

Ma lavaras, pa zistroas mamm Ernest gant ar c'hafe :

« Soñjet em eus en ho merc'h Lizig. Me 'gav din... »

« Gortozit. Me 'm eus un dra bennak da ziskouez deoc'h. »

Hag o lezel ar gafetierenn war an daol, e reas sin d' ar chokolodenn da zont d' he heul e kambr ar baotred e-kichen. Klozañ an nor a reas.

« Kavet em eus... » eme Nenn Jani.

« Komzit izel. Kavet hoc'h eus labour evit Lizig ? »

« Ya. »

« Digarezit ac'hanon. Mes ar vaouez yaouank a zo aze 'zo ar gemenez he deus kemeret Lizig da zeskardez. Feuket e vefe marteze. »

Nenn Jani a zisplegas e berr gomzoù pezh he doa da lavarout.

Pa zistrojont d' ar gambr vras, e oa diviz politikerezh atav etre ar micherour hag ar skolaerez. Ar re all n' o doa tra d' ober nemet selaou. Betek ma kavas Malvina, o sevel ar mondrig ispilhet ouzh he chadennig arc'hant, e oa peder eur hanter.

« Poent din mont da gemer an tren, » emezi.

Ar weladennerien a savas, hag a gimiadas diouzh Ernest hag e vamm. Deuet er-maez er ru Kre, ar chokolodenn hag he nizez a yeas diouzh un tu, an daou all diouzh an tu all. Nenn Jani a verzas he doa ar vaouez yaouank, a raed Karo anezhi, silet he brec'h dehou dindan gazell gleiz ar micherour.

120

* * *

Pemp eur nemet kard e oa, ha ne oant ket aet pelloc'h eget ar blasenn La Tour-d'Auvergne.

« Klev 'ta, tintin Jani, » eme Valvina, « ret e vo din redek betek ar gar da dapout an tren. Me 'zo 'vont da lavarout dit kenavo. »

Hag o pokat da zivjod ar vaouez kozh ez eas kuit.

Nenn Jani a chomas da sellout ouzh he nizez o pellaat skañv a-hed ru ar Maerdi. En un taol e santas e oa skuizh. Dre chañs e kavas war ur bank ur plas goullo. D' ar Sul e oa he boaz menel er gêr, ur wech aet d'an oferenn. Nag iskis an darvoudoù o doa torret en ur sizhun chadenn he buhez, graet dezhi ober anaoudegezh gant tud estren, kaout keloù eus kerent na gontent mui a-boan eviti ! Un nebeut mizioù diagent, e oa bet o keginañ en un ti, hag e oa deuet ur paotrig koant c'hwec'h vloaz er gegin en ur c'hoarzhin da ziskouez dezhi traoù marzhus : bleunioù japanat, emezañ. Heñvel oant ouzh pastilhez. Nemet pa daoled

anezho en dour e tigovent, e korvigelle en-dro dezho neudennoù liesliv a bep tu, ez aent da draoù evel bleunioù marteze, hogen ivez evel laboused ha balafennoù. Ha piv en dije divinet e oa kuzhet seurt burzhud en ur bastilhezenn ? Ma ! a soñje Nenn Jani, me n' on ket kaer evelto. Ha koulskoude, me ivez, e-giz pa lavarfed, a zo bet taolet en dour, ha setu kresket en-dro din neudennoù, hag e krapont ouzh kement a gavont war o hent, hag e pakont traoù evel en ur roued. Pe evel ma pak ur bugel chevr ha peskedigoù en e avenell, hag eñ o redek en aod en hañv e-mesk ar c'herreg d' an izelvor. Malvina ! Merc'h Katell ! Me a yae gant Katell pa oamp bihan da redek war draezh Pempoull. Nag espar e tleen bezañ, diarc'hen, noazh va divesker, troñset va brozh betek va daoulin, va c'hoef chikolodenn war va fenn ! Da zaouzek vloaz on bet lakaet e koef, adalek deiz va fask kentañ. Katell a oa bihanoc'h, hag a oa ur c'habell war he blev, skoulmet gant lasoù dindan he groñj, hag e rede atav war va lerc'h. Piv en dije lavaret e vijemp un deiz dispartiet ?

121

Fañch va gwaz ne gare ket kalz Katell. Ne ouzon ket perak. O, ne fell ket din soñjal er sulvezh-se a oamp aet hon-daou da dremen e Kastell-Paol, hag e-pad merenn gwaz Katell en doa roet da Fañch re a win ruz da evañ, ha lakaet div werennadig rom en e gafe, hag e oa savet ar voeson d' e fri, hag en doa lavaret traoù ken rust da Gatell ! Ha me ouzh e glevout am bije karet sankañ dindan ar plañchod gant ar vezh. Me 'gav din em bije gwelet Katell aliesoc'h panevet Fañch. Paour kaezh Fañch ! Pell 'zo n' on ket aet da ober war-dro ar bez. Bered Kerfaotraz a zo pell. Nann, n' emañ ket ken peil-se. N' eus nemet kemer an tram er ru Siam. Ar bleunioù am eus lakaet ar miz diwezhañ a zo gweñvet-holl, me 'zo sur. E bered Kerfaotraz e tle bezañ ivez bez gwaz mamm Ernest. Eno e vez interes ar re baour. Pezh a c'haller ober gant arc'hant ! Sellit, e tiez ar vourc'hizien-se, an dispign a vez graet da aozañ ur pred ! Ar boued, ar gwinoù, ar segalennoù evit an aotrounez ! Ha dilhad an itronezed, hag o bravigoù ! Gwir eo, ma na rafent seurt dispign, me n' em befe ket peadra da vevañ, nag ar c'hemenerezed, nag ar varc'hadourien, nag ar re a labour evito. E-giz-se emañ ar bed. Ha gwelloc'h e vefe kemmñ ? Evel ma lavar Malvina, evel ma lavar ar paotr-se, Kaourintin. Ar paotr brav, e feiz ! Un tammig brabañser. Un tammig goapaer. Ne vefen ket souezhet, un tammig merc'hetaer. An doare ma selle ouzh Malvina ! Hag ar vaouez-se a oa gantañ a oa jaloux, a gredan. Hi a ro labour da Lizig. Ha kemeret e vo Lizig gant an div-se, Lila ha Zita ? Pebezh anvioù amc'hiz ! Sur n' eo ket o gwir anvioù. Lavaret e vefe anvioù dañserezed **pe** ganerezed, e-giz ma weler war skritelloù an teatr, pe an ti-se, petra eo ? ar Vilin-Avel pe ar Vilin-Ruz, er ru Kleber. Koulskoude e tleont bezañ merc'hed dereat. Ne dafe ket an Itron Tomazi e ti n' eus forzh piv. Tog nevez an Itron Tomazi ! Peseurt ezhomm he deus-hi eus togoù nevez ? Ne da morse er-maez. Hiziv, ar Sul, ne dle ket ober dantelezh. Sur e kav hir an amzer. Hag an Aotrou Baruel ? Petra a ra hennezh d' ar Sul ? Marteze mont gant e vag da bourmen. Ya, lavaret en deus din en deus ur vag-dre-dan e Porzhtrein. Mar kemer ar paotrig Herri da vousig en e vurev e c'hallo ivez mont da vousig en e vag. Se a blijo dezhañ. Ur paotr dilu eo. N' eo ket evel e vreur Ernest. Ken sioul eo an Ernest-se ! A-boan ma lavar ur ger. Me 'gav din eo lent. N' eo ket unan d' ober trouz. Ha koulskoude e oa gant ar vicherourien er ru Siam o klask kemer Ti ar Prefed-Mor !

122

Klask lakaat an tan en ti-se, a lavare Kaourintin ! Ha m' o dije lakaet an tan ? Traoù kaer a zo eno, hag ur sal vras da zañsal, war am eus klevet. Pebezh tantad, va Doue ! Bravoc'h c'hoazh, ma vefe lakaet an tan, hag ur bal o vont en-dro, ha tout an ofiserien-vor hag o gwragez paket e-kreiz ar flammoù, an div-se, o deus kaset ac'hanon da sutal en deiz all er ru Traverse, o rostañ gant ar rest, o c'hortoz mont da rostañ en ifern evit bezañ ken digalon ouzh ar beorien. Tud fallakr ! Me 'zo fallakr ivez, kaout seurt soñjoù ! Ur pec'hed muioc'h da lavarout er gador-gofez, pa 'z in d' ober va fask. Me ne dan ket alies da gomuniañ. Jermina, matezh an Itron Drouineau, a ya bep miz, d' ar Gwener kentañ eus ar miz. Ur froudenn eo. Evit Malvina ne dle ket mont alies war-dro an iliz. Emañ en tren bremañ. Marteze o komz adarre eus ar skol nevez. Pebezh sarmon he deus graet din ar mintin-mañ ! Pemp bloaz warn-ugent he deus dija. Poent e vefe dezhi dimeziñ ha kaout bugale. Doare ur plac'h sirius he deus. Ne laka ket a boultrenn war he beg, evel ma ra kement a blac'hed yaouank bremañ, zoken

mitizhien e koef. Gwisket-kran eo evelato. Skolaerien ha skolaerezed ar gouarnamant a vez paeet-mat. Me 'welo anezhi alies, pa vo e Kerber. Ne ouzon ket zoken pelec'h emañ skol ar merc'hed. Kalz micherourien eus ar porzh a loj e Kerber, mes muioc'h c'hoazh er Peder Milin hag e Rekourañs. Hag an diskrog-labour a bad atav ! N' eo ket tost da echuiñ, am eus aon. An holl a chom aheurtet, micherourien ha mistri. Fenez, a lavare Kaourintin Gourvest, ez eus bodadeg vras. Sur ne vo ket e Koc'hu an Ed, e-kichen va zi. Nann, kredapl e vo en Treilhis Gwer. Eno ez eus muioc'h a frankiz, ha mar deu ar jandarmed hag ar soudarded warno, e c'hellont redek kuit dre ar c'hoad Boulogn ha Kerabekam ha ru ar Werc'hez. Ma ! me 'vo em gwele d' an eur-se, hag a lezo anezho holl d' ober o reuz. Nann, ne vezin ket eno. Na sachit ket war va mañch ! Kemer c'hoazh va anv ! Me n' em eus graet netra fall. An daou bolis-se adarre ! Sur ez int mezv-dall, kregiñ e brec'h ur vaouez kaezh a zo o vont d' ar gêr ! Lakaat ac'hanon en toull ! Morailhañ an nor warnon ! Gortozit ken na deuo ar c'homiser-polis. Dupod eo amañ. N' eus nemet ur prenestrig, aze uhel-uhel, gant barrennoù. A ! Aotrou komiser, deuet oc'h da 'm zennañ er-maez. Me a c'hell mont va-unan. Nann, ne sachit ket war va fri...

123

En ur streviañ, e tigoras Nenn Jani he daoulagad. O paouez menel kousket e oa, ha krog da huñvreal. Ne oa mui den nemeti war ar bank. Kalz tud o doa dilezet ar blasenn. Ur fourrad-avel, savet-trumm, a lakae ar boultrenn da droellañ en alezioù, hag a skigne ouzh he zreid petalennoù ur rozenn hejet war unan eus bodoù al liorz.

Tremen c'hwec'h eur e tlee bezañ. Poent dezhi distreiñ d' ar gêr da fichañ he c'hoan.

(da genderc'hel.)

E gwerzh er staliou :
René Le Gléau
SYNTAXE DU BRETON MODERNE
1710 - 1972
Priz : 12,00 lur

Kevrin Lord Pennejen

Romant, ur chabistr hepken ennañ

STEPHEN LEACOCK (1869-1944) a voe ganet e Swanmore, Hampshire (Bro-Saoz). Divroañ a reas da vro-Ganada gant e gerent e 1876, d'an oad a seizh vloaz. Bevañ a reas e yaouankiz e ti-feurm e dad tost da Simcoe, Ontario (Kanada). E studioù uhel a reas e Skol-Veur Doronto. Diwezhatoc'h e voe kelenner er gêr-se ha goude-se e Skol-Veur McGill e Krec'h-ar-Roue, e-lec'h ma voe anvet da benn Rann ar Arboellouriezh hag ar Bolitikouriezh.

Skrivañ a reas da gentañ diwar-benn an arboellouriezh hag istor Kanada, met brud a zeuas dezhañ dreist-holl diwar e oberoù a fentigellerezh.

*An daou bennad a gavor amañ a zo tennet eus **Literary Lapses**, moulet e 1910 e Krec'h-ar-Roue.*

Echu e oa an traoù. Deuet e oa ar rivin. Edo Lord Pennejen en e goazez, e zaoulagad o parañ difiñv war an tan o teviñ en oaled al levraoueg. Er-maez, an avel a voude (pe a ouele) en-dro da douribelloù Pennejen Towers, kastell-annez tud Pennejen. Ar c'hont kozh, avat, ne daole ket a evezh ouzh gouelvan an avel en-dro d' e gastell. Re a breder a oa war e spered.

Dirazañ ez oa ur bern paperennoù glas, dezho talbennoù moulet. Gwech ha gwech all o zroe hini ha hini en e zaouarn ha neuze o adlakaë war an daol en ur hirvoudiñ. Evit ar c'hont ez oant arouez ar rivin, ar rivin mik ha diremed, ma teufe d' e heul ar c'holl eus an annez meurdezus a oa bet lorc'h remziadoù Pennejened. Hag ouzhpenn, e vefe anavezet bremañ gant ar bed holl kevriñ skrijus e vuhez.

125

Gant c'hwervoni e anken e plegas ar c'hont e benn, rak donet a rae a lignez vrudet. Tro-dro dezhañ e weled, stag ouzh ar mogerioù, poltredoù e c'hourdadoù. Amañ, a-zehou, ur Pennejen hag en devoa torret e c'hoaf e Crécy, pe diouzhtu a-raok. Aze, McWinnie Pennejen, an hini a varc'hekaas evel ur sod adalek tachenn lazhadeg Flodden bete Kêr-Edin da zegas da gêriz spouronet ar c'heleier en devoa gallet dastum en ur dremen dre an dachenn-emgann. En e gichen ez oa skourret dremm deñval hanter-spagnol Sir Amias Pennejen, eus marevezh Elesbed, ma voe e dignol ar c'hentañ o hastañ a-herr war-du Plymouth da zegemenn e hañvale morlu Bro-Saoz (koulz ha ma c'heller barn o chom diwar-hed gloaz) bezañ war-nes digeriñ ar c'hrogad gant Armada Bro-Spagn. Dindanañ, setu an daou vreur, Jili hag Everard Pennejen, marc'heien, hag a oa bet azezet dindan an dervenn a-gevret gant Charlez II. Neuze, war an tu dehou bepred, poltred Sir Ponsoby Pennejen a oa en em gannet e-ser Wellington e Bro-Spagn ha bet torret eus e garg en abeg da se.

Rag-eeun dirak al lec'h ma 'n em gave ar c'hont en e goazez, edo skoed al lignez, ardamezet e mantell ar siminal. Ken eeun ha ma 'z oa, en divije gallet ur bugel hen lenn hag intent e ster balc'h : UN EJEN A-RUZ PALEFARZHET WAR VAEZ GEOL GANT UR GOAF A-ZEHOU HAG UR C'HI A-DAOLADOU EN UR C'HENSTURIEG ER C'HREIZIG-KREIZ GANT AR GER-STUR : " HIC, HAEC, HOC, HUIJUS, HUIJUS, HUIJUS ".

* * *

« Tad ! » mouezh ar plac'h a dregernas sklentin dre zamc'houlou al

levraoueg lambrusket. En em strinket ez oa Gwendolina Bennejen e kerc'henn ar c'hont. Lugerniñ a rae al levenez war he zal. Ur goantenn a dri bloaz ha tregont ez oa Gwendolina, ur Saozez wirion, dezhi freskted ha dinamded an oad flour. Dougen a rae unan eus ar seurt gwiskamantoù-pourmen dudius e lien-kriz gell e vez kement ar c'hiz anezho e-touez brientinien Vro-Saoz, tra ma 'z oa kelc'hiet he dargreiz gant un droiad c'houriz ler rust. An doare didro ha kuñv ma 'n em rene eo he lakae dedennus-meurbet. Marteze a-walc'h ez oa-hi muioc'h didro eget ne vern pe verc'h all eus hec'h oad war-hed meur a lev tro-dro. Lorc'h a oa e kalon he zad gant Gwendolina, rak gwelout a rae, melezouret enni, holl berzhioù e ouenn.

« Tad, » emezi ur mousc'hoarzh o parañ war he dremm gaer, « pegen eürus on, o ! eürus on ken ez on ! Edwin en deus goulennet diganin bezañ e wreg ha touet hon eus bezañ en eil d' egile... mar bez mat ganeoc'h da vihanañ. Rak ne fell ket din dimeziñ hep aotre va zad, » a lavaras c'hoazh en ur sonnaat he fenn gant balc'hder, « re Bennejen on evit-se. »

126

Hag hi neuze da deurel he selloù war dremm enkrezet ar c'hont kozh. Trumm e kemmas he doare. « Tad, » a grias-hi. « Tad, ha klañv oc'h ? Petra a zo ? Ha seniñ a rin ? » Gwendolina, tra ma komze, a vennas tizhout ar gordenngloc'h ponner oc'h istribilhal tost d' ar voger, hogen ar c'hont, gant aon na c'hellfe he strivoù diroll lakaat end-eeun ar c'hloc'h da seniñ, a bakas he dorn. « E gwirionez ez on gwall-nec'het, » a lavaras Lord Pennejen, « met peoc'h gant se bremañ. Komzit din kentoc'h eus ar c'heloù a zo ganeoc'h. Spi am eus, Gwendolina e tere ho choaz ouzh ur Bennejez hag e vezo an hini hoc'h eus roet ho ker dezhañ dellezek da zougen hor ger-ardamez war un dro gant e hini-eñ. » Hag o sevel e selloù war-du ar skoed a oa dirazañ e hiboudas ar c'hont hogozik hep gouzout dezhañ : « Hic, haec, hoc, hujus, hujus, hujus ». Marteze e huanade evel-se ur bedenn bet dibunet gant kement eus e c'hourdadoù araozañ ma n' hallje biken hec'h ankouaat.

« Tad, » a gendalc'has Gwendolina, damabaf, « Edwin a zo Amerikan. »

« Va souezhañ a rit e gwirionez, » a respontas Lord Pennejen, « ha koulskoude, » a lavaras c'hoazh en ur dreiñ war-du e verc'h gant an neuz-vat kourtes a verk ar brientin a gelennadurezh kozh, « perak n' hor befe ket doujañs hag esmae e-keñver an Amerikaned ? Evit gwir, bet ez eus anvioù meur en o zouez. Da skouer, hor gourdad, Amias Pennejen, a oa, a gav din, euredet da bPokahontas... da vihanañ, mar ne oa ket euredet e gwirionez... » ur pennadig e chomas ar c'hont en entremar.

« Da vihanañ, en em garout a raent an eil egile, » a lavaras Gwendolina.

« Dres, » eme ar c'hont, disammet, « en em garout a raent an eil egile. Ya, se an hini ez eo. » Neuze, evel pa vije bet o prederiañ outañ e-unan e tisplegas : « Ya, bet ez eus Amerikaned veur. Un Amerikan e oa Bolivar. An daou Washington, George ha Booker, a zo Amerikaned o-daou. Re all a zo bet c'hoazh, daoust ma ne zeu ket o anvioù d' am spered bremañ. Hogen, lavarit din, Gwendolina, ho mignon Edwin, e pelec'h emañ annez e dud ? »

« En Ochkoch, Wiskonsin, emañ, va zad. »

127

« Dal 'ta ! Ha gwir a livirit-hu ? » a eilgerias ar c'hont, dudiet mui-ouzh-mui. « Ochkoch, hep mar na marteze, a zo un anv kozh brudet. Ul lignez a Rusia eo tud Ochkoch. Un Ivan Ochkoch a zeuas da Vro-Saoz gant Pêr Veur. Dimeziñ a reas d' ur c'hourvamm din. O diskennad, Kemmesk Ochkoch, tapet gantañ an eil re-lignez, en em gannas e tangwalladenn Voskov ha diwezhatoc'h e gwastadeg Salamanka hag e feur-emglev Adrianopolis. Ha Wiskonsin ivez, » a gendalc'has an denjentil kozh, e zremm oc'h enaouiñ gant ar berv, rak sorc'hennet e oa gant an ardamezouriezh, ar remziadouriezh, an amzeroniezh hag an douaroniezh-kenwerzh, « tud Wiskonsin, pe welloc'h, a gredan, Gwiskonsin, a zo a uhelwad kozh. Ur Gwiskonsin a heulias Herri Gentañ da Jeruzalem hag a saveteas va gourdad,

Lipestal Bennejen, eus a-dre daouarnioù ar Sarasined. Ur Gwiskonsin all... »

« Salokras, va Zad, » eme Wendolina o vonet seven war e gomz, « Wiskonsin n' eo ket anv Edwin. Anv e annezlec'h eo, a gredan. Hini va servijer eo Edwin Einstein. »

« Einstein, » a restas ar c'hont war var, « un anv indianek marteze. An Indianed, evelato, a zo kalz anezho a lignez dreist. Ur gourdad din... »

« Tad, » eme Wendolina o vonet adarre war e gomz, « setu ur skeudenn eus Edwin. Barnit dreizoc'h hoc'h-unan ha denjentil ez eo. »

Hag hi da lakaat e dorn he zad ur vetalskeudenn amerikan arlivet e ruz-roz hag e gell. Reiñ a rae ar skeudenn da welout ur skouer dibar a c'hourelezh amerikan o tennañ d' ar pimpatrom angl-ha-semitat-se a gaver ken alies gant an dud ez eus enno ur meskad gwad saoz ha yuzev. Tremen pemp troatad ha daou veutad mat a uhelder en devoa an den-se, ha ledan e oa diouzh se. E zivskoaz, stouet-dudius warzinaou, a genglote gant e zargreiz moan kompezet-mat ha gant e zorn plegus, met krogus koulskoude. Morliv e zremm a oa lakaet anat gant e varbustell du diflak.

Evel-se ez oa Edwin Einstein, an hini ma 'z oa kalon Wendolina (pa ne oa ket he dorn) gouestlet dezhañ a-benn neuze. Pegen eeun, met pegen iskis koulskoude, istor o c'harantez ! Hañvalout a rae da Wendolina ne bade nemet abaoe an derc'hent ha, padal, ez oant degouezhet e gwirionez an eil gant egile teir sizhun a oa. Ne oant ket bet evit stourm ouzh ar garantez entanet he devoa o sachet an eil davet egile. Evit Edwin, a-vec'h ma krede anzav outañ e-unan pegen hoalus e kave ar Saozez yaouank livrin gant hec'h anv kozh ha gant he domanioù ec'hon. Setu ma fellas dezhañ ober al lez dezhi. Evit Gwendolina, bez' ez oa en emzalc'h Edwin, er bravigoù a zouge, er madoù divent lakaet war e anv gant ar vrud, ur galv d' un tech romantel ha marc'hegel bennak kuzhet en he natur.

128

Plijout a rae dezhi e glevout o komz a genlodennoù hag a verkoù, a leveoù hag a skodennoù pe diwar-benn kenwerzh ramzel e dad. Pegen uhel e seblante kement-se bezañ ha pegeit diouzh buhezioù divalav an dud en-dro dezhi ! Plijout a rae da Edwin ivez klevout ar plac'h o kaozeal diwar-benn domanioù he zad, diwar-benn ar c'hleze diamantet e zornell, bet roet - pe brestet - gant Saladin d' ur gourdad dezhi kantvloazioù a oa. An doare ma taolenne-hi he zad, ar c'hont kozh, a bike un tech romantel bennak e kalon hael Edwin. Nepred ne skuizhe hemañ o c'houlenn pe oad ez oa, penaos ez oa e yec'hed, pe hag-eñ e veze gwall-drefuet gant ur fromadenn drumm, hag all... Neuze ez oa degouezhet an abardaez a gare Gwendolina advevañ dibaouez en he spered, pa 'n devoa goulennet Edwin diganti hag-eñ - war-bouez un nebeut divizoù da lakaat dre skrid ha da vezañ studiet diwezhatoc'h - e karfe donet da vezañ e wreg. Hag hi, en ur lakaat he dorn gant fiziañs en e hini, da respont ken eeun ha tra - war-bouez asant he zad ha war-bouez sevenidigezh ar c'hemennadurioù hag an enklaskoù lezennel rekis - e karfe. Kement-se holl a oa evel un huñvre. Ha setu ma 'z oa deuet Edwin e-unan-kaer da c'houlenn he dorn digant an aotrou kont, he zad. Edo d' an ampoent, end-eeun, er raksal oc'h ensellout gant e ganived ar gwiskad aour a c'holoe sternioù an taolenoù en ur c'hortoz e zanvez-pried da gemenn keloù o flanedenn da Lord Pennejen.

Kemer a reas Gwendolina hec'h holl nerzh-kalon a-benn an taol bras. « Tata, » emezi, « bez' ez eus un dra all c'hoazh hag ez eo dereat anzav ouzhoc'h : emañ tad Edwin er genwerzh. »

Sailhat a reas ar c'hont diwar e gador, sabatuet-naet. « Er genwerzh ! » a restas-eñ war he lerc'h. « Tad danvez-pried merc'h ur Pennejen er genwerzh ! Va merc'h, lezverc'h tadkozh va douaren ! Ha kollet hoc'h eus ho penn, plac'h ? Re eo, re wazh eo se ! »

« Met, tad, » a aspedas ar plac'h koant, enkrezet, « va intentit ! Tad

Edwin an hini eo - Sarkofagus Einstein, senior - ha n' eo ket Edwin e-unan. Edwin ne ra netra. Biskoazh n' en deus gounezet ur gweneg. Divarrek-krenn eo d' en em vevañ. N' hoc'h eus nemet sellout outañ evit hen krediñ. Evit gwir, tad karet, hennezh a zo mik eveldomp-ni. Emañ amañ bremañ, en ti-mañ, o c'hortoz ho kwelout. Mar ne vije ket en abeg d' e vadoù bras... »

129

« Plac'h, » eme ar c'hont, taer, « ne vern din pinvidigezh ar paotr. Pegement en deus ? »

« Pemzek milion daou c'hant hanter-kant mil dollar, » a respontas Gwendolina. Lord Pennejen a harpas e benn ouzh mantell ar siminal. Ur gorventenn a c'hwezhe dre e glopenn. Edo o klask jediñ pegement a interest a vez bep bloaz diwar bemzek milion ha kard a zollared e pevar hanter dre gant, troet e lurioù saoz, skillinged, ha penniged. En aner. Deuet ez oa e empenn, stummet gant bloavezhiadoù hir a uhel-vevañ hag a brederiañ plaen, da vezañ ur benveg re soutil ha re lemm evit an niveriñ.

Dres d' ar c'houlz-se e tigoras an nor hag Edwin Einstein en em gavas en e sav dirak ar c'hont. Biskoazh n' ankouaas Gwendolina ar pezh a c'hoarvezas neuze. A-hed he buhez e voe heskinet gant taolenn an darvoud-se : he c'haredig sonn e toull an nor, e sell leal kaer o parañ a-firbouch war ar spilhenn diamantet sanket e kravatenn he zad, hag eñ, he zad, o sevel diwar vantell ar siminal un dremm sebezet-marv.

« Chwi ! C'hwi ! » a roc'hellas. Ur pennadig e chomas en e sav-sonn en ur hejal e zivrec'h dre an aer evel da gerzhout a-dastorn ha neuze e kouezhas a-hed e gorf evel ur c'hwist war al leur. En em strinkañ a reas an daou garedig d' e sikour. Edwin a zrailhas e c'houzougenn d' he digeriñ, a dennas ar spilhenn diamantet hag he lakaas a-gostez, evit reiñ aer dezhañ. Re ziwezhat ez oa avat. Laosket en devoa an aotrou kont Pennejen e huanad diwezhañ. Tec'het ar vuhez dioutañ. Tremenet ez oa ar c'hont. Da lavarout eo, marv ez oa.

Biskoazh ne voe gouvezet ar penn-abeg d' e varv. Hag ar gwel eus Edwin eo hen lazhas ? A c'hellfe bezañ. Mezeg kozh an tiegezh, kerc'het buan ha buan, a zisklêrias ez oa dic'houzvez a-grenn. Pezh a oa gwirhañval ivez. Edwin e-unan n' hallas displegañ netra. Hogen, taolet e voe pled penaos, goude marv ar c'hont hag e zimeziñ da Wendolina, ez oa kemmet evel unan all en e blas : gwelloc'h dilhad a wiske ha kalz gwelloc'h saozneg a zeue gantañ.

Evit ar pezh a sell ouzh an eured, sioul e voe, tristik a-walc'h zoken. Diwar c'houlenn Gwendolina, ne voe na pred-eured, na merc'hed-a-enor, na degemeradeg, tra ma pouezas Edwin, dre zoujañs ouzh kañv e bried, evit na vije na paotred-a-enor, na bleuñv, na profoù, na loar-vel kennebeut.

130

Evel-se eo e varvas kevrin Lord Pennejen a-gevret gantañ. Emichañs ez oa re luziet evit bezañ dedennus en ur feson bennak.

(Troidigezh gant JAKEZ KONAN)

Penaos gounit ur milion a zollarded

Pleustriñ a ran kalz ar vilionerien. Plijout a reont din. Plijout a ra din o fasoù. Plijout a ra din an doare ma vevont. Seul vui en em bleustromp, seul vuioc'h e plij din an traoù e pleustromp warnezh.

Dreist pep tra e plij din an doare m' en em wiskont, o brageier louet karrezennet, o jilettennoù gwenn karrezennet, o chadennoù-aour ponner hag o gwalinier-sined ma sinont o chekennoù ganto. Feiz ! feson gaer o devez. Bodit c'hwec'h pe seizh anezho, war bep a gador, en o c'hclub, hag un drugar e vo deoc'h sellout outo. Mar bez an disterañ poultrenn warnezh e tered paotred d' he broustañ kuit. Ya, ha laouen e vezont ouzh hen ober. Me va-unan e plijfe din lemel un nebeut poultrennoù diwarno.

Muioc'h eget ar pezh a zebront, zoken, e plij din barregezh o spered. Souezhus eo. Sellit 'ta outo o lenn. Ne reont nemet lenn a-hed an amzer. Kit e-barzh ar c'hclub da n' eus forzh pet eur hag e welfot tri pe bevar anezho gant se. Hag an traoù a c'hellont da lenn ! Soñjal a rafec'h e vefe un den bet o poaniañ start en ur burev adalek unnek eur diouzh ar beure bete teir eur goude kreisteiz hag un eur hanter dezhañ hepken da zebriñe bred, re faezh da ober tra. Tamm ebet. Gellout a ra an dud-se chom en o c'hoazezioù goude an eurvezhioù labour-burev-se, da lenn an DAMSKEUD, ar GAZETENN BOLIS hag an HINI RUZ-ROZ, ha kompren ar fentigelloù kenkoulz ha ma c'hellan-me ober.

Ar pezh a garan ober eo monet ha donet dre o zouez evit tapout klevout bommoùigoù eus o c'haoz. En deiz all e klevis unan o lavarout en ur stouñ a-raok : « Ma ! Kinniget am eus dezhañ ur milion hanter ha diskleriet dezhañ ne rofen ket ur gweneg ouzhpenn. Da gemer pe da lezel... » Darbet e voe din monet war ar gaoz da lavarout : « Petra ? Petra ? Ur milion hanter ! Adlavarit se enta ! Grit ar c'hinnig-se din-me, da gemer pe da lezel. Esaeit 'ta ganin-me ur wech : gouzout a ran e c'hallan. Pe, mar deo gwell ganeoc'h, krennit anezhañ d' ur milion rik ha setu graet an taol ».

132

N' eo ket e vefe an dud-se dibreder diwar-benn an arc'hant. Nann, aotrou, ned int ket, pell ac'hano. Evel just, ne daolont ket kalz a bled ouzh arc'hant bras, kant mil dollar war un dro pe un dra bennak er mod-se. Netra nemet ouzh arc'hant bihan. Ne vezit ket gouest da gompren se ken n' ho pez gouezet pegen nec'het e teuont da vezañ abalamour d' ur real, d' ur gweneg pe nebeutoc'h.

Klevit kentoc'h ! En abardaez all ec'h antreas daou anezho er c'hclub, o nijal gant ar blijadur : lavarout a raent ez oa aet ar gwinizh war-grec'h hag o devoa gounezet, kuit ha fraez, pep a bevar real en ur ober nebeutoc'h eget un hanter-eur. Hag int-i, war an digarez-se, da lakaat aozañ koan evit c'hwezek den. Ne gomprenan-me ket an dra-se. Alies em eus bet gounezet div wech kemend-all o skrivañ evit ar c'helaouennoù ha nep gwech ne voen troet da fougeal diwar-benn va zaol.

Un nozvezh e klevis unan o lavarout : « Mat ! Galvomp New-York ha kinnigomp ur c'hard gweneg dezho ». Mil gurun ! Soñjit 'ta ! Paeañ ar c'houst da c'hervel New-York, tost da bemp milion a dud, diwezhat en noz, evit kinnig ur c'hardgweneg dezho ! Evelkent... Hag aet ez oa sot tud New-York ? Ne oant ket : kemer a rejont ar c'hard gweneg. Evel just, uhel-arc'hantouriezh eo an dra-se. Ne gredfen ket lavarout ez on gouest d' he c'hompren. Klask a ris, diwezhatoc'h, gervel Kêr-Chikago evit kinnig ur gweneg hanter dezhi, ha Kêr-Hamilton, Ontario, evit kinnig un hanter-dollar dezhi, met plac'h ar pellgomz a gredas hepken edon o trelatiñ.

Kement-mañ holl a ziskouez, sklaer hag anat, em boa studiet don penaos en em ren ar vilionerien. Hag em boa. Epad bloavezhioù. Kavout a rae din e c'hellfe va studiadennoù bezañ talvoudus da baotred yaouank nevez-krog da labourat ha mall ganto paouez.

C'hwi a oar, meur a baotr a zeu da gompren diwezhat en e vuhez penaos, mar en divije gouezet pa 'z oa yaouank, ar pezh a oar bremañ, e-lec'h bezañ ar pezh ez eo, e c'hellje bezañ ar pezh ne vo ket. Hogen, pegen nebeut a baotred a chom a-boz da soñjal penaos, mar goufent ar pezh n' ouzont ket, e-lec'h bezañ ar pezh e vezint, ne vefent ket ? Prederennoù skrijus eo ar re-mañ.

133

Bezetañ a vezo, dastumet am eus un ditour bennak diwarbenn an doare m' en em ren ar vilionerien.

Un dra a zo hag ez on diwarvar diwar e benn. Mar c'hoanta un den yaouank dastum ur milion a zollared ez eo dleet dezhañ bezañ evezhiek-meurbet ouzh e vevañs hag ouzh e stad-vuhez. Kement-mañ a c'hell seblantout bezañ start. Hogen diwar boaniañ hepken eo e teu ar berzh. Aner eo d' un den yaouank hag en deus ar spi da c'hounit ur milion a zollared, soñjal ez eo lakaet dezhañ sevel da seizh eur hanter, debriñ fars ha vioù bouk, evañ dour yen da bred ha monet d' e wele da zek eur noz. Arabat dezhañ ober se. Re a vilionerien am eus bet gwelet evit komz a-hend-all. Mar c'hoantait donet da vezañ milioner, arabat deoc'h sevel a-raok dek eur diouzh ar beure. Morse ne reont. Ne gredont ket. Dister e vefe lakaet talvoudegezh o stal gant an dud, mar befent gwelet en hentoù da nav eur hanter.

Gaoù-holl eo ivez ar reolenn gozh a zilontegezh. Evit bezañ milioner, ho pez ezhommm champagn, e-leizh ha dalc'hmat. Champagn ha wiski-Skos ha dour-Seltz. Damdost e-pad an noz e rankit chom da evañ sailhadoù anezho. An traoù-se eo a sklaera an empenn a-benn taolioù-kenwerzh an deizwar-lerc'h. Gwelet am eus bet meur a hini eus an aotrounez-se hag e veze o empennoù ken sklaer diouzh ar beure ma hañvale o fasoù bezañ poazh-berv a-grenn.

Bevañ evel-se, anat deoc'h, a c'houlenn menozioù start. Met se a c'hellit da bremañ a-bintadoù.

Rak-se, va c'heneil yaouank, mar hoc'h eus c'hoant da guitaat ho renk a-vremañ en ho micher ha da vonet war-raok, kemmit stumm d' ho puhez. Pa zegaso hoc'h ostizez ho vioù-kig-sall da zijuniñ, fraoñvit-i dre ar prenestr d' ar c'hi ha lavarit dezhi degas deoc'h asperjez skornet hag ur voutailhad win-Mozel. Neuze, pellgomzit d' hoc'h implijour da reiñ da c'houzout dezhañ ez errufot en ho labour war-dro unnek eur hanter. Tapout a ray ganeoc'h monet war-raok. Ya, ha buan-tre.

E pe zoare, just a-walc'h, e tastum ar vilionerien o arc'hant ? Se a zo ur gudenn luziet. Hogen ur stumm da ober eo hemañ. Degouezhit e kêr gant pevar real en ho kodell. Hogozik holl o deus graet evel-se. Displeget o deus bet din kant gwech (an aotrounez-se, milionoù ha milionoù dezho) penaos ne oa nemet pevar real ganto en o godell, kentañ gwec'h ma 'z oant degouezhet e kêr. A-hervez, se eo a roas dezho al luskad da doullañ o hent. N' eo ket aes d' ober, sklaer eo. Meur a wech em eus esaeet. Un drovezh e voe darbet din dont a-benn. Amprestañ a ris pevar real ha, d' an daoulamm-ruz, e hastis buan o c'has ganin e-maez kêr. Mar ne vijen ket degouezhet gant un davarn-vier er rakkêr ha mat n' am bije ket dispignet va fevar real eno e c'helljen bezañ bet pinvidik hiziv.

134

Ur stumm mat all eo embreger un dra bennak. Un dra bennak a vent ramzel. Un dra bennak n' en deus den soñjet ennañ biskoazh. Da skouer, unan a anavezan, a zanevellas din ez oa bet diskennet ur wech e Meksiko hep un diner (foeltret en devoa e bevar real oc'h erruout e Kreizametika) ha setu ma taolas evezh ne oa milin-dredanerez ebet eno. Neuze e lakaas un toullad war ar stern hag e c'hounezas berniadoù arc'hant. Unan all a anavezan ivez a oa en em gavet un deiz e New-York war ar sec'h, hep an disterañ liard toull. Ac'hanta ! Donet a reas en

e spered penaos, ar pezh a rae diouer eno ez oa savadurioù a vefe dek estaj uheloc'h eget n' eus forzh pehini eus ar re a oa bet gwintet betek-hen. Hag eñ da sevel daou ha d' o gwerzhañ diouzhtu. En un doare ken simpl-se eo e krog bepred kemend-all a vilionerien gant o folotenn.

Bez' ez eus, evit gwir, un doare kalz aesoc'h eget hini eus ar re-se. Kazus a-walc'h e kavan e zisplegañ abalamour ma 'm eus c'hoant d'ober an dra-se va-unan.

Dre zegouezh hepken eo e klevis kement-mañ un nozvezh er c'hlub. Bez' ez oa eno ur paotr kozh, pinvidik-mor, dezhañ unan eus gwellañ fasoù ar vandennad, heñvel-mik ma 'z oa ouzh ur bleiz-mor. Morse n' em boa klasket gouzout penaos ez oa deuet da vezañ ken pinvidik-all. Evelkent, un abardaevezh e c'houlennis digant unan eus ar vilionerien penaos en devoa Bloggs kozh gounezet e holl arc'hant.

« Penaos en deus o gounezet ? » a respontas gant ur brizhc'hoarzh. « Feiz, o gounezet en deus o sunañ intañvezed hag emzivadad. »

Intañvezed hag emzivadad ! a soñjis, pebezh kavaden dreist ! Met daoust piv ivez en divije diskredet ez oa arc'hant gant ar re-se ?

« Ha penaos, » a c'houlennis gant evezh bras, « ez eo en em gemeret d' o sunañ ? »

« Feiz, » a respontas egile, « netra nemet ouzh o flastrañ dindan e seulioù, n' eo ket diaesoc'h eget se ! »

135

Daoust ha n' eo ket un dra eeun, ivez 'ta ? Alies em eus soñjet er gaoz-se abaoe hag emeon e sell d' ober un taol-arnod. Mar gallan tapout krog enno e teuin a-benn d' o flastrañ buan a-walc'h. Penaos o zapout avat ? An darn vuiañ eus an intañvezed a anavezan, a ziskouez bezañ re greñv evit ar seurt abadenn, hag evit ar pezh a sell ouzh an emzivadad e rankin pakañ ur bern spontus anezho. Etre-keit-se e choman da c'hortoz ha mar c'hoarvez ganin ur wech bennak kaout un torkad mat a emzivadad war un dro e kalemarc'hin anezho da welout.

En diwezh, diwar un enklask graet ganin ez on deuet da grediñ e c'hellit ivez flastrañ an dud-a-iliz d' o sunañ. Lavarout a reer e flastront brav. Marteze koulskoude e vez aesoc'h kaout d'ober ouzh an emzivadad.

(Troidigezh gant JAKEZ KONAN)

Un Alarc'h, Un Alarc'h tre mor...

Ur seil nevez ouzh politikerezh an dug Yann IV

MICHAEL JONES, " Ducal Brittany, 1364-1399, Relations with England and France during the reign of Duke John IV " - Oxford University Press, 1970.

Ma lakaer a-gostez an Dugez Anna, Yann IV zo hep mar an hini brudetañ e-touez Duged Vreizh, paneve nemet abalamour d' an Alarc'h...

Betek-hen n' eus nemet La Borderie, koulz lavaret, e-touez an istorourien, en deus studiet a-zevri ren ha politikerezh Yann IV. Rannet en deus La Borderie ren an Dug e daou brantad, an eil a-raok 1381 egile goude 1381 (ar bloavezh 1381 a verk eil feur-emglev Gwennrann, sinet gant roue Bro-C'hall hag Yann IV, goude distro hemañ eus Bro-Saoz). E-pad ar prantad kentañ e oa lakaet Breizh en arigrap gant ar Saozon ha ne rae an Dug nemet sentiñ ouzh urzhioù roue Bro-Saoz, Edouarzh III. La Borderie a zispleg emzalc'h an Dug dre ma oa bet desavet e lez Edouarzh III, e gulator hag e dad-kaer war un dro, ha dre ma oa bet lakaet war dron Breizh gant harp ar soudarded hag an arc'hant saoz ; un arval eus Edouarzh III e oa anezhañ neuze ha setu perak, hervez La Borderie, e leze e vro dizifenn enep korvoerezh * an avanturourien saoz ; setu perak ivez e tegemeras al lu saoz e 1373, o vezañ kiriek evel-se eus padelezh ar brezel. Politikerezh Yann IV zo displeget evel-se dre ur saozkarouriezh stag ouzh darvoudoù istor personel an Dug.

137

Echuiñ a ra ar prantad kentañ gant drouziwezh 1373 hag an harlu da Vro-Saoz ha disheñvel eo an eil prantad a grog goude distro an Dug da Vreizh. Kentelioù an harlu a lakaas ar wech-mañ an Dug da gemm e emzalc'h hag e bolitikerezh ; galvet en-dro gant ar Vrezhoned, o doa en em savet a-enep stagidigezh o bro ouzh Bro-C'hall, e tibabas Yann IV ur politikerezh disheñvel, o tilezel ar saozkarouriezh hag o terc'hel kont eus goulennoù ha sav-boent an uhelidi ; chom a ra neptu etre Bro-Saoz ha Bro-C'hall ha krouiñ a ra ur melestrerezh efedus a dalvezo da Zuged ar XV-vet kantved.

An dezrann-se zo bet degemeret gant an ha istorourien, gall pe vreizhat e vefent, o deus skrivet abaoe La Borderie. An istorour Michael Jones (ur C'hembread moarvat) en deus studiet nevez 'zo ren an Dug Yann IV ; ali eo gant La Borderie war ar pouez o deus bet menozioù hag oberoù an Dug war an darempredoù tric'hornek etre Breizh, Bro-C'hall ha Bro-Saoz, hogen kavout a ra dezhañ ne glot ket rannadur ar ren e daou brantad gant an darvoudoù, hag hervezañ n' eus e gwirionez diforc'h ebet etre an daou brantad-se ; ne c'heller ket kavout azonoù * ur rannadur bennak etre div lodenn ar ren, ken e-keñver ar politikerezh diabarzh ken e-keñver ar politikerezh diavaez.

Abaoe an derou e felle da Yann IV bihanaat ha terriñ al liammoù a stage Breizh ouzh rouantelezh Bro-C'hall hag evit tizhout ar pal-se e oa ret dezhañ kreskiñ ha suraat e c'halloud e diabarzh ar vro, eleze sevel ur melestrerezh ha kaout korvoderoù * reoliek ; diwar an diazez-se e c'hellfe ar galloud dugel klask tizhout an dieubidigezh politikel a oa, hervez meur a istorour, ar pezh he doa Breizh ar muiañ ezhomm, ouzhpenn ar peoc'h.

An dug hag e guzulierien a felle dezho adunvaniñ an dugelezh hag adsevel ar melestrerezh ; ar gouarnamant dugel en doa miret betek-hen doareoù mererezh un damani aotrouniezhel ha ne oa ket c'hoazh da skouer melestrerien arbennik evit ar Yalc'h ; ar boazioù melestrerezhel saoz ne oant ket bet degaset da

Vreizh e-pad ar brezel, daoust ma oa Breizh - ha Bro-C'hall ivez - warlerc'hiet e-keñver Bro-Saoz evit melestrerezh ar Yalc'h. Yann IV a grouas evit ar wech kentañ Kambr ar Jedoù * ha tailhoù eeun ha reoliek diazezet war ar mogoù ; an ensavadur-erounit pennañ a oa Kuzul an Dug.

Michael Jones a ziskouez ne oa ket ken pouezus ha m' o deus kredet an istorourien gall ha breizhat roll ar Saozon e mererezh an Dugelezh ; Kuzul an Dug ne oa ket mestroniet gant ar Saozon, hogen ar re-mañ a oa koulskoude kalz niverusoc'h eget ar Vrezhoned e tiad an Dug. Niver ar Saozon e tiad an Dug, al levezon o doa warnañ, an arc'hant paeet d' ar gabitened saoz o doa stourmet gant Monforzhiz, an holl draoù-se a zisplije d' an uhelidi ; drouklaouenoc'h e oant c'hoazh dirak ar strivoù graet gant an dug evit kreskiñ e c'halloud ha bevennañ o hini e diabarzh an dugelezh.

138

Diskouez a ra Michael Jones ne oa ket an dug ken tuet ha ma kreder da blegañ d' al lazioù saoz ha da gemenoù Edouarzh III. Abaoe derou e ren e rae an dug eus e wellañ evit lemel ar pezh a chome eus aotrouniezh Bro-C'hall. Derc'hel a rae d' ar c'hevred gant Bro-Saoz, n' eo ket hepken abalamour d' al liammoù personel en doa gant Edouarzh III, hogen ivez dre m' en doa prometet hemañ terriñ al liamm a wazonezh a chome etre Breizh ha Bro-C'hall. Setu perak n' en doa politikerezh Yann IV netra da welout, hervez M. Jones, gant trivliadoù saozkar.

Distro ar brezel etre Bro-C'hall ha Bro-Saoz a grouas ur saviad * diaes evit Yann IV ; ret e voe dezhañ dilezel e bolitikerezh-daleañ pa zilestras ul lu saoz ha ne gavas ket harp e sujidi, rak an darn vrasañ anezho a oa a-enep ar c'hevred gant ar Saozon ; miret o doa eñvorioù fall eus emzalc'h al lu saoz e-pad brezel Herezh Vreizh. Al luoù gall a zeuas a-benn da aloubiñ an darn vrasañ eus tiriegezh * Breizh, ha ret e voe da Yann IV mont d' an harlu, tra ma 'z asante Breizhiz d' an dalc'hidigezh c'hall hep enebiñ kalz.

Hogen pa zivizas Charlez V, roue Bro-C'hall, ha Parlamant Pariz diberc'hennañ an dugelezh evit he stagañ ouzh Bro-C'hall, ar Vrezhoned en em savas hag a gasas dileuridi da Vro-Saoz evit goulenn ouzh Yann IV distreiñ. Sinet e voe eil feur-emglev Gwenrann etre Yann IV ha roue Bro-C'hall.

Deuet en-dro da Vreizh e vezas Yann IV e oa disheñvel e lazoù * diouzh re eontred Richarzh II a rene war Vro-Saoz, « komprenet en doa e oa ret dezhañ, evel rener politikel, sinañ treuzvarc'hadoù hag ober gant touellerezh ha pilpouzerezh... » Emellet en doa er brezel saoz-gall e 1372 gant ar spi da c'hounit spletoù. N' en doa gounezet nemet an harlu hag ar wech-mañ e felle dezhañ « bezañ evezhiek-tre o kerzhout etre Bro-Saoz ha Bro-C'hall ».

An darn vrasañ eus e sujidi a oa enep-saoz hag asantiñ a raent e chomfe o bro dindan levezon Bro-C'hall ; diskouezet o doa koulskoude e 1379 e felle dezho mirout an dieubidigezh politikel ; Yann IV a dlee derc'hel kont eus stad-spered e sujidi ha dreist-holl eus hini an uhelidi.

139

Klask a reas an dug suraat e c'halloud, evel m' en doa graet a-raok an harlu, o kreskiñ roll ar melestrerezh en doa diazezet hag oc'h en em zieubiñ diouzh levezon Bro-Saoz ha diouzh al liammoù a chome gant Bro-C'hall ; klask a rae tizhout ar palioù-se gant an hentennoù a c'helle heuilhañ rener ur Stad vihan ha gwan gennet etre div Stad c'halloudusoc'h. Sinañ a rae kevredoù gant Bro-Saoz, hogen evel kevratoù-surentez * a-enep Bro-C'hall, met chom a ra neptu pa darzh ar brezel.

E-pad dek vloaz diwezhañ e ren, Yann IV en em zalc'h evel pa vefe an dugelezh " e-kichen " Bro-C'hall ha nann " e diabarzh " bevennoù ar riez-se. Keñveriañ a ra Michael Jones saviad Breizh er politikerezh etrevroadel ouzh saviad Portugal ha saviad Bro-Skos ; kevred Breizh gant Bro-Saoz a c'hell bezañ keñveriet ouzh kevred Bro-Skos gant Bro-C'hall ; itrikoù ha kammdroioù luziet a rae Yann IV ganto en e bolitikerezh-diavaez, hag amsteriegezh hemañ ne c'hellont

bezañ komprenet nemet « e goulou ar c'hoant o doa Breizhiz d' an dieubidigezh...
ha preder kentañ Yann IV a oa ar galloud dugel lakaet da dalvezout evit ar pezh
a selle evel lazou Breizh ».

* GERIOU HA N' EMAINT KET E GERIADUR R. HEMON :

azon : critère ; erounit : exécuter ; Kambr ar Jedou : Chambre des Comptes ;
kevrat : contrat ; korvoder : revenu ; korvoerezh : exploitation ; laziou :
intérêts ; saviad : situation ; tiriegezh : territoire.

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

Hêr Per Brizhkloareg an dug Yann Rous
(1237 - 1286)

Temz-spered Yann Rous ha derou e ren

Diaes d' ur mab bezañ ken heñvel ouzh e dad ha ken disheñvel dioutañ war un dro.

Ar youl-uhelaat, ar gred da c'hourc'hemenn, ar c'hoant da gaout an hollc'halloud a zeve en ene Yann Rous a zeve ivez en ene e dad Brizhkloareg. War ar poent-se e oant heñvel, nemet douget e oa ar mab da zastum madoù, e-lec'h ma tigure an tad atav e zorn gant largentez.

O doare-spered avat, an hent a heulient da dizhout ar pal, a oa disheñvel-krenn. Kabalus, dibasiant, fourradus, bouilhus e oa an tad. Ar mab a oa evezhiek, disfizius, sioul, difrom hervez ar gwel, hogen pennek, kendalc'hus, o kas war-raok e vennadoù, pezh na oa ket e dad. Yann Rous a zo Brizhkloareg, nemet Brizhkloareg tamolodet en ur c'hogn, o chom hep astenn e grabanoù, o c'hedal e breizh, ouzh e likaouañ, e-lec'h sailhañ warnañ ha c'hwitañ war e daol. « Muioc'h a drouz eget a labour » a vije bet ger-stur an tad, hag hini e vab « muioc'h a labour eget a drouz ».

Ur perzh-mat en doa Yann Rous, na gaver ket alies gant ar briñsed : ne rede morse war-lerc'h meur a c'had war un dro. Ne oa ket ken uhel e zonezonoù, ken skedus e berzhioù ha re e dad. Hag evelato e oberoù a zougas muioc'h a frouezh.

Pezh a glaske da gentañ oa traoù start : kreskiñ e zomanoù ha kargañ e irc'hier. D' e venoz edo aze diazez ar galloud. Gwilherm ar Brezhon, aozer ar " P'ü pidenn ", en doa lavaret, evel hon eus gwelet, e c'haller gant arc'hant prenañ servij an herañ, ar gadarnañ marc'heien.

141

Kalz amzer en devoe da seveniñ e venozioù : un hanter gantved. Diwar ar 16 a viz Du 1237 betek an 8 a viz Here 1286, deiz e varv, e renas. Dre na vrezlekaas avat nemet an nebeutañ ma c'hallas, dre ma strivas da chom divrud, e-lec'h klask bezañ e penn, ne gaver e Breizh e-pad an hanter gantved-se nemet un niver bihan a zarvoudoù a bouez, ha diaes eo ober eus e ren un heuliad istorel klok ha reizh. Ma ne verker nemet an darvoudoù dellezek a veneg, pouezus e gwirionez, - ha se a dleer ober, - e vo treut an danevell, ha leun a doulloù. Mar klasker kontañ pep tra dre ar munud, e vo kavet darvoudoù e-leizh. Hogen enoeüs e vefe, ha tost didalvoud. Dibab a rin eta kement a zo heverk, a ro ur skeudenn eus an amzer, o strolañ an degouezhadenoù rumm dre rumm en-dro d' ur greizenn, a vo oberoù, doareoù ha personelezh an dug.

Kurunidigezh Yann Rous.

Goude bezañ touet gwazoniezh da roue Frañs, d' ar 16 a viz Du 1237, Yann Rous a voe mall warnañ distreiñ da Roazhon, ma voe anavezet da zug ha kurunennet da eizhved Sant Marzhin, da lavarout eo d' an 18 eus ar miz.

Eno e oa e-leizh a eskibien hag a varoned. Anvet e vez gant ar gronikourien gozh eskibien Roazhon (Yann Jikel), Nâoned (Roperzh, a yeas e 1240

da eskob-meur Jeruzalem), Dol, Gwened, Sant-Malo, Kernev, Sant-Brieg, Leon, hag e-touez al liked Gwionvarc'h beskont Leon hag Herve yaouank e vab, Alan beskont Roc'han, Herri Avaogour kont Gouelou, Andreu Gwizhurie, Herve eus lignez yaouañ Leon.

Arouezioù pennañ ar veli dugel a oa neuze ar c'hleze hag ar banniel, a veze binniget war aoter iliz-veur Roazhon, ha roet d' an dug diouzh daouarn an eskob. Neuze e toue an dug e le lidel da zifenn gwirioù ha frankizoù an Iliz, an noblañs hag e holl sujidi. Yann Rous a nac'has menegiñ frankizoù an Iliz en e le. Pa gomzimp eus e zarempredoù gant ar gloer, e klaskimp kompren perak.

Ret eo avat komz da gentañ eus ur gudenn a-ziforc'h, e derou e ren.

142

Ar yuzevien harluet diouzh Breizh

A-raok an 13-vet kantved, n' eus e dielloù Breizh anv ebet eus ar yuzevien.

Keit ha ma ouzon e veneger anezho evit ar wech kentañ en ur feur-emglev skoulmet etre Per Dreux hag eskob Naoned, d' an 23 a viz C'hwevrer 1222, skrivet ennañ gant an dug :

« Dre va youl ha dre va aotre en devezo an eskob beli war ar yuzevien a vev en e zalc'h-douar, evel m' o devoa e ziaragerien. Mar nac'h ar yuzevien plegañ, kuitaent dalc'h-douar an eskob hep distro. »

Teul Naoned.

Lenn a reer en un teul eus 1235 e pe c'hiz e veze lakaet ar reolenn da dalvezout. Setu amañ troidigezh an teul dudius-se :

« Ra vezo gouezet gant an holl penaos eo bet diazezet ar prosez etre Jafrez priol Donz diouzh un tu, ha Kreison ha Bonostru, yuzevien eus Gwenrann, diouzh an tu all. Ar priol, ar re a zo kred evitañ hag holl vadoù ar prioldi, a chom dieub diouzh pep dle e-keñver ar yuzevien gentlavaret hag o hêred da virviken. Ar yuzevien-se a ziskler ez int kuit eus an dleoù-se, ha roet o deus kuitañs dirak an Aotrounez Gwilherm Derval, marc'heg, Main e vreur, Bonabe Ruzieg, marc'heg, ha re all. Hag evit startaat an emglev, al lizhiri-mañ a zo bet lakaet warno siell d-Triskan, neuze senesal ar yuzevien, ha re Jakob eus Naoned hag Harank eus Segré, yuzevien ivez o-daou. Graet e Naoned, d' al Lun war-lerc'h ar Sul ma kaner Laetare Jerusalem, er bloaz 1234. »

An teul-se, a zo bet miret ar skrid orinel anezhañ, a weler war e du enep dek linenn skrivet en hebraeg, « e lizherennoù rabinek », eme Dom Moris, hag a hañval bezañ an droidigezh diwar al latin. Ar sielloù a zo bet lamet. Er 17-vet kantved e chome c'hoazh tammoù anezho. War unan eus sielloù ar yuzevien e weled « hanter-batrom penn ur vaouez gant un torkad-blev a-dreñv », ha war an hini all « ur rozenn bemp-deliennek ». War hini ar senesal e weled c'hoazh « un tamm eus ur c'hleze ».

Anat eo e oa « senesal ar yuzevien » an den karget gant eskob Naoned da c'houarn an drevadennad yuzev a veve war e zouaroù. Beli en doa war Wenrann ha Naoned, pa 'z eo gwir e voe savet an teul er gêr-mañ hag e chome an daou yuzev er gêr all. Eskob Naoned, ouzhpenn e zomanoù e Naoned, en doa ivez un dalc'h-douar a bouez e Gwenrann.

143

Ar werin hag ar yuzevien.

Er bloaz war-lerc'h, 1235, e voe bec'h war ar yuzevien e tu gwalarn Frañs. Edod oc'h embann ar groaziadeg. Kalz tud, kemeret ganto ar groaz, a oa prest da loc'hañ etrezek an Douar Santel, pezh a oa fall evit ar yuzevien, rak atizet e

veze ar santadurioù relijiel, hag e troent buan da gounnar ruz ouzh ar bobl he doa lazhet un Doue.

Ar re a yae d' ar groaziadeg o doa ezhomm arc'hant, a c'houlennent digant ar yuzevien, hag ar re-mañ, o tennañ o mad eus o enkadenn, o gwaske kriz. Ouzhpenn ar gounnar a save diwar seurt uzurerezh, e oa ar gasoni ouzh bourevien ar C'hrist, a lakae a vare da vare ar werin da vont e gouez ha da skeiñ dreistmoder. Ar yuzevien a veze taget, laeret, gwallgaset, muntret.

Se a c'hoarvezas e 1236, nebeut amzer goude Pask, da lavarout eo e miz Ebrel, dreist-holl en Anjev, Poatev ha Breizh. Holl yuzevien ar broioù-se ne voent ket lazhet, evel a zo bet lavaret, rak e Breizh, tri pe bevar bloaz war-lerc'h, e chome c'hoazh kalz anezho.

Feur-emglev Yann Rous ha Raoul Felger.

En ur feur-emglev skoulmet e miz Meurzh 1240 etre an dug Yann Rous ha Raoul Felger, e kaver ar pennad-mañ :

« Evit pezh a sell ouzh ar yuzevien, ar c'hont pe zug Breizh a ro aotre d' an aotrou a Felger da lakaat harz ouzh o uzurerezh kerkent ha ma teraouo ar brezelioù. Youl an dug eo ma vezo barnet ar c'hlemmoù a-zivout an dleoù dezho gant an aotrou a Felger, ha m' en devezo gwirioù heñvel-rik ouzh re aotrou Gwizhurie. »

Diwar se e c'haller krediñ e kendalc'he ar yuzevien gant o uzurerezh. Prest goude, e kounnaras ar werin outo adarre. Dre eurvad, ne voe ket skuilhet gwad evel e 1236.

144

Ar Parlamant-Meur.

Er bloaz 1240, un nebeut sizhunvezhioù hepken war-lerc'h ar feur-emglev am eus meneget, an dug Yann Roue a vodas e Plouarzel-Breizh-Uhel e lez leun, " Parlamant-Meur Breizh ", holl gannaded ar vro evel ma oa stummet neuze, an eskibien, an ebed, ar gonted, ar varoned ha gwizien all an dug. Goulenn a reas digant hemañ ma vije kaset ar yuzevien er-maez a Vreizh.

Studiet e voe ar gudenn, hag embannet an ordrenañs da heul :

« Da gement hini a welo al lizheroù-man, Yann, dug Breizh, kont Richmond, salud !

« Gouezit :

« War c'houlenn an eskibien, an ebed, ar varoned ha gwizien Vreizh, goude bezañ sellet evezhiek ouzh mad ar vro, ez argasomp diouzh Breizh an holl yuzevien. Ni hag hon héred ne zalc'himp morse unan anezho war hon douaroù e Breizh, ha ne c'houzañvimp ket ma vefe dalc'het unan war e zouaroù gant nikun eus hor sujidi.

« An holl zleoù graet da yuzevien o chom e Breizh, e pe zoare bennak ha diwar be abeg bennak e vijent graet, a zo distaolet a-bezh hag akuitet war hon urzh.

« An holl zouaroù roet diwar ouestl da yuzevien, an holl ouestloù loc'hus ha diloc'h kemeret ganto a vezo daskoret d' an dleourien pe d' o héred, nemet an douaroù ha gouestloù all a vije bet gwerzhet da gristenien dre ur varnedigezh eus hol lez.

« Nikun ne vezo tamallet na barnet evit bezañ lazhet ur yuzev.

« Pedit hag erbediñ a feiz vat ha gant hon holl c'halloud a raimp an

Aotrou Roue Frañs da gretaat dre e lizheroù an dalc'h pe ordrenañs-mañ, ha gwarantiñ a reomp en anv hon tad hag en hon hini na vezo paeet morse an dleoù graet e Breizh d' ar yuzevien war zouaroù hon tad.

« An ordrenañs-mañ, evel skrivet amañ, a douomp a feiz vat seveniñ da virviken. Mar disentomp diouti, e c'hallio holl eskibien Vreizh, a-gevret pe a-unanoù, hon eskumunugañ ha lakaat berz war hon douaroù en o eskoptioù, daoust da bep gwir-dreist hon eus pe a c'hellomp kaout.

145

« Ouzhpenn se, mennout hag aotren a reomp ma ray hon hêred a reno war hol lerc'h, pa o devezo tizhet an oad reizhek, al le da zerc'hel feal d' an ordrenañs-man, evel skrivet amañ. Ar varoned, ar wizien hag ar re all a dle touiñ fealder da gont Breizh ne douint na ne zougint gwazoniezh d' hon hêred nemet pa o devezo ar re-mañ, diwar reked daou eskob pe daou varon da vihanañ en anv ar re all touet bezañ feal d' an ordrenañs-mañ. Pa vezo graet al le-se avat, kement den a dle fealder da gont Breizh a douo fealder hag a zougo gwazoniezh raktal d'hon hêred.

« Embannet e Plouarzel-Breizh-Uhel, d' ar Meurzh kent Dasorc'hidigezh hor Salver, er bloaz 1240. »

An deiz-se a oa an 10 a viz Ebrel hervez an deiziadur nevez.

Pouezusted ar Parlamant-Meur.

Talvezout a rae ar boan treiñ amañ an dalc'h pe ordrenañs dugel-se penna-da-benn. Pouezus eo an danvez, ha pouezus ivez dre ma tiskouez ar stummoù-lavar lidek e veze kemeret perzh war-eeun en arguzerezh hag en divizoù a-zivout aferioù boutin gant bodadeg kannaded ar vroad. Brizhkloareg, en e rendaeloù gant ar veleien, dreist-holl e Sant-Albin hag e Redon e 1225 ha 1227, en doa klasket lakaat ar varoned hag an uhelidi all da vont a-du gantañ evit stourm ouzh an Iliz. Hogen Brizhkloareg, aotrouniezhus a-ouez d' an holl evel ma oa, a levezone kreñv ar bodadegoù-se, hag ouzhpenn ne oa lec'h ebet enno evit ar veleien. Amañ, er c'hontrol, e weler an ebed hag an eskibien o tont, hag o kendivizout gant ar varoned hag an izili all eus an noblañs.

Ret eo krediñ ez eo diwar atiz ar " Parlamant-Meur "-se ma voe harluet ar yuzevien, rak, ur miz diagent, en emglev a reas gant Raoul Felger, ne seblante ket soñjal en dra-se.

« En amzer-se, » a skriv hor gwiraour hag istorour bras Beltram Arc'hantred, « e veze e-leizh a yuzevien e Breizh. Ken rust ha ken didruez e oa o uzurerezh ma samment an uhelidi, ar varc'hadourien, ha dreist-holl ar werin. Bodet e voe ar Breujoù, a c'houlennas groñs raktal digant an dug o argas. »

N' eus ket ezhomm lavarout muioc'h diwar-benn ar skrid-se, a zo splann a-walc'h drezañ e-unan.

A-hed an deizioù

GENVER 1973.

Setu ar goañv deuet adarre, hep erc'h na skorn betek hiziv. Ha gwell a se eo rak n' eo ket ur bam rankout bleniañ ur c'harr war an erc'h pe ar riell, e kêr pe war ar maez, evel m' eo c'hoarvezet ganin meur a wech e-kerz ar bloavezhioù tremenet, o tistreiñ diouzh devezhioù-studi Nedeleg. Hogen Breizh n' eo ket ur vro yen, goude holl, hag an erc'h n' en em ziskouez ket alies enni. Ha padal, n' eus netra par da gened vresk ar gweledvaoù dibaot-se, pa vez gwisket ar gwez gant dantelez gwenn a-hed an hent. Soñj am eus da skouer eus devezhioù-studi SAE e Koad-an-Doc'h p' en doa an erc'h troet ur bodad gwez e-tal ar skol d' ur strollad plac'hed eured sonnet dindan an oabl louet. Gouzout a raen moarvat ne vije ket padet pell an achantadur-se hogen seul vui a briz a roen dezhi moarvat ma ouien e vije dibad ; e devoud, ne dizhis ket anavezout ar c'hoadig-se un nebeut sizhunvezhioù war-lerc'h, pa ne vane mui nemet skourroù du ha reut eus ar stummoù heneuz ha splann am boa arvestet outo a-ziagent.

Gwechall, p' o deveze an dud amzer vak war ar maez e raent o mad eus ar goañv evit lenn un tammig. An dra-se am eus klevet bepred. Evidon-me, ne gav ket din em eus muioc'h a oar e-pad ar mizioù du eget e-pad n' eus forzh peseurt koulz-amzer all ; ar c'hontrol a vefe gwir kentoc'h, marteze. E-pad ar goañv e labourer ar muiañ evit an Emsav : emvodoù a vez da bleustriñ, redadennoù da ober evit gweladenniñ ar greizenn-mañ-kreizenn (ha n' eo ket dizudi bepred ar baleadennoù-se, e kreisteiz Roazhon atav, pa dreuzer maezioù marellet gell ha gwer, gant o diabelloù dic'hortoz adreñv d' ar runioù noaz). Koulskoude, er goañv-mañ em eus klasket lenn a-zevri levr pe levr, en tu-hont d' al levrioù gallek - pe saoznek a-wechoù - a rankan damlenn - dre vicher - diwar-benn armerzh, politikouriezh pe skiantoù an natur ha n' int ket gwall zedennus dalc'hmat, ret eo lavarout.

147

N' eus forzh penaos, ur wech er gêr, evit tec'hout diouzh ar bed gall a c'hronn ac'hanomp a bep tu, e klaskan neuze lenn levrioù e yezhoù keltiek all. E gwir, tec'hout diouzh ar bed gall a zo diaes : aze emañ, gant e wask - gwaskus e devoud - e skingomz, e skinwel, bezant bepred (evel just, darn a c'hell en em serriñ penn-da-benn en ur geto met kement-se n' eo ket un diskoulm). Neuze en em c'houlennan peseurt sevenadur brezhon a zo e Breizh ; moarvat n' eus hini ebet koulz lavaret. Ne vo unan gwirion nemet en deiz ma vo gouest kefredourion ar vro-mañ - gwall zistank int hiziv - da dremen hep ar galleg. Me ' gred en doa Roparz Hemon lavaret kement-se pell zo. Hogen n' omp ket degouezhet - nag a-bell - er bazenn-se. Sur mat e veizan koulz hag un all e teu lanv ar sevenadur saoznek tamm-ha-tamm betek hor bro (ouzhpenn an hanter eus ar c'helaouennoù pouezusañ a zegemeran em levraoueg du-mañ a zo skridaozet e saozneg ; ur c'hard pe un drederenn eus al levrioù a bourchasan a zo saoznek ivez) ; hogen tremen a ra ar sevenadur saoznek evelkent dre skramm ar sevenadur gall ; ne gemer talvoudegezh e soñj ar Vrezhoned nemet dre maz eo bet degemeret a-ziagent gant ar C'hallaoued o-unan. Hag en un doare iskisoc'h c'hoazh ne daol Breizhiz evezh da vat ouzh o arzourion nemet diouzh m' o deus graet berzh e Pariz ; brud ur c'haner evel Alan Stivell a zo dleet evit darn d' an doare « kantreizhadur » a zo bet roet dezhañ gant ar skinwel gall.

Bezot pe vezot, n' eo ket warc'hoazh beure eo e vo gouest an emsaverion zoken da vont da gerc'hat o boued kefredel e n' eus forzh peseurt bro eus Europa pe Amerika ha n' eo ket warc'hoazh beure kennebeut e kavimp en hol levraouegoù hag en hol levrديوù kement a skridoù saoznek, alamanek ha spagnolek pe italianek hag a levrioù gallek e-tal hon oberennoù brezhonek.

Da c'hortoz, ar pezh a c'hell ober pep hini eo eta deskiñ yezhoù ha sevel evitañ levraouegoù lies-yezh. Ma fell dezhañ anavezout broioù tost d' e hini e c'hell deskiñ kembraeg pe iwerzhoneg. Kement-se n' eo ket mui tre diouzh ar c'hiz, ret eo anzav. Ne gomzan ket eus Iwerzhoniz a zo disprizet gant nouspet « emsaver » hiziv evit abegoù liesseurt, peogwir n' int ket deuet a-benn da saveteiñ o yezh, peogwir e sentont ouzh ur Stad vourc'hiz (netra souezhus e kement-se a-hend-all o vezañ maz eus bourc'hizion vihan eus ar pep brasañ eus Iwerzhoniz). Evit Kembreiz ha Plaid Cymru n'eo ket dav komz anezho : kempennelourion int holl. E gwirionez ez eo diaes din dougen ur varnadenn bennak ken diwar-benn Iwerzhon ken diwar-benn Kembre. Padal, dezrannadurioù zo renet gant aozadurioù zo e Kembre ha zoken " Cymdeithas yr iaith " - taer a-hervez - ne hañvalont ket klotañ mat gant saviad gwirion ar vro-hont. Hogen un dra a zo anat din evelato : emañ stuz an Emsav du-se a-unvan gant stuz ar boblañs ha dre se hepken en deus gellet Plaid Cymru kaout un tammig krog e buhez politikel Kembre. War ar marc'had ez eo bet gouest ar vrogarourion a-hont ivez da grouiñ aozadurioù liesseurt a zo estreget aozadurioù tasmantel hor bro-ni. Gellet he deus Plaid Cymru tremen dreist da skoilh ar brezel, pezh na dizhas ober hini ebet eus an aozadurioù brezhon a zo bet oberiant d' ar mare-se. Me ' oar, evit an damkaniezh omp trec'h d' an holl gwitibunan hag an holl a rankfe soublañ uvel dirazomp ; er pleustr, ret eo lavarout n' omp ket ken skedus all ha betek hiziv n'he deus servijet an damkaniezh vurzhus hon eus empennet nemet da rannañ ar pezh a zleje bezañ bet an Emsav en un dastumad sektennoù diniver. Ha goude-se e karfemp kenteliañ ar re all. Me ' gred ne oar ket mui ar vrogarourion vrezhon petra eo bezañ lu.

Hogen n' eo ket eus politikerezh ar broadoù bourc'hizion vihan-se e felle din komz, eus o lennegezh ne lavaran ket pe, da vihanañ, eus levrioù zo am eus nevez lennet en iwerzhoneg pe e kembraeg. Unan anezho a zo " Dialann deorai " e dalbenn ha savet eo bet gant Donall Mac Amhlaigh. Deiz-levr ur micherour iwerzhonat divroet da Vro-Saoz goude an eil brezel eo al levr-mañ. A-dreuz an oberenn-mañ e teuer da anavezout buhez kalet al labourerion iwerzhonat barnet d' an harlu e Bro-Saoz e-lec'h o deus ranket mont da c'hounit o zamm greun ; diskouez a ra ar skrivagner pebezh labour pounner a zo hini ar vicherourion-se, pegen diasur eo o buhez peogwir e rankont mont eus un embregerezh d' egile, dic'hopret ha ma vezont alies ur wech echu e drevell gant an embregerezh-mañ-embregerezh el lec'h-mañ-lec'h. Meur a wech eo em gavet ar skrivagner dilabour e-unan. Ha bourrus eo e zanevell peogwir ez eus ganti blaz ar pezh a zo bet bevet e gwirionez (ha ne gaver ket bepred en ur romant, lakaomp) ; ivez, bez e oar livañ e genseurted gant kizidigezh ha karantez, petra bennak ma ra damgoap anezho a-wechoù. Dre se on bet dudiet bepred gant va lennadenn.

Seurt lennegezh testeni n' eo ket dibaot el lennegezh iwerzhonek ha sur mat e c'hellfed sevel ur roll hir eus an « emgounskridoù » savet gant tud eus ar bobl hag embannet abaoe ar brezel bed kentañ. Unan eus ar re gentañ ha marteze unan eus ar re vrudetañ a zo bet istor ar martolod kozh eus inizi Aran hag a zo e dalbenn " An t-Oiléanach " gant Tomas O Criomthain (" An Enezour ") hag am eus kavet plijus da lenn gwechall (el levr kentañ am eus lennet en iwerzhoneg ez eo). Mat eo resizañ evelkent n'eo ket ar seurt lennegezh « endarzhok » bepred ; meur a wech eo bet broudet ar skrivagnerion boblek-se gant lennerion eus kêr da sevel o zamm oberenn ; hag ar « vourc'hizion »-se a adwele hag a reizhe o skridoù. Diouzh ar c'hiz e oa neuze en Iwerzhon - evel e Breizh - un doare gwerinelouriezh berboell ha lu a-walc'h peogwir e kinnige evel ur skouer un doare-bevañ ha na oa nag hetus na gallus er bed a-vremañ. Didalvez eo ouzhpennañ n' o devoa an danevelloù-se ster politikel na kevredadel ebet : an tu livus eus ar vuhez henvoazel war ar maez a veze diskouezet hepken d' ar lenner.

An oberenn iwerzhonek emeon o paouez lenn n' eo ket dres diouzh an doare-se. Un testeni kevredadel a c'heller diverzout enni hag eñ roet hep mennout d' ar skrivagner moarvat. Diwar lenn an eñvorennoù mañ e teuer da welout penaos n' o deus an darn-vuiañ eus ar vicherourion iwerzhonat a zo aet da labourat e Bro-Saoz abaoe ar brezel diwezhañ, lakaomp, « emskiant renkad » ebet, - ha kement-se

a zo gwir, pergen, eus an daneveller. Hiniennou eus ar vicherourion a zo kontet deomp o doareoù el levr-mañ en em sant lodek e stourm ar vroadelourion iwerzhonat hogen tamm ebet en hini ar vicherourion e Bro-Saoz. Reoù zo a c'hellfe bezañ feuket ha gwallskoueriet gant hevelep dispriz ouzh « ereoù kevredigezhel natur ». Hogen kavout a ra din ez eus tu evelkent da gompren tro-soñjal al labourerion-mañ ha dreist-holl hini ar skrivagner : ne reont ket eus o micher ur « stad vuhez » ; evito ned eo ar vicher end-eeun nemet un tu da c'hounit o zamm greun ; nac'hañ a reont eta ober eus ar renkad o broad ; ha war ar marc'had, emichañs, n' o deus tamm c'hoant ebet e chomfe o bugale - p' o devez bugale - en hevelep renkad hag int dre ar spered eta e tec'hont dija diouzh o renkadelezh evel ma tec'h re all diouzh o broadelezh a zo stag, en o soñj, ouzh o zavantegezh. Ha lavaromp ouzhpenn a-hend-all, n' en em stag ket ar vicherourion a zegemer o stad vicherour ouzh o renkad war-eeun, ouzh ar gevredigezh a venn e zerc'houezañ, ne lavaran ket, hag houmañ a zo peurvuiañ ur strollad politikel mennet da gemer ar galloud. Evit pezh a sell ouzh Donall MacAmhlaigh, embannet gantañ meur a levr ha perzhiek er stourm evit ar yezh hag ar vroad iwerzhonat, anat eo en em glenk a spered er gevredigezh iwerzhonat « bourc'hiz bihan » ha n' eo micherour nemet dre zegouezh.

150

Ul levr all am eus lennet nevez zo e kembraeg en deus plijet din a-walc'h ivez. E dalbenn a zo " Hen dy ffarm " ha savet eo bet gant D.J. Williams. Gant ar brogarour-mañ em eus bet tro da gejout div wech ; ar wech kentañ e oa e 1947 p' edon o vont d' ar c'hendalc'h etrekeltiek kentañ war-lerc'h ar brezel, e Dulenn. Degemeret e oan bet en e di a-raok din sevel war vourzh al lestr a zlee kas ac'hanon da Roslare en Iwerzhon. En em gavout aris gantañ evit an eil gwech e Caerdydd, tri bloaz hanter zo, da geñver bodadeg skrivagnerion ar broioù keltiek. Marvet eo damc'houde ar vodadeg-se, a soñj din. Dalc'het em eus soñj eus un den hegarat ha seder, dister da welout hogen speredel e zoare. E-giz ma verken diouzhtu ne oa netra meurdezus na gouest da zedennañ an evezh en e stumm : mentet bihan e oa, livrin e zivoc'h evel kouerion zo, boaz da vevañ dindan an amzer ; dougen a rae lunedoù hirgelc'hiek hep tamm fichadur ebet nemet e oa liv ar vadelezh en e gerc'henn ha daoulagad krak ha lemm o sell en e benn ; va lakaat a rae da soñjal e Frañsez Vallee gant e stumm dilorc'h ha madelezhus war un dro. Padal, daoust d' e ziavaez didro e oa bet D.J. Williams unan eus brogarourion gadarnañ Kembre. Kemeret en doa perzh e 1933 en argadenn a-enep da aerborzh al lu saoz e Kembre ha barnet e oa bet evit se d' ur bloavezh toullbac'h. A-c'houdevezh en doa D.J. Williams kendalc'het da stourm evit ar Strollad broadel m' en deus legadet dezhañ e holl beadra, ma ne fazian ket, war-lerc'h e varv.

Gwechall, goude bezañ distroet diouzh Kembre e 1947 em boa lennet un nebeut dastumadoù kontadennoù savet gantañ ha klasket em boa zoken trevezañ e zoare kontañ en ur rummad danevelloù am eus aozet war-dro ar bloavezhioù 50 hag a zo chomet diembann. Abaoe n' em boa bet tro biskoazh da lenn skrid ebet diwar bluenn ar skrivagner-mañ nemet broudet gant ar weladenn a ris da Gembre e 1969 hag ar gejadenn nevez am boa bet gant ar brogarour em boa pourchaset un nebeut eñvorlevrioù savet gantañ, pergen " Yn chwech ar ugain oed " e-lec'h e tezrevell D.J. Williams e yaouankiz hag unan all am eus lennet en devezhioù-mañ : " Hen dy ffarm ".

151

E gwirionez ne gaver ket kement-se a eñvorennoù personel el levr diwezhañ-mañ. Ar skrivagner en deus klasket ober istor e diegezh en 19vet kantved adal amzer e dad kuñv. Dedennet on bet gant an destenn-mañ o vezañ m' em eus klasket me va unan taolennañ buhez va ziegezh e kornog ar vro e dibenn ar c'hantved tremenet hag e derou ar c'hantved-mañ. Gwir eo en deus gellet D. J. Williams reiñ kalz muioc'h a vunudoù egedon ha livañ en un doare kalz klakoc'h ha perveshoc'h kevredigezh plouezat Kembre en 19vet kantved eget n'em eus gellet ober va unan evit va c'horn-bro eus Gwaien : ar skrivagner kembraek en deus bevet e-unan war ar maez e-pad e vugaleerezh hag e yaouankiz, ar pezh n' eo ket c'hoarvezet ganin ; hag ivez, a gav din, en deus kaset da benn imbourc'hadennoù n' am eus ket gellet ren va unan dre ziouer a amzer ; dre se ez eo kalz ledanoc'h e daolenn eget va hini ha kalz pinvidikoc'h ivez. Hogen a-benn ar fin,

daoust da zisheñvelderioù zo a zo dleet d' ar c'hemm etre ar katoligiezh ha protestantiezh, evit ar pep brasañ, e tenn kalz Kembre an 19vet kantved da Vreizh an hevelep prantad, ken e-keñver an doare-bevañ (anv a zo ivez e levr D.J. Williams eus « gweleoù kloz » !) ken e-keñver stuzegezh an dud diwar ar maez dre vras.

E Kembre ivez ez eo stank meurbet an eñvorlevrioù gouestlet d' ar gevredigezh henvoazel (e Breizh, siwazh, n' hon eus ket kement-se a destenioù seurt-se : nevez zo, hini Youenn Drezen en e romant " Skol Louarn Veig Trebern " a vefe ar gwellañ) ha ret eo din lavarout zoken on bet plijet marteze muioc'h gant oberennoù all a seurt se e kembraeg, evel " Hen atgofion " diwar bluenn W.J. Gruffydd, embannet e 1942 e-pad ar brezel diwezhañ ; kenaozet ha skrivet eo gwelloc'h marteze eget hini D.J. Williams a zo re stank an danvez ennañ, marteze (ha se a anzavan daoust ma ne blij ket din kalz personelezh skrivagner " Hen atgofion " a nac'has harpañ an emsav e Kembre p' en devoa tro d' henn ober en un dilennadeg bennak e-lec'h en devoa emstrivet a-enep da zanvez kannad ar Strollad broadel e Skol-veur Aberystwyth, a gav din).

152

E Kembre avat evel e Breizh pe en Iwerzhon ez eus chomet un doare hiraezh da gevredigezh henvoazel an 19vet kantved hag evel m' em eus lavaret meur a wech he devoa ar gevredigezh-se daoust d' an dienez, d' ar baourentez, d' ar mac'homerezh ivez un doare kened na bar ket en hor c'hevredigezh c'hreantel. Gant an hiraezh-se, da skouer, eo intret skridoù ur skrivagnerez evel Frañseza Kervendal e-barzh ar gontadenn " Kêrbenn " e niverenn diwezhañ Al Liamm (hogen lavarout a rin diouzhtu n' en em gavan-me tamm ebet en harlu e Roazhon, er c'hontrol). Pelloc'h moarvat eo padet ar gevredigezh henvoazel-se er broadoù keltiek en abeg d' ar sujedigezh ha d' an diouer a reverzhi c'hreantel. Soñjal a c'heller e vije Breizh deuet da vezañ heñvel ouzh broadoù Lec'h-lenn pe an Izelvroioù m' he dije gellet derc'hel he frankiz. Hogen ar gudenn a sav dres eo gouzout ha bez e c'hell ar broioù-se pourchas un uhelskouer da Vreizh. Evidon-me ne gredan ket nemeur : breinet eo bet ar broadoù-se gant ar sevenadur beveziñ kevalaour dizremmwel a zo hini Europa ar C'hornog dre vras ha moarvat ivez n' eo ket uhelvennad Sveden pe Zanmark a hetan-me evit Breizh (na kennebeut all, koulz eo lavarout, hini Sina pe Albania pe Alamagn ar Reter). D' un dra bennak en devo servijet isdiorreadur Breizh : da reiñ tu d' ar Vrezhoned empennañ un doare sevenadur deneloc'h eget hini ar broadoù kevalaour pe sokialour a vremañ.

An dra-se a zo damsantet moarvat gant an darn vuiañ eus eus an emsaverion e Breizh hag er broioù keltiek all, daoust ma n' eo ket gwall sklaer, evel just, o gweledigezh eus ar gevredigezh ma huñvreont enni evel ma klaskin diskouez o komz pelloc'hik eus skridoù an danvez skrivagnerion yaouank e Breizh.

Kent displegañ avat pezh a soñjan diwar-benn skridoù an danvez skrivagnerion yaouank-se e fellfe din merkañ un dra am eus damveneget meur a wech hag a gavan tregasus. Abaoe ar brezel diwezhañ n' eus deuet d' al lennegezh vrezhonek skrivagner nevez ebet koulz lavaret (petra bennak ma eus bet embannet muioc'h a vrezhoneg abaoe 1945 eget n' oa bet biskoazh kent). O lenn avat niverennoù Al Liamm pe ar skridoù a zo bet moulet gant ar gelaouenn e verzfe unan ez eo bet savet an darn vuiañ gant skrivagnerion eus marevezh Gwalarn pe a oa aet dija war an oad p' o deus kroget da skrivañ ha da embann skridoù e brezhoneg (ha soñjal a ran amañ e Jarl Priel, Reun Menez Keldreg, Anjela Duval, hep kontañ ar skrivagner rannvroelour ha rannyezhelour Per-Jakez Helias).

153

Hogen a-douez ar re yaouank a zo deuet d' an Emsav ha d' al lennegezh vrezhonek a-c'houde ar brezel, pet o deus savet un oberenn wirion ? Hini ebet, a gav din. Ne gomzin ket eus va oberenn evel just a zo nebeut anavezet dre m' em eus ranket embann anezhi e stumm liestennadurioù. Hogen Per Denez n' en deus embannet levr distag ebet ; Ronan Huon en deus moulet ul levrenn varzhoniezh hag un dastumad kontadennoù ; Arzel Even en deus savet un oberenn skiantel ha kalvezel hepken. Lakomp ouzhpenn barzhonegoù Youenn Gwernig a zo bet atav un « outsider ». Ne c'heller ket keñveriañ an eostad treut-mañ ouzh hini puilh Skol Walarn.

Petra a zo kiriek d' an difrouezh-mañ ? Marteze an diouer a vroud politikel en deus atizet skrivagnerion Skol Walarn hag en deus entanet anezho : darvoudoù a zo bet etre an daou vrezel ha " Breiz Atao " a oa moarvat un darvoud pemdeziek : nag ur " Breizhad oc'h adkavout Breizh " na " Komzoù bev " ne vijent bet skrivet hep " Breiz Atao ". Er c'hontrol n' eo bet broudet rummad Al Liamm gant luskad politikel gwirion ebet ; breinet ha trenket eo bet hepken gant tabutoù dister, hep dibenn ebet dezho, evel hini ar skritur, a rankje bezañ bet disoñjet pellzo. Evel-se ez eo bet hor rummad-ni ur rummad tremen ha n' en deus ket degaset kalz tra d' al lennegezh vrezhonek. Stag eo ivez an difrouezh-mañ ouzh ur meizadur « kenedelour » eus al lennegezh hag an arz a zo e unan un heuliad eus an diouer a stourm politikel gwirion. A-benn ar fin en em c'houlennan ha n' eo ket bet embannet an oberenn lennegel bouezusañ eus hor rummad-ni gant ar gelaouenn *Emsav*. Politikerezh eo a zo danvez ar gelaouenn-mañ, a lavarot. Hogen dres ne gav ket din e c'heller distagañ al lennegezh diouzh ur mennad politikel bennak goude ma ne vije ket anat hemañ e kement skrid a vo bet embannet.

Ha bremañ, setu un trede rummad o tont, ur rummad tud yaouank nevez. Daoust hag ar re-mañ a vo gouest da sevel un oberenn lennegel wirion ? Evit ar poent - se a fell din lavarout diouzhtu - ne welan nemet unan ez eus danvez ur skrivagner ennañ : Bernez an Nay hogen hemañ n' eo ket troet gant al « lennegezh diduellañ » daoust maz eus ennañ, hep mar ebet, temz un aozer skridoù gwirion. An danvez skrivagnerion ha skrivagnerezed all a embann kontadennoù dreist-holl e-barzh Al Liamm, Preder pe Hor Yezh a seblant bezañ donezonet a-wechoù (mat eo kontadennoù Gwendal Denez ha Jaklin Pennanec'h e-barzh niverenn diwezhañ Al Liamm, da skouer). A-ziforc'h e ranker lakaat an danevelloù embannet nevez zo e-barzh un niverenn arbennik eus Preder dindan an talbenn TALM 1, o vezañ m' int bet savet gant skrivagnerion koshoc'hik eget ar re hon eus meneget.

154

Peseurt barnadenn reiñ diwar-benn an holl skridoù-se nevez embannet ? Da gentañ, ret eo lavarout ne ouzomp ket c'hoazh pere eus an danvez skrivagnerion-mañ a vo gouest da genderc'hel da skrivañ ha da sevel un oberenn. O follennata pajennadoù Al Liamm er bloavezhioù tremenet e c'hellfed kejout gant anvioù danvez skrivagnerion o deus dilezet al lennegezh hag a-wechoù ar yezh hec'h-unan. Hogen daoust ha diverzout a c'heller er c'hontadennoù embannet e-barzh Al Liamm pe Hor Yezh ur gemennadurezh bennak, merk ur bersonelezh ? N' eo ket anat betek-henn. Darn anezho ne reont nemet hiraezhiñ war-lerc'h nospet skrivagner rannvroelour d' ar gevredigezh henvoazel diwar ar maez ha n' eus ket anezhi ken. Ar re all a chom serret en o bed personel-int hep diabell weled ebet war ur gevredigezh vrezhon da zont ; rak n' eus forzh penaos ne c'heller lec'hiañ ar gevredigezh-se nemet en dazont : un dousennad a dud n' eo ket ur gevredigezh. Alese, marteze, an dic'hoanag a zo oc'h intrañ kontadennoù zo, re Wendal Denez, da skouer. N' eus e gwirionez gweledigezh politikel sklaer ebet oc'h awenañ ar skridoù a zo embannet gant ar skrivagnerion yaouank ; hiniennoù anezho moarvat, diouzh lenn notennoù zo, a zegemer mui pe vui ar mennozhioù kleizelour pe nagennelour a zo diouzh ar c'hiz abaoe un toullad bloavezhioù. Hogen nac'hus e hañval bezañ o emzalc'h dreist-holl hag o zezennoù politikel ne glotont ket war-eeun gant degouezh Breizh hag ar stourm a zo da ren enni. A-benn ar fin ned a ket o folitikerezh en tu-hont da implij ur c'heriaoueg zo ha nad eo hec'h-unan nemet un heklever eus an hini a zo arveret er metou kleizelour gall. En tu dehou a-hend-all n' eo ket gwelloc'h an traoù : eno adarre e verzer an hevelep anadenn a hekleverezh hag a berokederezh : diaes eo, da skouer, komz eus Europa hep resizañ - pezh na vez ket graet peurvuiañ - eus peseurt Europa ez eus anv. Ar c'healioù politikel en em ziskouez e bruderezh ar gostezenn-se ne hañvalont ket bezañ frouezh ur preder politikel gwirion kennebeut.

155

Disheñvel e tleje bezañ bet ar pennadoù a zo bet embannet nevez zo e-barzh *Talm 1* ha klevet em eus hini pe hini oc'h asuriñ e oa awenet ar c'hontadennoù a zo bet embannet en dastumad-mañ gant ur preder ha na gaver ket e-barzh ar c'hontadennoù moulet war Al Liamm. Padal, maz eus preder er c'hontadennoù embannet e-barzh *Talm* ne gav ket din ez eo hemañ ur preder politikel, unan

buhezel ne lavaran ket. E-keñver lennegezh moarvat ez eo dreist ar c'hontadennoù embannet pe adembannet e-barzh *Talm* da lod eus ar c'hontadennoù embannet e-
lec'h-all. Kalz a gizidigezh hag a varzhoniezh a zo e-barzh kontadennoù
Pierrette ha Joelle Kermoal ha prizout a ran ivez mousfent Yann Mikael koulz ha
beoder e zanevelloù. Hogen peseurt gweledigezh nevez eus an Emsav ha Breizh a
gaver enno ? Ar pezh en em ziskouezfe a vefe kentoc'h un doare « divamadur » :
Roazhon, pergen, e-barzh kontadennoù Pierrette ha Joelle Kermoal a wisk neuz un
douar a harlu hag a douell war un dro, douar un dispac'h ha n' eus bet anezhañ
biskoazh nemet e spered ar re o deus empennet anezhañ, douar ur strollad
keneiled skignet a bep tu, douar ar c'herse. Daoust ma n' eo ket hir ar
gontadenn " Roazhon bepred " ez eo arouezius mat er c'heñver-se. Petra eo a-benn
ar fin an dispac'h ez eus bet huñvreet ennañ ? Emvodoù ha divizoù un toullad
mignoned, bepred an hevelep re, o chom bepred etrezo hag etrezo hepken, o treiñ
tamm-ha-tamm hag hep gouzout dezho da vourc'hizion vihan peogwir ne gavont ket
tro da enouestlañ o buhez en un obererezh dispac'hel gwirion. Hag ivez a-hend-
all : daoust hag an « dispac'h » a zo gouest da gemm an den e-unan ? Setu ar
goulenn a sav e spered unan diwar lenn burutelladur ur romant rusian o taolennañ
buhez ar gevredigezh soviedat gant P. Kermoal embannet war Al Liamm. Rak petra
eo mab-den ? Evit tud hon amzer, armerzhourion ha kenedourion - er gwellañ
degouezh - ned eo nemet un « homo economicus » bennak pe neuze, evel ma lavar
Hoparz Hemon :

Ur glororenn
o sunañ an oabl ha livioù kaer an deiz
da darzhañ trumm...

Penaos kas da benn un dispac'h hep bezañ termenet da gentañ petra eo mab-
den ? Ha penaos termeniñ mab-den ? Daoust ha bez ez eus anezhañ c'hoazh ? Daoust
ha n' eo ket marv war un dro gant Doue a oa e warant nemetañ ?

156

Poent eo bremañ en em c'houlenn peseurt roll ha talvoudegezh reiñ d'al
lennegezh. Pa lavaran e rank ul lennegezh wirion kaout un diabell-weled
politikel ha speredel ne fell ket din lavarout dre se e tle houmañ bezañ sujet
d'un aozadur politikel bennak, n' eus forzh pehini e ve. Un oberenn lennegel ne
dalv nemet ar pezh a dalv an den e-unan hag un den ha n' eo ket dieub ne c'hell
endevout talvoudegezh ebet. Pe ez eo ar skrivagner profed pe n' eo ket kalz
tra ; hogen ar profed, n' eus forzh penaos, ne c'hell ket bezañ den ur strollad.
A-hend-all ez eo arabat dereiñ d' al lennegezh rik ur pouez dreist. Ur roll
kalvezel he deus ivez al lennegezh : pourchas patromoù d' ar yezh skrivet a vo
implijet bemdez gant an holl. Se am eus lavaret endeo. Arabat e vefe d' ar
skrivagner krediñ ez eo awenet bemdez gant ar Spered. Evidon-me ne roan ket kalz
a briz d' am oberennoù faltazi. Nevez zo em eus klevet er skingomz un
displegadur eus unan eus ar c'hontadennoù am eus embannet un nebeut bloavezhioù
zo en dastumad " An deiz-ha-bloaz " ha souezhet on bet o verzout em boa hogos
disoñjet va-unan ar gontadenn-se. Ar pezh a c'hell ober ar skrivagner el
lennegezh faltazi - ne renkan ket ar varzhoniezh el lennegezh faltazi - eo reiñ
un testeni diwar e benn e-unan moarvat (n' eo ket kement-se evel hinienn hogen
evel den e amzer), diwar-benn e bobl e-giz m' emañ, diwar-benn e vro (rak-se em
eus akedet da lec'hiañ darn eus va c'hontadennoù e Gwaien, e Gwened pe e
Roazhon) ; seurt testeni a ro tu d' ur bobl end-eeun d' en em anavezout en istor
(ha rak-se on bet degaset da blediñ gant an istor war-eeun). Ur vicher vrogar e
tle bezañ hini ar skrivagner eta, e Breizh er mare-mañ da vihanañ ; hogen
n' eo ket dav dezhañ evit keloù se en em gemer evit un haroz. Dibaot eo ar
skrivagnerion o deus ur gemennadurezh bennak da ziskuliañ hag ar re-se peurvuiañ
a zo ivez oberourion ha krouerion an istor.

GERIOU HA NA GAVER KET ER GERIADURIOU.

Aozadur g (-ioù) : organisation
Kefredel ag : intellectuel.
Kefredour g (-ion) : intellectuel m.
Kenedelour ag & g : esthéticien.

Kenedour g (-ion) : esthète.
Kantreizhadur g (-ioù) : justification.
Derc'houezañ y : représenter.
Dezrannadur g (-ioù) : analyse.
Divamadur g (-ioù) : désenchantement.
Emgounskrid g (-où) : autobiographie f.
Emdarzhek ag : spontané.
Greantel ag : industriel.
Imbourc'hadenn b (-où) : recherche.
Isdiorreadur g (-ioù) : sous-développement.
Nagennelour ag & g : contestataire.
Perokederezh g (-ioù) : psittacisme.
Pleustr g : pratique.
Reverzhi c'hreantel : révolution industrielle.
Stuzegezh b (-ioù) : mentalité, culture.

NOTENNOÙ

gant P. ar Bihan, A. Latimier, P. Denez, L. Andouard, B. an Nailh, P. Penneg, R. Huon, studierien Roazhon.

Hor Mignoned

Yann JEGOU ha Lena LOUARN e bried a gas deoc'h keloù laouen ganedigezh Glen - Erwan - Eflamm, e Roazhon d' ar meurzh 13 a viz C'hwevrer 1973.

Albert BOURGEOIS hag e wreg, eus Foujera, a zo laouen o kemenn deoc'h ez eo bet euredet o merc'h Marie-Françoise gant Pierre Phelep, d' an 9 a viz Ebrel.

Yann FOUERE hag e wreg a zo laouen o kemenn deoc'h ez eo bet euredet o merc'h Anne-Benedicte gant Michael Musgrave, e Abati Kylemore (Connemara, Iwerzhon), d' ar 24 a viz Ebrel.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' an holl.

Kañv

Klevet hon eus keloù marv ul lenner feal, an Ao. Erwan CORONAT, a oa o chom e Pariz.

Gouvezet hon eus ivez e oa aet da anaon an Ao. chalonni Jos SALVAT, unan eus pennoù an Emsav Okitaniat, rener ar gelc'hgelaouenn " Gay Saber " a rae eskemm gant Al Liamm.

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e-kerz an daou viz diwezhañ :

Miz GENVER : J. P. Cloarec, 10 lur ; C. Le Brazidec, 4 ; H. Le Floc'h, 5 ; L. Bothorel, 20 ; C. Clocher, 24 ; F. Le Calonnec, 5 ; M. Gourlaouen, 5 ; L. Orhand, 5 ; A. Le Bec, 15 ; L. Bihannic, 55 ; E. Ropers, 30 ; F. Tourmen, 20 ; V. Le Caer, 10 ; A. Cloître, 20 ; J. de Lesquen, 70 ; M.-J. Marot, 30 ; J. Rohou, 5 ; H. Le Lan, 100 ; J. Fennec, 25 ; A. Souffes-Despré, 70 ; M. Mazé, 15 ; A. Le Floc'h, 5 ; J. Le Meliner, 170 ; B. Audic, 20 ; J. Y. Haspot, 20 ; F. Vossen, 17,25 ; P. Aoustin, 5 ; B. Assicot, 10 ; A. Cornic, 10 ; It. Renault, 30 ; G. Latimier, 15 ; F. Kervella, 130 ; J. M. Bouessel, 20 ; A. Heussaf, 29,35 ; Y. Miniou, 10 ; G. Mahé, 10 ; G. Kernevez, 5.
- War un dro : 1.049,60 lur.

159

Miz C'HWEVRER : dizanv, 320,16 lur ; T. Pabu, 10 ; Y. Ar Beg, 200 ; R. Tremel, 15 ; R. Brisson, 20 ; A. Herry, 70 ; R. Autret, 15 ; J. Conan, 10 ; H. Calvez, 170 ; J. Connan, 50 ; B. Le Nail, 40 ; P. B. Ruban, 50 ; M. Runpaot, 15.
- War un dro : 985,56 lur.

2.035,16 lur hon eus bet abaoe derou ar bloaz. Bennozh Doue d' an holl brofourien.

Hol lennerien a skriv

Digant P. H. hon eus bet ul lizher hir ha dedennus e meur a geñver, dre ma tispleg ennañ e soñjoù diwar-benn ar gelaouenn :

« Da gentañ va lezit da gemenn deoc'h an holl vad a soñjan diwar-benn ho kelaouenn, hon Liamm, ha pegen plijet e vezan alies ouzh he lenn.

Evidon da chom, diouzh boaz, hep skrivañ tra pe dra d' ur gazetenn, petra bennak e vefe va soñj diwar he fenn, fellout a rafe din ober un toullad " refleksionoù " a vezo " profitapl " marteze. Spi am eus, da vihanañ.

Lennerien 'zo, aliesik, a damall ouzhoc'h embann pennadoù n' emañ ket o lec'h, hervezo, en ur gelaouenn lennegel.

Petra eo ur gelaouenn a reer " lennegel " anezhi, en hor mare ? Ur gelaouenn a " v-Belles-Lettres " marteze ? Mat e oa en amzer " velepok ", a-raok ar brezel pevarzek. Evit hiziv an deiz, avat, n' eo ket, tamm ebet. Hiziv e rank ur gelaouenn a seurt gant hon hini, bezañ digor war ar bed, war dachenoù a bep seurt. War an arzoù hag ar skiantoù kenkoulz hag al lennegezh. War an darvoudoù a zegouezh dre ar bed pe en hor bro-ni. N' eo ket da vrozennat, da zrailhañ disterachoù war o divout, evel just, da lakaat war wel doare-bezañ, " spered " an traoù, ne lavaran ket.

« N' eus ket ul lec'h war an douar n' en deus ket ur gentel evidomp, » a skrive Roparz Hemon. Bez' e lavarin ouzhpenn n' eus ket un danvez ne ve ket ur vammenn a ouiziegezh evidomp.

E berr gomzoù : da gentañ, e tle ur gelaouenn lennegel a-vremañ, bezañ ur gelaouenn sevenadurel.

Liested an danvezioù a vez kavet en Al Liamm a zo reizh holl ha ret, eta.

Keuz am eus, avat, da chom hep kavout danvezioù 'zo. War dachenn an Arzoù, da skouer. Ha koulskoude, nag a draoù a vefe da lavarout, evit enebañ ouzh " Arz ar Foar " evel ma rae R. Hemon anezhañ, an " Ersatzkunst " -se hag a zo oc'h aloubiñ pep tachenn, o lakaat pep tra da vreinañ.

Evit pezh a sell ouzh an Arzoù, hag ar sonerezh dreist-holl, anat eo ez eo ar vrezhoned hêred an distervez gall, siwazh ! ne gomzan ket eus ar sonerezh gwerinel, evel just, a zo lakaet ken brav da badout gant ar rummad yaouankizoù...

War ur c'hraf e savan gant al lennerien a gomzen anezho uheloc'h. Mar deo ret d' an holl destenoù eus ho kelaouenn mirout un ton uhel, ar pennadoù nann-lennegel rik a rank bezañ eeun (ha n' eo ket izel) o yezh. Pa ne vez ket tu da dremen hep gerioù " gouiziek ", " ispisial ", ret e vefe reiñ un nebeut sklaeriadennoù da vihanañ, pegen dister bennak e vefent. Kement-se a rofe deomp tro-gaer da zeskiñ termenoù arnevez 'zo, talvoudus alies en hor mare.

159

N' on ket eus ar re-se a bismig goved ar yezh amevet, na pegen dic'houzañvus e vez o yezh avat, evit darn eus hor " meizourien " !

Anavezout a ran ar gudenn, va c'hredit ! Evel ma ouzoc'h, ez on sonaozour hag " atebeg " sevenadurel war un dro. Ma 'z afen da gomz ouzh an dud (gouest da c'houzout, zoken) diwar-benn va arz gant termenoù boas va micher, piv a gomprenefe ? Den. Ret eo din eta, ober gant troioù-lavar eeun ha dreist-holl hep ober gant ar yezh a-seurt-se a reer " Hexagonal " anezhi, yezh prizet-meurbet gant ar c'hefredourien c'hall.

Un dra all, pouezus war a hañval din, an hini bouezusañ marteze : endalc'h politikel ha kealoniezhel Al Liamm.

Un touell eo an dipolitikerezh, ur " gwel-spered ", anat eo. Netra nemet oc'h embann ur gelaouenn e brezhoneg, er framm gall, e saver a-du gant ur sav-boent politikel 'zo. Ha seul-vuioc'h pa vez skrivet diwar-benn kudenn Vreizh ha pa vez danevellet darvoudoù 'zo.

N' eus forzh penaos eta, hag en ur chom hep mont a-du gant kostezenn pe gostezenn, e rank Al Liamm ober un tammig " politikerezh ". E mod pe vod. Ne gredan ket ez afe unan eus hol lennerien da rebech an dra-se ouzhoc'h keit ha ma talc'hot da chom war an dachenn-se.

N' eo ket heñvel, war-hed-pell, gant ar gealoniezh (an ideologiezh, mar kirit gwelloc'h) o tiwanañ eus pennadoù 'zo pe eus an Notennoù.

Reizh, eeun ha mat eo e teu war wel, en ur gelaouenn a seurt gant hon hini, menozioù disheñvel, kealioù enep zoken. Kement-se a zo adskediñ ar prederioù, ar prederiadennoù eus an eil re hag ar re all en hor mare.

Ret eo, evel just, da strollad-ren ar gazetenn, teurel pled e toujo pep hini menozioù pe gredennoù an holl. Ret eo ivez, d' ar bennskrivagnerien (paour-kaezh tud anezho !) teurel evezh e viro ar gelaouenn, kempouez etre pennadoù kontrol ha ne vezo ket rastellet gant un den pe ur strollad bennak.

Ma ! Keuz am eus d' hen lavarout deoc'h hogen n' eo ket bet graet dalc'hmat gant Al Liamm diouzh reolenn an diuntuegezh.

E-pad ur marevezh penn-da-benn, re hir en holl forzh penaos, ez eus bet tro da grediñ edo Al Liamm kannadig-bruderezh ur strollad 'zo.

An dud-se a yae an " Notennoù " holl ganto (hep komz eus ar pennadoù), o prezegenniñ, o lezenniñ, o pompadiñ...

Tremen displijus e oa kement-se. A-drugarez Doue, un nebeut kemm a zo bet hag abaoe an niv. 150, war a hañval din, ez a goustadik an neuz untu war vihanaat.

Hiniennoù 'zo c'hoazh o c'hoari Jean Cau hag o teurel drouk-flemmadennoù an hevelep advlaz ganto ha gant re hemañ. Setu perak e skriven e derou va lizher e vezen plijet alies o lenn ho kelaouenn. Me am bije kavet gwelloc'h skrivañ : dalc'hmat, evel just.

Hiziv an deiz, ar gelaouenn lennegel rik nemeti a zo e Breizh eo Al Liamm. Lennet e vez gant tud eus meur a familh politikel ha prederouriezhel (pe o tont anezho). Arabat dezhi bezañ kelaouenn ur rannad anezho hepken.

Evidon, hen anzav a ran, keuz am eus n' eo ket ledanoc'h ho strollad kenskrivagnerien. Ledanoc'h war an tu kleiz. Un enepouez talvoudus e vefe, dreist-holl pa lenner pennadoù 'zo.

Komprenit mat, ne c'houlennan ket ma vezo skriddaelou e-barzh Al Liamm. Hetiñ a ran ma teuio da vezañ adsked gwir ar vuhez speredel (kefredourel ?) en hor bro. »

*

Digant Y. B. : « Muioc'h a dresadennoù hag a luc'hskeudennoù a vefe mat el " Liamm ". »
Respont : A-du omp, met ker eo.

*

Digant F. B. : « Me 'garfe kavout pennadoù diwar-benn al louzoù evel hini L. Ar Floc'h en niverenn 121 " Al Liamm ". Marteze ez eus lennerien all a gar an natur egizdon. »

*

Digant an Dr. A. R. : « Dedennet eo bet va evezh gant div notenn en ho niverenn diwezhañ. Da gentañ sonadeg evit bombard hag orglez. Karet em bije lenn e oa va mignon Loeiz Ihuel an hini a zalc'h ograoù Iliz Kuzul Chalonied Sant-Albin Gwenrann hag ar perzh en deus kemeret er sonadegoù brudet a vez roet eno bep hañv abaoe ouzhpenn 15 bloaz ha se dre ma 'z on bet unan eus ar re o deus sikouret Ihuel er penn kentañ.

An evezhiadenn all a zo kalz pouezusoc'h. An notenn gouestlet gant Omnes da Laenneg skrivagner ez eo. Bez' em eus em c'herzh diskleriadurioù ha dielloù eus ar re dudiusañ o vezañ ma 'm eus gouestlet ul lodenn vat eus va amzer vak, abaoe 60 vloaz, d' hor c'henvroad brudet. »

*

Digant Gwenole ar Menn : « Diwar-benn " Al Liamm " niv. 156 p. 58 : ul lizher gant an Ao. Tricoire diwar-benn ar ger kitar. Lavarout a ra ez eo ur fazi skrivañ « war e c'hitar » o vezañ m' eo kitar ar ger " reizh " ha n' eo ket gitar. Ha komz a ra eus Gregor a Rostrenen a ro *gitarr*, ur *guitarr*. Ha gwir eo ez eo *kitar* a zo bet degemeret er yezh lennegel (Vallée, R. Hemon...). Met ar stumm *gitar* a zo testeniet ivez e 1744 e Geriadur L'Armerie p. 180 : « Guittarre. m. (On écrivoit anciennement, Kithar & Kittarr) ». An evezhiadenn-mañ a zo kemeret diwar Gregor : « (On écrivois autrefois : kytharr, & kyttarrp.) ». Gregor a zo bet levezonet marteze gant an etimologiezh pa ro *kitar*. L'A. hag a anaveze GReg. a ro *gitar*.

Ha neuze *kitar* pe *gitar* ? E gwirionez e kav din e vefe gwelloc'h mirout *gitar* ha *kitar*, an hini kentañ evit " guitare ", an eil evit "cithare ". An daou a zo troet bete-vremañ gant *kitar* (Vallée, R. Hemon). Ar memes ger evit an orin, met *gitar* a zo deut moarvat dre ar galleg diwar ar spagnoleg " guitarra " keit hag eo *kitar* diwar al latin " cithara " (kitaire e galleg an XIIIvet k.). Ur pennad hiroc'h a sonjan sevel evit " Hor Yezh " diwar-benn *kitar*, *gitar*. Met c'hoant am boa da ziskouez ez eo testeniet *gitar* gant un den a anaveze Geriadur Gregor hag en deus roet daoust da se *gitar*, ger gwregel. »

161

Levrioù Al Liamm

Er miz-mañ e teu er-maez levr barzhonegoù Anjela Duval " Kan an Douar ", pezh-c'hoari diembann ha hirgortozet Tangi Malmanche " An Intañvez Arzhur " hag ivez eil levrenn " Skol louarn Veig Trebern " gant Youenn Drezen. Dindan ar wask emañ ivez drama diembann Tangi Malmanche " Buhez Salaun lesanvet ar Foll ". Peadra da lenn eta evit ur pennadig amzer.

A-hend-all emañ e gwerzh ivez e ti Al Liamm (J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp) an div gontadenn bet embannet gant Hor Yezh : " Ur galedenn a zen " gant Yeun ar Gow, hag " Ar Follez yaouank " gant Meavenn. An daou levrig-mañ zo skeudennet brav.

Niverennoù kozh da werzhañ

Skouerennoù eus an holl niverennoù Al Liamm meneget war an niverenn diwezhañ (pajenn 58) a chom da werzhañ. Ouzhpenn, ur rummad klok eus ar gelc'hgelaouenn (niverennoù 1 betek 155) a

c'heller prenañ evit ar priz a 1.200 lur.

Ar goulennoù a zo d' ober da : P. Le Bihan, 16, rue des Fours-à-Chaux, Saint-Servan, 35400 Saint-Malo - c. c. p. 5349-06 Paris. An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù kas.

Koumananterien

Ouzhpenn bezañ plijus, kalonekaus-dreist eo gwelout o kreskiñ niver koumananterien AL LIAMM. Seblantoù a bep seurt a c'heller merzout aze, an holl anezho o prouïñ en un doare anat emañ hor bro o nac'hañ ar marv hag un emskiant yac'h oc'h ober he hent tamm-ha-tamm e-touez hor c'henvroiz, daoust d' al levezonioù divreizhek spontus o galloud, o labourat warno abaoe keit amzer... Koulskoude, un dra emaoamp o c'hoantaat abaoe pell : tizhout mil koumananter, a c'hellfe dont da wir diouzhtu ma c'hellfemp pouezañ war an dud a zo bet, e-pad ur pennad, koumanantet d' AL LIAMM. Bez' ez eus diouto hogos kemend-all ha niver ar re feal... Piv a zo prest da bleidiñ gant ar gudenn-se en e gorn-bro ? Meur a zen, kollet pep spi gantañ ur mare 'zo, a adkavfe gant plijadur an entan a zo bet e hini a-raok dezhañ digalonekaat. Ha forzh penaos, an hini na fello ket dezhañ adkoumanantiñ, e c'hellou koulskoude bezañ frouezhus evidomp anavezout e abegoù hag e drivliadennoù. Amañ e vo kavet da skouer taolenn ar parrezioù lec'h ez eus, pe ez eus bet, d' an nebeutañ ur c'houmananter (niver ar re gollet a zeu da heul, etre kiochedoù). Ma vez plijet gant seurt taolenn hol lennerien, posubl vo ober kement all evit ar re aet e-maez ar vro ; hogen, da gentañ strivañ da adc'hounit ar re gollet, hag ivez astenn roued ar goumananterien (kalzig a barrezioù n' int ket meneget er roll !). Pell 'zo e c'houlenne Gwalarn hag-eñ e c'helled kavout d' an nebeutañ ur Breizhad dihonet e pep parrez... Chom a ra c'hoazh ul labour divent da seveniñ a-raok bezañ tizhet seurt pal ! Pep menoz, pep diskleriadur ha pep skoazell a vo degemeret mat evit diorren ar gelaouenn ha kreskiñ he fouez en emsav a vremañ.

162

Alaer	2	
an Alre	2	(-4)
an Arzhon	1	
an Arvor	1	
Bai	1	(-1)
Banaleg	0	(-1)
Baod	1	
ar Baol	1	(-2)
Belz	1	
Benac'h	0	(-1)
Berlevenez	0	(-1)
Bezon	1	
Bieuzhi	0	(-1)
Bilir	0	(-1)
Binig	1	(-1)
Boulvriag	4	(-3)
ar v/Bourc'h Wenn	1	
Brandivi	0	(-1)
Brenniliz	0	(-1)
Brest	47	(-32)
Briad	1	
Bubri	2	(-1)
Bulad	1	
Bulien	1	(-1)
Kallag	1	(-3)
Kameled	0	(-1)
Kamlez	1	(-1)
Kanivel	0	(-1)
Karanteg	1	
Karaez	2	(-2)

Karnag	2		
Karnod	1		
Kastellvriant	1		
Kastellin	2	(-7)	
Kastellnevez ar Faou	1	(-1)	
Kastellaodren	1		
Kastell-Paol	2	(-3)	
Kastellun war Seo		(-1)	
Kawan	1		
Kemblizieg		(-1)	
Kergrist-Moelou	1		
Kerien-Boulvriag	0	(-2)	
Kerlouan	2		
Kerven (Plangoad)	1	(-1)	
Kervoroc'h	0	(-1)	
Kemper	31	(-16)	
Keven	2		
Kintin	1		
Kiberen	2		
Kistreberzh	1	(-1)	
Kleder	1		
Kloar-Karnoed	1		
Kombrid	0	(-1)	
Konk-Kernev	5	(-6)	
Konk-Leon	1		
Korle	0	(-1)	
ar c'h/Kozh-Varc'had	1	(-2)	
ar g/Kroaz	1		
Daoulaz	0	(-2)	
Dinan	2	(-1)	
Dinarz	2	(-1)	
Dirinon	1	(-1)	
Donz	1		
Douarnenez	9	(-7)	
Duod	0	(-1)	
Elien	0	(-1)	
Evrann	1		
ar Faoued	1	(-1)	
Felger	1	(-1)	
Fouenant	3	(-2)	
ar Fouilhez	1		
Gaerz	0	(-1)	
ar Gelveneg	1		
Gouenou	1		
Gourin	0	(-1)	
Gregam	2		
Groñvel	2	(-1)	
Gwaien	0	(-1)	
Gwareg	1		
Gwened	7	(-5)	
Gwengamp	10	(-11)	
Gwenvenez	1	(-1)	
Gwerann	0	(-1)	
Gwerc'h	0	(-1)	
Gwezeg	1		
Gwinevez	2	(-2)	
163			
Gwipavaz	1	(-1)	
Gwiskriv	1		
Gwiseni	2		
Gwitevede	0	(-1)	
Hañveg	1		
an Henbont	1	(-2)	
an Hengleuz	0	(-1)	

Henvig	1		
Hifiniag war Vor	1		
Houad	0	(-1)	
ar Chapel war Erz	1		
Iviaz	0	(-1)	
Lambaol-Gwimilio	0	(-1)	
Lambaol (Eusa)	0	(-1)	
Landehan war ar Maez	1		
Landelo	0	(-1)	
Landernev	4	(-2)	
Landevenneg	1		
Landreger	3	(-3)	
al Landrev	1		
Lanedern	0	(-2)	
Lanejen	0	(-1)	
Lanester	1	(-1)	
Langedig	2		
Langoad	0	(-1)	
Langonned	0	(-1)	
Laniliz	1		
Lanneur	0	(-1)	
Lanuon	11	(-6)	
Lanvolon	1		
Laruen	1		
Lechiagad	0	(-1)	
Lennon	1	(-1)	
Lesneven	3	(-5)	
Lezardrev	0	(-1)	
Lokemo	1		
Lokoal	0	(-1)	
Lokorn	0	(-1)	
Loktudi	1		
Logivi-Plougraz	1		
Logunec'h	1	(-1)	
Lopereg	1	(-2)	
Louaneg	2	(-3)	
Loudieg	2		
Mael-Karaez	0	(-1)	
Mantallod	0	(-1)	
Maouron	1		
Menezberz	1		
Menezkreñv	1		
Menieg-Roazhon	1		
Merenieg	2		
Molenez	0	(-1)	
Montroulez	11		
an Naoned	23	(-12)	
Neulieg	1		
an Oraour-Botrel	1		
an Oriant	8	(-3)	
Pelez	0	(-1)	
Pañvrid ar Beskont	0	(-1)	
Pazieg	1		
Pempoull	1	(-1)	
ar Peniti	0	(-1)	
Perroz	2	(-1)	
Pervenat	3		
Peurid ar Roc'h	1		
Piberieg	1		
Planiel	0	(-3)	
Plañwour	1		
Plarnel	1		
Pleheneg	0	(-1)	
Pleiben	0	(-2)	

Plerin	3	
Pleskob	1	
Pleuven	1	
Pleuveur-Bodou	2	
Pleuveur-Gaoter	0	(-1)
Plevian	0	(-1)
Plijidi	0	(-3)
Plistin	2	(-2)
Ploeur	0	(-1)
Plogastell	0	(-1)
Plogonneg	2	(-1)
Ploneour	0	(-1)
Plonevez ar Faou	1	(-1)
Plouaerdut Breizh Uhel	1	
Plouarzel	1	
Ploue	1	
Ploueg ar Mor	0	(-2)
Plouenan	1	(-2)
Ploueskad	3	(-1)
Plouezoc'h	1	
Plougastell	1	
Plougernev	2	(-1)
Plougernevel	1	
Plougonven	1	(-1)
Plougouskan	1	(-1)
Plouc'ha	1	
Plouie	0	(-1)
Plouilio	1	(-2)
Ploulann-Meur		(-1)
Plouneour-Traezh		(-2)
Plourec'h	0	(-1)
Plouvorn	0	(-1)
Plouzane	0	(-1)
Ploveilh	2	
Plufur	1	
164		
Sant Yann ar Biz	0	(-1)
Sant Jili ar C'hoad	1	
Sant Malo	8	(-2)
Sant Nazer	1	(-6)
Sent Sebastian	0	(-1)
Sant Tegoneg	1	
Sant Visant al Lanneier	1	
Saozon-Roazhon	3	(-3)
Sarzhav	1	
Skaer	0	(-1)
Skrignag	0	(-1)
ar Sent	0	(-1)
Sinzag	1	
Speied	1	
Tonkedeg	1	
Trebeurden	0	(-2)
Tredarzeg	0	(-1)
Tregenneg	1	
Treglañviz	2	
Tregon	0	(-1)
Trelaevern	1	(-1)
an Treou	0	(-1)
Treveneug	0	(-1)
Trevereg	1	
Triagad	1	
an Uhelgoad	1	
Pluguen	1	
Pluniav	1	

Pont-Melvez	0	(-2)
Pornaleg	0	(-1)
Porzhig	1	
Poulaouen	0	(-1)
Poulgwazeg	0	(-1)
ar Poullgwenn	1	
Pouskorv	1	
Purid-Kirrtin	0	(-1)
Raziez	0	(-3)
Redon	0	(-1)
ar Releg-Keruon	1	(-1)
Reuz-Bihan	1	
Roazhon	62	(-52)
Rosgov	1	
Rospez	0	(-1)
Rosporden	0	(-1)
Rostrenen	1	(-1)
Roz an Arvor	1	
Sant Armel	0	(-1)
Sant Albin Elvinieg	1	
Sant Brieg	18	(-7)
Sant Ke-Porzhtrev	1	(-2)
Santez Elen	0	(-1)
Sant Gwenole	0	(-1)
Sant Hermelen-Naoned	3	
Sant Yann ar Biz	0	(-1)
Sant Jili ar C'hoad	1	
Sant Malo	8	(-2)
Sant Nazer	1	(-6)
Sant Sebastian	0	(-1)
Sant Tegoneg	1	
Sant Visant al Lanneier	1	
Saozon-Roazhon	3	(-3)
Sarzhav	1	
Skaer	0	(-1)
Skriagnag	0	(-1)
ar Sent	0	(-1)
Sinzag	1	
Speied	1	
Tonkedeg	1	
Trebeurden	0	(-2)
Tredarzeg	0	(-1)
Tregenntg	1	
Treglañviz	2	
Tregon	0	(-1)
Trelaevern	1	(-1)
an Treou	0	(-1)
Treveneug	0	(-1)
Trevereg	1	
Triagad	1	
an Uhelgoad	1	

Kenstrivadeg kanaouennoù-pobl

Ur genstrivadeg kanaouennoù-pobl a zo bet dalc'het en Oriant d' ar 14 ha d' ar 15 a viz Ebrel dindan an anv " Devezhioù kanerien ar Bobl ".

Kendalc'h Keltiek Etrevroadel

Er bloaz mañ e vo ar C'hendalc'h Keltiek en Iwerzhon. Graet e vo eus an 13 betek an 18 a viz Eost. Ne vo ket dalc'het ar C'hendalc'h, evit ur wech, en ur gêr vras, met en ur gêr vihan, Blessington, nepell eus Dulenn, ouzh troad menezioù Wicklow.

Kregiñ a raio ar C'hendalc'h d' al Lun 13 a viz Eost diouzh an endervezh, pa vo degemeret ar Gendalc'hidi gant aozerien ar C'hendalc'h ha gant kuzul-kêr Blessington. Divodet e vo ar C'hendalc'h diouzh ar Sadorn vintin. An danvez da vezañ studiet a-hed ar sizhun a zo : ar sonerezh er broioù keltiek : an amzer da zont. Ouzhpenn ar prezegennoù, an divizoù hag ar bodadegoù diouzh an noz, e vo div veaj dre ar vro, unan o padout un devezh leun, unan all o padout an endervezh hepken : ar veaj kentañ a gaso an dud da g-Kells, Rathcarn ha Maynooth ; an eil beaj a gaso anezho da Glendalough.

165

Meur a zoare a vo da vezañ lojet ha maget e Blessington. Tu a vo da vezañ degemeret en Downshire House Hotel, a zo un ostaleri eus ar Renkad A, da lavarout eo n' ouzon pet " steredenn " dezhi met sur un niver mat anezho ! En ostaleri-se e kousto ar sizhun 20 lur sterling. A-hend-all, tu a vo da vezañ lojet e tiez all, eus an doare " Bed and Breakfast ", gant ar predoù kreisteiz ha noz en Downshire, evit 18 lur sterling ar sizhun.

A-hend-all, ur priz izeloc'h c'hoazh a vezo graet evit an dud yaouank, o lojañ dindan teltennoù. Ret eo d'an dud yaouank o defe c'hoant da vont kas o anv da b-Per Denez : diouzh o niver e vo aozet an degemer. Soñj sekretourien Skourr Iwerzhon a oa goulenn teltennoù eus an arme. Mat a vefe dezho gouzout niver ar re yaouank a zeuio, hep re zale.

Sur omp e vezo plijus ha dedennus ar C'hendalc'h Keltiek en Iwerzhon. Mat e vefe kaout eno un niver vat a Vretoned, rak er bloavezh goude e vezo ar C'hendalc'h e Breizh, en Naoned, ha pouezus e vo ober bruderezh e-touez ar Gelted all.

Evit lakaat an anv da vont da Gendalc'h Iwerzhon, skrivañ mar plij da : P. Denez, Ri, Ploare, 29100 Douarnenez.

Emsav Etrevroadel Skolioù-Uhel ar Bobl - International Folk High-School Movement

Brudet eo Emsav Skolioù-Uhel ar Bobl e Skandinavia. Gouzout a reer pegement a zleer dezho e-keñver stourm broadel ha stourm kevredigezhel : a-drugarez dezho o deus gallet ar broioù skandinaviat lakaat da dalvezout ur socialistiezh o toujañ ouzh an demokratelezh. An Dr Noelle Davies, anavezet mat e Breizh evit ar skoazell he deus roet a-hed ar wech d' ar Vretoned, a zo brudet ivez evit he labourioù diwar-benn ar skolioù-uhel pobl e Skandinavia. Un ti he doa prenet, gwechall, e Kembre, evit sevel, gant he gwaz, an Dr. D. J. Davies, ur skol-uhel evit pobl Kembre. N' eo ket deut an dra da vat, met abaoe un nebeut bloavezhioù, e vez aozet gant an Dr Noelle Davies hag he c'hevredigezh, skolioù-hañv a vez bodet, alies-tre, er broioù keltiek. Er bloaz-mañ e vo graet ar skol-hañv-se en Exeter : tennañ a raio danvez ar skol da Gernev-Veur. Eus an 19 a viz Gouere betek an 28 e pado ar skol : dalc'het e vo e Skol-Veur Exeter hag e saozneg e vo ar prezegennoù hag an divizoù.

Setu amañ roll ar prezegennoù pouezusañ : Istor Devon ha Kernev-Veur, gant an Ao. T. Eurof Walters - Ar skrivagner Thomas Hardy, gant an Ao. E. Lyn Rees - Douaroniezh ha douarouriezh Devon ha Kernev-Veur, gant an Ao. John Perkins - Europa er bloavezhioù dek-ha-tri-ugent, gant ur c'hannad e Parlamant Breizh-Veur - Lec'h ha Labour ar Sindikadoù er Gevredigezh a-vremañ (diviz) - Ar vuhez e Kernev-Veur, gant Ann Jenkins.

Diouzh an noz e vo abadennoù dañs, kanaouennoù, c'hoariva, hag all.

Priz ar skol-hañv (boued, lojeiz, kentelioù ha pourmenadennoù) a zo 28 lur sterling, hag ouzhpenn 3 lur sterling da vezañ paeet pa lakaer e anv (an 3 lurse forzh penaos ne vezint ket daskoret).

166

Ret eo en em enskrivañ ar c'hentañ ar gwellañ evit se skrivañ da b-Per Denez, Ri, Ploare, 29100 Douarnenez. Ur yalc'had (unan hepken) 20 lur sterling a c'hello bezañ roet.

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien a vo dalc'het ar bloaz-mañ eus ar 15 d' an 29 a viz Gouere, er Greizenn Yann XXIII, e Kintin. Digor eo K.E.A.V. d' an holl, c'hoant dezho brezhonegañ, gant m' o devo studiet mat diazezoù ar yezh, rak e-kerz ar 15 devezh-se ne vez graet nemet gant ar brezhoneg.

Digor eo peurgetket d' ar re a zo o teskiñ, rak eno e kavint tro da gaout kentelioù, da implijout ar yezh a-hed an devezh, ha da vezañ skoazellet gant brezhonegerien ampart, en un endro a vakañsoù laouen.

Evit kaout titouroù ouzhpenn, skrivañ d' an Itron de Bellaing, 28, rue des 3 Frères Le Goff, 22000 Saint-Brieuc (Pell. 33-26-66).

Embannadurioù

Degouezhet eo ganeomp an embannadurioù-mañ liesskrivet :

- *Dafar geriadur ar yezh arnevez* (pempet strobard, Rann A 5, (Rém-Sym.) - " Preder " kaier 149-150. Priz ar c'haier : 12 lur.
Rann 20 Geriadur istorel Roparz Hemon a zo deut ivez er-maez (Kriz-Lavarout). Niverenn 151-152 " Preder ". Ar c'haier a goust 12,00 lur.
Ar c'houmanant da 12 niverenn " Preder ", Geriadur Istorel e-barzh a zo 60 lur, hag ar c'houmanant da 6 rann eus ar Geriadur e-unan a zo 60 lur. - PREDER, 30, place des Lices, c. c. p. 16 093 13 Paris.

- *Inventaire du système consonantique du Breton*, gant Goulven Pennaod ha Barzhonegoù gant Gwion Letard-Morliguen, " Ar Gwag ho C'hro ", a zo bet embannet gant Kêr-Vreizh (43, rue St-Placide, Paris 6e).

- *Imbourc'h* niv. 37 ha 38. Ur pennad pouezus en niverenn 37 : " Emdroadur an Trede Emsav abaoe ar brezel diwezhañ ". Koumanant : 30,00 lur - c. c. p. Y. Ollivier 1534 25 Rennes.

- Degouezhet 'zo ganeomp ivez ul levr, moulet ar wech-mañ, diwar zorn Ronan Kerleon, " Les Bretons le dos au mur ". Kontañ a ra prosez an F.L.B. - La Table Ronde. Paris.

Pladennoù

En eil bladenn Yann Ploug, ur bladenn vihan 33 tro ez eus teir ganaouenn e galleg ha brezhoneg. Diwar zarvoudoù an amzer-mañ ez int bet savet. Stumm kanaouennoù " cabaret ", fentus ha goapaus, a zo warno ha n' int ket displijus da selaou. Eilet int war ar gitar. (Editions Romain.)

167

Ur bladenn vihan all (45 tro) gant Patrick Ewen hon eus bet. Ar c'hanaouennoù-mañ n' int nag e galleg nag e brezhoneg met e saozneg. An div ganaouenn engravet a zo skosat-rik : Fisherman's Lassie ha Johnnie Cope, eilet eo Patrick Ewen gant Brieg (violons) ha G. Delahaye (gitar 12 kordenn). Rebech ebet d' ober diwar-benn ar sonerezh hag ar c'han a zo brav-tre hag an tonioù ivez, met marteze e-keñver an dibab, rak kanaouennoù anavezet int hag o c'havout a reer dija war veur a bladenn skosat. (Embannet gant Kelenn.)

Lec'hanvadurezh

Embannet eo bet gant " Service Hydrographique de la Marine (Route du Bergot, Brest) lec'hanvadurezh enez Groe ha trowardroioù An Oriant. Ar studiadenn-mañ zo bet kaset da vad gant Gweltaz Bernier hag Alan ar Berr.

Lizher da Bennrener an O.R.T.F.

Setu amañ al lizher a zo bet kaset gant Abel Omnes da Arthur Conte, pennrener an O.R.T.F.

Ar respont a gaver da heul a zo an hini a vez kaset bep gweeh ma vez skrivet da baotred Bariz war ar gudenn-se.

Aotrou Pennrener,

Selaouet hon eus gant ar brasañ evezh ho tiviz er Skinwel gant Jacqueline Baudrier, ha spi bras hon eus o vezañ ma 'z oc'h ur rannvroeler kataloniat, ec'h aotreet an Aotrou Griveau,, rener hor skingomz ha skinwel rannvroel, da wellaat un tamm bennak hor skingasadennoù brezhonek.

N' hon eus evit c'hoazh, krenn ha krak nemet ur 1/4 eur bep pempzektez ha 2 wech 1 vunutenn 1/2 (90 eilenn) dre sizhun.

Resev a reomp alies lizheroù fuloret o c'houlenn ouzhimp mont da gaout renerezh an O.R.T.F. evit ma vo kemmet hep dale stad an traoù.

Daoust ha ne c'hellfec'h ket reiñ urzhioù da Roazhon evit ma vo :

- 1) 1 skingasadenn skinwel bep sizhun e-lec'h bep pempzektez ;
- 2) daougementet da vihanañ ar c'hasadennoù skinwel 90 eilenn.

Karout a rafemp ivez e vefe tu da greñvaat Radio Kimerc'h evit ma vo klevet ar skinlec'h-mañ e Breizh a-bezh ha nann hepken en ul lodenn eus departamant Penn-ar-Bed.

An Aotrou Griveau, ezhomme ebet da lavarout, a vez atav hegarat tre en hor c'heñver, hogen ne c'hell ober netra keit ha n' en deus ket hoc'h aotre.

168

Gant ar spi e komprenot mat ac'hanomp e kasomp deoc'h en a-raok, Aotrou Pennrener, hon trugareziou.

Skingomz ha Skinwel
18 bis, straed Duguay Trouin
Sant-Brieg

Respont an Aotrou Conte :

Aotrou,

An Aotrou Arthur Conte, Pennrener an O.R.T.F. en deus lennet ho lizher an 2 a viz Meurzh gant kalz a evezh ha goulennet en deus diganin respont deoc'h evitañ.

Kompren mat a ra ar pouez o deus evidoc'h ar c'hasadennoù er yezh rannvroel, met kreskiñ padelezh ar c'hasadennoù-se ne sell ket hepken ouzh ar brezhoneg hogen ivez ouzh ar yezhoù rannvroel all.

En abeg da se e fell d' ar Pennrener lakaat ar gudenn dirak Kuzul mererezh an O.R.T.F. hag hemañ a zivizo an doare a c'hello bezañ sevenaet ho koulennoù, koulz ha goulennoù ar rannvroioù all.

Kredit me ho ped, Aotrou...

Gortozomp 'ta hep re a spi.

Diskouezadeg ar c'hizellerezh afrikan

Anavezet eo ar skulterezh afrikan dreist-holl dre ar maskloù ha, moarvat, ivez, dre an traezoù kizellet (antilopennoù hag all) a vez gwerzhet muioc'h-mui e stalioù 'zo pe, zoken, war ar straedoù.

Biskoazh, avat, a-raok tremen treuzoù an Orañjerezh e Pariz, e derou miz C'hwevrer, n' em bije kredet e oa ken pinvidik hag e c'helle diskouez kemend-all a oberennoù kaer disheñvel dre o ment, o danvez, o stumm hag o awen. P' eo bet lakaet ar vorianed da ouezidi nemetken gant tud wenn ar c'hantvedoù tremenet ez eo bet graet ur pikol fazi ganto rak a-walc'h e oa ar pezhioù diskouezet en Orañjerezh evit ma vefe anat d' ar gweladenner edo eno dirak ur wir sevenadurezh. Unan, evel just, disheñvel-bras diouzh sevenadurioù meur all ar bed nemet e oa anat, ivez, o c'herentiez rak peurliesañ e vez awenet an arzourien afrikan gant an hevelep patromoù hag hor re (da sk. ar vamm o reiñ bronn d' he bugel). Santet o deus, evelomp-ni, an ezhomm a oa da gaeraat framm o buhez pemdeziek hag ac'hano an dorioù, ar skebell, al loaioù ha kement a draezoù all skultet. Sed dres pezh en deus displeget Per Méauze hag eñ mirour Rann Afrika Zu Mirdi an Arzoù afrikan hag okeaniat, pa laka ar c'hizellerezh afrikan « a-rez gant an testennoù meur a zo bet lezet gant an Den warnañ e-unan ».

Disheñvel-kenañ an doueed gresian ha roman, hegarat, plijus ha neuziet-kaer (n' eus nemet mont e liorz an Teolieredioù evit en gwelout) diouzh re an Afrikaned ken iskis ha spouronus alies. Eno emañ an dalc'h. Delwenoù kaer, traoù kenedus a felle da gizellerien Hellaz ober pe, neuze, adtaolenniñ, diouzh o doare, pezh a welent en-dro dezho. Er c'hontrol, klask a ra dreist-holl an arzour afrikan, dre zigeriñ frank an nor d' e faltazi, skeiñ don spered e genvroiz hag e tizh kement-se dre eeunaat, dre linennekaat en un doare souezhus. Dre se, ez eo, sur a-walc'h, hor c'hizellerezh breizhat tostoc'h, un tamm, ouzh hini ar vorianed eget skulterezh ar C'hresianed pe ar Romaned.

169

Hag eno e kejom gant kudenn al levezonoù. N' heller ket mirout a soñjal, o welout traezoù 'zo an dud du, en arzoù arall, da skouer hini Ejiptiz, ha n' eo ket souezhus kement-se peogwir e ouzer n' eo ket bet ar Sahara an harz didreuzus d' an dud hag ez eus bet darempredoù etre Azia hag Afrika dre ar Mor Indian... Hag Europiz ? Pellik 'zo e tarempredont arvor an Afrik ha, neuze, e vefe souezhus n' o dije ket lezet ur merk bennak anezho e spered an arzourien du. Unan eus lec'hioù sebezusañ an Afrik, war a leverer, a zo azeuldi Zimbabwe, e

Rhodesia, savet gant pikolioù mein keitet an eil re ouzh ar re all hep simant etre ar VI-vet hag an XIII-vet kantved m' eo bet kavet ennañ bragerizioù aour, plakennoù kizellet hag all, hag ivez pezhioù moneiz ha porselennoù sinaat o tiskouez ez eus bet darempredoù etre ar vro-se hag ar Reter-Pellañ.

E-mesk an delwenoù diskouezet, hini ebet, kement ha ma ouzon, ne oa bloaziet. Moarvat dre ne ouzer ket pegoulz int bet savet. Anat e oa n' edont ket holl eus an hevelep mare. Evel en hon ilizoù, lod eus an delwenoù koad a oa miret e ratre-vat, lod all a oa preñvedet ha krignet ; kaeroc'h a se ne oa ken ar re-mañ a-wechoù. Soñjal a ran dreist-holl e penn un den yaouank souezhus-tre dre e neuz prederiek pezh a zo dibaot e-mesk kement a zremmoù difrom ha diaes gouzout petra a zo dindano.

Erfin e fell din pouezañ war gerentiezh anat an holl draezoù diskouezet pe eus Afrika ar C'hornog pe eus ar Zaire e teuent. Koulskoude, ne oa delwenn ebet eus ar Reter hag ar C'hreisteiz hag, evel just, eno e oa ur mank bras.

Pezh a c'hellan lavaret, evit echuiñ, eo n' em eus graet d' an diskouezadeg souezhus-se, a voe digor e-pad mizioù Du, Kerzu, Genver ha C'hwevrer, nemet ur weladenn re verr hag e vijen deuet en-dro a galon vat m' em bije bet amzer.

Loeiz ANDOUARD.

An embannadurioù kembraek

Emañ ar gouarnamant breizhveuriat o paouez reiñ da c'houzout e vo daougementet er bloavezh 1973-1974 ar skoazell stadel roet d' an embannadurioù kembraek : tremen a ra ar skoazell-se eus 12 500 lur saoz (150 000 F) da 25 000 lur saoz (300 000 F). Evel-se e savo hollad ar skoazell foran da 147 000 lur saoz bep bloaz (ouzhpenn 1 700 000 F !), en o zouez 83.000 lur saoz profet gant ar pennadurezhioù lec'hel (da lavarout eo ar c'huzulioù-kontelezh hag ar c'huzulioù-kêr) evit levrioù ar vugale hepken.

Meret eo ar skoazell-se gant Burev ar Wask eus Skol-veur Gembre, met n' en deus ket ar burev-mañ da varn danvez an oberenn. A-walc'h eo dezhi kavout un embanner evit kaout ar gwir da zegemer ur skoazell.

170

Hep ar skoazell vras-se ne vefe ket darn vrasañ an embannerion evit derc'hel da embann kement a levrioù kembraek bep bloaz. Kinniget e vez da skouer d' ar vugale un dibab ledan-tre, ennañ levrioù skiant-faltazi, bandennoù treset hag istorioù ar " Far- West ". Evit an dud war an oad e veze kinniget betek-hen dreist-holl levrioù lennegel met dont a ra muioc'h-mui er-maez bremañ levrioù tostoc'h eus ar vuhez pemdeziek, levrioù evit keginañ, levrioù evit desevel ar vugale, levrioù evit ober war-dro e garr-tan, levrioù evit an " hobbies ", levrioù " do-it-yourself " (mil micher), levrioù evit ar vakañsoù, hag all...

Sevel a ra niver ar gembraegerion hiziv e Kembre da 650 000 den, da lavarout eo ur palevarzh eus poblañs ar vro, met un diforc'h bras-tre a zo gant Breizh : gouest eo un darn vras eus ar gembraegerion da skrivañ ha da lenn o yezh vroadel. Koulskoude ne brenent ket kalz levrioù betek-hen ha skars-meurbet e oa ar Gembreiz a brene ul levr kembraek bep miz. Boazet e oa ar Gembreiz da zaremprediñ dreist-holl al levraouegoù ha ne brenent nemet levrioù marc'had-mat-tre, levrioù-godell peurliesañ e saozneg. Klasket e vo diwar-vremañ embann levrioù kembraek marc'hadmatoc'h hag oberennoù tostoc'h eus c'hoantoù an dud, romantoù-polis hag istorioù faltaziek niverusoc'h. Kevezerezh a zo etre an embannerion ha ret eo dezho ober enklaskoù e-touez al lennerion hag ober gant hentennoù arnevez ar " marketing " evit anavezout gwelloc'h ar marc'had.

E-keit-se ne ra nemet kreskiñ niver an titloù kembraek a zeu er-maez bep bloaz ha 203 en deus tizhet an niver-se e 1972 !

Mouezhiadeg en Iwerzhon :

Trec'het eo bet ar Fianna Fail gant an eneberezh

Adnevezet eo bet an Dail d' an lañ a viz Meurzh ha gounezet eo bet ar muiañ niver gant kevren ar Strollad Fine Gael ha Strollad al Labour ; un doare raklun boutin o doa savet an daou strollad-se daoust d' ar Fine Gael bezañ muioc'h a-zehou eget ar Fianna Fail. Setu disoc'hoù ar vouezhiadeg, keñveriet gant re mouezhiadeg 1969 :

Strolladoù	1973	Sezioù	1969
Fianna Fail	624.530	69	602.227
Fine Gael	473.779	54	450.013
Labour	185.117	19	223.282
Dizalc'hidi	39.424	2	42.478
Sinn Fein	15.366	-	-
Aontacht Eireann	12.321	-	-

Ar strolladoù republikan n' o deus ket bet kalz a vouezhioù : 15.366 d' ar Sinn Fein (urzhiadur politikel an I.R.A.), ar pezh a ra 1.536 mouezh dre zanvez-kannad, ha 1.027 mouezh dre zanvez-kannad evit an Aontacht Eireann (Iwerzhon Unanet), strollad nevez krouet gant tud o deus kuitaet ar Fianna Fail. Ret eo merkañ koulskoude eo bet dilennet ar vinistred o doa kuitaet ar gouarnamant dre ma oant tamallet da vezañ harpet an I.R.A. da gaout armoù : C. Haughey zo bet dilennet evel kannad Fianna Fail ha N. Blaney evel kannad dizalc'h e pastell-vro Biz-Donegal gant 8.573 mouezh.

171

Ar stourmad dilennel zo bet graet dreist-holl war ar c'hudennoù armerzhel ha kevredadel (" bara hag amann ") ha raklun an eneberezh a boueze war ar c'hudennoù-se ; n' eo ket bet komzet kalz eus kudenn Norz-Iwerzhon. Ne seblant ket e raio ar strolladoù kevreet ur politikerezh disheñvel-bras diouzh an hini renet gant Jack Lynch abaoe 1966.

P. P.

Votadeg e Dundee :

Darbet eo bet da Vro-Skos kaout un eil kannad broadelour

Dalc'het eo bet ur votadeg e pastell-vro Dundee d' an lañ a viz Meurzh ; sellet eo ar pastell-vro evel unan eus kreñvlec'hioù Strollad al Labour, 70 % eus ar baotred a zo micherourien ha feur an dilabour zo savet da 9 % tra m' eo 6,8 % evit Bro-Skos a-bezh. Kinnig a rae Strollad al Labour ur Sassenach (Saoz) evel danvez-kannad, George Machin, ur sindikadour eus Sheffield hogen un enklask graet e 1968 a ziskoueze e vote 84 % eus tud Dundee evit ar Strollad ha nann evit un den. An holl evezherien a rakwele un trec'h aes evit al Labour ; soñjal a raent koulskoude e c'hounezfe ar Strollad Broadel un nebeut mouezhioù war al Labour hag ar Strollad Frankizour mouezhioù war ar Strollad Mirour. Souezhet eo bet an holl gant an disoc'hoù ; setu, lakaet keñver-ha-keñver, disoc'hoù ar votadegoù graet e 1970 hag e 1973 :

	1973		1970	
	Mouezhioù	Tregantad	Mouezhioù	Tregantad
Labour Party	14.411	32,7 %	22.630	48,3 %
Strollad Broadel Skosat	13.270	30,2 %	4.181	8,9 %
Strollad Mirour	11.089	25,2 %	19.832	42,4 %
Strollad Frankizour	3.653	8,3 %	-	-
Strollad Labour Bro-Skos	1.409	3,2 %	-	-

Miret eo bet ar sez gant Strollad al Labour hogen kouezhet eo tregantad e vouezhioù eus 48,3 % e 1970 da 32,7 %, hogen n' eo ket bet gounezet ar mouezhioù-se gant ar Virourien hag ar Frankizourien. An dra pouezusañ a zo e gwirionez lamm war-raok ar Strollad Broadel, en deus tric'hementet e vouezhioù abaoe 1970 ; darbet eo bet d' ar broadelour bezañ dilennet, rak 1409 mouezh zo bet roet da G. Mac Lean, danvez-kannad Strollad Labour Bro-Skos, ur strollad bihan krouet gant darn eus izili tu-kleiz ar Strollad Broadel, hemañ en dije bet muioc'h a vouezhioù eget al Labour Party (14.679 enep 14.411).

172

Anat eo e kaver bremañ muioc'h-mui a Skosiz a-du gant an emrenerezh ; dreist-holl e-touez ar re yaouank ; kreñvaet eo al lusk-mañ gant kudenn tireoul Mor an Hanternoz, rak goulenn a ra ar Strollad Broadel ez afe darn eus ar " royalties " da Vro-Skos.

P. P.

AN DARVOUDOU E BREIZH

Disoc'h an dilennadegoù e Bro-C'hall hag e Breizh.

E Bro-C'hall eo chomet ar galloud gant Pompidou hag e vignoned.

E Breizh ivez ez eus bet dilennet pemp ministr en-dro gentañ. Koulskoude eo aet war-raok an tu kleiz gall e Breizh. Trec'het eo bet war Pleven ha 6 kannad sokialour zo bet kaset da vreujoù Pariz e-lec'h unan en a-raok.

Ret eo teurel pled ouzh an doare mouezhiañ dre bastell-vro, a harp kement an tu dehou ; gant un doare mouezhiañ kenfeurel e vije bet kaset da Bariz 13 kannad eus an tu kleiz e-lec'h 6 ha 20 eus an tu dehou e-lec'h 27.

Evit ar strolladoù breizhat eo kalonekaus a-walc'h an disoc'hoù.

- S.A.V. a zastum 30.166 mouezh da lavarout eo 2,15 % war 26 pastell-vro, ha kement-se hep roll-labour resis, hep bodadegoù niverus hag hep tud anavezet-tre.

- An U.D.B. a zastum 6.026 mouezh war 6 pastell-vro (2,01 %). En hevelep pastelloù-bro eo bet tizhet 4.592 mouezh gant S.A.V. (1,52 %).

O stagañ mouezhioù an U.D.B. ouzh mouezhioù S.A.V. e vez tizhet :

- 6 % e Landerne,
- 4,94 % er Faoued,
- 3,37 % e Brest,
- 2,34 % e Roazhon-Su,
- 1,76 % en Naoned.

An disoc'hioù zo gwelloc'h war ar maez eget er c'hêrioù bras, nemet e Brest marteze evit an U.D.B. Ha moarvat ez eus tud o deus kavet gwelloc'h mouezhiañ talvoudus adalek an dro gentañ evit tud evel Ar Foll e Sant-Brieg pe Ar Penseg e Kemperle da skouer, tud a zo gouest da zifenn ar vro.

Skol divyezhek e Sant-Gwenole (Bro-Vigoudenn).

Kroget eo bet an taol-arnod e Sant-Gwenole e-barzh ur skol-vamm (bugale etre 2 ha 5 bloaz). Ar vestrez skol a gomz brezhoneg ha galleg ouzh ar vugale ar re-mañ o komz an div yezh pe galleg hepken er gêr.

173

Anavezet ha kalonekaet eo an taol-mañ gant an ensellerezh-skol. Ar mennozioù zo aet war-raok abaoe un nebeut bloavezhioù memes tra.

Klañv eo ar mezegniezh e Breizh.

Setu ger-stur studierien skol-veur mezegniezh Roazhon o deus harzet da labourat abaoe ar 26 a viz Genver. Goulenn a reont start :

- ma ne vefe ken eus an " numerus closus " da lavarout eo an doare da zibab niver ar vezeien da zont hervez niver ar gweleoù klañvdi a zo e Breizh. Rak, o vezañ ma n' eus ket a-walc'h a weleoù klañvdi er vro ne vo biken a-walc'h a vezeien ;

- ma vefe stummet ar vezeien hervez pezh zo rakwelet gant al lezennoù da lavarout eo 4 bloaz staj da bep hini er c'hlañvdioù e-lec'h 2 vloaz nemetken e Roazhon (mankout a ra a blas er c'hlañvdioù evit an danvez-mezeien).

O vezañ ma ne yae ket war-raok ar c'haozeadennoù diniver o deus aloubet ar skol-veur abaoe ar 16 a viz Meurzh ; emaint eno c'hoazh.

Kaset o deus dileuridi da vinistrerezh ar yec'hed e Pariz ha degemeret int bet gant an archerien du-hont.

Setu perak int aet 150 bennak betek Pariz gant kirri-tan o tisplegañ d' an dud a-hed an hent, abegoù o stourm. E-keit-se e reont an hevelep tra e Breizh a-bezh. Nann n' eo ket yac'h ar Yec'hed e Breizh.

Harzioù-labour el liseoù hag er skolioù-meur.

Abaoe dibenn miz Meurzh emañ darn vras ar skolioù-meur hag un toullad liseoù o sevel a-enep daou dra :

- Lezenn " Debré " a redi pep paotr da ober e goñje etre 18 ha 21 bloaz ;

- an " Diplôme d'étude universitaire générale " a astenn kraban ar batroned war ar skolioù-meur hag a laka da vervel kevrennoù n' o deus talvoudegezh ebet evit ar batroned pe ar Stad C'hall evel hini an arzoù plastek pe ar c'heltieg.

Hogen, e gwirionez an daou abeg-mañ n' int ket abegoù don ar stourm. Ar re yaouank a zo fae warno gant ar reizhiad kinniget dezho, gant galloud an arc'hant. Dre al Lezenn Debré e tagont an arme gall a servij an arc'hant hag ar re binvidik, pe an arme berr-ha-berr ha n' eo mat nemet da lazhañ. Arabat ankouaat eo aloubet un darn vras eus hon bro gant an arme gall.

Labourerion Vreizh o stourm.

Kenderc'hel a ra al labourerien da stourm evit o bara pemdeziek, ha kenderc'hel a ra ar batroned d' o gwaskañ.

- 10 devezh harz-labour e Sant-Brieg en S.M.B. ; ar vicherourien a felle dezhe kaout ur c'hresk 0,50 lur ; deuet int a-benn ;

- 1 sizhun harz-labour e ti Ericsonn e Brest : ar vicherourien a sav a-enep ar renerezh a vir ouzh ar goprou da vezañ uhelaet hervez ar bloavezhioù-labour graet gant pep hini el labouradeg ;

- e ti Madeg e Kemperle ez eus bet kaset kuit 3 micherourez a oa er C.F.D.T. gant ar micherourezed all a zo bet rediet, dre zrouktunerezh, da vont e sindikad an ti, ar C.F.T., krouet gant ar patron e-unan.

174

Bro-Iwerzhon.

Aozet eo bet ur referendom e Bro-Ulad evit gouzout hag e felle da Uladiz chom stag ouzh Breizh-Veur. Mouezhiet eo bet d'an 8 a viz Meurzh. An disoc'h a voe 591.820 mouezh evit chom stag ha 6.463 a-enep. Hogen, o vezañ m' en doa lavaret

an I.R.A. chom hep mouezhiañ, e oa a-boan ouzhpenn 50 % eus an dud o vouezhiañ : ar referendom n' en deus diskoulmet netra.

E-keit-se eo bet lakaet div vombezenn da darzhañ e London gant an I.R.A. (1 den lazhet ha 243 gloazet).

Ar gouarnamant saoz a laka e spi en diskoulmoù kinniget gant al " Levr gwenn " : Bro-Ulad a chomfe stag ouzh Breizh-Veur, hogen dezhi belioù lezennel ledanaet.

Dihun an Indianed er Sfadoù-Unanet (kv " Al Liamm " 152/ 251).

E 1492 e skrive Kristof Kolomb kement-mañ diwar-benn an Indianed : « Ar re-se zo ken hesent, ken peoc'hiek... ma n' eus ket ur vroad gwelloc'h egeti er Bed ».

D' ar 27 a viz C'hwevrer 1973 eo emvodet an Indianed Oglalas, galvet gant an " American Indian Movement " (Emsav Indianed Amerika) evit diskouez da bobloù ar bed o droug, o spi hag o youl. D' an 10 a viz Meurzh eo bet lazhet unan anezho e-pad ur fuzuilhadeg a-enep " mirerien an Urzh ".

Graet o deus an Indianed-se un harz-difenn hag a vez c'hoazh dalc'het gante e-kichen iliz Wounded Knee. Ul lec'h istorel eo evite peogwir eo bet lazhadeget du-hont 300 eus o breudeur d' an 28 a viz Kerzu 1890.

Derc'hel a reont evit reiñ da anavezout d' ar bed ar stad m' emaint o vevañ enni (pe o treuzvevañ kentoc'h).

Bez ez eus war-dro 800.000 Indian er Stadoù-Unanet ; 488.000 anezhe klozet e-barzh 247 mirva ; n' o deus ket ar re-se ar gwir da vouezhiañ hag roet e vez dezhe un deskadurezh estren n' he deus netra da welout gant o hêrezh yezhel ha sevenadurel.

... Ni, Bretoned, daoust ha n' omp ket ivez Indianed en un doare bennak ?

Ya, Indianed ar C'huzh-Heol.

AL LIAMM 158

TAOLENN

Va zad gant PER DIOLIER	179
An Emzivadeg gant AN TOUSEG	180
Nenn Jani (kendalc'h) gant ROPARZ HEMON	181
Ar Ribouladenn gant GIZA ABGRALL	190
Feunteun Varanton gant LANGLEIZ	196
Istor Breizh (kendalc'h) gant LA BORDERIE (tr. R. Hemon)	203
Ur Bobl dizouar gant PER PENNEG	207
Notennoù	220

Va zad

Va zad en devoa graet ar brezel pevarzek,
eus ar pevar bloaz-se ne vanne ger ebet,
koulskoude kroaz-vrezel ha medalenn 'n doa bet
zoken ur prizoniad en devoa kemeret.

Va zad war an talbenn a oa bet gwall c'hloazet,
dont a rae d' ar gêr kein ha brec'h mac'hagnet,
a-raok mont d' al linenn 'oa bet labourer-douar,
goude ne c'helle mui derc'hel war an alar.

Ur pañsion en doa bet, ha kenteliet kadarn,
setu lakaet an den e labour an hent-houarn,
en ti-feurm evit gwir e vreudeur ' chome 'tav,
bez' e oa re a dud er mereurioù endev.

Va zad a oa ur c'houer eus maezioù Breizh-lzel,
da Bariz e rankas mont da gaout trevell,
komis a eil renk, ne oa ket a drede,
evit labour burev nebeut donezonet.

Va zad maget gant laezh mamm vrezhonegerez
ne zeskas ket ervat parlant ar C'hallaoued,
e soñjoù a stumme e yezh kozh ar Gelted
ha lent ha goustadik galleg e tistripe.

Va zad ne gomprenas biskoazh ster e vuhez,
met sammet e galon gant barradoù enkreuz
e klaskas tec'hadenn e gwin ruz ar sklaved,
boutailhoù e pep lec'h an den paour a guzhe.

' Chomas ket pell va zad er gêr vras villiget,
tost ouzh harzoù ar Beauce emañ-eñ douaret,
va zad a oa ur c'houer eus maezioù Breizh-Izel,
war e vez eus Kornog ra c'hwezho an avel.

St-Servan, 2-12-72.

AN EMZIVADEZ

Dilezet e skeud yen ur c'halvar
E kroazhent an inosanted
Evel kalz a emzivadad
Kresket eo bet hep par na kar.
Gant radenn an touflez da gavell
Pa oa o kemer he repoz
Dindan toenn boemus an noz
Luskellet eo bet gant an avel.
Klevet he deus e bod an dervenn
Dasson an amzerioù kadarn
Mestr ebet de'i met al louarn
E skolioù-meur ar mil gwenojenn.
Trubardet gant he c'harantezioù
Amourouzien o c'halon sec'h
Brell o fenn ha dinerzh o brec'h
Bebet he deus e-touez ar bezioù
Dismegañset 'voe abalamour
D' he zreid noazh ha d' he daouarn rouz
Ha c'hwez an eost war ar bern plouz
Korf kaezh stummet gant al labour.

Ganet diwar un tad dianav
Teuzet un deiz gant ar vorenn
Ha diwar ur vamm a ouenn sklav
Beuzet un deiz 'barzh ar vojenn
Setu ar goantenn-he-blev-glav
 batardez nobl
 hor bobl.

Nenn Jani

PENNAD 3

Gant Mezheven o vont e-biou, hag an diskrog-labour o padout, e veve kêr evel dindan ur vantell blom. Goude strafuilh ha tousmac'h an deizioù kentañ e oa deuet skuizhder. Ne aozed na bodadegoù na displegadegoù bras. A-hed an deiz e weled micherourien o vont a vagadoù bihan dre ar ruioù, pe o chom e korn pe gorn, hep a-boan kaozeal peurliesañ, rak ne oa ket nemeur a geleier.

Nag archerien na soudarded n' en em ziskouezent re. Hogen an holl a ouie e oant prest da zont er-maez nep koulz. E burevioù ar gouarnamant hag ar morlu, ar renerien, sur da c'hounit an trec'h, n' o doa d' ober nemet gortoz. Rak un dra hepken o doa aon : na savje freuz ha dizurzh en un taol, atizet gant ar gounnar hag an dic'hoanag.

Ha kounnar ha dic'hoanag a c'hore en tiez-se ma ne deue mui gopr ar sizhun, ha ma ranked koulskoude kaout arc'hant. Nebeut e oar ar re n' o deus biskoazh anavezet an dienez petra eo stourm ar beorien evit krapañ an toulladig gwenneien a bellaio an naon un devezh pe zaou : an dilhad Sul pe ar walenn-eured a gaser d' an ti-prestañ, al labourioù bihan a glasker e ti ar vourc'hizien, livañ dorioù ha prenester, kempenn liorzhoù, ar c'hantren war-dro an ti hent-houarn pe an ostalerioù da zougen valizennoù beajourien. Bugale a veze lakaet da gestal. War gresk ez eas niver al laeroñsioù.

N' eo ket hepken ouzh ar vistri e troe kounnar ar vicherourien hag o gwragez. Renerien ar sindikad a veze tamallet ivez. E kuzh e rankent en em guzuliañ, a-wechoù e-pad an noz, e ti unan anezho.

182

Da unan eus ar c'huzuliadegoù-se e oa bet pedet Kaourintin Gourvest, ar sekretour. An 8 a viz Gouere e oa, ur Sadorn. En endervezh e oa tremenet dre di e vamm, a oa e di ivez, sañset, nemet n' eo ket alies e kouske er gêr. E vamm, intañvez ur maltouter, ne glemme ket. A-zivout doare buhez he mab, ne grede ket ober goulennoù. Ar paotr, pa zeue, a veze atav degemeret-mat, hag atav e veze boued da reiñ dezhañ. E zilhad a veze naetaet, gwalc'het, peñseliet, e loeroù didoullet gant ar vaouez kozh, n' he doa bugel nemetañ. Moumounet oa bet ganti a-vihanik, lezet da ober pezh a gare. Dre eurvad ne oa ket troet da fall. Sirius e oa war e vicher, speredek. Aet da zeskard er porzh-brezel, en doa dastumet un tammig deskamant o taremprediñ ar c'hentelioù a veze graet en abardaez evit ar vicherourien yaouank. Gouest e vije bet da dremen arnodennoù ha da gaout implij er burevioù. Hogen flemmet oa bet abred gant naer ar politikerezh. Deuet d' e bemp bloaz warn-ugent, ne oa ket savet uheloc'h eget bezañ mestr-micherour en ul labouradeg. Gounezet en doa brud avat er sindikad, hag abaoe bloaz e oa bet sekretour.

Pa welas he mab o tont en he ranndi vihan, ru Graveran, e voe laouen ar vamm. Ul lizher a oa deuet evitañ. Roget e voe gantañ ar golo diouzhtu : da gemenn dezhañ e oa bezañ hep mank da nav eur en abardaez-se e ti isrener ar sindikad, er ru Arago.

« Te ' chomo da goaniañ, Kaourintin ? »

« Ya. »

Ar paotr a yeas en e gambr d' en em walc'hiñ, da lemel e varv ha da gemmañ dilhad. Etretant, ar vamm eürus a farde koan. Graet he doa soubenn evel ma oa he

boaz d'ar Sadorn, ha c'hwez ar c'hig hag al legumaj o rollvirviñ er chaodouron a yae dre ar ranndi. Bez' e oa bara, amanenn ha formaj. Bez' e oa ur voutailhad win ruz en toull bihan dindan an dar, ha gwispid er voest houarn-gwenn er ganastell.

Pa voe Kaourintin azezet ouzh taol, e reas e vamm, lentik, ar goulenn he doa bet c'hoant d'ober :

« Lavar din, va faotr, ha te a zeu a-benn ? Me 'oar ne vezez mui paeet. Ha berr eo an arc'hant ganez ? An eizh a viz Gouere eo. Me 'm eus bet va zrimiziad pañsion. Me a c'hell prestañ dit un nebeut gwenneien mar karez. »

« N' em eus ket ezhomm, » eme Gaourintin en ur zistouvañ ar voutailh.

« Gwir ? »

« Pa 'm bezo ezhomm e lavarinn dit. »

Kaourintin ne oa ket tad a familh. Ne oa ket gwall zispigner, ha forzh penaos, e ouie en em zibab, hep rankout amprestañ digant e vamm.

183

« Ma ! butun am eus prenet dit atav. »

Hag e tennas daou bakad eus he armel, a lakaas war an daol.

Echu ar pred, e-lec'h mont kuit, e vanas ar paotr er gêr, o studiañ paperoù en doa tennet eus e c'hodell, en ur evañ goustadik e gafe, hag en ur rollañ sigaretennoù. Da nav eur nemet kard hepken e savas, ha mont er-maez hep rannañ grik.

E ti isrener ar sindikad, er ru Arago, pa 'z erruas, e oa pevar micherour, izili ar strollad-bleniañ, holl gwazed kozhik a-walc'h, ha daou guzulier-kêr. Er sal-debriñ, troet da sal-guzul, ne c'hortozed mui nemet ar rener. Dizale e teuas, gantañ ur mell kanfard yaouank, gwisket-faro, nevez degouezhet eus Pariz, kannad an aozadur savet gant an tuad sokialour da skoazellañ, hag e gwirionez da urzhiañ an harzoù-labour.

E gefridi a oa strizh : ober da baotred sindikad Brest kompren edont o kerzhout gant un hent-dall, hag e rankent chom a-sav. Ur brezegenn hir a eure, o tisplegañ dre ar munud kement a oa bet graet e Pariz, an emzivizoù gant ar gouarnamant, ar strivoù niverus da lakaat uhelaat pae ar vicherourien. Fellout a rae dezhañ dreist-holl diskouez d' ar " broviñsiz " -se ne oant ket bet dilezet gant tud ar gêrbenn. Hogen, evel ma lavaras, " a-walc'h 'zo a-walc'h ", hag e oa ret gouzout echuiñ pa weled sklaer ne oa mui mann da c'hounit.

« Ha petra 'zo bet gounezet ? » a c'houlennas unan eus at vicherourien.

« Esper a zo da gaout hanter-kant santim kresk ar sizhun, an eil dre egile. »

« Esper a zo ! »

« Ya, nemet adkregiñ diouzhtu gant al labour. »

« Hanter-kant santim ! pa oa bet goulennet ugent real ! Ha c'hoazh n' eo ket sur ! »

Ar micherour a skoas gant e veilh-dorn war an daol. Gant ur micherour all e teuas ur c'hrozmoladenn. Unan all c'hoazh a dufas a-gostez war ar pallenn-leur. Ur c'huzulier-kêr a chaoke begig e vouchig-barv. Egile a dorche e lunedoù-fri gant e vouchouer.

« Ouzh ar ret n' eus ket a remed, » eme ar pevare micherour, sioul e

vouezh. Hennezh oa an den a oa bet gant Kaourintin o harpañ Ernest en deiz ma oa bet gouliet. Teñzorier ar sindikad e oa. En e zaoulagad louet e spurmanted holl skuizhder ar re o doa gouzañvet e-pad ur miz, nemet kounnar ne oa ket.

184

« Derc'hel a c'hallfemp c'hoazh, » eme an isrener o sellout ouzh ar c'hrañchad war ar pallenn-leur hag o soñjal er rebechoù en dije digant e wreg, « ma vefemp sikouret gwelloc'h gant Pariz. »

Ar c'hannad a grizas e dal.

« Sikouret gwelloc'h ? »

« Me a fell din lavarout, roet arc'hant deomp. »

« Estregedoc'h a zo e Frañs. Bez' ez eus harz-labour, c'hwi ' oar, e neudennerezhioù Armentières, ha bremañ e Saint-Etienne e vo harz-labour c'hoazh moarvat gant ar vengleuzerien. »

Ar pabor, sanket-don e zaouarn e godelloù e vragoù, harpet e gein ouzh kein e gador, astennet e zivesker hir, o lakaat e votoù ler melen nevez-flamm da strakañ, a ginnige fuloriñ ; hag e seblante war un dro ober goap.

Ar rener n' en doa rannet ger. Bremañ, e berr gomzoù, e trugarekaas ar Parizian. Ar gwir a oa gantañ, emezañ, ret e oa echuiñ. Ne lavaras ket, pezh a voe damzivinet gant ar re all, e oa bet graet an diviz gant galloudoù uheloc'h egeto e kêrbenn Bro-C'hall, ha ne oa ar vodadeg-mañ nemet ur farsadenn da reiñ ur seblant a reol d' an dro a oa bet c'hoariet. Ne voe ket votet zoken. Ne chome d' ober nemet aozañ ar c'halvadenn a vije moulet en un ti-moulerezh bihan antronoz, daoust ma oa Sul, ha skignet e-touez ar vicherourien :

« Kamaladed,

« Goude peder sizhun, an trec'h a zo deuet ganeomp, hag an aberzh hoc'h eus graet n'eo ket bet graet en aner. Ar gouarnamant en deus ranket plegañ. Kresket e vo ar goprou. Ar munudoù a vezo merket diwezhatoc'h. Diskouezet hon eus hon nerzh d' ar vistri, ha ne dalvez ket ar boan e ziskouez pelloc'h. Adkrogomp gant al labour eta d' al Lun 10 a viz Gouere.

« Bevet renkad al labourerien ! Bevet ar Republik ! »

Kaourintin a reas ur c'hwibanadenn en ur lakaat an doug-pluenn en-dro war ar skritol. Adlenn ar pennad a reas, plegañ an tamm paper, hag e sankañ e godell-vruched e chupenn.

185

Ar vodadenn a dorras neuze, hag ar stardadennoù-dorn a voe ken kañvaouus ha re un interamant.

Kaourintin, e-unan-penn er ru, a laoskas un huanad, hag o tennañ e anal, a lakaas aer fresk an noz da vont don en e skevent. Mont buan a reas e-biou da iliz Sant-Varzhin, ha postal betek traoñ ar ru Bariz. N' eo ket da di e vamm ez ae. Ne felle bezañ kejañ gant den. War blasenn al Libretez koulskoude e voe gwelet gant daou vicherour.

« He ! Gourvest ! »

Ne selaouas ket. Dek munud goude, edo er ru Kre. Karo, ar gemenerez, e vestrez, a oa ouzh e c'hedal.

* * *

Seiz, satin, plouz, feltr, rubanenoù, neud-orjal, falsvleunioù,

pailhourennoù, kouchoù-pluñv, mouloù-togoù, sichennoù koad estumm kebell-touseg, an holl stlabez-se a lufrennaouez ouzh bannoù an heol, a gouezhe a-veskell warno dre an daou brenestr. Labouradeg Lila ha Zita, al Lun 10 a viz Gouere.

D' al Lun-se, ma oa distroet micherourien ar porzh-brezel d' o labour, e oa deraouet Lizig Hingant da zeskiñ ar vicher gabellerez e ti an div c'hoar.

Pa oa deuet gant he mamm Emili, « a-berzh an Itron Tomazi », da c'houlenn bezañ degemeret, ne oa ket bet a respont diouzhtu. Tabut evel kustum a oa savet etre Lila ha Zita. Lila a felle dezhi kemer Lizig, « peogwir e oa he mamm eus Montroulez », ha Zita ne felle ket dezhi, « peogwir he doa bet he gwalc'h eus tud Vontroulez ».

Lila ha Zita, - Lusi ha Suzan Bozeg da reiñ dezho o anvioù gwirion, - o doa digoret ur stalig-kabellerezh en o c'hêr c'henidik a Vontroulez. Hogen ne oant ket bet « komprenet ». An itronezed eno, kaer a oa diskouez dirazo « skouerennoù nevez » eus Pariz, a nac'he groñs heuliañ ar c'hiz. Divizet o doa eta an div c'hoar mont da Vrest. N' o doa ket arc'hant da gaout ur stal er gêr vras. Feurmet o doa div gambr er ru Jean-Macé, en ur c'harter cheuc'h a-walc'h evit arzouezed evelto.

Kalet e oa bet, siwazh. Maouezed kozh e-giz an Itron Tomazi ne oant ket kalz diouzh o doare. Ret oa pasiantañ. Ranket o doa zoken adaozañ togoù kozh. Chañs avat o doa bet en diwez. Gwreg ur besamiral he doa roet dezho togoù d' ober evit pemp eus he merc'hed. Mignonezed d' ar re-se a oa deuet neuze. Ha bremañ e oa un eured vras e fin ar miz, ha karget oant bet da gabellañ an dimezelled-a-enor.

186

Tremen poent oa kaout un deskardez, pa ne vije nemet evit kas an togoù d' an tiez. Mezh he deveze Zita oc'h ober he-unan ar c'hefridioù-se. Ar paotrezed en em ginnigas a voe kavet holl re ziskempenn pe re hardizh. Holl, nemet unan : Lizig. Ha da vamm Lizig e oa bet kemennet e vije he merc'h... hep he faeañ, da vihanañ e-pad tri miz.

Lakaet e voe Lizig er mintin-se, kentañ tra, da strobañ perlezennoù gwer war un neudenn hir-hir. Un tammig spontet, ar plac'hig a grogas gant al labour, he bizied o krenañ. Hep rannañ grik, e selle ouzh an div c'hoar, stouet o fennoù, Lila o fichañ-difichañ ur skoulm rubanennoù, Zita o stummañ un tog gant plezhennoù plouz. Blev Lila a oa rollet uhel a-zioc'h he zal, harpet war ur bourled orjal, hervez giz an amzer-se, ha ne oa ket diaes divinout e oant livet, rak al liv arem-se a oa warno n' halle ket bezañ o liv-natur. Lizig a soñjas e tlee kaout da nebeutañ tregont vloaz. Blev Zita a oa du-pod, frizet a bep tu, hep mar gant bigoudioù pe ur biñsetenn-rodellañ. Un tamm yaouankoc'h e oa eget he c'hoar. Da labourat o doa gwisket gorreoù-sae gris-melen o-div.

Zita a savas, a yeas d' ar gambr e-kichen, hag e zistroas gant ur bezeliadig laezh. Lakaat a reas ar bezel war ar plañchod.

« Kis, kis, kis, » emezi.

Neuze e teuas goustadik, o lakaat didrouz, gant evezh, ur pav dirak egile, eus ar c'hogn ma oa chomet kuzhet, ur c'hazhig gwenn brizhellet-gell, a douchas al laezh gant e fri en ur deurel selloù disfiziuz ouzh Lizig. Pa voe sur ne oa ket an estrevez deuet da laerezh e laezh digantañ, en em lakaas da lapañ.

« Mirliflor a gav mat e laezh ar mintin-mañ, » eme Lila.

« Sec'hed en deus, » eme Zita.

« Tomm eo ivez. »

« N' eo ket ken tomm ha ma oa dec'h da noz en Omnia. »

« Ar film a oa kaer koulskoude. »

« Me 'garje en dije Mirliflor paeet deomp pep a gornedad koaven-skorn, e-lec'h pastilhez bent. »

« Re dost eo d' e wenneien. »

« Te 'gav dit ? »

« Skragn eo. »

« Te 'zo tost da 'z kwenneien, Mirliflor ? » eme Zita en ur flouarañ al loenig, a rontaas e gein, a savas e lost hag a frotas e benn outi.

187

« Se 'ra din soñjal, » eme Lila, « e rankan kaout neud arc'hant. Lizig, it buan da gerc'hat ur blouead, er stal-verserezh, c'hwi 'oar, er ru d'Aiguillon. N' ho pezo ket ezhomm paeañ. Lavarit ez eo evidomp. Nann, gortozit, ez an da skrivañ war un tamm paper. »

Pa voe aet Lizig kuit, e voe skandalet Zita gant he c'hoar. « Arabat dit, Zita, lavarout n' eus forzh petra dirak ar plac'h-se. »

« Te 'c'h eus lavaret ivez. »

« Peogwir ez poa komzet da gentañ. »

« Ne vern, n' he deus ket komprenet. »

« Bremañ m' hon eus un deskardez, » eme Lila, « e vo ret deomp derc'hel war hon teod. »

Pa zistroas Lizig, e oa un itron oc'h esaeañ un tog hanter c'hraet. Chom a reas betek tost kreisteiz, o kontañ ur bern brozennoù.

* * *

Pa erruas Lizig da verenn, edo he mamm, Ernest hag Herri ouzh taol. Ivoñ a zebre da greisteiz e ti e implijer, ar peruker.

« Penaos emañ an traoù, Lizig ? »

« Mat, mat, mammig. Mes an div-se a zo droch. Aet int dec'h da noz er sinema Omnia gant o c'hazh, hag o c'hazh en deus prenet madigoù dezho. »

Herri a zirollas da c'hoarzhin.

« Tav, Lizig ! » eme ar vamm.

« Te 'fell dit lavarout, » eme Ernest, « o deus prenet madigoù d' o c'hazh. »

« Nann, nann, klevet mat em eus. »

Herri a c'hoarzhhas muioc'h c'hoazh.

« Peoc'h, bugale ! Debrit ho soubenn. N' em eus ket c'hoant da glevout diotachoù. »

Emili a selle ouzh Ernest, a droe e loa en e asied hep debriñ. Disliv e oa c'hoazh e zivoc'h. Savet e oa abred en deiz-se, hag aet er-maez eus an ti evit ar wech kentañ abaoe ma oa bet gouliet e c'har. Kerzhet en doa betek ar porzh-brezel, n' eo ket da labourat, hogen da welout ar mezeg, en doa aotreet dezhañ eizh devezh ehan.

« Te 'oar, Ernest, » emezi, « e rankez debriñ da gaout nerzh. »

188

An daou vugel all o doa lonket o soubenn, o skejenn bara-hag-amanenn hag o bolennad kafe. Herri raktal a oa lammet kuit da vont d' ar skol. Lizig, plac'hig vat, he doa kinniget skoazellañ he mamm, hogen kaset oa bet en-dro d' he labour kabellerez, « dre aon da vezañ diwezhat ».

« Kemer an aer a rafe vat dit, Ernest, » a gendalc'has ar vamm. « Klev 'ta ! Ha ma'z afemp-ni hon-daou d' ober un droig pourmen ? N'em eus ket kalz da ober en devezhiou- mañ. Betek Jardin al Louzoù ? »

« Ne vez digor nemet d' ar Yaou ha d' ar Sul. »

« Betek Monumant ar Re Varv neuze ? »

Digant he mab Ivoñ, yaouankoc'h koulskoude, n' he dije ket Emili graet seurt goulenn. Hogen Ernest, da seitek vloaz, a oa chomet c'hoazh bugel e meur a geñver. Emili a wiskas he boned intañvez. Hag hi paour, ne gare ket mont er-maez e blev.

Edo o tigeriñ an nor, pa welas Nenn Jani o tont dre ar porzh.

Degas da Ernest a rae ur voutailhad gwin-yec'hed he doa prenet en un apotikerezh. Pa glevas edo ar vamm hag ar mab o vont da vale, e kinnigas mont ganto.

El liorz h vihan teñval leun a skeud, azezet war ur bank a-dreñv al liesdelwenn arem savet en enor « ar soudarded hag ar vartoloded vrezhon marvet evit ar Vro », e teuas Jani hag Emili da vezañ mignonezed evit mat.

Emili ne oa ket ranell, ha ne brize ket ragachat gant merc'hed an ti hag ar c'harter. Klasket he doa evelato gouzout hiroc'h diwar-benn ar vaouez kozh he doa skoazellet he mab. Digant Karo ar gemenez, a yae da wriat gwech an amzer e tiez bourc'hizezed, he doa klevet e oa « Nenn Jani » ur geginerez vrudet.

An div intañvez, kichen-ha-kichen war ar bank-se, a gontas istor o buhez an eil d'eben.

Emili, chomet emzivadez abred e Montroulez, a oa bet savet gant un eontr hag e wreg, ha kaset ganto d' he daouzek vloaz da vatezh vihan e maner daou bried pinvidik. En ti-se, - a soñjas Nenn Jani, - he doa desket he doareoù seven d' en em zerc'hel ha da gaozeal. An daou bried a oa marvet avat, hag Emili a oa aet da labourat e stal ur c'hemener, ha lakaet gantañ d' ober jiletenuoù gwazed. Neuze he doa divizet mont da Vrest, evel kalz plac'hed all, e spi da c'hounit muioc'h. Da seizh vloaz warn-ugent e timeze gant ur micherour eus ar porzh, Jozeb Hingant.

189

Ne gomzas ket Emili kalz eus he fried, ha ne lavaras ket penaos en doa kavet e varv. Komz a reas dreist-holl eus an daou vab na oant ket bet gwelet c'hoazh gant Nenn Jani, Charlez hag Ivoñ.

Charlez a oa martolod, ha d' an amzer-se e Tonkin, e bourzh ul lestr-tarzher. Da naontek vloaz e oa kartermestr. Dizale en dije poentoù a-walc'h evit tremen da eilmestr. Se en doa skrivet war e lizher diwezhañ. E vamm n' he doa bet morse an disterañ tamm trubuilh gantañ.

Ivoñ en doa seitek vloaz. Abaoe c'hwec'h miz e laboure e ti ur peruker er Ru Vras. Nenn Jani a verzas e mouezh ar vamm ur c'hemm pa venegas ar mab-se. Ne lavaras droug ebet anezhañ. Forzh penaos, n' he dije ket graet, ha p' he dije bet abeg da ober. Froudennek e oa, emezi. Abaoe ma oa aet er-maez eus ar skol e oa bet mousig e stal ur marc'hadour-gwin, komis en ur stal-ginkailherezh,

lakezig en ur c'hafedi. Sot e oa gant ar sonerezh. Desket en doa e-unan c'hoari ar sutell-gorzh, ha mont a rae er gouelioù gant bagad muzikerien ur strollad-jiminas.

A-benn un nebeut devezhioù e tlee Herri tremen e sertifikad. Bet e oa ur Yaou da welout an Aotrou Baruel, a oa bet ken plijet gant aer dilu ha daoulagad eeun ar paotrig m' en doa asantet e gemer en e vurev er porzh-kenwerzh e miz Eost.

« A drugarez deoc'h, itron. »

« Nann, nann, lavarit din Jani 'ta ! »

« Neuze, lavarit din Emili. »

(da genderc'hel.)

Ar Ribouladenn

« Sell 'ta piv ! Lena ! Deus ganeomp 'ta, d' ober un tamm trouz ! »

Erruout a ra Lena, berr he blev, berr he sae, en ur redek. Mousc'hoarzhin a ra, damzigor he muzelloù ganti. N' eo ket brav-tre met dedennus a-walc'h.

En-dro d' an daol, ur strollad paotred ha merc'hed. Studieren int, evel Lena, hag oc'h evañ ur banneig goude an " devezh-studi ".

« Hag a nevez ? », eme Lena. « Ma, n' eo ket gwall fentus an traoù ganeoc'h, amañ ; piv 'zo marv ?

- Ret eo c'hoarzhin dizehan gant honnezh, » eme Erwan, ur paotr bras, ken hir e vlev ha blev ar plac'h. « N' eo ket ur plac'h, un avel-dro eo !

- Neuze, eme Lena, piv a baeo din ur banne ?

- Da c'hodell, sur, » a respont Job en ur c'hoarzhin.

Mont a ra Lena betek Job ha reiñ a ra dezhañ tri fok.

« Te 'zo ur mignon, Job, met n' out ket evit derc'hel mat d' ur gwenneg, atav hep ul lur ! »

Goulenn a ra ur banne chouchenn.

« Setu, emeon en-dro ganto, a soñj Lena ; chom da lavarout youyou, da evañ, da ganañ. Ret eo din lakaat anezho da c'hoarzhin, evel kustum. Forzh penaos, n' em eus netra gwelloc'h d' ober. Ma vefen er gêr, e tlefen chom da sellout ouzh ar pellwel, gant tad ha Gwennig... Met un ti hep ur vamm n' eo ket un tiegezh. Chom da sellout ouzh an tele ! Tad a soñj en e labour, ha Gwennig... Petra e c'hellfen ober evit Gwennig ? Pa 'z eo bet galvet mamm da Zoue, e oa Gwennig ken bihan, hag e oan-me er skol. Re ziwedhat eo bremañ. Ken iskis eo Gwennig... Hag-eñ e kar ac'hanon ? N' ouzon ket. N' eus forzh ; amañ, gant ar vignoned, e kavan ur seurt tommder, ha n' on ket va-unan. »

« Neuze, Lena, petra ' gontez deomp ? » eme Soaz, ur plac'h vihan, ruz he blev, gant brizhennoù war he dremm. Azezet eo e-tal Lena, o sellout outi gant he daoulagad glas evel ur mor rust.

191

Ul lamm a ra Erwan :

« Nann, arabat goulenn digant Lena lavarout un dra bennak ; pa grog da gomz, n'echu ket. »

Gwir eo. Teodet mat eo Lena. Gallout a ra komz evit lavarout forzh petra, pe evit breutaat diwar-benn danvezioù sirius-tre, pe evit lavarout netra.

« Daoust ha kontet am eus deoc'h istor boulañjerez Belz ? » a grog Lena.

Respont a reont « nann », nemet Ifig, atav o vorediñ.

« Neuze, a gendalc'h Lena, Janig ar voulañjerez... »

Kalz a drouz 'zo 'barzh an davarn. Ur bladenn saoznek a yud " Jezahel ". Emañ ar baotred o ventadañ ar ganaouenn gant o zreid. Leun eo ar sal gant moked

ar butun ; tanet eo an daoulagad. C'hwez ar chouchenn a vesk gant c'hwez ar gwin, ar bier.

« Kompren a ran Mona, a soñj Lena etre daou istor ; ne blij ket dezhi un abardaevezh evel-se. Hi 'zo ken sioul, ken c'hwek. N' eo ket un endro eviti. Perak ez on mignonez dezhi ? Perak e vez Mona ken alies ganin ? Ur plac'h desket ken mat, ken speredek ! Er mare-mañ, emañ Mona o komz gant he mamm ; emañ marteze o c'hoari gant he breur. Plijout a rafe din bezañ c'hoar Mona. »

Ifig a sav e benn

« He ! Ur banne chouchenn all evidon, emezañ.

- Hag evidon ivez ! eme tout ar re all. Pa 'z eus ur werenn en e gichen, e vez atav Ifig dihun-mat. »

Kregiñ a ra ur bladenn, ken kreñv ken ez eus tu da glevout mouezh Alan Stivell. Ar chouchenn a lak war teod Lena ur blaz melus.

« Piv a anavez hennezh ? » eme Goulven o kregiñ gant un istor un tammig lous.

Emañ Job o fredoniñ. Lena a sell outañ. « N' eo ket ur paotr fall, plijus eo peogwir e c'hoarzh ken alies. Daoust ha c'hoant en deus da c'hoarzhin, e gwirionez ? O ya, d' am soñj. Labourat a ra mat ; en em glevout a ra mat an holl hag ur vignonez koant en deus. »

Echu eo istor Goulven

« Ret e vefe dit skrivañ 'barzh " Yod-Kerc'h " eme Job o c'hoarzhin. Lena a c'hoarzh ivez. He divskouarn a safron un tammig. Tomm eo. Re domm. Ar chouchenn yen a ziskenn e toull he gouzoug. En em lakaat a ra da vouskanañ " Pardon Speiet ". Erwan, Goulven ha Soaz a gan ivez. Ifig a huñvre, ur sigaretenn etre e vuzelloù. Ar baotred hag ar merc'hed en o c'hichen a grog da ganañ ganto. E-pad ur pennad, ne soñj Lena e netra : aes eo kanañ hep soñjal, en em drelatañ gant an trouz, an tommder.

192

A-benn ur c'houlz e sav Erwan :

« Piv 'zeu ganin da Davern ar Porzh ? »

- Me 'zo 'vont d' ar gêr, eme Goulven.

- Mont a ran ganit, » a respont Lena.

Diboukañ a reont, heuliet gant Soaz, Ifig ha Job. Er-maez, an aer a zo gleb ha yen. Morc'h-laviñ a ra. Goullo eo straedoù kêr. Un nebeut gouleier a vez gwelet er prenestroù. Tremen a ra ur c'harr-tan ha strinkañ a ra pri ouzh ar re yaouank. Youc'hal a ra Lena :

« Dousig 'ta, Ifig ; te 'ya daou du an hent ganit ! »

Ur bar goulaouet-kaer a lugern e penn all ar ru. Mont a reont e-barzh ar bar. Bourbl an dud o vouskomz a leugn ar sal. Azezañ a reont ouzh un daol vras. Ha dav adarre d' ar chouchenn, d' ar c'hanaouennoù, d' an istorioù. Lena a gav atav istorioù nevez da gontañ. Erwan a c'hoarzh kreñvoc'h eget an dud all. Emañ Lena en e gichen :

« Erwan..., a soñj hi, ur paotr brav, ha speredek. Plijout a ra din bezañ gantañ. N' eo ket evel ar re all. Erwan, avat, ne gar ket ac'hanon. En em garout a ra e-unan hepken. C'hoarzhin a ra peogwir e oar eo plijus-tre e c'hoarzhadenn da glevout. Koulskoude... Soñj am eus eus ur fest-noz, va fest-noz kentañ. Dañset am eus gantañ. Dañsal a ra mat. Ken jentil e oa evidon ! Me 'oa kollet e-

kreiz ar vodadeg, ne ouien dañs ebet, ha skoazellet en deus ac'hanon. Met bremañ, a-boan ma komz ganin ur wech an amzer. Ne ra forzh, gantañ emañ. »

- Neuze, ur banne chouchenn all, Lena ? eme Job.

- Nann, a-walc'h 'm eus bet, » a respont Lena. Ne c'hell ket evañ muioc'h eget teir gwerennad hep kaout " laboused en he fenn ".

Kroget o deus da lakaat ar sal da ganañ " Barzh toullbac'h Naoned " e giz arnevez, diwar-benn ar C.R.Sed hag an F.L.B. Goude teir pe beder c'hanaouenn heñvel, e teu an tavarner da vezañ ruz-tan ; youc'hal a ra :

« Kit er-maez, ma fell deoc'h ober reuz !

- Deuit 'ta, a lavar Soaz, na chomomp ket amañ, n'eo fentus. »

Difourkañ a reont, buan-buan. Emañ Ifig o klemmichal : « N' eo ket echu va bier...

193

- Chom peoc'h 'ta, eme Job, a-walc'h 'peus evet. »

Erwan a bed e vignoned d' e di da evañ ur banne kafe. Didrouz eo kêr, bremañ. Ar glav a gouezh, goustadig. En a-raok e kerzh Lena hag Erwan, o tivizout. Ur plac'h a zo o tont : Janig eo, mignonez Job.

« Salud, Janig ! » emezañ, toutek e vouezh. Komz a reont ur mare etrezo.

« Boñ, neuze, noz-vat d' an holl ! eme Job, me 'zo 'vont kuit.

- Kenavo 'ta !

- Hounnezh 'zo ur pikez 'vat, eme Ifig, paour kaezh Job ! Staget eo outi 'vel ur c'hi chadennet.

- Karantez, karantez, » a gan Lena gant ur vouezh dous.

Erwan zo o chom en ur savadur bras, e-kreiz Kêr-Yann. Ur ranndi aes en deus, bihan ha kuilh. Skritelloù war ar mogerioù, posters, un daol izel, ur gwele-gourvezvank, un daol-studi karget gant levrioù, ur gegin vihan.

« Ur studier en e aes, a soñj Soaz ; ur gambrig e-barzh ar Site n' am eus ken. Kalz arc'hant en deus, sur, met gant e vignoned ez a pep tra. Che, setu Lena oc'h ober reuz adarre ! »

Lena, azezet war ar gourvezvank, a gomz, uhel he mouezh ; c'hoarzhin a ra. En he c'hichen, Ifig a vouc'hoarzh. Lakaat a ra Erwan dour da dommañ evit ar c'hafe, ha dont a ra en-dro eus ar gegin gant tasennoù. Azezañ a ra e-kichen Lena : « Chut, na gomz ket ken kreñv, a lavar dezhi, n' emañomp ket er marc'had !

- En em c'houlenn a ran penaos e rez evit bezañ atav ken laouen, eme Soaz. N'ac'h eus kudenn ebet, 'ta ?

- Kudenn ebet ? Daoust hag un den a zo er bed hep kudenn ebet ? eme Lena. Ret eo ober gant ar c'hudennoù, avat. Gouelañ diwarno ne lak ket an traoù da vezañ gwelloc'h, 'fi 'oar ? »

Soaz a hej he fenn :

« Ya, met, te, atav emañ o kanañ, o c'hoarzhin, oc'h ober trouz 'vel mil diaoul. »

Ifig a zihun :

« Houmañ 'zo un diaoulez, sur ! »

Lena 'zo chikanet :

« Ev ha serr da veg ; ne gomprennez tra ebet, n' anavezez netra, nemet blaz ar chouchenn ! »

194

Souezhet eo Soaz ; biskoazh n' he deus gwelet Lena droug enni :

« Chom sioul 'ta, Lena, hanter-vezv eo hemañ, evel boaz.

- N' on ket facht, eme Lena, flamm he daoulagad. Met ne varnan ket ar re all, ha ne fell ket din bezañ barnet, setu tout. »

« N' am eus ket c'hoant da gontañ va buhez, a soñj Lena. N' eus ket ezhomm da vezañ atav melkonius, avat. Da betra e servij ? Emañ Erwan o lakaat ur bladenn. Evel-se e chomint mut. Ankounac'haat a rint buan an traoù 'm eus lavaret. Forzh penaos, ne reont ket foultr. Pep hini gant e gudennoù. Ha neuze ? Gwir eo on eürus gant ar studioù a garan, ar vignoned, ar frankiz. Koulskoude e plijfe din bezañ nebeutoc'h dishual. Gallout a ran ober ne vern petra ; n' eo ket a bouez. Pa oan bihan, e kreden e oa plijus bezañ an-unan. Ha bremañ e kav din on dilezet, met n' eo ket un abeg evit bezañ trist. »

Soazig 'zo azezet war ar gador-vrec'h ; sellout a ra ouzh golo ar bladenn, o vouskanañ :

« Petra 'zo degouezhet gant Lena ? a soñj hi. Ne gomprenan ket he doare. Skuizh eo marteze... Ya, skuizh eo. Peogwir n' he deus kudenn ebet. Hi 'zo atav war he zu mat, atav gant he c'hanaouennoù, he c'hoarzhoù... N' eo ket fall an ton-se... »

« Pelec'h p' eus prenet ar bladenn-mañ, Erwan ? emezi a vouezh uhel.

« E ti-ar-son e kreiz-kêr, » a respont Erwan.

Hanter astennet e-kichen Lena, e sell ouzh he c'hilpenn :

« Dleout a rafe lezel he blev da greskiñ. Petra 'zo 'barzh ar pennig-se ? N' eo ket aes gouzout ar pezh a soñj Lena. Pa oan er fest-noz ganti, e oa ken sioul, ken didrouz, tost abaf ; hag an deiz goude, ne oa ket ar memes plac'h. En em ziskouez a ra ken laouen, ken dister. Un talbenn eo marteze, met e-lec'h lavarout an traoù a soñj e vez atav oc'h ober goap outi hec'h-unan. Plijout a rafe din anavezout anezhi gwelloc'h. »

Treiñ a ra Lena he fenn :

« Mat e oa ar c'hafe, emezi o vousec'hoarzhin. Poent eo din mont d' ar gêr bremañ.

- Me 'zo 'vont ivez, eme Soaz. Deus ganin 'ta, Ifig ! Ne blij ket din distreiñ va-unan ken diwezhat ! »

Sevel a ra Ifig, dihunet mat gant ar c'hafe.

195

« Ha te, Lena, p' eus ket aon da gerzhout da-unan 'barzh straedoù Roazhon ? eme Erwan.

- Nann, eme Lena, o sevel he skoaz, forzh penaos, n' emañ ket pell va zi ; neuze, noz-vat d' an holl !

- Noz-vat dit ! »

E-barzh ar saverezh 'mañ Lena :

« Setu, a soñj-hi, echu an abadenn. Ha neuze ? Bremañ ez on va-unan, evel boaz. Atav ar memes tra. Chouchenn, mignoned, hag a-benn ar fin... digenvez. »

Digeriñ a ra an nor. Emañ Gwennig, he c'hoar, e-barzh ar sal-gibellañ, e-tal ar melezour.

« Salud Gwennig, eme Lena, mat an traoù ?

- Salud 'ta Lena, un abardaevezh vat p' eus bet ?

- Ya, eme Lena.

- Da riboulat out aet, keta ?

- Ya, eme Lena, ur blaz c'hwerv en he genou. Da riboulat. »

FEUNTEUN VARANTON

Ar gontadenn a zilez bremañ ar roue Arzhur hag a zistro da Varzhin. Kerkent ha degouezhet hemañ en Arvorig, e oa aet a gastell da gastell evit pediñ, a-berzh e vestr, holl roueed ha duged kurunet a Vreizh-Vihan da zont, d' an deiz-mañ-deiz, da gompezenn Salisbury, e-lec'h ma tlee en em zastum an armead kristen.

Rak, hiziv, ne oa ket mui hepken rouantelezh an Div Vreizh e felle d' ar Saozon drastañ, aloubiñ, mac'homañ, met ar Bed Kristen en e bezh.

Re allies, e oa bet faezhet ar Vretoned en abeg d' o dizunvaniezh. Hiziv, evit kaout an trec'h da vat, e tlefent en em zastum, erfin, en-dro d' ur penn-brezel unvan. Ha piv, nemet Arzhur, o roue yaouank, a c'hellfe ren warno hep arvar na dael ? Daoust ha ne oa ket bet dilennet gant an Aotrou Doue E-unan, ha lakaet a-us d' an holl, dre Vurzhud ar C'hleze, en un doare na c'helle ket bezañ splannoc'h.

Setu a zisplegas Marzhin d' e ostizion. Ret e voe d' ar re-mañ anzav edo ar wirionez gantañ. « Ya », a lavarjont eta, a-unvouezh, da gannad Arzhur : da Salisbury ez afent gant o dalc'hidi ; ha, pa vefe gourc'hemennet dezho hen ober, ec'h argadfent, holl a-gevret, ar Saozon. Ha, gant skoazell an Neñv, en o stlepfent er mor, ha pa zlefent, int o-unan, koll o buhez en emgann uhel-se.

Ha, da ziskouez o feiz e reizhded o stourmad, e tivizjont kemer, adal-vremañ, da ardamez brezel, arouez Salver ar Bed, o gwir Arc'hmeistr : ur groaz ruz, brouderezet war seiz gwenn-kann o bannieloù. Diwar an arouez santel-se, en em anavezfe hiziviken an eil re ar re all holl izili an armead kristen.

Ha neuze, sevenet eus e wellañ ar gefridi a oa bet fiziet ennañ gant ar roue Arzhur, e kemeras Marzhin penn an hent a zlee e zegas en-dro, tennadig goude tennadig, betek ribl ar mor.

197

Da vare an darvoudoù hon eus bremañ da zisplegañ, edo Marzhin e barr e oad-gour. War-dro tregont vloaz en doa. Brav ha plijus e pep keñver evel m' edo, ha brudet ouzhpenn-se en abeg d' e zonezonoù dreist-denel, ne vefe ket bet diaes dezhañ kavout kompagnunezed a blijadur e-leizh koant e-touez ar re goantañ. Roll mignoniezh an Aotrou Doue a zouje avat dreist pep tra, en amzer-hont. Hag a-walc'h e oa bet gant an doujañs-se evit e zistreiñ, betek-hen, da sentiñ ouzh an nerzh e sache d'an Droug.

Dre un dro-bleg dic'hortozet a-berzh an Tonkadur, e vo ur plac'h yaouankik flamm, hogos ur grennardez, e zougo avat d'ar pec'hed.

Un deiz, a-bouez treiñ ha kildreiñ dre vaezioù Breizh-Izel, setu m' en em gavas Marzhin, hep soñjal, war wrimenn Koatmeur Brekilien. An abardaez a oa anezhañ. Un abardaez a viz Mae. Tomm e oa dija skinoù an heol ha klouar gwaskedenn ar gwez. Aet skuizh, marteze, gant ar vuhez re fur a rene abaoe keit all, ne oa ket hep melkoni e kleve ar beajour galvadenn an nevez-amzer. Gouzout mat a rae Marzhin, eñ hag a ouie pep tra e oa e Brekilien e chome Viviana. Viviana na oa nemeti a vefe gouest da levezoniñ e donkadur ha da gemmañ e vuhez, e doare pe zoare - en un doare mantrus, e gwirionez - mar ' deufe dezhañ he c'harout. Ha, koulskoude, e-lec'h kenderc'hel gant e hent hep teurel ur sellad zoken ouzh ur c'hornad douar na c'helle kinnig dezhañ nemet anken ha trubuilh, e sankas er c'hoadoù.

Anaoudegezh an dazont a zlefe sikour mab-den da stourm ouzh e blanedenn, rak ar stered, anat eo - ne c'hellont ket rediañ unan en despét d' e youl. Hogen d' an abardaez-se e oa teneridigezh e galon, kentoc'h eget furnezh e spered a luske kammedoù Marzhin.

Adal pell-amzer, an hiraezh da anavezout e enebourez yaouank e jahine. Fellout a rae dezhañ he merzout hag he spiañ a-bell. A-bell hepken ! Ha pa vefe dizoloet ar spiour, petra risklfe ? Diskredik e-keñver ar merc'hed evel ma veze Marzhin, ne gouezhfe ket e lasoù houmañ. Ha, distavet e c'hoant-gouzout, ec'h adkavfe e beoc'h diabarzh.

Setu, da vihanañ ar sigurioù a ijine, en e follentez, evit en em zigareziñ, eñ e-unan, eus ur froudenn ken arvarus.

198

Ar Stankenn-Hep-Distro, ma save enni maner Dionas tad Viviana a oa nepell ac'haleno. Hogen ne dremene ket ar plac'h yaouank ar pep gwellañ eus hec'h amzer e maner he zad. Kalz muioc'h e plije dezhi en em dennañ hec'h-unan-penn gant hec'h huñvreoù muiañ karet, en ul lec'h digenvez a anaveze mat...

Diouzh ar Stankenn-Hep-Distro, e pigne ur wenodenn strizh, anvet, hag anvet mat gant tudigoù ar vro, na zistagent ket hec'h anv hep krenañ : " Gwenodenn-ar-Soñjennoù-Foll ". Ha ret anzav ne oa ket hep abeg o doa roet dezhi un anv ken iskis : ar feunteun a weled war he ribl a dremene da vezañ strobinnellet. " Feunteun Varanton " a raed anezhi. Bez e tlee dont da vezañ brudet-holl, hag ar vrud-se a bad atav ; rak daoust ne chom mui liv ebet eus ar gwez bras, pleustret gant evned diniver a bep ouenn hag a bep stumm, a greske gwechall tro-endro d' he bardell, n' eo ket aet da hesk he galloud. Meur a hini a zouj c'hoazh he burzhudoù.

Plijet evel ma veze gant peoc'h ha kevrin ar c'hoadoù, n' he dije ket gallet Viviana kavout, er c'hoadmeur a-bezh, ul lec'h peoc'husoc'h ha hoalusoc'h war un dro da zevizal gant he soñjoù. Eno e oa, eta, e teue d' en em repuiñ pep gwech n' edo ket he zad er gêr ; ar pezh a c'hoarveze ken alies ha bemdez.

Marzhin a ouie mat edo ar plac'h, d' ar c'houlz-se eus an deiz, e-kichen ar feunteun. Ha, koulskoude, ne glaskas ket distreiñ e varc'h eus an hent a zlee e zegas betek enni. Keuz en devo, e-barzh nemeur, eus ar mall e zoug bremañ en diarbenn d' e donkadur.

Pa zifoupas Marzhin a-ziouzh gwasked ar c'hoadmeur, edo ar plac'h yaouank en he c'hoazh e-kichen ar feunteun, ul levr bras digoret war he daoulin. Trouz donedigezh ar marc'h hag ar marc'heger o waskañ hag o terriñ skourroù munut ar wenodenn pe ouzh o disteurel en ur vont, n' he lakaas ket zoken, da sevel he fenn.

An neuz da lenn e rae hepken Viviana rak, e melezeour sklaer ha boull ar feunteun, e spie, e-kuzh, an hini a zeue.

Minc'hoarzhin a reas hemañ rak ur gorvigell ken aes da ziskuliañ. Hogen koantoc'h ha plijusoc'h da welout e oa c'hoazh Viviana eget ne grede. Ha, kentizh, ec'h ankounac'haas e ragenebiezh evit soñjal hepken e douster an herradig-amzer a veve.

199

« Plac'h koant, emezañ dezhi, en ur rediañ e varc'h da chom a-sav a-benn un nebeut kammedoù, piv oc'h ha petra 'rit amañ ? Ur mailh war e vicher e tlee bezañ an hini en deus desket deoc'h lenn er pikol levr-mañ ! »

Adserriñ a reas Viviana he levr hag en e lakeas etalti, war ar bontalez varvor a dalveze dezhi da gador. Ha graet d' an estrañjour ur minc'hoarzh ken hoalus all, e respontas dezhañ :

« Perak va goulennata, o va mestr, c'hwi hag a oar pep tra ? Va anv eo Viviana. Emañ va zad o chom nepell ac'halen, er maner a welit du-hont. Desket en deus din an nebeut a dra a ouzon... Ha, bremañ, e c'hortozan ho kentelioù. »

Diskennet a-ziwar e varc'h, Marzhin a stagas al loen ouzh skod un avalenn ouez hag a dostaas d'ar plac'h evit azezañ etalti. Houmañ a bare bremañ he selloù outañ, dizouj kaer, hep paouez a vinc'hoarzhin. Luskellat a rae he divesker a-us da zour ar feunteun. En o monedonea, begoù he zreid a spine a-wechoù gorre ar melezour berus, a skrije neuze gant o allazig skañv ; ken e sinklas, en diwezh, ur flistradig dour betek dremm an estrañjour azezet e-kichen ar verc'h yaouank. Hep rannañ ger, Marzhin a sec'has, gant palv e zorn, an takennoù lintrus a ziruilhe war e zivjod, evel pa vefent bet daeroù.

Daeroù !... Nag a zaeroù a skuilho a-raok pell amzer, da heul ar c'hoari bugel-se ! Nep sin kevrinus, nep arouez ne c'helle mui avat e lakaat da zistreiñ war e giz. Re bell e oa aet bremañ. Nac'het en doa klevout mouezh e askre, a guzulier dezhañ pellaat diouzh ar seurt degouezhadenn. Dall e chomfe dirak sinoù.

Ha Marzhin ha lavarout dezhi, d' e dro, hep paouez a vousc'hoarzhin :

« Ur mestr fur hoc'h eus bet. Perak klask unan all ?

- Ne c'hell ket un tad deskiñ pep tra d' e verc'h. »

Daoust hag he doa graet ar respont amjestr-se a-zevri pe dre ziouiziegezh ? Diaes e vefe bet gouzout. Diskouez a rae bezañ ker glan a gorf hag a galon ha dour treuzwelus ar feunteun a adskeude, dres d' an ampoent, he stummoù mistr.

« Plac'hig koant, eme Varzhin, n' hoc'h eus ket soñjet, nebaon, er ster a c'hellfen reiñ d' ar gerioù emac'h o paouez distagañ ? »

Hi, avat, hep distreiñ he selloù dioutañ, a eilgerias d' an estrañjour :

« Sklaer eo o ster, evidon-me ! »

200

Edont bremañ kichen-ha-kichen. Marzhin en dije gallet he briata hag he stardañ ouzh e vruched, netra nemet oc'h astenn e zivrec'h. Ar wrez loskus en em sile en e wazhied a lakae e galon da dalmañ buanoc'h. Fromet holl gant un esmae hag un deneridigezh n' en doa merzet, betek-hen, evit plac'h all ebet, e klaske en em virout a grenañ. A-benn un herradig, e c'houlennas outi :

« Gant petore kentel e c'hellfen kregiñ d' ho kenteliañ ? »

Dremm Viviana ne ziskulie netra eus he soñjoù don. Bez e selle atav outañ gant kemend-all a goantiz hag a zouster hoalus :

« Dre ar gentel a blijo ar muiañ deoc'h, aotrou ker, gant n'hon devo ket da ruziañ - na c'hwi na me - eus ar blijadur a dennimp diouti. »

Minc'hoarzhin a reas adarre Marzhin dirak he soutilded.

« Hag ar gentel-se lakaet e-maez hon divizoù, petra rofec'h din en eskemm d' ar boan a gemerfen ?

- Va c'halon a rofen deoc'h e prof, mignon ker. Va c'halon, ha netra ouzhpenn...

- Ra vezo graet hervez ho c'hoant, mignonez ker, a eilgerias Marzhin o waskañ kement ha ma c'hellas war e gerseenn.

- Met, da gentañ holl, petra 'ouzoc'h ober ?

- Gouzout a ran kerzhout war-c'horre an dour, gourc'hemenn ouzh ar flammennoù hag ouzh ar seizh avel, lakaat da redek ur stêr e-lec'h ne voe nepred gwelet unan ; ha mil ha mil c'hoari all, skañvoc'h pe bounneroc'h. Me 'oar ivez reiñ d' ur stlejennad vrumenn bennak ne vern pe liv, ne vern pe stumm : stummoù ha livioù meneier pe diez, stummoù tud pe anevaled, pe euzhviled zoken. Gouzout a ouzon c'hoazh dibradañ ur c'hastell gant ar votenn zouar e zouge, an armead a strive d' e arsailhat hag a soudarded e zifenne.

« Ha, da brouiñ ne glaskan ket ho lorbañ gant sorc'henoù ez on prest da ziskouez deoc'h ur gouel aozet evidoc'h-c'hwil hepken ha ne vefe nemedoc'h a gement a c'hellfe e welout, hep pellaat zoken diouzh pondalez ar feunteun-mañ. »

Ken plijet e voe Viviana gant kinnig Marzhin ma stlakas he daouarn. Ha, kerkent, ec'h adsavas hemañ, hag ez eas da gutuilh ur skourrig kraoñkelvez en ur vod gwezegoù a greske nepell ac'halese. Ur c'helc'h a dresas goude, en-dro d' ar feunteun gant beg ar skourr, hag un nebeut gerioù kevrinus a hiboudas a vouezh izel. Hag echu e lid-hud, e teuas da azezañ adarre e-kichen e vuiañ-karet. Abenn un herradig amzer, ar c'hoadmeur a seblantas fiñval. Ha neuze, dirak Viviana sebezet, e tifoupas a-zindan ar gwez marc'heien hag itronezed, hag en em zalc'he dorn ouzh dorn, dre goubladoù, o kanañ en un doare dispar hep paouez a gerzhout war o goar.

201

Goude bezañ en em renket war wrimenn ar c'helc'h a oa bet treset gant Marzhin, e krogjont holl da gorolliñ gant kemend-all a ampartiz, endra ma sone biniawoù ha bombardoù disgwelus, da eilañ o c'hammedoù mibin.

Nepell ac'halehont, e c'helled gwelout el lijour stumm ur c'hastell, kelc'hiet gant ul liorz marellet a vleunioù dispar a bep seurt livioù, glas lin, ruz flamm, melen aour, ha leun a wez o tougen frouezh dedennus ken dispar all.

Sorbet evel m' edo gant nevezinti an arvest en em zisplege dirazi, ne grede ket mui Viviana seniñ ger.

Padout a reas ar gouel iskis-se betek mare ar gousperoù. Goude ar c'horolloù, e voe astennet liñselioù gwenn-erc'h war ar c'hilazenn ha degaset meuzioù ha diedoù e-leizh. Echu an danvez ha lamet listri ha liñselioù, e chomas an dimezelled da varvailhat ha da fistilhañ etrezo, e-pad ur pennad mat c'hoazh, endra ma tiduelle an aotrounez - distroet d' o c'hoarioù kadarn ha d' o mirc'hi - oc'h arsailhat jakoù-plouz e rabinoù al liorz.

Pa zeuas ar goubañvel-noz, marc'heien, floc'hed, itronezed, dimezelled, en em dennas goustadik hag evel gant keuz trema ar c'hoadmeur, en ur gorolliñ adarre. Viviana a welas o skeudennoù fuilhet o teuziñ, a-silik, koublad war-lerc'h koublad, a-feur ma sankent e amc'houlou ar gwez bras. Dambrest goude, ar c'hastell a deuze ivez el lusenn hag a zianade d' e dro. Hogen, war c'houlenn ar plac'h, e chomas al liorz, a voe anvet ganti, e koun ar blijadur he doa bet el lec'h benniget-se : " Repu Pep Levenez ". Ha setu penaos e vez graet anezhi c'hoazh hiziv zoken.

« Koantenn, ret eo din ho tilezel, a lavaras, erfin, Marzhin da Viviana.

- Ha perak kement-se a vall, keneil ker ? Daoust ha ne c'hellfec'h ket deskiñ din unan all eus ar c'hoarioù dispar a ouzoc'h ?

- Muioc'h a amzer vak eget n' am eus fenoz a zlefen kaout. Dont en-dro a rin hep dale. Ha neuze e teskin deoc'h ar re vravañ eus ar burzhudoù a ouzon sevel, gant ma vin asur ne nac'hot mui bezañ din, da c'houde.

202

- Gouzout a rit kerkoulz ha me, aotrou ker, e kollfen war un dro va brud-
vat hag ho karantez, mar asantfen d' en em werzhañ deoc'h er c'hiz vezhus-se.
Daoust ha n' on ket dija ho mignonez dre ar galon ? Deskit din ar pezh am eus
kement a c'hoant da c'houzout, hep goulenn netra en eskemm, hag, un deiz bennak,
marteze... »

Ha Marzhin, " an den fur ", div wech dallet peogwir e rakwele en amzer-da-
zont ken aes ha ma lenne en amzer-vremañ, Marzhin a voe diboell hag hegreidik a-
walc'h evit tremen gant divizoù ar goantenn : bez e teskfe dezhi, neket hepken
an holl ardoù-hud a ouie hag ul lod kaer eus al lezennoù kuzh a ren ar bed, met
ivez ur sekred gouest da eilpenniñ e blanedenn-eñ. C'hoant en doa da vezañ
gopraet en eskemm. Gopraet e vefe.

Na kriz e tlee bezañ avat e gerseadenn

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

**An dug Yann Rous
(1237-1286)**

(KENDALC'H)

Darempredoù Yann Rous gant ar gloer

Da geñver e gurunidigezh, evel hon eus gwelet, Yann Rous en doa nac'het touiñ al le da wareziñ gwirioù ha frankiz ar gloer. Ha c'hoant en doa eta da adkregiñ gant ar stourm a-zivout ar re eskumunuet, an deogoù, an trederannadur, h.a., a oa bet echuet gant builh ar Pab e 1230, asantet dezhañ gant Brizhkloareg ?

Ar " regalenn ".

N' en doa ket. Ur gudenn all e oa. Evit ar mare, ne oa nemet un dael etre an dug hag eskob Naoned diwar-benn ar " regalenn ". Per Brizhkloareg an hini eo en doa adderaouet ar brezel bihan-se, war-dro dibenn e ren, e 1235.

Ar " regalenn " a oa ez strizh ar madoù bedel roet d'un eskopti, hag en un doare all ar gwir en doa ar c'hont, a lavare, da biauañ ar madoù-se pa ne oa ket a eskob er sez eskobel.

Hervez kont Naoned dug Breizh, madoù bedel iliz Naoned a oa un dalc'h perc'hennet gantañ. Evel pennaotrou, e tlee kaout anezho pa oa vak ar sez, ha neuze o reiñ d' an eskob nevez.

Eskob Naoned a lavare ne oa ket dindan beli ar c'hont. Hemañ, emezañ, ne dlee ket kaout ar madoù bedel pa ne oa eskob ebet, hag an eskob nevez n' en doa ket ezhom kaout anezho digantañ. E gwir, eskob Naoned a lavare ne zouge ket gwazonezh d' ar c'hont, ha ne oa nemet a-boan sujed dug Breizh. Se a oa mont pell, ha ne c'halle ket bezañ gouzañvet.

Ar c'hont, o welout n'anavezad ket e veli-aotrou, a veze mall warnañ, kerkent ha ma varve un eskob, he lakaat da dalvezout dre berc'hennañ ar " regalenn ", da lavarout eo, madoù bedel an eskopti. Nac'het e veze outañ ar gwir-se avat gant kuzul-chalonied iliz Naoned, hag an eskob nevez a nac'he ivez degemer ar madoù digant ar c'hont. Gwall dabut a oa eta, ha setu amañ pezh a c'hoarveze.

204

Ma vije bet lezet da gaout e wir hep rendael, n' en dije graet ar c'hont nemet kemer, didrouz, leveoù ha gounidoù ar « regalenn " keit ha ma chome ar sez dieskob. Hogen, evit kastizañ pezh a oa, war e veno, ur gabal a-berzh e waz-lij, e lakae e zalc'h en arigrap, e waste madoù bedel an eskopti. Da skouer, e 1235, etre marv an eskob Herri ha donedigezh e warlerc'hiad, an eskob Roperzh, er sez, Per Brizhkloareg en doa kemeret " regalenn " eskopti Naoned ha dismantret anezhi a-grenn : o preizhañ war vadoù gwizien ha sujidi an iliz, o lakaat tellerien da zastum an deogoù, o terriñ dorioù ha prenester an tiez eskobel, o tiskar koadoù, o pesketa el lennoù pe o tisec'hañ anezho, h.a.

Ar Pab en doa tamallet Brizhkloareg, hogen gant kalz a zouster, ha kompezet oa bet an tabut, war a hañval, gant un treuzvarc'had distabil na blije

na d' an eil kevrenn na d' eben. Dre se e pade c'hoazh e gwirionez ar rendael, ha prest oa da darzhañ adarre kerkent ha ma vije goullou sez Naoned.

M' en dije Yann Rous touet difenn gwirioù ha frankizoù an Iliz, e vije bet kredet ez asante da c'houlennoù eskob Naoned, nac'het gantañ a-enep e veli evel dug ha pennaotrou. Ha setu perak, da gaver e gurunidigezh e 1237, ne fellas ket dezhañ touiñ. Ne reas taol-nerzh ebet koulskoude, hogen derc'hel start a reas d' e ziferadennoù.

Tri bloaz goude, e 1240, e voe vak sez Naoned, rak an eskob Roperzh a oa bet anvet da batriark Jeruzalem. Yann Rous a berc'hennas ar " regalenn ", ha daoust ma tennas gounid diouti gant muioc'h a gerreizhded eget e dad, an eskob nevez anvet, Galeran, a glemmas garv. Eskumunugañ an dug a reas, ha lakaat berz war an eskopti. Yann Rous a gemennas d' an Tad Santel e plege, hag hemañ, e 1247, a lamas an eskumunugenn diwarnañ hag ar berz diwar an eskopti.

Goude se, rendael ar " regalenn ", hep bezañ peurgompezet, a yeas war sioulaat.

Darempredoù gant Roma.

Chom a rae avat diaesterioù da reizhañ etre an Iliz ha Yann Rous. War zigarez ne oa ket meneget e anv e builh Gregor IX, graet e 1230 hag asantet dezhañ gant e dad, e lavare ne selle ket an tamm skrid-se outañ. N' en doa ket, emezañ, da zerc'hel kont eus ar c'hastizoù a-enep ar gristenien o dije enebet ouzh ar builh ; ha bez' e c'halle, da skouer, daremprediñ ar re eskumunuget daoust d' an difenn.

205

War a hañval, ne voe ket a zizurzhoù grevus da heul, ha ne voe ket gwallgaset ar veleien evel e-pad darn eus ren Brizhkloareg.

Padal, ur skouer fall e oa, ha gwashoc'h trubuilhoù a c'halle dont da heul. War c'houlenn eskibien Vreizh, ar Pab a gemennas da Yann Rous e rankje sentiñ ouzh builh 1230. Evel ma talee, Inosant IV, warlerc'hiad Gregor IX, en ur bref eus an 20 a viz Mae 1245 kaset da eskibien Vreizh, a zisklerias e tlee an holl Vrezhoned mirout feal an urzhioù roet e builh Gregor IX, war boan da vezañ eskumunuget.

Edo Yann Rous d' an ampoent oc'h ober ar peoc'h gant iliz Naoned. Pa voe graet an dra-se, e soñjas en afer all, ha goude termal un nebeud e tivizas mont da Roma evit he diskoulmañ e-unan. Eno, e 1256, d' ar 7 a viz Ebrel, dirak daou gardinal, e savas ur skrid sentidigezh leun da holl gemennadurioù Gregor IX hag Inosant IV a-zivout ar re eskumunuget, an trederannadur, an deogoù, h.a. A zo muioc'h, e roas e c'her da lakaat dindan e warez hag hini e varnerien an ilizoù hag ar gloer, da lezel an eskibien da zivizout e pep frankiz war holl gudennoù ar feiz, an uzurerezh, an aferioù ilizel hag eneel, hag ivez da reiñ leal d' an ilizoù al laesioù a bep doare graet dezho.

Adunvanidigezh klok e oa eta evel ma weler. Yann Rous en doa komprenet en dije, dre anavezout d' an Iliz ar gwirioù ret dezhi d' ar mare-se evit lakaat he beli speredel da dalvezout, skoazell brizius diganti en diwez evit harpañ e veli-eñ, hag ez anavezje an Iliz diouzh he zu o doa duged Vreizh ar gwir da gaout ar " regalenn " en eskoptioù, ar gwir nemetañ a bouez bras e-keñver ar politikerezh hag ar berc'henniez-h-domanioù. Er c'hiz-se e c'hoarvezas, evel ma welimp, dindan ren unan eus e warlerc'hidi dostañ.

Goude 1256 ez eo aes kavout darvoudoù stank o tiskouez e oa gwirion an adunvanidigezh etre Yann Rous hag an Iliz, hag e padas ar peoc'h betek marv ar priñs.

Setu amañ div pe deir skouer.

Pont Naoned.

E 1260, dug Breizh hag eskob Naoned, Galeran, en em glevas evit adsevel, pep unan o paeañ e skod, ar pont war al Liger a oa tost da gouezhañ en e boull, - hep mar an hini a-dreuz brec'h ledanañ ar stêr, anvet hiziv pont Piremil. Ma vije kouezhet ar pont, e vije bet ur gwall reuz evit holl eskopti Naoned, hag e c'haller lavarout evit Breizh ha Poatev.

206

Evit mirout ouzh an dismantr hag adsevel ar pont, e oa eta reizh ha leal lakaat taosoù a-ratozh war gêr Naoned hag an eskopti, hogen an div veli, speredel ha bedel, an eskob hag an dug, a ranke en em glevout penn-da-benn. An emglev, a vije bet diaes, hogos dic'hallus un nebeut bloavezhioù diagent, a voe skoulmet evit ar gwellañ, hag al labour, ken pouezus, ken ampl ha ken talvoudus, a voe echuet a-benn un dek vloaz bennak.

Ar senesal.

E 1261 e voe graet ur gwalldaol grevus a-enep galloud-barn bedel eskob Sant-Malo gant Olier Kergoed, senesal aotrou Louzieg. An ofiser-se, hep mar war urzh e vestr, a lakaas kregiñ, e Sant-Malo-Begnen, da lavarout eo en aotrouniezh eskobel, e daou zen a chome e dalc'h an eskob ha dindan e c'halloud-barn. Skrapet e voent ac'hano dre heg, barnet ha krouget dre veli ar senesal. An eskob a reas klemm dirak an dug. Hemañ, o vont da hanterour hag o lezel a-gostez aotrou Louzieg, na oa ket bet meneget e anv en afer, a roas d' an eskob un digoll dispar. Ouzhpenn an dell-gastiz lakaet war ar re o doa krouget sujidi an eskob, un dell-gastiz a rankas aotrou Louzieg paeañ, e voe kondaonet ar senesal hag e genwallerien da vont da gerc'hat relegoù an daou zen krouget ha da gas anezho da vered Sant-Malo-Begnen, evit bezañ douaret eno. Neuze e rankjont mont d' an nav iliz-veur a Vreizh, ober prosesion lidel e pep hini evit anataat ar c'heuz o devoa d' o zorfed, gwisket hepken gant o bragoù hag o rochedoù, hag o tougen strobadoù bras a wialennoù evit bezañ fustet ganto dirak an holl.

Yann Rous, evel a weler, a zalc'he feal d' ar gouestl en doa graet da wareziñ an ilizoù, o gwirioù, hag an dud stag outo.

Evit pezh a sell ouzh ar " regalenn " e voe c'hoazh un nebeut diaesterioù, hogen reizhet e voent a c'hrad vat gant an dug, a roas kalz diouzh e du, evel a c'haller merzout da skouer en emglev a reas e 1267 gant eskob Landreger.

Etre an dug Yann Rous ha kloer Vreizh, adalek 1256, e voe klok an adunvanidigezh, ha se betek marv ar priñs.

Ur bobl dizouar : Planedenn griz Tatared Krimea

Tatared Krimea o doa krouet gwechall ur stad c'halloudus er vro a zo bremañ Su-Oukrainia, hogen diskaret eo bet o stad gant ar Rusianed ha kriz eo bet o flanedenn abaoe, peogwir int bet en diwezh kaset er-maez eus o bro. Hanter-kant vloaz 'zo e seblante kaeroc'h o dazont, rak d' an 18 a viz Here 1921 e voe embannet krouidigezh Republik emren Krimea gant ar gournamant soviedel ; hogen n' eo ket bet lidet ar jubile e 1971 rak kroget e oa bet er bloavezhioù 1943-1944 prantad gwashañ istor an Datared peogwir int bet treuzkaset da Greiz-Azia e-lec'h m' emaint c'hoazh o vevañ, tonket da vezañ teuzet e-touez pobloù all. Ur skouer a gavomp amañ eus dislavaroù ar politikerezh soviedel e-keñver ar broadelezhioù.

UR SELL WAR ISTOR AN DATARED BETEK 1941

Tatared Krimea a zo anezho ur bobl turkeger ha muzulmat, hag e tiskennont eus Tatared deuet gant Mongoled an Orda Aour ha diazezet e Krimea en XIIIvet kantved ; goude diskar Khanelezh (1) an Orda Aour er XVvet kantved o deus krouet ur Khanelezh a anzave aotrouniezh Sultan Turkia. Derc'hel a raent lodenoù eus Su-Oukrainia hag eus ar c'h-Kouban, hogen kreizenn o riez a oa Krimea. Brezelioù a veze alies etrezo hag ar Rusianed, hogen Tsarelezh Rusia a zeue da vezañ kreñvoc'h-kreñvañ tra ma wanae galloud Turkia ; an Dsared a felle dezho tizhout ar Mor Du, hag evit se e oa ret trec'hiñ hag aloubiñ Khanelezh Krimea ; dont a rejont a-benn anezhi e-doug eil hanterenn an XVIIIvet kantved, ha staget e voe ar Ghanelezh ouzh Rusia e 1783.

(1) Khanelezh, ur stad remet gant ur Khan (C'han), anv roet d' o renerien gant ar pobloù turk ha mongol.

208

Klask a reas an Datared en em zieubiñ, hogen aes a-walc'h e voe d' an armeoù rusian faezhañ an emsavadegoù, rak gourenez Krimea ne oa ket ur rannvro ken bras ha ken meneziek hag ar C'haokaz e lec'h ma c'hellas ar venezidi stourm e-pad dekvloaziadoù. Divroiñ a reas an Datared davet Turkia dre gantmiliadoù e-doug an XVIIIvet hag an XIXvet kantved, rak ne felle ket dezho chom dindan yev ar Rusianed hag ivez dre ma oant diberc'hennet eus o douaroù : e 1854, da vare brezel Krimea e voe roet an urzh da gas kuit an Datared a chome a-hed an arvor : e-pad ar bloavezhioù 1860-1862 e tivroas c'hoazh 231.000 Tatar da Durkia ; lec'h an divroidi a veze kemeret gant trevadennerien rusian hag oukrainat. Ouzhpenn 500.000 Tatar a chome er c'hourenez e 1783, ne oant nemet 188.000 e 1897, un drederenn eus ar boblañs, tra ma rae Rusianed hag Oukrainiz 45 % anezhi. Klask a rae ar gournamant rusian diberc'hennañ an Datared, hogen klask a rae ivez rusianekaot ar re a oa chomet er vro.

Un adsav sevenadurel ha politikel a ziwanas e dibenn an XIXvet kantved hag a reas berzh ; krouet e voe kelc'hioù, kelaouennoù, skolioù, h.a., hag ar Gelc'houiziegezh Veur Soviedel (embannadur 1937) a veneg e oa ken kreñv an trivliadoù broadel e-touez an Datared « ma teuas levezon ar vroadelouriezh vourc'hizel da lemel an dislavaroù etre ar renkadoù ».

Darvoudoù 1917 a seblante seniñ eur an istor evit an Datared ; an darn vrasañ anezho a oa a-du gant ar *Milli Firka* (Strollad Broadel) a c'houlenne treuzfurmatur Rusia en ur Stad kevreadel ha diskoulm kudenn an douar, rak an darn vrasañ eus an Datared a oa kouerien ha 40 % anezho n' o doa tamm douar ebet. Bodañ a reas ar *Milli Firka* un Dael Vroadel, embannet e voe krouidigezh ur Republik demokratel emren, krouet e voe ur gouarnamant hag ul lu e miz Gwengolo 1917. Ret e voe d' an Datared stourm ouzh ar Re Wenn hag ouzh ar Volcheviked

ivez ; trec'het e voe da skouer an Datared gant batailhonoù martoloded ha soudarded kaset eus Sebastopol gant ar Volcheviked e miz Genver 1918 : trec'het e voe ar Volcheviked gant lu ar jeneral Denikin a aloubas ar c'hourenez hag a zivodas ar gouarnamant tatar : an Datared a reas un emglev gant ar Volcheviked hogen pa voe trec'het ar Re Wenn e voe lakaet berzh war ar *Milli Firka*, diskleriet evel « urzhiadur enepdispac'hel » hag e lec'h rannañ an douaroù etre ar gouerien tatar, evel ma c'houlenne ar re-mañ, e voe krouet atantoù-Stad renet gant Rusianed dreist-holl. Hogen ar gouarnamant bolchevik, dindan atiz Lenin, a zivizas ober eus ar Stad nevez ur Stad kevreadel, ha krouet e voe d' an 18 a viz Here 1921 Republik Sokialour Soviedel emren Krimea, stag ouzh Republik Kevreadel Rusia.

209

N' en doa ket ehanet enbroerezh ar Rusianed ha ne rae an Datared nemet 25 % eus ar boblañs, hogen ul lec'h bras a oa bet roet dezho e ensavadurioù ar Republik ; izili askell gleiz ar *Milli Firka* o doa asantet kenlabourat hag emezelet o doa er Strollad komunour ; o rener, Veli Ibragimov (1) a oa bet anvet Levier ar Republik ; an tatareg a oa bet lakaet da yezh kefridiel e-kichen ar rusianeg ha krouet e oa bet skolioù ha c'hoarivaoù tatarek. Hogen kemañ a reas an traoù pa grogas ar gouarnamant soviedel da « spurjañ » ar « vroadelourien vourc'hiz » er Republikoù broadel hag emren.

Veli Ibragimov a voe fuzuilhet a-unan gant meur a hini all e 1928, milieroù all a voe kaset d' ar c'hampoù ; distrujet e voe evel-se an intelligentsia tatar ; goude 1930, da vare kengladekaat an douaroù, e voe kaset 30.000 pe 40.000 kouer da Siberia, ganto un darn vras eus ar gloer muzulmat ; bloavezhioù ar « spont bras » e 1936-1939 a voe drastus ivez ; al levierien a oa bet lakaet e-lec'h Ibragimov, Mehmet Kubay ha Ilias Tarakhanov, a voe fuzuilhet ivez. Hogen an darvoud gwashañ evit dazont ar bobl datar a oa da c'hoarvezout.

(1) Ibragimov a zo Ibrahim ; rusianekaet e vez an anvioù nannrusian dre stagañ outo an dibennoù -ov, -iev, pe -in. Miret eo bet ar boaz-se betek-hen.

210

TORRIDIGEZH AR REPUBLIK HAG AN TREUZKASADEGOU

D' an 18 a viz Mae 1944, a-raok goulou-deiz, e voe treuzkaset dre nerzh an holl Datared da Greiz-Azia ha torret o Republik, war zigarez m' o doa darn anezho kenlabouret gant an Alamaned. An hevelep planedenn a zo bet hini seizh pobl all : pemp o chom e Norz-Kaokaz : Tchetchened, Ingouched, Balkared, Karatchaied, Kalmouked ; ur bobl eus Su-Georgia, Meskhetiz, ar seizhvet hini o vezañ Alamaned ar Volga, treuzkaset da Greiz-Azia e 1941. Sevel a rae ar boblañs oc'h ober an eizh pobl-se da 1.650.000 den e 1943-1944 hag e c'heller jediñ da marteze ouzhpenn 500.000 den ar re a varvas e-doug an treuzkasadegoù hag e-doug ar bloavezh a zeuas goude (1).

Gwir eo o doa an Alamaned kavet harperien e-touez darn eus ar pobloù-se, hogen kavet o doa kenlabourerien e-touez pobloù all an U.R.S.S. hag e-touez ar Rusianed ivez (al lu Vlasov da skouer) hag e c'heller merkañ diouzh un tu ez eo bet barnet d' ar marv ar genlabourerien a zo bet tapet, ha diouzh un tu all ez eo kouezhet ar c'hastiz war an holl annezidi ha zoken war izili ar Strollad Komunour, war izili ar gouarnamantoù emren, war ar gargidi ha war soudarded al Lu Ruz distroet eus ar brezel. Bez' e c'heller merkañ ivez ez eus peder fobl n' int ket bet tizhet gant an Alamaned : Alamaned ar Volga, an Dchetchened hag an Ingouched (tizhet eo bet harzoù Republik an div bobl-mañ e-pad un nebeut mizioù e 1942) hag ar v-Meskhetiz.

Ne voe anavezet an treuzkasadegoù nemet dre embannidigezh e-barzh " Izvestia " (niverenn eus ar 26 a viz Mezheven 1946) eus testenn an devez eus ar 25 a viz Mezheven 1946 a dorre div Republik emren, hini Krimea hag hini an Dchetchened-Ingouched hag a venege ivez an treuzkasadegoù. Abaoe ne voe meneg e nep lec'h eus Tatared Krimea nag eus ar pobloù all ; eil embannadur ar " Gelc'houiziegezh Soviedel Veur " hag al levrioù all ne veneg ket anvioù ar Republikoù bet torret nag anvioù ar pobloù zoken, evel pa ne vije mui anezho ;

n' int ket meneget kennebeut er pennadoù gouestlet d' ar republikoù pe d' ar rannvroioù e-lec'h m' int bet kaset ; n' o doa dileuriad ebet ken e Sovied ar Broadelezhioù.

(1) An treuzkasadegoù-mañ a c'hell bezañ keñveriet ouzh hini " Hent an Daeloù " meneget e pennad M. Kerraen hag I. Gak : " An Indianed er Stadoù-Unanet " (AL LIAMM, niv. 152) ; n' eo ket ar Cherokied nemeto a voe treuzkaset da Oklahoma a-hed " Hent an Daeloù ", hogen peder fobl all ivez - ar « pemp broad sevenaet » - ar pobloù Cherokee, Choctaw, Chickasaw, Creek ha Seminole - war-dro 27 % eus ar Cherokee-ed ha 50 % eus ar Creek-ed a varvas. Hogen an darn vrasañ eus ar pobloù indian zo bet treuzkaset d' ur mare bennak ; ar bobl Winnebago da skouer zo bet rediet da gemm annezadur 6 gwech etre 1829 ha 1866. Brezel, treuzkasadegoù ha gouennlzh, setu an tri c'her a c'hell diverrañ istor an Indianed ar Stadoù-Unanet en XIXvet kantved.

211

Prezegenn guzh Khrushchev a voe an diskleriadur kentañ o lavarout ar wirionez diwar-benn an treuzkasadegoù ; klotañ a rae gant ar pezh a oa anavezet en estrenvro dre zanevelloù graet gant tud o doa kuitaet an U.R.S.S., hogen ne oa ket kalz a dra. Titouroù founnusoc'h a zo deuet abaoe un nebeut bloavezhioù gant an testennoù embannet e samizdat (« emembann », anv roet en U.R.S.S. d'an holl destennoù embannet e kuzh) gant an Datared pe o c'heneiled, evel al « Lizher digor skrivet gant keneiled rusian Tatared Krimea ».

An treuzkasadegoù zo bet kaset da benn gant bezennoù « arbennik » an N.K.V.D., a gelc'hie ar c'hêriadennoù hag a dolpe an dud ; lezet e veze etre pemp ha tregont munutenn evit ober pakadoù ha kaset e vezent d' an hent-houarn, serret e bagonioù-samm, hag ar veaj davet Kreiz-Azia a bade alies meur a sizhun ; e-pad ar veaj « ar marv a ziskare ar re gozh, ar re yaouank, ar re wan ; mervel a raent gant ar sec'hed, ar moug hag ar breinadur... d' an arsavioù pa veze roet dour ha boued, ne veze ket aotreet douarañ ar re varv, ha ret e oa lezel anezho e-kichen al linenn hent-houarn... », a lavar al " Lizher Digor " meneget uheloc'h.

Kaset e voe evel-se an Datared davet an Oural, Siberia, Kazakhstan, hogen an darn vrasañ anezho a voe degaset da Ouzbekistan ; p' am erruent e vezent marnaoniet, gwanaet alies gant kleñvedoù, ha ne oa bet prientet netra evit o degemer. Evel ma tisklerias Yusuf Suleymanov en ur prosez graet e Tachkent e 1969 : « Diskargañ a rejont ac'hanomp e *Urta Aul* evel chatal da vezañ lazhet. Nikun ne daolas evezh ouzhomp, daoust ma oamp marnaoniet, lous ha klañv an dud a zeuas da vezañ klañvoc'h-klañvañ ha kregiñ a rejent da goeñviñ gant an naon ha da vervel a-diegezhioù. Fellout a ra din lavarout e oamp 206 eus an hevelep kêriadenn, ha 100 a varvas ; me va-unan a zouaras 18 anezho hag eus 7 tiegezh a oa kar din, ne chomas hini ebet ». Ha Yuriy Osmanov a laver : « Ya, roet ez eus bet douar d' an Datared, ur metrad hanter er vered » (Deved 1945 a zisklerie e vefe roet douar d' an Datared er broioù e-lec'h ma oant degaset).

An Datared a lavar eo marvet evel-se 46,3 % eus ar boblañs e-doug an treuzkasadegoù hag e-pad an triwec'h miz a zeuas da heul. Da vare ar prosezoù graet d' an Datared ar K.G.B. (Polis Politikel, ez-N.K.V.D.) en deus klasket prouiñ ne oa ket ken uhel dregantad an dud marvet, a vefe etre 18 % ha 22 % eus ar boblañs e-pad an triwec'h miz tremenet goude an donedigezh da Ouzbekistan, hogen ar sifroù-se ne lakaont ket er gont niver an dud bet marvet e-doug an dreuzkasadeg, a zo bet uhel a-walc'h.

212

Ar re o doa dreistbevet a oa lakaet dindan beli an N.K.V.D., rak dalc'het e oant da reolennoù an « annezadur arbennik » ; da skouer, n'o doa ket ar gwir da guitaat o lec'h-anez ; ar jeneral Grigorenko en deus keñveriet o stad ouzh hini ar served. Ne ouzer ket kalz a dra diwar-benn ar vuhez o deus renet, hogen goude an diaesterioù spontus o deus bet da c'houzañv e-doug ar bloavezhioù kentañ, ez int deuet a-benn da vevañ gwelloc'h, hogen n'o doa ket ar gwir da embann levrioù pe gelaouennoù en o yezh.

E-pad an amzer-se e veze graet pep tra evit diverkañ o roudoù en o bro, Krimea ; ar vro a oa hiviziken ur proviñs, staget da gentañ ouzh Rusia hag abaoe 1954 ouzh Oukrainia, dre urzh Khrushchev. An holl anvioù-lec'h a oa bet rusianekaet : Taganash o vezañ Solenoye Ozero, ha Buyuk Orlar kemmet e Oktyakrskoye, h.a. « Pep tra zo bet graet evit diwriziennañ holl elfennoù buhez vroadel an Datared hag an eñvor anezho zoken. An tiez a voe dismantret hag ar parkoù lezet da vont e gouez ; ar beredoù a voe aret... Pep tra moulet pe skrivet er yezh datarek a voe devet, eus an dornskridoù kozh betek skridoù klasel marksour-leninour. »

DIZUADUR AR POBLOU TREUZKASET HA GANEDIGEZH UN EMSAV BROADEL

Meneget e voe adarre anvioù ar pobloù treuzkaset evit ar wech kentañ e 1956-1957 ; Khrushchev en doa didamallet anezho en e brezegenn guzh brudet, o lavarout en doa Stalin dilezet ar menoz da dreuzkas ivez an Oukrainiz dre ma oant re niverus, hogen n' en doa ket meneget an Datared.

E miz C'hwevrer 1957 e voe adsavet peder Republik pe rannvro emren e Norz-Kaokaz ; adroet e voe o gwirioù d' ar pobloù a chome eno e 1943 hag aotreet e oant da zont en-dro d' o bro, hogen an distro a dlee bezañ aozet tamm-ha-tamm, en un doare « urzhiet » hep ma vefe graet un droug bennak da armerzh ar broioù e-lec'h ma oant bet treuzkaset.

213

Hogen div bobl ne oant ket bet dizuet : an Alamaned ha Tatared Krimea ; abaoe miz Ebrel 1956 e oant dieubet diouzh reolennoù an « annezadur arbennik », dre un deved chomet diembann, hogen ne oa ket bet restalet dezho ar gwir da adkavout o madoù nag ar gwir da zont en-dro d' o bro. Respontet e voe d' o dileuridi, evel ma voe respontet ivez d' an Alamaned ha d' ar v-Meskhetiz (1), e oa an U.R.S.S. a-bezh o mammvro ha ne rae forzh neuze al lec'h e oant o chom ennañ.

Dizuet e voe an Alamaned e 1964 hag Datared e 1967, hogen ne oa ket bet adsavet o Republikoù, na roet dezho ar gwir da zont en-dro, war zigarez ma oant « gwriziennet » el lec'hioù ma oant bet kaset ha m' o doa an hevelep gwirioù hag ar geodedourien all.

Un emsav broadel zo ganet e-touez an Datared hag a c'houlenn an dizuadur politikel (pal tizhet e 1967), ar gwir da zistreiñ da Grimea hag adsavidigezh ar Republik emren.

Klask a ra an emsav broadel pouezañ war ar pennadurezhioù dre gas pedskridoù hag aozañ bodadegoù, o chom atav e bevennoù al lezenn : daoust da se en deus ar gouarnamant graet prosezoù hag ar re oberiantañ e-touez an emsaverien zo bet kondaonet d' an toull-bac'h pe d' ar c'hamp-labour.

Ar pedskrid kentañ zo bet kaset e miz Gouhere 1957 ha n' o deus ket ehanet abaoe, gant dastum kantmiliadoù a sinadurioù : pep Tatar en deus sinet meur a wech.

Graet e voe prosezoù d' ar re o doa aozet ar pedskridoù ; da skouer, e miz Here 1961, e voe kondaonet e Tachkent daou Datar da 5 ha 7 vloavezh « renadur strizh » en ur c'hamp-labour evit bezañ skignet testennoù diwar-benn kudennoù an Datared, ar pezh a oa bet barnet evel bruderezh enepsoviedel hag evel atizadur d' an enebiezh etre ar pobloù (hervez pennadoù 60/1 ha 64 eus Lezennoù Torfedel Ouzbek).

(1) Disheñvel eo ar gudenn evit Meskhetiz, rak ne oant ket bet tamallet da vezañ kenlabouret gant an Alamaned, hag a-hend-all n' o doa na rannvro, na Republik ebet dezho ; an dreuzkasadeg n' eo ket bet meneget biskoazh en U.R.S.S. betek un deved eus an 30 a viz Mae 1968 a roe dezho ar gwir da chom n' eus forzh pelec'h « hervez lezennadur al labour hag ar reolennoù war an aotreoù-tremen », hogen

nac'het eo bet dezho betek-hen ar gwir da zont en-dro da v-Meskhetia.

214

Un nebeut Tatarred yaouank o deus klasket sevel un « Unvaniezh ar Yaouankiz tatar evit an distro d' ar vro », hogen ret e voe dilezel ar menoz. Abaoe 1964 e kas an Datared bep ar mare dileuridi da v-Moskva, en ur grouiñ evel-se er gêrbenn soviedel un doare « lobby », hag abaoe 1965 ez eus bet krouet e pep kêr pe gêriadenn e-lec'h ma 'z eus Tatarred o vevañ « Stolloù-ober evit harpañ ar Strollad (komunour) hag ar gouarnamant da ziskoulmañ kudenn vroadel ar bobl datar » ; ar stolloù-ober-se zo kreizennoù an emsav broadel hogen merkañ a reont, dre an anv dibabet, e fell dezho labourat e bevennoù al lezennoù.

Klasket o deus an Datared pouezañ dreist-holl war Gendalc'hioù ar Strollad Komunour, o kas pedskridoù, milieroù a lizhiri hag a bellizhiri ; kaset e voe da skouer e-pad an XXIIIvet Kendalc'h e 1966 125 dileuriad da v-Moskva ; roet e voe ganto d' ar Poellgor-Kreiz ur pedskrid sinet gant 120.000 Tatar (tost d' an holl Datared en oad-krenn), ha seizh levrenn enno an testenioù hag ar stadegoù diwar-benn darvoudoù ar bloavezhioù 1944-1945. Degemeret e voe darn eus an dileuridi gant Georgadze, Sekretour Presidiom ar Sovied Meur, hag hemañ a reas promesaoù, hogen ne c'hoarvezas netra, hag e voe kaset ur eil pedskrid, sinet gant 115.000 den, hogen ar wech-mañ an dileuridi a voe harzet ha kaset kuit eus Moskva. Dalc'het e voe bodadegoù en Ouzbekistan evit merkañ deiz-ha-bloaz ar Republik emren, hogen an darn vrasañ a voe divodet gant ar polis.

Abaoe o dizuadur (1967) n' o deus ket an Datared ehanet da gas goulennoù ha pedskridoù d' ar pennadurezhioù, hogen ar respont zo bet atav bac'hidigezhioù ha prozezoù, a vefe re hir ober ul listenn anezho. Klask a ra ivez an Datared dont en-dro da Grimea, daoust d' ar pezh a oa bet lavaret dezho. War-dro 12.000 zo deuet evel-se en-dro ; hogen int bet kuit da Ouzbekistan gant ar polis, zoken ar re o doa kavet labour ha lojeiz. Lizhiri-klemm zo bet kaset d' ar Poellgor-Kreiz o verkañ e vez degaset enbroerien oukrainiat da Grimea dre viliadoù, ar pezh a brou n' eo ket « leun » ar vro, evel ma vez respontet d' an Datared.

Ar gouel broadel aozet gant an Datared e Chirchik (Ouzbekistan) a zo bet divodet dre nerzh gant ar polis d'an 21 a viz Ebrel 1968 ; galvet e oa bet ar milisia, bezennoù ar K. G. B. hag ar bomperien, 300 den a voe toullbac'het ; diarbennoù a voe kemeret e 1968 evit herzel ouzh an Datared da zerc'hel ar bodadegoù a reont er beredoù d' an 18 a viz Mae, deiz-ha-bloaz an treuzkasadegoù.

D' ar 16 a viz Mae 1968 e voe kaset da v-Moskva 800 dileuriad gant 23.000 lizher hag ur pedskrid sinet gant 60.000 den, hogen ar pennadurezhioù a nac'has o degemer ; dic'hallus e voe dezho kavout kambroù en ostalerioù, ha toullbac'het e voent goude bezañ bazhataet ; lavaret e voe dezho gant adprokolor Moskva, Stasnikov, e oa ar gudenn datar diskoulmet « ur wech evit vat », ha ne vefe roet aotre ebet.

215

An emsav broadel tatar en deus kavet harp digant an emsav demokratel, en deus roet brud d' e c'houlennoù ; harpet eo bet gant daou zen dreist-holl, ar jeneral Grigorenko hag ar skrivagner Alexei Kosterin ; hemañ a zo bet skarzhet eus ar Strollad Komunour, ma oa ezel anezhañ abaoe 1916, dre m' en doa savet e vouezh evit difenn gwirioù an Dchetched, ha goude marv Kosterin (1), ar jeneral Grigorenko zo deuet da vezañ difenner taer an Datared. Setu darn eus ar brezegenn graet gant Grigorenko d' ur gouel aozet gant an dileuridi tatar en enor da Gosterin, d' ar 17 a viz Meurzh 1968 : « Soñjal a rit hoc'h eus afer ouzh tud onest. N' eo ket gwir. Ar pezh a zo bet graet d' ho proad n' eo ket bet graet gant Stalin nemetken, ar re o deus kenlabouret gantañ a zo bev hag a zalc'h kargoù uhel ».

Ar bloavezh 1968 a oa bet diskleriet evel Bloavezh Etrevroadel Gwirioù an Den gant Bodadeg ar Broadoù Unanet ha d' an 21 a viz Mezheven 1968 e kasas an Datared ur galv d' ar Bed ; kontañ a raent istor o fobl ha deskrivañ a raent e saviad bremañ. Goulenn a raent harp evit ma vefe adroet dezho o gwirioù : «

Abaoe m' hon eus kroget da stourm hon eus dastumet war ar pedskridoù kaset d' ar pennadurezhioù-Stad ouzhpenn 3 milion a sinadurioù, eleze pep Tatar en deus sinet dek gwech da nebeutañ. Hogen galv 300.000 den, adlavaret dek gwech, a zo bet aner. Pennadurezh ebet eus ar Strollad (Komunour) pe eus ar Stad n' en deus respontet deomp hag embannadur soviedel ebet n' en deus graet meneg eus hor stourm... » Er c'hontrol, kaset int bet dirak al lezioù-barn hag abaoe 1959 200 Tatar zo bet kondaonet d' an toullbac'h pe d' ar c'hamp-labour, hep kontañ kantadoù all o deus bet pemzek devezh toullbac'h hepken.

(1) Mervel a reas Kosterin d' an 10 a viz Du 1968 ; dont a reas d' e zouaridigezh Tchetchened, Alamaned ha dileuridi tatar a reas prezegennoù evit lavarout o anaoudegezh vat.

216

Prosezoù all a zo bet dalc'het abaoe : d' an 29 a viz Ebrel 1969 da skouer e voe barnet e Simferopol, kêrbenn Krimea, un ijinour, Gomer Baiyev, unan eus ar re o deus klasket dont da Grimea, kondaonet e voe da zaou vloavezh toullbac'h evit « difreterezh ha bruderezh enepsoviedel » ; d' ar 1añ a viz Gouhere e voe dalc'het e Tachkent, kêrbenn Ouzbekistan, ur prosez graet da zek Tatar dalc'het en toullbac'h goude manifestadeg Chirchik ha tamallet dezho « bruderezh enepsoviedel, falstamallerezhioù enepsoviedel, eneberezh ouzh ar polis » ; an darn vrasañ eus an damallidi a oa ganet etre 1940 ha 1946 hogen tri anezho o doa stourmet en Arme Ruz e-pad ar brezel ; setu o anvioù : Rollan Kadiyev, 29 bloaz, fizikour anavezet, Izet Khairov, 31 bloaz, fizikour, Risa Ulifov, 49 bloaz, mañsoner, Ayder Bariev, 26 vloaz, mekanikour, Svetlana Aymatova, 26 vloaz, ha Munire Khalilova, 23 bloaz, klañvdiourez o-div, Reshat Bayramov, 28 vloaz, ha Radvan Gafarov, 54 bloaz, tredaner o-daou, Ismail Yazidzhiyev, 52 vloaz, mañsoner, hogen skrivagner tatar ivez, bet kelenner met torret eus e garg ha bet erbedet da vezañ anvet « Haroz an Unvaniezh Soviedel » e 1942 ; an holl anezho a oa oberiant en emsav broadel. E-touez an testennoù tamallet e kaved : Kannadigoù kaset gant an dileuridi datar o chom e Moskva, danevelloù eus bodadegoù aozet gant ar Strolloù-Ober, pennadoù ha lizhiri skrivet gant Kosterin, ar brezegenn graet gant Grigorenko d' ar 17 a viz Meurzh 1968, un destenn skrivet gant Bayramov diwar-benn « Gouennlzh e politikerezh ar Gouarnamant Soviedel », h.a.

Fellout a rae d' ar jeneral Grigorenko dont d' ar prosez ; kaset en doa da Boellgor ar Broadoù Unanet evit Gwirioù an Den un Galv evit an Datared, sinet gantañ ha gant 54 Rusian all ; hogen toullbac'het e voe Grigorenko d' an 22 a viz Mae 1969 ha kaset d' ur bredospital, e-lec'h m' emañ dalc'het atav, evel meur a eneber.

Padet e oa bet ar prosez pemp sizhun ; evit ar prokolor hag ar varnerien ne oa kudenn ebet, peogwir ec'h anzavent o doa skrivet pe skignet an testennoù, hogen lavarout a rae ivez an Datared e oa gwir pep tra skrivet hag e tamallent ar gouarnamant soviedel eus gouennlzh hag eus diforc'hidigezh etre ar broadoù. Kondaonet e voe pevar anezho da dri bloavezh kamp-labour, ar re all a voe kondaonet d' ur bloavezh toull-bac'h. Tatared a oa deredet da heuliañ ar prosez ha da ziskouez kengrediezh d' an damallidi, hag e-pad ar pemp sizhunvezh e chome atav un engroez war ar blasenn dirak al lez-varn.

Prosezoù all zo bet dalc'het e 1969 ha 1970, meur a Datar zo bet torret eus e garg ; menegiñ a reomp hepken ez eus bet ur plac'h a 18 vloaz kondaonet e miz Gwengolo 1970 da dri bloavezh kamp-labour evit bezañ istribilhet bannieloù du war an ti-polis hag ar savadurioù-Stad da zeiz-ha-bloaz an dreuzkasadeg. Pedskridoù all zo bet kaset, da geñver kantvet deiz-ha-bloaz Lenin, e 1970, da geñver XXIVvet Kendalc'h ar Strollad Komunour e 1971, ha reoù all abaoe c'hoazh : da skouer ur pedskrid zo bet meneget gant ar Burevioù-gwask e miz Eost 1972 ; hogen seblantout a ra n' eo ket bet ken puilh oberezhioù an Datared e 1971-1972 ha ma oant e-pad ar bloavezhioù 1967-1969.

217

* * *

An emsav broadel tatar n' eo ket deuet a-benn da dizhout e bal ; an

didamalladur, roet e 1967, n' en deus ket degaset ar gwir da zont en-dro d'ar vro na da adsevel ar Republik ; ar gwir o deus an Datared da embann ur gelaouenn en o yezh, " Lenin Bayragy ", ha da embann un nebeut levrioù - ez eus eizh levr e 1970 ; krouet bet evit ar wech kentañ e 1968-1969 klasoù e-lec'h ma vez desket tatareg en nebeut skolioù kentañ. Nebeut a dra.

Bez e c'heller soñjal ez eo aner a-walc'h kas pedskridoù hep ehanañ ; moarvat, hogen ret eo soñjal ne c'hell ket an Datared kaout un obererezh politikel digor ; ouzhpenn-se, sinañ ur pedskrid n' eo ket un dra dinoaz evel e meur a vro.

An Datared o deus dibabet a-hend-all an hevelep kadoniezh hag an emsavioù eneber all, gant " Poellgor Gwirioù an Den " krouet gant an Akademiad Sakharov, pe gant izili an " Emsav demokratel " ; an holl a c'houlenn ouzh ar gouarnamant ma vo lakaet da dalvezout al lezennoù en deus votet hag ar pennaennoù en deus embannet hag e taolont pled da chom e bevennoù al lezennoù, ar pezh na vir ket outo da vezañ lakaet en toullbac'h. E-touez ar broadelezhioù enframmet er Stad Soviedel n' eus nemet ar Yuzevien hag o deus diskouezet abaoe un nebeut bloavezhioù an hevelep kalonegezh, an hevelep pennegezh hag un emskiant vroadel ken kreñv hag an Datared.

Planedenn Tatared Krimea a ziskouez deomp a-hend-all dislavaroù ar politikerezh soviedel e-keñver ar broadoù stag ouzh ar Stad rusian ; diskouez a ra da skouer n' o deus ar broadoù-se na gwir na galloud ebet, daoust da stumm kevreadel ar Stad soviedel, peogwir e vez ar gwirioù hag ar galloudoù broadel lamet pe restaolet hervez an divizoù kemeret e Moskva, hep ma c'hellfe ar pobloù kaout ur pouez bennak warno ; diskouez a ra ivez ez eo bet atav ar broadoù nann-rusian aberzhet d' ar « raison d'Etat ».

218

Ur skouer eus torfedoù Stalin a gavomp amañ ivez, hogen, evel ma lavar Grigorenko, ar giriegezh n' eo ket da lakaat war Stalin nemetken, rak izili ar Politburo a votas a-du gant an divizoù ha darn anezho o lakaas da dalvezout ; bez' e c'heller menegiñ en o zouez : Serov, Souslov ha Vorochilov. Planedenn an Datared abaoe 1957 ha dreist-holl abaoe 1967 a ziskouez ivez bevennoù an distalinekadur.

Diaes eo displegañ koulskoude an diforc'h a zo bet graet etre ar pobloù a oa bet dindan dalc'h al lu alaman e-pad ar brezel hag an diforc'h a zo bet graet abaoe 1957 etre ar pobloù a oa bet treuzkaset, diouzh un tu, pobloù an Norz-Kaokaz, a zo bet aotreet holl da zont en-dro d' o bro hag o deus adkavet o Republikoù, ha diouzh un tu all, an Alamaned, an Datared hag ar v-Meskhetiz ; ret eo merkañ o deus broioù-orin div bobl, Krimea ha Meskhetia, un dalvoudegezh vrezel, Krimea, kreñvlec'h al lu hag ar verdeadurezh soviedel er Mor Du, ha traoniennoù Meskhetia oc'h en em ledañ a-hed harzoù Turkia ; ret eo merkañ ez eus bet treuzkaset bihanniveroù all evit abegoù heñvel a-walc'h, war a seblant ; rak setu pezh a c'hoarvezas da Goreiz ar Reter Pellañ ha da C'hresianed ar Mor Du. Ar Goreiz a rae ar palevarzh eus poblañs proviñs Vladivostok, hag un distrig broadel a oa bet krouet evito ; Koreiz ar Reter Pellañ n' int ket meneget ken goude miz Ebrel 1937 hag adkavout a reer an darn vrasañ anezho e Kreiz-Azia (war 314.000 anezho, e kaver, da goulz an niveradeg graet e 1959, 139.000 Koread e Ouzbekistan ha 74.000 e Kazakhstan ; diaes eo gouzout pet Koread a vefe chomet e rannvro Vladivostok). Hervez R. Conquest, ar C'hresianed a chome er c'hêrioù a-hed ar Mor Du, a vefe bet treuzkaset da Greiz-Azia e 1949.

An holl devoudoù-se a brou an disfiz en deus ar gouarnamant soviedel ouzh ar broadoù nann-rusian, zoken goude marv Stalin, rak penaos displegañ a-hend-all ar youl da virout teir fobl bihan strewet e Kreiz-Azia, en ur nac'hañ outo ar gwir da zont en-dro d' o bro ? Ma tistrofe an holl Datared da Grimea, ne vefent nemet ur bihanniver (war-dro 300.000 den) tra m' eo adsavet bremañ poblañs ar c'hourenez da 1.800.000 e 1970, ha tra ma teu atav trevannederien oukrainat d' en em ziazezañ er vro ; strewet e vefe an Datared en o zouez, a dra 'sur.

219

Diaes eo d' an Datared kaout ar goanag e c'hellint un deiz adkavout o douar, o madoù hag o bro, ha koulskoude ne gollont ket spi ; evel m'en deus lavaret Yazydzhiyev da ziwezh e brosez : « Arabat deoc'h krediñ ez eo ar bobl datar ur bagad deñved ne ra forzh eus al lec'h m'emañ o peuriñ gant ma vo leun e gof ».

Levrlennadurezh :

Robert CONQUEST - The Nation Killers : The Soviet Deportation of Nationalities. - London, MacMillan, 1970.

Ann SHEERY - The Crimean Tatars and Volga Germans : Soviet Treatment of two national minorities. - Danevell embannet gant " The Minority Rights Group ", London, 1971.

Chantal LEMERCIER-QUELQUESAY - The Tatars of the Crimea : a Retrospective Summary Central Asian Review, 1968, N° 1.

Vincent MONTELL Les Musulmans Soviétiques - Paris, Ed. du Seuil, 1957.

Gerioù n' emaint ket e Geriadur Roparz Hemon :

arbennik : spécial ; bezenn : unité militaire ; bredospital : hôpital
psychiatrique ; deved : décret ; kevreadel : fédéral ; kefridiel : officiel ;
saviad : situation ; treuzkasadeg : déportation.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Nolwenn hag he zud Patrick LE BOULICAUT ha Gwenola OLLIVIER a zo stad enno o kemenn deoc'h ganedigezh Gurwal, e Roazhon d' an 13 a viz Meurzh.

Y. B. BOUCHER hag e wreg a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h-vihan Nolwenn Tailhades, e Naoned d' an 21 a viz Ebrel.

Françoise LE GOFF ha Malo LOUARN a zo laouen o kemenn deoc'h ez int bet euredet d'ar 25 a viz Ebrel. Lidet eo bet an eured gant Youenn Troal e chapel Salaun ar Folgoad e Argol.

Yann TALROT a zo laouen o kemenn deoc'h en deus resevet urzh an diagonelezh digant Eskob Sant-Brieg ha Landreger, en e iliz parrez Sant-Yann-ar-Vali e Lanuon, deiz Sul ar Beuz, 15 a viz Ebrel.
Beleget e vo da vloaz war-dro Pask en iliz Itron-Varia Rostren. An holl vignoned a vo pedet en deiz-se.

Eured Berc'hed POUPINOD ha Yann-Ber FOURGOUX a zo bet lidet d' an 30 a viz Mezheven en iliz Itron-Varia ar Porzh-Mat en Naoned.

Mikael PREMORVAN, Erwanek SKRANGN hag o merc'h Gwenola a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh Ann-Gael hag Even e Roazhon d' ar 25 a viz Ebrel.

Laouen eo Anne-Gaelle, Tangi ha Maiwenn LARNICOL-DOUSSIN o kemenn deoc'h ganedigezh o c'hoarig Lenaig-Uriel-Nolwenn, e Roissy-en-Brie.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' an holl.

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e-kerz an daou viz diwezhañ :

MIZ MEURZH :

H. Cam, 20 lur ; P. Le Gall, 20 ; dizanv, 100 ; B. Cadoret, 50 ; F. Le Calonnec, 40 ; B. Le Rallic, 20 ; A. Guilcher, 70 ; M. J. Marot, 20 ; T. Caulet, 20 ; J. Creff, 70 ; P. Lemoine, 9 ; R. Pellen, 9 ; L. Andouard, 20 ; Y. Gueguen, 50 ; A. Daniel, 20 ; A. Bernechin, 50 ; J. M. Bouessel du Bourg, 20.

- War un dro : 608 lur.

MIZ EBREL : M. Gwilherm, 10 lur ; P. Droguet, 10 ; M. Miniou, 10; dizanv, 20 ; E. Tymen, 10 ; L. Bothorel, 20 ; T. Le Goff, 40 ; E. Konan, 30 ; L. Bevan, 10 ; P. Pennec, 160 ; Y. L'Heveder, 5.

War un dro : 325 lur.

2.968,16 lur hon eus bet derou ar bloaz. Bennozh Doue d'an holl brofourien

733 C'houmananter

733 c'houmananter a gont AL LIAMM e derou miz Mezheven, lodennet evel ma verkomp

dindan :

Aodoù-an-Hanternoz, 119 ; Penn-ar-Bed, 189 ; Il-ha-Gwinum, 77 ; Liger-IZelañ, 39 ; Mor-Bihan, 52 ; Rannvro Bariz, 125 ; Departamantoù all, 66 ; Afrika an Hanternoz, 2 ; Afrika Du, 4 ; Iwerzhon, 11 ; Kembre, 10, Skos, 1 ; Bro-Saoz, 6 ; Bro-Alamagn, 7 ; Helvetia, 3 ; Izelvroioù, 7 ; Belgia, 4 ; Italia, 1 ; Bulgaria, 1 ; Stadoù-Unanet, 2 ; Kanada, 4 ; Haiti, 1 ; Aostralia, 2 ; Ceylan, 1 ; Japan, 1.

Un tamm kemm a c'hellor kavout o keñveriañ ar sifrennoù a-us ouzh ar re embannet en niverenn 154. Neuze e kontemp 722 goumananter. Un toullad a re nevez a zo deut abaoe, hogen ranket hon eus a-hend-all lemel a-ziwar hor rolloù un niver mat a lennerien ha n' hor boa ket gallet kaout diganto o adkoumanant.

Klask a rimp mont bepred war-raok evit astenn levezon ar gelaouenn ha trugarekaat a reomp ar re a labour ganeomp er feur-se.

E-touez Koumananterien AL LIAMM, menegomp :

- Skolioù-meur : Brest, Roazhon (Breizh) ; Aberystwyth, Bangor, Kerdiz, Abertawe (Kembre) ; Kork, Dulenn (Iwerzhon) , Oxford (Bro-Saoz) ; Tübingen (Alamagn).

- Skolioù : I.U.T. Lannuon ; C.E.S. Gwened ; Coleg Dewi Sant Cardigion.

- Levraouegoù : Levraoueg-kêr Kemper ; Levraoueg-kêr Brest ; Levraoueg-kêr Sant-Nazer ; Levraoueg Vroadel Bro-Skos, DinEdin ; Levraoueg Vroadel Bro-Gembre, Aberystwyth ; Zentral-bibliothek, Zurich.

- Kelc'hioù keltiek : Nevezadur (Pariz).

- Kevredigezhioù : The Celtic League, Rialto, California, U.S.A. ; Kevredigezh Bretoned Melun ; Kreizenn Vreizhat a Gelaouadur, Brest ; Kreizenn Sevenadurel Breizhat, Gwengamp ; Emglev an Tiegezhioù, Roazhon ; Oaled Kevredadel-diorroadurel, St-Brieg.

- Mererezh O.R.T.F. Roazhon.

Lizhiri

Digant R. A. : « Setu ur chekenn a gasan deoc'h evit adneveziñ va c'houmanant d' Al Liamm, rak abaoe m' am eus kroget da lenn ar gelaouenn-mañ, em eus kavet atav traoù a dalvoudegezh da lenn enni. »

Digant A. M. : « Echu eo va c'houmanant-bloaz. C'hoant em eus da genderc'hel da lenn Al Liamm. Ar gelaouenn n' eo ket re ziaes evit an dud a grog da zeskiñ brezhoneg. Kendalc'hit evel-se. »

222

Koun Breizh

Koun Breizh a gemenn d' e izili en em gaout d' ar Sul 24 a viz Mezheven e Bains-sur-Oust, war blasenn an Iliz. War-lerc'h al lidoù en em vodo an holl war an dachenn Emgann evit bodadeg ar poellgor.

Embannadurioù Al Liamm

Deut eo a-zindan ar wask abaoe ur miz daou levr a-bouez : dastumad barzhonegoù Anjela Duval " Kan an Douar " gant ur rakskrid diwar zorn an Ao. Klerg, ha " Skol Louarn Veig Trebern ", eil levrenn. An trede a zo prest ivez da zont er-maez.

A-hend-all ez omp krog da embann pezhioù-c'hoari diembann Tangi Malmanche, ar pezh a zo un darvoud pouezus. Poent-bras e oa, rak ouzhpenn un hanter kantved zo e oant o c'hortoz un embanner. An daou levr kentañ a zo " An Intañvez Arzhur ", bet skrivet war-dro 1900, ha " Buhez Salaun lesanvet ar Foll ", bet skrivet e 1922-1923. Trede levr Malmanche a vo ennañ " Gwreg an Toer " ha " Marvail an Ene Naonek

Kaset eo bet ivez d' ar mouler trede levr Embannadurioù klok ar Bibl troet dindan renerezh Maodez Glanndour. Goude " Ar Pevar Aviel " hag " Oberoù ha lizhiri an Ebestel " e teuio er-maez " Ar Psalmoù."

" Nenn Jani ", romant nevez Roparz Hemon a vo moulet ivez dizale dindan stumm ul levr.

" Kan an Douar ", barzhonegoù gant Anjela Duval, war Johannot niverennet 25,00 lur ; war baper all 16,00 lur.

" Skol Louarn Veig Trebern ", eil levrenn, gant Youenn Drezen, war Lafuma niverennet, 30,00 lur ; war baper all 25,00 lur.

" An Intañvez Arzhur ", drama e pevar arvest, gant Tangi Malmanche : war Johannot niverennet 25,00 lur ; war baper all 18,00 lur.

" Buhez Salaun ", drama e tri arvest, gant Tangi Malmanche, a c'heller rakprenañ hep mizoù-kas betek ar 15 a viz Eost : war Johannot niverennet 20,00 lur e-lec'h 25,00 ; war baper all 15,00 lur e-lec'h 19,00.

Embannadurioù a bep seurt

" Skol " a zo krog da zont er-maez adarre goude un ehan hir, da heul marv hor mignon Armañs ar C'halvez. En niverenn 50 e vo kavet un dibab pennadoù evit ar skolioù tennet eus " Sketla Segobrani " bet savet gant Vallée ha Mordiern 50 vloaz 'zo.

Koumanant da 4 niverenn : 20,00 lur. Mlle Yola Chariou. 16, rue Berlioz, Saint-Brieuc.

E niverenn 84 " Hor Yezh " e kaver poelladennoù diwar-benn al levr " 40 pennadlenn " gant Per Denez, bet embannet gant Al Liamm.

223

" Imbourc'h " 39 a zo anezhañ ur geriadur galleg-brezhoneg ha brezhoneg-galleg o plediñ gant an armerzh hag ar gevredigezh, a-bouez bras evit ar vuhez a-vremañ evel Kaier 153-154 " Preder" a zo ivez ur geriadur met e fichenoù. Ar c'hwec'hvet strobard eus Dafar geriadur ar yezh arnevez ez eo.

Imbourc'h : koumanant-bloaz, 30,00 lur - c.c.p. Y. Ollivier 1534-25 Rennes.
Preder : koumanant 12 niverenn, 60,00 lur - c.c.p. 16 093-13 Paris.

Pladennoù

Resevet hon eus ur gaer a bladenn 33 tro digant An Triskell. O fladenn gentañ eo, embannet en hevelep ti hag hini Alan Stivell. An enrolladur a zo dispar,

dreist-holl pa lakaer ar bladenn da dremen war un ardivink stereo. Neuze e klever kalz gwelloc'h pep benveg ha pep kaner.

Piv eo An Triskell ? Pevar paotr yaouank ampart-tre war o binvioù (telenn, gitar, tin whistle, mandolinenn, banjo 5 kordenn). Se a vo merzet diouzhtu pa selaouot an tonioù iwerzhonat, reel ha hornpipe hag a vez c'hoariet buan-tre.

Klasket o deus reiñ ul liv nevez da ganaouennoù breizhat en ur lakaat da dalvezout perzh pephini anezho, perzh pep benveg ha dre vras perzhioù ar folk-song. Deut int da benn ha sur mat e vo dañset war don ar Serjant Major pe hini dañs Fañch en hañv-mañ.

A-drugarez da gempennadurioù eus ar re wellañ (Jef ar Penven, Abjean pe An Triskell o-unan) e roont deomp da dañvañ tonioù gorrek (evel " Kimiad ar soudard yaouank " pe " Ar voraerien ") a zo dezho glander ar sonerezh klasel.

E berr gomzoù, ur bladenn eo ret deoc'h selaou.

An talbenn a zo " Musiques Celtiques " embannet e ti Philips. Koustañ a ra war-dro 28,00 lur.

G. H.

" Carn " kelaouenn etrekeltiek

" Carn ", kelc'hgelaouenn nevez drimiziek ar C'hevre Keltiek (Celtic League) a gemero lec'h " Celtic News " hag al " Levr-bloaz " war un dro.

An niverenn 1, deut er-maez e dibenn Ebrel, 'zo enni 22 bajennad a geleier ha pennadoù all o tennañ da zardvoudoù ar broioù keltiek. Div drederenn 'zo e saozneg hag ar peurrest e yezhoù keltiek. En ur pennad hir e vez roet diskleriadurioù a-zivout ar C'hevre, e balioù, e genurzhiadur, e obererezh, e roll en hor stourmoù broadel. Div pajennad 'zo e brezhoneg, o plediñ gant darvoudoù c'hoarvezet nevez 'zo er broioù all.

" Carn " 2, dindan ar wask, a zeuy er-maez e Mezheven.

Perak an anv " Carn " ? Unan eus an nebeut gerioù a zo boutin d' an holl yezhoù keltiek hag o tereout war un dro evel titl ur gelaouenn a genobererezh etrekeltiek.

224

« D'ar c'harn, e beg ar menez, e tegas ar bignerien pep hini e vaen. »

Laouen e vimp o kaout pennadoù, keleier, lizherioù koumanantoù.

15 lur da gas da Jakez Derouet 1, rue Géo-André, 44100 Nantes - c.c.p. Jacques Derouet 3264-47 Nantes.

Ret eo spisaat " Carn " n' eo ket liesskrivet hogen moulet brav, hag ur golo kaer kenañ 'zo ganti.

Emañ e soñj Skourr Breizh ar C'hevre aozañ div gartenn, hag embann anezhe :

- unan eus ar 6 broadoù keltiek, pep anezhe en he yezh vroadel ;
- unan eus Breizh, e brezhoneg penn-da-benn, ar re fellfe dezho rakprenañ pa vo deuet ar mare d' embann anezhe a zo pedet da skrivañ da sekretour hor skourr.

Kroget eo al labour gant an hini kentañ. Ar re a ra war-dro an anvioù-lec'h a c'hell skrivañ da reiñ o ali a-zivout kartenn Vreizh.

Dalc'het e vo Kendalc'h-bloaz ar C'hevre Keltiek d' ar 4 ha 5 a viz Eost e Bro-Gembre, e-pad an Eisteddfod e Rhunthun war-dro 30 miltir eus Bala.

Dastum

Ar gevredigezh-mañ a zo he fal klask hag embann tonioù hor Bro. Dastumet eo bet endeo un 2 000 bennak a ganaouennoù ha renket hervez al lec'h a orin. Dizale e teuo er-maez an embannadur kentañ e stumm ur c'haier hag ur vandenn (pe ur bladenn, pe ur minikased), a vo warno tonioù eus pep korn Breizh. An embannadurioù all a vo gouestlet da gorn-mañ-korn, er c'hontrol. Priz ar c'hentañ embannadur : 19,85 lur.

Ar goulennoù a zo d' ober d' ar chomlec'h-mañ : DASTUM, 19, avenue de la Chapelle, Chartres-de-Bretagne, 35170 Bruz.

Kudennoù a Yezh hag a Istor e Breizh

Setu talbenn ar brezegenn graet e Sant-Malo, d' ar 7/6/73, dirak izili ar Greizenn Sevenadurel, gant Leon Fleuriot, kelenner war ar C'heltieg ha rener Kevrenn ar C'heltieg e Skol-veur Roazhon. Anavezet dre e oberennoù diwar-benn ar brezhoneg kozh (geriadur ha yezhadur), Leon Fleuriot en deus labouret evit un embannadur nevez " Documents de l'Histoire de Bretagne ". Dre e anaoudegezh don eus an Istor, ez eo deut ar prezegenner a-benn da zizoleiñ fedoù a-bouez evit pezh a sell ouzh ar brezhoneg, e emdroad, e levezon, e stummoù disheñvel..., hag un dizoloadenn e voe an testennoù displeget evit darn vuiañ ar selaouerien.

225

Kemennadur.

Ar strollad SAV a bed ac'hanomp da embann an diskleriadur da heul :

« Meur a gemennadenn embannet er c'helaouennoù o deus lakaet da grediñ e oa emglev etre an emsav " Breizh Yaouank " hag a strollad breizhek SAV.

Renerien SAV a fell dezho resisaat n' eus ha n' eus bet liamm ebet etre Breizh Yaouank ha strollad Ar Vro, o vezañ m' o deus an daou strollad menozioù disheñvel-krenn da ren ar stourm evit Breizh (5/5/73).

Da heul embannadur ur gelaouenn nevez anvet " La Nation Bretonne ", strollad SAV a resisa ivez n' en deus netra da welout gant an embannadur nevez-se hag e vo kerkent taolet er-maez kement ezel a genlabourfe hep aotre d' ar gelaouenn-se (5/5/73). »

Ar c'hoariva brezhonek e Pariz.

D' ar 7 a viz Ebrel, e " Kêr-Vreizh ", e voe displeget " AR BALEER BRO ", ur pezh-c'hoari savet gant Jarl Priel. Ar c'hoarerien, hervez an urzh ma teujont war-wel, a voe :

TEREZA 'R C'HORR : ar Vamm,
AN ITRON SENECHAL : ar Vatezh,
YANN-GLAODA EMEILLAT : Job,

SOAZIG SENECHAL : Marivon,
JILBERZH BRUNEAU : ar Medisin,
D. S. DELORME : ar Baleer-bro.

A-raok an displegadenn e komzas L. Andouard eus ar pezh hag eus ar c'hoarierien a ziskouez, evit ar 4-vet gwech, e c'hellfe ar c'hoariva brezhonek bezañ bev-buhezek ma karfe ar Vretoned.

Dibunet e voe " An tousegi ", barzhonegig kaer Jakez Riou, gant Soazig Gourves, ha gwerz " Erwan an Arc'hantek " gant L. Andouard.

Kinkladur al leur-c'hoari (?) a oa bet savet gant J. Bruneau, e verc'h Mona ha Padrig, ur Breizhad eus Athis-Moñs.

Jermen Breton, hag eñ prest da sikour ar c'hoarierien a chomfe berr gant o c'hentel, n'en devoe, e gwir, netra da ober.

Goude an displegadenn e voe un tamm diviz, reut a-walc'h evit gwir, etre G. Pennaod, H. Caouissin ha L. Andouard.

Sal vihan a-walc'h Kêr-Vreizh ne oa ket leun-barr rak ne oa ket bet graet kalz a vruderezh. Tud yaouank dreist-holl a voe gwelet eno.

Un eil displegadenn eus " Ar Baleer-bro " a zo bet graet e Ti ar Yaouankiz, e Sceaux, dindan baeroniezh " Da Virviken ", d'ar sadorn 19 a viz Mae.

226

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien

K.E.A.V. a gemenn e vo dalc'het e 26vet skol-hañv e KINTIN (Aodoù an Hanternoz), eus ar Sul 15 (da noz) d'an 28 (goude kreisteiz e viz Gouere, er " Centre Jean XXIII ".

Digor eo K.E.A.V. d' an holl, c'hoant dezho brezhonegañ, gant m' o devo studiet mat diazezoù ar yezh - da skouer 25 kentel kentañ Cours Élémentaire R. Hemon - rak e-kerz ar 15 devezh-se ne vez graet nemet gant ar brezhoneg.

Digor eo dreist-holl d' ar re a zo o teskiñ, rak eno e kavint tro da gaout kentelioù, da implijout ar yezh a-hed an devezh, ha da vezañ skoazellet gant brezhonegerien ampart, en un aergelc'h a vakañsoù.

Doareoù ar skol-hañv.

Implij an amzer :
Diouzh ar beure : kentelioù, kaozeadennoù, studiadennoù.
Diouzh an endervezh : studiadennoù, baleadennoù.
Diouzh an noz : beilhadegoù, koroll, c'hoariva, h.a.

Priz : 20,00 lur an devezh.

Lojeiz : An darn vuiañ eus ar berzhidi a lojo e salioù-kousket (e logelloù). Un nebeut kambroù a vo ivez. Ar re o defe c'hoant kaout unan a zleo goulenn ar c'hentañ ar gwellañ. Un adskodenn a vo goulennet evit ar c'hambroù.

Degas pallennoù ha liñselioù, pe seier-kousket.

Levrioù da zegas :

Evit an deraouidi : Cours Élémentaire, Grammaire, Dictionnaire, gant R. Hemon.

Evit ar re all * :

- Kan an douar, gant Anjela Duval ;
- Ur galedenn a zen, gant Y. ar Gow ;
- Ar Follez yaouank, gant Meavenn ;
- Skol-louarn Veig Trebern, gant Y. Drezen.

Ar re n' o defe ket al levrioù-se a gavo anezho war al lec'h.

Evit mont da Gintin (evit ar re ne zeufent ket gant o c'harr) :

- Kirri-boutin (Linenn C.A.T. Sant-Brieg - Karaez - Kemper)
- Trenioù (Linenn Sant-Brieg - Pondi).

Aliet e vez d' an dud a zo e soñj dont, kas o anv adalek ar lañ a viz Mezheven da : Kamp ar Vrezhonegien, 28, rue des 3 Frères Le Goff, 22000 Saint-Brieuc. - Pellg. : 33-26-66.

(*) An holl levrioù-se en embannadurioù Al Liamm. Goulenn anezho er stalioù, pe e ti an Dll Queille, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp (gwerzh dre ar post hepken).

227

Skol-hañv ar C'hevre Keltiek / Celtic League Summer School

Emañ Skourr Iwerzhon ar C'hevre Keltiek oc'h aozañ ur skol-hañv adarre er bloaz-mañ. Dalc'het e vo e Dulenn etre ar 1-añ hag an 13 a viz Gouhere. Bemdez e vo 6 eurvezh kentelioù iwerzhoneg evit deraouerien, nemet da verc'her e vior dieub en endervezh : en holl war-dro 30 eurvezh eta. Pouezet e vo war reolennoù an distagadur e doare ma vo gouest ar berzhidi da genderc'hel gant studi ar yezh o-unan diwezhatoc'h. Bez' e vo prezegennoù e saozneg diwar-benn neuzioù pennañ ar sevenadur, ar politikerezh hag ar vuhez kevredigezhel en Iwerzhon ar mare-mañ. Diskouezet e vo filmoù ivez. E-pad an amzer vak e vo troiadoù ha diduelloù.

Pedet eur d' emrollañ ar c'hentañ 'r gwellañ gant an It. Caitlin Maude, 37 Dun an Oir, An tSean Bhan, Tamlacht, Co. Atha. Cliath. Goulenn a reer paeañ ur skodenn a £ 6 en a-raok, met evit studierien e vo £ 4 hepken. D' ar re a garfe mirout lojeiz, skrivañ d' an It. Brid Heusaff, 9 Bothar Cnoc Sion, Ath Cliath 9, en ur spisaat " Bed and Breakfast ", pezh a goustfe bemdez war-dro £ 1-25 pe £ 1-50, pe " Kambr, lein ha koan " (a goustfe etre £ 10 ha £ 14 ar sizhun). Ret e vo avat kaout un tamm arc'hant-gouestl, ur fiziadur, evit-se.

Mennad aozerien ar Skol-hañv 'zo da gentañ digeriñ un hent d' an darempredoù etrekeltiek o tremen hep ar saozneg ; ha da eil lakaat da anaout gwelloc'h Iwerzhon. Spi o deus e vo heuliet o skouer er broioù keltiek all.

Skol-hañv Kevredigezh-studi ar biniou

Skol-hañv ar gevredigezh-mañ a vo dalc'het etre ar 1-añ hag ar 15-vet a viz Gouere 1973, e Oaled Sevenadurel " Menez Kamm ", etre Gourin ha Speied.

Kinniget e vo kentelioù bombard ha biniou-kozh d' ar sonerien hengounel (daou ha daou) ha kentelioù d' an daboulinerien a c'houlenn diganeomp.

Ar biniou-bras a vo kelennet gant kelennerien K.A.B. ha gant ur c'helenner Skosat, ar Penn-Soner C. Pryde, mab ar P.-S. J. Pryde brudet abalamour d' an ton " The Amazing Grace " bet kempennet gantañ en un doare sonerezh pop, ur bloaz 'zo.

Ur genstrivadeg biniou-bras hag ur genstrivadeg biniou-kozh ha bombard a vo dalc'het d' ar sadorn 7 a viz Gouere e Menez Kamm. Ar priz " Soner Arc'hant

Kevredigezh-studi ar Biniou, 1973 " a vo roet d' ar gwellañ soner biniou-bras.

Evit tremen hon arnodennoù-sonerezhel, pe evit kemer perzh e skol-hañ K.A.B. pe en hor genstrivadeg, ez eo ret skrivañ ar c'hentañ ar gwellañ (a-raok an 10-vet a viz Mezheven, ma c'hellit, gant ur golo-lizher hag un timbr evit ar respont) da g-Kevredigezh-studi ar Biniou, 10 bis, boulevard Gambetta, 22000 Saint-Brieuc. - Pellg. (96) 33-10-90.

228

Kendalc'h Keltiek Etrevroadel

Er bloaz-mañ e vo ar C'hendalc'h Keltiek en Iwerzhon. Graet e vo eus an 13 betek an 18 a viz Eost. Ne vo ket dalc'het ar C'hendalc'h, evit ur wech, en ur gêr vras, met en ur gêr vihan, Blessington, nepell eus Dulenn, ouzh troad menezioù Wicklow.

Kregiñ a raio ar C'hendalc'h d' al Lun 13 a viz Eost diouzh an endervezh, pa vo degemeret ar Gendalc'hidi gant aozerien ar C'hendalc'h ha gant kuzul-kêr Blessington. Divodet e vo ar C'hendalc'h diouzh ar Sadorn vintin. An danvez da vezañ studiet a-hed ar sizhun a zo : Ar sonerezh er broioù keltiek : an amzer da zont. Ouzhpenn ar prezegennoù, an divizoù, hag ar bodadegoù diouzh an noz, e vo div veaj dre ar vro, unan o padout un devezh leun, unan all o padout an endervezh hepken : ar veaj kentañ a gaso an dud da g-Kells, Rathcarn ha Maynooth ; an en beaj a gaso anezho da Glendalough.

Meur a zoare a vo da vezañ lojet ha maget e Blessington. Tu a vo da vezañ degemeret en Downshire House Hotel, a zo un ostaleri eus ar Renkad A, da lavarout eo n' ouzon pet " steredenn " dezhi met sur un niver mat anezho ! En ostaleri-se e kousto ar sizhun 20 lur sterling. A-hend-all, tu a vo da vezañ lojet e tiez all, eus an doare " Bed and Breakfast ", gant ar predoù kreisteiz ha noz en Downshire, evit 18 lur sterling ar sizhun.

A-hend-all, ur priz izeloc'h c'hoazh a vezo graet evit an dud yaouank, o lojañ dindan teltennoù. Ret eo d' an dud yaouank o defe c'hoant da vont kas o anv da b-Per Denez : diouzh o niver e vo aozet an degemer. Soñj sekretourien Skourr Iwerzhon a oa goulenn teltennoù eus an arme. Mat e vefe dezho gouzout niver ar re yaouank a zeuio, hep re zale.

Sur on e vezo plijus ha dedennus ar C'hendalc'h Keltiek en Iwerzhon. Mat e vefe kaout eno un niver vat a Vretoned, rak er bloavezh goude e vezo ar C'hendalc'h e Breizh, en Naoned, ha pouezus e vo ober bruderezh e-touez ar Gelted all.

Evit lakaat an anv da vont da Gendalc'h Iwerzhon, skrivañ mar plij da : Per Denez, Ri, Ploare, 29100 Douarnenez.

Emsav Etrevroadel Skolioù-Uhel ar Bobl - International Folk High-School Movement

Brudet eo Emsav Skolioù-Uhel ar Bobl e Skandinavia. Gouzout a reer pegement a zleer dezho e-keñver stourm broadel ha stourm kevredigezhel : a-drugarez dezho o deus gallet ar broioù skandinaviat lakaat da dalvezout ur socialistiezh o toujañ ouzh an demokratelezh. An Dr Noelle Davies, anavezet mat e Breizh evit ar skoazell he deus roet a-hed ar wech d' ar Vretoned, a zo brudet ivez evit he labourioù diwar-benn ar skolioù-uhel pobl e Skandinavia. Un ti he doa prenet, gwechall, e Kembre, evit sevel, gant he gwaz, an Dr D. J. Davies, ur skol-uhel evit pobl Kembre. N' eo ket deut an dra da vat, met abaoe un nebeut bloavezhioù, e vez aozet gant an Dr Noelle Davies hag he c'hevredigezh, skolioù-hañv a vez

bodet, alies-tre, er broioù keltiek. Er bloaz-mañ e vo graet ar skol-hañv-se en Exeter : tennañ a raio danvez ar skol da Gernev-Veur. Eus an 19 a viz Gouere betek an 28 e pado ar skol : dalc'het e vo e Skol-Veur Exeter hag e saozneg e vo ar prezennoù hag an divizoù.

229

Setu amañ roll ar prezennoù pouezusañ : Istor Devon ha Kernev-Veur, gant an Ao. T. Eurof Walters. - Ar skrivagner Thomas Hardy, gant an Ao. E. Lyn Rees. - Douaroniezh ha douarouriezh Devon ha Kernev-Veur, gant an Ao. John Perkins. - Europa er bloavezhioù dek-ha-tri-ugent, gant ur c'hannad e Parlamant Breizh-Veur. - Lec'h ha labour ar Sindikadoù er Gevredigezh a-vremañ (diviz). - Ar vuhez e Kernev-Veur, gant Ann Jenkins.

Diouzh an noz e vo abadennoù dañs, kanaouennoù, c'hoariva, hag all.

Priz ar skol-hañv (boued, lojeiz, kentelioù ha pourmenadennoù) a zo 28 lur sterling, hag ouzhpenn 3 lur sterling da vezañ paeet pa lakaer e anv (an 3 lur-se forzh penaos ne vezint ket daskoret). Ret eo en em enskrivañ ar c'hentañ ar gwellañ, evit se skrivañ da b-Per Denez, R., Ploare, 29100 Douarnenez. Ur yalc'had (unan hepken) 20 lur sterling a c'hell bezañ roet.

Tro Breizh Alan Stivell

E-pad miz Mae en deus kanet Alan Stivell e 14 kêr a Vreizh dindan un deltenn vras enni 3.000 plas. Lod a savo klemm ouzh ur seurt stumm arvest, gwell ganto gwelout ar c'haner o reiñ e abaden dirak un " dibab a re c'hlan ". Koulskoude, Stivell n' eo ket un trubard, ur bruder ne lavaran ket. Kanañ a ra e brezhoneg ha setu brezhoneg war blasenn gêr. Hag ouzhpenn, meneget en deus ar c'haner meur a wech pezh a venne ober :

- Tizhout ar bed gant ur sonerezh nevez, anezhañ e doare ur gevredigezh vreizhat da zont.

- Reiñ lañs da stummoù bruderezh all, evel ar c'hoariva pe ar fiñvskeudennerezh.

Ur menoz uhelek eta. Hogen anavezet eo bremañ Stivell e kalz a vroioù. Brassens hag eñ o deus gwerzhet ar muiañ a bladennoù e Bro-C'hall e 1972, ha ne gont ket Bretoned hepken e-touez e estlammerien.

Chom a ra tost d' an hengoun e-keñver ar c'han pa zeu gantañ da skouer " marv eo ma mestrez ", tra mar deo ar binvioù-ambrougañ modern a-grenn. Kemer a ra e donioù e gwerinoniezh ar broioù keltiek. Hep dale moarvat e krouo e demoù dezhañ e-unan, hag ur ganaouenn skoüs a-walc'h en deus savet nevez 'zo " Brezhoneg 'raok " he zalbenn.

An arvest-mañ a viz Mae a oa nevez darn vrasañ e zanvez. Embannet eo tost da vat war ur bladenn, nevez ivez evel just. He zalbenn " Chemins de terre " a zo-eñ un arouez ouzhpenn.

Abaoe daou vloaz, lañs a zo gant ar sonerezh keltiek, gouest da leuniañ bremañ salioù bras a arvesterien e Pariz. Souezhus eo zoken gwelout ur vro vihan evel Breizh, kabestret start c'hoazh, mastaret he sevenadur abaoe kantvedoù, o c'hened ur seurt eost. Lod a lar n' eus eno nemet ur c'hiz ha na bado ket. Marteze. Hogen ma 'z eus kalz tud o labourat gant kred, o vennout krouiñ war dachenoù liesseurt, e vezo c'hoazh efedoù souezhus. Digoret e vint, ar skluzioù bras.

230

Bezeta vezo, ne vo ket ankounac'haet gant arvesterien miz Mae skeudenn Stivell o seniñ " Kimiad " war ar biniou-bras, en doare skosat glanañ, dindan liv gwer fosforek al luc'hvannerien en ur aergelc'h a voged hag a ziduamant strolladel.

'Benn goulou-deiz, barzhonegoù gant Erwan Evenou

Erwan Evenou zo ur stourmer politikel en em ginniget evel kannad er Faoued e-kerz ar mouezhiadegoù diwezhañ. En e zastumad barzhonegoù ec'h adkaver prederioù ar stourmer. An 53 fajenn-mañ zo rannet e teir lodenn. En hini gentañ " Gwerz an diankad " en deus hiraezh da Dan Meur e yaouankiz. Un arvar melkonius a gaver er barzhonegoù-mañ :

O Tan Meur va Yaouankiz, pelec'h out bet sac'het ?

met ives ur stourm a-enep d' an dic'hoanag-se :

Redek a rin adarre war-lerc'h da sterenn veur,
betek an deiz ma 'z kavin e kildro va hent.

Talbenn al lodenn diwezhañ avat a zo arouezius " Goulou-deiz ". An distro d' ar vro ez eo ha marteze d' ar " sterenn " adkavet. Ar barzhonegoù-mañ zo engouestlet en un doare splannoc'h. " Plouk " a zo e-touez ar re fromusañ :

Ha dirak ar gwenn-ha-du bihan
a-ispilh 'us d' ho kwele
Ali, Mohammed, Ahsen,
pa vagit ur soñj bennak evit va bro,
soñjit ivez
eñ 'zo Arab ivez.

Anavezet en doa en e yaouankiz an Arabed er mare ma oant sklaved :

Ha bremañ, pa n' oc'h ket mut,
me 'zo manet c'hoazh,
rak va Job! 'zo laosk hag amoet.
C'hoant am eus da vout Arab.

'BENN GOULOU-DEIZ, gant Erwan Evenou, rakskrid gant Yann-Ber Piriou : 5,00 lur.
U.D.B., B. P. 713, Roazhon - c.c.p. 2365-78 Rennes.

Istor Hañveg

" Istor Hañveg ", ar c'hentañ istor kumun embannet e brezhoneg, gant hor mignon Herve ar Menn a dle dont er-maez e miz Mezheven. Un oberenn a feiz e tonkadur hor yezh ez eo. Al levr 230 pajenn (14 X 21) ennañ a vo gwerzhet 26 lur hep mizoù-kas betek an 30-9-1973. Kas an arc'hant da Herve Le Menn - c.c.p. 647 04 Paris.

231

Priz Armor

An dimezell Saint Gal de Pons a zo a paouez resev evit he barzhonegoù **Gwiadenn ar Vuhez**, embannet war niverenn 15 " Studi hag Ober ", priz Armor roet evit ar wech keñtañ. Hor gwellañ gourc'hemenoù a gasomp dezhi. " Studi hag Ober " Keresperzh, 22 Louaneg.

Unvaniezh Speredel Vreizh

Bodadeg Unvaniezh Speredel Vreizh a zo bet dalc'het e Kemper-Gwezeneg d' ar c'hentañ a viz Mae. Eñvoret eo bet trede kantved ganedigezh ar breizhat Grignon Monforzh ha war-Ierc'h eo bet lidet oferenn deiz-ha-bloaz an Aotrou Kalvez. Goude an oferenn eo bet benniget ar monumant a zo bet savet en e eñvor.

Eire Ghlas

" Eire Ghlas " (Iwerzhon c'hlas) a zo anv un diskouezadeg diapozitivoù a dremen er salioù bihan amañ hag ahont e Breizh. Al luc'hskeudenner, Per Gouchouron, ur c'hernevad eus Kameled, a gas ac'hanomp evel-se en tu all d' ar mor e bro ar Ouezeled.

Al lodenn gentañ a ziskouez kened dispar Kornog ha Kreisteiz ar vro : gourenez Dingle, Kerry, porzh-mor Cork, al lanneier divent, al lennoù skoachet er c'hlasvez, ar menezioù gant o zropelloù deñved, an inizi kollet e sioulder an donvor. Treuziñ a reomp ur gêriadenn, krediñ a-walc'h a rafemp en em gavomp e Breizh-Izel, ugent vloaz 'zo : buhez sioul ar maezioù, an natur manet naet met goullonderet eus he zud, setu re alies stad ar Gaeltacht : bro, tud ha yezh o vervel tamm-ha-tamm.

An eil lodenn a gont istor Iwerzhon ha dreist-holl hini Zulenn. Savadurioù " O'Connell Street " a zegas da soñj n' eo ket ken pell-se Dispac'h Lun Fask.

Plijus-kenañ eo labour Per Gouchouron. Dibabet mat eo ar sonerezh, tro-ha-tro an " Dubliners ", ar " Chieftains ", pe c'hoazh ragach ar maouezed enrollet, o werzhañ o frouezh, e-pad ar marc'had. Ar brezhoneg a zo aes da gompren ha traoù fentus a vez klevet zoken bep an amzer. Petra a vank neuze ? Evidon, ar bobl iwerzhonat. Ne weler ket kalz anezhi. Mat 'vije bet, d' am soñj, he diskouez en he buhez foran o labourat koulz hag o riboulat en tavarnioù diaoulek.

Diwezhañ ali a ro deomp an oberour a zo mont ar buanañ posupl da Iwerzhon rak an douristelezh a gresk kement ma c'haller meizañ e c'hoarvezo du-hont ar pezh a c'hoarvez hiziv e Breizh : gwerzh ur vro ha distruj he ene.

D. P.

232

Al liderezh e brezhoneg : lennadennoù pemdeziek

Deuet eo er-maez, embannet gant Barr-Heol, an holl lennadennoù pemdeziek evit ar bloavezhioù par hag ampart. Evit pep bloavezh ez eus peder levrenn, 100 pajenn bennak pep hini : priz 7,00 lur pep levrenn.

Pep bloavezhiad klok : 25,00 lur.

Kas an arc'hant war-eeun da Revue Barr-Heol, c.c.p. 24M-53 Rennes.

Skingomz ha Skinwel (Abel Omnes)

Soñj hoc'h eus moarvat hor boa lavaret ar miz diwezhañ e c'houlennemp digant an tri c'hannad, Ar Foll, maer Sant-Brieg, Ollivro, maer Gwengamp, ha Bourdelles, maer Louaneg, pouezañ war an Ao. Conte, pennrener an O.R.T.F. evit ma asantfe gwellaat un tamm bennak hor skingomz hag hor skinwel. Soñj hoc'h eus ivez,

marteze, hor boa embannet respont an Ao. Conte da vaer Gwengamp, ha merzet hoc'h eus, sur, ne zegase ar respont-se netra a-nevez. Keloù ebet betek-hen digant an Ao. Ar Foll ha Bourdelles. Ma, setu m' emañ hor c'heneil Charlez ar Gall, o paouez reiñ da c'houzout e vo hiviziken skingaset div wech skinweladenn " Breizh o vevañ ", unan d' ar merc'her da 13.30 evel boaz hag unan all d' ar sadorn da 12.30.

An dra-mañ, daoust ma n' eo ket ur wellaenn dispar, a raio memes tra kalz a blijadur d' ar vrezhonegerien, rak kalz anezho, abalamour d' o labour, ne c'hellent ket chom da sellout ouzh ar skingasadenn-se ha setu bremañ e c'hellint gwelout anezhi e-pad o fred d' ar sadorn da greisteiz. Kemenn a ra ivez Charlez ar Gall, en tu-hont da se, e vo bremañ filmoù " Breizh o vevañ " e liv, ar pezh a vo plijus-tre d' ar re o deus un ardivink diouzh-se.

Trugarekaat a reomp an holl re o deus skoazellet evit lakaat pennadurezhioù an O.R.T.F. d' ober ar c'hammedoùigoù-se war-raok.

Un dra a c'houlennomp start digant hol lennerien eo kas dimp, an aliesañ ar gwellañ, burutelladennoù diwar-benn ar skingasadennoù hag ar pezh a garfent dreist-holl gwelout er programmoù. Embann a raomp ho lizheroù gant ar brasañ plijadur. Liseidi eus skolioù Sant-Brieg o deus prometet dimp pennadoù bihan evit " Dihun " hogen, evel just, gouzout a reomp dre hir skiant-prenañ petra eo ar promesaoù graet a-raok ar vakañsoù gant ar re yaouank, hag hegreidik a-walc'h e chomomp !

BREIZ O VEVA.

Hervez ar pezh hon eus klevet en deus hor c'heneil Per ar Flao, graet ur c'helskrid eus ar re vravañ diwar-benn pesketaerezh ar stoklosted (anvet c'hoazh " chevretez ") ha sur eo o devo bet an arvesterien ar brasañ plijadur o welout ar film-se war ar skramm bihan.

Tregeriz a gas o gourc'hemenoù gwellañ d' hor mignon Broudig evit ar c'helskridoù er parrezioù Koadaskorn hag ar Chapel Nevez. Laouen tre ez int o welout n' int ket bet ankounac'haet evit mat, ha spi o deus o devo tro da welout ar c'hantreer-se aliesoc'h en o bro.

233

OFERENN VREZHONEK GOUEL AN HOLLSENT.

N' eo ket alies e vez klevet er skingomz oferenoù lidet e Bro Dreger, ha setu ez omp laouen o reiñ da c'houzout ez eo bet karget an Ao. Floc'h, person Louaneg, da aozañ hini an Hollsent.

Skingomz ha Skinwel, 18 bis, straed Duguay-Trouin, 22000 Sant-Brieg

AN DARVOUDOÙ E BREIZH

Disoc'hoù ar votadeg evit ar Parlamant gall e Breizh d' ar 4 a viz Meurzh 1973.

Disoc'hoù ar votadeg a zellezfe ur studiadenn pizh ha klok evit diskouez endroadur ar menozioù politikel e Breizh, hogen ne roimp amañ nemet un nebeut evezhiadennoù hollek a-raok dezrann disoc'hoù ar strolladoù politikel breizhat.

Setu an arvezioù pouezusañ :

1) Ar strolladoù a-du gant ar gouarnamant, an UDR hag ar strolladoù kevreet ganti (RI, CDP) (1) dindan an arouez URP, a zeu atav e penn ha gounezet o deus mouezhioù ma keñverier gant disoc'hoù mouezhiadeg 1967 : 42,8 % e 1967, 47,3 % e 1968, 46,8 % e 1973. Gwelloc'h eo keñveriañ disoc'hoù 1973 gant re 1967, rak re 1968 a oa re dibar (2)

2) Ar gounid-se zo bet graet diwar goust an Tu-Kreiz ha kenderc'hel a ra hemañ da gilañ : 25,8 e 1967, 15 % e 1963. Rannet eo bet e gwirionez an Tu-Kreiz, ul lodenn eus e gannaded o vezañ aet a-du gant ar gouarnamant, o heuliañ skouer Pleven. Hogen ar wech-mañ darn eus ar voterien o deus dilezet an Tu-Kreiz evit ar PS (Strollad Sokialour).

3) Lusk war-raok ar PS zo hep mar ebet darvoud pouezusañ ar votadeg ; savet he deus tregantad he mouezhioù eus 9,3 % e 1967 da 17,1 % e 1973, dont a ra bremañ a-raok ar PCF. Voterien nevez a zo deuet eus an Tu-Kreiz dreist-holl hogen darn a zo bet gounezet ivez diwar goust ar PCF ha diwar goust ar PSU.

4) Kilet en deus ar PCF : 15,4 % eus mouezhioù e 1973 e-lec'h 17,1 % e 1967. Kilet en deus ar PSU ivez (3,2 %), daoust m' en deus miret sez Sant-Brieg.

Merket eo bet ar votadeg dre niver an danvezioù-kannad kinniget gant ar strolladoù breizhat : 26 gant Strollad ar Vro ha 5 gant an UDB ha ret eo menegiñ ivez Gi Caro, kinniget gant ar PSU. Setu, evit pep departamant hag evit pep pastell-vro, niver ha tregantad ar mouezhioù roet da zanvezioù-kannad ar strolladoù breizhat.

234

Departamant ha pastell-vro

	Niver ha mouezhioù eztaoiet			
	SAV	%	UDB	%
Penn-ar-Bed				
1. Kemper	56.152			
J. Le Calvez, (SAV)	1.622	2,88		
2. Brest (kêr)	70.211			
R. L'Hostis (UDB)	1.769	2,51		
A. Tanguy (SAV)	605	0,96		3,48
3. Brest (maezioù)	54.799			
P. Cadalen (SAV)	1.697	3,09		
P. Dorval (UDB)	1.621	2,88		5,98
4. Montroulez	47.562			
J. Nicot (SAV)	611	1,29		
Danvez-kannad ebet er pastelloù-bro all (5, 6, 7, 8)				

Aodoù-an-Hanternoz

1. Sant-Brieg	72.129			
G. Gautier (SAV)	2.274	3,15		
2. Dinan				
Y. Fouéré (SAV)	1.365	2,57		
3. Loudieg	48.746			
A. Chapel (SAV)	797	1,64		
G. Caro (PSU)	5.738	11,7		
Danvez-kannad ebet er pastelloù-bro 4 ha 5.				

Mor Bihan

1. Gwened	57.885			
R. Derrien (SAV)	1.452	2,51		
2. An Alre	43.982			
P. Jenot (SAV)	1.649	3,74		
4. Plouarzel (Ploermel)	36.558			
L. Camus (SAV)	357	0,97		
5. An Oriant	56.275			
A. Raude (SAV)	719	1,28		
6. An Henbont	43.872			
E. Evenou (TJDB)	1.400	3,19		
H. Pungier (SAV)	766	1,74	4,94	
Danvez-kannad ebet e pastell-vro 3 (Pondi).				

Il-ha-Gwilun

1. Roazhon	62.486			
------------	--------	--	--	--

P. Coué (SAV)	1.517	2,44
E 1968 L. Bothorel, " Front Breton " en doa bet 1.157 mouezh)		
2. Roazhon-Su (Monforzh) 79.215		
R. Gorvan (SAV)	1.020	1,28
J. David (UDB)	845	427 2,34
3. Gwitreg 39.523		
B. Macé (SAV)	468	1,18
4. Redon 39.797		
P. Guerinél (SAV)	1.197	3,01
5. Felger 42.132		
H. Vasseur (SAV)	1.782	4,23
6. Sant-Malo 64.851		
Annaig Roy	1.674	2,33

Liger-Atlantel

1. Naoned 65.642		
J.-C. Rivallain (SAV)	1.005	1,53
2. Naoned 52.318		
Lionel Divard (SAV)	504	0,96
A. Tassel (UDB)		1,06 0,81 1,78
3. Naoned 52.839		
Lusian Divard (SAV)	539	1,19
4. Ansiniz 61.733		
It. Surzur de Lobel (SAV)	965	1,56
5. Kastellbriant 39.847		
It. Gouez (SAV)	2.549	6,39
6. Sant-Nazer 58.415		
A. Le Fur (SAV)	1.118	1,91
7. Gwerann 44.048		
M. Barre (SAV)	1.156	2,62
8. Penbo 51.093		
P. Manac'h (SAV)	758	1,48

236

Departamant	niver ar pastelloù-bro		SAV danvezioù-kannad Mouezhioù		UDB danvezioù-kannad Mouezhioù	
					UDB+SAV %	
Penn-ar-Bed	8	4	4535	2	3390	3,46%
Aodoù-an-Hanternoz	6	3	4436	-	-	2,54%
Mor Bihan	6	5	4943	1	1400	2,65%
Il-ha-Gwilun	6	6	7658	1	845	2,57%
Liger-Atlantel	8	8	8594	1	427	2,11%
Holladoù	34	26	30166	5	6062	2,59

Mouezhioù eztaolet e 34 pastell-vro : 1 397 337

Mouezhioù dre zanvez-kannad

- SAV : 1160 (evit 26 danvez-kannad)

- UDB : 1212 (evit 5 danvez-kannad)

237

Ar sifroù hollek a seblant bezañ izel da gentañ, hogen evit strolladoù nevez o kinnig danvezioù-kannad evit ar wech kentañ, an disoc'hoù n' int ket fall, dreist-holl pa soñjer en diouer a vruderezh e meur a bastell-vro ha pa soñjer e oa bannet ar strolladoù breizhat diouzh ar skingomz hag ar skinwel. Ar PSU, krouet abaoe pell ha diazezet mat, n' en deus bet nemet 3,6 % eus ar mouezhioù eztaolet e Breizh. SAV, da skouer, a zeu a-raok ar PSU e Felger hag en Orient.

Ma vije bet kinniget gant SAV hag an UDB danvezioù-kannad en holl pastelloù-bro Breizh, bez e c'heller martezeañ o dije bet da nebeutañ 50.000 mouezh.

Jedet eo bet a-us tregantad ar mouezhioù aet da SAV ha d' an UDB war un dro. N' eus ket kalz a ziforc'h etre an departamantoù, nemet e Penn-ar-Bed (3,46 %)

hogen en departamant-se n' eus bet danvezioù-kannad nemet e 4 pastell-vro diwar 8, tra m' en doa SAV kinniget danvezioù-kannad en holl pastelloù-bro Il-ha-Gwilun ha Liger-Atlantel. Diaes eo gouzout pet mouezh a vije bet roet d' ar strolladoù breizhat e pastelloù-bro all. N' eo ket reizh neuze keñveriañ 29 gant 44 ha 35.

Pouezus eo merkañ bezañs un emskiant vreizhat dre Vreizh a-bezh ; ar pastelloù-bro e-lec'h m' en deus bet SAV ar muiañ a vouezhioù a zo a-hed an harzoù : Kastellbriant (6,39 %) ha Felger (4,23 %) ; an tregantadoù tizhet e pastelloù-bro Ansiniz ha Penbo a zo uheloc'h eget ar re tizhet en Oriant hag e Montroulez. E pep kumun eus al Liger-Atlantel, da skouer, ez eus bet tud o votiñ evit SAV.

Ledanoc'h eo, a dra sur, levezon ar menoz breizhek hogen bez ez eus kalz tud o deus c'hoantaet votiñ " talvoudus " pe dibab etre kleiz ha dehou. E-doug un diviz skignet war " France-Inter " e derou miz Meurzh e oa goulennataet tud war ur straed en ur gêr a Vreizh (anv ebet) ; goulennet e oa outo : « Petra a soñjit eus ar strolladoù emrener, daoust hag e votot evito ? ». War pevar den goulennataet, daou o doa en em ziskleriet a-enep, unan o lavarout zoken gant imor e oa un dra " folklorel ", hogen an daou all a oa a-du, ur vaouez o respont : « Kompren a ran mat anezho, hogen ne votin ket evito » ; ur paotr o lavarout : « An dud dre amañ a zo kentoc'h a-du ganto, hogen ne votint ket evito ». Ret eo menegiñ he doa bet an UDB 4,38 % eus ar mouezhioù e Brest evit ar votadeg kuzul-kêr, ha 11,5 % en Alre. Ar pezh a ziskouez e votfe disheñvel an dud ma vefe dibabet kannaded evit ur Parlamant breizhat.

P. P.

(1) Mirout a reomp anvioù gallek ar strolladoù politikel.

(2) An tregantadoù a gaver amañ evit 1967 ha 1973 a dalv evit 4 departamant ar Rannvro Steuñvel Breizh, hogen heñvel eo bet an endroadur e Liger-Atlantel (kv. " Le Monde ". 8-03-73).

238

G. S. - Pennadoù diwar-benn ar mouezhiadegoù zo bet embannet war " Breiz " (Ebril 1973), " L'Avenir de la Bretagne " (Ebril 1973) ha " Le Peuple Breton " (Ebril 1973). Diglok eo pep hinl anezho, hag hini ebet anezho ne ro an holl sifroù ha tregantadoù ; disheñvel eo a-wechoù ar sifroù diouzh ar re a roomp amañ ; resisaat a reomp hon eus kemeret da ziazez ar " mouezhioù eztaolet " en holl pastelloù-bro e-lec'h ma oa danvezioù-kannad breizhat : hevelep tra evit an holladoù.

Bro-Vontroulez.

Kaoz a zo eus dilojañ Palez ar breujoù e Montroulez : " Tribunal de grande instance " ha lez-varn " Correctionnel ". N' eur ket sur c'hoazh : ur pennad a zo bet war ar gelaouenn " Le Monde ". Divizet e vefe bet dilojañ palezioù Dinan ha Montroulez. Ne c'halle ket c'hoarvezout evel just keit ha ma oa Pleven kannad Bro-Zinan.

Emañ dres ti-kêr Montroulez o paouez divizout reiñ arc'hant evit staliañ mat al lez-varn. Displijet-bras eo bet ar mererezh gall e Pariz. Ne ouzer ket perak. Aes eo kompren e vo plas a-walc'h er palez bras ma vez dilojet.

Mar deo gwir ez eo bet divizet kement-se e vo ret a-benn nebeut da dud Karaez, Lanneur ha Montroulez mont da Vrest e-lec'h mont da Vontroulez. Chalus-tre e vefe an darvoud-se ken evit ar boblañs hag e-keñver armerzh ar c'horn-bro. Diskouez a ra splann, dreist-holl, n' eo ket bet goulennet ali ar boblañs, met divizet gant burevioù Pariz.

Betek bremañ n' eo ket bet lavaret e oa faos ar c'heloù, pezh a ro da soñjal ez eo gwir. Ne seblant ket tud ar vro asantiñ tamm ebet hag e vo trouz bras emichañs ma vez divizet da vat.

L. K.

Keleier eus Sant-Brieg.

E Sant-Brieg eo bet gouestlet da Vreizh miz Mae a-bezh. Eus an 2 d'an 31 e voe klevet ha gwelet prezegennoù, abadennoù a bep seurt, pep tra o tennañ da Vreizh dre ar politikerezh, an ekonomiezh, an arzoù, ar folkor, al lennegezh, ar vouedoniezh, h.a.

Skrivagnerien - J. Chardronnet, Y. Brekilien, Y. B. Piriou, P. Keineg, A. Guel, Y. Fouere, h.a. - a zo deut da sinañ o levrioù ha da gomz gant o lennerien. Ar ganerien vrudetañ - Glenmor, Alan Stivell, An Tri Yann, Kanerien Bro-Leon - o deus leuniet ar salioù.

E-pad ar miz a-bezh ez eus bet un diskouezadeg levrioù e brezhoneg pe diwar-benn Breizh, er Centre Culturel, straed Jouallan. Embannadurioù Al Liamm a oa diskouezet brav ouzh gwerenn ar stal ha war banelloù bras en diabarzh, ha niverus an dud a zo deut da welout an diskouezadeg-se.

Ouzhpenn-se e voe un abadenn varzhoniezh e-lec'h ma voe displeget testennoù e galleg (oberennoù Villiers de l'Isle-Adam, T. Corbière, P. Keineg) hag e brezhoneg.

239

Evit ar re-mañ e voe displeget kaer ha fromus gant Anna Kervella ha Genovefa Broustal barzhonegoù Anjela Duval, R. Hemon, M. Glanndour, Jakez Riou, Youenn Gwernig, Ivona Konan.

Plijet-kenañ e voe ar selaouerlen - ouzhpenn 50 anezho ar pezh a zo brav evit un abadenn varzhoniezh - o klevout mouezhioù an 2 blac'h yaouank o deus diskouezet evel-se e oa bev-buhezek al lennegezh vrezhonek.

Nevez 'zo ez eus bet badezet straedoù nevez e Sant-Brieg.

Gant plijadur hon eus gwelet e oa bet lakaet 6 eus ar straedoù-se dindan anvioù ar skrivagnerien : Emil Ernod, Renan Ar Rouz, Erwan Vertou, Loeiz Tiercelin, Viktor Segalen ha Leon Dubreuil, ha unan all dindan anv Aberystwyth ar gêr gembreat gevellet gant kêr Sant-Brieg.

Hor gourc'hemmennoù da guzul-kêr Sant-Brieg evit e venoz.

AL LIAMM 159

TAOLENN

An divroad gant PER DIOLIER	243
Teñzor gant ERWAN KERVELLA	245
Peder mogedenn gant MAKOTO NOGUCHI	247
Tourist-dre-heg 1945 gant KIVIJER	251
Du-mañ gwechall gant HERVE AR MENN	268
Ar prizoniad gant JORD KLER	274
An tri oan gant Liam O'FLAHERTY (tr. Ani Kerembelleg)	288
Ar Suis Bras gant MAODEZ GLANNDOUR	293
Istor Breizh (kendalc'h) gant LA BORDERIE (tr. R. Hemon)	301
Skeudenn, gant TUDUAL HUON	311
Notennoù	312

An divroad

Abaoe ken pell all 'm eus kuitaet ar gêr,
 tiez gwenn va c'hêriadenn vihan,
 n' ouzon ket piv a zo bremañ
 unkaner e laz ar barrez.

N'ouzon ket mar deo fresk atav
 dour stivell ar peder amzer
 'oa o sourral tost d' ar maner.

Daoust hag e ra ar brosesion
 tro an iliz deiz ar pardon
 gant banieloù ha kan brezhon
 ha ma werzh c'hoazh an ispisour
 kouignoù loustig eston o saour ?

Daoust ha ma tañs ar re yaouank
 war blasenn grec'h goude 'n ofern
 ar piler-lann, ar c'havotenn
 ha ma toug ar maouezed kozh
 war o fenn ar chigoladenn ?

Dalc'het évez marc'had ar c'hezeg ?
 Ha gwelout a reer o redek
 ar gouerien gant o loened
 evit diskouez o farfeted ?
 ha da c'houde trouz ar c'hilhoù
 hopet drant ha rust an taolioù,
 leoneg leun ar genouioù ?

N'ouzon ket ma lar ar c'hestour
 en iliz d' an donezonour :
 " Doue ra bardon' d' an Anaon ".

244

N' ouzon ket piv a zo person,
 n' ouzon ket piv a zo fabrik,
 n' ouzon ket piv a zo noter,
 pe anv 'n deus ar baraer,
 abaoe ken pell all 'm eus kuitaet ar gêr.

St-Servan, 15-4-73.

TEÑZOR

Kurunoù kousket war loar ar perlez gwenn
 morianed o gwafoù hir
 kantig an houl
 delienn c'hleb hag orañjez er mizioù du

daeloù o ruilhal war diweuz ar foeter-hent
koadoù ar maen roz
kilpennerezh un ardamez dianav
ster e hun un den hep huanad
kizhier liesliv roueed e kreñvlec'hioù ar grennamzer
kridienn plusk un aval
lusk ur c'harr-nij dihentet
trizek gwenodenn o pellaat ar gwalleur
pal o foennat ar gwez krenus
taniou dic'houlou faoutet en noz
chuchuenn
kestell geot krapet war daoulagad ar c'havr-noz
gouelioù o tarnijal er c'hregin gwak
sukr gantin
meulgan touellus ur yourc'h dispourbellet e vlazioù
eur gentañ chal ar mel
skin berv al limestra
plom devet e palv ar c'hanaouennoù gouez
tresadennoù ganet eus ed ar follentez
derzhienn un erer digabestr
pedenn
penn-ahel ur spurmant digenvez
koad e roudennoù distrob
goulc'her al linad alaouret
kan ar glujar
peulvan an iliz-veur
toaz leskidik kenweet er yeun
gousav gwer-glas an avel
rigedag ur c'honikl pennfollet
246
rakwelour tenerus an douar diboell
ograoù
ripiou eskellek o plavañ war an erc'h
ijin korfoù gwenn e puñs ar c'hambreier
c'hwerventez un emgann dianket o kizellañ ur vorenn
tro-vrec'h ur vorganez gwatemaltek
kur diehan ur morhoc'h
mouchig-dall an olifant blevek
ramz armerzh
mergl lent un oristal dibennet

va zeñzorioù...

1973.

247

Makoto NOGUCHI

Peder mogedenn

-I -

Bevañ er bed,
Mervel er bed :
Brav eo,
Gant al labour.
Setu ur c'hoad kaer :
Ar bed bras,
Hini an dud,

Hini an dud a zo o vevañ warnañ.
Na vezit ket skuizh
Gant douar un dornad tud
Peogwir n' eo ket marv c'hoazh ho loened.
Setu arm an drouklazher...
Na glaskit ket
Al levenez en dremmwel ;
Sellout a ranker e-harz
An diskejenn a zo o tarzhañ.
Ret eo dezhi bezañ gounezet
Gant holl nerzh mab-den.

Mat, neuze, da lec'h all ez an.

248

- II -

Heuliañ un den
A zo steuziet :
Seblantout a ra din
Emañ va buhez o kregiñ
Pa glaskan un den
E-barzh kognoù bihan
Ar gêr-mañ, bras hag iskis,
N' he deus perzh dibar ebet,
N' eo bet biskoazh an hini
Am eus gwelet betek hiziv.
Pelec'h emañ ?
Posubl-tre 'vefe e sell-eñ ouzhin
Dre ur prenestr er savadur-mañ ;
Eñ a sell ouzhin,
Me, n' ouzon ket.
Ret 'vefe din skeiñ war an holl zorioù en holl savadurioù...
...PE
Goulenn ouzh ar polis.
...NANN
Fellout a rafe din e glask va-unan
El lein pe e-barzh ar c'hav
Er savadur e-lec'h m' emañ.
Klask an den kollet
Eo va micher.

249

- III -

A-daol-trumm e tihunan
War un draezhenn distro.
Va-unan emañ.
Pegen brav ar gweledva !
Gant daoulagad skuizh
E sellan outañ.
Kreskiñ a ra trouz an tarzhoù.
Gwaskañ ' ra muioc'h-mui warnon.
Tec'hout a glaskan
Bremañ,
Un den bennak a garfen kaout tost ouzhin,
Ur plac'h yaouank
Ganti kaerder ar c'hlanded
Warni pezh dilhad ebet.
Bec'hiet on gant he c'hened.
Ne c'hellan fiñval tamm ebet.
Sellout a ra ouzhin
Ha mousc'hoarzhin goustad
Ha mousc'hoarzh-mañ a zo an hini a glasken pell 'zo,

An hini a zo ret din kaout evit bevañ.

250

- IV -

An den zo kouezhet eus lein ar savadur.
Petra en deus gwelet ?
Gwelet en deus an elfennoù
Ar muiañ tre ennañ.
A-walc'h ' oa an amzer tremenet o kouezhañ
Evit gwelout kement-se.
Ha pa gavas e brederouriezh
E teuas da vezañ ludu evit ar plant.
Ar marv e-barzh an ifern : ifern ar marv.
Aon rak ar marv
Aon rak ar vuhez ivez
Amezeg ar vuhez eo ar marv
Prederenn hag oberenn.
Mervel gant ar brederenn !
Mervel gant an oberenn !

Kanit ! kanit ! kanit ! kanit !
Kanit ! kanit betek ar marv.
Kanit ! kanit da virviken.

Tourist-dre-heg 1945

Kivijer eo an anv brezel am boa kinniget d' am c'hadvan pa voen degemeret el Lu. Hogen re vreizhek e kavas ar c'hadvan an anv-se ha peogwir, ivez el Lu Brezhon, e rank ar gour (*) soublañ d' e ofiser, n' on ket anavezet dindan an anv a gemeran hiziv. Kinnig a ris unan all a voe degemeret diouzhtu, hag eñ koulskoude ken breizhek hag an hini kentañ. Met er c'hiz-se emañ an traoù ! Va anv brezel a zo berr ; n' en deus nemet ur silabenn. Bez' ez eo hini ul loen a vez kavet dre ar bed-holl : fellout a ra din menegiñ ur bronneg pevarzroadek daskirier. Trawalc'h eo evit ma vezin anavezet gant ar re o deus kerzhet d' ar paz ganin en ur ganañ *Mari Vastrouilh*, pe *War da Zremm*, dre straedoù Roazhon, Strassburg ha war hentoù ar C'hoad Du.

Lakaat a ran va zro da gregiñ e derou miz Mae 1945. Edomp neuze ur pennad mat en tu all d' ar C'hoad Du. A strolladoù bihan e voemp lakaet war hon hent. Ni a oa pevar. Hor pal dimp holl a oa distreiñ da Vreizh da gaout keloù eus hor familhoù, da c'houzout petra e oant deuet da vezañ. Tremen ar pezh a chome c'hoazh eus an talbenn ne voe ket diaes : chom a rejomp un nebeud eurvezhioù e beg ur c'hoad, dindan ar glav sklaset, ha pa soñjas dimp e oa tremenet an Amerikaned kentañ e-biou, e tilezjomp ar c'hoad. Tost alese e oa un hent hag, un tammig larkoc'h, ur gêriadenn. Eno e kavjomp Amerikaned all, tud ar gêriadenn ha labourerien estren, Gallaoued an darn vrasañ. Den ne daolas pled ouzhimp. Divizout a rejomp kenetrezomp e vije mat dimp en em gemmeskañ gant al labourerien, ar pezh a voe graet ; dizale e voemp c'hwec'h en hor strollad. E-pad un nebeudig devezhioù ez ejomp war droad, o tebriñ e-lec'h ma veze kavet da zebriñ hag o kousket e krevier saout, war ar c'holo pe ar foenn. En em zigareziñ a rae atav ar gouerien da vezañ divarrek da reiñ dimp gwelloc'h lojeiz eget ur c'hraou a zlee bezañ, emezent, " elendes kalt ". Met ni ne gavemp ket yen ar c'hrevier hag a-hend-all, er stad ma oamp ne c'hellemp ket bezañ re figus.

(*) An derezioù-karg el Lu a oa, o kregiñ dre ar penn izelañ : gour, kentour (= kentañ gour), kerrenour ha kadvan.

Un deiz, goude kreisteiz, setu ni degouezhet en ur gêr. E kreiz ar blasenn e oa daou pe dri garr-samm hag Amerikaned o kinnig, pe gentoc'h o reiñ urzh, d' al labourerien ha d' ar soudarded gall a oa o tistreiñ eus o c'hampoù, da bignat er c'hirri. Ni a bignas evel ar re all. Adalek neuze, me 'lavar deoc'h, ez eas buan an traoù. Treuzdouget e voemp d' ur champ dalc'het gant an Amerikaned. Ne chomjomp ket pell eno, un devezh marteze, trawalc'h evidon da welout e komprenen mat ar saozneg pa veze distaget fraezh : komandant ar c'hamp a sermonas ac'hanomp e saozneg evit ma taolfemp muioc'h a evezh ouzh an naetadurezh. Alese e voemp kaset larkoc'h, da Ludwigshafen, en ur c'hamp e dalc'h hon amezeien dostañ. Amañ, evel er c'hamp amerikan, ne chome ket an dud da louediñ rak ret e oa skarzhañ ar c'hamp evit reiñ lec'h d' ar repuidi all a oa o tont war hol lerc'h. Sirius e oa deuet an traoù da vezañ ; ret e oa dimp bezañ war evezh. Lakaet em boa va fri e " kombod " ar re n' o doa ket a baperioù dre ma oant bet laeret diganto, pe dre ma oant bet kollet en ur vombezadeg bennak pe devet en un tan-gwall. Evit an dud-se e veze graet un enklask betek en o c'humun c'henidik ha bez' e rankent chom er c'hamp betek ma vije echu an enklask. Va soñj kentañ a oa klask mont d' ar gêr evel-se hep ober implij eus ar paperioù faos a oa ganin evit gallout kemm va anv diwezhatoc'h, diouzh ezhom. Pa welis penaos e oa an traoù er c'hombod-se e ris evel an darn vuiañ : en em lakaat war ar renk er c'hombod all ha diskouez va faperioù d' an aotrounez ofiserien. Tremen a ris dirak un ugent bennak anezho ha dirak pep hini e rankis kontañ va istor : genidik e oan eus ar Gerveur hag edon o labourat en Oriant ; ur sadornvezh, o vont d' ar gêr, edon e diavaez gar an Alre p' en em gavas eno daou garr-samm alaman, gant soudarded ; e nebeud a amzer e voemp bountet, paotred all ha me, en

unan eus ar c'hirri-se tra ma vezemp atizet gant ar « schnell, schnell Mensch ! » Eus an Alre e voen kaset war-eeun da Wened ha goulentaet gant ar polis. Anat e voe d' ar polis diouzhtu ne oan-me netra en afer. Anzav a reas ar boliserien o doa faziet ha n' eo ket me eo edont o klask. Daoust da se avat e voen kaset da labourat da Vro-Alamagn. Ha setu. Meret em oa an istor-se e-pad ur pennad mat. Lavaret em boa d' an aotrounez ofiserien e oan dizemez, evel-se ne rejont ket a c'houlennoù din diwar-benn va gwreg. Seul verroc'h ar gevier seul aesoc'h da gontañ, a soñjen-me.

253

Echu ar goulennata e voe roet din ur follenn hent-houarn ha peadra da zebriñ en hent. Lavaret em boa e felle din mont da X, ur gêr tost da Lonkanezan e-lec'h, sañset, edo ur voereb din o chom. Un adres a ranken reiñ. Ne c'hellen ket reiñ va hini e Ki-ar-Berenn nag hini va zud e Ploue-ar-C'hastell : tapet e vijen bet diouzhtu ha ne felle ket din ober ar blijadur-se dezho. Er gêr m' am boa lavaret e chome va moereb ec'h anavezzen daou zen, kenderv ha keniterv pell d' am gwreg. Bez' e c'hellen kontañ warno avat evit kaout keleier eus ar gêr. Renket mat e oa bet an traoù gant pennoù-bras an adenvroañ evit tapout kement hini, evel don, hag en doa traoù da guzhat, betek e anv gwirion. Tapet e oan evel ur gelienenn en ur wiadenn-gevnid. Ne dleen ket bezañ gwall laouen en tren o tostaat ouzh Lonkanezan. Hep ehanañ e teue ar c'hoant din, pa oa deuet an noz, da ziskenn eus an tren pa dostae hemañ ouzh ur gar bennak, ha da c'haloupat goude-se dre ar maezioù ha kemer un tren boutin. Ya met kazi sur e oa evezhierien pe spierien en tren ; marteze ivez e torrfen va gar o tiskenn evel-se en deñvalijenn war piv 'oar petra ? Dont a reas an deiz. E pep gar e tiskenne tud ha war ar c'hae e oa tud o tegemer anezho hag okas anezho davet ur « centre d'accueil ». Un doare gouel e oa evit an holl dud-se. Evidon-me avat ne oa ket, pell ac'hano. Degouezhout a ris e Lonkanezan hep bezañ kavet diskoulm ebet d' am c'hudenn. Er gar e voe roet dimp un draig bennak da evañ ha da zebriñ, ha da c'houde e voemp dispartiet e strolladoù hervez al lech m' hor boa da vont. Ni a oa c'hwec'h paotr bennak. Graet e voe dimp pignat en ur c'harr-pourvezoù bihan. Dre eurvat e pignis an diwezhañ hag e chomis azezet war lost ar c'harr gant va zreid a-ispilh. Bihan, bihan e teue va c'halon da vezañ ! N' em eus ket soñj bezañ komzet gant den abaoe m' am boa kuitaet Ludwigshafen ! N' ouzon ket pegeit a zo eus Lonkanezan da X, met ne voemp ket pell oc'h erruout. A-daol-trumm, piv a welan-me en ur c'hroaz-straed nemet an daou zen-se am eus meneget bremaik, o vont kazel ha kazel ? Marteze a-walc'h e oa ar sul hag edont o pourmen dre aze ? Evidon-me, er mare-se, ne oa na sul na pemdez ! Ar c'harr-pourvezoù a yae goustad-goustad evit treiñ trumm war an tu-kleiz evit mont en ur straed strizh o vont war-bouez krec'h. Lamm a ris gant va fakadoù ha mont da bokat d' an dud-se hep ankounac'haat ober sin d' ar paotr all a oa war lost ar c'harr da reiñ dezhañ da gompren em boa kavet " va zud ". En em dennañ em boa graet eus ar wiadenn-gevnid !

254

Va fediñ a rejont da vont ganto betek o zi. Gouzout a raent pelec'h e oan bet hag e peseurt stad e oan en em lakaet. Bez' o doa keleier eus Ki-ar-Berenn : va gwreg a yae mat, va merc'h ivez, hag an eil, ar mab... Ne gomzas ket hiroc'h va c'henderv o welout ar souezh war va zal.

- An eil, emezon ?

- Marteze a-walc'h em eus faziet, unan all bennak e tle bezañ, a laras-eñ.

Hag e komzjomp eus traoù all. Diouzhtu e lavaras din ne c'helle ket reiñ ur gwele din evit an noz dre m' en doa tud, repuidi eus an Oriant. Hep daleañ muioc'h en em lakis en hent.

Va fal kentañ bremañ a oa tremen dre Sant-Albin-an-Hiliberenn da welout ha ne oa ket bet saotret hol lec'h pirc'hirinaj gant hon enebourien.

Laouen e voen o welout e oa chomet an traoù eno evel m' am boa gwelet anezho ar wech diwezhañ. Disamm et va c'halon, e kendalc'his gant va hent. Brav e oa an amzer ; plijus e oa mont war droad. Abred diouzh ar beure e kaven laezh

fresk da evañ, nevez goroet, klouarik c'hoazh ; war-dro kreisteiz e raen ur pred founnusoc'h en un ostaleri, d' an abardaez ar memes tra. Ha petra edon o klask evel-se, o chom da stlejañ war an hentoù ? Un tamm spi am boa e c'hellfe unan bennak kinnig din ul labour e-lec'h ne zeuje den d' am c'hlask. Ne c'hellfen ket chom pell hep labourat, se a oa sur. Met ne greden ket goulenn labour peogwir n' em boa micher ebet, da nebeutañ evit labourat war ar maez. Duañ paper evel skrivagner en ur burev, evel ma 'm boa graet a-raok, ne oa ket kaout ur vicher kennebeut.

En em gavet e oa an 10 a viz Mae. Dalc'het em eus soñj mat eus an deiziad, a oa ivez hini argad an Alamaned e 1940 ma oa bet ken tomm dimp du-hont e Bro-Elzas. Edon o tizhout kentañ tiez ur vourc'h pa welis o tont davedon daou archer war varc'h-tan. Ma, chom a rejont a-sav tost din, divarc'hañ ha goulenn ouzhin va faperioù ! Sternachet klok e oant, lufus, start war o divesker, bras, kreñv ha meurdeus. Klask a ris bezañ ken distrafulh ha ma c'hellen, hag astenn a ris dezho va faperioù.

255

- C'hwi a zo eus ar Gerveur ha petra an diaoul emac'h oc'h ober dre amañ ?

- Emaon o tont eus Bro-Alamagn, evel ma 'z eo merket war va faperioù, ha kemer a ran va amzer da zistreiñ d' ar gêr. Paotr yaouank kozh on, un tammig arc'hant 'zo ganin, ar vro-mañ a gavan plijus, n' eus ket a vall warnon ; a-hend-all e chom c'hoazh tarzherezed er mor etre an Douar-Bras hag ar Gerveur.

Se a oa gwir : un nebeud deizioù kentoc'h, hervez ar c'helaouennoù, e oa bet kaset ur vag d' ar goueled gant un darzherez.

N' ouzon mui penaos e teuis da gomz eus un archer all, o servij er Palez, a oa bet, koulz lavaret, kamalad skol din nemet koshoc'hig egedon. Unan eus paotred o mirc'hi-tan e anaveze ivez. Tremet mat eta a reas ar gejadenn-se evidon nemet diwar ar mare-se e paouezis d' ober touristerezh-war-droad. Klask a ris ur gar ar buanañ ma c'hellis rak an daou baotr o sternachoù lufur ne zalefent da lakaat ober un enklask du-hont er Gerveur ha da c'houde e vije holl archerien Breizh, Bro-C'hall ha Bro-Navarra war va lerc'h...

* * *

Trenioù a-walc'h a veze kavet er mare-se dija ha ne oa ket ker an hent-houarn e-skoaz ar pezh ez eo bremañ. Ur beurevezh, setu me o tegouezhout e gar Lann-an-Arne. N' anavezen ket mat ar gêr-se hag hi koulskoude tost a-walc'h ouzh Ploue-ar-C'hastell, lec'h ma felle din mont. Perak ez afemp ni, Kastellploueziz, da Lann-an-Arne pa oa kalz aesoc'h dimp mont da Vrest ? Daoust da se e ouien petra am boa d' ober : eus ar gar, klask ur straed da vont betek ar stêr, klask ar pont, sachañ va zreid ganin e Kerne ha klask un hent hag a yae a-hed ar stêr tramek ar c'huzh-heol. Archerien a oa er gar, o c'hortoz ar baotred a oa o tistreiñ eus Bro-Alamagn gant an tren ispisial-se a anavezen ken mat. Tost d'ar porzh-houarn ez anavezis ivez ur marc'hadour bier a oa o kargañ pe o tiskatgañ e garr-samm. N' ouzon ket hag-eñ e anavezis ac'hanon : lezet am boa va mourroù da greskiñ. Eñ ha me hor boa uzet hor brageier war an hevelep skinier er skol, er c'hatekiz, en iliz. Anavezet pe nann, n' eus forzh penaos ne ouie ket edon o tec'hout rak ar polis. Diouzh an tu-se ne oa ket a zañjer diouzhtu.

256

Ur wech aet er-maez eus Lann-an-Arne e tilezis an hent bras hag e tiskennis d' an aod. Chom a raen un eur, div eur, en hevelep lec'h ha da c'houde ez aen un tammig larkoc'h, war-zug ar c'hornog. En em gavout a ris e-kichen porzh an Treizh p' edo an noz o kuezhañ. En ur vont gant hentoù bihan ez en em gavis e ti va zud hep bezañ gwelet den war va hent. Reuz a oa bet dre aze ; ur c'hogn eus an ti en doa resevet ur stokadenn greñv ; ur maen bennak, zoken, a oa bet diframmet diouzh ar voger. Un obuz, a voe lavaret din diwezhatoc'h, a oa kouezhet e-kichen. Lammat a rae va c'halon pa dostaen ouzh an nor. Houmañ ne oa

ket prennet. He bountañ a ris ha mont en trepas ; e penn an trepas e oa un nor all gwerennet. Dre ar gwer e teue betek an trepas sklerijenn ar gegin. Gwelout a ris aze va mamm azezet ouzh an daol. N' he doa klevet netra c'hoazh. Edo o wriat ouzh sklerijenn ur c'hozh kleuzeur. Aon am boa d' he spontañ. Digeriñ a ris an nor ; va mamm a savas he fenn.

- O ga ! Te eo?

- Ya, me eo.

En ur bokat dezhi e liviris dezhi e oan deuet da guzhat. Soñjal a rae dezhi, a laras-hi.

Ne welen va zad neblec'h, na va breur.

- Ha tata, pelec'h emañ ?

- Marv eo. N' eus ket bet a boan ; aet eo, uzet gant al labour. N' eo ket bet pell klañv. Ur mab ac'h eus bet.

Trist ha laouen edon war un dro o klevout ar c'heleier-se. Gwir e oa neuze ar pezh en doa lavaret egile din. N' em boa ket bet a geloù digant va gwreg abaoe ma oa deuet da welout ac'hanon e Roazhon e derou miz Mezheven 1944. Kenderv va gwreg ne ouie ket an dra-se ha pa welas e oan souezhet e reas evel m' en defe faziet. N' em boa ket bet a amzer da brederiñ war an traoù-se, met neuze e ris un tamm jederezh : ar paotr a oa bet ganet e derou miz Meurzh ; kimiadet am boa diouzh va gwreg d' ar c'hwec'h a viz Mezheven ; ne c'helle ket klotañ gwelloc'h ! Laouen e oan memes tra da gaout ur mab.

Va breur a oa er gêr ; krog e oa da labourat war e vicher. Aet e oa d' ober un dro goude koan gant e gamaladed. Dre eurvrat e chome hennezh c'hoazh gant va mamm !

Betek-hen ne oa ket deuet an archerien c'hoazh d' am c'hmask.

257

Ne oant ket deuet c'hoazh, ya met dont a rafent, sur a-walc'h ! Ne gav ket din, evelato, e kredfent dont en noz : un tamm " legalite " a oa dija, na petra-ta ! War an deiz, avat, e c'hellent dont da n' eus forzh pe vare, ha kuzhat en ti ne oa ket aes. Evit chom hep bezañ gwelet gant an amezeien, e-keit ma chomfen e ti va mamm, e vije ret din kuitaat ar gêr mintin-mat ha distreiñ pa vije deuet an noz. Se, a gave din, a oa fur, ha koulskoude ez on chomet meur a wech er gêr an deiz, prennet an nor war va c'hein. Neuze avat e vezen an aliesañ oc'h evezhiañ dre al lomber hag-eñ ne oa ket a archerien o pignat gant ar ru. Ne oa ket ur vuhez ! An aliesañ, avat, ez aen kuit ha zoken, pa gaven lojeiz en un tu bennak evit netra, e chomen un nozvezh pe ziv hep dont d' ar gêr. Lavaret em boa d' am mamm e oa arabat dezhi ober biloù evidon. Ne reas din morse an disterañ rebech !

Na kemmet e oa an traoù evidon bremañ ! Va mamm intañvez, va gwreg ur c'hrouadig muioc'h dezhi da vogañ ha, dreist-holl, da ober war e dro. Ret e vije dezhi mont da labourat, met piv a soursife ouzh he bugale ? Ha me « on the run » ! Dizale e teuas keloù falloc'h c'hoazh betek enomp : echu e oa an traoù bremañ ivez e tachenn an Oriant hag harzet e oa bet va gwreg gant an « dieuberien », lezet ar vugale gant an amezeien ! « Trist e oa lenn al lizher », evel ma lavare ar re gozh.

Pa vezen o kuzhat er c'hoadoù, o c'hortoz an deiz da vont e-biou, e prederien war va zonkadur, war hini va zad ha war hini va zad-kozh - tad va zad - an hini nemetañ am boa anavezet.

Va zad-kozh, d' e seizh vloaz, a voe kaset da ziwall an deñved war ar menezioù en ur mare ma oa stank ar bleizi c'hoazh en hor bro ! Maer e barrez a gasas anezhañ da Vrest, pa oa ugent vloaz, gant un tamm paper skrivet. En em

gavout a reas gant un den eus e barrez hag a ouie lenn galleg hag a lavaras dezhañ :

- Arabat dit diskouez an tamm paper-se da zen ebet, distro d' ar gêr !

Ur baperenn emrollañ en armead gall e oa ! N' on ket evit lavarout deoc'h penaos eo c'hoarvezet, met kaset e voe d' an arme memes tra rak alies em eus klevet anezhañ o komz eus « kañkoñli ». Re yaouank e oan d' ar mare-se da c'houzout petra oa « kañkoñli ». Ne gomprenis ster ar c'homzoù-se nemet pa ris anaoudegezh gant an Emsav. Va zad-kozh a boanias kalz e vuhez-pad evel mevel war ar maez. Pevar-ugent vloaz e oa hag e veze goulennet c'hoazh da vont d' ober labourioù « skañvoc'h » evel dic'harzhiañ, troc'hañ brug, troc'hañ keuneud war ar c'hleuzioù, h.a. Pa n' en doa netra d' ober e kemere ar sac'h-guano da vont da glask e vara. A bep seurt traoù a zeue gantañ : gwenneien, tammoù bara, tammoù kig-moc'h poazh, avaloù. Eus an ti-kêr e reseve, e kav din, un dorzh-vara c'hwec'h lur bep miz. D' e zaou vloaz ha pevar-ugent, aet fall e zivesker hag e zaoulagad, e tivizas lavarout kenavo d' ar bed-mañ. Ur beurevezh e voe kavet e gorf, ur skoulm en-dro d' e c'houg, stag ouzh ur penn-gef.

258

Ur fuzuilh din, boulc'hurun, ma veñjin va zad-kozh !

Va zad. Tri bloaz en arme c'hall hep tamm gounidegezh ebet. Nebeut amzer a-raok ma voe diskleriet brezel pevarzek en em gav gantañ ur gwallzarvoud war e labour hag e koll ul lagad. E baeamant a zo dister ha c'hoazh n' eo ket diskleriet evit ar pezh a c'hounez ; ne resez koulz lavaret netra eus an asurañs. E vestr a zo galvet d' ar brezel. E afer a gendalc'h da vont en-dro a drugarez da labour hag onestiz va zad. Skrivañ a ra d' am zad ur wech an amzer o prometiñ dezhañ ur bern traoù pa vije echu ar brezel. Echuiñ a ra ar brezel hag ar promesaoù a zo ankounac'haet.

Va zad hag e vestr o deus bremañ pep hini e di nevez, va zad dindan an douar, e vestr war-c'horre !

Me. Kaset d' al lise d' an oad a drizek vloaz ; gant ur yalc'had-studi evel just. Ar bloaz kentañ a voe spontus ! Soñjit 'ta, ur paotrig lent a-ziwar ar maez, gant e votoù-koad, e sac'h-treid pell, ha tamm arc'hant godell ebet, oc'h en em gavout a-daol-trumm gant paotred a oa bet maget mat, a oa gwisket mat, o doa pluñv en o sac'h-treid hag arc'hant leun o godelloù !

Va mamm a oa ganin evel just pa voe an digoradur. Goulennet e voe outi hag-eñ ez afen d'an oferenn d' ar sul. Ret e oa paeañ evit an holl vloaz en a-raok, evit ar c'heder. Se a rae un tamm mat a arc'hant. Va mamm a lavaras nann.

D' ar sul vintin, pa veze ar re all o vont d' an oferenn, e veze klevet an evezhier o lavarout : « Les dissidents, par ici ! ». Ur c'hwec'h bennak e oamp.

Ar bed a oa a-enep din !

Goulennet e oa bet ur sikour-studi evidon en ti-kêr. An Aotrou Maer a respontas : « An hini n' eo ket gouest da skoliañ e vugale n' en deus nemet kas anezho da ziwall ar saout ! ». N' eus ket ezhomm da c'houlenn eus pe du e oa ar maer-se.

259

Dont a ra ar brezel hag ar paotr-saout manket a zo galvet da vont en deiz kentañ. Nevez dimezet e oan ha n' em boa gwenneg ebet dirazon. Va gwreg a resevas ar skoazell gentañ eus an ti-kêr tri miz war-lerc'h, goude un enklask - ma n' eo ket ur vezh ! E-keit-se e oa tud all ganin hag o doa da zibab etre o faeamant er sivil hag hini an arme, hag an ofiserien a vicher - se 'zo anavezet - a c'houneze muioc'h eget en amzer a beoc'h. Heuget e oan !

Bloaz da c'houde setu me demobilizet. Yalc'h an tiegezh a zo goulllo hag al labour a zo kollet. Va flas a oa bet kemeret gant ur maltouter war e leve, en

doa tapet un eil bañsion o labourat pemzek vloaz evel konter en ul labouradeg sardined. N' en doa ket a-walc'h gant e ziv bañsion gant ur verc'h hepken, mestrez-skol ? Un trede a felle dezhañ kaout, marteze evit fortunañ aesoc'h e verc'h, na oa ket eus ar re goantañ. Gallet em bije klask trabas ouzh va implijer met ne dalveze ket ar boan. Ober a ris ur goulenn da vont da skolaer peogwir e oa chomet hiniennou prizoniet. Anvet e voen e Pluñv-an-Diaoul. Daoust hag edo an traoù o vont da cheñch evidon bremañ ? Va huñvre yaouankiz a oa bezañ mestr-skol hogen « echuet » em boa va studioù en ur mare fall, e 1932, ha ret e oa bet din kemer un hent all. Daoust hag edo ar chañs ganin bremañ ? Ma oa, ne chomas ket pell : va rener a oa sokialour, an eil mestr a oa komunour hag evel ma teree ouzh an dud-se, er mare-se, ne c'hellent ket gouzañv ar brezhoneg nag ar re a rae war e dro. Me oa unan eus ar re-mañ, a glaske ober gant yezh va bro e kement korn a Vreizh-Izel. Un deiz e savas tabut etre ar rener ha me. Youc'hal a reas ne oa ket dereat d'ur skolaer mont da gomz brezhoneg gant ar beizanted. « Moi, » e lavare, « quand j'entends un élève parler breton, je lui f... mon pied au c... » Ar c'homunour ne lavare netra ; ne oa ket breizhad. E Pluñv-an-Diaoul e oa un oristal a sokialour, a lavaras din un deiz : « Gwelloc'h e kavfen gwelout va bugale o vervel eget klevout anezho o komz brezhoneg ! »

Er bloaz war-lerc'h e c'hortozis en aner bezañ anvet adarre. « Pistonet » mat e oan bet emichañs. Saverien Moger ar Mor Atlantel a c'houlenne divrec'h ha zoken « danvez louet ». Kantadoù ha kantadoù a dud eus va c'horniad a labourere warni. D' ober plijadur da biv ne dafen ket me ivez ? Mont a ris ! Daou vloaz da c'houde e voen galvet da vont d' al Lu.

260

Pa oan paotr yaouank em boa er gêr, a-us da zor ar gegin, ur skritell a oa warni skeudenn un Iwerzhonad yaouank o terc'hel ur fuzuilh en e zaouarn, gant ar gerioù « Lun Fask 1916 ». Va haroz e oa ar paotr-se. Bremañ pa oa deuet ar mare ne c'hellen ket kilañ hep kaout dispriz ouzhin va-unan. Ober a ris va menoz mont eta. D' an eur ziwezhañ, koulskoude, e voe darbet din chom hep mont ken nec'het e voe lakaet va spered pa en em gavis e Roazhon. Degouezhet e oan d' an abardaez, re ziwezhat d' am meno da glask ar C'harter Jeneral. Mont a ris d' ober ur weladenn da dud ar Strollad. Er burevioù e kavis R. Euzanor, Ch. Ganeoc'h hag L. Hiranod. Souezhet e voen o klevout Euzanor o lavarout din e tlefen soñjal gwelloc'h er pezh edon o vont d' ober. Hag eñ ha displegañ din penaos edo an traoù etre ar Gouarnamant hag al Lu. Trenket e oa ar soubenn ! Tremena a ris an noz eno. En deiz war-lerc'h e oa hanter c'hraet va menoz distreiñ d' ar gêr hep mont da lakaat va anv el Lu. Mont a ris da welout Alan ar Blei, ur c'hamalad kozh din, am boa anavezet p' edon o labourat e Kepac'h. Amañ e voe brasoc'h va souezh c'hoazh pa zeuas Alan da zigeriñ an nor din, un nor hag a oa morailhet ha chadennet ; ur mell pistolenn a oa gantañ en e zorn, ur " c'holt " pemp ha daou-ugent da nebeutañ. Me 'gav din ne ziskrogas ket eus e bistolenn keit ha ma voen eno : me 'gred en doa aon na vefe laeret ur baperenn bennak digantañ, ul lizher a gav din. Yen e voe an diviz.

Peogwir edo an traoù evel-se e kavas din e oa koulz din mont d' ar gêr : al lu a vije evit ur wech all ! Edon neuze o vont etrezek ar gar, digalonekaet o welout n' em boa kavet nemet diseblanted pe enebiezh e-touez tud ar Strollad. Met piv a welan o tont davedon war ur riblenn-straed nemet an hini a veze graet outañ TAD, Tad Enoch (netra da welout gant Enoch Powell !). Graet hor boa anaoudegezh e kentañ KD a oa bet aozet e Roc'h Trevezel. « Deus da welout An Hini Bras 'ta, » a laras din. Ha me o tistreiñ gantañ. Ar pezh a c'hoarvezas a zo aes da zivinout : an hini a gomzas da ziwezhañ edo ar gwir gantañ. Sinañ a ris. Bremañ e oa ret din mont d' ar gêr da lakaat un tammig urzh em aferioù. Va mamm am boa da welout ivez, da gemenn dezhi an nevezenti ha da c'houlenn outi he bennozh. Ne oa ket un afer a netra mont d' al Lu ha dilezel pep tra ! An traoù, avat, ne dremenjont ket evel en ul levr a varc'hegouriezh : va mamm a oa bet kaset d' an ospital da vezañ oberataet hag o welout anezhi war he gwele ospital n' em boe ket a galon da gomz dezhi eus ar Bezen. Lavarout a ris dezhi e oa re arvarus chom en Oriant hag ez edon o vont da Roazhon da labourat.

261

* * *

Galoupat a raen ar maezioù hep gouzout re evit petra estreget evit chom pell diouzh an hentoù bras. Kavout ul labour en un tiegezh ? Petra am bije graet pa vije laret din sterniañ ul loen kezeg ha mont da gerc'hat ur c'harrad melchon ? Nann, ne dalveze ket ar boan din klask, zoken. Ha gant ar baeamant am bije bet, ha gallet em bije magañ va gwreg ha va bugale ? Douetus bras e oa. Met pelec'h mont, petra ober ? Kaer am boa treiñ ha distreiñ ar goulennou-se em spered ne gaven respont ebet. Un dra a oa anat : ne oa bet graet netra evit an drouziwezh. Er pezh a selle ouzhin, n'em boa ket an disterañ adres da vont, ne ouien ket e pelec'h mont da glask paperioù faos ; pa vije echu va arc'hant e vije ret din laerezh... pe washoc'h ! Gwir eo hor boa aberzhet hor buhez en a-raok ha ma 'z omp distroet bev evit an darn vuiañ ac'hanomp ez eo dre vurzhud !

A-raok en em zispartiañ, du-hont e Ludwigshafen, hor boa divizet, va c'hamaladed ha me, en em gavout hor pevar en ur barrezig e-kichen Roazhon. Mont a ris d' an deiz ha d' an eur merket, met n' em eus ket soñj bremañ ha bez e oamp tri pe bevar eno. Tri e oamp sur. An emvod-se ne zegasas netra deomp. Ar re all a felle dezho chom er vro, me a felle din mont kuit. Mont a rejomp da welout ur c'hamalad all a oa o chom er c'horniad. En em gavet e oa ivez, e ti e dud, ha fellout a rae dezhañ chom ivez. Distreiñ a ris d' ar gêr, o soñjal muioc'h-mui en divroañ. Ne ouien ket c'hoazh da belec'h mont. Kentañ bro a soñjis enni a voe Iwerzhon, evel just. Ya, met penaos tizhout an enezenn-se ? Laerezh ur vag, lakaat ur ouel warni ha loc'hañ ? Ne oa ket ken aes-se d' ober evit unan n' en doa kroget morse nag en ur stur, na zoken en ur roeñv ! Hogen el Lu em boa graet anaoudegezh gant ur paotr a zlee anavezout hiroc'h egedon e merdeadurezh : Gwer, a oa o chom tost d' an aod en tu all da Bont'n-Abad. Me ' gav din en doa graet pesketaerezh. Setu me en hent adarre, en taol-mañ war-zu Kemper. Eus Kemper ez ae un tren da Bont 'n-Abad. Eus Pont 'n-Abad e ranken mont war droad. Mare kreisteiz e oa ha peogwir e oa deuet naon din e klaskis ul lec'hig sioul, distro ha diarcher da « derriñ un tammig kreun » ha da deurel ur sell war an " O.-F. ", an torchouer-se a veze graet anezhañ kelaouenn. Pa voe echu va zammig pred e tispakis an " torchouer ". Bemdez, koulz lavaret, e kaved ennañ traoù divalav diwar-benn tud an Emsav. En deiz-se e oa ivez ur gac'hadennig e-barzh, hogen gwashoc'h c'hoazh e oa peogwir e lennis ennañ e oa bet harzhet Gwer en e di en derc'hent. Un huñvre muioc'h diskaret !

262

Arvarusoc'h-arvarusañ e teue da vezañ evidon chom er gêr da gousket. Deiz pe zeiz e vije va zro da vezañ chadennet. Ret e oa din mont kuit. Peogwir ne c'hellen ket mont etrezek an hanternoz ez afen trema ar c'hreisteiz. Un deiz em boe ar blijadur da welout va merc'h ; pa voe aet kuit e liviris « warc'hoazh e rankan mont ». Va mamm a roas din ur pullover a oa bet d' am zad, en ur lavarout din :

- Dalc'h anezhañ warnout ar pellañ ma c'helli.

E wiskañ a ris diouzhtu. Antronoz, abred, e krogen em malizenn, graet va menoz ganin mont da vat. Ne oa ganin nemet an arc'hant am boa ezhom evit ur veaj mont. Anavezout a raen va gwander ; gallout em bije graet distreiñ o kavout re a ziaesterioù war va hent. Se ne zlee ket c'hoarvezout ; nann, mont a raen kuit eus ar gêr ha ne zistrofen ket diouzhtu ! En em gavet e gar Lann-an-Arne e voe darbet din memes tra ober va c'hiladenn gentañ : en ur lenn ar skritelloù er gar e welis e oa ur riblennad douar, dek kilometrad led dezhi, a-hed an harzoù gant Bro-Spagn, a oa difennet mont enni hep un aotre ispisial. « Deomp dei memes tra, » a liviris din va-unan ! Kemer a ris ur bilhed betek an Naoned. Ur fazi e vije bet, a greden, kemer unan betek Baiona kenkaz e vijen bet goulennatet en tren. Soñjet o dije diouzhtu edon o klask tec'hout da Vro-Spagn. Eus an Naoned ez is da Angoulem goude bezañ tremenet un nozvezh en un tren goulo e n' ouzon mui peseurt gar. En Angoulem e kemeris ur bilhed evit Bourdel. Eno, avat, e tiskennis en un ostaleri e-kichen ar porzh-houarn hag e savis abred en deiz war-lerc'h gant aon na vije deuet ar polis da c'houlenn va faperioù diganin. Pourmen a ris e Bourdel, debriñ a ris frouezh forzh pegement, tañva a ris ar gwin gwenn, ober a ris gerioù-kroaz war ur skaoñ, hag evit echuiñ ez is d' ar sinema da

welout " Les Misérables ". Da c'houde e kemeris tren Baiona. Ouzh kostez ar Mor Atlantel ne oan diskennet morse izeloc'h eget, an Naoned. Ne oa ket noz c'hoazh p' en em gavis e Baiona. Tostaat a raen ouzh ar pal ha ret e oa din bezañ war evezh. Tremenet ganin ar gloued ez is war-eeun dirazon, hep sellout nag a-gleiz nag a-zehou gant an nerzhusañ kerzhed a c'hellen kemer, evel un den a ouie mat pelec'h mont. Mont a ris tre e kentañ ostaleri a blijas din, goulenn ur banne ha goulenn ivez hag-eñ e oa ur gambr evidon evit an noz. Bez' e oa ! Koaniañ a ris ivez eno ha mont da gousket.

263

En deiz war-lerc'h edon adarre abred war-sav. Ne felle ket din bezañ " kutuilhet " em gwele. Bez' em boa kartennoù eus ar vro, hogen kozh kartennoù hepken, a vije bet diaes ober unan vat ganto. Pelec'h, ha penaos, tremen an harzoù ? Mont a ris ur pennadig war an hent bras a gase war-eeun da Irun. Dont a ris war va c'hiz hep dale o kavout ne oa ket fur chom war an hent bras. Da c'houde e soñjis : « ha ma 'z afen dre an aod ? Mont en dour pa vije noz ha douarañ war aod Bro-Spagn ? ». Ya met penaos gouzout peur e vijen e-tal Bro-Spagn ? N' anavezen ket ar vro ha goulenn ouzh an dud (ouzh piv ?) a oa arvarus. Nann ! Ar pezh am boa ar gwellañ d' ober a oa kemer an tren a ya war zu ar sav-heol en ur dostaat a-nebeudigoù ouzh an harzoù. Da c'hwec'h eur e oa unan. Er porzh-houarn e oa merket ivez e ranked kaout un aotre evit mont en tren, da nebeutañ evit ar re a yae pell a-walc'h diouzh Baiona. Klask a ris ur c'horn sioul ha didud da studiañ va c'hartennoù ha d' ober gerioù-kroaz. Hir e kavis an deiz. Aet skuizh o c'hortoz em c'horn distro e tostais tamm-ha-tamm ouzh ar gar. Kalz re abred e oan c'hoazh. Tostaat a rae ur mare a vije a bouez bras em buhez. Dont a rafe da vat pe get ? *That was the question*. A-vec'h en em gavet er gar setu o tont davedon ur plac'h yaouank, o vousec'hoarzhin din. Goulenn a reas ouzhin hag-eñ ne c'hellfemp ket mont da... gemer ur banne en un ostaleri. Edo, a laras-hi, oc'h ober hec'h " hañvezh " war an traezhennoù tro-war-dro da Vaiona. He micher, divinet oc'h eus a-benn bremañ, a oa koshañ hini a zo er bed, hervez e vez lavaret. N' eo ket evit en em zidamall met ne c'houlennet ket gwelloc'h eget pellaat diouzh ar gar ; evit lavarout ar wirionez ne oa tamm mall ebet warnon zoken tremen dre an amproenn a oa ouzh va gortoz. Heuliañ a ris ar plac'h. Marteze e voe evit va mad, piv oar ? N' eus forzh penaos, an hini a zo hep pec'hed...

264

Pa zistrois d' ar porzh-houarn edo an uhelgomzer o kemenn : « ar veajourien evit ar riblennad difennet a rank kaout un aotre... ». Buan e tennis va malizenn eus ar pakva, da c'houde e prenis ur bilhed da vont betek an dibenn-linenn hag e pignis en tren. Den ne c'houlennas diganin aotre ispisial ebet. An tren a loc'has diouzhtu. Betek-hen ez ae mat an traoù. An tren a ehane e pep gar, marteze ur vunutenn, marteze muioc'h ; tud a ziskenne, tud all a bigne. Er pevare pe pempvet porzh-houarn e taleas an tren un tammig muioc'h ; sellout a ris war ar c'hae, a-gleiz hag a-zehou : den ebet ! Va c'hombod a oa dres dirak kloued ar gar, a oa digor frank ha ne oa den ebet ken eno da zegemer ar bilhedoù ; eus va c'hombod e welen, en tu all d' ar gloued, an hent bras ha zoken an ostaleri a oa dirak ar gar. N' em boe ket a amzer da soñjal hag-eñ oa paotred an hent-houarn o skarzhañ ur voutailhad hini ruz e kuzh a-dreñv ar pakadoù marc'hadourezh e foñs ur vagon. Kregiñ a ris em malizenn, treuzañ ar c'hae, mont e-biou d' ar gloued ha war-eeun en ostaleri. Eno, keit ha ma oa an ostizez o klask ur voutailhad gwin gwenn, e tispakis va zammig kartenn a oa em chakod kleiz. Anavezout a ris al lec'h m' edon hag an hent am boa da gemer. Bez' em boa marteze pemp kant metrad d' ober evit bezañ er-maez eus ar gêriadenn. An hent a yae war bouez krec'h a-hed ar pemp kant metrad-se ; da c'houde e troe war an tu dehou hag e tiskenne. Pa soñjas din ne c'hellen bezañ gwelet gant den e tilezis an hent bras evit mont en ur c'hoad a oa war an tu dehou. A-vec'h m' am boa bet amzer d' ober un ugent metrad er c'hoad e welis daou archer e kaki o tiskenn gant an hent bras war o marc'houarn. Ouf ! Tomm e oa bet din ! Mar deo evidon eo e oant en hent ne oa ket bet pell ar c'heloù o tegouezhout betek enno. Me a ziskennas larkoc'h er c'hoad, da c'hortoz an noz. Pa voe deuet an noz e teuis war va c'hiz rak dre an tu kleiz d' an hent bras eo e felle din mont. Treuzañ a ris an hent bras. Kregiñ a ris da gerzhout en deñvalijenn er brouskoad hogen ne c'hellis ket mont pell ken stank e oa an drez. E-touez an drez e chomis da

gousket. Gant un dra e voen strafuilhet : er gêr a oa en tu kleiz din e kleven kleroniou o seniñ. Diouzhtu e soñjis e oa bet degaset soudarded eno da ziwall an harzoù. Penaos e rafen ? Dihuniñ a ris abred. Klask a ris ur wenodenn, din da vont ganti keit ha ma vije an dud c'hoazh en o gweleoù.

265

Dirazon war-zu ar c'hreisteiz e oa un dorgenn ; en tu kleiz d' an dorgenn e tlee bezañ ar gêr a welen war ar gartenn hag e-lec'h ma kleven ar c'hleroniou o seniñ. Bez' e tleen pignat gant an dorgenn-se met a-raok e rankfen treuzañ an hent bras a gase d' ar gêriadenn. Se ne c'hellen ober nemet pa vije deut an noz. Klask a ris ul lec'h da guzhat. E-pad an deiz e chomas paret va daoulagad war an dorgenn-se, a geñverien-me gant menez Kerrudu. Ne oa ket deuet mat an noz c'hoazh p' en em lakis en hent, met a-raok pell e voe ken du hag en ur sac'h. Sec'hed em boa : n' em boa evet netra abaoe ma oan aet er-maez eus an ostaleri, hag ar pezh am boa debret a oa sec'h-meurbet. Klevout a ris dour oc'h hiboudiñ ; gant va dorn e tegasis dour d' am genou. Goude e lammis dreist ur gloued ha va zreid a zouaras war ul lec'h blot ; en ur foenneg e tleen bezañ. N' em boa graet nemet daou pe dri gammed pa santis evel anal un dra vev tost ouzh va fri. Ar spont a lakaas ac'hanon da zistreiñ en tu all d' ar gloued evel p' am bije bet divaskell. Marteze ne oa nemet ul loen kezeg, pe ur vuoc'h hogen bez' e c'helle ivez bezañ un tarv, pe zoken un den. Kavout a ris un hent-karr a c'hoarie an dro d' ar foenneg. Tostaat a raen ouzh an hent bras, a oa sklerijennet mat. Chom a ris ur pennad en deñvalijenn da evezhiañ an tro-war-droioù. Ar gouleier ne sklerijennet nemet an hent : an dorgenn a oa en deñvalijenn eta. Un nebeud metradoù da ober er sklerijenn hag e vefen e surentez adarre. Treuzañ a ris buan an hent ha kregiñ da gratat gant an dorgenn, evurus o welout ne oa ket a orjal neblec'h. Ne oa ket a zrez kennebeut, raden hepken ; an douar dindan va zreid a oa blot ; evel-se ne raen trouz ebet. Dizale e voen war-c'horre ar grec'hienn. Ar raden eno a oa uhel, kazi ment un den. Petra a oa en tu all d' an dorgenn ne ouien ket, neuze e oa gwelloc'h din chom aze da c'hortoz an deiz : tost edon d' ar pal, ret e oa bezañ evezhiek betek ar fin. Gourvez a ris e-touez ar raden ha kousket betek tarzh an deiz.

A-raok kregiñ gant an diskenn en tu all e kemeris amzer evelato da sellout ouzh ar gweledva. Na kaerat taolenn ! Ac'hano e welen pleg-mor Gaskogna, evel ma weler lenn-vor Brest a-ziwar menez Kerrudu. Ne oa den war-wel. Me 'grede din e oan dija e Bro-Spagn ha n' en em guzhen ket ; ne c'hellen ket hen ober kennebeut, peogwir diribin ar grec'hienn eus an tu-mañ a oa noazh. Kejout a ris gant ur paotrig daouzek pe drizek vloaz hag e c'houlennis digantañ, e spagnoleg, hag-eñ oamp e Bro-Spagn. Ne respontas ket; neuze e ris ar goulenn e galleg. Ar respont a voe : « Non, ici c'est X... », ar gêriadenn a oa a-dreñv din bremañ.

266

Ar paotrig, oc'h en em gaout e X..., a gomzfe evel just : pa voe aet ar mous a zivar-wel e skois buan etrezek ur c'hoad a oa war an tu kleiz. Un draoniennig e oa, goloet a wez derv, gant ur wazhig dour o redek war-du Bro-Spagn. Klask a ris ar c'huzhetañ lec'h a oa hag eno ez en em walc'his hag e ris va barv. Ne zeuas den war va zro ha da zibenn an abardaez e ris un tamm mat a hent. Pignat a ris gant naoz disec'h ur froud e-lec'h ma vezen taget hep ehan gant un doare kelien plat (marteze a-walc'h eus ar re a laka ar saout da vreskin) a lakae ac'hanon e fulor rak ne c'hellen ket en em zifenn diouto dre ma oa ganin ur valizenn em dorn dehou hag ur pakad en dorn kleiz. Pa welen un tamm paper bennak war an douar e taolenn ur sell warnañ da welout e peseurt yezh e oa skrivet. Kement-mañ avat ne zegasas ket nemeur a sklerijenn din : e dibenn an deiz ne ouien ket c'hoazh e pe vro edon. Aozañ a ris va gwele e-kichen ur wenodenn, e-touez ar raden adarre. Da darzh an deiz e voen dihonet gant ur vandennad kezeg o tiskenn d' an daoulamm gant ar wenodenn. Kezeg gouez marteze ? Sammañ a ris va fakadoù adarre ha mont war-du ar c'hreisteiz. Dizale ez en em gavis war vord ur froud. En ul lec'h e oa bet ledanaet ar froud ha graet gantañ ur poull gwalc'hiñ, gant mein plat tro-dro, evel ma veze graet e Breizh d' ar mare-se. Treuzañ a ris ar stêr ha mont d' ober tro ar poull. Eno e oa leun a dammoù paper o doa servijet da bakañ soavon ha lijou. Pep tra a oa skrivet e spagnoleg ! Nepell diouzh ar poull avat e oa un ti n' am boa ket kalz a fiziañs ennañ, un ti divalav hep stalafioù. Ha ma vefe maltouterien e-barzh ? Un distro a rankis ober abalamour d' an ti-se met da c'houde ez en em gavis war un doare hent-karr a yae war-du ar

c'hreisteiz. A-benn ur pennad, war an tu dehou, e welis kouerien o treiñ foenn da sec'hañ en ur foenneg. Pa en em gavis dirazo e paouezjont da labourat hag e c'houlennis outo :

- *Estamos en España aquí ?*

- *Si señor, está Usted en España !* a respontas unan anezho.

Hervezo em boa graet ur c'hilometrad endeo e Bro-Spagn. Lavarout a rejont din, ouzhpenn, e kavjen dizale, o kenderc'hel gant va hent, hent bras Pamplona. Ul levenez vras a grogas ennon : a-benn ar fin n' em boa ket ezhomm da guzhat ken, an archerien gall n'o doa galloud ebet ken warnon. Ha me da ganañ ha da ganañ, a-bouez-penn, kement tra a dremene dre va spered ! Evel just e kanis " Mari Vastrouilh " ha " War da zremm ".

267

Dalc'het em eus soñj mat eus an deiziad : pevarzek a viz Gouere. Bremañ e ouien petra 'oa ar c'hleroniou-se a gleven en noz kentañ : paotred ur patronaj bennak oc'h en em c'hourdonañ evit lidañ o " c'hator-suilhet ".

Tizhout a ris hent bras Pamplona. Un hanter eur da c'houde ec'h erruen en ur vourc'h e-lec'h ma oa soudarded. Mont a ris da gaout unan eus ar gedourien ha lavarout dezhañ edon o paouez treuzañ an harzoù ha n' em boa warnon nemet paperioù faos. Un is-ofiser a voe galvet. Resevet mat e voen. Da greisteiz e tebris gant an is-ofiserien, a oa un eizh bennak anezho. O kas va c'hador un tammig war-dreñv e torris ul litrad gwin. « Arabat deoc'h ober biloù, » a voe lavaret din, « se a zo sin vat evidoc'h ». Ar pred a oa founnus-tre : soñj em eus e oa zoken « calamares en su tinta » a zebren evit ar wech kentañ. Brokus e voent gant o gwin ruz : evurusamant e voe da c'houde un tasad kafe mat, am boa koulz lavaret ankounac'haet ar blaz anezhañ. « Amañ eo evel-se bemdeiz, » a lavaras unan pa savjomp diouzh taol.

Eno e tremenis an noz ivez met en deiz war-lerc'h e voen kaset da Fuenterrabia. E Fuenterrabia e voen herberc'hiet en un ostaleri e-lec'h ma kavis tud all hag o doa, evel don, treuzet an harzoù hep goulenn aotre. Eno ne oamp ket gwelet mat : ar re a oa tremenet du-se araozomp a veze aotreet da vont e kêr da bourmen, ha lod anezho, evit kaout arc'hant godeli, a werzhe liñselioù ha pallennoù an ostaleri ! Tremenet eizhtez e voemp kaset da v-Miranda-de-Ebro. Fuenterrabia da gentañ, Miranda da c'houde, me ' gav din em eus lennet an dra-se endev, ne gav ket deoc'h ? Ya, hogen me, hag ar re all, a voe lakaet en ur c'hamp kreizenniñ ha n' eo ket en ur c'hloerdi. Bep daou-ugent metr en-dro d' ar c'hamp e oa ur soudard, gant e fuzuilh. En noz, evit chom dihun, e youc'hent eus ur gedour d' egile " Alerta ! ". Klevet e veze ar galv o tostaat, o pellaat, o tostaat adarre, en tu all, hag o pellaat evit mat, betek ar wech all.

An dra-mañ a zo bet lavaret din n' eus ket pell : en deiz war-lerc'h ma 'z on aet kuit " en em boeñchennas " an archerien e ti va mamm. D' ar mare-se e tleen bezañ en tu all d' an Naoned.

Ti Park an Ael, Gouere 1973.

Du-mañ gwechall

Herve ar Menn a zo o paouez mervel e Pariz d' an oad a bevarzek vloaz ha tri-ugent. D' an 9 a viz Eost eo bet douget e gorf da vered Hañveg, ar barrez ma voe ganet er bloaz 1899. Setu amañ an daou skrid diwezhañ bet kaset gantañ d' Al Liamm.

Rouanez ar c'heun

E derou ar c'hantved, e-kichen du-mañ, en em lede ur gompezenn vras enni ouzhpenn kant devezh-arat a lannegoù ha geunioù. Lodennet e oa etre ar c'hêrioù nes. Frankiz o doa al loened a gased da beuriñ du-hont. Va rouanez a voe engehentet eno d' an nevez-amzer.

Nann, nann, n' eo ket a-zivout kaerañ pe gwellañ paotrez va c'horn-bro eo e komzan deoc'h. Ur gazeg eo rouanez ar c'heun, ganet eno gant ur vidochenn Kerne, diwar marc'h-limon Lesvenez, daou loen en em garas er fraost a beurlvan. N' eo ket al lezenn veur, en em garout ?

Ur vidochennig e oa Podez, va c'hazeg karet. He gwelout a ran bepred : du a liv, tost d' an douar, hir he moue, blevek he divesker. Ur pennig brav he doa, daoulagad lemm ennañ, war e c'horre divskouarn berr bepred o fiñval. Un tammig e oa krenn he zalier. Ur c'hof a oa dezhi evel ma tere d' ur gazeg a c'hane un ebeul ar bloaz, e-ser labourat, par d' ar javed all.

Evel ma welit ne oa ket Podez ur gazeg " kenstrivañ ". En amzer he yaouankiz ne oa ket anv eus kartennoù ar " Stud-Book " zoken. Ma ! emezoc'h, setu aze ur pezh kaer ! Komzoù goull o a zo ganez, den kaezh ! Rouanez petra 'ta eo da vidochenn vlevok ? Eo, va zud vat, bremaik e welot. Yon gozh, hon amezeg e gorn pri, brudet a-bell aba d' e skiant-prenet hag e ouiziegezh, un devezh a lavare d' ar falc'herien, o tiskouez dezho va loen : « Intent a rit, va zud, furoc'h eo ar gazeg-se eget meur a zen ; ne gomz ket avat ».

269

Hep mar, furoc'h e oa Podez egedon pa 'z aen, da bemp pe c'hwec'h vloaz, etre he divesker ha dindan he c'hof, da bakañ an teureged hag ar c'helien-morz. Difiñv e chome va c'hazegig, evel ma veze gant he ebeulien. Meur a wech e kouezhis diwar he c'hein, ha kerkent e chome a-sav. Nag ur gouron a veze ac'hanon, diarc'hen, digabell, war gein Podez, va blev er vann, o taoulammat dre ar c'heun. Ar c'hezeg all hon heulie, digor-bras o fronelloù, badadomp, badadomp, an douar o krenañ, an tirien o wintañ d' an nec'h, diframmet gant hern ar rederien. Ne oa ket ac'hanon un impalaer oc'h aloubañ ar bed ? Va c'halon a zaoulamme ivez, war-nes rannañ gant ar balc'hder a veze ennon. Daoust ha Podez ne gerzhe ket ar primañ buanoc'h eget an tren a dreuze an draonienn, trummoc'h zoken eget ar skoul askellek ? Gwelet em boa taolenoù Waterloo ha Reichshoffen, ne oant ket par din !

O ya, met... Ne vezen ket atav ken lorc'hek war gein Podez. Rak, en hañv, pa dreuzemp ar stêr, va dougerez a ranke mont da c'hourvez e lec'h donañ an dour, kaer am beze enebañ outi. Glebiet betek va gaol pe va begel, n'em boa ken mont ac'hano war va zroad, gieb-dour-teil ma veze kein Podez o sevel eus he c'houronkadenn.

Un dek devezh-arat geun a oa dimp-ni. Derc'hel a raen va zropell da beuriñ war hon tra. Nemet, loen all ebet ne c'houzañve Podez da chom war he zachenn, setu perak e hualen va c'hezeg. Un devezh, un ebeulez eus Bodellek, balc'hted he zri bloaz enni moarvat, o varc'ha ouzhpenn-se - Ne zeuen ket a-benn d' he c'has

diwar-dro va loened ; tregaset e oan ganti. Pa savas ur soñj d' am fenn : « A, gast ar gurun a loen, » emezon, « bremaik te a droc'ho douar o vont ac'hann, hep goulenn da begement ». - Petra a ris ? Netra nemet dishualañ va zri loen en oad gour. Kerkent, m' ho pije gwelet, va zud kaezh ! Va femp a gezeg, digor-bras o genou, o taoulammat war-lerc'h ebeulez Bodelleg, par d'ur bagad kon o kas war ur c'had pe ur yourc'h.

Yann Helies, en e bark, savet e zivrec'h, a c'hope a-bouez-penn « Ho ! Ho ! ». Me 'lar... Mont a reont gant an diaoul, bremaik emaint e Landerne ! - Landerne a oa c'hwec'h lev ac'hano. Pennfollet holl, ar c'haezh ebeulez a dreuze ar poulladoù, o strinkañ dour ha pri a bep tu, gwechoù all e kertzhe war ar vein krag, pe kouarz, a daole tan ouzh stok an hern, ken aes ha tra e roge lanneg ha tirien gant ar c'hwec'h penn kezeg o vont d' an daoulamm-ruz.

270

Un hanter eur e padas an hemolc'hadeg. Gleb-teil ha priellet holl e oa va loened ; an dec'herez avat, gant ar spont hag ar bec'h a oa warni, a oa gwennet holl, goloet ma oa gant an eon. Pelloc'h e kavas hed he gar da vont d' he c'hêr, Podez, hag he re bepred war he seulioù. E Bodelleg, ar marchosi a oa digor hag an ebeulez mont e-barzh. Re seven e oa va c'hezeg-me da vont dre heg e ti an nesañ ! Diseblant-kaer e tizrojont d' ar c'heun, sevenet-mat o c'hefridi.

Gant Podez, rouanez ar c'hezeg.
Skarzhet geun ha lanneg

* * *

Ar Falc'hadegoù

A-benn en em zifenn ha terriñ he naon e rankas an denelezh stourm azalek ar penn kentañ ha goude, labourat. E derou hor c'hantved e teuas ar c'hiz, gant ar vourc'hizien binvidik, embreger o c'horfoù dre labour aner ar " sportoù ". Ken e teuas an ardivinkoù d' o disammañ e voe buhez ar vicherourien ha kouerien un embregerezh talvoudek. Marrat a oa an diaesañ labour en amzer va zad. Ar poaniusañ, e derou ar c'hantved-mañ, a oa falc'hat geot. Bez' e oa atantoù a zek devezh-arat foenneg. En ur wech pe ziv e troc'hed ar foenn, gant filc'hier a zaou ha tregont pe bevar ha tregont meutad hed. Tri c'hartad douar a oa gorread un devezh falc'her, war ar geot red, hep douar-gozed. Kalz nebeutoc'h, mar bez rodellek pe stoket ar geot.

War-dro Gouel-Yann e teraoue ar falc'hadegoù. Un devezh bennak a-raok e c'houlenned ar falc'herien da zont. Neuze e kleved, dre ar c'hêrioù, taolioù morzhol ar falc'herien o " wellat " o benvegoù. Ul labour aketus eo gwellat falz pe falc'h, nebeut a dud d' hen ober a zoare. War un annev strizh e lakaer dremm ar falc'h ; a daolioù morzhol e skoer warni, evit tanavaat an dir, oc'h astenn an dremm ; rak tognañ a ra o troc'hañ. Arabat ober bronnoù d' ar falc'h gant taolioù morzhol dizingal pe e troc'ho evel un heskenn. Ma chom re dev an dremm ne droc'ho ket mat, ha diaesoc'h e vo he lemman. Ma 'z eo re danav e vo troñset pe dorret gant an douar, mein pe geuneud. Dav eo ivez kaout ur maen-lemman o tereout ouzh ar falc'h. Ur maen gwak d' an dir tener, unan da gregiñ ma 'z eo kalet an danvez.

271

Gouzout kempenn, da lavarout eo gwellat ha lemman, eo perzhioù mat ar falc'her ampart.

Beure mat, d' an deiz merket, dre hentoù ha gwenodennoù, o c'hlavioù war o skoaz, ec'h erru ar falc'herien er gêr. Amzer da danañ ar butun ha d' evañ ur banne en ti, ha yao ar baotred d' ar foenneg.

Ar falc'her paour a sav mintin
Da vont da boaniañ d' ar rabin.

O, ya da, kanomp gant joa
Ur ganaouenn d' ar falc'herien.

An ozhac'h, pe mab an ti, eo a grogo da gentañ, evit digeriñ al labour.
Dre ma teuint e raio ar re all eveltañ. Kaeroc'h e lavar ar son :

Ar c'habiten 'bak e vaen-lemmañ,
An holl baotred 'ra eveltañ.
Ar maen 'zo mat, ar falz 'zo lemm,
'Chom ket an neudenn war he dremm.

Ha war ar glizh eo treishoc'h an troc'h. Met n' emeor ket diouzhtu " da vat ". *Hir eo an dei(z), amzer 'zo da skei(ñ)*. Evelato eo ret heuliañ ; mall a zo war mestr-an-devezh da bilat e eostad.

Erru Marjan gant dijuni,
Div bodezad a voued ganti.
Al loaioù koad a c'hoari mat,
Prim eo goullo pep podezad.

Soubenn al laezh, amann rouzet warni, ur banne odivi d'echuiñ, am eus gwelet da c'hortozenn. Diwezhatoc'h, pinvidikoc'h pe figusoc'h an dud, e tebred bara gwinizh gant amann, kig moc'h ha kilhevardon, jistr da evañ, lambik da stardañ. Gant ar brezel eo en em voazet hor c'henvroiz ouzh ar gwin.

272

Bremañ, p' eo diroufennet ar vegel ha glebiet er c'hourlañchenn, eo distagelletoc'h an teodoù. « Ur falc'h vat ac'h eus, Yann, me 'gav din ; evelato bremaik e vo gouest Per da deuler foenn ouzh da zivesker, » pe traoù all evel-se a lavaro un teodeg bennak da lakaat helebini.

Ul lemmañ, kent sachat warni, ha bec'h dezhi, geot d' an traoñ. Zion, zion ha zion ; ne glever ken dre ar prad gant ar filc'hier o touzañ. Rika raka, rika raka. Ur rummad all a zo o lemmañ o benvegoù, pelloc'h en draonienn. Youc'hadennoù a dregern penn da benn d' ar stankenn geuneudek.

Matezh pe merc'h an ti a zo deuet d' ar foenneg gant hini dous hag hini kreñv, da ginnig d' ar wazed war o labour. Ar mousc'hoarzhoù koant a dalvez ivez da gennerzhañ kalonoù.

Ar falc'h a ra un hanter tro,
Ar geot a gouezh a regenno(ù).
O, ya da, kanomp gant joa
Ur ganaouenn d' ar falc'herien.

Kaoteriadoù yod kerc'h, kreienet tev, gant feunteuniadoù amann er c'hreiz, a bep seurt laezh da soubañ, a veze aozet da verenn an devezhioù bras, gwechall. Netra gwelloc'h enep ar skuizhder, a lavare ar re gozh. Ma, en devezhioù bras e voe dilezet ar yod du-mañ war-dro naontek-kant c'hwec'h pe seizh. Soubenn ar c'hig moc'h ha " ragod " kig ejen eo a veze diwezhatoc'h ; jistr, odivi, pe lambik, da evañ.

Debret lein e klask pep hini ul lec'h kalet, en disheol, da sankañ e annev, evit gwellat e falc'h. Goude e vo graet ur c'houisk. Kreñvoc'h, met damheñvel ouzh ar grilhed o kanañ, e ra un dousenn pe ouzhpenn a dud o vorzholiañ filc'hier a-gevret.

Da zihunañ ar gouskerien e ra mestr an devezh ul lemmañ d' e falc'h. Pep a vanne a vo evet kent dizreiñ d' ar foenneg. Emaomp o voulc'hañ ur foennegad vras ; krogad a vo, bremaik. Ar gwellañ falc'herien a yelo er penn a-raok, da welout piv eo " tad ar geot " pe ar maout. Dre greiz ar prad e kerzh al laz falc'hat etrezek ar penn all. Daou baz an eil war-lerc'h egile, rampet o divesker, ez a ar goured a-raok, a droatadoù, o boteier o ruzañ war an douar.

Hardi, paotred, sachit ato,
D'ar foeneg vras grit he baro.

273

Nag ur gaer eo da welout, un dousenn falc'herien, pe ouzhpenn, war gorf o rochedoù gwenn, lerc'h war lerc'h, o falc'hat foenn ! D' ar prad e vo degaset merenn-vihan ward-ro peder-pemp eur. Azalek naontek-kant dek e teuas ar boaz da reiñ kafe d' an devezhioù bras. Kent e roed bara, kig, amann, jistr, odivi.

Ken e vo echu al labour, betek an noz a-wechoù, e kendalc'ho ar falc'herien. Setu ar geotenoù diwezhañ o kouezhañ. Echu eo an devezhiad kentañ ; marteze e vo dek pe zaouzek all eveltañ, hep ehan.

Dreist-holl e-doug an eost hag ar falc'hadegoù,
Kalet eo ar vicher, e-pad un nebeud mizioù,

eme ur son all. Petra 'fell deoc'h, a-viskoazh eo bet evel-se.

Ar falc'her a zisoñje e boan
O tebriñ kig ha farz d' e goan.

(Ar pep brasañ eus pennadoù ar rummad-mañ a zo bet embannet er " Bed Keltiek ".)

Ar Prizoniad

Diaes eo lavarout pegen don e voen skoet pa voe kemennet din e oa aet " paotr Vau-Via " da anaon. Edon o chom er mare-se e Naoned ha bep sul, kerkent ma c'hellen, e sachen buan va skasoù ganin war-zu maeziou Bro-Wened ken tost ouzh va c'halon.

Met ur sulvezh a viz Du e oa ken fesonet fall an amzer ken e chomis er gêr. Ar sulvezh-se eo e varvas.

Ha koulskoude ar paotr yaouank kozh-se aet ken trumm da anaon ne oa na kar na par din. Ur mignon ? Lavaromp kentoc'h em boa skoulmet darempredoù gantañ hag an darempredoù-se o doa desket din kalz traoù a vefe chomet kuzhet ouzhin a-hend-all. Gantañ em eus desket an doare da studiañ hep levrioù.

Gortozet em eus kent kregiñ gant an danevell-man. Ha tud 'zo a lavaro n' he deus talvoudegezh ebet. A c'hell bezañ ! Savet em eus ar skrid evit reiñ testeni, rak ur bajenn istor eo. N' em eus ijinet netra : ar pezh a zo dibunet amañ a zo gwir penn-da-benn. Seurt den ne vo mui gwelet kalz, seurt buhez ne vo mui bevet : aet eo ar ouenn hogozik da get, mouget eo bet gant un doare-bevañ arnevez. Ha daoust ha ne vez ket alies ar vuhez iskisoc'h eget an iskisañ romantou ?

*

Divalav e oa an den ! E zremm dreist-holl a oa ur souezh. Seblantout a rae e oa e fri koshoc'h eget ar peurrest eus e fas, ur fri koeñvet, distreset-spontus. A bep tu d' an dremm e horjelle divskouarn ledan, sec'h ha stummet evel kregin-mor. Pa lavarin e wilc'he ar paotr hag en doa ur vouezh rok ha tregernus ken na oa tregernus, e vezo aes kompren perak o doa kement a dud diskred warnañ, netra nemet ouzh e welout. Un troc'had mat a zen e oa. Biskoazh n' em eus gwelet daouarn ken tev, ken nerzhus. Meur a wech, a-hed e vuhez, en deus bet tro d' ober ganto, hag ar re o deus bet ur c'hwistad n' int ket chomet da dermal.

275

Ujan Tomoux e oa e anv, met an holl er barrez a rae " Vau-Via " anezhañ. Gwechall war ar maez e veze roet - d'ar baotred dreist-holl - pe anv o c'hêriadenn pe ul lesanv all o klotañ gant un namm bennak. Ne oa anavezet " Vau-Via " nemet dre al lesanv-se ha pa veze ret ober gant ur paper ofisiel, tud 'zo hag o doa e zarempredet a-vihanik a skrabe o fenn en ur c'hrozmolat :

- « Ujan Tomoux... Tomoux ? N' eus Ujan Tomoux ebet er barrez ! »

Aes e vefe krediñ e oa dizoare ar paotr, ur seurt troc'her-buzhug, pout e spered, evel ma vez kavet a-wechoù. Dilu ha lemm an hini e oa ; flemmus a-walc'h e oa e gaoz, ha pa veze graet goap outañ ne bade ket pell an abadenn : ar goapaer a astenne buan e gammed da dec'hout kuit, mezhek ha pignous, rak " Vau-Via " ne selle ket berr ouzh e bateroù kennebeut. E vilded ne roe ket dezhañ un neuz speredek, se 'zo gwir, ha c'hwi 'oar e vez barnet re alies an dud diouzh o dremm ! C'hoarzhin a rae e-unan diwar-benn digened e vizaj. Boaz e oa da lavarout :

« Gwashañ tra a reas va mamm a voe ober ur mab, ha gwashañ tra a c'hoarvezas ganin a voe bezañ ar mab-se ! »

Met ne oa nemet evit farsal.

E gwirionez, gwashañ tra a reas ar vamm a voe nac'hañ lezel he mab da

fortuniañ gant Julia, plac'h mereuri " An Dervenn vras ", war hent Gwened. Ne oa ket pennhêrez an " Dervenn vras " ur goantenn, se 'zo sur, met an dud diwar ar maez n' int ket figus evit ar pezh a sell ouzh kened ar c'horf. Madoù he doa Julia ha ne vefe ket bet berr ar peuriñ ganti na gant he gwaz. Diaes eo gouzout perak e tisplije ar plac'h-se d' an Itron Tomoux. Tud 'zo a lavaras - teodoù fall ar barrez - en doa tad Julia nac'het dimeziñ ganti pa oa plac'h yaouank. N' he doa ket ankounac'haet an dismegañs-se ha deut e oa eur an droukrañs tregont vloaz goude. It da zivinout pelec'h emañ ar wirionez. Ne lakaas ket " Vau-Via " e voned ruz, ne glaskas ket enebañ ouzh e vamm. Pinous e stouas e benn ; ne ziskrogas ket diouzh o labour ha den ebet ne welas pegen don e oa gloazet ar paour-kaezh " Vau-Via " .

276

Koulskoude ne oa ket den da rambreal war gab e reor e korn an oaled. A-viskoazh e plije dezhañ mont da vale ha da glakenniñ gant e gamaladed. Goude ma voe kaset Julia da guzhat he c'horfad mezh, en em lakaas " Vau-Via " da evañ muioc'h eget na oa ret, da vezañ diaes e-keñver an holl, da vale bro evit an disterañ abeg. Buan e taere.

Hag e c'hoarvezas an darvoud a freuzas buhez ar paotr-se evit an eil gwech. Maer Sant-Yann-ar-Boderezh, ar barrez tostañ, a zimezas e verc'h. War an ton bras e voe lidet an eured. Yaouankizoù ar c'hanton a ziredas da zañsal diouzh an noz, hag an holl dud da hejañ o letern, da chalpat ha da gloukañ n' eo ket dour-sistr met gwin eus an dibab ha chigodenn ar vro. E-touez ar gouvidi e oa daou archer. N' eus netra souezhus : maer ar gumun, an Aotrou Dejour, en doa pedet da zont kargidi ofisiel kêr. Unan eus an archerien, un den araous anezhañ, war a lavarer, a oa tomm d' e benn. Kejañ a reas gant " Vau-Via " e korn ar saldañs. Etre an daou zen e oa bet dija gerioù taer meur a wech. Piv a reas goap ar c'hentañ ? Pehini a vountas egile ? Morse ne voe diskoulmet ar gudenn. An archer feuket, a gasas " Vau-Via " da c'hoari e c'hlesker a-hed e gorf e-mesk treid an dañserien ! Ma oa an archer un den mentek, ken mentek all, hag iziliet mat e oa " Vau-Via " ivez ! Hemañ a savas buan hag ur c'hwistad d' an archer, ha daou, ha tri... " Paotr e gepi " a lamme, a biklamme, a hikete dindan an taolioù-morzhol. An archer en em gavas war e barlochoù, o hadañ e zent war e lerc'h, o skopañ gwad !

Evel-just kalz a drouz a reas an istor-mañ ! N' eo ket brav tabutal, met kemer klopenn archer ar Republik da annev a zo un torfed. Kaset e voe ar paour-kaezh " Vau-Via " da vidouf Gwened. Barnet kriz ha didruez e vefe bet ma n' en defe ket kavet un difenner taer : an Aotrou Dejour e-unan ! Gwall-skoet e oa bet ar maer gant un afer ken fall. Pebezh dismegañs evit un tiegezh a-zoare ! Trec'hiñ a reas war e vevh evit lakaat ar wirionez-rik da vezañ anavezet. Diskleriañ a reas ar pezh en doa gwelet. Hep termal e lavaras e oa an archer kiriek d' an tabut, en ur spisaat e oa mezv-dall, ar pezh n'eo ket brav evit un den karget da doullbac'hañ ar vezvierien.

Pennek e oa Paul Dejour ha gwazh-a-se evitañ : ne ouie ket pegement a dregas a gouezhfe war e chouk ! Ar frankiz a zo un dra vat, met pep den a varn al lezennoù hervez e c'hoantegezhioù, neketa ! Evit saveteiñ enor ar jañdarmed hag enor ar Republik e ranke Ujan Tomoux, lesanvet " Vau-Via ", bezañ kondaonet ! Penaos e c'helle un den a-boell evel an Aotrou Dejour sevel e vouezh ha difenn un urupailh, un istrogell evel hemañ !

277

Hag an diskan trubard en-dro :

« ... Touellet oc'h bet, Aotrou Maer..., sur n' hoc'h eus ket gwelet mat ar c'hrogad... Ret ne vefe reizhañ an traoù : n' eo ket re ziwezhat, neketa ! Ouzhpenn-se, hervez em eus klevet, e vefe an Aotrou Prefed war-nes diskouez deoc'h e anaoudegezh-vat evit al labour talvoudus graet e Sant-Yann... C'hwi 'zo istimet mat e burevioù Gwened... e burevioù Pariz ivez... ya... ya... e Pariz ivez ! Ne vefemp ket souezhet o welout a-barzh nemeur ur vedalenn war ho pruched. Un digoll dleet evel-just ! Koulskoude, koulskoude, e kenkas e teufe menozioù fallakr e speredoù tud 'zo, e vefe gwelloc'h sevel un diskleriadur

nevez, tostoc'h ouzh ar wirionez rik. Kompren a rit... an Urzh a dle bezañ doujet, ha c'hwi 'zo difenner an Urzh republikan-se !

Ha gant ur mousc'hoarzh lubanus e tiskouezed d' ar maer ar paper da zislavarout ! Met an enklaskerien o doa d' ober gant un den start hag onest. Nac'hañ a reas an Aotrou Dejour ober an disterañ cheñchamant d' e desteni, hep galv na distro e oa.

Diwar neuze e kouezhas war e chouk trubuilhoù a bep seurt, trubuilhoù hadet gant un dorn diwelus, skoilhoù ha stignoù ganas lakaet war e hent gant kargidi ha lakizien ar prefeti. C'hwitañ a rae bremañ pep tra dirazañ. Kanet e voe kunujennoù dezhañ ha lamet digantañ tamm-ha-tamm ar pezh a ra enor ha galloud ur maer. Anavezout a reas fallagriezh don an dud : tregont vloaz goude, an den onest-se a ouele dourek o tiskouez din ar stobad lizhiri dizanv hag hudur a oa degouezhet gantañ er prantad-se... An den a zo ur bleiz e-keñver an den... (1)

Ar varnerien a zigoras ar skouarn vat : lez-varn Gwened a gondaonas " Vau-Via " da zaouzek miz toull-bac'h. An archer... ne adkemerar morse e garg : klañvidik e chomas. Evel ma oa tost da gaout e retred e voe kaset d' ar gêr, gantañ en e sac'h, un tamm brav a leve ha meuleudioù mistri archerien galoñset an departamant. Mervel a reas daou vloaz goude en e genkiz : ur marv trumm a gredan.

(1) Marvet eo bet an Aotrou Dejour e Mae 1965.

278

... En toullbac'h ne reas " Vau-Via " nemet lugudachoù didalvez ha meur a wech e sellas moarvat ouzh an almanak en ur hiraezhiñ d' e zieubidigezh. Pa zistroas d' ar gêr, kuilh ha sart, ec'h adkrogas gant e labour evel diagent, hep keuz na mezh.

*

1938 : Skignet e vez er radio prezegennoù krosis Hitler. Hemañ, c'hwezhet gant al lorc'h, a laka ar pennoù bras da sodiñ hag ar pobloù da grenañ. Emgav Münschen a dro da netra : ne chomo nemet stardoù-dorn ha mousc'hoarzhoù pilpous. Emañ ar bed o c'hortoz an darzhadenn vras o tont. Met Bartali, ar paotr devot, a ya ar maout gantañ en " Tour de France ". Tridal a ra Mussolini gant al levenez rak « emañ Doue gant ar bobl italiat ! »

1939 : Prezegennoù helavar c'hoazh. Er radio ne vez ar gaoz a-bezh nemet gant ministred ha jeneraled pennfollet : « Morse ne zeuio an enebour war douar hon tadoù. Kentoc'h mervel ».

Gouelañ a ra ar maouezed.

Ar wazed, moan o reor, n'o deus c'hoant ebet da vezañ harozed, met n' eus tu ebet d' ober mod all.

Paotr ar beziou a bourchas ur bal nevez...

3-9-1939 : Ar brezel ! Evel miliadoù ha miliadoù paotred all, " Vau-Via ", ar sac'h war e chouk, a ya kuit da zifenn ar vammvro.

Mezheven 1940 : Evel miliadoù ha miliadoù all, ar paour-kaezh " Vau-Via " a zo nasket ha kaset d' ur c'hamp e-lec'h ma chomo da louediñ tost da bemp bloaz. Disoñjet em eus anv ar c'hamp-se, met n' hon eus netra d' ober gantañ.

Ar vuhez ne veze ket dibreder e kaouedoù an Alamaned. Dre wallchañs edo bac'h " Vau-Via " tost ouzh enez Peenemünde, ar porzh-brezel e-lec'h ma veze savet ha bannet ijinoù pellvleniet anavezet dindan an anv V1. Diwezhatoc'h e voe

krouet, bepred e Peenemünde, binviñ dañjerusoc'h evel V2 an Aotrou Von Braun !

279

Pa zistroas d' ar gêr, e 1945, ne oa kaoz gant ar paotr nemet eus ar pezh en doa gwelet du-hont, ha bliv e oa e zaoulagad, sañset : an trenioù o vont hag o tont gant traoù hir, iskis, hag a bep tu dezho soudarded o wintañ fuzuilhòu ha mindrailherezed e kenkas e teufe unan bennak da dostaat. Mirout a reas soñj dreist-holl eus ar bombezadegoù a sklerijenne an noz a-us d' ar porzh pa zeue, e dibenn ar brezel, steudadoù kirri-nij saoz pe amerikan da bulluc'hañ ar bannvaou fuzeenoù milliget. Neuze e tirede d' ar c'hamp an Alamaned da gerc'hat un tolpad prizonidi evit diatrediñ ar savadurioù flastret ha freuzet tro-war-dro. Ne oa ket ar mare na d' ober ardoù na da bismigañ war al labour rak an deizioù-se e oa lijer biz an aotrounez war draen ar fuzuilh !

Ar chañs a vousec'hoarzhaz outañ. Dieubet e voe gant ar Rusianed ha kaset ganto betek Stettin, e Polonia, en ur c'hamp-kreizenniñ. N' ouzon ket pegeit e chomas e Polonia met an droiad ne zisplijas ket dezhañ : hegarat ha dinoaz e oa tud ar vro-se emezañ.

Distreiñ a reas da Vreizh war e bouezig. Adkavout a reas e vamm na bade ken ouzh e c'hortoz, met ar vamm hepken : abaoe unnek miz e oa aet an tad da anaon. Stlepel a reas e sac'h-broc'h war gogn an daol, ur sac'h uzet tout, hag a oa aet da heul ar soudard a-hed ar bloavezhioù-brezel. Peget war al lien, skeudenn ur veleganez - ur " Gretchen " bennak - blev hir ha bronnoù begek kaer dezhi : « Die Schöne des Dorfes », (1) a risigne an ibil ! Brav a-walc'h e teue gantañ ar gerioù alamanek-se.

Mont a reas diouzhtu d' ar marchosi : sot e oa bet gant e gazeg kozh, met al loen n' anaveze ket mui e vestr.

(1) a dalvez war-bouez nebeut kement ha : pompinell ar gêriadenn, pe : plac'h koantañ ar gêriadenn.

*

280

Hag e krogas ur vuhez a-nevez rak, kerkent ha ma vez kavet gantañ en-dro e annez, ec'h adkrog an den diouzhtu gant plegioù ha boazioù kozh. Paotr " Vau-Via " a adkemeraz an arar, ar strop, ha bec'h d' al labour : an douar a c'hortoze, pell a oa, daouarn nerzhus ar wazed kreñv evit strujusaat. Toullet e oa bet ur varrikennad sistr hag alies e tirede d' e di paotred a oad gantañ, pep hini anezho o tibunañ e eñvorennoù-brezel un tammig " reizhet " evit doare ! An dud a blij kement dezho en em veuliñ dirak ar re all ! Laouen e oa ar bodadegoù-se, laouen ha dibreder. Anavezet o doa ar vignoniezh start, ar poanioù kalet, an disfiz, an emgannoù pemdeziek evit bevañ, ar skuizhder hag a sil en eneoù e uzadur divius, berad ha berad ! Divrall e tlefe chom seurt liammoù, neketa. Tamm-ha-tamm koulskoude e teuas an emgavioù da vezañ distank. Ne geje mui gant ar gamaladed nemet d' ar sul, goude an oferenn, dirak ur voutailhad gwin gwenn e ti an Itron Bokel - Doue d' he fardono ! Ar c'haozioù a yeas da hesk ha buan e laoskaas ivez al liammoù-se. Lod a zimezas, daou pe dri a varvas, kalz a chomas kludet en o zoull, o taskiriat o soñjoù, o freder, o nec'hamant. Bremañ n' en em gave mui ar vignoned nemet dre zegouezh, e korn ur park pe er c'hovel.

N' eo ket al labour a vanke er vereuri kennebeut ! E-pad ar brezel ar maouezed chomet o-unan penn ken hir-amzer o doa labouret an douar, mat pe fall, met bepred gant kalon : tenn ar vicher ha gwan o divrec'h.

Koazhañ a rae buan nerzh ar vamm. Goude marv an tad he doa stourmet, pennek, ouzh an Tonkadur, poulzet gant ar c'hoant da virout strujus douar he zud ! Pa zistroas he mab e torras a-grenn hec'h holl youl avat. " Vau-Via " a gemeras ur meni plijadur o soursial ouzh ar steudal labourioù a chome da gas da benn. Ne dae ket mui d'abuziñ e amzer d' ar vourc'h. Abaoe an distro, ne dae mui zoken d' an iliz ha deut e oa krenn a-enep d' ar veleien. Ar vamm eo a yae da brenañ ar pourvezioù. Mont a rae war he fouez, en ur biltrotat. Ur druez e oa he

gwelout war hent an distro, daoubleget dindan he samm. Ret e veze dezhi chom a-sav meur a wech da dennañ hec'h alan. Alies e strebaote, e riskl da gouezhañ. Kerkent ha ma spurmante ar vaouez e penn ar wenodenn e tileze " Vau-Via " an haelioù hag ez ae d' hec'h arbenn. Nann evit he disammañ : da gaout ar pakad butun hag ar gelaouenn ne lavarar ket. Rak - iskisat tra - deut e oa sot ar paotr gant ar c'hoant lenn, neket levrioù (a gendalc'he d' ober aon dezhañ), met ar c'helaouennoù, dreist-holl ar re a zibune a-hed hag a-dreuz keleier diwar-benn ar brezel ha buhez - pe marv, siwazh ! - ar brizonidi. Kement pennad displeget ennañ un draig bennak a-zivout ur prizoniad, a veze lennet hag adlennet pizh gantañ. Pa voe er gumun, " kevredigezh ar brizonidi ", an hini kentañ o vont, d' ar red, da lakaat e anv, e voe hor paotr. Ne oa ket brogarour tamm ebet, foei a rae war ar politikerezh, ne ouele ket pa voude ouzh e zivskouarn a c'han broadel. Un dra, un dra hepken a gonte evitañ : bezañ bet prizoniad, gallout lavarout, lorc'h ennañ, ouzh fas an dud :

- Me, Vau-Via, me 'zo bet prizoniad, ya... e-pad pevar bloaz, e Peenemünde...

281

Hag ar chapeled en-dro !

Er pleg-se en doa kavet, marteze, ur pal nevez d' e vuhez ; hag ar vuhez, petra eo nemet ar pezh a vez huñvreet ? Lesanvet e voe : " ar prizoniad ".

*

Ar mizioù, ar bloavezhioù a yeas e-biou evel-se. War ar pemdez e rae an den war-dro e atant : ul labourer kalonek e oa.

D' ar sul e lenne ar gelaouenn, goustadik, en ur adlenn a-wechoù pennadoù talvoudus evitañ (gwirioù ar brizonidi), a-wechoù fromus (marv ur c'hamalad kozh). D'enderv ez ae d'ober ur bourmenadenn da louzaoua a-dreuz ar maezioù. E vamm he doa desket dezhañ anv ha perzhioù mat ar plant. Anavezout a rae 'ta an darn vuiañ eus al louzoù a vez kavet en hor bro. Gant ampartiz e renke anezho war estell ul loch da sec'hañ. Gwechall e tirede an dud davet e vamm. Houmañ, deut kabac'h, e c'houlennjont ali digant ar mab. Selaou a rae " Vau-Via " ar c'hlañavour hep seniñ ger. Echu ar c'hlemmoù ez ae paotr-al-louzoù d' e loch. Goude ur pennad e tegase d' an den ur sac'hadig, ennañ ur meskad ijinnet gantañ. Hervez ar pezh em eus klevet - ha gwelet - e oa prizet kenkoulz e alioù hag e louzoù. Alies e teue ar pratikoù d' e drugarekaat. Ne gemere gwenneg ebet nemet ec'h asante degemer ur prof bennak : butun, ur voutailhad win (hini mat). Traoù fentus ha dic'hortoz a-wechoù : ur c'hwezherez evit e varc'h-houarn !

Eeun ha didro e oa e vuhez, hep kalz didu, hep kalz reuz kennebeut. Div pe deir gwech ar bloaz, avat, pa veze lidet an " Armisti " pe " Gouel ar Republik ", tud ar vourc'h a wele " Vau-Via " o ranellat abred dre ar straedoù da c'hortoz an eur merket evit ar fest... Bourrañ a rae o vezañ e-mesk ar gamaladed vedalennet ; selaou ouzh ar prezegennoù pompus (pegen aketus o selaoue !), klevout son kadarn ar c'hleron, kan ar person hag ar vasikoded, stlakerezh ar banniel broadel triliv !

« An distro ne dalv ket an eured, » a lavarar.

282

Distreiñ a rae d' ar gêr, ur bannac'h dindan e fri ha goullo e voursikod. Antronoz vintin ec'h adkroge gant e labour, drev, sonn e gribell, gant ur bern eñvorennoù da valañ en e empenn evit pell amzer.

- Un devezh dispar hon eus bet, emezañ !

*

E 1953, un nozvezh a viz Mae, pa groge dija goulou-deiz da sklaeraat gwer ar prenestr, e varvas ar vamm. Bez' ez eus tud hag a dreuz ar vuhez evel-se,

aonik, moustret, tamolodet. N' eus netra da lavarout diwar o fenn. Didrouz he doa bevet, didrouz e varvas. Morse n' en doa diskouezet " Vau-Via " ur garantez dreist d' e vamm : an den diwar ar maez ne blij ket dezhañ lakaat war wel e drubuilhoù. Anat, e voe skoet ar paotr koulskoude ! Hag an amezeien a lavare kenetrezo, en ur zistreiñ eus an obidoù :

- Hemañ a lezo al logod da grignat golc'hed e wele, sur !

Diaes en em gavas e gwir. Ne reas na similhoù nag orbidoù met dont a reas da vezañ tristoc'h : mont a rae alies d' ober ur flouradig d' e varrikenn ha pa ne blij ket dezhañ fourgasiñ ar fornigell ez eo aes kompren n' edo mui e benn gant e labour, rak ur sac'h goull, evel ma ouzhoc'h, ne c'hell ket chom en e sav. Dibarfet e labour. Koufonañ a rae e amzer. N' edo mui war e du. Ne rae nemet mibiliachoù. Anat eo e kase e stal da stalig a zeiz da zeiz. Lakepoded hag istrogelled ar barrez a-oad gantañ, ha na gredent ket daremprediñ an ti pa oa bev ar vamm, a ziredas kazi bemdez. Ha moged butun da nijal ha gouzougadoù sistr d' an traoñ ! An amezegezed a zeuas war-lerc'h marv ar vamm kement ha naetaat ar gambr hag ober war-dro al lienaj. Diskouez a rejont dezhañ penaos en em zibab da renkañ e zilhad hag ar pep retañ evit kaout un ti dereat. Kinnig a rejont dezhañ n' eo ket gwalc'hiñ hepken met takonañ ha ferñ ar pezh a vije ret. Met skuizhañ a ra buan an dud oc'h ober an aluzen. Tamm-ha-tamm e voe ankounac'haet marv an hini gozh ha digenvez ar paotr. Sammet e vez pep hini gant e labour, ul labour na lez ket amzer da drueziñ. Ouzhpenn-se, darempredoù dipitus ha leziregezh ar " prizoniad " a zisplijas dezho. Evel-se e koazhas skoazell an amezeien tamm-ha-tamm hag a fontas da vat. Lezet e voe " Vau-Via " d' ober e furlukin. Hag a reas !... Moc'het e veze e labour, spontus ! An traoù graet bourlik-ha-bourlok ne c'hellont ket padout.

283

Un deiz bennak e redas dre ar maezioù un nevezinti a bouez. Edo " Vau-Via " o werzhañ e beadra, e loened - e gazeg kozh ken karet koulskoude - e ostilhoù, e vinvioù liesseurt, eus an hini brasañ betek an hini bihanañ. Dilezel a rae pep tra, dichipot, diseblant, hep keuz : ne felle ket dezhañ mirout gantañ an disterañ fun pe storeen. Un avel a rebechoù hag a zismegañs en em ledas war ar mereurioù diwar-dro. Ar beizanted, kalet o c'horf ouzh ar boan, ne garont ket gwelout seurt traoù en o metou : un den diwar ar maez o tizanaout e vicher, hag int ken damantus d' an douar abaoe meur ha meur rummad, an douar deut strujus dre c'hweziñ puilh warnañ. Ha penaos e vefe barnet ur c'habiten a vor a gasfe e lestr d' ar strad, a-benn-kaer, dre leziregezh ? Gant ar vezh !

Chom a reas ar " prizoniad " diseblant ha distrafuilh, e-kreiz ar barrad-kounnar a-enep dezhañ. Anavezout a rae korvigell e genseurted. Gouzout a rae e teufent, e tiredfent kentoc'h, poulzet gant ar spi da breñañ d' ar briz izelañ koulz ar bitrakoù evel al loened. Ha setu dres ar pezh a c'hoarvezas : trec'het e voe ar santimantoù, ar menozioù uhel, gant ar c'hoant kozh - gourdadel - d' ober aferoù mat.

Ur mizvezh e padas an abadenn drist-se. Kement tra kinniget a voe gwerzhed ha gwerzhed a-wechoù evit nebeut rak d' abardaez, pa veze tomm d' e benn, e leze " Vau-Via " an traoù evit kazi netra. Lakaet e voe an atant en arigrap : an holl gouerien amsellus a fardas war an degouezh evel merien war un tamm sukr. Skubet e voe ar marchosi, ar c'hraou, ar c'hriognol betek an ibil diwezhañ. Reiñ a reas zoken e gazh da verc'h un amezegez. Feurmiñ a reas ar parkoù, ar pradoù d' ar gouerien dostañ nemet teir laneg. Ne chomas mann nemet pezh a oa ret evit derc'hel menaj ur paotr yaouank kozh distrob. Pa veze goulennet outañ :

« Ha bremañ, paotr, penaos e teuio da vegad war an daol ? » e responte : « N' en em chalit ket : diwar-goust karantez ha sistr mat ! »

284

E gwirionez ez eas da zevezhour ! Met fellout a reas dezhañ bezañ un devezhour " a-zoare ". Figus e oa an den. Mont a reas da gavout ar berc'henned pinvidikañ. Kinnig a reas dezho e servij n' eus forzh pe zeiz « nemet ar sadorn a vo gouestlet da gempenn an ti, hag al lun a vo an devezh-louzaoua ! » Evel ma

oa un den kreñv ha na derme ket war al labour tennañ, e voe asantet d' e c'houlenn. Den na netra ne zeuas a-benn d' e lakaat da freuzañ e varc'had, pe an eost en arvar pe ur gwallzarvoud bennak c'hoarvezet en ti-mañ-ti, morse ne zislavaras e c'her. Ha setu penaos, bep sadorn, e veze gwelet " Vau-Via " oc'h ober war-dro e gouez, o furchal er gambrig, o vont d' ar vourc'h da brenañ e bourveziou, bepred an hevelep re : boestadoù-mir (frigasenn, brizhili), bara, butun ha " Morbihan-Eclair ", kelaouenn sizhuniek an departamant. D' ar sul e lenne, lunedoù e vamm gantañ war e fri. D' al lun ez ae da vale dre ar maeziou, da louzaoua, da glask da skouer al louzaouenn-staoter (pe c'hwervizon), ken mat ivez, hervezañ, evit lakaat ar boued da ziskenn aes, an delioù-drez, a dorr tan ar c'hoëñv-gouzoug, ar broust a zistan poanioù ar remm. Pa lavararin e taremprede kement " abadenn " broadel dalc'het war blasenn ar vourc'h e weler e rene " Vau-Via " ur vuhez disoursi ken e oa disoursi.

*

Er mare-se darvoudoù dic'hortoz va buhez-me a reas din mont d' ober va annez du-hont. Prenet em boa un dachenn-douar e-sell da sevel un ti bihan. A-viskoazh on bet dedennet gant peoc'h ar maeziou, kan al laboused, labour ar beizanted ha dreist-holl, ya, dreist-holl gant ar gwez ! Diskoachet em boa 'ta un dachenn a glote gant va c'hoantoù donañ : sioulder an natur ouez, ur stivell froudennus o vourboulhañ, ha tro-war-dro gwez a bep seurt hag a bep ment dirazon, a-dreñv, pell, pell... un dudi !

O c'hortoz ar " genkiz " da vezañ savet e feurmis un hanter eus pennti " Vau-Via ". Ne oa nemet ur speurenn o tistrannañ an daou annez. Diwar an deiz-se, dre vray pe dre heg, e tleen skoulmañ darempredoù gant an istrogell-se (hag a anavezen pemzek vloaz 'oa dija). Alies e vez barnet an dud re brim. Abaoe ar stokad gwalleürus c'hoarvezet gant " beg-e-dog ", an archer, e oa kouezhet an diskred warnañ. Evel ma oa divalav (hag un den divalav ne blij ket), ha techet da sevel driked ar c'hav aliesoc'h eget hini dor an iliz, e veze disprizet ar paour-kaezh " Vau-Via ", pe " ar prizoniad ", ken chaoker, ken randoner ma oa ar prantad-se. Nag a wech em eus e glevet o tibunañ dizehan e " istor "... « Edon e Peenemünde... kabiten ar c'hamp, nonde ! ar salaud Rüsdoef... ar c'hamalad Davère, hag all, hag all » ken e lavararin dezhañ a-benn ar fin : « Ac'hanta, Vau-Via, me 'soñj din ec'h anavezan da istor koulz ha te. N' eus diskan all ebet ez penn ? »

285

Mouzhet e voe ouzhin tri devezh diouzhtu : lamet em boa digantañ ar pezh a roe ur ster d' e dammig buhez. E vouzherezh ne badas ket avat!

Mont da louzaoua gantañ a oa ur blijadur dreist. Nag a draoù prizius em befe desket netra nemet ouzh e glevout, ouzh e welout ! Pegen arroutet e oa war ar vicher-se ! Anavezout a rae holl blant-medisinerezh hor bro. Kutuilh a rae anezho gant aked, o treiñ hag o tistreiñ an delioù en e zorn. Gouzout a rae, dre voaz, da belec'h mont evit diskoachañ al louzoù-mañ-louzoù ! Chom a raemp da chuchual, met pegen talvoudus e oa dizoleiñ an natur evel-se ! Diskouez a reas din neket ar plant boutin hepken met pep seurt traoù na welomp ket mui, dallet ma 'z omp gant ar vuhez pennfollet a renomp. Evidon e tigoras ul levr nevez ma oa ar pajennoù anezhañ ken dedennus an eil hag eben. Evel-se hon eus heuliet roudoù al louarn kozh a ziskenne a-dreuz al lanneg nes d' ar pennti. Teir gwech hon eus e welet o klask e vegad. Pegen divergont e oa al loen-se ! Chom a rae en e sav, goapaer, o parañ e zaoulagad dizaon warnomp ! D' an disterañ jestr e lamme dreist al lann, en ur genderc'hel dichek gant e valeadenn. Gantañ ivez em eus diboufet an naered-wiber en o rodelloù e gor an heol. Mont a raemp didrouz a-hed ar c'hleuzioù, war un tu diouzh ar mintin, war an tu all diouzh an endervezh : an anevaled vil-se a blij dezho bannoù nerzhus an heol : heuliañ a reont e bourmenadenn en oabl. Ur sulvezh bennak hon eus paket - ha lorc'h ennomp - eizh naer ken heugus an eil hag eben, met tudoù, pebezh diskan digant va gwreg !

Nag a draoù a zeskas din ar c'hozh vigrier-se ! Anvioù ar c'hebell-touseg ken prizet bremañ, anvioù laboused ar vro, o c'han, o geiz, o neizhioù, o doare

da vevañ da reiñ boued d' o re vihan. Hervez merkoù dister ha diwelus evidon (liv an oabl, c'hwezh an aer, red ar c'hogus, nijadenn al laboused, kresk pe digresk al loar), e lavare hep faziañ kalz : warc'hoazh e raio glav, brummenn, pe : kreñv e vo an avel, pe : emañ an amzer yen o tont, oc'h echuiñ. Pebezh ampled fonnus em befe graet eus an holl draoù a ziskouezas din ! Siwazh, sellet em eus hep gwelout !

Ne oa ket drouk ar paotr : iskis, o vevañ er-maez eus pep reolenn ne lavaran ket. N' eo ket aezet kompren seurt tud. Seven ha dizoare war un dro, hegarat ha drouk koulskoude, gwidreüs a spered pe didroidell hag eeun. Leun a zoujañs a-wechoù met o kunujenniñ n' eus forzh piv dirak n' eus forzh piv ! Krediñ a ran e tisprize ar vuhez dre voaz, dre anoaz, met peseurt enkrez a guzhe en e spered ?

286

Ne laboure nemet pa veze goull e yalc'h. Tamm-ha-tamm e teuas e bratikoù da vezañ displijet gant e zoareoù faltazius. Nebeutoc'h-nebeutañ e veze goulennet an den da labourat. Ret e voe dezhañ gwerzhañ un dachennig da hemañ, ul lanneg da henezh. Spontusat tra evit e nized, c'hoant dezho lakaat ar skrap war bep tra, hag int da ziredek buan gant aon na werzhfe e holl beadra ; ganto litradoù boeson, polizi rostet, butun hag un tranzistor prenet e Prizunik ! Goap a rae " ar prizoniad " ouzh seurt klufaned. Evañ ha debriñ a rae ar pezh a veze degaset dezhañ, hep trugarekaat ar rastellerien-vadoù a zisprize a-grenn. Penaos kompren ivez peseurt froudenn e boulze da chom muzet a-greiz-holl en e di meur a zeiz hep lakaat troad ebet er-maez ? Ar stalafioù serr. Trouz ebet. Kousket ar paotr ? Klañv ? Peseurt anken, peseurt kerse a lakae anezhañ da chom evel seizet war e wele en ur mor a soñjoù melkonius ? Setu un dra n' omp ket evit gouzout.

Un afer all hag a c'hoarvezas gantañ a ziskouezas pegen gwerous e teue da vezañ. Abaoe an amzer m' en doa feurmet e zouaroù, e nac'he " Vau-Via " paeañ an tailhoù dleet.

« Ne labouran ket mui, ne baein ket mui, » a chaoke-eñ !

Aheurtet e oa an den, met implijidi burevioù Gwened a zo ken aheurtet all. Kaset e voe dezhañ lizhiri erbedet gant sielloù bras ha sinet gant pennoù uhel, peadra d' ho lakaat da baeañ kentoc'h div wech eget unan gant aon d' an trubuilhoù da zont ! Hag ur mintinvezh e tarzhas an taol kurun a zistrujas ur wech muioc'h sioulder ar gomun. Erruout a reas an urcher, digas, o wintañ un espled ofisiel. Ar " prizoniad ", ar ruz d' e benn, a lammas warnañ, e zifretas en ur skeiñ ouzh e fas « e oa re yaouank, anez da se en devije graet un intañvez gant e wreg ! » An urcher, ur c'hêriad yaouank moan e feskennoù, a vesteodas gourdrozoù diot, ar c'hwezenn o ruilhal diwar e zremm. Evel just e reas an den-a-lezenn klemm ouzh an istrogell. Ur wech muioc'h e tiskennas 'ta an archerien da gaout " Vau-Via ". Bez' e oa daou archer, sañset hervez ar reolenn, met ivez gant aon razañ : anat e oa ne felle ket d' hor paotr c'hoari ar vasikod dirazo. Edo an archerien war evezh, gwall-spontik e gwir ! Brudet e oa " Vau-Via " evit e nerzh hag e varradoù-kounnar dichadennet. Ne respontas netra ! C'hwitellat a reas evel ur pabor, oc'h ober goap outo, o tistagañ bourdoù ha fentigelloù. Paotred Mari-Robin a guitaas an ti, mezhek ha morennet o zal. « Ar wech-mañ, a soñjas an holl, e troio fallik an traoù evit ar " prizoniad. " Fall-tre e gwirionez !

287

Ar sadorn war-lerc'h ez eas " Vau-Via " d' ar vourc'h evel boaz d' ober e varc'hadoù. Kejañ a reas gant mignoned drev, ha dibunañ a reas an istor gant gwilc'hadennoù ha c'hoarzhadennoù skiltrus. Brud an archerien a voe gwall-gaset ken a voe gwallgaset. An dud a blij dezho lakaat ar re all da sodiñ gant ma chomint-i didrubuilh. Distreiñ a reas d'ar gêr e poent brav. Diouzh an endervezh en deiz-se end-eeun e teuas " Yann Maouter " da droc'hañ e vlev gantañ. Digor-frank e oa an ti met ne oa den e-barzh. D' ar sul vintin e tistroas Yann a-nevez. Kavout a reas e vignon chouket war ar bank, harpet ouzh ar voger. Edo o roc'hal iskis...

Galvet e voe ar medisin. Hemañ a zeuas, imor fall ennañ un den o vervel a zo ur pratik kollet ha mervel d' ar sul a zo un dismegañs. Galvet e voe ar person hag a respontas ne c'helle ket mont nemet goude lein. Perak en em zirenkañ evit un ibil n' en em zirenk ket evit dont d' an iliz ha na bae ket "diner an iliz " ? Dont a reas war-dro teir eur en ur vont d' ur vodadeg evit ar re yaouank... Re ziwezhat ! Hag evel-se e voe disprizet ar paour-kaezh " Vau-Via " betek e varv !

Ar marv kevrinus-se a lakaas an teodoù da vont en-dro.

Un nebeut deizioù a-raok en doa gwerzhet e laneg war hent bras Redon. Evit mil lur nevez ! Morse ne voe dizoloet ar yalc'had. E pelec'h en doa he lakaet ? Un den a-seurt-se ne gase ket e vilhedoù d' ur c'hef-espenn bennak. Edo an arc'hant en ti, pe war-dro an ti, met pelec'h ? E-pad ur sizhunvezh, an daou niz war o farlochoù, o gwagez, o bugale hemañ a lakaas an ti a benn-bouell. Didachet e voe ar plañchod, sondet ar mogerioù, freuzet ar barrikennoù goullo. Pep tra a voe stlapet er-maez war al leton, didruez, an imor o kreskiñ enno !

En aner !

E dro-gamm diwezhañ e oa !

*

Ya, keuz am eus bet d' an den-se.

Krediñ a ran ez eus bet pardonet kalz dezhañ !

An tri oan

Troet diwar ar saozneg gant ANI KEREMBELLEG.

An droidigezh-mañ zo bet savet gant ur studierez eus Skol-Veur Roazhon evel ma 'z eo Giza Abgrall, oberourez " Ar Ribouladenn " en niverenn diwezhañ, hag ivez Jaklin Pennanec'h, Gwendal Denez, Ernest Olier hag Iffig Skirioù m' eo bet embannet o c'hontadennoù en niverennoù kent.

Sevel a reas Mikaelig a-raok tarzhan-deiz. Klask a reas ober an nebeutañ trouz posubl. Debriñ a reas daou damm bara amanennet hag evañ un dasadennad laezh daoust ma ne gave ket mat laezh yen gant bara amanennet diouzh ar mintin. Met evit ur wech evel-se, petra a rae d' ur paotrig ar pezh a zebre ? Bez' e oa eñ o vont da welout an dañvadez zu a oa war-nes oaniñ. An noz a-raok en doa lavaret e dad e oa an dañvadez zu sur da oaniñ ar mintin-se, hag evel just e oa ur priz, teir grampouezhenn, evit an hini kentañ endije gwelet an oan.

Sevel a reas ar c'hliked ha tec'hout a reas er-maez. Gwelloc'h e oa chom hep lavarout da John e oa o vont. Evel just en dije bet John c'hoant da vont ivez. Dre ma oa o tiskenn gant ar wenodenn d' ar red e teue e vilginoù, o ruzañ ouzh ouzh ar bodoù glas, da vezañ gleb gant ar glizh ha gwelet e veze e gasketenn o lammat a-us hag a-is d' ar c'harzh. Re a vall a oa warnañ evit digeriñ ar gloued hag, o krapañ dreisti, e reas ur rogadenn vihan da gorf e jiletenn c'hlas. Met ne rae forzh. Unan all a vije bet roet dezhañ evit e drizekvet deiz-ha-bloaz.

289

Treiñ a reas war tu kleiz an hent bras ha sevel a reas gant ur wenodenn a gase d' ar park e-lec'h ma talc'he e dad, ar barner, e zañvadez zu, an hini he doa gounezet ur priz. Ar wenodenn-se ne rae nemet un hanter gilometr bennak met soñjal a rae dezhañ ne echufe ket, ha ne rae nemet strebotiñ e-mesk ar mein skignet war ar wenodenn. Ken diaes e oa redek war ar mein gant botoù ler ha re abred er bloaz e oa c'hoazh evit ma vefe lesket da vont treid noazh. Aviañ a reas Jimmy Bihan, mab an devezhour, hag a veze lesket da vont treid noazh e-pad mizioù du ar goañv, hag en deveze dalc'hmat troc'hoù ken spontus war e vizied treid, ar pezh a oa aviet gant an holl baotred vihan e skol ar vourc'h.

Krapañ a reas war ur c'hleuz a gase d' ar park hag en ur stlapañ e zaouarn e lavarar « O gast ! », un douadell en doa desket gant Jimmy Bihan. Lorc'h bras a oa ennañ ouzh he gouzout. Tennañ a reas e votoù ler hag e loeroù ha kuzhat anezho en un toull e-barzh ar c'harzh. Goude e redas a lammoù, e seulioù noazh evel pikoù krenn liv-kistin pa save anezho. Ar geot a oa gleb hag an douar kalet met reiñ a reas da grediñ dezhañ e-unan e oa plijus un dudi.

O treuziñ un toull-karr evit mont er park all e welas ur c'honikl o krignat geot. Trumm e chomas a-sav, e galon o tridal kreñv. Ar c'honikl a ehanas da zebriñ. Sevel a reas e zivskouarn. En em zerc'hel a reas war gab e reor, e c'houzoug stegn hag e bavioù o skourrañ laosk. Neuze en em lakaas en-dro war e bevar bav. Strinkañ a reas e zivskouarn war-raok. Goude e c'hourvezas gant e zivskouarn stouet war e gein hag e chomas difiñv. Gant ur mell youc'hadenn e fardas Mikaelig war-raok, heñvel ouzh ur c'hi o harzhal, hag ar c'honikl da dec'hout en ur piklammat dillo. Ne veze gwelet nemet e lost gwenn er sklerijenn arc'hantet.

Mont a reas Mikaelig er park met ne oa dañvadez zu ebet war wel. Mont a reas war ur roz ha servel a reas « chowin, chowin » teir gwech. Neuze e klevas « Mah-m-m » er park a-gostez ha redek a reas. An deñved a oa e-barzh an daou bark diwezhañ, daou bark hirvoan astennet en un draonienn etre daou darroz, hag a oa gronnet gant kleuzioù uhel ha stank, mogerioù ur c'hreñvlec'h kozh. E-barzh an hini tostañ eus ar parkoù e kavas dek dañvad hag a oa kichen-ha-kichen o sellout outañ, gant o femzek oan dirazo hag a oa o sellout ranell outañ ivez. Kontañ a reas : ne oa ket an dañvadez zu aze. Dianalañ a reas gant an atiz. Marteze he doa bet un oan endeo er park all. Mall warnañ ez eas betek an toull-karr a gase d' ar park a-gostez, o vale dre guzh, o tiwall diouzh al lec'hioù ma veze geot uhel, evitañ d' ober nebeutoc'h trouz. Fall e oa direnkañ un dañvadez o oaniñ. Sellout a reas gant evezh en un toull e-barzh ar c'harzh, met ne oa gouest da welout netra. Neuze en em stlejas war-du an toull-karr hag e reas ur sell diouzh ar c'horn. An dañvadez zu a oa just eno, gant he favioù diaraog war ur roz bihan.

290

He c'hof a oa koeñvet ken e valire a bep tu hag he favioù ne oant ket kreñv a-walc'h da skorañ anezhi. Treiñ a reas he fenn trumm hag e selaouas. Derc'hel a reas Mikaelig war e anal gant aon d' ober trouz. Arabat 'oa direnkañ an dañvadez. O kilañ goustad evit gourvez e klevas ur bouton o strakañ war e vragoù : gouzout a rae e oa divoutonet e sifelennoù. Lavarout a reas c'hoazh « O gast ! », hag e reas e venoz goulenn gant e vamm an aotre da lakaat, e-lec'h sifelennoù, ur gouriz heñvel ouzh an hini a lake Jimmy. Neuze en em stlejas pelloc'h diouzh an toull-karr, tennañ a reas e sifelennoù hag e lakaas anezho d' ober ur gouriz. Poan a raent d' e groazlez met en em santout a rae gwelloc'h ha 'vel ur gwaz.

Goude e teuas en-dro d' an toull-karr da sellout. An dañvadez zu a oa en hevelep lec'h c'hoazh. Skrabañ a rae an douar gant he favioù diaraog ha treiñ-distreiñ a rae evel pa he dije bet c'hoant da vont en he gourvez met aon ivez da vont. A-wechoù e wigoure he dent hag e rae un trouz divalav ; prennet he doa start he garvanoù ha treiñ a rae he fenn a-gostez. Poan a sante Mikaelig en e galon gant an druez eviti hag en em c'houlenn a reas perak ne zeue ket an deñved all da welout anezhi. Goude en em c'houlennas hag-eñ he doa santet e vamm an hevelep poan pa he doa bet Ethna an diskar-amzer a-raok. Sur a-walc'h peogwir e oa ar medisin aze.

Trumm ez eas an dañvadez zu war he daoulin. Chom a reas war he daoulin ur pennad amzer ha goude e klemmas hag e kouezhas war an douar hag en em astennas gant he gouzoug war ar roz bihan hag he fenn a-dreñv o kouezhañ war an diribin bihan. Mikaelig a zisoñjas ar boan neuze. Hegaset e oa. Ankounac'haat a reas tennañ e anal, ken evezhiek e selle. « A » a lavaras. En em astenn a reas an dañvadez c'hoazh ha klask a reas en em lakaat war he zreid. Treiñ-distreiñ a reas o skeiñ gant he zreid hag o skrignal he dent. Tostaat a reas Mikaelig. Sellout a reas outañ gant aon met re wan e oa evit fiñval. Fregañ a reas Mikaelig ar sac'h dour ha gwelout a reas daou droad bihan o tont er-maez. Tapañ a reas krog enno ha sachañ. Klemm a reas an dañvadez c'hoazh ha bountañ gant he holl nerzh. Kouezhañ a reas an oan war ar geot.

291

Huanadiñ a reas Mikaelig gant ar blijadur ha kregiñ a reas da frotañ e gorf d' an oanig gant e ivinoù. An dañvadez a droas hag a c'hwezhas anezhañ en ur ober un trouz fentus ha laouen en he c'horzailhenn. An oanig a oa goloet e gorf gant danvez gludek ha melen ; kregiñ a reas da fiñval ha neuze e klaskas sevel, met kouezhañ a reas ; ha Mikaelig a gendalc'has da frotañ anezhañ, o lakaat e viz en e zivskouarn hag e fronelloù evit distouvañ anezho. Ken dalc'het e oa gant e labour ma ne welas ket e oa aet an dañvadez pelloc'h ; pa voe gouest an oan da chom en e sav ha p' en doe c'hoant da lakaat anezhañ da zenañ, e verzas Mikaelig e oa aet an dañvadez en he gourvez en-dro evit oaniñ. « O gast », a lavaras Mikaelig, e veg digor-bras, « c'hwec'h krampouezhenn em bo ! »

An eil oan a oa gwenn evel an hini kentañ met gant ur pik du war e skouarn dehou. Mikaelig a frotas anezhañ gant e holl nerzh, oc'h ehanañ ur wech an amzer

evit sikour an oan kentañ da chom en e sav pa glaske trabidellañ dre amañ pe dre aze. An dañvadez a droe, oc'h ober trouzoù izel en he c'horzailhenn hag o c'hwesa an daou oanig, hep chom a sav e lec'h ebet, ken mezevellet hag ur skoliad, ar boullou douar stag ouzh he c'hof o vrañsellat evel ur chapeled dre ma yae war-raok. Neuze, Mikaelig a dapas krog en oan kentañ ha klask a reas e lakaat da zenañ, met nac'h a reas tapout ar penn-bronn hag e sankas e veg er gloan. Lakaat a reas Mikaelig e viz en e veg ha tamm-ha-tamm e teuas a-benn da lakaat ar penn-bronn e-barzh gant e zorn all. Gwaskañ a reas war ar penn-bronn ken e flistras al laezh tomm e beg an oan. Fistilhañ a reas an oan e lost, difreñ a reas e gorf hag e vountas e benn hag e krogas da denañ.

Mikaelig a oa just o vont da reiñ e dro d' an oan all pa stagas an dañvadez da glemm. Kuit ez eas. Lavarout a reas Mikaelig « chowin, chowin » ha lakaat an oan e-tal he fenn met treiñ a reas-hi ha mont kuit en ur glemmañ, o skrignal he dent hag o skeiñ war an douar. « O gast », a lavaras Mikaelig, « emañ-hi o vont da gaout un oan all ».

Adarre en em lakaas an dañvadez en he gourvez, astennet he faviou diaraog ; hag en ur stegnañ he gouzoug e roas buhez d'un trede oan, unan du.

292

Sevel a reas prim, kleuz he daou gostez bremañ. Hejañ a reas he fenn hag hep teurel evezh ouzh an oaned e krogas da zebriñ geot en ur doare taer, o chom a-sav ur wech an amzer evit ober « Mah-m-m ».

Bamet gant al levenez e frotas Mikaelig an oan betek ma voe gouest da chom en e sav. Lakaat a reas an holl oaned da denañ e-pad ma chome sioul an dañvadez o peuriñ ; ur wech an amzer e c'hwese-hi unan anezho. « O gast ! » a gendalc'he Mikaelig da lavarout, o soñjal e vije bet brudet tre bremañ hag e vije bet komzet diwar e benn e-pad ar sizhun a-bezh. Ne oa ket bemdez e veze un dañvadez gant tri oan.

Kas a reas anezho en ul lec'h goudoret dindan ur c'harzh. Torchañ a reas e zaouarn gludek war ar geot. Digeriñ a reas e gontell ha troc'hañ ar gloan lous a oa ouzh bronn an dañvadez gant aon na lonkfe an oaned un tamm outañ hag e varvfent. Reiñ a reas ur sell diwezhañ outo hag e lavaras « chowin, chowin » gant ur vouezh flour ha neuze e troas evit mont kuit.

Erruet e oa dija en toull-karr pa chomas trumm a-sav. Redek a reas en-dro e-lec'h ma oa an oaned ha pizh e sellas outo. « Tri he deus bet, » a lavaras dianalet. « O gast ! biken ne oa c'hoarvezet an dra-se a-raok. Marteze e roio va zad un nebeut gwenneien din. »

Ha pa oa o redek war-du ar gêr e harzhas evel ur c'hi gant ar blijadur.

ANJELA DUVAL
KAN AN DOUAR
barzhonegoù
war Johannot niverennet 25,00 lur
war baper all 16,00 lur

AR SUIS BRAS

Kemeret hon eus ar pleg da zigeriñ, e penn-kentañ pep bloavezh nevez, ar c'helc'hkelaouennoù a zo bet embannet e Breizh kant vloaz a-raok. Kentelius-meurbet ez eo peurliesañ, hag a-wechoù e reer kavadennoù.

Evit ar bloaz, er *Revue de Bretagne et de Vendée*, eo gant souezh hon eus dizoloet ar werz-mañ : *Ar Jouis Bras*. Lavarout a ran gant souezh, rak e lec'h ebet n'em boa gwelet anv eus an embannadur-se. N' em boa ket meneg anezhañ em notennoù. Hag evit sklaeraat va c'houstiañs em eus kemeret levr F. Gourvil diwar-benn Kervarker : Hersart de la Villemarqué et le Barzaz-Breiz. Rak evel a ouzoc'h ez eus da geñveriañ gwerz ar *Suis Bras* ouzh *Baron Jaouioz* Kervarker. Met e Gourvil, anv ebet kennebeud-all eus ar stumm-mañ. Anat eo n' eo ket aet Gourvil da welout petra eus hor gwerzioù kozh a c'helle chom c'hoazh en eñvor ar bobl, na zoken petra evit gwir a oa bet dastumet hag embannet amañ hag ahont.

Menegomp berr ha berr ar stummoù a zo bet embannet en diavaez d' ar *Barzaz-Breiz*, hag a vefe da geñveriañ ouzh *Baron Jaouioz*. En *Uhel*, ur stumm er Gwerzioù II, p. 30-39, dindan an anv : *Izabell ar Yann* ; ar gentel-se a gomz eus ur pont, eus daoulinañ war ar pont-se, met n' eo ket sklaer an destenn, ne weler ket ar perak eus ar jestr-se ; e dibenn ar werz, kennebeud-all, ne zistro ket ar plac'h d' ar gêr. E dastumad Pennwern amañ ivez dindan an anv : *Ar Jouis koz*, levrenn 89, follennoù 149-152, ha follennoù 181-185 ; embannet eo bet ar pajennoù-se e Gwerin niv. 5. An daou stumm adskrivet gant Pennwern en em ziskouez diglok-meurbet.

Setu eta kentel ar *Revue de Vendée et de Bretagne* : gant an taol lagad kentañ eo sklaer eo an hini glokañ, an hini vravañ, an hini sklaerañ ; met ken sklaer all, n' eus meneg ebet anezhi nag e Gourvil nag e lec'h all. Piv eta a savo ar roll klok eus ar c'hement a zo bet embannet amañ hag ahont eus folklor ar vro ?

294

Al lenner a welo diouzhtu amañ n' eus ket anv eus Baron Jaouioz. Ur Suis eo an hini en deus kaset gantañ Louizan ar Rouz. An *Uhel*, eñ, en devoa ijinete talvez ar ger Jouis kement ha Yuzev : met kalz a faltazi en devoa ar folklorour meur. Dija Guilhom ar Yann, er *Revue Celtique*, levrenn II, p. 65, a oa bet fin a-walc'h evit chom hep heuliañ anezhañ. Taolit pled eo ur Yann-all hon eus amañ, evel dastumer hor gwerz, Yann-Vari, en devoa da anv-barzh Eostig Koad an Noz.

Ur Suis : emañ e vro, a lavar dimp ar werz, kant lev en tu all da Bariz. Ur Suis e gwirionez, pe unan eus ar soudarded alaman a rede dre ar vro gant an armeoù hag ar brezelioù a bep seurt. Marteze war dachenn an darvoudoù eo bet danvez ar Werz nebeut a dra : ur plac'h o timeziñ gant ur Suis, ha kaset gantañ d' e vro...

Met ar pezh a dalv eo ar pezh eo deuet kement-se da vezañ en emskiant ar bobl. Ne c'hell ket bezañ aet kuit eus ar vro, hep bezañ rediet, hep bezañ gwerzhet, n' eo ket a youl-kaer. Hag an emskiant vroadel-se a zo c'hoazh laket da splannañ gant ar pezh a c'hoarvez pa dremen Pontorson : war harzoù Breizh, he loen zoken, hec'h inkane, a ya war he daoulin koulz hag hi. Evel just, sklaer eo, tud ar bobl gwechall e Breizh, n' o devoa emskiant vroadel ebet : an dra-se a zo un ijinadenn eus an amzer a-vremañ, ijinadenn an emrenerion.

N' hall ket Louizan kennebeud-all chom hep kaout hiraezh da Vreizh, hag a-benn ar fin distreiñ d' ar vro...

Da varn diouzh ar yezh, stummoù kozh a zo, hag ivez hervez an darvoudoù hag ar soñjoù diskleriet e kredan e vefe ar werz-mañ eus ar 17-vet kantved, da vihanañ.

M. GLANNDOUR.

295

AR JOUIS BRAS

Pa oan o tont eus an ofis
War sich ar Groaz e remerkis
Pevar lakez hag ur Jouis.

Ar Jouis bras o c'houl ouzhin :
« Plac'h yaouank, c'hwi euteur dimiñ ? » (bis)
Allaz ! ha me a oa yaouank
A laras dezhañ 'oan kontant.

Hag o reiñ din un diamant :
« Dalc'hit hoc'h arrez, merc'h yaouank ! »

E-barzh er gêr pa erruis,
'Barzh er gampr wenn en em lakis
Ha da ouelañ e komañsis.

Ma mamm ouzhin he deus goulet :
« Ma merc'h, 'vit petra e ouelet ? »
- « Mar erru ar Jouis amañ
'N an' Doue, va nac'hit outañ. »

N' oa ket he c'homz peurachuet
Ar Jouis bras 'zo antreet.
« Na boñjour ha joa en ti-mañ,
Pelec'h emañ va dous Louizan ? »

He mamm dezhañ 'deus respontet :
« 'Boe ma oa aet d'hec'h ofern-bred,
Goudevezh, n' em eus hi gwelet. »

- « O, reit-hu din an alc'hweziou
Mar 'mañ war-dro, me he c'havo. »

'N alc'hwez ar gampr wenn eo kroget,
E zous Louizan en deus kavet.

« Louizan ar Rouz 'n em breparet,
Dont ganin diouzhtu a rankfet.

Rak ho preur Louiz am eus kavet,
Ar paeamant en deus touchet :

296

Pevar c'hant skoed en arc'hant gwenn,
Ha kemend-all en aour melen. »

Louizan ar Rouz a c'houlenne
Digant he mamm pa ziskenne

« Va mammig paour din leveret,
Gant ar Jouis 'vo ret monet ? »

- « Leal, va merc'h, me n' ouzon ket,
Digant ho preur Louiz 'c'houlennfet. »

- « Va breurig Louiz, din, o, leret,

Gant ar Jouis 'vo ret monet ? »

- « Ya, gant ar Jouis 'vo ret monet,
Ar paeamant a zo touchet :

Pevar c'hant skoed en arc'hant gwenn,
Ha kemend-all en aour melen, »

- « Itron Varia an Dreinded,
Me 'zo graet din 'vel d' al loened :

Me a zo gwerzhed en ur foar
E-giz d' un aneval brutal.

Met va mamm baour, livirit din,
Petore abid a wiskin ? »

- « Gwiskit an hini a geret,
Birviken gant joa n' e uzet.

Met gwiskit unan bennaket
Hag a vo skañv deoc'h da gerzhed. »

Ar Jouis bras oa 'tal an tan
Hag a lavaras dei buan :

« Gwiskit an hini a geret,
Evit kerzhout na refet ket.

'Mañ 'n inkape e toull ar porzh,
Ha dibret kloz ouzh ho kortoz.

Houarnet eo gant leton gwenn
Ur brid alaouret en e benn,

297

Un dibr arc'hantet war e gein,
Louizaik ar Rouz 'vit ho tougen. »

Louizaik ar Rouz a lavare
War gein hec'h inkane pa bigne :

« Adeo a laran d' am broiz,
Nemet d' al laer, va breur Louiz,
En deus va gwerzhed d' ar Jouis.

Me garfe klañv va breur Louiz
Ken a errufe gwreg ar Jouis
Da laret dezhañ : « Sav alese, Louiz ! »

*

Pa oa o tremen Pontorson
Ec'h eure ur strak he c'halon :

« Kriz oc'h-c'hwi evel un ejen
Pa ne ouelit ouzh en tremen ;

Ha c'hwi 'welout va inkane
O vont d' an daoulin koulz ha me.

Met, Jouis bras, livirit din.
Ha n' on ket erru tost d' ho ti ?

- Kant lev a zo 'c'hann da Baris,
Kant lev tu-all 'mañ bro ar Jouis. »

*

Ar Jouis bras a lavare
D' e vamm er gêr pan arrue :

« Setu deut ganin amañ
Bravañ plach yaouank a gavan.

- Perak n' he lezel gant he zad
Mar n' eo ket deuet gant he grad vat ?
Emañ 'n dour war he daoulagad...

Pa vo bet ur pennad 'barzh va zi
Me a gontanto anezhi. »

Ar Jouis bras a lavare
Da Louizaik ar Rouz neuze :

298

« Louizaik ar Rouz, deut d' am c'hampr
Da zibab aour a-vesk arc'hant.

- Gwell 've ganin bezañ em bro
O kontañ vioù a-zousennoù.

- Louizaik ar Rouz, deut d' am c'hampr
Da glevout son ar violoñs arc'hant.

- Gwell 've ganin hep lakat mar
Klevout chas va bro o harzal.

- Louizaik ar Rouz, deut e kêr
Evit choaz etof ha mezher,

Evit choaz lien Hollanda
Ha dantelezh eus ar c'haerañ.

- Ur vrozha barlin 've gwell ganin
Ma vije va mamm he roje din. »

Louizaik ar Rouz a lavare
Diwar brenestr he c'hampr un de :

« Aviz a ra din e klevan K
ok Indez va zad o kanañ.

- Penaos oufec'h klevout 'nezhañ
Ha c'hwi pemp kant lev dioutañ ! »

Louizaik ar Rouz a lavare
Diwar brenestr he c'hampr un de :

« O laouenanig, evnig nij,
Gra va gourc'hemenoù d' am broiz,

Nemet d' al laer, va breur Louiz
En deus va gwerzhet d' ar Jouis.

Lavar dê 'ven 'tal an tan
O tommañ ur jouis bihan,

Ur bugel ken kaer hag an de
Ouzh Louiza ar Rouz heñvel ec'h eo. »

Mamm ar Jouis p' he deus klevet
Na d' he mab he deus lavaret :

299

« Ar bed o c'hoari 'zo ganti...
Kemer da gleze ha lazh-hi.

Troc'h-hi a dammoù, taol-hi er mor,
Ar pesked he c'haso d' he bro.

- Salv-ho-kras, va mamm, se ne rin ket
Me 'm eus eviti kalz resped. »

Ar Jouis bras a c'houlenne
Ouzh Louizaik ar Rouz neuze :

« Louzaik ar Rouz, din, o ! leret :
Pe c'hwi am c'har, pe c'hwi ne ret ?

- Ya, Jouis, ho karout a ran
Evel ar galon a zougan.

C'hoazh davantaj me ho karo,
Mar karit dont ganin d' am bro.

- Daou inkane 'zo er marchosi,
Unan 'zo deoc'h, unan 'zo din :

Hag it gantañ pa geret d' ho pro,
Me am eus paotred hag ho kaso.

It gantañ d' ho pro pa geret
Arc'hant da vont ne vanko ket.

Met evit va mab n' ho po ket
Hennezh 'n devo ar choaz eus ar merc'hed. »

Louizaik ar Rouz a lavare
War gein hec'h inkane pa bigne :

« Muiañ chagrin am eus bremañ
Ec'h eo va mab a chom amañ. »

Louizaik ar Rouz a c'houlenne
E ti he mamm pan arrue :

« Bonjour ha joa holl en ti-mañ,
Petra nevez a zo aman ?
Banked un eured a gredan !

300

- Banked un eured ned eo ket
Ofern gentañ ho preur beleg.

Ha manet eo klañv ho preur Louiz
'Boe maz oc'h aet gant ar Jouis. »

Louizaik ar Rouz p' he deus klevet
Da gichen e wele 'zo redet :

- « Sav alese, emezi, Louiz.

Setu erru gwreg ar Jouis.

Hastit buan ha depechet
M' efomp d' ofern va breur beleg. »

N' oa ket he c'homz peurachuet,
He breur Louiz a zo bet savet ;

O daou d' an Iliz ec'h int aet
D' ofern gentañ o breur beleg.

Ar beleg yaouank a c'houle
E gein d' an aoter pa zistroe :

« Petra 'zo nevez en Iliz-mañ ?
Me a sant va gwad o tommañ.

- N' eus netra nevez er bourk-mañ,
Met eo erru ho c'hoar Louizan,

Met eo erru gwreg ar Jouis
Ha rentet yac'h ho preur Louiz. »

Ha kredit hardizh eo gwir se
Bras e oa ar joa etreze !

Kanet gant Mari Ferchal nezerez kozh e Gwengamp,
dastumet gant Yann-Vari ar Yann ha bet embannet gantañ e
" Revue de Bretagne et de Vendée " miz Here 1873, p. 286-297.

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

An dug Yann Rous

(1237-1286)

(KENDALC'H)

Yann Rous hag ar C'hladdalc'helezh

Yann Rous a reas e c'halloud da chom hep ober brezel ouzh nikun. Ha mar gweler anezhañ, gwechig an amzer, o stourm ouzh darn eus e varoned, ez eo dre ma oa bet atahinet. Ha c'hoazh, e-lec'h hiraat ar c'hrogadoù, e klaske o digreskiñ kement ha ma c'halle. Pezh a ziskouez e voe dister ar brezelioù bihan-se eo n' anavezet nemet a-boan an abegoù hag an darvoudoù anezho.

Brezel gant Leoniz.

Meneget e vez gant hor c'hronikoù, e 1240 ha 1241, etre Yann Rous hag Herve III, beskont eus skourr yaouañ Leon, ur brezel ma voe losket ennañ gant Leoniz " kastell Kemperle ".

Da gentañ e chomer souezhet o welout Leoniz o loc'hañ diouzh aod an hanternoz, o treuziñ Kernev a-bezh, hag o kerzhout hep bezañ harzet gant soudarded an dug betek aod ar c'hreisteiz.

Kompren a reer avat pa soñjer en doa bet ar skourr-se, dre zimeziñ, adalek derou an 13-vet kantved, e kreisteiz Kemeded-Heboe, un dalc'h-douar bras a oa e bennlec'h kastell Treizfaven, war-hed un nebeut levioù diouzh Kemperle.

Pa varvas Herve III, e 1241, ez echuas ar brezel. Nag e vab Herve IV, na Yann Rous n' en doa c'hoant da genderc'hel. Emzivizoù hir a voe. Yann Rous, en e vadelezh, ne c'houlenne nemet un dell-gastiz, hogen unan gwall bounner, hag Herve IV a nac'he paeañ ur priz ken uhel. Trenkik an darempredoù etre an daou briñs, hep brezel koulskoude. Ugent vloaz e padas ar rendael. E 1260 en em glevjont en diwez : evel digoil eus ar c'hammoberoù hag ar gaou graet gant e dad ouzh an dug, Herve IV a Leon a ouestlas paeañ dek mil lur, hag ouzhpenn chom hep ober brezel, na d' an dug, na d' e hêred.

Brezel gant aotrou Klizun.

En e stourm a-enep an dug, e 1241, ne hañval ket beskont Leon bezañ bet kevredidi. Etre 1254 ha 1261, e rankas Yann Rous ober ur brezel hiroc'h, ha grevusoc'h hep mar.

Enaouet e voe ar brezel-se gant Olier gozh, aotrou Klizun, e 1254. Tarzhañ a reas, a c'haller krediñ, pa fellas d' ar baron-se goulenn al le a wazoniezh evit an douaroù lakaet e kerz e vreudeur yaouankañ. Al le-se, hervez « dalc'h-azez ar c'hont Jafrez », a dlee bezañ graet d' an dug.

Olier, dilezet gant e vreudeur aet a-du gant Yann Rous, a gavas kevredidi e-touez baroned evel Alan Avaogour, mab an Herri-se a oa bet laeret gant Per Dreux, hag a oa deuet a-benn da adkavout darn eus e binvidigezh dre zimeziñ gant hêrez aotrouniezh Dinan. Alan a oa neuze perc'henn an aotrouniezh-se. E 1257, Yann Rous a dagas Dinan, hag, hervez ar c'hronikoù, a zevas ar gêr-se. Neoazh, evel na lavarar ket en doa kemeret Dinan, e tleer soñjal ne voe lakaet an tan

nemet er fabourziou. Alan Avaogour, war se, a zilezas e gevredad, ha daoust ma voe anvet trubard gant Olier gozh, e reas ar peoc'h gant an dug.

Aotrou Klizun, chomet e-unan da zougen pouez kounnar Yann Rous, en eur lakaas dindan warez roue Frañs, hag e c'halvas an dug da zont dirak lez-varn ar roue, o prometiñ plegañ d'ar varnedigezh a vije graet. Kentañ tra a reas Yann Rous e voe kemer kastell hag aotrouniezh Klizun, e 1260. Neuze ez arguzas evit tremen hep en em ziskouez dirak barnerien ar roue. War urzh strizh al lez-varn e plegas evelkent.

An div gevrenn en em gavas e Pariz, da geñver Parlamant ar Chandelour, e miz C'hwevrer 1262, hag ar roue o lakaas d' ober un emglev, a voe skoulmet d' ar 1-añ a viz Meurzh : Yann Rous a ziskrogas diouzh kastell hag aotrouniezh Klizun, n' eo ket avat evit o daskoriñ da Olier gozh, hogen d' o reiñ raktal da vab hemañ, Olier yaouank, a voe karget da bourchas d' e dad peadra da vevañ, ha da baeañ, evit ar mestaolioù graet a-enep an dug, un dell-gastiz a 4.000 lur tournez d' ar priñs-se.

303

Yann Rous, evel ma weler, pa veze kompezet un dael etrezañ hag e wizien, ne zisoñje morse leuniañ e yalc'h.

Setu amañ un trede brezel, a roas tro dezhañ da ziskouez e oa ur banker dispar, ur mailh da zastum moneiz.

Brezel Lanvaoz.

P' en deveze ur baron ezhomm kaout arc'hant, an dug, atav leun e yalc'h a breste dezhañ ur bern, a neveze hag a greske zoken meur a wech hep marc'hata. Hogen, a-benn ur pennad, e-lec'h reiñ skoazell d' ar baron d' e dennañ eus an islonk, Yann Rous, o welout spis ne c'halle ket e zleour paeañ e zle, a daole anezhañ e-barzh : perc'hennañ e zouarou, e aotrouniezhoù a rae, evit o stagañ ouzh an domani dugel.

Aotrouniezh Lanvaoz, e parrezioù Gregam ha Pleuigner, a oa en 13-vet kantved e piaou d' ur marc'heg anvet Alan Lanvaoz, meneget gant e ditloù hag e wirioù e dielloù abati al lec'h-se, adalek 1240 betek 1264. Ne oa ket bet eta kenkizet gant an dug adalek 1238, evel ma lavar kronikourien 'zo.

E roll-kontoù ar bloaz 1267, e weler un teller eus an dug Yann Rous oc'h enskrivañ al leve diwar « douar Lanvaoz ha douar Koatremael, piaouet gant an aotrounez Alan ha Jafrez Lanvaoz ». Douar Lanvaoz ne oa ket bet c'hoazh staget eta ouzh an domani dugel, rak hervez ar skrid-se e oa e piaou da Alan Lanvaoz ha d' e vab Jafrez. Perak ez ae al leve neuze gant an dug ? Er roll-kontoù-se, un tammig pelloc'h, dindan an deiziad « ar Yaou kent Gouel-Mikael » (25 Gwengolo), 1270, e lenner : « En deiz-se e voe niveret holl zleoù an aotrounez Alan ha Jafrez Lanvaoz d' an aotrou an dug, ha kavet e savent da 4.400 lur ». Evel gouestl eus an dleoù pounner-se, an dug en doa kemeret leve douar Lanvaoz.

Er bloaz-se, 1270, Alan Lanvaoz, aet kozh (rak e 1224 e oa dija deuet d'e oad-gour), a lezas e aotrouniezh gant e vab Jafrez, a douas fealded d' an dug d' ar Sadorn goude Gouel an Dreinded (14 Mezheven). Nebeut goude, an tad a varvas.

304

An dug en doa espernet Alan en abeg d' e oad, gant aon da lakaat an holl da daeriñ ma vije bet kalet e-keñver ur c'hozhiad. Ne oa ket ezhomm bezañ ken doujus e-keñver ar mab. O vezañ na bae ket, Yann Rous a gasas urcherien evit pakañ krog e douar Lanvaoz ha lakaat ar perc'henn er-maez. Neuze eo e voe tamallet Jafrez da « ober brezel d' an dug ». An dug avat, - ne oa ket gwall spontus eta ar brezel-se, - ne voe ket ret dezhañ kemer an armoù. Un amezeg, Alan VI beskont Roc'han, evit gounit grad vat ar priñs ha splet all, a gemeras warnañ hep mez ar garg a " urcher " hag a dagas Jafrez. Moustret e voe hemañ gant nerzhioù bras beskontelezh Roc'han. D' e gastizañ evit bezañ en em savet a-

enep an dug, e voe kemeret ha lamet e aotrouniezh a Lanvaoz digantañ e 1272. D' ar mare-se eo e voe staget an douar-se e gwirionez ouzh an domani dugel.

Ne oa ket a-walc'h koulskoude evit disammañ Jafrez kaezh diouzh e zle a 4.000 lur da Yann Rous, merket e 1270. Ouzhpenn douar Lanvaoz, aotrounez al lec'h-se o doa en 13-vet kantved dalc'hioù bras a-walc'h distag an eil diouzh egile e meur a barrez eus beskontelezh Roc'han, dreist-holl e Melran, Remengol, Mourieg, Radeneg. Da gaout e arc'hant, Yann Rous a lakaas an dalc'hioù-se e gwerzh, ha prenet e voent gant beskont Roc'han e 1273 evit 7.115 lur.

Pevarzek vloaz goude, e 1288, Alan II Lanvaoz, mab Jafrez, a c'houlennas groñs kaout an dalc'hioù-se en-dro digant beskont Roc'han. Hir-tre e voe ar prosez. Kaer en devoe ar beskont chikanal, e voe douget e 1298 ur varnadenn, a lezas an dalc'hioù gantañ, nemet ret e voe dezhañ paeañ da hêred Jafrez Lanvaoz 3.000 lur, pezh a oa reizh. Rak gwerzhet oa bet an dalc'hioù ouzhpenn 7.000 lur, ha ne dlee aotrounez Lanvaoz nemet 4.000. Gwir o doa da gaout 3.000 lur eta, an nemorant dister eus o finvidigezh a wechall. Padal ne oa ket da vezañ disprizet.

« Brezel Lanvaoz », renet gant gwidreoù ar prokulor hag an uzurer, a daol sklerijenn war an doareoù-ober a blije d' an dug Yann Rous : gwell e oa gantañ liammañ ha mougañ e enebourien e lasoù ha pejoù an arguzerezh eget o flastrañ dre an armoù.

Kudenn ar " feurm ".

War ur poent hepken e hañval ar priñs-se bezañ dalc'het d' an dezoioù, d' an nevezadurioù, d' an aloubadurioù graet gant e dad, ha kondaonet gant Enklask 1235. Goulenn a reas ma vije miret gant an dug " feurm " an aotrouniezhoù a yae da vinored, hag an dra-se, ur " gwir " hervezañ, a zeue d' e heul tennañ gounid leun eus an douar, hep harz ebet, gant ar galloud da droc'hañ ha gwerzhañ ar c'hoadoù, da besketa el lennoù, da zistrujañ ar jiboez, da rivinañ an hêr.

305

Gwashoc'h c'hoazh : dre ar " gwir " -se e vened krennañ frankiz an destamanterien, pe da vihanañ herzel ouzh sevenidigezh an testamantoù, war an digarez ma ranked evit ober se kemer lod eus leveoù an aotrouniezh, ha digreskiñ eta gounid ar " feurmer ".

N' eus mar ebet e klaskas Yann Rous mirout ha lakaat da dalvezout ar gwir kasaus-se. Ha da anataat an dra ez eus an akta end-eeun a savas diwezhatoc'h pa zivizas ober dilez anezhañ. E rolloù-kontoù e ren e kaver ivez gounidoù diwar douaroù bras a oa ar " feurm " anezho gant an dug. Da skouer, e 1269, aotrouniezhoù Kallag ha Rostrenen, e 1274 hini Serent. Darn eta eus uhelidi Vreizh a ranke gouzañv ar gwir direizh-se. Enebiñ a raent avat.

Ha setu amañ ur skouer a bouez :

E 1250, baronelezh Wizhuriege a yeas gant un hêr a oa c'hoazh en e gavell (Andrev IV). Yann Rous a vennas kemer ar " feurm ". Marc'heien ha noblañsoù all eus an aotrouniezh, evit bezañ disammet diouzh ar walenn, a reas emglev gant an dug. Prometiñ a rejont paeañ dezhañ 1.000 mark arc'hant evit kaout aotre da zibab ar " feurmer ".

Heuget avat gant goulennoù endalc'hus ar priñs, en em erbedjont ouzh ur galloud-barn dreist d'e hini, da lavarout eo Lez Roue Frañs, evit ma vije diskleriet ne oa ket ar " feurm " gant an dug. Dre se, ma vije divizet e oa ar gwir diouzh o zu, ne vijent ket rediet da baeañ ar 1.000 mark. Hêr yaouank Gwizhuriege a varvas d' ar 15 Meurzh 1251, ha ne voe ket lec'h da genderc'hel gant ar prosez. Hep mar, an dug eo en dije kollet, rak e 1265 en doa goulennet bezañ gward mab unan eus baroned Vreizh, a oa dija dindan ward e dad-kozh, ha nac'het oa bet gant Lez ar Roue e c'houlenn.

Evel tudjentil baronelezh Wizhuriege, kalz tudjentil all a enebe ouzh ar "

feurm ", lakaet da " wir " gant an dug, hag un nebeud anezho a zeuas a-benn zoken d' en em beurzisammañ dioutañ, e-touez re all aotrounez Tintenieg, evel ma vo gwelet pelloc'h.

306

Ar " gwir-daspren ".

Evitañ da vezañ stag e galon ouzh an doare aes-se da zastum leve, Yann Roue en diwez a gomprenas ne vije biken degemeret ar preizherezh displeal-se, kondaonet-groñs gant Enklask 1235, hag e chomje ur vammenn a rendaeloù, a drubuilhoù, a rouestloù a bep seurt. Ne oa ket evel e dad aheurtet da dizhout pezh a oa dreist e c'halloud.

Klask a reas eta kavout un dra all, ken gounidus evit e gef, hogen muioc'h diouzh grad e varoned. Prometiñ a reas dilezel krenn ar " feurm " ha reiñ aotre dezho da ober testamant e pep frankiz, war an diviz ma vije paeet gant an hêr (dindan oad pe get) d' an dug, goude marv ur gwaz-lij, ur yalc'had kement ha leve-bloaz an dalc'h-douar ; pe c'hoazh e vije lezet an dug da dennañ gounid diouzh an dalc'h-douar-se, hep mont dreist d' ar reizh, e-pad bloaz. A dra sur ne oa ket ken grevus hag ar " feurm ", a lakae un aotrouniezh a-bezh, a-wechoù e-pad bloavezhioù hir, etre daouarn an dug. Ha padal ar gwir nevez-se, - anvet " gwir-daspren ", o vezañ ma oa daspren ar " gwir-feurm ", - a oa spletusoc'h evit kef an dug eget ar gwir kozh. Rak ar " feurm ", hag eñ pounner, ne c'halle bezañ nemet dizingal ha diasur, peogwir ne zeue nemet pa oa hêr un dalc'h-douar dindan oad. Ar " gwir-daspren ", er c'hontrol, a dleed paeañ bep gwech ma tremene un dalc'h eus ur gwaz-lij da unan all, a oa ur vammennsur ha tost ingal a leve.

Ordrenañs an dug o treiñ ar " gwir-feurm " da " wir-daspren " a voe embannet d' an 11 a viz Genver 1276 (doare-bloaziadañ nevez). Degemeret-laouen e voe gant hogozik an holl dudjentil. Un nebeudig hepken a enebas ouzh ar " gwir-daspren " kement ha m' o doa enebet ouzh ar " gwir-feurm ", en o zouez, aotrou Tintenieg. Dizale avat e rejont evel ar re all, oc'h asantiñ d' an urzh nevez, ha leuniet e voe koufr an dug.

Gwall ampart e oa Yann Rous.

Le-gwazoniezh ha prosezoù.

Diskouez a reas ivez e ampartiz oc'h aozañ ur fazi bras graet gant e dad. Hemañ, techet evel ma oa da lakaat e levezon e pep lec'h ha da herzel ouzh levezon ar varoned, en doa aloubet, a-enep ar reizh, ar gwir da zegemer le-gwazoniezh o gwizien ha da varn prosezoù ar wizien-se rag-eeun dirak e lez, - hep soñjal e tennje roue Frañs e vad eus ar skouer-se roet dezhañ evit barn dirak e lez-eñ prosezoù gwizien an dug, hag e vije ar re-mañ a-du, evit reiñ taol-distaol d' o aotrou ha kaout ur gwarezour. Pezh a oa c'hoarvezet e gwirionez, hag ac'hano e oa savet rendaeloù diziwez hag e oa bet digresket kalz ar veli dugel.

307

Yann Rous a zilezas al le-gwazoniezh ha barnedigezh direol ar prosezoù dre un akta lidel eus ar 16 a viz Kerzu 1275. Hag er miz-se end-eeun e teuas a-benn da lakaat roue Frañs, Fulub Hardizh, da ober un hevelep dilez evit pezh a selle ouzh gwizien dug Breizh. Ne voe mui galv da lez an dug na da lez ar roue nemet hervez ar reizh, er prosezoù a-zivout " dalc'h ar barnedigezhioù " ha " namm er gwir ". En dastumad kozh barnadennoù lez roue Frañs, anavezet dindan an anv " Olim ", e kaver goude 1275 kalz nebeutoc'h a brosezoù a Vreizh eget diagent.

Darempredoù gant Frañs ha Bro-Saoz

Per Brizhkloareg, e-pad e holl ren, a oa bet hogozik atav oc'h ober brezel d' an holl, roue Frañs, roue Bro-Saoz, baroned c'hall, baroned vrezhon, Sarasined, Albiziz, h.a.

Er c'hontrol, Yann Rous ne reas brezel ebet ouzh nikun, nemet brezel ar Groaz.

Dalc'hmat e voe krenn a-du gant Frañs. E 1240 e nevezas gant lid e le a wazoniezh d' ar roue sant Loeiz, gwarantet, evel m' en doa grataet, gant c'hwec'h eus uhelañ baroned Vreizh. Ar bloaz war-lerc'h, d' an 8 Gwengolo, e voe graet marc'heg e Melun gant roue Frañs, hag e voe neuze gwelet er renk kentañ e gouelioù al lez, dastumet-klok e Saumur, gouelioù aozet en enor d' e ditl a varc'heg ha da hini breur sant Loeiz, Alfoñs, kont Poitiers.

E 1242, pa adkrogas ar brezel ouzh Bro-Saoz, roue Frañs a c'halvas dre vann an holl dudjentil a dlee ober servij en arme. Yann Rous a sentas, en em ziskouezas e Chinon, ha netra ken.

Kontelezh Richmond.

E sujidi, gwir eo, a reas muioc'h. Roue Bro-Saoz en doa gourc'hemennet da " Vistri ar Pemp Porzh ", da lavarout eo pennrenerien e vorlu, paramantiñ listri evit tagañ al listri gall e Mor Breizh. Roue Frañs a roas urzh d' ar verdeidi c'hall, ha peurgetket d' ar verdeidi vrezhon, derc'hel penn outo start, pezh a rejont eus ar gwellañ.

308

Hogen an dug ne gemeras tamm perzh er stourm. Hep dilezel Frañs, e klaske espern roue Bro-Saoz muiañ ma c'halle, ha war-dro an amzer-se e kasas dezhañ dezhañ ur reked evit kaout en-dro kontelezh Richmond.

Ne oa ket tre ar mare d'ober seurt goulenn. Padal, ne voe ket argaset krenn gant roue Bro-Saoz, Herri III. Evel Saoz e heulie gredus al lavar-stur : « Mann evit mann, ro evit ro ». Ha setu amañ ar respont iskis a reas d' an dug :

« Ne oamp ket mennet tamm ebet da zaskoriñ deoc'h an douar a c'houlennit, hag en ur gas dimp ho koulenn, Abad Sant-Gweltaz, ho kannad, n' en deus ket lavaret peseurt mad a c'hallfec'h tennañ dioutañ, mar karfemp e resteurel deoc'h. En em glevit eta gant ho tad (Per Brizhkloareg a oa c'hoazh bev d' an ampoent) a-zivout ar skoazell a rofec'h dimp evit adkavout hor gwirioù, ma taskorfemp deoc'h kontelezh Richmond. Respontit a-raok Gouel Maria ar Goulou (1243). »

Ar gwirioù da " adkavout " meneget amañ gant roue Bro-Saoz n' int nemet aloubidigezh ar rannvroioù gall lamet ez reizh gant Fulub Aogust digant Yann Dizouar. Yann Rous n' en doa c'hoant ebet da reiñ skoazell. Koulskoude, hep dale pell e voe skoulmet un hir a arsav-brezel e Bourdel, da badout pemp bloaz, etre Frañs ha Bro-Saoz (7 Ebrel 1243), hag an dug, kalonekaet, a glaskas adarre kaout kontelezh Richmond, a gave ken hoalus.

En dro-mañ, - daoust na ra an istorourien meneg ebet eus an degouezh, - e fellas dezhañ hep mar teneraat Herri III dre ginnig e vab henañ Yann Vreizh e dimeziñ da Veatriz, merc'h roue Bro-Saoz.

Yann Vreizh ne oa nemet c'hwec'h vloaz, hag ar briñsezig a-vec'h bloaz, ha ne vije ket graet buan an eured. Evelato. ken plijet e voe ar roue saoz ma prometas, dre un teul eus ar 17 Mezheven 1245, da Yann Vreizh, « e vab karet », emezañ, ul leve-bloaz a 2.000 mark arc'hant. Anezh 1.800 (1.200 lur sterling) a dlee kemer lec'h ar gounid diwar gontelezh Richmond, keit ha ne vije ket tu da reiñ d' ar priñs ar gontelezh he-unan. Al leve-se, avat, evel ma c'haller kompren, ne vije paeet nemet war-lerc'h an eured, goude pell amzer eta, rak ne oa ket tu da lakaat an daou vugel da zimeziñ. Ne oa nemet ur bromesa en avel, ha ne oa ket Yann Rous tost da gaout ar gontelezh prizius.

309

Rouantelezh Navarra

Evit kaout digoll eus ar gerseenn-se, e reas un taol brav, un nebeut bloavezhioù goude. E dad-kaer Tepot IV, kont Champagn, roue Navarra, en doa gouestlet dre gontrad-dimeziñ reiñ en argourou d' e verc'h Gwenn, dugez Vreizh, hêrezh rouantelezh Navarra.

Tepot, neoazh, en doa kemeret un eil gwreg hag en doa bet mibien, a dlee, hervez ar reizh c'hladdalc'hel, kaout an hêrezh-se a-raok ar merc'hed. Ar mab henañ, Tepot V, a c'houlenne groñs ar rouantelezh-se. Gwall ziasur e oa hêrezh Wenn eta, gwall goustus, gant prosezou e-leizh d' ober skoilhoù ha mizou bras, brezelioù marteze.

Gwellañ tra d' aber d' un den dilu, nebeut douget da zispign arc'hant en aner, oa klask tennañ ar brasañ gounid a c'halle diouzh an hêrezh. Hep termal, Yann Rous a asantas e 1254 d' ar c'hinnig graet gant sant Loeiz : dilezel e wirioù ar Navarra en eskemm eus ul leve-bloaz a 3.000 lur, naet ha distag.

Yann ha Beatriz.

Un nebeut bloavezhioù war-lerc'h, sant Loeiz, kadarn hag hael evel ma oa, en doa adaozet ar peoc'h etre Frañs ha Bro-Saoz dre feu-skrid an 28 Meurzh 1259. Yann Rous a adkrogas gant e venoz start da gaout en-dro kontelezh Richmond. Abalamour d' an emglev skoulmet etre an daou roue, e c'halle adober a-zevri ar pezh en doa graet re vuan e 1245.

E miz Mae 1259 e c'houlennas, da vezañ gwreg e vab henañ Yann Vreizh, a oa ugent vloaz, ar briñsez Beatriz, eil merc'h roue Bro-Saoz, Herri III, hag hi pemzek vloaz. Hag e c'houlennas ivez m' he dije da argourou kontelezh Richmond. Ar marc'had a zeuas da vat. Hêr Breizh a voe degemeret da bried ar briñsez Beatriz. En diskar-amzer 1259, roue ha rouanez Bro-Saoz a yeas da weladenniñ roue Frañs, hag an eured a voe lidet war an ton bras en iliz abati Sant-Denez e-tro miz Du.

Herri III n' en doa ket nac'het groñs reiñ kontelezh Richmond d' e verc'h en argourou. Daleañ a reas avat, hag etretant e ouestlas paeañ d' e zeuñv al leve-bloaz diwar ar gontelezh-se, 1.200 lur sterling, hag ouzhpenn 200 mark arc'hant, o sevel al leve da 2.000 mark, evel m' en doa gouestlet ober e 1245.

310

War a hañval, Herri III en em glevas mat gant e zeuñv. E 1260, - e 1261 kentoc'h hervez an doare-bloaziadañ nevez, - e reas anezhañ marc'heg, gant gouelioù bras. E 1268, en diwez, e tivizas daskoriñ kontelezh Richmond da zug Breizh. He lakaat a reas etre daouarn Alan Asereg, un uheliad brezhon kaset da Vro-Saoz gant Yann Rous. Hemañ, dre urzh ar roue, a roas anezhi kerkent d' e vab-kaer, pried Beatriz. E vab-kaer, o tilezel al leve-bloaz a 1.200 lur sterling, a renas neuze war gontelezh Richmond, hag anvet e voe kont Richmond betek e varv.

Yann Rous er groaziadeg.

Daoust dezhañ bezañ nebeut douget d' ar brezel, Yann Rous, pa welas ar roue sant Loeiz o wiskañ ar groaz evit an eil gwech e 1270, a heulias anezhañ hep marc'hata en e eil kroaziadeg.

D' ar Yaou goude Pask, 17 Ebrel 1270, e loc'has diouzh Susinio gant e wreg Gwenn Champagn, e c'houlennas Beatriz a Vro-Saoz, e vab Yann Vreizh kont Richmond, hag ur bagad tudjentil vrezhon. Da Varsilha ez ejont holl, hag eno an dug, hervez Dom Lobineau, « evel ma weler war rolloù-kontoù e di, a lakaas enskrivañ ouzhpenn 80.000 lur evit e zispign, hag ivez 7.000 lur dastumet e Breizh evit ar groaziadeg ».

Lestrañ a eure e Marsilha e miz Gouere, tra ma lestre sant Loeiz en Aigues-Mortes. Gant e ambrougerien e kemeras perzh en ergerzhadeg-vrezel, a zilestras evel ouzer e Kartada, en Afrika, hag a lakaas seziz war Duniz.

Ar roue sant Loeiz a varvas e-doug ar seziz-se, d'ar 25 a viz Eost, hag an armead a-bezh a zistroas da Frañs e-tro miz Du 1270. Yann Rous diouzh e du a zistroas da Vreizh, hogen e vab Yann kont Richmond hag breur-kaer hemañ, ar priñs Edouarzh a Vro-Saoz, e-lec'h mont en-dro diouzhtu da Europa, a yeas d'a heul ur bagad kroazidi niverus a-walc'h da Siria, e Ptolemais. Goude ober un nebeut taolioù-kaer e tistroas kont Richmond da Europa e kentañ hanterenn ar bloaz 1273, o tegas gantañ, hervez skrivagnerien 'zo, relijiuzed eus Urzh Karmez, ma savjod evito kouent Plouarzel-Breizh-Uhel.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Yann MIKAEL hag Eliaza POIRIEL e bried a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh o mab Gurvan-Karadog, d' ar 6 a viz Mezheven e Naoned.

Alan DURAND ha Pierrette LONCLE e bried zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o mab Herve-Per-Mari, d' an 19 a viz Gouere e Roazhon.

Tina AR FLAO ha Yann AR BEC a zo plijet o kemenn deoc'h dimeziñ o mab Ronan gant Maryse DEUDON, e Kerfeunteun, d' an 31 a viz Gouere.

Remi CHAUVET a zo laouen o kemenn e zimeziñ gant Dominique de PESLOUAN, e Frehel, d' ar 4 a viz Eost.

Hervelina ROUDAUT, eus Kerlouan, hag Erwan BERTHOU, eus Berrien, a zo bet ivez euredet d' an 18 a viz Eost e Lokmaria-Berrien.

Gaela ha Rozenn COCHEVELOU a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o breur bihan Gurvan, e Gwened d' an 3 a viz Gouere.

Yann-Fanch ha Joelle FURIG a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o mab Sten.

An Ao. hag an Itr. Rojer CHASLE a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh o mab Gwenole, e Sant-Malo.

Tina AR FLAO ha Yann AR BEG a zo plijet o kemenn deoc'h dimeziñ o mab Ronan gant Maryse DEUDON. An oferenn eured a zo bet lidet en iliz parrez Kerfeunteun d' an 31 a viz Gouere.

Gracie ILHARREGUY hag Erwan LEON a zo laouen o kemenn deoc'h ez int bet euredet e Roazhon d' an 18 a viz Eost.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' an holl.

Kañv

Gant kerse hon eus klevet e oa aet da anaon Herve AR MENN e Pariz. Douaret eo bet e Hanveg d' an 9 a viz Eost.

Gant Herve ar Menn e oa bet savet Kenvreuriezh ar Sonerien e Pariz. E 1959 en doa embannet dastumad kanaouennoù ar c'horonal Bourgeois, graet en doa ivez war-dro kanaouennoù bet dastumet gant Penwern ha savet kreizenn sevenadurel Kervarker e Pariz. Edo o paouez echuiñ un istor eus parrez Hanveg hag a zo dindan ar wask.

D' e wreg, d' e vibien Gwenole hag Erwan ha d' e holl vignoned e kasomp hor gourc'hemennoù a gengañv.

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e-kerz an daou viz diwezhañ :

Miz MAE :

J. M. Bouessel du Bourg, 20 lur ; I. Cochevelou, 20 ; C. Delalande, 20 ; D. Guichard, 20 ; J. M. Bouessel du Bourg, 25,00 ; Y. Souffez, 20 ; R. Tassel, 70 ; Y. Goarin, 10 ; H. Le Bitoux, 10 ; J. Abasq, 20 ; P. Le Meur, 20 ; R. Radenne, 40 ; N. Keffeleant, 20.
- War un dro : 432 lur.

Miz MEZHEVEN : G. Thompson, 19 lur ; F. Jestin, 15 ; M. Le Fur, 5 ; A. Guillou, 90 ; F. Bouvier, 5 ; E. Leon, 20 ; A. Stivell, 70 ; M. Guillou, 40 ; J. LeMoigne, 20 ; M. Le Toiser, 20 ; J. M. Bouessel du Bourg, 20 ; C. Faou, 5. -
War un dro : 329 lur.

3.612,16 lur hon eus bet abaoe penn kentañ ar bloaz. Bennozh-Doue d' an holl.

1 000 koumananter a-raok fin ar bloaz

Ret eo tizhout ar 1.000 koumananter a-raok fin ar bloaz. N' eo ket diaes tamm ebet. 740 a zo bremañ. Ma klask pep hini anezho 1 c'houmananter all, se a raio 1.480. Ar re ne gavint hini ebet (ar pezh e gwirionez ne zlefe ket bezañ gant niver bras an dud troet bremañ gant ar brezhoneg !) a c'hell paeañ ur c'houmanant d'ur mignon bennak. Ar vutunerien paour a c'hell, evit kaout an arc'hant ret, butuniñ un tammig nebeutoc'h, ar pezh a vo mat tre evit o yec'hed, hag en doare-se ivez e paeint nebeutoc'h a dailhoù d' ar Stad C'hall !

Un Tregeriad.

Hol lennerien a skriv

Digant C. A. M. : « Kas a ran deoc'h 20 lur a-benn adneveziñ va c'houmanant-bloaz. Spi am eus e talc'ho " Al Liamm " gant hec'h hent evit skignañ e-touez ar rummadoù tud yaouank e Breizh ar gerioù-stur rekis evit dont da vezañ stourmerien efedus en ur vro tizhet ganti da vihanañ he dieubidigezh speredel. »

Digant J. er C'h. : « Echu va c'houmanant, setu enta ar chekenn-mañ evit resev niverennoù all hag evit skoazellañ an teñzorierzh da embann anezho ! Trugarez-bras d' an holl dud a ra war-dro " Al Liamm " hag a skriv pennadoù dudius-tre. Trugarez evit an amzer dremenet ganto, dibae a dra sur... hag evit pijadur al lennerlen a lenn hag a adlenn hep linenn evel don moarvat. »

Digant S. R. : « Setu amañ ur chekenn-bank evit adkoumanantiñ d' " Al Liamm ". Ar c'houmanant kentañ a oa bet kinniget din gant " Bugale Breizh ", hor c'helc'h keltiek e Nansi. N' ouzon ket pegoulz e vo echu, ar gentañ em eus resevet eo an niverenn 151. »

314

Eus ar C'hanada digant Jakez Konan : « Dec'h hepken em eus bet an niverenn 157 Meurzh-Ebrel, ha plijus-kenañ he c'havan. Dreist-holl e plij din " Deiz-ha-bloaz Tangi Malmanche " ha " Nenn Jani " gant Roparz Hemon. Troidigezh " Istor Breizh La Borderie " a zo ur pennober.

« Anaoudek on ouzhoc'h da vezañ moulet an daou bennad tennet eus oberoù S. Leacock. Siwazh, ur fazi bennak a zo bet graet ouzh o moulañ : « Ur milion a zollarded » e-lec'h « ur milion a zollared » e titl en eil anezho, hag en tregontvet linenn, p. 134 « ouzh ur bleiz-mor » e-lec'h « ouzh ur bleiz-noz », ar pezh a gemm ster skeudenn ar menoz !

« Meur a wech ivez ez eo bet « difaziet » va skrid evit pezh a sell ouzh an dro-lavar « Ha hi da... ». Moulet ez eus bep tro : « Hag hi... ». Reizh eo se hervez yezh Leon a zo dianav dezhi an « H » c'hwezhet ! Hogen Tregeriz ha tud Kernev-Uhel a zistag fraez an « H » -se. »

Da geñver marv Herve ar Menn

Anavezet eo bet dreist-holl Herve ar Menn en Emsav evit al labour graet gantañ da advrudañ en hor bro ar binvioù sonerezh kozh evel ar biniou hag ar vombard. Marteze e vo kavet plijus gant meur a hini gwelout adembann ur pennad bet embannet e niv. 19 " Kannadig OBER " (8 a viz Meurzh 1934) ha kaset da hemañ gant Herve. F. Kervella, hag a oa o ren ar c'hannadig-se d' an ampoent, eo en deus degaset dimp ar pennad-se. Lakaet eo bet, anat eo, er skritur peurunvan.

UN DRA VAT HA PLIJUS !

« Pevar bloaz a zo abaoe ma pleustran war vinvioù sonerezh poblek Vreizh. Un dachenn ec'hon ha fraost eo houmañ. Hor binvioù sonerezh pobl (ar biniou hag ar vombard eo an anavezetañ), daoust pegen bras perzh o deus bet e buhez hor pobl, a zo dilezet a-grenn, ha disprizet zoken a-wechoù. D' o heul eo dilezet ha disprizet ul lodenn eus hor c'hizioù mat hag eus hon herezh speredel.

Gwelet em eus e kaver dudi o seniñ gant ar binvioù pobl ; gwelet em eus ivez eo talvoudek-bras an implij anezho evit hor broadelezh. Abalamour da se, a-gevret gant daou gile, warlene, e savis " Kenvreuriezh Ar Viniouerien Vrezhon ". Pal ar gevredigezh-mañ a zo mirout ha skignañ ar c'hiz d' implijout ar binvioù-seniñ keltiek. Pemzek ezel oberiant a zo ac'hanomp hiziv, 62 wech ez omp bet o seniñ er gouelioù e-pad ar bloavezh tremenet, dreist-holl e Pariz, ha div wech e Breizh. Ober a reomp gant ar vombard, ar biniou bihan hag ar biniou bras. Pemp ac'hanomp a zo gouest da seniñ mat o-unan-penn.

Aliañ a ra va c'henvroiz da zeskiñ seniñ gant ar binvioù sonerezh keltiek, plijadur o do ha plijadur a raint d' o c'henvroiz ha d' an estrenien. An hini a zo un danvez soner ennañ a c'hell deskiñ seniñ e-unan-penn evel am eus-me graet ; dindan vloaz e vo barrek da seniñ bravik a-walc'h, dreist-holl ma vez unan bennak d' e vleniañ. Binvioù ha sonerezh e prest Kenvreuriezh ar Viniouerien vrezhon d' he izili evit netra. An izili a vez kelennet an eil gant egile. Herve ar MENN. »

315

Da heul diouzhtu e kaved ar skridig-mañ :

Ur goulenn. - Daoust ha dic'hallus e vefe sevel ur strollad, pe strolladoù, kanerien, 2, 3 pe 4 den e pep hini, evit mont da werzhañ kanaouennoù brezhonek er gouelioù ha pardonioù e-pad an hañv ?

Diaes eo gouzout pe eo ivez ar frazenn-se diwar bluenn Herve pe ne deo ket. Techet ez eo F. K. da grediñ e vije bet lakaet kentoc'h war c'houlenn Kerlann, unan eus saverien ar vreuriezh, aet ivez da anaon tost da bevar bloaz a vo dizale.

Niverennoù kozh " Al Liamm " da werzhañ

Chom a ra c'hoazh da werzhañ an niverennoù-mañ : 1, 2, 4, 5, 6, 7, 25, 29, 30, 32-33, 36, 37, 43, 53, 62, 63, 64, 65, 67, 69 betek 158 (nemet an niverennoù 98 ha 100 hag a zo diviet).

Priz an niverennoù a zo :

- 1, 2, 4, 5 : 4 lur ar pezh ;
- an niverennoù all : 6 lur ar pezh (nemet an niverennoù 32-33, 62, 65, 126, 151 hag a goust 8 lur ar pezh).

Tu a zo da gaout ar bloavezhioù klok-mañ :

- 1959 (72-77) ; 60 (78-83) ; 61 (84-89) ; 62 (90-95) ; 64 (102- 107) ; 65 (108-113) ; 66 (114-119) ; 67 (120-125) ; 68 (126- 131) ; 69 (132-137) ; 70 (138-143) ; 71 (144-149) ; 72 (150- 155).

Prenañ niverennoù kozh a zo un doare mat da skoazellañ ar gelaouenn. Kreskiñ a ra bep bloaz ar werzh-se a-hend-all ha setu da skouer sifrennoù ar 6 bloavezh diwezhañ : 1967 (259,00 lur) ; 68 (828,50 lur), 69 (923,501ur) ; 70 (1.083,73 lur) ; 71 (1.240,65 lur) ; 72 (2.222,30 lur).

Kalz a niverennoù a zo diviet. Hogen un toullad mat eus ar re a chom c'hoazh a vo diviet dizale.

Ur rummad klok eus Al Liamm a c'heller prenañ (niv. 1 betek 155) ; priz : 1.500 lur.

Ar goulennoù a zo d' ober da : P. LE BIHAN, 16, rue des Fours-à- Chaux, Saint-Servan, 35400 Saint-Malo. An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù-post.

Kanerien Nevez Breizh e Sant-Luner

D'an 2 a viz Gouhere, dindan un deltenn vras, e voe un abadenn e Sant-Luner gant " Les Aventuriers ", Serj Kergidu, Jil Servat, an 3 Yann an Naoned ha Bernez Benoit. Dirak mil arvester, d' an nebeutañ. Pouk e oa an amzer, hogen aergelc'h arnev a oa er sal ivez. Goude pep " niverenn " e oa ret kemmañ ar benvegoù-heglev. Emglev ebet etre an arzourien, ha Bernez Benoit, da skouer, a rankas seniñ gant e c'hitar en deñvalijenn, lazhet gouloù al luc'hvannerien gant ar re all.

316

Aergelc'h politikel ivez gant kanaouennoù " Les Aventuriers ", Kergidu, Servat, a-enep ar gouarnamant (evit Servat, n' eo ket hepken ar brezhoneg arm kentañ an dispac'h sevenadurel, hogen ar pal kentañ ; Alan Stivell a ya pelloc'h en un doare all, rak kinnig a ra e arvest e brezhoneg, o treiñ geriennoù e galleg evit ar re n' ouzont ket c'hoazh brezhoneg), gant diskleriadurioù Yann-Loeiz Josig evit an 3 Yann, feuket gant barnadenn griz Jacques Vassal (oberour levr " La nouvelle chanson bretonne ") hag o vreutaat evit Bro an Naoned ha Breizh-Uhel gant arguzennoù talvoudus.

Kergidu, gantañ neuz ur profed, a zo dezhañ ur vouezh heverk, metalek un tamm. Ne gan nemet e galleg siwazh, hogen talvoudek eo lod eus e ganaouennoù, da skouer " Je suis pèlerin ". Gant Jil Servat, bremañ 4 soner ouzh e ambrougañ, en deus kavet hor yezh un difenner a dalvoudegezh. Gwelloc'h-gwellañ e seblant bezañ ha gouvezet en deus endeo adneveziñ e strobard kanaouennoù. An 3 Yann a zo deut betek ur seurt parfeted teknikel gant ar binvioù-seniñ, doare o arvest ha betek imp'hj al luc'hvannerien. Plijus-meurbet eo o meni, hogen un dra bennak a vank : marteze donedigezh ur pempvet den er strollad, gantañ awen donoc'h. Yann-Baol Corbineau ha Yann-Loeiz Josig a seblant ren ar c'hoari. Marteze e vije ret reiñ muioc'h a bouez d' an daou all. Diaes da larout, hogen war dachenn ar c'hanaouennoù-pobl a Vreizh-Uhel adnevesaet, n' o deus ket betek bremañ an 3 Yann a gevezerien.

Ar c'hanaouennoù-se, evel re Vreizh-Izel, a oa re tud a-ziwar ar maez hag hor sevenadur a-vremañ, zoken e Breizh a zo hini ar c'hêrioù, siwazh marteze. Ha kêriz a glask, hep gouzout dezho peurliesañ, « en em adwrizeniañ ». Grevusoc'h marteze. Daoust hag ez eus e aergelc'h danvezel an amzerioù-mañ ur stumm-bevañ

dellezek eus an anv sevenadur ? Marteze ez eus unan, o tont eus hon herez, o c'henel bremañ, er boan hag er joa kemmesket.

P.A.B.

Pladennoù

Degouezhet zo ganeomp peder fladenn 45 tro embannet e ti Arfolk. Ar pevar Strollad, Ar Sonerien Du, Kouerien Sant Yann, Satanazet hag ivez Ar Bleizi Ruz a zo diskibien da Ziaouled ar Menez met klasket o deus, pephini en e zoare, klotañ gant an amzer a-vremañ hep disteurel hêrezh an amzer dremenet.

Ar Sonerien Du, da skouer, a ra gant ar biniou kozh hag an akordeoñs c'hoariet abaoe pell 'zo e Breizh ha se ne vir ket outo d' ober gant loaioù pe chom a-sav gant ar binvioù ha kanañ evel ma ra Iwerzhoniz. Ur rebech : bezañ adkemeret un ton anavezet bremañ pa vez kanet war bladenn an Diaouled : Gavotenn ar Menez.

Kouerien Sant Yann a denn implij eus ar biniou, ar vombard hag an akordeoñs, c'hoari a reont ouzhpenn gant loaioù, ur fleüt, ur gitar hag un tamm taboulin.

Ar Bleizi Ruz, dezho un anv diaoulek, a zo aet pelloc'h eget ar re all evit pezh a sell ar binvioù, ober a reont gant ar saxo, da skouer. Lod a lavar zoken ez int aet re bell. Seblantout a ra ez eo kentoc'h un ton da zañsal eget un ton da selaou en ur gadorvrec'h ha se n' eo ket un tamall evel just.

317

Distro ar Gelted 33 tro, kentañ pladenn vras Youenn Gwernig, a zo embannet ivez e ti Arfolk. N' eo ket alies hon eus ar blijadur da selaou ur bladenn vreizhat-rik, setu unan evit ur wech. Ar c'hanaouennoù a zo kempennet ha kanet gant Y. Gwernig a-wechoù harpet gant e wreg. Bez' ez eus un nebeut kanaouennoù-pobl (Son ar jistr, Gwin ar C'hallaoued, Sonenn ar bugul, Tralalaleno) hag un nebeut re all savet gant Youenn Gwernig e-unan : Les Bougnoules, Gavotte du Joint, Distro ar Gelted, Gwerz an Harluad, What did the French do to their last Bourbon (saourus-kenañ hag e saozneg), Gwez ha Bez-enskrivadur (fentus-tre) hanter-vrezhonek, hanter-saoznek. Ar sonerezh a zo didamallus hag eilet alies gant un delenn, ur fleüt, ur banjo pe ur gitar. Un tamallig marteze e-keñver an aergelc'h, un enrolladur en ur sal gant tud o kemer perzh a vefe bet marteze gwelloc'h evit hevelep kanaouennoù.

Degouezhet eo ganeomp ur pennadig 'zo dija ur bladenn 45 tro anvet " Satanazet ". Heñvel a-walc'h ha ken barrek eo ar sonerien-mañ ha Diaouled ar Menez. Diouzh un tu e kaver " An Dro Elfenn" ha diouzh an tu all " Pachpi nevez ". Ur bern binvioù a vez implijet : pib, banjo, fiddle, ograou, bombard, fleüt, gitar ha loaioù. - C.A.S.E., Kastell Kernabad, 22200 Plouisi.

G. ha T. H.

Embannadurioù

Degouezhet eo ganeomp an embannadurioù liesskrivet-mañ :

- **Ar Gevidenn**, niv. 5. Ur romantig eo, savet e-kerz ar bloavezh-skol 1971-1972 gant Gurvan Etienne, 9 bloaz, hag e dad. Lodennet eo e pennadoù berr ha fentus, ar yezh a zo reizh hag aes. An istorioù a gas da soñj eus " An Tri Boulomig Kalon Aour ". Liesskrivet mat-tre eo evel boas.

- **Brogon** gant Koulizh Kedrez, alias Kouli Kedrez, gant ur c'hlotenn ouzhpenn (ar c'hlotennoù a zo stultenn an oberour, o c'havout a reer er barzhonegoù ha zoken

er skridoù e komz plaen). An dastumad-mañ a zo skrivet fall-spontus avat ha dre se diaes da lenn. Merzet hon eus koulskoude e oa danevelloù erotek en ur yezh esoterek. Barzhoniezh a zo gant lod eus ar gerioù puilh ha divoutin hag ar pezh hon eus gallet lenn eus " Kablus " a zo savet mat en doare dibabet gant ar skrivagner.

- **Hor Yezh**, niv. 86-87, a zo puilh ha liesseurt, ouzhpenn 100 pajenn kinniget da eñvor Arzel Even : ur varzhoneg gant Anjela Duval, un droidigezh gant Arzel Even, ur studiadenn jedoniezh gant e vignon Kerverziou, geriaoueg Sant Ivi gant Alan Heussaff, div gontadennig gant E. ar Barzhig, poelladoù gant Surzhur, studiadennoù yezhadur gant F. Kervella, gant J. Gwegen ha gant Gwenole ar Menn.

- Niverenn 42 ar gelaouenn bolitikel **Imbourc'h**, koumanant 30 lur, a ro keloù eus ar broioù keltiek : Kembre, Manav, Alba hag Iwerzhon. Setu amañ roll ar pennadoù all : Daoust ha peurbadout a c'hell ar gevredigezh lieselour kornogat, Geneliezh ur c'homunour, Armerzh Breizh, Trevadennoù ar Portugal.

318

- **Barr-Heol**, niverenn 77 : koumanant 20 lur. Ar gelaouenn relijiel-mañ a zo atav ken dedennus ha ken liesseurt : Notennoù-beaj, prezegennoù, barnadennoù, skridoù prederouriezh (Freud ha ni, gant F. Kerrain).

Resevet hon eus ivez **An Nerzh**, niverenn 8, stagadenn da " la Bretagne Réelle " : koumanant 16 lur. Pennadoù gant Rieg, J. Gallo, G. Pennaod, hag ur ganaouenn bet dastumet gant Herve ar Menn.

Klask a reer

Klask a reer ur sekretour da labourat hanter-amzer en ur gevredigezh sevenadurel (Roazhon), ur c'helenner evit reiñ un nebeut eurvezhioù kentelioù brezhoneg bep sizhun (Pariz). Skrivañ d' ar gelaouenn, e ti Ronan Huon, 2, venelle Poulbrikenn, 29200 Brest, en ur verkañ war al lizher : evit an embann 001.

Minikasedig evit al levr " Kentelioù brezhonek "

Ur minikasedig nevez hir-badus (1 eur 1/4) a zo nevez-deut er-maez : holl destennoù al levr " Kentelioù Brezhonek " (eil derez) gant Per Denez. Testennoù lennet gant Lukian Kergoat, Gwendal Denez, Jaklin Saliou. Un enskrivadur eus ar re wellañ. Priz 30,00 lur digant Al Liamm.

" Nenn Jani "

Ar romant " Nenn Jani " gant Roparz Hemon a vo embannet dizale e stumm ul levr, ha ne vo ket kavet eta ar peurrest war ar gelaouenn.

Nevez deut er-maez

Testennoù al levr Kentelioù brezhonek, eil derez, gant Per Denez, a zo bet enskrivet hag embannet e stumm ur minikasedig L. P. a bad 1 eur 1/4. Lennet eo an testennoù gant Lukian KsRGOAT, Gwendal DENEZ ha Jaklin SALIOU. Eus ar gwellañ eo bet graet al labour. Priz ar minikasedig L. P. a zo 30,00 lur. Bez e c'heller prenañ digant AL LIAMM.

Erbediñ a reomp start d' ar studieren goulenn ar minikasedig, a vo ur skoazell vras evit kement hini a zesk ar yezh.

319

Roll an emskiant vroadel e stourm Vietnamiz

« Anat eo ne c'hell ket ar saviad etrevroadel displegañ pep tra (e endroadur ar brezel) ha ne c'hell ket displegañ dreist-holl dalc'husted ha started ar bobl vietnamat. Ret eo sellout ouzh an abegoù broadel, ha da gentañ ouzh nerzh **ha** donder an emskiant vroadel... Aloubet ha trevadennet eo bet hor bro e-pad ouzhpenn pevar-ugent vloaz ha bez' ez eus un dro-lavar vietnamat, " koll e vro ", hag a zispleg mat hon trivliad, eleze ar sammad poanioù, mezhoù ha dismegañsoù gouzañvet e-pad ur c'hantved ; an doare arallekaat a ra ne vezer mui un den gwirion a zo bet merzet don gant ar bobl a-bezh en holl renkadoù hag un trivliad don ez eo. Ha p' en deus diskleriet Ho-Chi-Minh e 1946, p' o deus adkroget ar C'hallaoued da dagañ Vietnamiz, « Kentoc'h mervel eget dont da vezañ sklaved en-dro », eztaolet en deus evel-se trivliad ar vroad a-bezh ; ha p' en deus lavaret e 1966 tost an hevelep tra dindan ur stumm all « N' eus netra prizioc'h eget an dieubidigezh hag ar frankiz ». Pa oa deuet an alouberien amerikan da vombezañ Norz-Vietnam, e c'helle Hanoi ha Haiphong bezañ distrujet hogen bez' e c'hellent bezañ adsavet ivez, ret e oa mirout da gentañ an dieubidigezh hag ar frankiz ; arabat e oa deomp dont en-dro sklaved trevadennet ; diwall hor broad, hor broadelezh, hor spered broadel, hon talvoudoù broadel, setu aze goell hor stourm abaoe tregont vloaz. »

Nguyen Khac Vien, skrivagner vietnamat ha rener embannadurioù e Hanoi.
(Arroud troet gant P. P.)

Iwerzhon

Niverusoc'h-niverusañ eo an dud e Bro-Saoz a gav dezho e vefe gwelloc'h dilezel Norz-Iwerzhon ; ur goulennadeg savet gant kerent ur paotr lazhet du-se a zo bet sinet gant miliadoù a dud a-benn un nebeut deizioù ; evit diskouez ar stad-spered-se, setu arroud ul lizher embannet gant ar gelaouenn " The Observer " .

Let's break with Ireland
(Torromp al liammoù gant Iwerzhon)

« Ne c'hellomp ket kenderc'hel da sellout ouzh Norz-Iwerzhon evel ouzh ul lodenn eus Breizh-Veur. Ar gatoliged iwerzhonat n' o deus biskoazh sellet outo o-unan evel Breizhveuriz hag ar brotestanted iwerzhonat o deus kaset da benn ur politikerezh " apartheid " pa oant o ren ar vro.

Ra vo graet ur boblaters, ra vo goulennet da Vreizhveuriz a bae tailhoù, en o zouez kerent ar re a zo bet lazhet en Iwerzhon :
" Daoust hag ez oc'h a-du evit terriñ holl liammoù politikel hag armerzhel gant Iwerzhon ? "

Kavout a ra din e tellez holl Iwerzhoniz bezañ unvanet an eil re gant ar re all.
»

E ti Moulerezh AR BAOL - Bali ar Marichal-de-Lattre-de-Tassigny
Diskleriet hervez lezenn : trede trimiziad 1973
Niverenn er voulerzh : 35163 - Ar merour : P. AR BIHAN

AL LIAMM 160

TAOLENN

Ar foeter-hent gant PER DIOLIER	323
Marvnad gant YANN-VARI BROHAN	324
Kartenn-anv gant MANUEL MARIA	326
Kanaouenn gant MANUEL MARIA (tr. M. Kerraen)	327
Pedenn gant AN TOUSEG	328
Doue-galleger gant T. KALVEZ	329
Eñvorennoù eus Breizh-Veur gant ROPARZ HEMON	330
Un den a urzh vat gant DIDROUZ	351
Mentadur ar vuhez gant GWENDAL DENEZ	358
Tangi Malmanche gant MAODEZ GLANNDOUR	362
Istor Breizh (kendalc'h) gant LA BORDERIE (tr. R. Hemon)	370
C'hoariva gant L. ANDOUARD	377
Dek Vroad " berzet " e Kornog-Europe gant PER PENNEG	380
Notennoù	384

Ar foeter-hent

Hanter-kant vloaz endeo ha ken sot hag un azen,
un hanter-kantved tost ha pitilh an den paour,
n' en doa biskoazh kemmet ar plom boutin en aour,
gantañ e holl vadoù a zalc'hfe en ur c'hased.

An den bihan abaf a oa aet war an hentoù
gant e visac'h lien hag e vlev louet,
en e benn marmous sec'h ar c'hoant monedone
da glask ar wenojenn ha ne ya da neblec'h.

Un deiz e voe kavet marv-reut en ur c'hleuz don
a-hed an hent postek a gane Kersella,
nepell diouzh ar feunteun a zispenn pep joa
ha tres war e vuzell ur seurt minc'hoarzh eston.

Met en e vuzetenn 'voe ket kavet a vara,
na boued na dilhad na skridoù na moneiz,
hogen bravigoù stumm n' en doa nikun gwelet,
tannoù steredennoù en noz dall o lintrañ.

Sant-Servan, 2-9-73.

MARVNAD

E koun ur vignonez lazhet war an hent.

Du-hont emañ an oabl lenkr dizamant,
Pa grog an hentoù bannet 'vel goafioù
Hag an toennoù da ruziañ
En ur gouli dizivius.
Kledour ar vro krignet gant an heol,
Holenn debrus an estrenvro
A zev ar gorzailhenn ;
Ha mougañ gant ambren ur skeudenn
O kaletaat er genoù,
O tisneuziañ
Da louet an hent
D' amliv an Ankou.
Glav al ludu a sko stank
Da zallañ ho sell.
A-frapadoù alan an dielc'hadoù
O tasseniñ war ho klopenn,
Ha stered du a wiad rouedoù
War genou ho puhez
War heol al lagad.
Kevnid an ankounac'h.

Ken drant he yaouankiz
Ha bividik he c'hoarzh, he sell, he lavar.
Kinnig he c'horf da avel ar vuhez

He blenie war gouel an dañs.
Koroll ar manifestadegoù hag hini ar Festoù-Noz
An divizoù er c'hafedi
Ha kimiadoù an adkav nes.
325

" Grand Ecran Panoramique "
Ne chom mui 'met ur skramm frailhet
Dirazon
Drailhennoù ur garantez
Ur gordenn o fuilhañ he neudenoù.
Sternioù inox karvan ur c'harr
O lintrañ gant c'hoarzh dizant ar marv
Dirak
Enep
A-dal
Harz
Stok
Fruk an houarn, drast ar c'harr
Strak ha storlok
Tarzh ar gwer bruzhunet.
Stlabez.
Tav an traezh en aer lor.
Hag endro fraoñv ar c'hirri o vont gorrek.
Selloù ranell.

Ya.
Ar marv 'n deus freuzet ar glorenn vresk.

Selloù goullo
Boulligoù gwenn ur pesk poazh.
Ul luc'hskeudenn ur wallzarvoud
Unan da welet ha da ziskouez
Unan da deurel e blodoù ar c'heloù.

Pradeier ar c'hoari 'zo deuet da gras.
Da zremm em zremm
Ha va melezour a vir tresoù n' eus ken anezho
Em ziavaez.
Bevañ 'rin gant da sell
Da c'hoarzh
Ha da vouezh ennon.
Bezañ 'vin ganit em askre
Ganin ennout.
Bezañ 'vin ar bed hag an douar.
Ha te vo alan va alan
Buhez va buhez
Buhez ha Marv.

326
Manuel MARIA

Kartenn-anv

Me zo Manuel Maria
Ganet er bloavezh 30, c'hwec'hvet devezh an Diskar-Amzer.
En Outeiro de Rei, en Terra Cha.
Me zo eus un tiegezh rust a gouerien
Feal d' o Douar ha d' o Doue.

Hirio emañ e Karantez.

Me zo Manuel Maria
Barzh Terra Cha, eme tud 'zo.
Barzh un douar kompez a vez douget,
Tachet en hon bouzelloù, a soñjan me.

Me zo Manuel Maria
Kouer ha barzh un tammig.
Setu perak e talc'han tarzh an deizioù
E don ma daoulagad
Hag ez an gant ma hent
Hag e c'houlun digant an traoñ bezañ tener
Digant an dud bezañ gwir.

327

KANAOUENN DA GANAÑ BEMDEZ

Ret dimp difenn hon yezh
Gant kounnar, gant fulor, taolioù mindrailherez.
Ret dimp difenn hor yezh ha stourm kriz ha kalet
Gant kirri-tank, kirri-nij, ha gant taolioù dorn.

Ret dimp bezañ start, tagnous ha didevez
Gant ar re a c'hoarie o zammig Aotronez
Gant an tourc'hed heugus 'vez gwelet o tec'hel
Gant ar moc'h, bet spazhet, gant an houlierien.

Ret dimp en em gannañ gant ar reneaded
Ar re a fell dezho mougañ dimp hon yezh.
Ret dimp en em gannañ gant an dreitourien
O deus c'hoant he lazhañ hag he sebeliañ.

Hep hon yezh ne vefemp ket tud zoken,
Paour-kaezh yer dibluet ne lavaran ket.
Gouzout mat e oar hon enebourien
E trec'h ar gerioù war ar c'hlezeier.

Hon yezh eo ni, ar bobl en he fezh,
Ar skoulm hon stag holl en hon sav,
Hêrezh ar bloavezhioù da bep hini,
Oaled m' emañ hon feiz bemdeiz o virviñ.

Ret dimp en em gannañ gant ar re laosk
Gant ar re sot, dizesk ha diot.
Ret dimp embann hon yezh, dibleg
He difenn gant hon dent ha gant hon ivinoù.

Ret dimp reiñ en-dro d' ar bobl he mouezh c'hlan
An neb hon c'har hep hon yezh a venn hon lazhañ.
Ret dimp difenn hon yezh gant hon dorn savet.
Rak hep hon yezh ne vimp ket saveteet.

brezhoneg gant MARK KERRAEN.

328

AN TOUSEG

PEDENN

Salmadenniñ en dro d' un tan

Pateroù du da Sant Haran
Ha seveniñ e skleur al loar
Marzhennoù ho pugale koar.

Ouzh hor c'hoantoù ho pet truez
Sant Erwan Meur a Wirionez.

E Tredarzeg mont da bediñ
Iron Varia 'r Gasoni
Gouestlañ dezhi penn-kil-ha-troad
Al loened-euzh a sun hor gwad.

Ouzh hor c'hoantoù ho pet truez
Sant Erwan Meur a Wirionez.

Dañsal e noazh koroll ar joa
En-dro da Santez Koupaia
'Vit lidañ betek ar mintin
Oferennoù war an tu-gin.

Ouzh hor c'hoantoù ho pet truez
Sant Erwan Meur a Wirionez.

Ha mont da glask da hanternoz
Dindan lagad pagan hor sent
Hentoù nevez d' ar baradoz
War roudoù an doueoù kent.

329

Tugdual KALVEZ

Doue-galleger

Va digarezit, Aotrou Doue
mar n' em eus ket kanet ur sul a oa
kantik ebet d' hoc'h enoriñ
en un iliz-parrez
moul-livet he c'hloc'hdi war glas-mor an oabl.
Pobl ar maezioù a oa deuet da vouskomz deoc'h
a-zivout ar c'heloù a bouez war he spered,
prezeg ar galon hag ar vugeliezh
prezeg an daouarn diflour
hag an dremmoù skarnilek.
Ho peleien a oa o tisplegañ dezhi
o tisplegañ e yezh Boileau
ket e yezh ar bou'elloù, ket e yezh ar c'hreizon
nann, en ur yezh arallvro, disaour ha divuhez,
hep bezañs, hep dason -
skarnil-ene.
Ar mouezhioù a chome goloet.
Kollet o c'homz.
Kollet o c'han.
Ha n' eo ket diskennet donezon ar yezhoù
dre doull dor hor c'hloareg ?
Aotrou Doue, digarezit va eeunegez -
C'hwi hag a oar an holl draoù
daoust ha ne vrezhonegfec'h ket ?

EÑVORENNOU EUS BREIZH-VEUR

(1919-1920)

I. - BUCKLEY

Ar Brezel, - Brezel 1914, ar C'hentañ Brezel-Bed, evel ma lavarer bremañ, - a oa o paouez echuiñ. Darev oa bet din bezañ galvet da soudard, hogen ne oan ket bet. Derou 1919 e oa.

Edon e Pariz, el lise Sant-Loeiz, prest da dremen an arnodenn evit mont er Skol Boliteknik, a dlee bezañ e miz Mae, a gredan. A-greiz-holl e skrivis da 'm zud da gemenn dezho krenn-ha-krak e oa kemmet va menoz. N' em boa asantet klask mont da ijinour nemet evit plijout da 'm zad. E gwirionez ne ouien ket petra a felle din.

Hag i glac'haret, va zud a blegas, hep enebañ kalz, da 'm froudenn. Distreiñ a ris da Vrest, ma edont d' an ampoent. « Ha petra a ri-te bremañ ? Petra a ri-te ? »

Evit kaout peoc'h diganto e lavaris em boa c'hoant bezañ kelenner. N' em boa avat nemet ur c'hoant : studiañ yezhoù. En ur vale dre ruioù Pariz e oan bet dedennet, evel ma vez dedennet ur gelienenn gant ar mel, gant skritelloù " Skol Yezhoù ar Reter ", hag e chomen, peg va fri outo, ouzh o lenn, linenn dre linenn : arabeg, kopteg, sinaeg, japaneg, ha me 'oar. Debron am boa da zeskiñ anezho holl. Siwazh, tremenet em boa va bachelouriezh er rummad D, rummad ar Skiantoù. Ha merket-splann e oa war bep skritell ne veze digoret dor ar Skol nemet d' ar re o doa ar vachelouriezh A, B pe C. Ur rangalon !

331

« Kelenner saozneg e vezin, » emezon.

« Mat, kentañ ac'h eus d'ober neuze eo mont da Vro-Saoz. »

Ur vignonez da 'm mamm a anaveze ur beleg breizhat e Bro-Saoz, a gemere pañsionidi, emezi, en e bresbital.

Skrivet e voe d' ar beleg, hag ur respont hegarat a zeuas kerkent digantañ. Aozet pep tra. N' em boa mui nemet mont en hent.

Ne oa ket ken aes koulskoude ha ma kredemp. D' ar mare-se e ranked kaout ur viza e konsuldi Breizh-Veur e Pariz. Biskoazh em buhez ne oan bet degemeret ken rust ha ma voen gant ar c'honsul, a huchas din, e galleg fall ha neuze e saozneg, e oan un toueller, a felle dezhañ mont da Vro-Saoz da c'hounit arc'hant, ha kaset e voen da sutal. Un eil gwech ez is d' e welout evelato, en dro-mañ gant ul lizher eus ar beleg o testenianñ e vijen pañsionad en e di. Stampet e voe erfin ar viza war va faspport gant an den fuloret, a glevis o krial en ur stlakañ an nor war va c'hein : « E ti ur beleg gall da zeskiñ saozneg ! » evel pa vije bet diotañ tra a c'halled ober war ar bed-mañ.

*

Degouezhet gant an tren en Haor-Nevez, e-kreiz an noz, e kemeris ur wetur-dre-varc'h da vont d' ar porzh-mor. Ar blenier a fazias war e hent. Ne ouie ket pelec'h edo lestr Southampton. E oa ar c'hloc'h o seniñ an disparti pa errujomp. Pignat a c'hellis e bourzh en ur stlejañ va valizenn bounner p' edod o vont da lemel an treuzelloù.

Pebezh mesk ha pebezh rouestlad ! Leun-kouch e oa al lestr. Plas ebet en diabarzh, e logoù ar veajourien. War ar pont dre-holl e oa soudarded saoz, astennet, paket en o mantilli hag o fallennoù gloan, rak miz Ebrel e oa, ha yen. A-benn e teuis da azezañ war gornig ur bank, hag e chomis eno daoust d' an taolioù-troad a roe din ur soudard a vorede, tamolodet em c'hichen.

Dre eurvad e oa sioul ar mor. Ne gouskis banne.

An deiz a savas goustadik. Ne oa nemet dour en-dro deomp, hogen en diwez e spurmantis tornaodoù a-bell ledet war an dremmwell. Lod eus ar soudarded a zihunas, a fiñvas, a yeas en o sav, a blegas o fallennoù hag o stagas war o seier. Me a ziskennas e korf al lestr, ma oa tud e-leizh o riboulat, paotred o lemel o barv, re all gant gobeledadoù te o doa prenet ne ouien ket pelec'h. Heuget e voen gant ar flaer a achape eus al logoù, rak tud a oa bet klañv e-pad an noz, hag e tistrois buan da 'm c'horn, aon din na vije bet laeret va valizenn.

332

Al lestr a riklas a-hed ur c'hae. An holl en em zalc'he prest da ziskenn, hogen ret e voe gortoz e-pad pezh a seblantas din bezañ ur beurbadelezh. Sellout a raen, soñj am eus, ouzh ar gwagennoù o tarzhañ ouzh peulioù du ur sav-prenn. Eus kêr Southampton ne welen mann. Netra nemet un aridennad bagonioù goullou, - tren Londrez, - emichañs, - en ur gouelec'hiad roudennoù, un nebeut lochennoù koad amañ-ahont.

*

Aotre a voe roet da ziskenn a-benn ar fin. Daou dreuzpoent a oa war ar c'hae, unan evit Breizhveuriz, unan evit an estrenien. Breizhveuriz a dremene prim-ha-prim, hag an estrenien goustadik, rak goulennataet e vezent hag e vurutelled pizh o faperioù. Un tamm aon a oa din na vijen harzet pe gunujennet evel ma oan bet gant ar c'honsul e Pariz. Hogen lezet e voen da vont. Neuze e rankis lakaat ha digeriñ va valizenn war un daol hir, a-dreñv dezhi maltouterien. Ar re-mañ avat ne oant ket trubuilhus. Ur sell hepken ha graet ur merk gant un tamm kleiz war ar pakadoù.

Pa c'hellis pignat en tren e oa leun dija. Plas a gavis koulskoude da azezañ en ur c'hombod, gant soudarded da genveajourien.

Souezhet e oan gant ment vihan ar c'hombod, ivez gant ar bankoù hag ar speurennoù bourell, kalz blotoc'h eget bankoù ha speurennoù koad ar c'hombodoù trede klas e Bro-C'hall. Dindan ar rouedoù-pakadoù e oa luc'hskeudennoù o tiskouez gweledvaou brudet eus Breizh-Veur, pezh a gavis plijus-meurbet.

An tren a ruilhas gorrek etre renkadoù tiez-brikennoù izel holl heñvel, fabourzioù Southampton moarvat, ha neuze, o tapout herr, etre parkeier ha torgennoù, lintrus gant ur gwiskad skañv a erc'h. Ar c'housked a c'houneze warnon, daoust d' an trouz ha d'ar cholori kaset gant ar soudarded, dreist-holl gant daou bikol Aostralian, a rae o furlukined, o sevel, oc'h ober an neuz da c'houren, o ragachat dibaouez hag o lakaat an holl nemedon da c'hoarzhin.

333

An tren ne ehane neblec'h. Ti-hent-houarn goude ti-hent-houarn a dremene, ha ne oa ket tu da lenn anv al lec'h, merket koulskoude e lizherennoù gwenn bras war blakennoù hir louet-du. Ar maezioù, a verzis, a oa kaer, hogen unton. Morvitellañ a ris en diwez, trec'het gant ar skuizhder. Pa zihunis, edomp adarre e-kreiz tiez bihan, o treuziñ ruiou ha ruiou vil ha diniver.

Londrez !

*

E gar Victoria, - pe Waterloo, ne ouzon mui, - e tegouezhjomp. Ar beleg ma aen d' e di en doa treset un daolenn resis eus an hent a dleen heuliañ, gant

eurioù an trenioù. Ne oa ket gwall sklaer e skritur avat. Ha setu me da gemer un taksi.

« Gar Luston, » emezon.

« Luston ! Luston ! » eme ar blenier o hejañ e benn. « O ! Euston a fell deoc'h lavarout ! »

« Luston » am boa lennet war an tamm paper.

Un den seven hag hegarat e oa.

Mar em boa bet spi da welout hini pe hini eus savadurioù brudet kêrbenn Vro-Saoz, e voe kerse ganin. Ne dapis alberz nag eus Pont an Tour, nag eus an Tour e-unan, nag eus kolonenn Nelson, nag eus Abati Westminster, nag eus Palez ar Parlamant, nag eus Palez Buckingham. Netra nemet ruioù ordinal, un tammig ledanoc'h, un tammig izeloc'h an tiez en daou du dezho eget e Pariz.

E gar Euston en em gavis evel kollet. Ar skritelloù, ar panneloù-arouez a oa ken stank ha ken luziet ma ne gomprenen mann enno. Ur paotrig daouzek pe drizek vloaz a zeuas da ginnig din dougen va valizenn. Ha me diskleriañ dezhañ ez aen da Chester. O verzout e oan un estren hag em boa poan oc'h intent ar pezh a lavare, e reas sin din d' e heuliañ. Gant ar paotrig servijus-se e voen saveteet. Kas a reas ac'hanon da brenañ va bilhed. Neuze em ambrougas betek an tren, haq e kavas din ur plas klenk e korn ur c'hombod.

Ur pezh arc'hant, - un hantergurunenn, - a lakais e plav e zorn.

« Re eo, » emezañ, o furchal en e c'hodell da reiñ din moneiz.

« Nann, mirit ! »

« Beaj vat ! » a grias en ur c'hoarzhin laouen.

*

334

Un tammig pelloc'h eget Chester e ranken mont e gwirionez, betek Connah's Quay, diskenn eno, ha kemer tren Wrexham betek Buckley Junction. Un implijad eus gar Connah's Quay, o welout e oan nec'het, am erbedas da ward an tren bihan-se, hag hemañ a zeuas leal da gemenn din p' edomp o tostaat ouzh Buckley.

Noz e oa. En em gavout a ris gant va valizenn en ur porzhig-houarn e-kreiz ar maeziou.

« Pelec'h emañ Buckley ? » a c'houlennis ouzh ar paotr a zastume ar bilhedoù.

Ur jestr a reas gant e zorn en ur serriñ e gloued. Ha setu me o kerzhout va-unan-penn gant un hent a welen a-boan en damdeñvalijenn, nemet a lec'h da lec'h e oa tiez sklerijennet o frenester.

A-greiz-holl e klevis c'hoarzhadennoù. Ur bagad tud yaouank, paotred ha merc'hed, a zeue a-dreñv din. Chom a ris a-sav.

« He ! » a c'halvis pa errujont em c'hichen.

Eus va gwellañ e tisplegis dezho e oan o klask ar presbital.

« The Presbytery, » emezon.

Ne gomprenent ket ar ger " presbytery ".

« Ti an Tad Pochard. »

« O ! An Tad Pochard ! Deuit ganeomp ! »

Ur paotr a zibradas va valizenn, a lakaas war e skoaz. Ha me da vont e-kreiz ar bagad. Kaozeal etrezo a raent an holl amzer, hag e komprenen e lavarent e vijent-i ken nec'het ha me ma vijent en ur vro estren.

Ur pennad mat e valejomp. Erfin, e penn ur grapenn, e harzjomp, hag ur plac'h a yeas da sachañ war gloc'hig dor un ti.

*

Ur pemp munud bennak a dremenas. Ur vaouez, ur voujienn en he dorn, a zeuas da zigeriñ.

« Ha n' eo ket ur fazi ? » a soñjis. « En ur presbital eo emañ ? »

Em faltazi em boa gwelet ur presbital evel e parrezioù Breizh en amzer-se, gant an aotrou person ha daou pe dri c'hure da nebeutañ, hag ur garabasenn gozh.

Ar vaouez a vouc'hoarzhe ouzhin ne seblante ket bezañ en tu-hont da zaou-ugent vloaz. Ur sae-gambr c'hlas gloanet a oa en-dro dezhi, hag he blev melen a oa un tamm diskempenn. Sur-mat edo o paouez sevel eus he gwele.

335

« C'hwi eo ! » emezi. « Ne c'hortozemp ket ac'hanoc'h hiziv. »

E galleg e komze.

Trugarekaat a reas va ambrougerien. Neuze, goude prenañ an nor he doa digoret hag he stagañ gant ur chadenn, e reas din mont e-barzh ur gambr, enni armelioù-levrioù e-leizh.

« An Tad a zo dihunet, » emezi. « Me 'ghev anezhañ o fiñval en e gambr. Bremaik e tiskunno. Azevit. Me 'zo sur ez oc'h skuizh-divi. »

O strakal un alumetezenn, e lakaas un dever-gaz war elum hag ez eas kuit.

Un ti ordinal e oa. Ne oa nag ur groaz nag ur skeudenn devot war ar mogerioù.

Hep dale e klevis trouz kammedoù o tostaat gorrek. Un den treut, un tammig krommet e gein, a zeuas er gambr. Gwisket oa e du, hep soutanenn, netra da verkañ e oa ur beleg. N' en doa ket kemeret amzer da wiskañ ar c'holier gwenn ront ha blet, douget, evel ma verkis diwezhatoc'h, gant an holl veleien, koulz katolik ha protestant, er vro-se.

« Bezit deuet-mat, » emezañ e galleg. « Ur veaj vat hoc'h eus graet ? »

Etre daou-ugent hag hanter-kant vloaz e oa, a gave din.

Ar vaouez he doa digoret dor an ti a zeuas er gambr gant ur podad te, laezh, sukr ha traoù da zebriñ. Me n' em boa debret netra e-pad ar veaj nemet gwispid a oa bet em valizenn, hag e oan du gant an naon.

« Houmañ, » eme an Tad, « a zo an Dimezell Blanche. Ur geginerez dispar a zo anezhi, c'hwi 'welo. »

War-dro hanternoz e oa, ha dizale e voe diskouezet din va c'hambr, a oa prest da'm degemer. Ur voujienn a zeve war an daol-noz.

« Nozvezh vat, » eme an Tad.

« Ha na zisoñjit ket, » eme an dimezell, « c'hwezhañ ar goulou. »

Ha me skuizh, ne vanis ket kousket diouzhtu. Darvoudoù va beaj a dremene dre va spered, ha dreist-holl hegarater ar Saozon o doa va skoazellet, ar blenier-taksi e Londrez, ar paotrig e gar Euston, ar gward e tren Wrexham, an dud yaouank war an hent. Nann, ne oant ket holl evel ar c'hozh konsul e Pariz.

*

336

« En ti-mañ, » eme an Tad pa azezjomp antronoz vintin da zijuniñ er sal-debriñ, « ne gomzimp nemet saozneg. Ar reolenn eo. »

E saozneg evel just e lavaras an dra-se.

« Mes dijuniñ a reomp er mod gall, » eme an Dimezell Blanche, « gant kafe dre laezh ha bara. »

Merzout a ris raktal e komze saozneg kalz gwelloc'h eget an Tad. Evit gwir e komze saozneg koulz hag ur Saozez.

Ur paotr eus va oad a oa ganeomp ouzh an daol.

« Va niz Emile eo, » eme an Tad. « N' eus plas du-mañ nemet evit daou bañsionad pe dri. Morse ne gemeromp muioc'h. »

« Pelec'h, » a c'houlennis, « emañ ar veleien all ? »

An Tad a zirollas da c'hoarzhin.

« En ur vro protestant emeomp, » emezañ. « N' eus nemedon da veleg, ha va farrez a zo ken bras hag ur c'hanton. »

An ti a oa bihan ha nevez-flamm : ar sal-debriñ, ar saloñs, ar sal-studi, ar sal-gibellañ hag ar gegin en traoñ, div gambr ha teir c'hambrig el lein. Diouzh un tu e oa ul liorz, diouzh an tu all an iliz, pe gentoc'h ar chapel.

Kaset e voen d' he gwelout. Ne oa ket brav : un aoter hepken, bankoù koad, un harmoniom, hag un nebeut delwenoù-plastr livet ; a-dreñv ul lochennig, a dalveze da sakristiri.

Goude se ez is gant Emile d' ober tro ar vourc'h.

*

Ar vourc'h, a lavaran. Ne oa tamm ebet avat evel bourc'hioù Breizh-Izel. Ur ru hir-hir a rae ar gêriadenn, gant tiezigoù brikenoù hed-ha-hed, ha tiezigoù all strewet e-kreiz liorzhoù ha parkeier en daou du, hag un nebeut straedoù bihan. Amañ-ahont e weled bernioù glaou, rak mengleuzioù a oa, pe a oa bet, tro-war-dro. Sabatuet e voen gant niver ar chapelioù, pep ranncredenn protestant o kaout he hini. Darn a oa e brikenoù, darn e koad. Bez' e oa ivez div iliz evit an anglikaned.

Buckley a oa digened-holl. An torgennoù hepken, glas-teñval, o c'hrec'hioù goloet gant erc'h, ledet war an dremmwel er c'hornog hag er c'hreisteiz, a oa kaer dindan an oabl ledan.

Goude merenn e chomis da gaozeal gant an Tad er sal-studi, a oa ivez ar sal-emvod.

337

Ur goulenn a ris outañ.

« Me 'gav din, » emezon, « ne dleomp ket bezañ pell amañ diouzh Bro-Gembre. »

« Pell diouzh Bro-Gembre ! E Bro-Gembre emaoamp ! » Ha me souezhet ha laouen-bras.

« Hag an dud a gomz kembraeg ? »

« Ne reont ket. Ne gomzer kembraeg nemet un nebeut kilometradoù ac'han, er c'huzh-heol, en tu all d' an torgennoù. Perak e c'houlennit ? »

« Me a oar brezhoneg, » emezon.

Ur ranngalon e oa bet din rankout lezel er gêr va levrioù brezhonek. Ne oant ket niverus, war-dro un dousenn : " Pipi Gonto ", " Tok Jani ", " Pôtr e vragou berr ", gant Dir-na-Dor, holl levrioù Klaoda 'r Prat embannet d' ar mare-se, en o zouez an hini a garen dreist-holl, " Nozveziou an Arvor ", am boa lennet hag adlennet meur a wech, hag ul levr kantikoù am boa kavet e pardon Santez-Anna-ar-Palud. Unan hepken a oa deuet ganin, unan prenet un nebeut deizioù a-raok, " Les bardes et poètes nationaux de la Bretagne armoricaine ", gant Le Mercier d'Erm.

E ziskouez a ris d' an Tad.

« Me ne ouzon ket brezhoneg, » emezañ. « Pa edon e skolaj Lesneven, e oamp rannet e daou rummad, rummad ar c'hallegerien ha rummad ar vrezhonegerien. Hag e veze tabut etrezomp. »

Aon am boa n' en dije graet goap ac'hanon. Ne reas ket.

« N' eus ket pell, » a lavaras, « e oa er vro-mañ ur beleg, an Tad Trebaol, ur mignon mat din, a gare kalz ar brezhoneg. Desket en doa kembraeg, hag ez embanne zoken ur c'hannadig katolik er yezh-se. Aet eo kuit siwazh. Ma ! Me a lenno al levr-mañ gant hoc'h aotre, ar pezh a zo skrivet e galleg da vihanañ. »

*

Boazañ a ris buan ouzh ar vuhez a renet er " presbital ".

Na disheñvel diouzh ar vuhez el lise Sant-Loeiz !

Mintin abred e lavare an Tad e oferenn, gant Emile da gurust. Ne oa den all ebet, nemedon hag an Dimezell Blanche a-wechoù.

Dijuniñ a raemp goude. An Tad a yae da lenn e vreviel hag ar c'hazetennoù. Me a naetae va c'hambur, hag a rae neuze ar pezh a blije din. Alies ez aen gant an dimezell da ober ar c'hefridioù, digarez, emezi, da glevout saozneg ar vro.

338

Merenn a oa da un eur. En endervezh, pa veze brav an amzer, e raen un dro-vale gant Emile. Ret e oa bezañ distro da c'hwec'h eur, da gemer " an te ", a oa hor c'hoan. An abardaevezh a dremenemp hor-pevar er sal-studi.

Me a lenne. Ar sal, evel am eus lavaret, a oa leun a levrioù renket en armelioù, levrioù saoznek e-leizh, romantoù avanturioù ha faltazi an darn vuiañ anezho, oberoù H. G. Wells, Conan Doyle, ha dreist-holl Jack London, a veze prizet gant an Tad evel gwellañ skrivagner ar mare. Levrioù spagnolek a oa ivez, hag o lenn a raen gant dudi, rak spagnoleg am boa desket hep kelenner e-pad ar brezel.

E derou ur sizhun e oan degouezhet e Buckley, d' ur meurzhvezh, a gredan.

Pa zeuas ar Sul e welis ar barrezianiz o tont d' an oferenn, a-vec'h un hanter-kant a dud. Hogozik holl e oant Iwerzhoniz diazezet er c'hornad. Muioc'h a gatoliged a oa er barrez, nemet kalz anezho a loje re bell da zont d' ar

chapel. Kanañ a raed kantikoù. An harmoniom a veze c'hoariet gant ur protestant, a ranked paeañ. An Tad a rae e sarmon en e sav dirak an aoter, rak ne oa ket a gador-brezeg.

Miret-strizh e veze ar Sul e Breizh-Veur en amzer-hont. Den ebet ne laboure. Stal ebet ne veze digor. An dud, ur wech aet d' an iliz pe d' ar chapel, a chome er gêr, hep krediñ mont da bourmen na plediñ gant o liorzhoù. Ni, a lavare an Tad, a ranke ober evelto, dre aon na vije brudet-fall ar gatoliged. Ur piano a oa er saloñs. Arabat e oa tostaat outañ en deiz-se. Arabat e oa kanañ, na c'hoarzhin na kaozeal re uhel zoken.

Petra a raemp-ni eta ?

Goude merenn, azezet er sal-studi en-dro d' an daol, ha serret-kloz ar prenester, kuzhet-mat, e c'hoariemp ar c'hartoù : " bezig ", ar c'hoari a blije gwellañ d' an Tad. Ma vije bet gouezet an dra-se, e vijemp bet dizenoret.

War-dro pemp eur hepken e teue un tammig trouz er vourc'h. Eus hon ti e klevemp mouezh ur paotr o sevel, hag e welemp dreist mogerig al liorzh tud bodet d' e selaou. Ne oa ket ur pastor, hogen ur micherour bennak, awenet gant ar Spered, a rae ur brezegenn hir. Hogozik e pep kroazhent, a voe lavaret din, e sarmoned evel-se.

*

339

Diouzh ar pezh a gontan e c'hallfed krediñ e oamp distag diouzh buhez ar gêriadenn.

Ar c'hontrol eo a zo gwir.

Tud a zeue alies d' hor gwelout, ha d' o gwelout ez aemp ivez. Protestanted. Ar gatoliged a zarempredemp nebeut, nemet un tiegezh pe zaou.

Brestad oa an Tad Pochard. Echu gantañ e studi, e oa aet e Breuriez an Eudiz. D' ar mare ma oa bet harluet ar breuriezhoù gant gouarnamant Bro-C'hall, e oa aet da Vreizh-Veur. Diouer a veleien a oa eno moarvat, rak a-vec'h desket gantañ un tammig saozneg e voe kaset da berson, ne ouzon mui pelec'h e Bro-Saoz, ha neuze e Kembre. Rankout ober sarmonioù, a anzavas ouzhin, a oa bet da gantañ ur verzherinti evitañ.

Nebeut a wech em eus kejet gant un den ken speredek ha ken mat. Hep bezañ rust, ne oa ket amc'hraus atav, ha goap a rae eus doareoù " dousik-dousik " beleien 'zo. Desket-bras e oa ha ledan e venozioù. En e yaouankiz e oa bet dedennet gant luskad an Ervenn, a oa e bal arneveziñ an Iliz, ha trubuilh en doa bet, a gredan, gant e vistri. A-du e oa gant an ekumenegezh. Ne gomprens ket, emezañ, perak e veze difennet outañ, beleg katolik, kemer perzh e bodadegoù pastored ar gêriadenn. Lakaat a rae e barrezianiz da ganañ kantikoù, evel " Lead, kindly light " ar c'hardinal Newman, a veze kanet ivez gant an anglikaned. Tostaat ouzh ar brotestanted a oa ret, a lavare, ha n' eo ket en em rannañ krenn diouto. O lenn divizoù Sened-Iliz Vatikan II em eus soñjet alies en Tad Pochard. Deuet-mat e vijent bet gantañ.

E-touez e levrioù gallek e oa oberoù Maeterlinck, tra souezhus evit ur beleg. Hoalet e veze gant ar gevrinouriezh. E traoñ unan eus e armelioù e oa ur c'hombod, atav serret war alc'houez, a rae anezhañ " an Ifern ", ennañ levrioù spiritegezh, vampirouriezh, ha me 'oar. Ne leze den ebet da lenn anezho. Ouzh sklerijenn an deologiezh hepken, a lavare, e tleent bezañ studiet.

Ne oa ket gwall greñv e yec'hed, ha boued a-ziforc'h a veze aozet dezhañ gant an Dimezell Blanche. Daoust ma oa echu ar brezel e ranked c'hoazh kaout tikedoù da brenañ traoù 'zo, ha miret e veze evitañ an holl amanenn. D' ar re all e roed margarin.

Ur si en doa, mar deo ur si. N' halle ket chom pemp munud hep choukañ malet en e fri. E voest-vutun, graet e korn, a veze atav e godell e borpant pe war an daol en e gichen, hag an doare pateled a zouge dindan e golier a oa rous gant an tammoù butun a gouezhe etre e vizied.

340

Karet e veze er gêriadenn. Pa 'z ae er-maez e rae ur mousc'hoarzh ouzh an holl, hag e kaozee gant meur a hini. N' eo ket souezh e tistroe alies diwezhat d' ar gêr.

« N' eo ket posupl, » a lavare an Dimezell Blanche o sellout ouzh he eurier, « un dra fall bennak a zo c'hoarvezet gant an Tad. »

*

An Dimezell Blanche Sergent a oa ur Flandrezadez eus hanternoz Bro-C'hall. Yaouank-flamm e oa aet da Vro-Saoz. Gouarnerez-vugale e oa bet e-pad meur a vloaz e manerioù tud pinvidik.

Un endervezh, a gontas din, e-doug ur " garden-party ", he doa klevet ur beleg katolik o komz galleg en he c'hichen, hag e oa aet da lavarout dezhañ " ur ger ". Ar beleg-se a oa bet nevez anvet en ur barrez a Gembre.

« Ret e vo din, » emezañ, « kaout ur garabasenn. Kontant oc'h da zont ganin ? »

« Ya, » emezi.

Ne ouie ket, a lavare, perak he doa respontet " ya ", hep soñjal, krenn-ha-krak. Hogen un nebeut sizhunvezhioù goude, edo an Tad Pochard hag an Dimezell Sergent e Buckley, estrenien an eil d' egile, en ur vro dianav, en un ti dianav.

Kalet e oa bet ar vuhez da gentañ. Paour-razh e oant. Ur mintin, emezi, ne chome en ti nag ur gweneg nag ur greunenn vara.

« Petra ober ? » a c'houlennas ouzh an Tad.

« Pediñ, » emezañ.

En ur labourat, e pedas a-hed an devezh.

En abardaez e teuas un itron eus ar vourc'h, na anavezent ket, n' o doa morse gwelet, da zegas dezho frouezh ha legumaj eus he liorz, hag ur bastellad kig. Hag antronoz e voe kavet pezhioù moneiz e kef ar chapel.

A-nebeudoù ez eas o bed war wellaat. Pañsionidi a gemerjont, paotred yaouank c'hoant dezho deskiñ saozneg. E-pad ar brezel avat ne oa bet hini, aes kompren.

Ret e vije bet mont pell da gavout ur vaouez ken oberiant.

Piv a zistlabenze an ti, a yae d ar marc'had, a rae ar gegin, a drese an daol, a skaote, a dorche, a bure, a frote ? - An Dimezell Blanche.

341

Piv a rae ar c'houez, a fere, a zalc'he kempenn an dilhad ? - An Dimezell Blanche.

Piv a labore al liorz, a droe an douar, a hade, a ziskoultre, a c'hwenne ? - An Dimezell Blanche.

Piv a skube, a ziboultrenne ar chapel, a goare hag a lufre an harmoniom hag ar bankoù, a lakae touzieroù fresk ha bleunioù war an aoter ? - An Dimezell Blanche.

Gwir eo e veze sikouret un tammig bihan gant ar bañsionidi. Hogen eus ar mintin betek an noz, ne ehane ket.

Ha gant an dra-se, dalc'hmat ur mousc'hoarzh laouen war he dremm, ur ger hegarat en he genou. Ur gristenez vat hag ur vaouez a galon.

*

Div pe deir gwech ar sizhun e teue tud da gemer an te, pe ni a veze pedet da vont en un ti. Protestanted e oant, bourc'hizien, implijidi pe varc'hadourien. Goude ar pred e chomed pell da gaozeal pe da ganañ, unan o c'hoari ar piano. D' ar mare-se ne oa na skingomz na skinwel.

Tud eeun, diardoù, nebeut prederiet gant ar bed en tu-hont d' o bourc'h. Ar Brezel Bras a oa aet e-biou hep strafuilhañ kalz ar vuhez er c'hornad-se.

E Buckley ne veze diduamant ebet nemet ar fiñvskeudennoù. Ur sinema a oa er ru vras. Bep Gwener hep mank ez aemp, an Tad, an Dimezell Blanche, Emile ha me, da welout an abadenn. E Breizh-Veur ne veze ket berzet ouzh ar veleien mont d' ar c'hoariva na d' ar fiñvskeudenndi.

Seblantout a ra din gwelout ar sal-se, noazh ha diginkl, evel diabarzh ur c'hrañj. En tu kleiz e oa un doare logell, hag e veze miret evidomp, daoust na baeemp ket keroc'h eget ar re all. Dirak ar skramm e oa ur savenn, warni ur piano. Un den a skoe warnañ hep astal, rak ar filmoù a oa mut. Filmoù berr a dremene da gentañ, Charlie Chaplin ha traoù ar seurt. Neuze e teue ar film hir, hir e gwirionez, rak bep tro ne ziskouezed nemet ul lodenn eus un danevell a bade dek sizhun pe vuioc'h a-raok echuiñ, skrijus peurliesañ : " The Hooded Terror ", " Perils of Pauline ". Pa weled ar muntrer kougoulek, skoachet a-dreñv un nor, ur goustilh en e zorn, prest da dagañ, pe c'hoazh Pauline liammet ha kordennet, ledet a-dreuz div roudenn hent-houarn, hag un tren o tont a-herr d' he flastrañ, e youc'he ar merc'hed gant ar spont, hag ar baotred o doa plijadur e-leizh.

342

Ne oa ket boued speredel eus ar c'hentañ. Gwelloc'h atav eget al loustonioù a vez er sinema hiziv an deiz.

*

Tamm-ha-tamm e teuis da anavezout an trowardroioù.

Emañ Buckley war un uhelenn. Diouzh tu ar c'huzh-heol, un hent bras a ziskenn etrezek kêrig Yr Wyddgrug, Mold e saozneg, un anv romanek kentoc'h, peogwir, hervez tud 'zo, n' eo nemet un distresadenn eus " Mont-Hault ". Roet e voe an anv-se moarvat gant an Normaned. Kaer a-walc'h eo, souchet ouzh troad torgennoù.

Eno e rankis mont en archerdi da lakaat va anv ha da gaout al " levr-personelezh " a veze roet d' an estrenien. Ouzhpenn ur wech, ha me o vale gant Emile war ar maezioù, e teuas un archer da c'houlenn digantañ e levr. Diganin ne voe morse goulennet va hini. Me a yae, sonn va fenn, hep fiñval kalz va divrec'h, evel ur Breizhveuriad. Emile a jestraoue, a blege e gorf en ur gerzhout, hag e veze merzet diouzh tu ne oa ket unan eus ar vro.

Diouzh tu ar sav-heol ez eus ur gompezenn. Un dudi e oa mont da Hawarden, ur gêriadenn kalz koantoc'h eget Buckley, an tiez damguzhet a-dreñv liorzhoù leun a vodoù-roz. Un itron gozh, ur gatoligez, a loje eno en ur maner e doare an dudjentil eus amzer Victoria, gant e-leizh a servijerien d'ober war he zro. Hawarden, gant ar c'hastell ma vevas ha ma varvas ennañ ar pennvinistr Gladstone, hag ur mirdi dediet dezhañ, a hañvale din bezañ un aspadenn eus an naontekvet kantved.

Un endervezh ez is gant Emile betek Chester, e Bro-Saoz. Ur c'harr-boutin a oa, anvet " char-à-banc ". Hogen Emile a felle dezhañ mont war droad. Hir oa an hent, war-dro pemzek kilometr, ha, tomm an heol. Oc'h erruout e oan skuizh-bras, nemet va skuizhder a yeas diouzhin o welout kêr, un aspadenn ivez, n' eo ket eus an naontekvet kantved, hogen eus ar Grennamzer, gant an iliz-veur c'hotek, ar murioù-tro hag an tiez, an treustoù livet e du pe e ruz war o zalbennoù kognek. Kalz eus an tiez-se, a ouzon, a zo nevez, adsavet diouzh patrom tiez kozh diskaret. Ne vern. Brav int. Un dra heverk a zo : e kreiz-kêr emañ ar stalioù er c'hentañ solieradur, gant pontoù a-dreuz ar ruioù, hag e c'haller bale hep riskl da vezañ friket gant ar c'hirri a dremen dindan.

343

Distreiñ a rejomp d' ar presbital goude serr-noz. Skandalet e voe Emile gant e eontr.

Da Holywell, - Treffynnon e kembraeg, - er gwalarn, ez ejomp ivez un deiz, en dro-mañ gant an tren. Ul lec'h pirc'hirinerezh eo. Ne ouien ket e oa seurt lec'hioù e Kembre. Eno, er seizhvet kantved, hervez ar vojenn, e voe dibennet santez Wenfrewi gant ar priñs Caradoc. He fenn a yeas da ruilhal war an douar, hag eno e tarzhas ur feunteun. Dre chañs, he eontr sant Beuno a erruas, a adpegas ar penn troc'het war he c'horf, hag ar plac'h, aet da leanez, a varvas abadez ur gouent. N' emañ ket anv Gwenfrewi, am eus aon, war roll ar sent enoret gant Iliz Rom. Ha koulskoude klañvourien a zeu da Dreffynnon da glask ar pare, en o zouez jipsianed ha protestanted, a lavaras din an Tad. Ur chapel c'hotek, kaer a-walc'h, a zo bet savet a-zioc'h ar feunteun, ha daou bardon a vez graet bep bloaz.

Ur wech ar miz, an Tad Pochard, Emile ha me a yae da Liverpool evit ober kefridioù, hag ivez, tra fentus, evit lakaat troc'hañ hor blev. Boutikloù ar berukerien e Buckley a gavemp re ziskempenn ! Pa spurmanten eus a-bell an tiez uhel renket a-hed ar c'hae war ribl hanternoz ar Mersey, e tride va c'halon gant al levenez, rak me a zo paotr ar c'hêrioù. Boubouadeg an engroez, talabao ar c'hirri a zo bet atav diouzh va grad. En un ti-debriñ e verennemp, ha neuze ez ae pep hini, e-unan-penn, e-lec'h ma kare. Eurvezhioù a dremenel el levrdioù o follennata levrioù kalz re ger evit va yalc'h.

*

An dud e Buckley a gomz saozneg, evel am eus lavaret, ar re zesket saozneg lennek, ar re zizesk ur saozneg dezho o-unan. Gouezet em eus abaoe e oa Buckleyiz diskennidi mengleuzerien eus kontelezh York, deuet eno en triwec'hvet kantved. O lavar a zo ur meskach eus rannyezh ar gontelezh-se ha rannyezh kornog Bro-Saoz.

Eus kement-se ne raen forzh. Ur vezh e oa, a soñjen, bezañ e Kembre hep deskiñ kembraeg.

Kembraegerien, he doa lavaret din an Dimezell Blanche, a loje en unan eus straedoù paourañ Buckley. Meur a wech e oan tremenet er straed-se, oc'h astenn va skouarn da glevout ur bommig kembraeg, hogen en aner. Merzet em boa ivez er er vourc'h enskrivadurioù kembraek dirak dor ar chapelioù, ha skritelloù ha panelloù-arouez divyezhek e oa er gar ha war ar maezioù e-kichen tremenvoeoù a-live al linennoù hent-houarn.

344

Meneget em eus an div iliz anglikan. Perak div iliz ? Unan e oa stag ouzh an Iliz Uhel, tost he c'hredennoù hag he lidoù da re an Iliz Katolik, hag eben stag ouzh an Iliz Izel, tostoc'h d' an digevrederien brotestant. Pastor an Iliz Izel a oa kembraeger. An Tad Pochard a reas din ober anaoudegezh gantañ. Mont a ris d' e di, hag e welis e levrioù kembraek. Gwelloc'h a reas : prestañ din ur yezhadur, " A Grammar of the Welsh Language ", gant Rowland, brudet gwechall, hogen diamzeret dija d' ar mare-se.

Ne zesker ket ur yezh gant ur yezhadur.

Un deiz ez is va-unan-penn d' ober un dro e Wrexham. Eviti da vezañ brasañ kêr ar c'hornad, n' eo ket gwall vras, na gwall vrav. Hogen eno e oa ti " Hughes a'i Fab ", unan eus pouezusañ kreizennoù embannerezh levrioù kembraek. Ar stal-werzh a oa bihan ha teñval, karget a levrioù kozh ha nevez mesk-ha-mesk. Daou levrig da zeskiñ ar yezh a brenis, moulet-mat, gant goloioù ruz. Pep kentel a oa enni ur roll-gerioù, ha frazennoù saoznek da dreiñ e kembraeg. O studiañ a ris a-zevri e-pad meur a sizhun.

Ur wech hepken e klevis tud o komz kembraeg etrezo, e-doug ur valeadenn, ma ne fazian ket, er menezioù en tu-hont da gêrig Yr Wyddgrug.

*

E miz Eost e teuas va moereb ha va c'hoar henañ da'm gwelout. Graet hor boa hor menoz mont betek Caergybi, - e saozneg Holyhead, - en Enez Vôn, ha tremen an noz eno.

« Ret e vo deoc'h, » eme an Tad Pochard, « ober un diskleriadur d' an archerien. Abalamour d' an trubuilhoù en Iwerzhon e vez taolet evezh pizh ouzh an estrenien. »

En archerdi Yr Wyddgrug e rejomp hon diskleriadur eta. Ha ni en hent. Dibabet-fall hor boa pal hor beaj. Caergybi a zo ur porzhig-mor divalav. Ne oa ket brav an amzer, hag a-vec'h ma c'helljomp spurmantañ menezioù meurdezus hanternoz Kembre, damguzhet ma oant gant al later. An ostaleri vras a oa leun, hag an ostalerioù all, ar re a weljomp da vihanañ, a oa lous. Divizout a rejomp distreiñ raktal da Vuckley.

345

Antronoz, setu daou archer o tont d' ar presbital. Hon anvioù a oa bet kaset gant archerien Yr Wyddgrug da archerien Caergybi, ha ne oant bet kavet gant ar re-mañ war levr-marilh ostaleri ebet eno. Ret e voe deomp en em ziskouez hon-tri dirak an daou baotr, ha goulennataet e voemp rust a-walc'h gant an hini koshañ anezho, a dlee bezañ serjant, rak kebrennoù a oa gwriet war e vañch.

II. - LEEDS

Forzh pegen plijus e oa bevañ e Buckley, e oan deuet da gompren e ranken daremprediñ ur skol-veur, ober studioù n'hallen ket ober eno, evit bezañ gouest da dremen arnodennoù diwezhatoc'h.

Se a lavarais da'm moereb ha da'm c'hoar, a voe ali ganin.

Un dimezell gozh, an Dimezell Gansin, a oa bet va mestrez-skol gentañ, o kejañ un deiz e Brest gant va mamm, a c'houlennas eus va c'heloù. Va mamm a lavarais dezhi em boa c'hoant mont d' ur skol-veur.

« An Dimezell Caldwell, » a respontas, « a c'hallo sur e harpañ. »

An dimezell-se, bet gwechall e Brest, a oa neuze kelenneres war an alamaneg e skol-veur Leeds, en hanternoz Bro-Saoz. Va harpañ a reas e gwirionez. Enskrivet e vijen hep poan er skol-veur, a skrivas din, peogwir em boa tremenet va bachelouriezh. Evit al lojeiz, netra aesoc'h : bez' e oa ostalerioù a-ratozh evit ar studieren.

E miz Here e kimiadis gant keuz bras diouzh an Tad Pochard hag an Dimezell Blanche, - ne dleen o adwelout nemet ur wech, - hag e kemeris an tren evit mont da'm chomlec'h nevez.

*

Hir e kavis ar veaj eus Buckley da Leeds, dreist-holl goude Manchester.

Menezioù hanternoz Bro-Saoz en em astenne, teñval ha gouez, en daou du d' al linenn hent-houarn, en un aridennad hep fin.

Edo an Dimezell Caldwell e gar Leeds ouzh va gortoz. Raktal em c'hasas d' an ostaleri he doa kavet evidon, ur " Y.M.C.A. Hostel ", e Lytton Terrace, en ur c'harter eus an hanternoz, tre e-kichen ar skol-veur.

346

Un ti bras e oa, pe gentoc'h ur rezad tiez bras stag-ouzh-stag, savet, e gredan, e-kreiz an naontekvet kantved, gant salioù ledek hag uhel en traoñ, ha kambrou niverus a-us. An darn vuiañ eus al lojerien a oa degouezhet un nebeut devezhioù diagent, hogozik holl studierien, paotred un tammig koshoc'h egedon, a oa bet soudarded e-pad ar brezel, hag a ranke adkregiñ gant o studioù.

Renet e oa an " hostel " gant ur " matron ", ur vaouezig blev gwenn hegarat, hag a ouie bezañ strizh diouzh ret, « un dorn dir en ur vaneg voulouz », evel ma lavarar.

An holl lojerien a oa Saozon pe Skosiz. Me hepken a oa estren. Ar " matron " am ambrougas d' ar sal-debriñ, rak deuet oa an abardaez hag edod o kemer " an te ". Ur brezegennig a reas da gemenn e oan " a French gentleman ", hag e oa un enor hag ur blijadur kaout ac'hanon en ti.

Plas a voe graet din etre daou baotr, a reas o gwellañ da'm servijañ. Goude ar pred, er sal-emvod, e teuas ur bern paotred da stardañ va dorn, pep unan o lavarout din e anv. Ha neuze, feiz, e kavas dezho o doa graet a-walc'h. Bez' e oan unan anezho, ha lezet e voen d' ober ar pezh a garen.

Daou pe dri faotr a oa e pep kambr. Em c'hambr-me e e oamp tri. Renkañ a ris va zraoù en un armelig e-tal va gwele, ha mont da gousket.

*

Reoliet e oa ar vuhez evel en ur skol, da vihanañ e-keñver ar predoù, a ranked kemer d' an eur rik, pa zassone ar gong dre an ti. Diouzh ar pardaez e ranked bezañ distro abred, da zek eur, a gredan. E pep giz all e oa frankiz.

Iskis e oa din, goude bevañ en ur presbital, en em gavout e-touez protestanted, rak protestanted e oant holl. Ur beleg katolik, a oa bet roet din e chomlec'h, pa 'z is d' e welout un nebeut deizioù diwezhatoc'h, a gavas eston e vijen bet lezet da vont en ostaleri-se hep eneberezh a-berzh an Tad Pochard.

« Diwallit, » emezañ, « na vefe klasket ho tistreiñ diwar ar wir Feiz. »

A dra sur, ne voe ket. E-pad tost dek miz a dremenis er " Y.M.C.A. Hostel ", a-boan ma voe graet meneg a relijion gant nikun dirazon.

347

Naet e oa an ti ha dalc'het-mat, ar boued yac'h ha fonnus. Ar c'hiz eo lavarout droug eus ar c'heginerezh saoz. Me n' en kavan ket ken fall-se. D'an dijuniñ e oa kig-moc'h fritet, pe silzig pe besked, - harinked alies, - gant vioù, yod-kerc'h gant laezh pe driakl, bara-ha-margarin gant kaotigell-orañjez. Da verenn e oa kig ha legumaj, - kaol, piz ha patatez, - hag ur meuz sukret bennak. Da goan, - anvet " te ", - e oa kig yen, bara-ha-margarin, koñfitur ha kouignoù. Da zek eur noz e servijed gwispid sall gant formaj. Da evañ ne oa nemet te pe laezh.

Bez' e oa ur sal-emvod ha salioù-studi. Ar re-mañ en abardaez a veze atav leun, rak evel am eus lavaret, e oamp studierien, an darn vuiañ ac'hanomp. Skol-veur Leeds, nevez a-walc'h, rak ne voe krouet da vat nemet e 1904, a oa brudet dreist-holl evit kelennerezh ar Skiantoù, Skiantoù pleustrek peurgetket, ar wiadennouriezh da gentañ penn. N' em boa ket ankounac'haet c'hoazh ar pezh am boa desket el lise Sant-Loeiz, hag harp a roen a-wechoù da 'm c'hamaladed. Diskoulmañ o c'hudennoù jedoniezh a oa din, - peurliesañ, - ur c'hoari bugel,

hag e kavent an dra-se souezhus.

D' ar Sadorn d' abardaez evelato e veze dilezet ar salioù-studi. Er sal-emvod, en-dro d' ar piano, e kanemp a-gevret kanaouennoù anavezet gant an holl en amzer-se, a selaouan bremañ gant hiraezh pa vezont skignet war wagennoù ar radio saoz er programmoù " sonerezh a werso ". Atav kanaouennoù dereat, hep an disterañ tamm gadaliez. Ar " matron ", azezet en ur c'horn oc'h ober stamm, n' he dije ket roet aotre.

Enoeüs e kaven ar sulveziou, an ti evel marv, kalz eus al lojerien aet da dremen an devezh gant kerent pe vignoned. Alies e chomen en ur sal-studi va-unan o lenn.

*

Ar skol-veur ne oa ket bras-bras, ur strollad savadurioù izel : al lenndi, ar salioù-kelenn, hag al labouradegoù fizik, kimiezh, hag all. Pep studier a zibabe un nebeut danveziou-studi hervez e c'hoant, nemet traoù 'zo, evel ar saozneg, ar jedoniezh, a oa ret d' ar re a venne tremen arnodennoù 'zo.

Me a zibabas tri danvez hepken : Lennegezh saoznek, Yezhoniezh saoznek, hag Istor.

348

Gant kelenner al Lennegezh saoznek n' em boe ket nemeur a zarempred. Ken stank e oa e ziskibien, n' halle ket kavout amzer da blediñ gant an holl. Koulskoude, e gentelioù a zigoras va spered war ur bed dianav din. Dizoleiñ a ris ne oa ket al lennegezh c'hallek kreizenn ar Sevenadur, evel ma oa bet roet din da intent er skolioù gall. Anaoudegezh a ris gant skrivagnerien n' em boa ket klevet zoken o anvioù diagent. Dedennet e oan dreist-holl gant ar varzhed, adalek Chaucer betek re hor c'hantved, sebezet hag estlammet gant kened o oberoù.

Kelenner ar Yezhoniezh saoznek a oa ur Skosad yaouank. Ne oamp nemet un hanter dousenn a studierien er sal vihan ma kelenne enni. Hensaozneg a zesken, en daou levr brudet, " Anglo-Saxon Primer " hag " Anglo-Saxon Reader " Henry Sweet. Hogen hor c'helenner a yae kalz pelloc'h : displegañ penndiazez hag hentennoù ar yezhoniezh, emdroadur ar soniadoù, ar gerioù, ar furmoù yezhadurel. Muioc'h a frouezh a dennis diouzh e gentelioù eget na ris diwezhatoc'h diouzh re gelennerien anvek ar Sorbonne.

Un den war an oad, Grant e anv, a oa karget eus an Istor. Plijout a rae dezhañ kaozeal ganin. C'hoant bras en doa, soñj am eus, da c'houzout penaos e veze kelennet an Istor e Bro-C'hall.

*

Leeds a zo ur gêr ijinerezhel vras gant fabourzioù ec'hon a bep tu. Ne oa ket deuet ar c'hiz ober ar savadurioù ramzel heñvel ouzh boestoù-alumetez a weler dre-holl hiziv, hag an darn vuiañ eus an dud a loje e tiez bihan.

Kalet eo ar goañv en hanternoz Bro-Saoz. Erc'h a rae alies, hag ar moustraj kasaus-se, melen-rous, mesket gant moged mil ha mil siminal, a hillig ar fri hag a dag ar gorzailhenn. Gant glaou-douar e veze tommet an ha diez. E salioù an traoñ en hon ostaleri e veze graet taniou ifern en oaledoù. Ar c'hambroù avat a oa yen-skilas pa 'z aed da gousket. Ne oa ket nemeur anavezet c'hoazh an tommerezh-kreiz e Breizh-Veur.

*

Eurvezhioù a dremenet e lenndi ar skol-veur. Kavout a ris un dastumad klok eus ar " Revue Celtique ". Ne oa ket troc'het zoken ar follennoù. Pa grogis d' o zroc'hañ, e teuas raktal an evezhier da 'm c'haout :

« Me a droc'ho, » emezañ.

349

Aon en doa sur-mat na vije diskolpet ar c'helc'hgelaouennoù prizius gant va c'hontell-c'hodell. Antronoz e kavis an holl rummad troc'het-brav. Ar paotr en doa sur labouret-start !

D' al lenndi-boutin e kreiz-kêr ez aen ivez. Hag eno e ris un dizoloadenn fromus : " Handbook of the Cornish Language ", gant Henry Jenner, al levr n' oa nemetañ neuze da zeskiñ kerneveg.

Ha me prenañ ur c'haier, hag eilskrivañ warnañ al levr penn-da-benn. Pezh a dennas ivez evezh an evezhier.

« Aotrou, » emezañ din, « ar wech kentañ eo, a gredan, ma welan al levr-mañ digoret war un daol. Kernevveuriad oc'h ? »

« Nann. Me zo Breizhad. »

Un tamm kaozeadenn a rejomp a-zivout ar yezhoù keltiek.

N' em boa ket dilezet studi ar c'hembraeg. En ul levr di e prenis " An Introduction to Early Welsh ", gant John Strachan. Al levr-se, saveteet dre vurzhdud pa voe distrujet va zi e Brest e 1941, a zo c'hoazh ganin. Ha me o skrivañ al linennoù-mañ, emañ dirak va daoulagad, e c'holo ruz louzet ha moustret, evel ma voe kavet e-mesk an atredoù.

Hag ar brezhoneg ?

Koumanantet e oan da gazetenn Frañsez Vallee, " Kroaz ar Vretoned ". Dre ar post e teue bep sizhun. Bihan ha dister evel ma oant, moulet war baper fall, e viren an niverennoù gant aked. Va brasañ teñzor e oant.

Ne gredan ket em eus skrivet netra e brezhoneg d' ar mare-se.

*

E Leeds e oa ur Gevredigezh pe ur C'helc'h evit deskiñ yezhoù : galleg, spagnoleg, alamaneg, hag all.

Ur studierez a c'houlennas diganin ober ur brezegenn c'hallek dirak izili ar C'helc'h-se. Nac'h a ris da gentañ. Ar plac'h avat a oa aheurtet. Terriñ va fenn a reas kement ma 'z asantis en diwez.

Diwar-benn Istor Breizh e komzis, o tiskouez penaos e oa ar Vrezhoned e-keñver ar C'hallaoued evel ar Gembreiz e-keñver ar Saozon. Da echuiñ e lennis gwerzennoù gant Brizeug.

Va frezegenn na reas ket kalz a verzh. Tud hanternoz Bro-Saoz ne seblantent ket gwall chalet na gant Breizh na gant Kembre.

350

En nevez-amzer ez is da dremen un devezh e York, a zo nepell diouzh Leeds. Bamet e voen gant ar gêr gozh, kaeroc'h c'hoazh, a gavis, eget Chester : ar murioù-tro, an dorjoù bras enno, ar straedoù chomet tost da vat evel er Grenn-amzer, dismantrou abati Santez-Vari, ha dreist-holl an iliz-veur. An heol a lintre brav, ha bleunioù, foeon dreist-holl, a zigore el liorzhoù. Ul levr-heñchañ am boa prenet, hag e felle din sellout ouzh pep tra dre ar munud. Bez' e voe unan eus eürusañ devezhioù va buhez.

Eürus, e gwirionez, e voe va buhez e Leeds. N' en em santen ket evelato ken tost d' ar bobl hag e Buckley, ma oan anavezet gant an holl. E ti an Tad Pochard hag an Dimezell Blanche e oan un tammig evel er gêr. An ostaleri, daoust

da hegarated ar " matron " ha va c'henlojerien, a vane un ti estren evidon.

E miz Mezheven, pe e miz Gouere, - ne ouzon mui, - e kuitais Leeds. Ne chomis nemet un nozvezh e Londrez. C'hoant a-walc'h am boa da weleadenniñ ar gêr veur, nemet tost goull e oa va yalc'h. Dre Folkestone ha Boulogne e tistrois. E miz Here e tleen mont da Wened evit ober va servij-soudard.

Un den a urzh vat

Yann Gabalan a oa bet atav un den a urzh vat.

An ti en doa kemeret er vourc'h a oa bet renket mat gantañ da viken en deiz kentañ. Abaoe an triwec'h vloaz m' edo o chom ennañ n' en doa bet ezhomm nemet da gemmañ plas al levrioù en e levraoueg, hervez lizherenoù an titloù nevez a brene.

Sekretour e oa en ti-kêr, karget da lakaat urzh a-raok ha war-lerc'h ar re all. Ur bennozh oa kaout un den eveltañ, onest ha sioul, da zalc'her an traoù hag an dud en o flas.

Ne leze trivliad ebet, na c'hoant, na kerse, da ruflañ lenn seder e ene. Buhez Yann a dremene ingal, a vloaz da vloaz, en ur beurbadelezh difiñv. Pe dost.

*

En e yaouankiz en doa bet c'hoant mont da veleg. Pe roet oa bet c'hoant dezhañ ? - Evel ma oa ur paotr fur ha mat da zeskiñ, e Skol Gristen Sant-Jozef, ar vistri beleien, eus un eil klas d' egile, o doa meulet dirazañ kaerder ur vuhez kinniget da servij Doue hag an Iliz. Setu m' en doa Yann dilezet erv e dad kouer evit heuliañ an hini merket dezhañ. Lorc'h e oa bet en e dud o welet dibab o mab ; person ar barrez en doa desket dezhañ ar c'hentelioù latin kentañ, ha lakaet anezhañ er c'heur, gant ar gurusted. Pa zistroe eus ar c'hloerdi bras, evit ar gouelioù, e sante eneoù an dud o stouiñ dirak e soutanenn, evel herdin ed dirak hini Jozef, er Skritur Sakr.

Mes Yann a oa un den lent, n' en doa c'hoant ebet da vevañ a-wel d' an holl, disparti diouzh ar werin. Ar pezh en defe plijet dezhañ a vefe bet sevel a-douez an dud, ober ur brezegenn ha distreiñ en o zouez, dianav. Setu ma tiskrogas diouzh e hent a-benn daou vloavezh kloerdi. Adkemeret a reas e blas en iliz, etre ar muzik hag ar peul kentañ.

352

E gerent o doa paeet evitañ da vezañ beleg ; ne soñjas ket goulenn diganto sikour da gendalc'her gant e studi. Deskadurezh a-walc'h en doa evit kaout ur plas mat e kêr, peogwir ne oa ket a labour evitañ er feurm. Mes d'an ampoent dres e roas sekretour an ti-kêr e zilez ha Yann a oa kontant da gemeret al labour-se.

Dizimez e oa chomet. Dalc'het m' edo bet er gêr pe er presbital d' ar sulioù hañv, e-pad e amzer skolaj, n' en doa ket bet tro da ober darempred gant plac'hed yaouank, er pardonioù, ha ne anaveze ket anezho mat. En e spered e kouezhent e daou rumm, pe gwerc'hezded glan ha santel, evel Santez Tereza ar Mabig Jezuz, pe merc'hed skañv, pennoù avel. Ouzh ar re gantañ en doa re a zoujañs evit tostaat outo, diouzh ar re all e pellae pa dostaent.

Ur wech hepken e oa bet war-nes karout ur plac'h yaouank. Pedet e oant bet o-daou d' un eured, ha lakaet asambles diouzh ar mintin. Merc'h ar miliner e oa, tud a renk uhel er barrez. Monig Trañvouez. Monig a oa bet laouen outañ, desket he doa dezhañ koroll gant ar yaouankizoù all, kanet o doa sonioù desket er skoloù hag, e-pad ar bal-noz, e oant aet o-daou kazel ouzh kazel dre ar straed, o vourkanañ hag o tivizout diwar o fenn o-unan. Dous en doa kavet kaout ur plac'h kloz ouzh e gostez, he fenn a-vec'h o flourañ e skoaz. Hogen en arvar e oa chomet ; ouzh he c'huitaat en doa soñjet e welje anezhi diwezhatoc'h ha

neuze, marteze... Hag hi kennebeut n' he doa ket komzet diwar-benn en em adwelet. Setu m' edo chomet an traoù a-sav. Monig a oa manet ur pennad mat er gêr, dizimez. Ar barrez a rae kaoz eus an dud a zeue da c'houlenn anezhi, tud pinvidik hag uhel, ur c'horonal zoken. Goude bloavezhioù, Yann a glevas e oa aet gant mab ur miliner. Kerse en doa bet o soñjal he doa en em roet ur plac'h yaouank ken tener d' ur penn ruz a anaveze evit bezañ un tamm ever gwin war ar marc'had. Setu ma chomas e-unan, disparti diouzh ar re all er memes tra, hep gwreg na bugale.

Ne rae ket kalz a zarempred na gant e familh na gant ar barrezioniz. Daoust ma anaveze mat buhez ar maezioù, n'oa ket staget e spered ken ouzh al labour-douar ha ne c'halle ket e gwirionez kemeret perzh e divizoù ar goueriaded all. Ha n' oa ket teodet mat a-walc'h, birvidik a-walc'h evit ober berzh en ostalerioù goude an oferenn, gant an deskadurezh en doa berniet a-hed an amzer.

353

Ar youl-se a oa padet ennañ betek e eizh vloaz ha tregont, youl an deskadurezh. An arc'hant a c'helle espern diwar e bae vihan a yae da breñañ levrioù. Diampart e oa bet, er mizioù kentañ, da zibab ar pezh a oa ret gouzout ; mes buan e teuas da welet e rankfe lezel danvezioù a zo a-gostez, pe neuze klask kaout deskamant war bep tra dre vras. Prenañ a reas evit se levrioù a gelc'houiziegezh hag evel-se, eus ul lizherenn d' eben, e peure park bras ar skiant, gant ur blijadur sioul. Soñjal a rae e teufe, un devezh bennak, da vezañ anavezet e-touez an dud desket, e kavfe neuze tud a c'hallfe meskañ ganto hep lorc'h na lentedigezh. E vuhez a gerzhe etrezek ar pal-se damwelet, ha ne zeue netra da derriñ he steuenn nemet prenadenn ul levr nevez.

Hogen, d' e eizhvet bloaz ha tregont e oa deuet ar steuenn da laoskaat. Perak ? Blaz an aner a gave gant e lennadurioù. Fallaet e eñvor ? - Dre ma teske ec'h ankounac'hae... Ha talvoudegezh e vuhez : muzulet gant lizherennoù kelc'houiziegezh, kraouiet en e di bihan, pa oa ar bed o c'henel, o karout, o c'hoarzhin, o ouelañ, o vevañ en-dro dezhañ...

Un abardaez a viz Mae, goude ar pred a gemere abred en ostaleri, e-lec'h mont war-eeun d' e di, ez oa aet da ober un droiad war ar maezioù. « Vad a ray din, » a soñje, « pellaat un tammig eus an testennoù a studian, evit gouzout gwelloc'h war be du treiñ. » En un doare nevez e sellas ouzh an douaroù en-dro dezhañ. Mab kouer ma oa, betek-hen n' o doa tennet o zalvoudegezh nemet diwar talvoudegezh ar frouezh a roent. Dre ma kerzhe dre an hentoù e plije dezhañ atav prizañ an danvez a ziwane er parkeier. Mes plijadur a save ennañ ivez bremañ o sellet, o selaou, o c'hwesa pinvidigezhioù an natur dre ma 'z ae.

Da gentañ e soñjas reneveziñ e anaoudegezh eus hentoù ar barrez, ar re m' en doa kerzhet dreizo p' edo kurust oc'h ober ar gest, pe kloareg pedet da gafea en ti-mañ 'n ti. Mes d' an eur ma c'halle-eñ mont da bourmen e veze an dud o tizreiñ eus o farkeier : n'oa ket diaes ober un hejadenn penn dezho, pe eskemm ur ger pe zaou, mes un tammig mezh en doa oc'h ober e aotrou war maezioù perc'hennet, e gwirionez, gant al labourerien-douar. Setu ma klaskas hentoù treuz ha kuzh, hag en diwezh e teuas unan da blijout dezhañ dreist ar re all. Redek a rae war zibenn-traoñ betek ur stêr, hag eno e kroge ur vanell c'houez a zalc'he a-hed ar stêr, a droe en un hent-karr dilezet a gase d' ur c'hoad. Kouezhañ a rae war ur frankizenn dispak gronnet a wez derv. Ur wenodenn voan a gase pelloc'h betek milin Pont-Here, moarvat, mes Yann a gavas ar frankizenn brav a-walc'h evitañ, hag a chomas enni. Diouzh un tu e oa ur c'hef derv astennet war an douar, ha warnañ e teue da azezañ bep tro ma c'halle. Hag eñ, a oa bet boazet da lammat buan eus al labour d' egile, hep koll amzer, a gemeras plijadur, evel un den kozh, o chom hir amzer da huñvreal e netra, diseblant e evezh ouzh buhez an traoù en-dro dezhañ, mes gant e ene koulskoude aloubet gant o levezon skañv. En e galon e sante un deneridigezh dianav o tiwan, bommoù barzhoniezh a soure en e eñvor, un hiraez da gaout unan all da rannañ gantañ buhez e ene. Ganti ? - Soñjal a reas e Monig Trañvouez, merc'h miliner Pont-Here, an hini a oa bet an dostañ dezhañ. Huñvre.

*

Burzhuoù a en em gav. An huñvre a oa deuet da wir. Un abardaez en doa klevet mouezhioù o tont davetañ eus rañvenn ar vilin, ur vaouez hag ur verc'hig vihan. Savet e oa evit tec'hout pa zifoupas ar verc'h vihan er frankizenn. Un ehan a reas, lentet, ha redek war he c'hiz dre ar vanell. Klevet a reas anezhi o kuzulikat : « Mammig, ur gwaz a zo aze ! » Ar vaouez a oa deuet re dost evit treiñ kein bremañ, bale a reas betek ar frankizenn, ha Yann a anavezaz anezhi diouzhtu : Monig. Hi avat a vanas war evezh, un arouez a nec'h hag a dristidigezh war he dremm. Diroufennañ a reas en ur mousc'hoarzh laouen : « Yann ! Biskoazh ! Abaoe an amzer !... »

Buan ec'h en em gavas en e aez ganti evel en dro ziwezhañ, ken pell a oa, ma oant bet asambles. Azezañ a rejont o-daou war ar wezenn, ar verc'h vihan o c'hoariellat dirazo. Kontañ a reas dezhañ edo-hi deuet da dremen an hañvezh gant he zud er vilin. Ne reas meneg ebet eus he gwaz nag he bugale, nemet a-dreuz, diouzh ret. Yann a roas ivez un diverrañ eus e vuhez. Ar verc'h vihan avat a gollas pasianted hag a c'houlennas mont da welet mamm-gozh. « Poent eo din mont d' ar gêr, » emezañ. « Dont a ran bep an amzer. »

En deiz war-lerc'h edo Yann adarre war hent ar vilin, evel kustum. Youl en doa marteze da welet Monig ? N' oa ket boazet da furchal en e ene.

Hag aze edo-hi, o c'hortoz anezhañ. Ar verc'h vihan n' oa ket deuet. « Enoet e vije bet, » emezi. Pa guitaas anezhi en deiz-se e kinnigas dezhi en em welout en abardaezioù da zont.

Seder ha fur e veze o divizoù. Monig he doa lennet kalz abaoe ma oa bet dimezet, romantoù dreist-holl, hag ivez kazetennoù kristen gwerzhet en iliz, ma kave enno ar c'hudennoù a zedenne lennerien an amzer-vremañ hag ar respontoù kristen a oa da vezañ graet dezho. Yann avat a ledanae leurenn ar gaoz, gant ar pezh en doa-eñ desket hag ar mennozioù en doa kempennet dreizañ e-unan. Hi a rae alies ar goulennoù, hag a selaoue anezhañ, hag eñ a zispake e ene o prezeg dezhi, o rannañ ganti an teñzor a skiantelezh hag a furnezh en doa espernet.

Ur vignoniezh start ha glan a skoulmas etrezo. A draoù uhel hepken e komzent, war o fouez, keñver ha keñver, o tirouestlañ kudenn pe gudenn, o pinvidikaat o anaoudegezh. An hañv a dremene, tomm ha goustad.

Hogen, gant tostaat an diskar-amzer e lavaraz Monig e oa deuet poent dezhi distreiñ d' he c'hêr. Yann a gredas merzout e taskrene he mouezh, mes ne daolas ket kalz a evezh. Hi ne bouezas ket war an amzer da zont, hag e tivizjont evel boaz. Lennet he doa Monig war ur gazetenn ne c'helle ket bezañ mignoniezh padus etre ur gwaz hag ur vaouez. Abred pe ziwezhat e troe da garantez. Ar pezh da ober a oa troc'hañ hep dale, kousto pe gousto. « Alies em eus lennet kemend-all, » eme Yann. « Mes petra reer eus bolontez an dud ? Un den dereat a zo mestr war e spered, war e galon ha war e youl. » - Monig a oa habaskaet... Trefuet oa bet gant ar pennad he doa lennet.

Yann, daoust d' e respont, a oa bet broudet ivez gant ar gudenn. Mes buan e kasas ar soñj kuit. En em blijout a rae gant Monig, mes se ne oa ket karantez. O darempred a blave uheloc'h eget live ar garantez. Dimezet e oa hi, bugale he doa, o c'hejadennoù ne oant nemet ur rann vihan eus he buhez, edo an hañv o klozañ, pep hini a yafe eus e du ; Yann a wele an amzer da zont en un doare didro.

Lavarout a reas se dezhi. - « Gwir eo, » emezi. Koulskoude e chomas difiñv, war ar wezenn, stenn he dremm, stouet he fenn. Ur sioulder nec'het a badas etrezo. - « Petra 'zo ? » eme Yann. Monig a oa war-nes komz, mes ne lavaraz ger ebet. - « Petra 'zo ? » eme Yann adarre, ha meudek e flouras he brec'h.

Neuze e welas Monig o koll he fenn. Kregiñ a reas e dorn Yann, e zougen d' he diweuz, pokat dezhañ start, hep trouz, flourañ anezhañ ouzh he jod. Hag ec'h en em voustras kloz outañ, hag e santas he diweuz gleb o pokat d' e c'houzoug, o ruzañ a-hed a-hed e jod betek e ziweuz dezhañ, hag e tapas e benn etre he daouarn hag e tifronkas : « Yann, Yann, me a gar ac'hanout, me a gar ac'hanout kement ! » - Hag e kouezhas he fenn war e vruched, he divrec'h en-dro dezhañ, en ur huanadiñ : « Va Doue, va Doue, petra 'm eus graet ! »

Yann a oa manet difiñv, abafet. Ur flemm c'hoant a oa tremenet dreizañ, e zivrec'h a oa bet war-nes briata anezhi, mes e volontez a voe trec'h. Heuget e oa gant he serc'h hag he daeloù. Pebezh disouezhenn ! Divalav e kave ar pezh he doa graet, divalav e kave anezhi, saotret e oa kaerder o divizoù seder. Distagañ a reas anezhi dioutañ, rust : « Me 'gave din e oas kreñvoc'h eget se, » emezañ. « N' edon ket o c'hortoz... Gwelloc'h deomp... » - N' oa ket ezhom da vont betek penn e soñj ; Monig a dec'has kuit hep treiñ he fenn.

Yann a zilezas hent milin Pont-Here, hag hentoù all ar barrez. Distreiñ a reas d' e voazioù kent : labour en ti-kêr, predoù en ostaleri, studiañ. Nemet, e-lec'h klask bountañ ar bed a-bezh e-barzh e benn, e soñjas en ur pal efedusoc'h. An Aotrou Person eo a heñchas anezhañ da sevel istor ar barrez. Bez' e oa en ti-kêr, er presbital, en eskopti hag e kêrbenn an departamant, danvez a-walc'h da sevel ul levr fonnus. Evel-se e teuas Yann e darempred gant kalz tud ; an dud war e dro en em lakaas da sikour anezhañ hag e voe degemeret mat er c'helc'hioù uhel. E vuhez a oa leuniet a-walc'h evit ma ne chomfe an hañvezh gant Monig nemet evel un huñvre pell, distag.

*

« Dont a rez ganeomp, Yann ? »

Bodadeg an ti-kêr a oa echu. Ar maer a oa o pediñ Yann da zont da evañ ur banne gant ar guzulierien. An dro gentañ e oa.

Kaoz diwar-benn ar vreutaenn en ti-kêr, diwar-benn al labour-douar. Yann a selaoue hep kemeret kalz a berzh. Evit terriñ ur pennad sioulder e lavaras e amezeg : « Klevet hoc'h eus eo marv Monig Pont-Here ? »

357

Yann ne gomprenas ket diouzhtu. Neuze e santas un taol en e galon : « Monig ? Peur ? Klañv e oa ? »

« Nann ! Kouezhet e lenn ar vilin ha beuzet. Setu ar pezh a lavarar, da vihanañ. Piv 'oar ? Fall e oa aet an traoù ganti er bloavezhioù diwezhañ. Evel m' he defe kollet he fenn. Troet oa da evañ zoken... »

Ar vezh a sourras en ene Yann. Pa soñje e oa bet staget ouzh ur seurt maouez. Spered direizh, kalon dinerzh. Treiñ da evañ ! Chañs en doa bet oc'h en em zizober diouti a-raok ma oa re ziwelzhat. Ma ouezfe an dud... Bremañ e veze pedet gant ar maer.

Goude ar banneoù en doa ezhom da ober un dro da sioulaat e spered. Kredet en doa e oa bet dirouestlet ar gudenn gant he marv, ha setu ma sante bremañ e oa eñ e-unan hualet ganti. E dreid a gasas anezhañ etrezek ar vilin. Dre ma kerzhe e teue e varn galet da laoskaat en he c'heñver. « Paour-kaezh maouez, » a soñjas. Setu ma oa eñ ivez o kerzhout bremañ dinerzh, digenvez. Truez en doa outi, o tougen glac'har he buhez. Ar glac'har a zirolle ennañ bremañ. Mes neuze e oa kreñv ! « Petra 'c'hallen ober ? » - Terriñ krenn, setu ar pezh dereat en doa graet. Hervez al lezenn, hag hervez e c'hoant.

« Abalamour din-me eo marv, » a soñjas. Mezh en doa o verzout ur bistigenn lorc'h velkonius o sevel ennañ.

Kendelc'her d' en em welet, stouiñ d' ur vuhez a guzh, a douell ? N' oa ket un diskoulm. Ne chome gant Monig nemet hent an dic'hoanag. E hent dezhañ,

hent ar furnezh, a oa c'hwerv bremañ, ha brein.

Chom a reas a-sav dirak ar frankizenn. Beuzet e oa e galon gant eñvor an amzer tremenet amañ gant Mona. Te ha me ; douster, leunded, karantez.

Teuziñ a reas ar vorenn diouzh e ene. Un aezhenn yen a skoas e gein. En em welet a reas evel ma oa bet atav, prezeger e galon sec'h, digenvez. « Monig, » emezañ. Galv ur vaouez varv.

Azezañ a reas war ar c'hef derv.

Mentadur ar vuhez

Azezet on a-dreñv div vamm-gozh o prezeg war briz dreist-kred ar silzig. Emaon e karr-boutin Abertawe, niverenn 116 - a-wechoù koulskoude e kemeran an niverenn 17 pe an niverenn 5 - trizek penny, ar priz eo, met petra 'vern ?

« ... dreist-holl e ti Baldwins, St Helen's Road ! Hanter-kant penny al luriad... »

Denez dezhañ e-unan : « Tost pemp beaj... 'blij ket din ar silzig. »

« Kresket spontus eo ar prizioù... »

Hag e kendalc'hont da azenañ gerioù... kig-moc'h... kig-leue... Unan anezho a ziskenn... Minc'hoarzh... C'hoarzh... Hu ! Hu ! Hu !

« Cheers, Hi, hi, hi. »

« See you love, Hu, hu, hu. »

Hag eben, dilezet, a stag da hiboudiñ.

Un toullad kañfarded a dorr sioulder an dud. Goapaat 'reont ur blogorn divarrek da dizhout ar stleug. Gant sikour unan bennak e sav an den betek ar blenier. En em staliañ 'ra war va zu kleiz ; an trepas a zisparti ac'hanomp. Ar vugale, int, a c'hoarzh o welout seurt penn sanket war ur c'horf ken dister. Rollet eo en ur vantell-c'hilav glas-mouk takonet, re hir evitañ, ha war e benn ur gasketenn zu a ziskenn betek e zivskouarn. Pourmen a ra ur sell genaouek a sebez tro-dro dezhañ. Diouzh e zaoulagad alamandez e red, a-hed e chod, un dakenn dour hag a chom da vrafisigellat ouzh e javed a-raok kouezhañ. A-wechoù e pak an dakennig gant e vilgin, hag e c'hoarzh neuze gant ur c'hoarzh marmouz. Ur wenaenn dev a zistumm e dal izel ; pa skrab anezhi gant e ivinoù lemm ez eskell, skañv, tammoùigoù kroc'hen sec'h betek al leur. Karout a ra glebiañ e viz ha dastum un tamm kroc'hen bennak evit e sunañ. A vare da vare e spluj e viz-meud e donder e mell fri limestra ha brondu ; sachañ 'ra un taol trumm, ha diskenn a ra e viz betek e c'henou da dañva ar mic'hi kaledet. Ne ra van ouzh c'hoarzhadennoù ar vugale nag ouzh taolioù-sell an dud doñjeret. Goude ur pennadig e c'hwezh e fri en ur follenn gazetenn kavet gantañ en e c'hodell. Sellout a ra pizh ouzh ar mic'hi o veskañ gant al liv-moulañ. Neuze e tibab un nebeut griñsennoù - da dañva - hag e lak aketus ar baperenn vreset el luduer, dirazañ. Kroaziañ 'ra e zivrec'h, laouen... ne seblant ket bezañ trefuet gant priz ar silzig.

359

* * *

Eil rener va skol a zo laouen gant e vab Robin. Hemañ en deus paouezet butunañ. Studier eo e London ; ur ranndi en deus e karter cheuc'h ar gêrbenn. Studier war ar gwir eo, gantañ en e soñj bezañ kelesker Skol-Veur. E dad koulskoude en doa aliet anezhañ da zibab ur vicher evel alvokad pe abienner. « Kompren a rez, gounit a rafe teir gwech muioc'h a arc'hant. »

Ur gambr en deus e karter cheuc'h London.

* * *

Pa guitais va c'hambr e oa karget an oabl a goumoul lart ha ponner. Delioù gell a eskelle douget gant an avel griz he doa distaget anezho diouzh ar brankoù evit o stlapañ, marv, war an hent eouliet a c'hilav. Didud oa ar straed. Deut oa

an noz abaoe pellik amzer, daoust d' am eurier merkañ c'hwec'h eur. Tremen a ris e-biou iliz katolik va c'harter, sanket e-kreiz ur c'hlazenn dev. Kuzhet eo a-dreñv un derveneg stank ha gwarezet gant ur glouedenn houarn. Ur beurevezh ma c'hortozen ar c'harr boutin evit mont d' ar skol, e welis ur Rolls Royce du ha lufrus o tifourkañ eus bali al liorz. Ur beleg, inkazet en e soutanenn, en doa blodet e feskennoù roz ha tener war an azezenn ouesk a-dreñv ar blenier...

Dirak ar c'hoc'hu, bep sadorn, e vez ur c'hozh den dall harpet ouzh ur peul tredan o seniñ violoñs. Ha teurel a rafec'h ur penny en e voestig houarn skrivet warni " Naon am eus " ? Me n' em eus silet pezh moneiz ebet er faout. E korn ar Bus Station ez eus ur marc'hadour kelaouennoù, enno keleier fresk an abardaez... n' eo ket un den dereat... tufañ 'ra war ar riblenn - alies e vez un dakenn wad en e dufadenn wer ha druz. Er c'hafedioù war ar porzh-mor e weloc'h penaos e sav ar gisti o brozh evit daou lur sterling. Dindan Picton Arcade e veze klaskerien-vara o lakaat o bionennoù da zasseniñ. Met klemmet o deus ar genwerzhourien ha bremañ e c'hell an dud cheuc'h pourmen e Picton Arcade.

360

* * *

En ur pub, un nozvezh, e kejan gant un den kozh gwisket lous, mezh-dall - raktal e tislouk ar banne bier diwezhañ evet gantañ e pep lec'h, war an daol, er gwer all leun pe c'houllo... ur gwir strinkadenn stronk... ha da heul ar bier, ur meskaj boued moc'h chaoket mat. Kouezhañ 'ra war e reor e korn ar sal... stouiñ 'ra e benn... orbid distumm... breugeud heson... ar strinkadenn diwezhañ, war e zilhad. Dibuk eo an dud. Patouilhañ 'ra en e loustoni. Sec'hiñ a ra e zaouarn war e chupenn... Skuilhañ 'ra pep tra. Glaourenniñ a ra. Ar barman, difrom, a stlej anezhañ war ar riblenn. Dibuk e chom an dud. Gouezet em eus goude e oa un Iwerzhonad o labourat abaoe tri bloaz ha daou-ugent er porzh-mor. Kargañ ha diskargañ 'ra ar bagoù glaou. Hervez an dud, a-raok semplañ gant e gofad, e kont e vuhez. Marv oa e vamm e 1921. Chomet oa eñ da stranañ en Iwerzhon - kavout a rae labourioù bihan - pemp bloavezh bennak a-raok dilestrañ en Abertawe... An dud n' o doa dalc'het soñj a netra all.

George B. a zo bet kanolier war ur vag e-pad an eil brezel bed. Dreist-plijet oa pa veze taolet an eor - evel-se eo en deus anavezet Marsilha. « Tud zo a vez gant evurus, » a lavaras din un deiz. « Un dra sur eo. Va mamm-gaer din a veze servijet dezhi merenn en he gwele, ha pa save e derou an endervezh, e c'hoarie bridge gant he mignoned. »

George B. a zo ezel eus ar Strollad Mirour.

* * *

361

Diskennet on betek kêr dec'h da brenañ ur glogorenn. Ugent timbr gwer am eus bet er gourvarc'had. Peget e vezont war ul levrig ha pa vez klok al levrig e c'hounezer prizioù. N' eo ket en holl stalioù koulskoude ; ret eo anavezout. Skrivet eo war an talbenn : « Reiñ a reomp timbroù gwer ». Ha d' ar yaou e vez div wech muioc'h a dimbroù. Un doare eo evit trugarekaat an dud - an doare-se a blij dezho. Neuze, setu. Kuitaat a rit abred ho ti, rak gout ouzoc'h e vezo kalz tud er stal. Ar yaou eo. Kemer a rit ur garrigell evit he c'hargañ, ha mont a rit el lostad, sioul. Gopret eo ar gortoz. Un dibab zo ivez etre dek timbr gwer bihan hag unan bras, o talvezout kement. Diskennet on dec'h e kêr da brenañ ur glogorenn. War ar riblenn dirak ar stal oa un den du o youc'hal : « Kaoc'h d' an Amerikaned ». Ur poliser e-kichen a lakae telloù-kastiz war girri harpet-fall. E-barzh, ar plac'h yaouank azezet a-dreñv he mekanik a verke ar prizioù. Kroget eo ar glav da gouezhañ. Ar poliser en deus kavet goudor dindan ar porched teñval. An den du, echuet gantañ e gan, a zo bet lonket gant an engroez gleb ha skuizh. Chomet on el lostad da selaou ouzh trouz arabadus ar mekanik-kontañ.

Meurzh 1972.

TANGI MALMANCHE HA "SPERED AR VRO"

Ken dramaek hag e c'hoariva eo bet tonkadur lennegel Tangi Malmanche. Hag eñ brasañ dramaour Breizh, eo bet ganet e Saint-Omer-en-Artois, marvet e Clichy, douaret e bered Dives-sur-Mer e Bro-Normandi, goude bezañ bevet al lodenn vrasañ eus e vuhez er-maez eur ar vro... Sed ugent vloaz m' eo marv, hag a-benn daou vloaz e c'hellimp lidañ kentañ kantveder e c'hanedigezh, d' ar 7 a viz Gwengolo 1875... Ha koulskoude, ul lodenn vras eus e bezhioù-c'hoari a oa chomet betek-hen dianav, diembann.

Setu erfin, a-drugarez da Ronan Huon, ma c'hellomp lenn *An Intañvez Arzhur*, ha stumm brezhonek *Salaün ar Foll...* en ur c'hortoz ma vo adembannet hep dale *Gwreg an toer* ha *Marvailh an ene naonek*. Ar peurrest eus c'hoariva Malmanche a zeuio en-dro d' ar goulou er bloavezhioù da zont. Spi am eus ez eo torret da vat ar gwall-blanedenn hag ez eo lamet kuit pallenn an ankounac'h a c'holoe e labourioù.

Ar re o deus c'hoant anavezout berr-ha-berr c'hoariva Malmanche n' o deus d' ober nemet digeriñ levr Abeozen : *Istor lennegezh vrezhonek an amzer-mañ*, eñ bepred ken resis hag ken reizh en e varnedigezhioù. Pe c'hoazh, mar fell deoc'h gouzout hiroc'h, kemerit niverenn 38 Al Liamm : pevar fennad a zo aze a dalvez ar boan o adlenn. An notenn-mañ ne zegas ket kalz a dra en-tu-hont d' ar pezh a zo dija aze, nemet e plijfe dezhi tennañ en-dro an evezh war Malmanche evel rener ar gelaouenn *Spered ar Vro*.

Peder niverenn. An hini gentañ eus miz Eost 1903. Ha goude-se, miz Gwengolo, miz Here, miz Du... Hag echu... Bloavezh kentañ diglok, n' eus ket bet un eil bloavezh. Tonkadur dramaek bepred.

363

Ur gelaouenn penn-da-benn e brezhoneg, kelaouenn a lennegezh, a lizeradur brezounek, evel ma skrive Malmanche hervez yezh Bro-Leon. Dont a rae ugent vloaz re abred. Ne zeuio ar menoz da vat nemet gant Gwalarn, a zo an niverenn gentañ anezhi eus miz Meurzh 1925. Rak daoust da bep tra, n' hellomp ket sellout ar gelaouenn *Ar Vro*, gant Taldir, embannet eus 1904 betek 1914, evel ur gwir gelc'hkelaouenn lennegel.

D' ar c'houlz ma kroge Malmanche gant *Spered ar Vro* ne vanke ket embannadurioù e galleg diwar-benn Breizh, en o zouez, l'Hermine ha ne oa ket dister, *La Revue Morbihannaise* a oa talvoudus. *Feiz ha Breiz*, divyezhek a oa krog abaoe 1900. Kazetenn Vallée, *Kroaz ar Vretoned*, e brezhoneg penn-da-benn, a yae war raok. Met sevel un embannadur miziek a lennegezh, e brezhoneg hepken, a oa neuze ur bariadenn tonket da c'hwitañ. Ouzhpenn-se ar rener a oa o chom er-maez eus Breizh : Tangi Malmanche, 5, ru Leopol-Robert, Paris, XIVE ; an den kiriek eus ar werzh o chom eñ ivez e Paris, Maurice Le Dault, 6, ru du Val-de-Grâce.

Un abeg all d' ar c'hwitadenn : ne seblant ket Malmanche bezañ kavet skrivagnerion dalvoudus. Pa zigorer an niverennoù ne weler ket enno kalz a dra e-keñver ar pezh ez omp bet kustum da lenn e *Gwalarn*, pe el *Liamm*. Ul lennegezh o valbouzat c'hoazh. Kalz a volontez vat, met skrid dreist-par ebet. Nemet, er bloaz goude, 1904, en diavaez d' ar gelc'hkelaouenn hec'h-unan, gant *Editions de Spered ar Vro*, testenn ar pezh-c'hoari *Le Conte de l'Ame qui a faim*, texte breton accompagné d'une traduction française ; nemet er mouladur-mañ ec'h adkemere ar galleg e bouez...

Ur pennad a zo koulskoude e *Spered ar Vro* a dalv ar boan, hag a c'hellomp sellout outañ evel ouzh ur pennad istorek, ar pennad-digeriñ gant Tangi Malmanche e-unan. Kalz a-ziaraok e-keñver tud e amzer, sed un den na grede ket e kalonegezh ur bobl disperedet ha kouezhet evit saveteiñ hec'h yezh. Pa oa ar bersonelezh vrezhon a oa klañv, pa oa an emskiant vroadel a oa mouget, e oa ar spered broadel a ranked da zihuniñ. An anv roet d' ar gelaouenn : *Spered ar Vro*, en disklerie anat, evel ar pennad kentañ-se, skrid berr, a zo a-walc'h anezhañ, eme Abeozen, evit diskouez ez oa Malmanche diaraoger gwirion an Emsav yaouank. E gemprediz n' o deus ket komprenet anezhañ. Ha koulskoude, goude 70 vloaz e chom e gomzoù ken gwir all, gwiroc'h zoken eget d' ar c'houlz m' int bet skrivet.

364

Degas a ran amañ ar pennad-se, nemet en treuzskrivan en hor skritur a-vremañ : ken rouez eo deuet skouerennoù *Spered ar Vro* da vezañ, ma n' hellfe ket moarvat al lodenn vrasañ eus lennerion " Al Liamm " teurel ur sell warnañ a-hend-all.

Va skouerennoù-me a zo bet da gentañ re Fanch Vallée, en devoa a-dal an derou harpet kelaouenn Malmanche. D'ar c'houlz-se, Malmanche en devoa 28 bloaz ha Vallée 43. Hemañ n'en devoa ket c'hoazh kavet war e hent Meven Mordiern (Rene ar Rouz) a dlee kas e vignon war-zu ar brezhoneg arnevez. Met a-benn neuze e troe ar speredoù gwellañ etrezek ur yezh uheloc'h ha barrek da zisplegañ ar menozioù modern.

Spered ar Vro, a lavare Malmanche e diwezh e bennad, ar gwir Vretoned a anavezo anezhañ. Ya, ar soñjoù reizh a drec'h e Breizh a-benn ar fin, nemet a-wechoù e rankont gortoz gwall-bell.

BEZOMP " NI HON-UNAN "

N'eus ket pell amzer e voe brud eus ar brezhoneg. E kazetennoù ar vro e voe brañsellet, ur wech c'hoazh, *Yezh kozh hon Tadoù* e-giz ur banniel gant meur a *Fidèle Abonné* hag a *Groupe de lecteurs assidus*, a guzhas diouzhtu da c'houde, evel ma ra ar verkerion war ur poligogn er poent ma 'z eer da zigeriñ an tan. Er c'hazetennoù a-ziavaez e savas ivez un nebeut mouezhioù : unan anezho, ma 'm eus soñj, a ziskulias d' ar Fransizion an dra souezhus meurbet-mañ : penaos « er goueled eus a Vreizh, e bilajoù bennak, un nebeudig anezho, e veze c'hoazh komzet ur yezh pehini... etc. » Met petra eo c'hwec'h kant komunenn e-skoaz d' ur frazenn gaer ? !

Ar re-se, me gav din, - me fell din lavarout ar re n'o doa ganto nemet o c'hoant d' ober vad, - o deus laket en a-raok, evit difenn ar yezh, un dra hepken : he c'hozhni. « Ar brezhoneg a oa giz-prezek hor gourdadoù, - emezo, - ni rank eta komz brezhoneg ivez. » Koulz lavarout, a gav din : « Setu amañ bragez va zad-kozh ; arabat din-me dougen ur vragez all, abalamour ma 'z eo houmañ hini va zad-kozh ».

365

Kement-se a zo brav. Met n' eo ket a-walc'h eo. Rak lakaat a reer ar bragoù kozh er c'houfr, ne wisker ket anezho avat, peurliesañ. Lavarout a ran muioc'h zoken : Mar be gwir ne dalfe ar brezhoneg, e-giz ma tisplege an hevelep kazetenn, nemet da « ober d' ar Fransizion derc'hel soñj eus ar Gelted », koulz e ve din-me, feiz, e vefe troc'het o zeod diouzhtu d' ar milion bennak a dud a gomz brezhoneg, ha din-me da gentañ, kentoc'h eget gouzout din n'her c'homzont nemet evit ober plijadur d' un nebeut tud ouizieki. Nann. Tud a-walc'h o deus komzet eus ar Gelted hag eus an amzer dremenet. Me garfe d' am zro displegañ un nebeut traoù abalamour d' ar Vretoned en amzer a-vremañ ha dreist-holl d' o bugale en amzer da zont.

*

En devezh-all em eus lennet en ur gazetenn eus a Vreizh ar pezh a zo amañ

war-lerc'h :

« Skrivañ a reer dimp eus a (amañ anv ur bourg bennak) : Dec'h ez eus bet graet en abeg da (n' ouzon mui petra) un tammig fest e-barzh an ti-kêr. Hor gourc'hemennoù d' an Ao. X... dreist an holl, pehini en deus distaget a c'hiz ken speredek, *Viens Poupoule ha T'en as un oeil, grand succès des concerts parisiens.* »

N' anavezan ket an Ao. X... Me gav din evelato ez eo ur paotr eus ar re gwellañ : den a feson, a skiant, a onestiz. Me gav din ne rafe droug ebet d' ur gelienenn, na gaou ouzh e nesañ evit an disterañ.

Koulskoude, me 'm eus kasoni ouzh an Ao. X... Me gav din ez eo un den fall. Un torfedour eo zoken. Ur muntrer eo !

Lazhañ a ra Spered ar Vro.

*

Daoust pegen bras e vezo an unanded er Frañs, ne vezo ket miret ouzh an dud da vezañ pe deo pe dreut, pe drist pe laouen. Ne vezo ket miret outo da vezañ disheñvel hervez ar broioù. Ne vezo ket miret ouzh broioù disheñvel da vezañ disheñvel a spered.

Petra eo eta spered ur vro ?

366

Unan bennak - pe egile - en deus lavaret : « Va zok a zo va zok-me, o vezañ ma n' eo ket tok un all eo ». Kement-se ne lavar ket kalz e doare. Koulskoude n' oufen kaout tro welloc'h evit displegañ petra eo spered ur vro. Spered ur vro bennak a zo spered ar vro-se, o vezañ ma n' eo ket spered ur vro all eo. Pep bro, pep bobl he deus he giz-hi da soñjal, he giz-hi da welout, he giz-hi da lavarout, he giz-hi da ober. Bez' e deus he vertuzioù-hi hag he zechoù fall-hi. En em ziskouez a ra hi hech-unan e pep tro. Dispar eo. Hag o vezañ ma 'z eo dispar, ez eo kaer, kreñv, bras e kement a ra.

*

En ur vro, ur spered all a zeu atav da vezañ ur spered fall. Da gentañ, un dra anat eo e vez aesoc'h kemerout ur pleg fall eget unan mat. Met gwashoc'h a zo c'hoazh : un dra hag a zo mat gant an eil pobl a zeu peurliesañ da vezañ fall gant eben. Dre gemerout skouer diouzh ur bobl gae a spered, ur bobl all trist a spered ne zeuio kalz a-wechoù da netra nemet da vezañ diot hag iskis. Rak-se n' eus netra falloc'h en ur vro eget ar spered a heñvelidigezh. Gant ar spered-se e teu, hep mank ebet, n' eus forzh pe vro da vezañ ken disheñvel diouti hec'h-unan ha ma 'z eo ar marmouz diouzh an den, an Diaoul diouzh Doue.

Ar wirionez-se a zo anavezet a bell 'zo. Met ar gwirionezioù kozh a zo c'hoazh ar re wellañ.

*

En he skridoù, en he Lizheradur eo dreist-holl ec'h en em ziskouez tro-spered ur vro. Gant he skridoù eo ivez e kas ur vro bennak he zro-spered d' ar broioù all. Hag, abalamour d' ar pezh a lavaran un tamm a-raok, ul lizheradur ha n' eo ket graet hervez spered ur vro, ne c'hell nemet ober droug dezhi. E feson, me gred e vezin tostoc'h d' ar wirionez eget d' ar gaou en ur lavarout ne vez tennet, eus ar skridoù kaset a Baris da Vreizh, nemet ar sotoni, an direlijion hag al loustoni gant an darn vuiañ.

*

Ur vro hag he deus c'hoant da virout he spered-hi a dle eta kaout he lizheradur-hi. Hag evit-se e tle-hi, da gentañ, mirout he yezh-hi. Ur vro hag a

goll he yezh a goll he spered en hevelep taol.

367

Ya, gouzout a ran : N' eo ket ar gwiskamant eo a ra ar beleg. Anat eo kement-se. Anat eo ivez e vez kustum ur beleg d' en em wiskañ e beleg ha nann e miliner. Moarvat, hag eñ gwisket e miliner e rafe e vicher memes-tra. Met kerse a vije kement-se gant an holl. Ha me ne gav ket din, a-benn ar fin, e vije gant e brezegennoù kement a dalvoudegezh, pa 'z eo gwir, dre welout ur miliner, e soñjer kentoc'h en Ifern eget er Baradoz !

Spered ar Vretoned en deus e wiskamant : ar brezhoneg. Perak eta amprestañ hini an amezeg ? An neb a gemer dilhad un all a gemer ivez e c'hwen.

*

Krediñ a reer a-walc'h e Breizh e c'heller fiziout er bobl (me fell din lavarout er re vunut, er re diouizie) evit difenn ar yezh. Hogen faziañ a reer, n' em eus ket aon d' en diskleriañ, ha pa rankfen bezañ laket da ganer fall. Ar bobl ne ra forzh ebet eus he giz-prezeg. He mirout a ra, moarvat, dre voaz ; n' he difenno ket avat dre gefridi, pa ouezo ur c'hiz all. Rak ar bobl n' oar ket petra eo an dreist-ezhomm. Kement tra n' he deus ket ezhomm anezhañ e lavar ez eo didalvez. Pa n' he devezo mui ezhomm eus ar brezhoneg e tilezo anezhañ.

*

An Ao. X... - setu e teu din soñj eus e anv : an Ao. Instar eo a reer anezhañ - a vez e Breizh kalz eus e seurt, hag int, dre o stad pe dre o micher, en em gav bemdeiz gant maread tud : gwazed, merc'hed, bugale. Abalamour d' o renk, d'o c'harg, d'o deskadurezh o deus galloud warnezho. Ar re-mañ a selaou ha (pezh a zo muioc'h) a gred anezho. Kement a reont, kement a lavaront a gavont brav. O c'hemer da skouer a reont. Ober evelto a glaskont.

Ar re-se a zo ar Vretoned desket. En o galloud emañ *Spered ar Vro*.

*

368

Ar Vretoned, evito da vezañ o chom kant lev diouzh Paris, n' int ket holl imbesiled. Ar pezh a lavaren uheloc'h, lod anezho o deus en komprenet. Hag un dra souezhus a-walc'h a c'hoarvez en amzer-mañ : e-pad ma teu ar bobl da zilezel ar brezhoneg, ez a an dud desket da gemerout damant dezhañ. Rak-se e c'heller lavarout : Neb a fell dezhañ labourat evit ar bobl a rank bremañ labourat evit an dud desket. D' an Ao. Instar da gentañ e ranker diskouez penaos eo e vro pinvidik a-walc'h, hep mont da gerc'hat spered er broioù all. Pa vezo komprenet an dra-se gentañ, ar bobl holl a gompreno da c'houde.

Emañ skrivagnerion ar vro o stagañ ganti dija. Me garfe sikour anezho gant ar gelaouenn-mañ.

*

Al Levr, bremañ, a gomz ouzh meur a hini. Ne ra ket ouzh kalz evelato. Ur skrid bep an amzer, ur Gelaouenn, a dalv gwelloc'h, a gav din. Rak, mar d-eo gwir e tle al lenner mont da gerc'hat al Levr, ar Gelaouenn avat a zeu da gaout anezhañ. Evit lenn al Levr e vez ret kaout bolontez d' en ober ; evit lenn ar Gelaouenn, bolontez vat a zo a-walc'h.

Ha piv n' en deus ket gentañ ar volontez vat da vihanañ ?

Kement den desket a zo e Breizh a garfemp eta mont d' o c'haout bep miz ha goulenn outo :

« Bretoned maz oc'h, petra hoc'h eus-hu graet eus Spered ho Pro ? »

Met, pa 'z eo gwir e c'hallint respont dimp-ni : « Na c'hwi hoc'h-unan ? »

», ni a lavaro neuze : « Sellit, lennit. »

« Setu amañ oberoù skrivagnerion ho pro. Setu amañ gwerzioù, marvailhoù, istorioù a bep seurt, c'hoarvezet pe nann, met gwir atav ; plijadurus pe zoanius, met mat atav da wellaat an ene. Setu amañ tud hag a brezeg evel ma prezeger war an tevenn, pa vez an avel o c'hourdrouz, ha nann evel ma reer er salonioù evit plijout d' an itronezed koant. Setu gwazed hag a soñj hag a sant an traoù evel ma reer etre an douar hag an Neñvoù, dindan heol laouen Doue, ha nann e-giz en tavarnioù pa son an hanter-noz. Setu c'hoazh merc'hed ha n' int ket fichet e-giz merc'hodennoù ur bazar. Setu bugale hag a zo bugale eus ar vro, ha nann eus eus ar re a zeu enni e-pad an hañv da vragal dirak an douristed. Setu amañ ouzhpenn ur mor hag a zo ar mor, reier ha n' int ket kartoñs, un oabl ha n' eo ket livet gant *Ripolin*. Setu tud ho pro, setu eneoù ho pro, setu traoù ho pro.

369

Ha n' eo ket kement-se eo Spered ar Vro ? »

Me gav din, ar gwir Vretoned a anavezho anezhañ.

TANGI MALMANCHE.

DEIZIADUR GODELL 1974

An dek 10,00 lur

Ne vez ket gwerzhet a-unanoù

Distaol 1/3 evit un niver bras

Kasit ho chekenn gant ho koulenn da R. HUON 2, Venelle Poulbriquen, Brest -
C.C.P. Rennes 1629-14

ISTOR BREIZH LA BORDERIE troet gant ROPARZ HEMON

An dug Yann Rous
(1237-1286)

(KENDALC'H)

Kreskidigezh an domani dugel Diazevidigezh Kastell Naoned

Kreskidigezh an domani dugel, setu aze skedusañ tra a gaver e ren Yann Rous, an oberenn ma pleustras warni e vuhez-pad. Dre brenadennoù gounidus bepred, dre brosezadurioù hir hag ampart, e stagas ouzh an domani-se seizh pe eizh aotrouniezh kaer : Muzilhag, Henbont, Lanvaoz e Bro-Wereg, - Gourin e Kernev, - Kerhazou e-kichen Roazhon, - Ar Roc'h-Derrien e Treger, - ha div all, pouezusoc'h c'hoazh, douar Dinan ha kontelezh Leon.

Bro-Leon prenet marc'had-mat.

Pinvidigezh ha galloud konted pe veskonted lignez henañ Leon a oa bet gwall hejet ha bihanaet en 12-vet kantved gant Herri II roue Bro-Saoz hag e vab Jafrez, hag en 13-vet kantved gant Per Brizhkloareg. Herve III a Leon a lezas e 1240 e greñvlec'h e Brest da vont gant Yann Rous, en eskemm eus ul leve-bloaz a 100 lur. Ne deas ket pelloc'h, ha, meret-mat gantañ e zomani betek e varv e 1265, n' en devoe mui ezhomm da ober amprestoù risklus eus ar seurt a veze kinniget gant Yann Rous evit hoalañ ar varoned a forane o arc'hant hag a gouezhe en dienez.

371

Mab Herve III, avat, Herve IV a Leon, ur frigaser e zanvez, en em daolas drezañ e-unan e rouedoù an dug. E dek vloaz, etre 1265 ha 1276, e voe rivinet-naet. E bennañ mammenn a binvidigezh oa porzh-mor, tailhoù ha kustum (hiziv e vefe lavaret gwirioù maltouterezh) Lokmaza-Penn-ar-Bed. O feurmiñ a reas, hag o gwerzhañ goude da Yann Rous, ha n' en devoe nemet ouzhpenn 16.000 lur en holl. Gwerzhañ d' an dug a reas ivez porzh-mor ha kastell Konk-Leon evit 2.500 lur, Plougonvelen ha Plouarzel evit 4.000 lur, Lokournan, e gastell Damani ha kement en devoa c'hoazh e Bro-Leon evit 7.200 lur. Berr-ha-berr, ar gontelezh en he fezh, war a hañval, ne goustas ket d' an dug muioc'h eget 32.000 lur, pezh a zo sur marc'had-mat.

Herve IV a chomas en noazh. An dug a rankas paeañ argourou e wreg, foranet evel ar peurrest. Madelezhus a-walc'h e voe zoken evit reiñ d' ar paour kaezh den rivinet, evit mont da Vrezel ar Groaz, ur marc'h-brezel eus ar gwellañ. Herve " bet beskont Leon " a werzhas prim al loen a-raok loc'hañ (e 1277).

Daoust d' e zienez, e veve c'hoazh ugent vloaz goude, e 1298.

Dinan prenet marc'hadmatoc'h c'hoazh.

E 1264, Yann Rous a brenas kastellaniezh Dinan ha kastell Lehon, gwelloc'h marc'had c'hoazh, evit 16.000 lur. Ar gwerzher, Alan Avaogour, - en doa bet Dinan a-berzh e vamm Marc'harid, - a oa aet diskiant, ha ret e oa bet tennañ digantañ gwardoniezh e vab Herriig, ha reiñ anezhi d' an tad-kozh Herri Avaogour, an hini a oa bet laeret gant Per Brizhkloareg.

Alan en doa gwerzhet d' an dug an darn eus douar Dinan a oa dezhañ, hag ivez un darn miret evit e vab, n' en doa gwir ebet warni. Herriig hag e ward a savas klemm. Yann Rous, neoazh, ne oa ket den da ziskregiñ diouzh an tamm en doa

kemeret, hag e talc'has penn. Rediet e voe gant Lez Roue Frañs e 1267 da anavezout gwir Herriig. Hogen, gwall chikaner ma oa, e reas prosez adarre. Pemzek vloaz goude hepken, e 1283, e voe graet treuzvarc'had : da Herriig e voe paeet un digoll, ha kêr ha kastellaniezh Dinan a chomas e piauou Yann Rous, evel diskouezet gant rolloù-kontoù eus an 13-vet kantved.

372

Perc'hennidigezh Vuzilhag.

Gwelet hon eus penaos en doa Yann Rous lakaet e graban war Lanvaoz, e 1272, dre ur meni brezel, dug Breizh kevredet ennañ gant beskont Roc'han evit flastrañ un den kaezh en doa rivinet da gentañ.

Peoc'husoc'h e voe perc'hennidigezh Vuzilhag, e-tro 1250. Hervez rolloù-kontoù 1267 ha 1270, edo an aotrouniezh-se en domani dugel neuze, hag implijidi an dug karget d' ober ar c'hontoù en em vode alies eno zoken.

Yann Rous, ampart war finesaoù ar c'henwerzh, aon dezhañ na vije divrudet gant seurt marc'hatadennoù, a reas meur a wech gant hanterourien, etre re all Per e vab yaouaer, a ouie ervat prestañ e anv evit prenañ douaroù hag aotrouniezhoù bras, a werzhe raktal d' e dad. Da skouer, d' an 19 a viz Du 1265, e leze holl zouar Dinan ha Lehon da vont gant an dug Yann Rous, un douar bet prenet dindan e anv, hag ouzhpenn, aotrouniezhoù Kerhazou, Henbont hag Ar Roch-Derrien.

Perc'hennidigezh Kerhazou.

Ne ouzer tamm ebet penaos e teuas Per Vreizh a-benn da berc'hennañ kastellaniezh kozh Kerhazou, na gant piv e voe gwerzhet.

Perc'hennidigezh Henbont.

Evit Henbont, ne oa ket ar gêr a zo bremañ war c'hlann gleiz ar Blaouezh, hogen ar gêr gozh a-dal dezhi war ar c'hlann dehou. Pa oa bet rannet Kemeded-Heboe, ul lod eus an dalc'h-douar bras-se e-kichen genou ar Blaouezh a oa aet, evel hon eus lavaret, gant beskonted lignez yaouañ Leon, ha Per Vreizh en doa prenet, pelloc'h en hanternoz, un dachennad ledek a-walc'h, a voe anvet diwezhatoc'h kastellaniezh Pontkalleg. Kêr gozh Henbont a oa dirann etre an dachennad-se ha douar priñsed Leon. " Douar Henbont" eo anvet war deul-prenañ Per Vreizh, eus an 19 a viz Du 1265.

373

Perc'hennidigezh Ar Roc'h-Derrien.

Evit kaout Ar Roc'h-Derrien e rankas Yann Rous prozeziñ kalet. Al lec'h-se, e-pad ren Per Brizhkloareg, a oa da Blezou, merc'h Konan Benteür kenderv-kompez Herri Avaogour bet laeret gant Brizhkloareg. E-pad ar brezel graet gant Per Dreux a-enep Amaouri Craon e 1222, Olier, pried Plezou, a lakaas kastell Ar Roc'h etre daouarn an dug, war c'houlenn hemañ, evel ma oa e zlead gwazonier. Kaer o doa bet Olier avat, Plezou, o mab Alan hag o merc'h Janed ober klemm, ne oa ket bet daskoret dezho, na gant Per Dreux, na gant e vab Yann Rous, kastell ha douaroù Ar Roc'h-Derrien. E 1269 e voe kaset an afer gant Janed dirak Lez Roue Frañs, ha rediet e voe an dug da reiñ dezhi ar c'hastell ha murioù kêr a-bezh. Al Lez a zaleas koulskoude a-raok reiñ he barnedigezh a-zivout douaroù ha douaroù-dalc'h an aotrouniezh hag a-zivout al leveoù kemeret hep gwir gant Per Brizhkloareg ha Yann Rous, a save, a lavare Janed, da 30.000 lur. War a hañval, hervez an " Olim ", ne oa c'hoazh barnedigezh ebet e 1272. Hervez istorourien Vreizh, kondaonet e vije bet Yann Rous da baeañ da Janed an 30.000 lur. Hep mar avat e voe graet emglev etre an div gevrenn, dianav dimp, rak douar Ar Roc'h-Derrien a chomas gant Yann Rous. Bez' e weler e oa stag, e 1287 ha 1288, ouzh an domani dugel.

Perc'hennidigezh C'hourin.

Un darn a zo chomet eus roll-kont ar gounidoù e Breizh e 1265, a ziskouez e oa deuet beskontelezh C'hourin neuze en domani dugel ivez. Un dispign a 56 gwenneg a zo merket evit ober paperenn-feurm, hag ar gounid evit Gourin evit un rannvloaz a gresk betek 155 lur ha 14 gwenneg. E " Levr an Armeri ", da lavarout eo roll ar servijoù-brezel, kinniget d' an dug e 1294, e kaver, el lodenn a-zivout Beliezh Kernev, ar pennad-mañ :

« Herri Koad-Buhal a lavar e tlee beskont Gourin reiñ ur marc'heg-arme, hag Herri a lavar e roio ar marc'heg-se, o vezañ m' emañ an douar en e zalc'h. »

Se a ziskouez ne oa mui a veskont e Gourin d' ar mare-se, hag en doa an dug, en ur c'horn eus ar veskontelezh, aozet un dalc'h-douar bihan evit unan eus e varc'heien. Prouiñ a ra krenn e oa bet staget ar veskontelezh-se ouzh an domani dugel, un dra graet, evel hon eus gwelet, e-pad ren Yann Rous.

374

Savidigezh Kastell Naoned.

Ha daoust ha ne oa ket ivez kreskiñ an domani dugel, hag e greskiñ kalz, sevel kastell Naoned, anvet Tour Nevez, war un dachenn lamet digant an eskob, ha paeet dezhañ zoken, el lec'h end-eeun m' emañ ar c'hastell c'hoazh hiziv, e korn mervent murioù-tro kêr, ul lec'h dibabet ken mat evit kreñvaat ha difenn ar murioù-se, ha kaout darempred gant an diavaez dre ar stêr Liger ?

Istorourien Naoned a laka peurliesañ er bloaz 1207 savidigezh kentañ an Tour Nevez gant Gwion Thouars. Ur fazi eo. Hervez ur varnedigezh douget e 1248 war ar rendaeloù etre eskob Naoned ha duged Breizh, e tamaller spis d' an dug Yann Rous bezañ aloubet an dachenn ma save ha ma sav c'hoazh kastell an Tour Nevez, un dachenn a oa lod eus douaroù an eskob. Hag ur pennad amzer goude, pa voe sioulaet ar stourm ouzh ar gloer, evel hon eus lavaret, e voe aotreet an dug, e 1259, da virout an dachenn hag ar c'hreñvlec'h en doa lakaet ober warni, gant paeañ d' an eskob ul leve-bloaz a 55 gwenneg.

Diarvar eo e voe Yann Rous, etre 1237 ha 1248, saver kentañ kastell Naoned.

Dibenn ren Yann Rous

Un tad a familh.

Hon istorourien gozh a ziskouez dimp Yann Rous, war e zistro eus ar groaziadeg, oc'h en em ouestlañ da velestrerezh mat e zugelezh.

« Goude e zistro eus Tunis, an dug Yann a Vreizh a chomas e peoc'h en e vro, hag a boanias da lakaat ar justis da ren, o skoazellañ ar beorien hag o virout na vijent gwasket, hag o sujañ dre e c'halloud an dud dissent ha lorc'hus na brizent ket plegañ d' al lezennoù. Hag e talc'has e pep tra d' ar reizhded. » (Ar Baod.)

Ober eus Yann Rous avat seurt skeudenn, skeudenn ur priñs reizhour, uhel ha strizh, a vefe dizanavezout ha zoken distresañ e demz-spered. E berzh pouezusañ ne oa ket hini ur priñs, rak evit difenn o c'hurunenn e ranke holl briñsed an amzer-se gouzout embreger ar c'hleze, bezañ brezelourien dreist-holl, hag eñ, evel hon eus gwelet, ne oa ket.

375

E gwirionez, e berzh pouezusañ oa bezañ un tad mat a familh. Leuniañ e irc'hier, kreskiñ e zomani hêrezhel a felle dezhañ a-raok pep tra, gwellaat stad e aparchant, reiñ dezho kargoù uheloc'h. Evel ur bourc'hiz ordinal, e lakae e zouaroù da vezañ gounezet ha tennet splet diouto. En e zomanoù e Kastellin,

Duod, Mael-Karaez, Karnoed e-kichen Kemperle, an Enezenn e-kichen Ar Roc'h-Vernez, e lakaas aozañ kloziou bras mogeriet-start, enno marchosioù evit magañ kezeg a ouenn vrav. Lavaret eo bet en deus savet kastell Susinio, pezh n' eo ket gwir, rak ar c'hastell-se a servije da annez da zug Breizh ken abred ha 1218. Hogen evel ma vourre kalz el lojeiz-se, e krogas d' e adsevel diouzh un tres nevez, - ul labour kendalc'het gant e warlerc'hiad Yann II, - hag e klaskas kreskiñ an domani stag outañ par ma c'hallas, betek aloubiñ ha laerezh hep morc'hed douaroù e amezeien, zoken re abati Sant-Gweltaz-Ruiz.

Bugale Yann Rous.

An tad mat-se en devoe kalz bugale : eizh digant e wreg Gwenn Champagn etre 1239 ha 1251 : Yann, ganet d' an 3 Genver 1239, a voe badezet gant Kadiog eskob Gwened, hag a savas goude e dad war gador dug Breizh, - Per, ganet e Kastellin e 1241, marvet e 1268, - Aliz, ganet e 1243, dimezet da Yann Châtillon kont Bleaz, marvet e 1288, - Tepot, ganet e 1245, marvet d' ar 25 Here 1246, - un eil Tepot, ganet e 1247, marvet ar bloaz goude, - Alienor, ganet ha marvet e 1248, - Nikolaz, ganet e 1249, marvet e 1251, - Roperzh, ganet e 1251, marvet e 1259.

Evel ma weler, an holl vugale-se, nemet daou pe dri, ne vevjont ket pell. Hogen Yann Rous, marvet da 71 vloaz, en doe an eurvad da welout e zouaren ha mab e zouaren, el lignez henañ. An douaren, anvet Arzhur, - an dug Arzhur II diwezhatoc'h, - a voe ganet d' ar 25 Gouere 1262, mab Yann kont Richmond, mab henañ Yann Rous, ha Beatriz a Vro-Saoz. An Arzhur-se en doe digant e wreg Mari, beskontez Lemojez, ur mab henañ anvet Yann, - an dug Yann III diwezhatoc'h, - ganet d' an 8 Meurzh 1286, seizh miz a-raok marv e dad-kuñv.

376

Marv ar briñsez Gwenn.

Gwreg Yann Rous, an dugez Gwenn Champagn, a varvas d' ar 5 Eost 1283. Beziet e voe en abati Itron Varia al Levenez, savet ganti e-tro 1270, evel ma oa bet savet Itron Varia ar Pedennoù, kouent menec'h eus urzh Citeaux e-tro 1250 gant he fried.

Marv Yann Rous.

Hemañ a varvas a-boan tri bloaz war-lerc'h marv e wreg, d' an 8 Here 1286, ha beziet e voe abati ar Pedennoù, savet, evel hon eus lavaret, gantañ.

Ur skrid meulus a voe enskrivet war e vez. An destenn a zo bet miret.

Meuliñ a ra neuz-vat ar priñs ha nerzh e vrec'h. Dre e furnez dreist-holl e trec'has e enebourien, a lavar pelloc'h. E veuliñ a ra c'hoazh evit bezañ bet « gwir zialer an torfedoù, gwarezer ar beorien hag ar re wan, peoc'haer e vro ». Gwir a-walc'h eo. Lavarout a ra ouzhpenn e voe an dug Yann « gredus da zifenn ar Feiz ha da zifenn ar gloer », pezh a ziskouez anat e oa kompezet an traoù etre an Iliz hag eñ.

Ar veuleudi a zellez muiañ avat eo « bezañ daougementet gant reizh e c'halloud hag e wirioù dre e evezhded ».

N' eus nemet an daou c'her " gant reizh " a c'hell bezañ kavet a re, e degouezhennoù 'zo. Yann Rous e-unan a ouie a-walc'h, hogen fellout a rae dezhañ daspreñañ e aloubidigezhioù, da vihanañ goude e varv. Dre se, en urzhioù en doa merket da efederien e destamant, e c'hourc'hemenne degemer klemmoù an holl re m' en dije graet gaou outo, hag ober dezho justis.

C'HOARIVA "E-KREIZ GOUELEC'H BREIZH"

Pep bloaz, abaoe m' hon eus kroget da labourat, me ha va mignoned, evit reiñ lañs en-dro d' hor c'hoariva brezhonek, e c'hellan lavarout hon eus graet ur c'hammed war-raok.

Hevlene, evit ar wech kentañ, eo bet displeget daou bezhc'hoari : " Ar Baleer-Bro " gant Jan Priel, hag " Un den a netra " gant R. Hemon. An hini kentañ a voe displeget e Kêr-Vreizh Pariz hag e Ti ar Yaouankiz e Sceaux, hag an eil e Kintin, e Kamp ar Vrezhonegerien.

Biskoazh ne oa bet hor strolladig ken niverus. C'hwec'h den a oa ezhomm anezho evit c'hoari " Ar Baleer-Bro " : tri faotr ha teir flac'h. En o zouez, J. Bruneau a oa anezhañ ar c'hoarier koshañ peogwir eo bet gwelet tro-ha-tro er pevar fezh-c'hoari hon eus displeget. Tereza ha Soazig o doa c'hoariet dija e " Gwreg an Toer ". An tri all, da lavaret eo an Itron Senechal, Delorme hag Emeillat, a oa anezho tud nevez-deuet d' hor strolladig. Unnek den en holl o deus labouret evit displegañ " Ar Baleer-Bro ", ma kontan, evel m' eo dereat, Mona Bruneau ha Padrig ar Gallaou a sikouras d' ober kinkladur al leur-c'hoari ha Bernez an Nailh a dresas div skritell, an eil kaeroc'h eget eben, evit abadenn Sceaux.

Pa sellan, koulskoude, ouzh ar strivoù hon eus graet, me ha va mignoned, abaoe pevar pe bemp bloaz, ez on-me dipitet un tammig. Peogwir hon eus prouet, er stad ankenius m' emañ hor yezh enni, e c'hell bezañ kavet ha bodet c'hoarierien, lod anezho donezonet-kaer, ha displeget pezhioù-c'hoari a dalvoudegezh, e kave din o dije tud all graet eveldomp, en ur mod bennak, pe e Lezvenen, pe e Kemper, pe e lec'h all, e Breizh pe en diavaez. Betek-hen, keit ha ma ouzon, n' am eus gwelet den oc'h heuliañ hor skouer.

Padal, pa sellan pishoc'h ouzh an traoù, e welan eo deuet, memes tra, ur vad bennak diouzh hor strivoù. Ne vije ket bet, da skouer, c'hoariet en hañv-mañ, e Kamp ar Vrezhonegerien, e Kintin, " Un den a netra " ma ne vije ket bet displeget en e raok " Ar Baleer-Bro " ha pezhioù all.

378

Evit diskleriañ hiroc'h va soñj e lavarin ne vijen ket bet prest me va-unan da lakaat c'hoari pezh R. Hemon, evit an eil gwech, ma ne vije ket bet troet va spered war-du ar c'hoariva, evel m' emañ abaoe meur a vloavezh. Da grediñ a zo n' em bije ket lakaet ar skrid anezhañ em sac'h pa 'z on savet war va marc'h-houarn da vont da Gintin. A zo muioc'h, ur wech en em gavet eno, n' em bije ket kavet ken aes tud d' e zisplegañ, anez d' ar strivoù a gomzan anezho uheloc'h.

[Itron Senechal (Fant Tassel, a-gleiz) ha Tereza ar C'horr (God ar Bris, azezet ouzh taol) e diwezhañ diviz " AR BALEER-BRO ", war leur-c'hoari " Ti ar Yaouankiz " e Sceaux.

GOD (hep ur fiñv). - « Fant, galv amañ raktal hor mitizien... Kae te, en ur redadenn da di ar person... ha pa vimp holl unanet, e taoulinimp da bediñ evit an Anaon... »

379

Gout a ouzer ez eus daou zen pennañ, e-keñver pezh o deus da lavaret war al leurenn, en " Un den a netra " : Rosenkrans ha Van Armeck. O vezañ ma oan prest, me va-unan, d' ober an hini kentañ e soñjis e vefe hogos diskoulmet ar gudenn ma kavfen ur paotr a youl vat d' ober an eil.

Ha setu m' en em gavas e Kintin va mignon ha kenlabourer mat Jilberzh Bruneau a vije bet laouen-tre d' en em lakaat e kroc'hen Van Armeck ma ne vije ket bet en em gavet klañv souden ha ma ne vije ket bet ret dezhañ mont buan-ha-buan d' ar gêr. A-drugarez Doue ez en em gavas prestik goude hor mignon yaouank Yann-Glaoda Emeillat, an hini end-eeun a rae " Job " er " Baleer-Bro ", hag eñ eo en em ginnigas diouzhtu d' am skoazellañ. Kavout daou baotr all da ober " ar micherour " hag ar " mevel kozh " ne voe mui, e gwir, nemet ur c'hoari ha gwazh a se ma tibabis da vont da vevel, evit ur predig-amzer, ar yaouankañ eus ar gampidi !

Lavarout a rin, ouzhpenn, e vije bet ur gwir bec'hed chom hep displegañ ur pezh-c'hoari e Kintin rak er Greizenn Yann XXIII ez eus ur vrav a sal-c'hoariva, enni ul leurenn ma c'hellfe ebatal aes warni un tregont bennak a c'hoarierien.

M' em eus pouezet, un tammig re marteze, war zisplegadur " Un den a netra " e Kintin eo evit diskouez n' eo ket chomet didalvoud a-grenn hor strivoù ha penaos e c'hellfe mont ar gouelec'h sevenadurel m' eo Breizh d' un oasis a vefe klevet enni safronerezh mil ha mil den o strivañ war gement tachenn ma tispleg mab-den warno e oberiantiz hag e ijin. N' eo ket al labour a ra diouer peogwir eo pep tra da grouiñ pe da adsevel. Breizh hec'h-unan eo a zo da vezañ lakaet en-dro war he flomm. (1)

(1) Setu ur bomm eus ur pennad embannet er " Monde " (9-7- 1969) diwar-benn Poñdi dindan an talbenn : " E-kreiz gouelec'h Breizh " : « Ar plac'hed yaouank... a zo niverusoc'h eget ar baotred hag o devez muioc'h a vec'h egeto o kavout labour. Ur wech diskoliet e kavont hir o amzer hag e " hetont oberiantizoù ". Goulenn a reont (e vefe savet) skolioù-noz, kentelioù diwar-benn ar c'hinklañ, an troc'hañ-dilhad hag ar gwriat. Amañ ne vez graet netra ebet e-keñver ar sevenadurezh (" C'est le néant culturel "). War an dachenn-mañ, an dud en o oad o deus, e gwir, roet o dilez. » - Ur vaouez eus Kêr-Boñdi eo a gomze d' ar c'helaouenner.

Dek Vroad " berzet " e Kornog-Europa

" Klevit kan ar broadoù o sevel eus o bez... "

SERGIO SALVI, **Le nazioni proibite, Guida a dieci colonie " interne " dell Europa occidentale**, Firenze, Vallecchi, 1973 (Ar broadoù berzet, Sturlevr da zek trevadenn "diabarzh" eus Kornog-Europa), 632 pajenn, 59 kartenn, 74 skeudenn er-maez testenn.

Setu ul levr gouestlet da vroadoù mac'homet Kornog Europa, ul levr pouezus ha dudius da lenn, savet mat ha skeudennet kaer ; ra lenno anezhañ an holl re ac'hanomp a zo barrek da lenn italianeg. N' eus levr heñvel nag e saozneg nag e galleg. (Levrig P. Laurent ha levrioù G. Héraud a zo skortoc'h ha disheñvel dre o danvez, rak studiañ a reont ar bihanniveroù dre Europa a-bezh.)

An aozer, Sergio Salvi, a zo ur skrivagner italian (embannet en deus dastumadoù barzhonegoù, ur romant ha levrioù skridvarnerezh) hag a zo ivez pennskrivagner ar gelaouenn sevenadurel " Il Bimestre " ; gouestlet en deus niverennoù dibar da vroadoù mac'homet, evel Okitania, Bro-Skos, Breizh, h.a. An niverenn gouestlet d' hor bro, embannet e miz Here 1970, prientet gant un istorour yaouank ezel un emsav eus ar c'hleiz pellañ, Elio Franzin, a oa enni pennadoù skrivet gant R. Huon, Y. Olier, P. Roy, h.a., ha barzhonegoù brezhonek gant o zroidigezh italianek (meneget war " Al Liamm ", niv. 143).

Marksour eo S. Salvi, hogen dogmatour tamm ebet, ha chom a ra diuntuek en e levr. Displegañ a ra e venozioù diwar-benn ar gudenn vroadel ha pal e levr en ur raklavar ; disteurel a ra termenadur youlel ha dreist-holl termenadur stadel ar vroad ; anat eo ne glot ket ar broadoù gwirion gant harzoù ar Stadoù (nemet e Island) ; ar c'hlotadur etre broad ha Stad n' eo nemet ur vojenn drastus, ha kevatalded ar gwirioù a dalv nac'hañ bezañs ar broadoù berzet. Sujet eo ar re-mañ d'un trevadennadur yezhel, sevenadurel hag armerzhel ; degemer a ra S. Salvi ar meizad a « drevadennadur diabarzh » goveliet gant R. Lafont, hogen pouezañ a ra war ar yezh ! « ar yezh eo a ra ar vroad », rak n' eo ket hepken ur rollad arouezioù hogen ur meizadur eus ar bed ; ar yezh a c'hell kilañ dre efed ar gwaskerezh hag an trevadennadur, hogen arouez kevandodel * ar vroadelezh a zo treuzkaset neuze alies da arouezioù all, evel ar relijion en Iwerzhon, hag an holl emsavioù broadel a stourm atav da advefañ ar yezh vroadel.

381

Menegiñ a ra S. Salvi adsav ar broadelezhioù hag ar c'henelioù dre ar bed a-bezh, eus Norzh-Amerika betek U.R.S.S. ha Gevred-Azia hag evezhiañ a ra endroadur an emsavioù broadel davet ar sokialouriezh tra ma 'z embannent gwechall keliadurezhioù mirour hag hengounelour ; displegañ a ra an endroadur-se dre efed un argerzh-proletarekaat ha steuziadur ar bourc'hiziezhoù broadel, distrujet pe deuzet er vourc'hiziezh mestroniour ; rannet eo an emsavioù broadel etre ar re a c'houlenn ur Stad dizalc'h hag ar re a c'houlenn an emrenerezh ; S. Salvi a zispleg o arguzennoù hep dibab, merkañ a ra hepken e c'hell an emrenerezh hag an dizalc'hted chom « furmel ». Menegiñ a ra ivez bezañs strolladoù marksour « broadelour » a harp o c'heoliadurezh * war bennaennoù * kavet e oberoù Lenin pe re Mao-Tse-Toung, dreist-holl gwir-emsavelañ ar broadoù ha ster araokelour ar stourmoù a zieubidigezh vroadel. Setu da skouer un arroud eus Mao-Tse-Toung : « Stourm ar renkadoù a gemer stumm ar stourm broadel e-barzh ur vroad a sav e-enep ur gwaskerezh estren », ha Salvi a lavar e-unan : « Etrevroadelouriezh ar broadoù mestroniour zo heñvel ouzh etrerenkadelouriezh ar renkadoù-ren ».

Goude bezañ displeget e venozioù diwar-benn ar vroad hag an emsavioù broadel er Raklavar - 15 pajenn - S. Salvi a zispleg perak en deus dibabet da

zanvez e levr dek broad berzet e Kornog-Europa. Lezet en deus a-gostez ar broadoù c'hwitet, eleze ar re a zo bet teuzet e-barzh broadoù kar pe amezek, evel Goueled-Alamagn ha Gorre-Italia, hag ar « falsvroadoù », da lavarout eo ar rannvroioù o deus un emskiant kumuniezhel hag a zo tuet a-wechoù d' en em ziskouez evel broadoù ; reiñ a ra skouerioù Korsika ha Sikilia a zo lodennoù eus ar vroad italian, evel m' eo Galisa ul lodenn eus ar vroad portugalat hag Elzas ul lodenn eus ar vroad alaman. Marteze ez a re bell amañ an aozer, rak m' emañ ar gwir gantañ evit ar yezh (ur rannyezh italianek eo ar c'horsikeg, tostoc'h ouzh an italianeg lennegel eget rannyezhoù Norz-Italia, hag ur rannyezh portugalek eo ar galisek) ; ne zalc'h ket kont eus an emskiant-bobl a zo frouezh an istor ; Korsika, Elzas ha Galisa o deus kemeret perzh da gantañ e istor ar broioù o doa an hevelep yezh, hogen troc'het int bet diouto abaoe meur a gantved, enbarzhet ma 'z int bet e Stadoù arallyezhek ; levezon ar vroad mestroniour en deus troc'het al liammoù gant ar vroad-orin ha pa c'hoarvez un adsav broadel, ar vrogarourien en ziskler evel Korsiz, Elzasiz, Galisiz ha nann evel Italianed, Alamaned ha Portugaliz ; lakaat a reont zoken o rannyezh da yezh lennegel. Arabat e vefe kavout amañ tres ur spered impalaerelour italian, rak S. Salvi a anzav evel broadoù gwirion Sardigna ha Frioul ha lakaat a ra e-barzh Okitania traoniennoù Piemont e-lec'h ma vez komzet rannyezhoù okitanek.

382

An dek broad studiet el levr a zo neuze ar re-mañ : Alba, Breizh, Katalonia, Kembre, Euzkadi, Friül, Fryslan, Kernev-Veur, Okitania, Sardigna. Ur pennad a zo gouestlet da bep broad ha pep pennad zo savet war an hevelep framm ; rannet eo e eizh lodenn : 1. An anv ; 2. An diriegezh * ; 3. Ar boblañs ; 4. Ar yezh ; 5. Al lennegezh ; 6. An istor ; 7. An armerzh ; 8. Ar stourm politikel. Liammet eo ar pennadoù-se dre istor stummidigezh ar vroad ; istor an trevadennadur politikel, armerzhel ha sevenadurel ; istor an adsav broadel. Bez ez eus da nebeutañ pemp kartenn evit pep broad ; taolenniñ a reont lec'hiadur ar vro e-barzh Europa, tiriegezh ar vro gant ar stêrioù hag ar c'hêrioù pennañ gant o anvioù e yezh ar vro, emled ar Stad vroadel, ar rannvroioù, emled ha kiladenn ar yezh, ar rannyezhoù. Luc'hskeudennoù 'zo bet lakaet ivez er-maez testenn, aroueziañ a reont dreist-holl istor ar vroad, istor ar yezh hag al lennegezh hag ar stourm politikel a-vremañ ; skeudennet eo da skouer tud o deus c'hoariet ur roll istorel e krouidigezh ar Stad vroadel, evel Nevenoe (ur skeudenn gant Langleiz), Owain Glyndwr (un delwenn e Caerdydd), Auto Handia (Sancho Meur, roue Navarra, diwar ul livadurig eus an XIvet kantved), h.a., pe en amzer-vremañ evel S. Arana-Goiri ha L. Companys. Diskouez a reer testennoù kozh er yezhoù broadel, evel : an destenn gantañ skrivet e katalaneg, div bajenn eus kanaouenn ar Groaziadeg (en okitaneg), pajenn gantañ ar Bibl kembraek, h.a. Kavout a reer ivez luc'hskeudennoù manifestadegoù (unan e Roazhon gant bannieloù breizhat), skritelloù en holl yezhoù (evit Breizh ur skritell eus ar MOB hag ur skritell eus ar FLB), enskrivadurioù war ar mogerioù (evel " Sardigna libera " - " 11 Set. [11 Gwengolo, deiz-ha-bloaz an emrenerezh] Catalunya lliure socialista "), ludresadennoù a bep seurt.

383

Plijus, bev ha resis eo an danevell, a ya betek darvoudoù 1971 ha 1972 ; titouret-mat eo bet an aozer ha klask a ra bezañ eeun pa zoug barnadennoù ; pa gomz da skouer eus ar vroadelourien vreizhat o deus dibabet kenlabourat gant an Alamaned, e skriv e c'helle ar politikerezh-se bezañ sellet evel reizh d' ar mare-se, « an Alamaned o vezañ enebourien ar C'hallaoued hag ar C'hallaoued o vezañ gwaskerien ar Vretoned ; ar gasoni enepgall a vire ouzh ar Vretoned-se da gompren pegen diboell e oa ar gealiadurezh nazi ha pegen nebeut e c'heller gortoz eus enebourien dre-zegouezh eus hoc'h enebourien ». Kavout a ra dezhañ o deus heuilhet hent Sukarno - a genlabouras gant Japaniz - tra ma vije bet gwelloc'h dezho heuliañ hent Ho-Chi-Minh, a stourmas da gantañ a-enep Japaniz ha goude a-enep ar C'hallaoued.

Taolennañ a ra S. Salvi an Emsav breizhat ha deskrivañ a ra an holl strolladoù, eus S.K.B. hag E.S.B. betek S.A.V. hag ADSAV 1532, o reiñ doareoù pennañ o c'healiadurezh. Soñjal a ra ne c'hello dont da vat ar stourm politikel e Breizh nemet pa vo krouet ul liamm organek etre an Emsav breizhat hag an urzhiadurioù sindikadel, etre ar stourm broadel ha stourm ar gouerien hag ar

vicherourien.

Al levr-mañ a c'hell bezañ ul levr prizius evidomp, n' eo ket evel just evit pezh a sell Breizh (un nebeut fazioù a zo ouzhpenn hogen munudoù dreist-holl) na marteze ar broadoù keltiek, hogen sur mat evit ar broadoù all ; piv en hon touez a oar ez eus emsavioù broadel e Sardigna hag er Frioul hag e vez komzet er broioù-se yezhoù latin disheñvel diouzh an italianeg ? Bez' ez eus zoken broadelourien frioulat a lavar ez eo Friouliz ur bobl a orin keltiek hag en abeg da se e skrivont ar fourlaneg gant « k » e-lec'h « c » !

Tizhet en deus S. Salvi e bal : sevel ur « sturlevr » gouestlet da vroadoù « berzet » e Kornog-Europa, ra vo troet hep dale e galleg hag e saozneg.

Per PENNEG.

* Gerioù n' emaint ket e Geriadur Roparz Hemon :
kealiadurezh : idéologie ; kevandodel : synthétique ; pennaenn : principe ;
tiriegezh : territoire.

NOTENNOÙ

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e-kerz an daou viz diwezhañ:

MIZ GOHERE :

J. Le Carrer, 70 lur ; R. Brisson, 34 ; M. Aodic, 20 ; J. Cadoret, 5 ; P. Coat, 20 ; A. Le Berre, 10.

- War un dro, 159 lur.

MIZ EOST :

L. Fiaut, 20 lur ; J. Bizien, 5 ; R. Tremel, 50 ; C. Lanchec, 45 ; Y. L'Haridon, 54,40 ; J. Queinnec, 20 ; L. Dorval, 19 ; Y. V. Bouessel du Bourg, 50.

- War un dro : 263,40 lur.

4.034,56 lur a zo degouezhet ganeomp abaoe derou ar bloaz. Bennozh Doue.

747 koumananter

Tizhet he deus AL LIAMM tost da 750 koumananter e-kreiz miz Here, lodennet evel-hen :

Aodoù-an-Hanternoz, 111 ; Penn-ar-Bed, 197 ; Il-ha-Gwinum, 79 ; Liger-Izelañ, 44 ; Mor-Bihan, 52 ; Rannvro Bariz, 128 ; departamantoù all, 68 ; Afrika an Hanternoz, 2 ; Afrika du, 4 ; Iwerzhon, 11 ; Kembre, 13 ; Skos, 2 ; Bro-Saoz, 6 ; Bro-Alamagn, 6 ; Helvetia, 2 ; Izelvroioù, 6 ; Belgia, 3 ; Italie, 1 ; Bulgarie, 1 ; Stadoù-Unanet, 3 ; Kanada, 4 ; Haiti, 1 ; Aostralia, 1 ; Ceylan, 1 ; Japan, 1.

Kerse a c'heller kaout pa ne gresk ket buanoc'h niver hol lennerien. Ma vije graet kont an holl o deus heuliet kentelioù brezhonek abaoe 10 vloaz da skouer, e seblantfe, e-kichen, disterik hor sifrenn a 747. Met, gouzout a reomp e vez un toullad a zeskerien o tiskregiñ, o kaout re ziaes ar striv (ha koulskoude n' eo ket ken diaes-se, rak gwelout a reomp hiniannoù o kregiñ da vat ganti o tont da vezañ gouest da lenn ha da gomz zoken goude ur bloaz studi). A-hend-all, an dud o deus abegoù " mat " : kalz a gelaouennoù 'zo ha n' heller ket prenañ an holl, n' eus ket a amzer evit lenn, ar skridoù a zo tra dister ha gwelloc'h eo klask stourm en ur gomz, Al Liamm a zo re bolitikel, pe n' eo ket a-walc'h, daou zoare-skrivañ a zo, da lavarout eo unan a re, h.a., h.a. An diseblanted a zo bras, zoken e-touez ar re wellañ ac'hanomp ; da skouer, goude galv ul lenner evit ar 1 000 koumananter embannet en niverenn 159, pajenn 313, hon eus gounezet betek bremañ ul lenner nevez.

E dibenn ar bloaz e vo 800 koumananter marteze, hag ar 1 000 koumananter a vo tizhet a-benn 2 vloaz pe 3 hepken, ma ne zegouezh kemm ebet e doare an Emsav.

N' ankounac'haomp ket avat hor profourien, niverus a-walc'h ha brokus, a vez roet ar roll anezho e pep niverenn. Sed un doare all - ha n' eo ket dister - da skoazellañ AL LIAMM, da c'hortoz an niver bras a lennerien.

P. A. B.

Lizhiri

Digant J. Q. - « Setu gant plijadur va adkoumanant. Astennit, mar gellit an notennoù. »

RESPONT : *Goulenn a reomp digant hol lennerien kas deomp notennoù pa gav dezho e talvezont ar boan. Gant plijadur eo e lakaimp anezho amañ bep gwech ma kavimp mat. Ret eo, avat o skrivezañ en un doare splann ha war un tu hepken.*

Digant P. P. - « Lennet em eus " An Intañvez Arzhur ". Plijus eo da lenn. Bez e kaver enni, da gentañ un daolenn eus buhez an dud e-barzh ur vourc'h e Bro-Leon e derou ar c'hantved, hogen ar pezh a denn un tammig d' ar reuz-c'hoari ha ne dalv ket ar pezhioù-c'hoari all ; bez e c'hellfe bezañ keñveriet marteze ouzh pezhioù - dramaoù gwirvoudelour - a veze savet d' ar mare-se gant Ibsen ha Strindberg da skouer. Ar pezh a zo dibar e Malmanche eo marteze roll drastus ar garantez, hag ez resis karantez ar c'horf, hag e c'heller degas da soñj " An Antekrist ", e-lec'h m' eo dasprenet Fontanelle gant karantez Mari, dre m' o deus nac'het karantez ar c'hig. »

Digant L. B. - « Lennet em eus war " Al Liamm " diwezhañ ur galv graet gant ul lenner evit tapout ar 1 000 koumananter a-benn ar bloaz nevez.

« Kas a ran deoc'h enta ur c'houmanant-skoazell evit ur c'heneil yaouank eus Bro-Leon. Mar deo ar paotr-mañ koumanantet dija, kasit ar gelaouenn da unan bennak all eus hoc'h anaoudegezh. »

Spi hon eus e vo meur a goumananter oc'h ober kemend-all.

Digant M. N. - « Skrivañ a ran al lizher-mañ evit goulenn diganeoc'h lakaat va mignon da vezañ koumananter " Al Liamm ", ha war un dro e kasan deoc'h ur chekenn a 30 lur.

« Va mignon 'zo aet da Vro Amerika ar bloaz-mañ, hag emañ o vevañ eno bremañ.

« E vakañsoù emaoeoc'h ? Ur bern labourioù 'zo ganeoc'h, sur mat. Kalon deoc'h ! Emaon-me o labourat en un atant e Gwinevez, e ti Chapalain (maer Gwinevez) a anavezit marteze. Chom a ran amañ betek fin ar miz hag ec'h in da Rosko da c'houde, da droc'hañ bleunioù, sañset. » - (M. N. a zo japanat.)

Digant R. G. - « Kalz a blijadur am eus kavet o lenn skrid ar C'hivijer e niverenn diwezhañ ar gelaouenn ha spi am eus ne chomo ket sac'het o kontañ darvoudoù ar mare-se. Pa dremenis un nebeut mizioù goude dre Fuentarrabia, e kavis ur graffiti war voger wenn ar gambr ma kousken, skrivet gant ur c'hreion du : " Bevet Breizh ". Frealzet e voen o c'houzout ne vijen ket va-unan-penn e bro ar " C'hastañetas ". »

Digant J. A. - « Laouen e vijen (ha meur a hini ganin) o c'houzout petra e teu da vezañ al labour evit dont d'un emglev diwar-benn an doare-skrivañ. Petra a zo graet ? Peur e vo echu al labour ? Ha mont a ra mat an traoù ? »

Ne c'hellomp respont nemet dre al lizher-kelc'h a zo bet kaset deomp hag a vo kavet pelloc'h. Eno e vo kavet ar c'hinnigoù m'eo 'n em gavet an dileuridi a du gante.

386

K.E.A.V. 73 e Kintin

E Kintin eo bet dalc'het K.E.A.V. ar bloaz-mañ, eus an 13 d' an 28 a viz Gouhere. Klasket e oa bet nevezif stumm ar c'helenn, met ar skolidi o deus kavet gwelloc'h distreiñ d' ar stumm diaraok. Setu e veze kentelioù bep beure, hervez

rez deskadurezh ar skolidi. Goude kreisteiz ec'h ae an dud da bourmen tro-dro da Gintin.

Prezegennoù a veze ivez, pe reishoc'h, taoliadoù digor. Da skouer, deut eo Malo Louarn da gomz eus " ar gumuniezh ", pe Yeun Gourvez eus " an alkoolegezh e Breizh ", pe c'hoazh Gwennole ar Menn diwar-benn " an anvioù-badez ". A-hend-all e teuas an aotrou Bourdelles da gaozeal diwar-benn ar sevenadur.

E-kichen ar c'hentelioù-se e veze, evel just, abadennoù diduañ. Tro hon eus bet da glevout Andrea ar Gouilh o kanañ, da welout diapozitivoù degaset eus Kreiz Amerika gant Bernez an Nailh, ha da sellout ouzh " Un den a netra ", gant Roparz Hemon, c'hoariet kaer gant strollad L. Andouard. Kement-se hep kontañ div weladenn da stalioù-labour eus ar vro, ur gazetenn bemdeziek graet gant tud ar c'hamp, beilhadegoù ha kalz traoù all a bep seurt.

145 a dud en holl zo deut da gamp Kintin, ha d' ar 27 a viz Gouhere e voe un arnodenn eus an Trec'h Kentañ.

Setu amañ roll an dud o deus c'hoariet " An den a netra " er c'hamp, d' ar 24 a viz Gouhere :

Rozenkrañs	LOEIZ ANDOUARD
Van Armeck	Y. G. EMEILLAT
Ar micherour	YANN KOROLLER
Ar mevel (kozh)	YANN KEFELEAN

Arnodenn en Trec'h Kentañ tremenet e Kintin.

Degemeret eo bet : Youenn ROSMORDUC, meneg mat ; Yann KEFELEAN, meneg mat ; Itr. Mona ROBIN-GABORY, meneg mat ; Divi KERVELLA, meneg mat a-walc'h ; Franseza BOUVIER, meneg mat a-walc'h ; Herve SIRIBIL ; Sabine SOUFFES.

Kuzul Ar Brezhoneg. - Bodadeg-veur an diskaramzer

Bodadeg-veur Kuzul Ar Brezhoneg a zo bet dalc'het e Menez-Kamm, d' ar Sul 7 a viz Here gant ar burev ha dileuridi an 18 kevredigezh sevenadurel a genlabour start etrezo.

Studiet eo bet dreist-holl emled ha kudennoù kelennerzh ar yezh er skolioù, er strolladoù sevenadurel hag er c'hampoù-hañv. Divizet eo bet ivez ledañ, nevesaat ha brudañ muioc'h c'hoazh ar c'hentelioù brezhoneg dre gomz kaset war-raok gant kelennerien Skol Ober.

Da geñver pourmenadenn bolitikel ar C'hentañ Ministr gall, Messmer, e darn eus rannvroioù Breizh, ez eus bet termenet pehini a vo emzalc'h ar C'huzul : evit-se ez eo bet savet gant an dileuridi un diskleriadur o tiskouez peseurt muntr danvezel ha speredel a ra ar Stad c'hall e Breizh abaoe kantvedoù, hag o c'houlenn e ve kemmet penn-da-benn ar politikerezh-gwaskañ-se, dre reiñ d' ar Vretoned ar frankizoù o deus ezhomm evit bevañ evel gwir Vrezhoned en o bro.

Mouezhiadegoù a zo bet graet evit envel ur burev nevez a vo e karg e-pad ur bloavezh. Adanvet eo bet Yann Talbot evel kadoriad. Ar pevar izili all eus ar burev a zo : Itron V. de Bellaing ha Yann ar Beg, adanvet o daou ; daou ezel nevez a zo bet anvet : AoAo. G. Dubourg ha Bernez an Nailh.

Kentañ bodadeg da zont, hini an Nevez-amzer, a vezo dalc'het e Menez-Hamm, d' ar Sul 31 a viz Meurzh 1974.

Ar c'hadoriad r Yann TALBOT.

Hor Yezh

Niverenn 88 **Hor Yezh** a gaver enni ur strobard barzhonegoù gant Anjela Duval bet embannet a-raok 1973. Ar barzhonegoù all skrivet a-raok 1973 a vo embannet er gelaouenn " Skol ". En doare-se, gant dibab Ronan Huon, bet embannet el levr " Kan an Douar ", e vo klok barzhaz Anjela Duval. - Koumanant : 20,00 lur. P. Denis c.e p. 1499-51 Rennes.

Deiziadur godell Al Liamm

Deut eo er-maez Deiziadur godell Al Liamm evit ar bloavezh 1974. Ar priz a vo 10,00 an dek. Evel boaz, lod e kaver war o c'hein bruderezh evit " Al Liamm " ha daou grennlavar, lod a zo gwenn ha war lod all e kaver ar meneg " Bloavezh mat ". Dav eo, eta, resisaat pere a garfer kaout.

Kasit ho chekenn gant ho koulenn da : R. Huon, c.c.p. 1629-14 Rennes. Distaol 1/3 adalek 50 skouerenn.

Herve ar Menn ha " Skingomz ha Skinwel "

Meur a gelaouenn he deus embannet, e brezhoneg koulz hag e galleg, pennadoù evit lavarout stourm diehan an den didrouz-se evit Breizh. Evidomp-ni, tud " Skingomz ha Skinwel ", ne ankounac'haimp biken ez eo bet eñ, e gwirionez, krouer hor C'hevredigezh. Pa voe meneg e 1956 (tremen a ra an amzer !) da sevel anezhi, eñ eo a baeas, gant arc'hant gounezet gantañ o seniñ en abadennoù harluidi hor bro e Pariz, koulz lavarout, holl ar frejoù kentañ. En doare-se e oa bet tu d' ober bruderezh, da voulañ paper lizher, goloioù, karnedoù timbroù " Brezhoneg er Radio ", h.a., ha d' ober an enklask bras evit goulenn digant hor c'henvroidi peseurt danveziou a blijfe dezho ar muiañ er skingomz. An dra-se, holl a-gevret, a dalvezas un toullad mat a zispignoù ne vije bet tu ebet d' o ober hep e skoazell, rak morse (ar pezh ne c'hell ket fougeal meur a gevredigezh all !) n' hon eus resevet netra digant an departamant pe zoken ar Stad. Ra chomo eta e eñvor da viken en hon touez.

A. O.

388

Relijion

Ur retred evit brezhonegerien gatolik an Emsav a zo bet dalc'het e Louaneg d' ar 7, 8 ha 9 a viz Gwengolo. Renet e oa gant an aotrou L. ar Floc'h, person Louaneg, sikouret gant beleien all. An danvez a oa : " Ar Feiz ha diaesterioù ar Feiz en amzer-vremañ ".

Minikasedig " Kentelioù brezhonek " (eil derez)

Daou vloaz zo eo bet embannet levr Per Denez " Kentelioù Brezhonek ". Er miz-mañ (Gwengolo 73) emeur o paouez lakaat da zont er-maez an Enskrivadur war vinikasedig eus an holl destennoù studiet el levr. 25 testenn gant Jarl Priel, Jakez Riou, Roparz Hemon, Ronan Huon, Youenn Drezen, Fañch Elies, Meavenn, Yann Ezel, Jakez Konan, D. K. Kongar. Lennet eo ar skridoù gant Lukian Kergoat, Gwendal Denez ha Jaklin Saliou. Padout a ra ar vandenn tost da un eur ha kard.

Ar priz a zo 30,00 lur. Mlle J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp - c.c.p. 1136-82 Rennes.

Pobl Vreizh

Tro hon eus bet da brenañ ur skouerenn eus " Pobl Vreizh " stumm nevez e-kerz vakañsoù an hañv. An niverenn 42 e oa 6 pajenn enni. Ar gelaouenn-mañ a zo eus an tu kleiz, miziek eo ha brezhoneg penn-da-benn. An hini nemeti ez eo. Diskouezet eo brav ha skeudennet.

War-lerc'h ar mouezhiadegoù

Setu amañ ar skritell a zo bet peget war murioù Sant-Brieg gant emsaverien Strollad ar Vro war-lerc'h ar mouezhiadegoù :

« Votadeg evit Kanton Sant-Brieg norz. Trugarekaat a reomp a-greiz kalon holl voterien ar c'hanton o deus lakaet o fiziañs ennomp e votadeg disul diwezhañ.

389

S.A.V. a zo aet war-raok-kaer e Breizh a-bezh, ha dreist-holl er c'hanton-mañ e-lec'h m' emañ dirak an Aotrou Bensimon, mignon an Aotrou Mitterand.

Goulenn a reomp ouzh hon holl izili ha mignoned hor strollad, chom hep votiñ pe votiñ nul en eil tro, disul kentañ.

Dic'hallus-krenn eo deomp reiñ hor mouezh da unan pe egile eus an daou zen a chom dirazoc'h : a-du int, penn-kil-ha-troad gant menozioù jakobin ha kreizenner ar Stad C'hall.

Ni a zo kreñvoc'h bremañ gant niver ar mouezhioù o kreskiñ. Kenderc'hel a raomp gant hor c'hinnig dirazoc'h, gant ar memes youl ha nerzhioù nevez degaset ganeoc'h d' ar stourm evit Breizh.

Ho kervel a reomp da stourm ganeomp evit Breizh dieub e-barzh Europa ar pobloù kevredet.

Evit Strollad ar Vro.

Ar c'handidat Lukian Raoul. »

Ar studioù keltiek e Skol-veur Roazhon

Gant Skol-veur Breizh-Uhel, e Roazhon, e vez roet an daou desteni : « Diplôme d'Etudes Celtiques ha Diplôme Supérieur d'Etudes Celtiques », d' an dud kavet barrek. Evit tremen, e ranker en em enskrivañ er Skol-veur : evit-se, skrivañ da : Monsieur le Directeur de la Scolarité, Université de Haute-Bretagne, Rennes Villejean, en ur c'houlenn an teuliad paperioù a zo ezhomm evit en em enskrivañ. N'eus ket ezhomm kaout testeni all ebet, ket zoken ar vachelouriez, evit en em enskrivañ.

Evit an Diplôme : dre skrid, troidigezh e brezhoneg ha troidigezh diwar ar brezhoneg ; dre gomz, diviz diwar-benn unan eus an oberennoù lennegel war ar roll, ha diviz diwar-benn istor ar yezhoù keltiek ha sevenadur ar pobloù keltiek.

Evit an Diplôme Supérieur : dre skrid, troidigezh e brezhoneg ha

troidigezh en ur yezh keltiek all ; dre gomz, diviz diwar-benn unan eus an oberennoù war ar roll ha diviz diwar-benn istor ar yezhoù keltiek ha sevenadur ar pobloù keltiek : muioc'h a vez goulnnet anat eo eget evit an Diplom.

ROLL AN OBERENNOÙ DA STUDIAÑ E 1973-1974

Brezhoneg a-vremañ.

Diplôme d'Etudes Celtiques.

Youenn Drezen : Skol-Louarn Veig Trebern, Levr II.

Tangi Malmanche : An Intañvez Arzhur.

Meavenn : Ar Follez Yaouank.

Anjela Duval : Kan an Douar.

Diplôme Supérieur.

Youenn Drezen, Skol-Louarn Veig Trebern, Levr III.

Tangi Malmanche : Buhez Salaun.

Roparz Hemon : Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh.

Notennoù diwar-benn al lennegezh : Abeozen, Istor al Lennegezh a-vremañ.

390

Istor ar brezhoneg ha yezhoù keltiek all.

Istor ar yezh.

Arzel Even : Istor ar Yezhoù Keltiek.

L. Fleuriot : Le Vieux Breton, éléments de grammaire.

Kenneth Jackson : A Historical Phonology of Breton.

G. Pennaod : Dornlevr Krenn-Brezhonek.

Evit an Diplom kentañ e c'houlenner un anaoudegezh dre vras eus ar gudenn ; evit an Diplom Uhel e ranker gouzout traoù resisoc'h.

Rannyezhoù (Diplom Uhel).

Evit an Diplom Uhel : studiañ un oberenn bennak, e forzh peseurt rannyezh, dibabet gant an hini a dremen an arnodenn.

Kembraeg (Diplom Uhel).

Ur pennad eus ar Mabinogi, embannet gant " Preder " gant un droidigezh e brezhoneg.

Ur pennad en ul levr a-vremañ dibabet gant an arnodennad.

Kernevek (Diplom Uhel).

G. Pennaod : Dornlevr Kernevek, Hor Yezh.

Caradar : Cornish Simplified.

Iwerzhoneg a-vremañ (Diplom Uhel).

Diviz en iwerzhoneg eeun ha studiañ ur pennad aes a-walc'h.

Sevenadur keltiek (Diplom kentañ ha Diplom Uhel).

Hubert : Les Celtes, 2 levrenn, Paris 1932.

Fr. Le Roux : Les Druides, PUF, Paris 1961.

Fr. Le Roux : Introduction générale à l'étude de la Tradition Celtique I (Celticum XIII), Rennes 1967.

Doare-skrivañ ar brezhoneg

Pedet omp da embann ar c'hinnigoù-mañ da heul bodadeg an 28 a viz Gwengolo 1973 e Karaez :

« E-doug an unnek bodadeg-studi bet dalc'het etre dileuridi an daou zoare-

skrivañ implijetañ evit ar brezhoneg, eo bet savet ha degemeret roll ar poentoù a zo bet emglev diwar o fenn.

1) Lakaat **b, d,** ha **g** e-lec'h **p, t** ha **k** e dibenn ar gerioù, hervez an deveradur, hep diforc'h ebet etre anv-kadarn hag anv-gwan.

2) Kudenn ar **c'h.**

Skrivañ **c'h** war-lerc'h ar, ur, er, er gerioù o kregiñ gant k. Chom a ra ar peurrest da vezañ studiet.

3) An dibenn verboù.

a) Skrivañ -mp e-lec'h -m (gwelomp e-lec'h gwelom).

b) Skrivañ -añ (prenañ), -iñ (debriñ) e-lec'h -a (prena) hag -i (debri).

k) Skrivañ **ema** e-lec'h **emañ**.

4) Skrivañ -añ (gwellañ) e-lec'h -a (gwella) en derez uhelañ.

391

5) Ar ger-mell.

Skrivañ **un, ul, ur** e-lec'h **eun, eul, eur**.

6) Chom hep skrivañ ar c'hemmadurioù S/Z, F/'F, CH/J, C'H/H.

7) Al liesterioù en « où » pe « ou ».

Skrivañ où (stumm ret evit al levrioù-skol).

8) An -ao- / -ô-

Skrivañ -ao- (paotr e-lec'h pôtr).

9) An -ae- / -ê- / -ee-

a) Skrivañ *dàel, impalàer, pàeron, màeron, dàer (daerou), làer, màer, kàer* gant -àe-.

b) Skrivañ -ae- en holl anvioù nemet ar re bet meneget uheloc'h.

k) Er verboù skrivañ -ae- e-lec'h -ee- pe -ê-.

10) An -iv, -iou, -iw - An -ev, -eo - An -av, -ao :

a) Lakaat ur **v** e-lec'h un **o** e gerioù 'zo : levr, revr, gavr...

b) War-lerc'h ur vogalenn :

- e dibenn ar gerioù, skrivañ **-w** (braw, hiziw pe hiriw, tew, bew, piw, liw, ataw...) nemet sav, fav, gov, trev (dav ? Skrev ?) ;

- e-kreiz ar gerioù, skrivañ **-v** (bevet, bravoc'h, livet...) nemet delwenn.

c) War-lerc'h ur gensonenn e dibenn ar gerioù :

- mirout ar **v** war-lerc'h un **l** (galv, palv, malv...) ;

- **o** pe **w** goude ar c'hensonennoù all (baro/barw ; dero,/derw ; maro/marw ; mezo/mezw ; azo/azw ; ano/anw ; garo/garw ; karo/karw ; taro/tarw ; bero/ berw ; ero/erw ; c'hwero/c'hwerw ; bano/banw ; lano/ lanw ; bezo/bezw...) nemet kenderw, keniterv, enderv...

Kemennadurioù

An Ao. V. Seite a gemenn deomp evel bep bloaz stad e skol dre lizher. Bet en

deus er bloavezh 1972-73, 806 skoliad enskrivet en e skol. 412 o vezañ paotred ha 394 merc'hed. Al lodenn vrasañ a oa eus Penn-ar-Bed (372), Pariz (268), departamantoù gall (112) goude e teu departamant al " Loire-Atlantique " (42).

Al lodenn vrasañ anezho a zo studierien (399), kelennerien ha skolaerien (94), implijidi (63), micherourien (33) ...

*

« E brezhoneg eo bet livet ar panelloù-lec'h e Breizh un tamm e pep lec'h e-pad penn kentañ miz Here.

N' eo ket war ar prim na diwar skañv e c'hellfe tud a bep korn en em glevout. Degas a reomp da soñj deoc'h eo bet graet kemend-all e meur a lec'h ha meur a wech dija.

Mirout da vougañ sevenadur Breizh hag ar Vretoned a fell deomp !

Rak mouget eo sevenadur Breizh gant ar vourc'hizien evit gounit aresetoc'h ha muioc'h diwar goust labourerien Vreizh. Lakaet eo bet ar Vretoned da vezañ estrenien en o bro, torret eo bet o nerzh kevredigezhel, ha setu int proletaerien doñv.

392

Dalc'het 'vez gant ar gwaskerezh sevenadurel, a-wechoù war zigarez bezañ demokratel. Er skolioù evel er skinwel hag er skingomz eo dister-tre lec'h ar brezhoneg, e-barzh ar straedoù eo bihanoc'h c'hoazh.

Poent eo stourm, ha n' eo ket e kuzh, n' eo ket o c'houlenn digant ar gouarnamant traoù na vo morse roet. Krog eo ar bagad " brezhoneg bev " da stourm war dachenn ar panelloù-lec'h, o c'houlenn digant an holl emsaverien en em lakaat en taol, hag o c'houzout ervad n' eus ster ebet gant ar stourm-se en diavaez eus ar stourm sevenadurel, en diavaez da stourm al labourerien da ziskar ar gevalaouriezh. »

" Brezhoneg ber " - Bodadoù stourm evit ar brezhoneg.

Livadurioù Isold ar Maho

Oberennoù Isold ar Maho, unan eus lennerezed " Al Liamm " a zo bet diskouezet en Orañjezti al Luxembourg, e Pariz, eus ar 7 d' ar 25 a viz Gwengolo. Hor gourc'hemenoù d' an arzourez.

" La technique de la peinture à l'huile "

Al levr savet gant hor c'heneil ha kenlabourer Zavier Langleiz, brudet ha troet e meur a yezh, zoken e japaneg, a zeuio er-maez dizale un adembannadur klokaet anezhañ. Hor gourc'hemenoù d' ar skrivagner ha d' an arzour, en deus diskouezet e vestroniezh war veur a dachenn.

Ur film brezhonek hag e brezhoneg

" Tri pri ", setu talbenn ar film savet gant Fulub Cassard, fiñvskeudenner breizhat. Ur film berr eo, rak ne bad nemet 19 munutenn. Kontañ a ra buhez ur c'houblad labourerien-douar gozh, an ozhac'h hag ar wreg, bet dek bugel dezho,

hag a zo taget a bep tu gant tud ar vuhez a-vremañ, renerien ar gevredigezh a bren o laezh, gwerzher an ardivinkoù labour-douar hag a nac'h kempenn o stlejerez kozh, an amezeg yaouank a arallvro a c'hortoz o marv evit prenañ o douaroù da ledanaat e atant. Plegañ a ra annezerien " di-pri " d' o zonkadur, hep kasoni. Hogen, er film, ur pennad lennet gant Alan Stivell a son ennañ heklevioù a emsavadenn hag a spi. Nann, kouerien Vreizh n' int ket kondaonet da c'houzañv diglemm ha da vont da get ! Nann, ar brezhoneg n'eo ket e donkadur an ankounac'h hag ar marv ! Ret eo d' ar Vreizhiz adkavout o feiz hag o c'halon ha neuze e kemmo an traoù. Kroget o deus endeo da gemmañ.

Lod eus ar film a zo eilet gant sonerezh Beethoven, " Dismantroù Athena ", pa zeu war ar skramm skeudenn an tiez-feurm rivinet. Ar film en deus bet ur priz da geñver Festival Oberhausen e 1973. Prenet e vije bet a-hervez gant pellwellerezh Bro-Alamagn hag anavezet e vo e meur a vro a-raok d' ar Vretoned e welout, rak ne dremeno ket, anat, dre an urzhiadurioù kenwerzhel boas. Da c'houzout muioc'h war ar film, e c'heller goulenn digant Film-Press, 103, rue Jean-Jaurès, 92170 Vanves.

393

" Tre ha lanv "

Setu talbenn ur rummad barznonegoù, 94 en holl, diwar dorn Youenn Olier, e stumm ul levr roneoskrivet embannet gant IMBOURC'H evel stagadenn. Savet eo bet ar barzhonegoù e-kerz an daou vloaz tremenet. Sed un doare ouzhpenn d' an oberour da zisplegañ e vennozioù ha sed un oberenn ouzhpenn evit klokaat roll hir endeo e labourioù. Mar deo don preder ar barzh, n' eo ket re ziaes ar stumm hag an holl a c'hello prizout ar barzhonegoù kaer-se. Youenn Olier a zo eus ar rummad-se a skrivagnerien ha ne zeu ket ar brud daveto, marteze dre ne reont forzh anezhañ, gwelloc'h ganto kenderc'hel da grouiñ pennek ha fonnus er sioulder. -

P. A. B.

Priz al levr barzhonegoù a zo 11,00 lur, da gas da Y. Ollivier, c.c.p. 1534-25 Rennes.

Ar brezhoneg er skingomz

Brezhoneg a c'heller klevet e-barzh ar post :

- Bemdeiz (nemet da sul), da un eur nemet 17, war Radio Brest ha Kimerc'h (201 ha 214 m. P.O.).
- Bep Sadorn da noz, etre 6 eur ha 7 eur, war France Inter (M.F.).
- Bep Sul da greisteiz, etre un eur hanter ha div eur hanter, war Radio Roazhon, Brest ha Kimerc'h (423, 214 ha 201 m. P.O.).

hag er Skinwel :

- Div wech ar miz, d' ar Merc'her, da un eur hanter goude kreisteiz, e c'heller gwelout war skinwel Breizh, an abadenn vrezhoneg " BREIZH O VEVAÑ ".

- D' ar Meurzh ha d' ar Gwener da noz, war-dro 7 eur hanter, e klever ivez ur ger bennak e brezhoneg.

An tan e ti hor mignoned Al Louarn hag Ar Mee

Degouezhet eo ar gwallzarvoud-se d' ar sadorn 13 a viz Here, en ti 30 Plasenn al Lisoù, e Roazhon, an tan o kregiñ en ur pezh-arboellañ e labouradeg Herve ar Mee. Ranket o deus paotred an tan sevel o skeulioù evit tennañ er-maez lod eus

an annezidi. Damzistrujet eo bet an ti, hogen, dre eurvad, n' eus bet den gloazet. Ranket he deus hepken an Itron ar Mee bezañ kaset d' an ospital goude bezañ analet re a voged.

394

AR BROIOÙ BIHAN

gant Per Penneg

Ar votadegoù-kanton.

Dalc'het eo bet war diriegezh ar Stad c'hall votadegoù-kanton e-doug miz Gwengolo 1973 : danvezioù-kuzulier rannvroelour pe broadelour a zo bet kinniget e meur a ganton er broioù dindan dalc'h Bro-C'hall, hogen e Breizh dreist-holl.

BREIZH.

Studiadennoù diwar-benn ar votadegoù a zo - pe a vo - embannet er c'helaouennoù breizhat ; menegiñ a rin dreist-holl ar studiadenne embannet gant " La Nation Bretonne ", dre ma 'z eo hir (22 pajenn en niverenn 5), resis ha klok, diuntuek ivez, hogen kavet e vez dezrannoù all e niverennoù miz Gwengolo " Le Peuple Breton " ha " L'Avenir de la Bretagne ", hogen ne vez ket kavet an holl sifroù er studiadennoù-mañ.

Bez' e c'heller keñveriañ disoc'hoù ar votadegoù-kanton e Breizh ouzh re ar votadegoù dalc'het e miz Meurzh (kv. " Al Liamm ", niv. 158, pp. 233-237) doareet int dreist-holl gant an devoudoù-mañ : Araokadennoù ar P. S. dre Vreizh a-bezh (ar skouer splannañ a zo ar sezioù gounezet e holl gantonioù Brest), kiladenn ar P. S. U., stabilded dre vras ar P. C. F. (gounidoù ha kolloù en deus bet e gwirionez), kolloù an tu-kreiz ha gounidoù bihan ar strolladoù a-du gant ar gouarnamant. Setu an doareoù pennañ ; aliet eo ar re a fell dezho gouzout hiroc'h da lenn ar studiadenne embannet war " La Nation Bretonne ".

Setu an disoc'hoù evit ar strolladoù breizhat :

SAV en deus kinniget 13 danvez-kuzulier-kanton, o deus bet en holl 4.299 mouezh, ar pezh a ra 4,98 % eus ar mouezhioù eztaolet, tra m' en doa bet 2,60 % e votadeg miz Meurzh.

Tizhet eo bet ar sifr uhelañ e kanton Lanniliz, e-lec'h m' en deus J. F. Kervern gounezet 14,53 % eus ar mouezhioù. P. Cadalen, bet danvez-kannad SAV e miz Meurzh, en deus gounezet ar wech-mañ 24,69 % eus ar mouezhioù e kanton Gwitalmeze hogen en em kinniget en doa ar wech-mañ " hep skritell " ha ne c'heller ket neuze lakaat anezhañ war al listenn.

Mat a-walc'h eo bet ivez an disoc'hoù e Roazhon, Sant-Brieg ha Monkontour : kinniget e oa bet un danvez-kannad e c'hwec'h kanton e Roazhon ha tizhet o deus an dregantad keitat a 4,58 % (6,59 % e Roazhon-I), L. Raoul en deus bet 5,82 % e Sant-Brieg, ha L. Chapel 4,96 % e Monkontour (n'en doa bet nemet 1,65 % evel danvez-kannad e pastell-bro Loudeag) ; an tregantadoù tizhet er c'hantonioù all a zo izeloc'h, hogen atav uheloc'h eget ar re gounezet e miz Meurzh ; souezhus eo koulskoude n' eus bet kinniget danvez-kuzulier ebet e Kastellbriant ha Felger, e-lec'h m' en doa bet SAV disoc'hoù mat e miz Meurzh.

395

UDB he deus kinniget 8 kuzulier-kanton, o deus bet 3.191 mouezh, ar pezh a ra 4,82 % eus ar mouezhioù eztaolet ; UDB he deus tizhet disoc'hoù mat e Brest (6,75 % e Brest-IV, 5,86 % e Brest-I) hag en Oriant (6,72 %), tra m' eo izeloc'h an tregantadoù gounezet gant an danvezioù-kuzulier kinniget e Roazhon hag e Naoned.

SKB en doa kinniget un danvez-kuzulier e kanton Staol ha bet en deus 2,78 % eus ar mouezhioù.

Bez' e c'heller merkañ neuze :

1) Ar strolladoù breizhat o devez kalz muioc'h a vouezhioù er votadegoù lec'hel eget er votadegoù hollek ; SAV hag UDB o doa bet a-gevret e miz Meurzh 2,59 % eus ar mouezhioù ; e miz Gwengolo SAV en deus bet 4,98 % hag UDB 4,82 % ; pouezus eo evit ur strollad politikel nevez tizhout 5 % eus ar mouezhioù. Evit an dregantad keitat n' eus ket kalz a ziforc'h etre an daou strollad, diaes eo keñveriañ al levezon o deus war ar voterien, hogen bez' e c'heller merkañ e ra gwelloc'h UDB en Oriant hag e Brest hag e ra gwelloc'h SAV e Roazhon hag e Sant-Brieg.

2) Izel e chom c'hoazh kouiskoude niver ha treganted ar mouezhioù, nemet e kantonioù 'zo ; hogen ar strolladoù gall ne c'hounezont ket alies kalz muioc'h : e Brest-I da skouer, UDB he deus bet 5,86 % hag ar PCF 11,6 % ; e Roazhon-I, SAV en deus bet 6,60 % hag ar PCF 7,9 % ; e Sant-Nazer, SAV en deus bet 3,7 % hag ar PSU 4,6 % ; skouerioù all a c'hell bezañ kavet. Gwechoù 'zo zoken danvez-kuzulier UDB pe SAV a zeu a-raok danvezioù-kuzulier ar strolladoù gall : E Lanniliz, J. F. Kervern (14,53 %) a zeu a-raok ar PS (10 %) hag ar PCF (1,4 %) ; e Sant-Brieg, L. Raoul a zeu a-raok ar PS ha n' eo ket pell diouzh ar PSU (9,50 %) ; Saint-Laurent e Plistin n' en deus nemet 78 mouezh nebeutoc'h eget ar PS. Ma vefe lakaet da dalvezout an dilenn kenfeurel, ar strolladoù breizhat a rafe muioc'h a verzh, evel ar Volksunie e Flandrez : 3,4 % eus ar mouezhioù he doa bet e 1958, 6,2 % e 1961 hag ouzhpenn 20 % e 1971.

« Sevel a ra diwezhat an heol pa vez re a gilheien o kanañ. »
(Krennlavar sinaat kinniget d' an Emsav.)

396

Departamant ha kanton

Penn-ar-Bed :			Mouezhioù	%
Brest-I	P. Le Bras	(UDB)	354	5,86
Brest-II	M. Herjean	(SAV)	203	3,03
Brest-IV	R. L'Hostis	(UDB)	532	6,75
Lanniliz	J. F. Kervern	(SAV)	929	14,53
Kastell-Paol	Y. Ilvoas	(UDB)	327	3,83
Kont-Kerne	M. Beaufrère	(SAV)	259	2,99
Aodoù-an-Hanternoz :				
Monkontour	L. Chapel	(SAV)	231	4,96
Plistin	E. de Saint-Laurent	(UDB)	190	3,69
Sant-Brieg-Norz	L. Raoul	(SAV)	595	5,82
Staol	A. Le Coq	(SKB)	111	2,78
Mor-Bihan :				
An Oriant-II	J. Guegan	(UDB)	1181	6,72
Il-ha-Gwilun :				
Roazhon-I	Y. Bouessel du Bourg	(SAV)	269	6,59
Roazhon-II	A. Baron	(SAV)	228	4,81
Roazhon-III	M. Danveau	(SAV)	245	5,40
Roazhon-VI	P. Roy	(SAV)	238	4,22
Roazhon-VIII	R. Gorvan	(SAV)	305	4,46
Roazhon-X	J. P. Letort	(UDB)	189	3,51
Liger-Atlantel :				
Naoned-I	L. Divard	(SAV)	228	3,19
Naoned-V	A. Tassel	(UDB)	247	2,72
Naoned-VI	A. Russon	(UDB)	221	3,06
Sant-Nazer-Kornog	Patru	(SAV)	402	3,69

Holladoù	(SAV)	4299	4,98
	(UDB)	3191	4,82
	(SKB)	111	2,78

397

Kinniget eo bet danvezioù-kuzulier gant ar strolladoù rannvroelour pe vroadelour e Elzas, e Korsika, e Katalounia-Norz ; Enbata n' en doa kinniget danvez-kuzulier ebet ar wech-mañ.

ELZAS :

An Emsav " Elsaas-Lothringen " en doa kinniget daou zanvez-kuzulier, unan e Zabern (n' hon eus ket kavet an disoc'hoù) hag an eil e Strassburg-VIII, e-lec'h m' en deus G. Moschenross gounezet 12,35 % eus ar mouezhioù, o tont war-lerc'h ar ministr Bord, danvez-kuzulier UDR, hogen o tont a-raok izili ar strolladoù all : Kreizenn Demokratel, PS, PSD, PCF ; niver ha tregantad mouezhioù G. Moschenross o deus kresket zoken da eil tro ar votadeg : 13,27 %.

Ar Strollad Kevreadelour Europat en doa kinniget daou zanvez-kuzulier e departamant ar Roen-Uhelañ : unan e Altkirch (n' hon eus ket bet ar sifroù) hag an eil e Andolsheim, e-lec'h m' en deus bet 8,62 % eus ar mouezhioù, o tont kalz a-raok izili ar PS hag ar PCF.

KORSIKA :

N' eus nemet ar PCP (Partitu Corsu per u Progresu) en doa kinniget danvezioù-kuzulier ar wech-mañ, ar strolladoù korsat all o doa kavet gwelloc'h chom hep hen ober. Kinniget en deus ar PCP danvezioù-kuzulier e holl kantonioù Ajaccio ; n' en deus ket gounezet kalz mouezhioù ; setu an tregantadoù en deus tizhet :
- Ajaccio-I : 3,00 % ; Ajaccio-II : 1,42 % ; Ajaccio-IV : 1,33 %.

Kinniget en deus ar PCP un danvez-kuzulier evit eil tro ar votadeg e kanton Due-Sevi, ha daoust ma oa ur stourm etre an Tu-Kleiz hag an UDR, ezel ex PCP en deus bet 222 mouezh, ar pezh a ra 9,35 % eus ar mouezhioù.

KATALOUNIA-NORZ (Rosellon) :

Kinniget e oa bet un danvez-kuzulier Rannvroelour katalat e Perpinya ; bet en deus 164 mouezh, ar pezh a ra 3,26 % eus ar mouezhioù.

Ar strolladoù rannvroelour, kevreadelour ha broadelour a zo tuet da gemer perzh muioc'h-mui er votadegoù ; un doare eo d' en em ziskouez dirak an dud, da ober abostolerezh ha da vuzuliañ al levezon a c'hellont kaout ; er c'heñver-mañ an disoc'hoù gwellañ zo bet tizhet en Elzas hag e Breizh ; strolladoù 'zo koulskoude (ARC, PPC hag UP e Korsika, ar strolladoù okitaniat, Enbata) o deus kavet gwelloc'h chom hep kemer perzh er votadeg.

Frankiz-estaoliñ e Kaledonia Nevez.

Kanaded Kaledonia Nevez - Melaneziz anezho - a grog da gemer un emskiant politikel ha da c'houlenn ar gwir da virout o fersonelezh vroadel er bed arnevez (lenn Le réveil canaque, " Le Monde ", 7-09-73) ; krouet o deus aozadurioù politikel ; lakaet eo berzh e miz Gouere 1973 war ur gelaouenn krouet gant unan anezho, ar " Seizennoù-gouzoug ruz " ; ar gelaouenn-se, " Wayagui ", embannet e yezh an enezenn Vare, a zo bet berzhet en abeg d' un dekred eus an 29 a viz Kerzu 1922 a harz « embannidigezh war an tiriegezh eus an holl kelaouennoù e yezhoù ar vro (langues indigènes) hep un aotre a-raok roet gant ar C'homiser-Uhel ».

398

Skrivagnerien oukrainat kondaonet d'ar c'hampoù-labour.

Prosezioù a zo bet dalc'het e-doug miz Ebrel ha miz Mae a-enep skrivagnerien oukrainat tamallet dezho a obererezhioù broadelour hag enepsoviedel », kondaonet int bet holl da gastizoù a ya eus 4 da 7 bloavezh kamp-labour. Kavout a reer en o zouez : Ivan Svitlychny, skridvarnour anavezet hag e c'hoar Nadia, Vyatcheslav Chornovil, kelaouenner, Eylen Sverstyuk hag Ivan Dzyuba, skrivagnerien ; daou anezho a zo bet dija toullbac'het ha kondaonet evel ur bern skrivagnerien ha skiantourien oukrainat e-doug ur rummad prosezioù dalc'het e 1966. I. Svitlychny a oa bet toullbac'het e miz Eost 1965 hogen dieubet e mis Ebrel 1966, an tamallidi all o vezañ kaset d' ar c'hampoù.

V. Charnovil, ur c'helaouenner, a savas evit difenn an tamallidi ; kas a reas ul lizher da Sekretour kentañ Poellgor Kreiz ar Strollad Komunour Oukrainat (a oa Piotr Shelest d' an ampoent) evit prouiñ ne oa ket bet graet ar proses hervez al lezennoù ; harpet e oa al lizher war ar studi pizh eus ar Bonreizh soviedel hag eus al lezennoù ; prientiñ a reas ivez ul " Levr Gwenn " war an hevelep kudenn ha kas a reas anezhañ ivez d' ar Poellgor Kreiz ; ur respont en doe : toullbac'het e voe e mis Eost 1967 ha kondaonet da dri bloavezh kamp-labour.

I. Dzyuba a zo ur skrivagner yaouank anavezet evel skridvarnour ; kenlabourat a rae d' ar c'helaouennoù oukrainat ; sevel a reas ul levr goude bac'hidigezhioù 1965, ha kas a reas anezhañ da Sekretour kentañ Poellgor Kreiz hag ivez da Brezidant Kuzul ar Ministred Republik Oukrainia ; el levr-se, anvet " Etrevroadelouriezh pe Rusianekaet (*) ", en em ziskouez a ra evel ur c'heodedour hag ur c'homunour feal, diskouez a ra ez eus ur gudenn en Oukrainia hag er Republikoù all dre m' eo bet dilezet ar pennaennoù leninour eus kevataliezh etre ar broadoù gant Stalin ha Khrushchev hag e vez kaset da benn ur politikerezh-rusianekaet dindan an anv a etrevroadelouriezh. Ne voe ket respontet dezhañ ha ne voe ket embannet al levr hogen taget e voe Dzyuba er c'helaouennoù, met ne voe ket toullbac'het nag heskinet d' ar mare-se.

(*) Troet eo bet al levr e saozneg hag embannet e Londrez e 1968.

Skolioù-Meur an Hañv.

Aozet e vez bremañ bep bloaz Skolioù-Meur Hañv e Okitania hag e Katalounia (kv. " Al Liamm ", niv. 154), hag aozet eo bet unan evit ar wech kentañ e Norz-Euzkadi.

Dalc'het eo bet e dibenn miz Eost e Prada ar 5-vet Unicersitat Catala d'Estiu, aozet gant Ar Grup Rossellones de Estudis Catalas eus Perpinya. Ar bloavezh kentañ (1969) e oa bet daou rummad-studi gant 70 den. Deuet eo hevlene ouzhpenn 500 den, rannet e 15 rummad, pep rummad o studiañ un danvez disheñvel : skiantoù, lennegezh, istor, sevenadur katalat ; c'hoariva, arz, fiñvskeudenn, h.a. An darn vrasañ eus ar berzhidi a oa etre 20 ha 30 vloaz ha niverus e oa ar studierien hag ar gelennerien, kalzig o tont eus Su-Katalounia.

399

Heuilhet eo bet skouer Katalaniz gant Okitaniz, o deus krouet warlene ur Skol-Veur Hañv, a voe dalc'het e Montpelher ; dalc'het eo bet hevlene e Villeneuve-sur-Lot, dindan renerezh Peire Bec, kelenner e Skol-veur Poitiers, ha Robert Lafont. War ar roll-labour e kaved da skouer : kentelioù istor, douaroniezh, lennegezh ha denoniezh Okitania ; bodadoù-studi diwar-benn kudennoù yezhoniezh, kevredadoniezh, jedoniezh, amvevadouriezh hag an hentennoù-eztaoliñ.

Krouet eo bet ivez hevlene ur Skol-Veur Euskarek e Norz-Euzkadi ; dalc'het eo bet e Don-Iban-LUZ d' an 29 a viz Eost betek an 8 a viz Gwengolo. 18 kelenner a oa deuet eus kêrioù an Norz hag ar Su evit kelenn eizh danvez : denoniezh (kentelioù gant J. M. Barandiaran, eus Skol-veur Salamanca), armerzh, douaroniezh, yezhoniezh (kentelioù gant ar c'helenner Mixelena), lennegezh, jedoniezh (kentelioù gant Santamaria ha Txillartegi), kelenouriezh ha prederouriezh. War-dro kant den o deus kemeret perzh e labourioù ar Skol-Veur, un darn vras o tont eus Su-Euzkadi.

Priantet eo bet ar Skol-Veur gant daou zen, Haritschelar, kelenner war an

euskareg e Skol-veur Bourdel hag unan eus renerien an Euzkalaindia (Akademie Euskarek) ha Manex Goyhenetxe, rener ar gevredigezh IKAS. Aozañ a raent abaoe tri bloaz sizhunvezhioù sevenadurel euskarek ha fellet o deus mont pelloc'h ha diazezañ ur Skol-Veur e-lec'h ma vefe kelennet pep tra en euskareg gant kelennerien deuet eus an Norz hag ar Su.

Heñvel eo neuze ar c'hudennoù evit Katalaniz hag Euzkariz. An darn vrasañ anezho a vev er Su, er rannvroioù enbarzhet er Stad spagnat (8 milion Katalan er Su, 180.000 er Rossellon ; 2.500.000 Euskarad er Su, 200.000 en Norz) ; diazezet o deus koulskoude ar Skolioù-Meur e rannvroioù an Norz enbarzhet e Frañs dre ma lez ar Stad c'hall muioc'h a frankiz-eztaoliñ ; dic'hallus e vefe bet aozañ seurt Skolioù e Barcelona pe Bilbo (Bilbao). Hogen ret e oa d' an aozerien diwall ma trofe ar Skol-Veur d' ur C'hendalc'h politikel, rak daou riskl a savfe neuze : da gentañ e c'hellfe bezañ nac'het ouzh Katalaniz ar Su an aotre da zont, rak hevlene darn a zo bet nac'het dezho o " visa ", ha d' an eil e c'hellfe ar gouarnamant gall lakaat berzh war ar Skol-Veur, evel m' en deus lavaret unan eus renerien Skol-Veur Prada da gelaouenner " Le Monde " (1-09-1973) : « Re vad eo an darempredoù etre Paris ha Madrid evit ma rofemp dezho un abeg bennak. Ni a zo amañ ur Skol-Veur, ul lec'h-studi ha nann un diazez evit an eneberezh katalat er Su... » ; gouzout a reont ervat ez eus, e-touez ar berzhidi, " evezherien " kaset gant an daou c'houarnamant. Setu perak e taol evezh an aozerien, e Prada evel e Don-Iban-Luz, da chom e bevennoù an dachenn sevenadurel ; strivet o deus zoken evit kaout asant ar pennadurezhioù gall ha gallet o deus aozañ ar Skolioù-Meur e liseoù-Stad. Chom war an dachenn sevenadurel en deus ur splet pouezus all ivez : lakaat da genlabourat tud o deus menozioù politikel disheñvel. Heuilhet o deus Okitaniz an hevelep hent, daoust n' o deus ket an hevelep kudennoù.

400

Ur riskl a zo marteze o tibab an hent-se. Meur a hini a soñjo e c'hell ar Skolioù-Meur Hañv bezañ un deiz " adc'hounezet " gant ar Stad pe ar Skol-Veur c'hall ; ne seblant ket bezañ grevus ar riskl-se, rak diouzh un tu n' en em emell ket ar Skol-Veur c'hall en afer, rak ar gelennerien a zo aze evel brogarourien ha tamm ebet evel dileuridi an Deskadurezh Vroadel c'hall ; diouzh un tu all, pouez ha niver kenvroiz ar Su a harzo ouzh ur seurt " adc'hounidigezh ", se zo gwir da nebeutañ evit Katalaniz hag Euzkariz.

Ur riskl all a vefe krouidigezh un troc'h etre an emsav sevenadurel hag an emsav politikel, hogen ret eo merkañ e kemer perzh en emsav sevenadurel tud engouestlet er stourm politikel, hag a-hend-all un obererezh renet er yezh vroadel nemetken a zo ganti ur ster politikel.

An darvoudoù e Korsika.

Emañ Korsiz o kemer pled muioc'h-mui ouzh planedenn o bro hag o kompren emañ o fobl o vont da get. Kroget o doa Korsiz da ermaeziañ da Vro-C'hall abaoe derou an XIXvet kantved tra ma teue an enezenn da vezañ ur vro diboblet hag isdiorreet ; trellet e oa Korsiz gant klod ha mojenn Napoleon ha disoñjet o doa skouer Paoli, ar stourmer evit an dieubidigezh.

Emañ an traoù o kemmañ abaoe un nebeut bloavezhioù ; kalz Korsiz o deus komprenet e oa trevadennet o enezenn hag e oa an divroadeg ur walenn ; an diorreadur kinniget dezho a c'helle zoken gwashaat an traoù : terkadur kompezenn ar reter en deus talvezet da gentañ dreist-holl d' an " treid-du " o doa prenet an douaroù ; al lañs roet d' an douristelezh ne zegas ket kalz a dra d' an enezenn rak an ostalirioù a zo perc'hennet gant estrenien.

Gouzañv a ra zoken Korsika efedoù an diorreadur en estrenvro, evel ma tiskouez afer ar " fankoù ruz " taolet er mor gant ar gevredigezh italian Montedison.

Trevadennet eo an enezenn e gwirionez hag e c'hell zoken Korsiz bezañ un deiz diberc'hennet eus o enezenn ; ne chomfe nemet an anvioù-lec'h eus herez istorel Korsika. Hogen ar re yaouank, evel e Breizh hag e Okitania, a fell dezho bremañ

chom en o bro. Darn anezho en em laka da enebañ taer, oc'h ober gwalldaolioù a-enep diazevadurioù ar SOMIVAC (Kevredigezh evit Terkadur Korsika) pe, nevez 'zo, a-enep ar savadurioù touristel ; hini ebet eus ar sponterien n' eo bet tapet gant ar polis. Strolladoù politikel rannvroelour a zo bet krouet, manifestadegoù a zo bet aozet, an hini taerañ o vezañ c'hoarvezet e Bastia d' ar 17vet a viz C'hwevrer 1973. Ar manifestourien yaouank a doa aloubet ar prefeddi, heskinet an isprefed ha lakaet bannieloù korsat e-lec'h ar bannieloù gall ; an Dr Simeoni, rener an A.R.C. (Ober Rannvroelour Korsat) ha V. Duriani, kuzulier-kêr komunour, a oa bet bac'het goude an darvoudoù-se.

Ar stourm a-enep ar " fankoù-ruz " a yae pelloc'h eget an darvoud e-unan, diskouez a rae youl ar bobl korsat da virout he doareoù-bevañ ha da gemer he flanedenn en he daouarn, ha bez' e c'heller keñveriañ afer ar " fankoù ruz " ouzh hini ar " Joint Français ".

401

Da geñver Devezhioù korsat (1), dalc'het evit an eil gwech e Corti (Corte), ez eo bet dalc'het ur vodadeg gant renerien ar pevar strollad politikel korsat : D. Alfonsi evit ar PCP (Partitu Corsu per u progresu), ar breudeur Simeoni evit ar ARC (Azzione per a Rinascita di a Corsica), Ch. Santoni ha F. Orsini evit ar PPC (Partitu di u Populu Corsu) ha G. Poli evit an Unione di a Patria, an ARC o vezañ ar strollad pouezusañ gant an niver brasañ a izili.

Ar pevar strollad-se o deus krouet un Talbenn a c'houlenn an emrenerezh evit Korsika. Diskleriañ a reont ne c'hell ar rannvroeladur kinniget gant ar gouarnamant gall « saveteiñ ar bobl korsat... diskoulm ar gudenn ne vo kavet nemet pa gemero Korsiz, a hiniennoù da gentañ, a-stroll da c'houde, emskiant eus gwirvoud ur vro hag ur vroad korsat gant he yezh, he zouar hag hec'h istor ». Lavaret en deus an Dr Simeoni : « Ar rannvroelouriezh a oa un enebadur emdarzhek ouzh un dañjer. Hon emsav, en ur prantad kentañ, a oa evel ur groazadeg evit klask ar C'horsiz hag ar " gorselezh ". An darvoudoù ha donedigezh ar re yaouank war an dachenn o deus kemmet an traoù, o luskañ ac'hanomp da gentañ davet un dezrann diazezet war an devoud trevadennel ha da c'houde o lakaat ac'hanomp da gomz eus ur bobl korsat. C'hoarvezet eo an emdroadur-se en un doare pragmatour... ha setu ma c'houlennomp bremañ an emrenerezh-diabarzh ».

Ar strolladoù korsat o deus dilezet a-gevret ar rannvroelouriezh evit ar vroadelouriezh ha setu perak daou anezho o deus kemmet o anvioù : an " Action Régionaliste Corse " a zo deuet da vezañ an " Azzione per la Rinascita di a Corsica " hag ar " Front Régionaliste Corse " a zo deuet da vezañ " Partitu di u Populu Corsu " ; ar ger " emrenerezh " ne ra mui aon d' an dud.

Dalc'het eo bet Vllvet Kendalc'h an ARC e Ajaccio d' an 19 a viz Eost nebeut goude Devezhioù Corti. Daou vil ezel a oa deuet ha votet o deus ar mennad-mañ : « Ar bobl korsat, arallekaet e-keñver armerzh ha sevenadurezh, a zo kondaonet da vont da get peogwir ar steuñvoù ha raktresoù oberiet gant ar Stad c'hall a rakwel evit 1985 enbroadur yoc'hoù estrenien ha mestroniezh ar c'hevalaoù war binvidigezhioù an enezenn. Ar bobl korsat he deus ar gwir d' en em zifenn hag e tle kavout enni hec'h-unan an nerzhioù danvezel ha speredel a vo ret kaout ; n' eus nemet o paeañ ar priz-se e c'hell ar bobl korsat kenderc'hel da vevañ ».

Tud 'zo a fell dezho muioc'h eget an emrenerezh-diabarzh ha setu perak e weler moarvat war ar mogerioù ha war an hentoù an enskrivadurioù : « Corsica da Gorsiz » ha muioc'h-mui « I Frandesi fora » pe « IFF » (Ar C'hallaoued er-maez) ; an emskiant vroadel nevez o c'henel e-touez ar yaouankiz n' eo ket komprenet mat gant an dud-e-oad. Kelaouenner " Le Monde " en deus klevet un den kozh o respont : « Lezit ac'hanon da vervel a-raok goulenn an dieubidigezh, ne fell ket din gwelout an dra-se... » (" Le malaise corse, indépendance et dignité ", 12-09-1973). Unvaniezh rannvroel ar C.G.T. he deus embannet d' ar 15 a viz Eost un diskleriadur o sevel a-enep an emrenerezh-diabarzh goulennet gant Talbenn ar Strolladoù korsat, o lavarout « n' eo ket gwir e vefe Korsika un drevadenn c'hall » hogen « un departamant c'hall eo korvoet, evel an departamantoù all, gant ar reizhiad kevalour ».

(1) Kv. Al Liamm, niv. 154, p. 441 hag en niverenn-man ar pennad d. b. " Ar skolioù-hanv ".

402

Hogen niverusoc'h-niverusañ eo Korsiz a lavar ez o bro un drevadenn. Souezhet-bras e voe, da skouer, ar re a gemere perzh er C'hendalc'h Bedel evit Gwareziñ an Natur er Mor Kreizdouarek, dalc'het e Beyrouth e miz Mezheven 1973, o klevout diskleriadurioù an daou dileuriad korsat, Stromboni, Prezidant Kambr Armerzhel Yaouank Bastia, ha Santucci, Sekretour Poellgor-Difenn a-enep ar Fankoù ruz ; lavarout a raent : « Ober a reomp gant ar galleg, evel m' eo bet rediet meur a bobl d' hen ober dre bouez an darvoudoù ; hogen hor c'halon en dije lakaet ac'hanomp da gomz korseg rak evel Korsiz emañ... Bro-C'hall a zo e penn ar bed evit ar saotradur... Ret eo gouzout e c'houzañv hor pobl abaoe dekvloaziadoù argadoù a bep seurt a gas anezhi d' ar marv ; stourm a reomp dre ma kengej an argadoù a-enep an natur, a-enep an dud, o tagañ o c'horfoù hogen o fersonelezh hag o briegezh ivez... Korsika a c'houzañv en un doare don an devoud trevadennel lakaet warni gant Bro-C'hall pe Italia, pe gant emglev an daou c'houarnamant ».

D' ar 5 a viz Here Kuzul Departamant Korsika en deus addilennet da Brezidant F. Giaccobi, radikal a-gleiz ; hemañ, goude bezañ diskleriet e felle da Gorsiz « bevañ ha mervel Gallaoued » en deus ouzhpennet : « Ne fell ket deomp e vefe ar vammvro ul lezvamm, ne fell ket deomp bezañ tud trevadennet ha trawalc'h hon eus gant doareoù-ober a denn d' an trevadennouriezh ».

Skouer Flandrez.

Kendalc'h Unvaniezh etrevroadel ar c'helaouennoù gallek a zo bet dalc'het e Liège hag e Brussels e derou miz Here. E-doug ar vodadeg kentañ, Charles Rebuffat, pennskrivagner " Le Soir ", ur gelaouenn eus Brussels, ha Prezidant etrevroadel an Unvaniezh, en deus roet d' ar gallegerien skouer stourm ar Flamanked evit o sevenadur : « Tra m' eo dister ken m' eo dister, er gumuniezh c'halleger Belgia, niver ar re a ro arc'hant evit un obererezh sevenadurel pe a gemer ur perzh oberiant enni, an holl strolladoù politikel o deus krouet abaoe bloavezhioù e Flandrez kevredigezhioù sevenadurel a vod dekmiliadoù a izili hag a zo deuet da vezañ evel-se strolladoù-gwaskañ galloudus-bras. Anat eo o deus an obererezhioù kaset da benn gant ar c'hevredigezhioù-se kenstrivet da zegas emrenerezh sevenadurel Flandrez, hogen ivez, dre an nerzh c'hwezhet e-barzh ar gumuniezh flamank, kenlabouret da zegas un diskoulm da gudennoù armerzhel ar vro... »

Lucien Outers, kannad Brussels ha sekretour ar C'huzul Sevenadurel Gallek, en deus roet ivez skouer ar Flamanked d' e genvroiz, oc'h embann e-barzh " Le Monde " ur pennad diwar-benn levr Manu Ruys, " Les Flamands, un peuple en mouvement, une nation en devenir " ; diskouez a ra petra o deus gounezet ar Flamanked war an dachennoù sevenadurel, armerzhel ha politikel, ha penaos ez emdro ar Stad belgiat unel davet ur Stad kevreadel gant div vroad ; skrivañ a ra : « Istor ar 25 vloaz a zo istor trec'hioù an Emsav Flamank... hag a zo ivez hini hon drouziwezhioù... »

403

AN DARVOUDOU E BREIZH

Bec'h war ar soja.

Diaesoc'h-diaesañ eo kaout soja eus Bro-Amerika. Ha war ar soja, 'vel ma ouzoc'h, e vez diazezet magadurezh al loened en amzer a-vremañ. Protein e-leizh 'zo ennañ. Kement-se 'zo deut diwar enkadenn ekonomiezh Amerika.

Diaes e ra se da beizanted Vreizh rak maget e vez kalz loened e Breizh. E 1971 da skouer, e oa produet e Breizh 30 % eus moc'h Bro-C'hall, 30 % a gig-yar, 40 %

a gig laboused all, 23 % eus produad ar vioù, 46 % eus kig koleoù. Hag implijet 'vez e Breizh etre 40 ha 50 % eus ar proteinoù a vez implijet e Bro-C'hall da vagañ al loened. Grevus e c'hellfe bezañ an enkadenn-se dreist-holl dre m' emañ muioc'h-mui dazont labourerien douar Breizh etre daouarn greantioù boued-loened, kooperativoù kevalour hag ar " C'hredit Agricole ".

Promoterien.

E-ser an hañv eo dav deomp menegiñ, daoust ma ne ouzomp netra resis, e vez skrapet hor bro gant ar promoterien. Ledenez Kraozon, Ledenez Ruiz, Porzh Fouen... Galvet eo Breizh da vezañ bro ar vakañsoù bras evit mat kevredigezhioù kapitalour, evel just.

Pezh a c'homo 'vo mat evit an Arme pe... ar magerezh pesked.

Dispac'h e Pleuveur.

Un tamm dre zegouezh, un tamm a-drugarez d' ur stourmer lec'hiet mat ha dihun e spered, e voe gouezet e oad e prientiñ un taol divalav. Reiñ aotre, buan ha buan hep re a drouz, da sevel ur stankell e bae Pleuveur da vagañ eged en dour mor dalc'het en doare-se.

Da lavarout eo rivinañ ar besketaerien hag ar genwerzhourien dre ziskar an douristerezh. Pep hini 'oa koll un tamm : al lodenn vrasañ eus an dud a lak e feurm ur gambr bennak e-pad ur miz pe zaou, digarez da wellaat ar geustereenn.

Pep hini 'oa koll evit mad ar Stad hag an Aotrou Huerou, unan eus pennoù bras ar magerezh pesked e Bro-Chall. 800 devezh-arat dezhañ evit netra.

Ha se diwar goust tud ar vro, n' eo ket nemetken dre lazhañ o micher a-vremañ, met ivez dre lakaat en arvar dazont ar c'hornad.

Kas ar bae d' ar marv eo mirout dour ennañ dalc'hmat a-hed an amzer. Lazhañ ur ouenn buzhug priziuz a vez kavet eno, lazhañ ar bezhin, hep bezañ sur, a-benn ar fin, eo en an daore gwellañ e vo graet. An teknik ma oa an dud en soñj implij n' eo bet graet ganti nemet ur wech, e Bro-Skos hag ez eo bet merzet ez ae ar vuhez en dour mor dalc'het war zisteraat abalamour ma teue an oksigen da ziueriñ.

Met e Breizh e c'heller arnodiñ forzh pegement.

404

Prim ha nerzhus e voe enebet gant an dud o vevañ tro-dro ar bae, e Landrelleg, Kerenog, Pennwern ha Pleuveur. Lakaat ar c'huzulioù-kêr ha kannad ar c'horn d' ober o menoz war an afer ne voe ket aezet, ken kustum int da blegañ. Met dre forzh derc'hel start ha diskouez o nerzh, dre spontañ ar pennoù bras zoken, ez int deuet a-benn. Dav eo menegiñ roll emsaverien ar c'horn, ha pegen bras e voe lec'h ar brezhoneg... evel just en ur vro vrezhoneger. Met daoust ha n' eo ket ivez unan eus abegoù an trec'h ?

Diarbennet eo bet evit ar poent ar striv-se da gorvoiñ muioc'h ar vro, met adpegañ raint en-dro gant o mennad, e Pleuveur pe e lec'h all.

Breizh, bro an douristed.

Abaoe ur pennad brav e teu an " doullourisket " bep bloaz betek amañ da gaout o zamm baradoz. Ur ouenn nevez 'zo en o mesk bremañ : " hipied ". Er gelaouenn " underground " gall Actuel ez eus bet, un nebeut mizvezhioù 'zo, ur pennad fromus : " Chauffe la Breiz ". Dreist, eo pep tra e Breizh, ar festoù-noz, an ostalioù, ar straedoù teñval, an heol, ar Stourm, an Emsavadeg, ar ganerien, ar boultrenn... Re bell emañ Katmandou evit lod, setu eo mat kaout un tamm liv-estren tost a-walc'h ouzh Pariz. Pep tra a zegas kemmoù e spered dinerzhet an dud a zo mat. Ha setu Breizh e gwerzh, Breizh en hit-parad.

Dav eo lavarout ez eus peadra da ziduañ anezho e-pad ar vakañsoù. " Festoù-noz ", diskouezadeg-dañs kentoc'h, gant sistr da evañ ha krampouezh da zebriñ, betek dislonkañ a-wechoù (Bro al lonkerien eo Breizh), a vez aozet gant ar c'huzulioù-kêr brogar.

Dalc'het e voe ivez meur a festival, meur a ouel sonerezh - petra bennak ma ne voe ket aozet ar re-mañ a-ratozh kaer evit an douristed.

Gouelioù-sonerezh.

Daou eus ar gouelioù-sonerezh eo bet c'hoarvezet deomp gwelout. Hini Rieg hag hini Kertalg e Moelan, e miz Gouere o-daou.

An hini kentañ a bade meur zevezh. Kregiñ a rae, d' ar gwener noz, gant filmoù. Tri, unan anezho gant Torr e Benn diwar-benn Plemed. Ha netra da baeañ. An deiz war-lerc'h, d' ar sadorn, goude kreisteiz, e oa Patrig Ewen hag ur c'haner eus Kernev-Veur. E parkeier bras ha brav, dindan gwez bras ha kaer e oa diskouezadeg levrioù a bep seurt, digor d' an neb a felle dezhañ.

Betek-hen 'oa mat-tre an traoù, nemet marteze war an dachenn-gampiñ ma ne veze klevet nemet galleg, ar skingomzerioù o vont en-dro forzh pegement. Peadra da lakaat ac'hanomp d' en em c'houlenn petra oamp deuet d' ober er gouel-se.

Betek-hen seder an traoù eta. Netra da baeañ, marc'had-mat ar sandwichoù. Met d' ar sadorn da noz e oa Glenmor gant e abadenn doare " Comédie française ", teoget an dud gantan, pa zeuas un nebeut tud da c'houlenn digantañ ha ne oa ket a-du da zigreskiñ e c'hopr a oa 350.000 lur kozh. Goude ur pennad kaoz, erfin kaoz 'zo lavarout kalz, e c'hellas Glenmor derc'hel da vont, met ket pell... An deiz war-lerc'h gant Stivell ne voe kement a reuz.

405

Daoust hag ez in da veuliñ an nagennerien-se ? Sur-mat e oa un dra vad tagañ ar c'haner meur, an idol, ar Barzh, tagañ ar roll a arzour prizius a fell da Glenmor c'hoari. Met a-hend-all ez eus da zerc'hel soñj e oa aozet ar festival-se gant tud yaouank ar c'hornad, hep arc'hant, hag e kinnigent kalz a draoù evit netra (filmoù, kanaouennoù, festoù-noz), tud yaouank a laoske ar re n'o doa ket kalz arc'hant da vont tre hep paeañ (an difreterien da skouer). Ha piv en doa labouret da sevel ar gouel-se ma c'helle pep hini dont da zisplegañ e stal. Ouzhpenn-se ne oa strollad urzhiañ ebet gante.

Da verzout e oa a-hend-all e kaved tud a bep seurt e-touez an difreterien. Ma lare unan : « Heuget on pa welan un den a seurt-se (Stivell) o c'hounit arc'hant a-drugarez d' ar sevenadur pobl ». Ha re all (e galleg evel just) :

« - Emaint o kanañ e brezhoneg ha ne gomprenont netra, nag an hini a zo o kanañ, nag ar re a zo o selaou. Koniri tout.

- Met daoust hag e ouzez e peseurt yezh e komz Glenmor gant peizanted e gornbro.

- Petra ran forzh ha pa vefe en italianeg. »

Daoust da se e oa reizh en em zifretañ e Rieg (kanerien - idol - festival un tamm e doare ar show-business) met tu 'zo d' en em c'houlenn ha n' o deus ket an difreterien divoustret o speredoù, o razailherezh, o profitañ **en** un aozidigezh frank, rak n' int ket bet gwelet o lakaat reuz e Festival Kertalg e Moelan e lec'h ma oa, kredapl, muioc'h abegoù da huchal.

Ma oa dereatoc'h ar priz eno, e oa aozet an traoù hervez doare ar show-business pop (10 lur X ur vordilihad a dud = tost da 20 milion a lurioù) ha n' eo ket, sur a-walc'h, evit mad un ti ar yaouankiz bennak. Ur c'homzer parizian distagellet mat, poz brezhoneg ebet eus perzh an aozerien, d' an " abreuvoir " e yae an dud da evañ, d' ar " mangeoire " da zebriñ, ha dav eo gwelout da beseurt

priz ! Ur wech serret ar chatal eo ret mat dezhañ debriñ hag evañ... Met pezh 'oa ar gwashañ eo gwelout pegen distag e oa pep tra eus kudennoù ar vro, eus buhez an dud er vro.

Dav eo deomp menegiñ ur gouel all, daoust ma n' hellimp ket komz hir diwar e benn. Gouel Lanester, an hini eo. Da gentañ en em gav e-pad miz Gwengolo. N' eo ket ken kontammet ar vro. D' an eil e pad meur a sizhunvezh. Digor eo d' ar vuhez ha d'he c'HUDENNOÙ. Abadennoù a bep seurt ha kaozeadegoù diwar-benn ar sevenadur hag all. Diskouezadegoù (unan gant Nono ha Youenn Gwernig).

406

Ur skouer evit Breizh : Enezenn Houad.

- « Les touristes, c'est comme le mazout, ça n'enrichit pas, ça encrasse. »

(Setu pezh a lavar un Tuniziad kozh e romant S. Cressanges, " Mourir à Djerba ")

Un darn vras eus kumunioù arvor Breizh o deus kredet e « galvedigezh touristel » hor bro, ha dibabet o deus postañ arc'hant evit dedennañ an douristed, da skouer en ur sevel porzhioù-diduiñ, en ur lezel embregerezhioù bras sevel lodennadurioù-tiez a-hed ar mor, h.a... hep soñjal e vefe lazhet an obererezhioù armerzhel all gant an douristelezh.

Setu pezh o deus komprenet eneziz Houad ; int-i o deus dibabet er c'hontrol : neveziñ o obererezhioù henvoazel, al labour-douar ha dreist-holl ar pesketaerezh. Nac'het o deus da gentañ reiñ an aotre da sevel 40 kenkiz en enezenn, ha bremañ difennet eo sevel tiez, nemet en-dro d' ar vourc'h ; nac'het o deus ivez sevel porzh evit an douristed. Aes e vefe bet koulskoude dibab an hent-se, rak ar pesketaerezh, obererezh pennañ an enezenn, a yae war ziskar abaoe bloavezhioù.

Krouet o deus pesketaerien Houad ur gevredigezh a vo fiziet enni ar sevel-ligistri ha gwerzh ar pesketaerezh ; savet o deus ul lec'h-digloañ evit al ligistri ha 100.000 legestr bihan a zo bet lakaet er mirva-se ; bez e c'hellint bezañ pesketaet a-benn 5 bloaz ac'han. Lakaet o deus ivez sevel ul labouradeg evit diholenañ an dour-mor.

Kaset eo bet pesketaerien da studiañ an doareoù-pesketa er C'hanada, e Alamagn, er Portugal. War ar 470 enezad ez eus 200 a zo dindan 20 vloaz, hag an darn vras eus ar baotred yaouank a fell dezho bezañ pesketaerien ha chom da vevañ en enezenn.

Enezenn vihan Houad a ro evel-se ur skouer d' an holl kumunioù o deus degemeret da c'her-stur : « Hep an douristed, silvidigezh ebet ».

Kendalc'h an Dziganed.

15.000 a dziganed zo deuet da Blouneour-Traezh d' o c'hendaic'h, e penn kentañ miz Eost. Tremenet mat eo an traoù hervez.

Kampoù brezhoneg.

A bep seurt kampoù 'zo bet ar bloaz-mañ c'hoazh. Kamp ar Vrezhonegerien, e miz Gouere. Ur rumm devezhioù-studi Skol an Emsav e miz Eost hag unan all e miz Gwengolo. Gant al Leur Nevez ez eus bet daou pe dri staj, unan pe zaou anezho war ar maez e-mesk ar beizanted. Ur staj brezhoneg a eizh devezh 'zo bet ivez gant an UDB e Plouber.

Ederven.

Pep hini en deus klevet sur a-walc'h komz eus afer Erdeven. Tud a blij dezhe bezañ en noazh pilh... hag ur maer ne blij ket dezhañ gwelout tud en noazh.

Plijet oc'h bet moarvat o klevout an " noazhidi " o lavarout e oa warlerc'hiet tud ar c'hornad, ar Vretoned 'keta ! Hag estlamm 'zo bet ennoc'h, ken sur all, o welout peseurt arguzennoù uhel ha fin oa gant maer Ederven.

407

An Arme atav an Arme.

Div c'haividigezh 'zo gant Breizh, ar c'halvidigezh touristikel hag ur c'halvidigezh soudardel. Er mizioù diwezhañ ez eus bet embregadegoù ispisial gant an armoù saoz, gall hag alaman, dreist-holl er Mor-Bihan.

E-keit-se e oa, e Roazhon, rejimant al Lann Doue o klask brudañ an arme dre un " operasion sourir ". Ur mousc'hoarzh ma tiver dioutañ e-leizh gwad ha daeroù an dud hag ar pobloù bet flastret gant skoazell ar rejimant-se : Aljeria, Indosina... ha me oar pere c'hoazh...

Hag ar Polis.

Ar bloaz-mañ eo deuet ar rumm skolidi kentañ er-maez eus Skol Polis Gwened. Hervez ne vefe nemet teir skol e Bro-C'hall. Hag unan 'zo e Breizh. Lec'hiet mat omp e Breizh e-keñver ar stummidigezh-micherel.

AL LIAMM 161

TAOLENN

Kest gant PER DIOLIER	411
Ar rener bras gant PER DIOLIER	412
Ma soudardez gant R. F. RETAMAR (tr. Riwanon Kervella)	413
Daeroù gant ANNA-MARI TRELLU	414
Ar glizh gant GWENDAL DENEZ	415
E-kichen an noz gant GWENDAL DENEZ	416
Sonenn or " Jowised " gant J. BELZ	418
Du-mañ, hiziv... gant FRANSEZ FAVEREAU	420
Goleron gant E. AR BARZHIG	426
" Ar Seizh Avel " gant LANGLEIZ	438
Ar ramz Kolevran gant gant FANCH AN UHEL	447
Istor Breizh gant LA BORDERIE (tr. R. Hemon)	460
Notennoù	469

KEST

Hir an amzer a skuizh ac'hanomp ;
 e klaskadenn ar vuhez leun,
 n' hon eus kavet nemet maskloù,
 touelladoù gouestl
 e tolpadou an dud c'hronnet.
 Na fresk analañ ' harz ar saprenn
 pa 'z eo divi an ene,
 riñset kalir peurfonn an deiz,
 ha gortozet ennomp ken pell
 evel ar vag
 ar mouch avel,
 en hor c'hreiz
 c'hoant riklus dremmwelioù gouyen
 a garfemp evañ dour o lennoù,
 a-walc'h, a-walc'h deomp neuze
 serriñ hon daoulagad
 evit tizhout klokted an noz.

Sant-Servan, 16.9.73.

Ar rener bras

'me 'r rener bras en e c'hriñol
 'c'h ober pakadoù, 'c'h ober pakadoù
 gant kozh paper, fiseleñn voan,
 espern ' vez nemet war ar boan.

'mañ rener bras en e gambrig
 o skriverezañ; o skriverezañ
 pajennoù leun 'vit ar mouler,
 d' e oberenn ' vo ket amzer.

D' ar rener bras ' vo sulvezh tomm,
 amprouennoù diwar ar plom
 zo da reizhañ ha pakañ kloz,
 n' eo ket deut c'hoazh poent ar repos.

'mañ 'r rener bras en e garr-tan
 war hentoù hir an dismegañs
 o kas leizh ' levrioù d' ar werzh,
 n' eus den arall 'vit seurt kenwerzh.

'mañ 'r rener bras en arme sioul
 n' eo ket hec'h oabl digoumoul,
 ar rener bras, e oberenn
 a zo er-maez eus al lezenn.

'mañ 'r rener bras 'n e zigenvez

o labour bemdez, o labour bemdez,
met gouzout a ra bremañ sklaer
ne vo ket bet e stourm aner.

Dinarz, 17.12.72

413

Roberto Fernandez RETAMAR

Ma Soudardez

Gant ma roched c'hlas soudard
Ez on eürusoc'h. Gant da roched c'hlas
Soudardez, emhout evel don
En un tu bennak, gant ar fuzuilh war ar skoaz, bremañ
Marteze, e welez ar memes stered ha me.
Soñjal a ran emhout e-kichen ar sklaerder-hont
Hag emañ aer an noz o flourañ
Da zremm war evezh. Hag e c'hellomp, ni hon daou,
Klevout un trouz. Hag e savomp asambles
O pellaat hag o tostaat an eil diouzh egile, evel
Pa ne vefemp ket dispartiet gant ar pennad hed-se,
E lec'h chom hon unan en deñvalijenn
Gant ar fuzuilh en dorn, o selaou
Anal verr an noz, emamp a-gevret
Hon daouarn skoulmet, hag hor rochedoù
Glas unanet, hag ez omp
N' eo ket ar re a selaou, met an trouz
N' omp ket ar re a furch en deñvalijenn
Nemet ar re a zisoñj ar sklerijenn evit an deñvalijenn
Hag en em strink gant trouz
En noz lugernus ar garantez.

troet gant RIVANON KERVELLA.

414

Anna-Mari TRELLE

DAEROÙ

Da zremm roufennet-holl
da zaoulagad trist
da vlev gouez, liv koad sklaer,
gouzout a ran ez out kozh
ha koulskoude
e verzan ennout
un elfenn a yaouankiz.

N' ouzon ket
derc'hel a ran da zorn sioul
ha santout a ran ennon
daeroù.

Daeroù diwelus

daeroù e don va c'halon
o c'houzout ez out kozh
da zremm roufennet-holl
Gwelout a ran out bet gwallgaset
ha koulskoude
e verzan ennout
un elfenn a yaouankiz.

Da zaoulagad skuizh, trist,
testoù da vuhez
ar pezh ac'h eus gwelet
ar pezh ne welin morse
Ha koulskoude
e karfen da wareziñ
ha da zizoaniañ.

Met gwir eo, yaouank on.

415
Gwendal DENEZ

Ar glizh

Ar glizh

ur beure 'n deus
goloet va huñvreoù
luziet va eñvoriou
glebiet da skeudenn
ha kouezhet on adarre
en enoe
enoë ar gerioù
enoë an Den
enoë ar vuhez

marv out ennon

frond an doan
a c'hronn ac'hanon
fenez
rak n' am eus mui nemet
da sell glas skedus
a-dreñv an daeloù.

Kaerdiz, 11.1.73.

416
Gwendal DENEZ

E-kichen an noz

Heol du ar marv
'n deus va dihunet
ur beure lusennek
ha kouezhet on
en islonk an netra
gant heklek ur c'hoarzh

o skeiñ ouzh moger
va digenvezded.

*

Huñvreet am eus e mintinoù fresk
ma kerzhen gorrek
war geot ouesk
ar Pradoù gleb
ha bep a gammed
e teuze ar glizh
e sklerijenn ar sav-heol.

Huñvreet am eus e devezhioù disheol
ma kerzhen gorrek
war kaeioù hir
ar porzhioù didud
e goudor merglet
al listri-karg, o sellout
ouzh an dremmwelioù latarek
o leñvañ.

417

Huñvreet am eus e novezhioù hep sked
ma kerzhen gorrek
war riblennoù simant
ar c'hêrioù sklas
skeud emfiñv
e miendall ar vuhez
o kanañ gerioù gwad
d' al loar.

*

Ar bloavezhioù goustad
'goashaio ac'hanon
avel an ankouazh
'skubo va eñvorioù
ha digenvez e vin
e moged ar vuhez
gant va huñvreoù hud
da vagañ va goanag.

*

Te ivez un deiz
a varvo aonik
serrez da reuz
e skeud an douar
ha ne vo den
evit leñvañ dit
pa vi en amc'houlou
an diziwezh
o treiñ ha ludu.

Kaerdiz, Meurzh 1973.

Sonenn ar " Jowised "

Goude bout lennet din pennad Maodez Glanndour (Al Liamm 159) a-zivout " Ar Suis bras ", setu deuet soñj din bout c'hoazh bet klevet ar werzenn-se en tu bennak. Me mont enta da gavout Jan er Meut, labourer-douar a barrez Plenuer (Plenweur), tostig-tra d' an Alre. Sonet en deus din ar pezh a gavot amañ - sonenn e dad - a lare, ganet-eñ ha desavet barzh ar memes bro.

Pe oen ér park é labourad
Ne sonjen ket nameit a vad

Chè deit me mamm de laret dein
Monet d'er gêr de ziméein.

« Nen pas, d'er gêr mé nen dein ket,
Ker er labour e zo pisset.

- Groeit ho kont el e garet,
Gwerhet oh bet d'er Jowised.

- Me mamm dein-mé é laréet
Pegement eh oen bet gwerhet (1)

- Tri-hant skouid én un dornad
Des reit er jowis-sé d'ho tad,

- Ha kement 'rall d'ho predér
Eit kousanein ho tióvêr. » (2)

Pe oen arriù ar en treuzeù,
Mé remerkas tri ré voteù.

419

Oé er Jowis é korn en tan,
E vutumein g'ur bimp argant

E vutumein g'ur bimp argant,
Ha éan ken du el un tad-bran.

« Me mamm dein-mé é laréet
Pèh broh lakein-mé de vonet

- Lakeit ho proh sei violet
Honnèh vo er skañnan de gerhet.

- Lakeit er vroh e garéet,
M'en assur doh, kuit e véet a gerhet.

- Be zo tri jaù abarh er hreù,
Brideù argant én o fenneù.

- Be zo tri jaù ékipet kloz
Etal en nor doh ho kortoz. »

Eh a er jowis-sé d'é vro,
Ur gaer a famelenn geto. (3)

« Me mamm, chetu ur famelenn,
Gwerso vras eh oh d'hé goulenn.

Me merh, azéet ér gadoér
Eh an de bréparein doh ho koén

Gwell vehé genein boud n'ur bod lann
Ha boud é ti me zad ha me mamm...

- (1) *oen* = *on* : en amzer a-vremañ e vez distilhet " oen " ganeomp-ni.
- (2) *kousañein* = *kousantein*, *asantiñ*.
- (3) *geto*, e Plenweur, 'vel tro-ha-tro, e vez dalbec'h laret : *getoñ* = *gantañ*.

Du-mañ , hiziv...

Se zo bet 'vel ur ouel difreget a-zirak ma daoulagad. Hag ar barner 'oa dirazon, pintet war e gador uhel, o krial :

- Hoc'h anv, raganv, micher ha oad !

Me 'sav, dispont, ha me 'respont dezhañ :

- If ar Bleveg, ugent vloaz, eus Brest...

Ma micher... Da gentañ, me 'oa toer. Desket 'm boa ar vicher-se. Bremañ... memes mod eo : me 'labour 'barzh an uhel, dalc'hmat en riskl da gouezhañ tregont metr izeloc'h ! Pa oan war bont Montroulez, 'oa hanter-kant metr. Se 'oa ar bloaz tremenet. Ur wech 'oa ur paotr kozh - hennezh, m' hen tou, ne zivezve ket !... met ur sadorn vintin 'oa, ha n' en doa ket bet amzer da gemer e foñsad ! - ha heñ a glask treuzañ ar pont war un treust houarn nevez laket... Ha dres, 'barzh an traoñ, 'oa mestr ar chanter o larout 'oa ret, dalc'hmat, stagañ ar gouriz, 'vit ar surentez... Ha hennezh a valee en nec'h, met ar barrennoù houarn ne oant ket stag c'hoazh... ha sed ar paotr kozh o horjellañ, aze, o horjellañ... Ha ni, savet hon selloù... Ni 'wele anezhañ en traoñ, friket e benn ouzh ar mein, diframmet e gorf... Met ar paotr a dap krog 'barzh ur varrenn hag a dizh an tu all! An holl a c'hoarzhe dindan, nemet ar mestr... Me 'm eus klevet 'oa bet dic'hopret an hini kozh nebeut goude.

421

Ha me ! Pet gwech eo bet manket din... Mod-se 'mañ war ar chanteroù, dreist-holl pa vez tomm e benn d' an den ! Ne oa ket pell e vezemp meyv 'barzh Montroulez : 'penn ar pont 'oa un ostaleri, hag ar re 'oa ganin oa lonkerien holl 'vez ! Gast ! Ar c'horfadoù 'm eus kemeret !... 'Vel an deiz diwezhañ : ni 'oa bet pedet holl d'ur fest da noz, hag evet hor boa a bep seurt : gwin, wiski... ha litradoù ! Da eizh eur, me oa meyv-dall ! Hag e-lec'h distreiñ da Vrest, 'oan chomet gant ur c'hamarad da gousket 'barzh hon tamm loch 'tal ar chanter, rak an deiz war-lerc'h 'oa fest arre. Ha ni 'oa meyv... me 'ouien ket ken pelec'h 'oan ! Arru eno, oamp krog d' en em bilat, n' ouzon ket perak. Ha ma c'hamarad, o kouezhañ, 'n doa skuilhet ur voutailhad " merkurokrom " a oa war an daol ! An deiz war-lerc'h, pa oa savet ar re all, oant deut d' en em walc'hiñ 'barzh 'tal hon loch, 'vel dalc'hmat, ha gwelet gwad o tiverañ eus leur hon zi ! Hag i 'barzh an ti, pennfollet... Mallozh hon Dou' ! Ar c'horfad c'hoarzhin ! Met eus ar mintin 'oa ur redadeg. Me 'oa aet gant ma c'hamarad 'barzh ar c'harr-skubañ ! Met harpet oant a-raok ar pont, rak eno 'veze roet champagn... Ha pa oamp arru 'oa achu ar redadeg abaoe pell ! Met ni oa reut, holl... Neuze, da greisteiz, 'oa paeet deomp hon lein gant ar berc'henned - pennoù bras eus Pariz - 'barzh un ostaleri eus 'tal Montroulez. Ha war an ton bras ! Met e-kreiz ar pred 'oa bet sach-blev... ur vezh, a lare ar vaouez a servije... ha torret hor boa traoù 'barzh ar sal ! Gant ar cholori-se, ar perc'henn 'n doa galvet an archerien. Ha me 'maez, pa'm eus gwelet se, ha kuit, d' an daoulamm, met ar gisti-se o deus tapet ac'hanon pelloc'h, n' ouzon ket perak... Kaset 'oan gante d' an archerdi, ha mestr ar chanter 'n deus pellgomzet dezhe mirout ac'hanomp. Ur wech ma oan aet 'maez da staotañ 'm eus klasket diflipañ, met... Ha chomet omp eno 'hed an noz, betek pemp eur eus ar mintin.

'M eus ket gwelet ar c'hagn a vestr-se abaoe, rak achu 'oa ar chanter, ha me 'oa aet da labourat war bont nevez Sant-Mark. Met ma 'm befe adkavet al loen-se... Ha gantañ n' em beze nemet al labourioù lous 'barzh Montroulez ar pezh na blije ket d' ar re all ober ! Ha memes mod oa 'barzh Sant-Mark... Me zo chomet da labourat 'barzh an ti-se peogwir 'oa bras, ha d' al lun, pa ne yaen ket da labourat, ma ne 'm boa ket c'hoant, pe ma n' hallen ket, ne larent mann. Ma

labour oa dañjerus 'vez, ha 'vit ur c'honedigezh dister mod-se e c'hallent mirout ac'hanon. Me, 'vefen ket chomet 'barzh ur plas all !

Se a lare ma zad bepred, bep tro ma welen anezhañ, gant e benn ruz. 'Vel 'pad ar prosez :

- Penn mezh ! a lare din, o hejañ e benn.

Heñ, hag a dape ur evrad bemdez, ha memes da zek eur vintin en deze e garg, beonez !

- Toull-jistr ! 'm boa respontet dezhañ.

Abalamour d' ar c'hozh pitaouer-se 'm eus tapet tri miz, ha daou c'hant mil lur da baeañ ! Ha ma c'hamarad tri mil !

422

Me 'm eus ket paeet ur gweneg c'hoazh, peogwir 'm eus dihanet da labourat e miz Eost, hag abaoe...

Me 'vez klañv bep hañv ! 'Vel arlene, pa oan bet kaset da Gastellin, da glañvdi an Aon : bemdez e teue kamaraded din, hag alies e kasent gwin ruz gante. Me 'guzhe anezhañ, met d' abardaez 'oa lonket pep tra gant ar re all, ha neuze e stlapemp ar boutailhoù dre ar prenestr, 'barzh ur c'hoad sapr a oa en tu all. Ha da sul, e yae ar merc'hed da zastum ar boutailhoù dindan ar gwez, ha mod-se e c'honezent arc'hant !

Ur sulvezh, a-hend-all, 'oa deut ur plac'h eus Kemper gante, da welout ac'hanon, ha me 'm eus soñj : me 'm boa c'hoariet 'nezhi war ma gwele, 'barzh an ospital, mod-se ! Mallozh hon Dou' ! Rak me 'veze atav 'tro Kemper da sul, pe 'pad an hañv. Me 'gav gwelloc'h tud ar c'hreisteiz : du-hont 'vez plijadur, e-lec'h 'kostez Brest... Ha ma " gwreg " zo eus Douarnenez. Gast, gant honnezh !... Hi 'zo bremañ 'barzh ur " skol " 'barzh Kemper.

A-raok dont amañ 'oan aet ganti d' ur fest pop da Bloneour-Lanvern. 'Oa ket re vrav, met chomet 'oan da gampiñ gant ma gwreg 'barzh ur prad, hag ar vandenn eus Douarnenez oa aze 'vez, holl. Ar re-se... dreist ! An deiz war-lerc'h 'vat, ar beizanted eus ar c'horn oa aet en gouez gant tout o yer hag o lapined a oa bet c'hwipet 'pad an noz !

An deizioù-se, oant aet d' ur bal 'tro aze, ha pa oant distroet da Zouarnenez, abred eus ar mintin, d' al lun, 'oa aet o c'harr-tan 'barzh ur paotr kozh a gase lizhiri pe gazetennoù. Kouezhet ar paotr a-ziwar e jav-houarn, ha stlabezet oa ar c'hazetennoù war ar straed ! Hag i o doa tommig c'hoazh, a dap ar paotr kozh, a zastum ar paperennoù, hag a lak 'nezhe holl 'barzh foñs an oto. Ha graet o deus tro kêr mod-se, o c'hoarzhin 'leizh o beg ! Ar paotr kozh a grie forzh, met i a c'hoarzhe ken-ken ! Met pa int harpet 'benn ar fin, o deus gwelet oa torret e c'har d' ar paotr kozh, ha kaset o deus anezhañ d' an ospital, war-eeun.

Ur wech all c'hoazh, o tistreiñ 'kreiz an noz, oant harpet e kêr, ha kroget d' ober cholori, n' ouzon ket 'vit petra - pe 'n em gannañ, pe... n' ouzon ket ! Ha daou gozh 'oa deut 'barzh o frenestr da glemm ha da hopal warne. Met ar re all 'oant ket chomet berr : pignet oant 'barzh an ti, ha 'n em laket da derriñ pep tra 'barzh ar gambr - hag un memes, gant blev hir evel don a-raok, 'n doa graet van da wallañ an hini gozh ! Deut 'oa an archerien, ha ranket o doa paeañ ar pezh oa bet drailhet...

423

E-lec'h ar barner gant e benn kog en fulor, 'oa bremañ ur beleg kozh, 'barzh 'tal... met un kozh-kozh, en ur soutanenn zu hir ha ledan, gant e benn moal, ha daoulagad bihan a verve 'kreiz e zremm ruz-ruz krizet...

'Vel ma vizen o kovez, azezet 'kreiz ur blasenn pe ur park...

Kriz 'oa bet ar barner ouzhin. Pa oan tremenet 'barzh Kemper 'vit ar varn oa tud all a-raok - istorioù familh pe istorioù reor, - ha me, gant ma c'hamarad, ne zihanemp ket da c'hoarzhin. Se ne oa ket bet plijet dezhañ moarvat ! Digollet 'oa bet 'vat : tri miz... N' en doa komprenet mann ebet. N' en doa ket klasket kompren ac'hanomp.

Ha ma zad a oa aze, o hegañ ac'hanon :

- Blev ! a lare heñ, oc'h ober goap ouzhin gant e veg kamm.

Al loen vil ! C'hoant 'n doa e yafen da labourat gantañ - toer war e gont eo ivez, ha gounit a ra mat. Met abaoe dek vloaz m' en doa dilezet ac'hanomp, ha laosket ma mamm da vizeriñ 'barzh Brest 'vit gounit deomp bara... Klask a rae lakat ac'hanon da vroc'hañ ouzh ma mamm, met bep tro, me 'gase anezhañ da gac'hat ! Labourat gant ul lonker brein mod-se, a rafe buhez din eus ar mintin betek an noz, ha rebechoù...

Neuze, hen goût a rae, 'oan dilabour. Me 'oa bet o labourat 'barzh porzh Kraozon, met pa veze gwallamzer 'pad ar goañv, n' hallen ket labourat. Ha me 'yae gant toerien a oa o tresañ tier 'tal ar porzh. Ar perc'henn 'oa un den yaouank, ha ni 'yae hon-daou alies, gant e garr-tan, da glask mein-glas, pe tachoù... Hag aze 'vez 'm eus lipet ouzhpenn ur bannac'h ! Ni 'yae dalc'hmat d' ar memes ostaleri, goude echu al labour bepred. Ha ma zad, na labourer ket pell ac'hane, 'n doa kavet anezhi. Dont a rae, tost bemdez, gant un all - un " den " eus e seurt - ha pediñ a rae ac'hanon da zont gantañ, pe e klaske trouz, rak ne zeue nemet pa mezv ; mod-all, ne grede ket !

Me ne raen van ebet, ne responten ket. Ha d' ar fin, e wele a-walc'h ne bakfe ket ac'hanon. Setu 'oa krog, gwashoc'h 'vit biskoazh, da chikaniñ ac'hanon :

- Lonker ? a lare din. 'Peus ket a vezh ? Pe vare e vo torret ho penn lous o kouezhañ a-ziwar un doenn ?

424

Koulskoude 'oan aet skuizh o welout anezhañ bemdez, o tont da c'hlaourenniñ warnon mod-se. Ur wech - meur a wech memes - 'n doa klasket sevel e zorn ouzhin. Met ur ur c'hamarad 'oa aze ganin, ur Marokad, ur mell paotr kreñv anezhañ, hag ur paotr chik ! Tapet 'n doa ma zad dindan e gilpenn, dibradet anezhañ war-bouez e chupenn, ha stlejet anezhañ 'maez... ha laret dezhañ, kentañ tro e wele 'nezhañ, e torre outañ e fas.

Abaoe n'em boa gwelet tres ebet dioutañ. Met un noz - ur sadorn noz, me 'oa aet d' ar bal gant kamaraded, ur bal bihan diwar ar maez 'tal Brest. Leun 'oa ar sal, ha ni 'oa aet kuit war-dro hanternoz, da evañ ur bannac'h 'tal-kichen. Pa oamp distroet, ur paotr 'n doa laret din oa deut ma zad etretant, hag e oa o klask war ma lerc'h, ha mezv oa, a lare hemañ, mezv-moñs. Gantañ oa un den en e oadoù, tres tagnous warnañ.

Chomet oamp ur pennadig o tañsal, met me 'oa nec'het ha 'vel ma oa tomm da ma fri 'vez, me 'lar d' ar blenier kas ac'hanon da di ma zad.

Erru eno - 'tro div eur pe teir eur - me 'wel un oto nevez dirak an ti. Ha me mont, dre ar jardin, ha dre gwer an nor a-dreñv, me 'wel 'nezhe o tebriñ o zamm kreun 'barzh ar gegin. Prennet 'oa an nor. Me 'vount warni. Terriñ 'ra ar c'hliked

- Petra neuze ? Perak 'maoc'h o redek war ma lerc'h ?

Ha ma zad, a-greiz pep tra, a lamm diwar e gador hag a dap ac'hanon dre ma roched. Huchal a ra n' ouzon ket petra. Ha pa glaskan 'n em zizober dioutañ e krog da skeiñ ganin... ur pezh taol-dorn 'barzh ma fas !

- Loustoni !

Ha heñ da respont :

- P' eus ket mezh, ma mab ? Mezv, d' ho oad !

Hag e ouele...

Erru 'oa ma c'hamarad 'barzh toull an nor. Met diouzhtu, egile all oa sailhet warnañ 'vel ul loen gouez. Ma c'hamarad 'oa kreñv, hag ul lajadig goude, egile 'oa astennet war al leur-di, ha ma c'hamarad a skoe a-dro-vriad...

Me oa dishualet bremañ, ken estonet 'oa bet ma zad. Ha me mont en trepas, ha pignat gant ar skalieroù... da gerc'hat traoù a oa chomet 'barzh ma c'hamb - ar wech kentañ 'oa din distreiñ en ti-se ma 'm boa bevet betek ma nav pe dek vloaz. Hag an hini kozh war ma lerc'h, met ken mezv 'oa, ken 'oa rampet e droad war ur bazenn, hag aze 'oa, o torc'hwenial 'barzh traoñ ar viñs ! Ne ouien ket e oa torret e c'har.

425

Pa oan distroet d' ar gegin, den ebet ken. 'Forzh skeiñ gantañ, egile 'n doa kollet e anaoudegezh. Ma c'hamarad 'n doa stlejet 'nezhañ 'maez an ti - mod-se 'n doa stoket e benn gant ar bazenn ouzh dor ar gegin ! - sachet 'nezhañ a-dreuz ar c'hlaenn, ha stlapet e gorf 'barzh penn all ar jardin, el linad hag en drez...

Ha ni kuit.

Da seizh eur vintin 'oa an archerien 'barzh ma zi, o kerc'hat ac'hanon. Kavet oant bet abred gant n' ouzon ket piv, ha kaset o-daou d' an ospital. Egile oa bloñset ha gloazet holl : e abrant, e jod, kern e benn h.a.

Un devezh leun oamp bet dalc'het 'barzh an archerdi ! Gast, ar moc'h-se 'oar lakat an den da gomz !

Ma zad a lare 'oamp aet hon-daou e sell da dagañ 'nezhe, marteze da laerezh, pe d' e lazhañ ! Met laret 'n doa oa ma c'hamarad 'ni 'n doa bountet 'nezhañ er skalieroù, ha torret e c'har... Kement-se 'm boa klevet a-zigant an archerien.

Met un deiz on aet d' ar Faou : ma zad 'oa aet di, da chom gant e vamm, ken na vefe yac'haet. Bec'h 'n doa o vale, ha distanet 'oa dezhañ. E vamm 'oa war e dro, ha diouzhtu ma 'm eus gwelet 'nezhi, me 'lar outi :

- C'hwi, an hani gozh, er-maez !

'Barzh he zi dezhi ! Met hounnezh oa pizh ha drouk : dalc'hmat 'oa bet fallakr ouzhimp, 'vel e vab all, ma zad-paeron.

- Petra 'peus kontet dezhe ? a laran da ma zad.

- Me 'zo kontant da ankouaat pep tra, ma teuit da labourat ganin.

- Kaoc'h ! Bras a-walc'h oc'h da lipat ar stal hoc'h-un ! 'm boa respontet, o stlakal an nor war ma lerc'h.

Me 'sante ur c'hwezenn yen war ma zal, 'vel gant an derzhienn.

Leizh ar gambr 'oa goulou tanav ar mintin, hag ar seurez e penn all ar gwele.

- Bleveg, poent eo deoc'h kemer ho kwrez !

FREIBURG, Genver 1973.

GOLERON

Goleron a zo un anv-lec'h eus kreizig-kreiz departamant Aodoù-an-Hanternoz. Kemerit ur gartenn ha tresit un tri-c'horn etre Sant-Brieg, Loudieg ha Gwareg, aze emañ e tu bennak. Ne din ket pelloc'h gant va diskleriadurioù, abalamour ne fell ket din ober ur gentel zouaroniezh hag ouzhpenn dre 'n avani em eus abegoù all c'hoazh, abegoù a-bouez, evit chom diresis war anvioù-lec'h an danevell-mañ, ha muioc'h c'hoazh war an anvioù-tud. Ur gontadenn wir ez an da gontañ, met fellout a ra din chom hep flemmañ den, rak, « an neb a vez lemm beg e deod a rank bezañ kalet kostez e skouarn ».

Er vro-se ne vez ken komzet brezhoneg, panevet da se, e-lec'h Goleron, e vefe, moarvat, distaget kentoc'h " Gwazh al laeron " pe " Gweh el leron " pe un dra bennak evel-se.

Goleron a zo ul lec'h plijus meurbet. E-barzh ar c'hreiz, ur stêr vihan dour sklaer eus ar c'haerañ, o tiskenn d' an druilh-drask e-mesk ar rec'hell, war draezh melen-aour, gant ar c'han didermen a blij kement d' ar besketerien dluzed. A-zehou, ur riblenn uhel mein greunek goloeta goadeier. A-gleiz, pradeier druz, un hent bihan ha goude, parkeier. Ar riblenn-mañ a zo kalz izeloc'h eget eben, dre m' eo e mein-sklent ar strad anezhi.

*

Traonienn Goleron a zo ken sioul, ken peoc'hus, ken fresk, zoken e-kreiz devezhioù bervet miz Eost, ken na sav en hini a dremen eno nemet ur c'hoant froudennus : mont da c'hourvezañ war c'heot fonnus unan eus ar pradoù, da ober ul lajad kousket, luskellet gant kanaouenn sklentin ar stêr.

M' hoc'h eus soñj, an hañv 1944 a oa bet dispar, ha kaer e oa bet an edeier, met ma oa bet troc'het eostoù puilh, falc'het e oa bet ivez kalz a dud.

427

An Alamaned, trec'het, a oa skarzhet kalz anezho war-du ar reter, met meur a hini ha strolladoù zoken a oa manet er vro pe dizroet enni, dre ma oa stouvet an hentoù gant Amerikaned, pe F.F.I.-ed, Fified pe, evel ma vez skrivet, paotred ar strouezh. Klask a rae neuze ar re zianket-se tizhout Brest pe An Oriant a oa c'hoazh dindan beli Hitler, pe en em rentañ trankil ha brav d' an Amerikaned a oa " fair play " gante, met e mod ebet, n' houllent kouezhañ etre skilfoù an derroristed, brizh soudarded, emeze, ha ne sellent ket berr petra ober ouzh ar brizonidi.

Ac'hanta, er miz Eost 1944 e oa evel-se daouzek paour kaezh soudard alaman dianket o troiata gant ur seurt karr-samm bihan a-dreuz ar vro ma komzan anezhi. Gouezet o doa e oa kelc'hiet strizh An Oriant ha ne dalveze tamm ebet ar boan, nag ar riskl mont betek eno, ha Brest neuze a oa kalz re bell. Koazhañ buan a rae o bitailh, ha diskenn ken buan all live an eoul-douar er pikol bidoniad o doa gellet gwintañ en o gwetur, pan anzavas an ofiserien dezhe e oa tremen poent skarzhañ. Ne vane nemet un dra d' ober : kouezhañ war ur strollad Amerikaned sioul hag en em rentañ dezhe. Aet e oant faezh, ha tremen faezh, ôg zoken o redek an hentoù hep gouzout pelec'h e oa ar gwellañ mont, distailet a bep tu gant tennoù, evel bleizi. Se ne oa ket ur vuhez ! Deut e oa ar mare da skeiñ an trebez war-lerc'h ar billig.

Goude un nozvezh leun a anken war vevenn ar c'hoad, e oant degouezhet mintin mat e penn-krec'h traonienn Goleron. Raktal e oant bet a-du evit kuzhat ar c'harr war c'hlazenn un dro-gorn, dindan torkadoù kelvez. Chom a reas eno ar

blenier ha daou all d' ober ged, met ar peurrest a oa nijet diouzhtu d' ar pradeier. Darn a ledas o fallennoù war ar geot leun a c'hlizh hag a ziroc'has diouzhtu, lod all n' o doa nemet ur c'hoant, en em walc'hiñ, hag ez ejont da fringal en dour.

*

Pemp lev bennak alese e oa fred e Kerloa. Ar patrioted, evel ma veze anvet c'hoazh ar Fified, a oa o vont da zieubiñ Kêr Gistin a zalc'he ar " Frigolined " d'ober o c'harreou enni.

Savet e oa beure mat tud ar bourk da welout an harozed oc'h ober kof-gar war ar blasenn, pep a roched marellet glas ha rous - lien " parachut " - war o c'hein, pistolinier ha kontilli en o gourizoù. Un nebeut fuzuilhoù a veze gwelet, met kalz muioc'h a vindrailherezoù.

428

Ar c'hure a oa krog gant e labour aluzener : reiñ ut sigaretenn d' ar vutunerien niverus.

Div blac'h a oa aze ivez, Tereza, ar glañvdiourez, ha Marc'harid, nizez ar c'habiten Iwan Jouannig, pep a groaz ruz war o brec'h kleiz. An div-se a yae, evel just, evit ober war-dro ar re glañv pe c'hloazet. Ar c'habiten, peogwir hon eus komzet anezhañ, a oa o rodeal eus penn ar blasenn d' eben, tri galoñs aour nevez-flamm gantañ war e skoaz hag un tamm brav a lorc'h en e foñs. Soñjit 'ta, eus adjudant ma oa, e oa deut da vezañ kabiten ! N'eo ket bemdez e vez gwelet kemend-all, geo ! Ofiserien all a oa c'hoazh, kalz ofiserien, ofiserien graet war an tomm, nemet daou is-letanant yaouank, Loeiz Denez, kloareg, ha Manuel an Touz, skolaer, graet gante o servij evel " aspirant ".

Glorus e oa an holl dud-se, se 'zo sklaer, darn ne welent den, met ar re ar muiañ c'hwezhet a oa c'hoazh an div dieurenn ; an div-se ma vefe bet piket dezhe o fenn-a-dreñv gant ur spilhenn, e vefe bet trawalc'h avel evit treiñ ur wenterez e-pad un hanter devezh, da vihanañ.

Daou garr-boutin ar barrez a wigouras war ar blasenn, bleniet gant o ferc'henned, Fransis 'r Rouz ha Loeiz 'r Gall. Sapre Loeiz ! Kement hag unan all e veze dirak e rod-stur, met, siwazh, adalek ma tiskenne alese, e veze un druez gwelout anezhañ. Ne veze ket uheloc'h eget ur paotrig daouzek vloaz, gant a verr, tort-didort e oa e baour-kaezh divhar. Met ar c'hwiltouz-se en doa e dammig kont, daoust dezhañ da vezañ bihan a vent, flemmus e oa e deod ha goût 'ouie dantañ start gant dent lemm.

Ar Patrioted a gras en daou garr gant kement a bres ha bugale-skol o vont d' o baleadenn dibenn ar bloaz. Pa voe harget ar bitailh en diadreñv, e voe gwelet an daou isletanant - ar re wir - pep a F. M. gante, o 'n em lakaat war o farlochoù war eskell karr ar Gall, da lavarout eo a-us d' ar rodoù a-raok. Hemañ a loc'has, hag ar Rouz war-lerc'h.

A-bouez-penn e kanas ar Fified ar " Marseillaise " :

« Allons enfants de la Patrie,
« Le jour de gloire est arrivé... »

An dud a lavare an eil d' egile : « Fromus ! Ken e teue c'hoant gouelañ din, plac'h kaezh ! Ma ie 'ta, sell oute ! Pegen dispont ! O va Salver, betek n' erruo poan ebet gant hini anezhe !

429

E Sant-Bili, en em lakaas ur c'harr-boutin leun a-drek paotred Kerloa, daou all a reas memes tra e Lanveg, hag e Kêr-Landremel e oa seizh anezhe o c'hortoz, pezh a rae eta daouzek. War urzh ar c'habiten Iwan Jouannig, Loeiz ar Gall a gemeras neuze an hent etrezek Kistin war-lerc'h ur sklerijenner war varc'h-dre-dan a ruilhe ingal pemp kant metr bennak a-raok.

Evel se ec'h erruas hon armead e penn izelañ traonienn Goleron. Dek eur bennak e oa ha krog ar baotred da soñjal en o adlein, pa voe gwelet paotr e varc'h-dre-dan o tistreiñ gwashañ m' helle e vrec'h kleiz savet gantañ :

- « Ar Voched ! »

N' en doa ket amzer ar c'habiten Jouannig da c'houlenn diskleriadurioù all, ar sklerijenner en doa dalc'het da vont a-hed ar c'hirri en ur grial : « Ar Voched ! »,

Ha birvilh diouzhtu en daouzek gwetur. Soñjal a rae an holl memes tra :

« Ni a ya da vezañ tapet amañ evel logod en o zoull ! »

Me 'lar deoc'h ne voe ket pell hon faotred o 'n em gavout er-maez ha gant ar foeltr a-dreuz ar Pradoù, kaoc'h tomm en o brageier... Pep hini a dreuzas ar stêrig evel m' hellas, darn a lammas evel yourc'hed en tu all, met muioc'h a voe o ribotat en dour, peadra da sodiñ an dluzed. Ha Tereza ha Marc'harid ? Chom a rejont bourdet war vord an dour ha ret e voe d' ar c'hure kemer anezhe war e chouk en eil war-lerc'h eben.

Daoust d' ar riblenn da vezañ sonn, me lar deoc'h ez ae an dud war-grec'h a-dreuz ar brouskoadoù, gant ar mil mallozh ma Doue zoken, kuit da sellout war o lerc'h... Daou pe dri a weas vil o zroad, met pa c'helljont dont betek an div glañvdiourez, e oa pep hini anezhe o tapout ur fallaenn ha ret ober ur bern kaezhigoù dezhe a-raok ma adteujont e-barzh.

Ar baotred a oa kluchet bremañ war lein an dosenn, pep hini en dorkad strouezh, addeut e oa hardison dezhe, karget o doa o armoù ha prest e oant da dennañ...

*

430

Hag an Alamaned e-keit-se ? Ar blenier, hanter-gousket war e rod, a oa bet dihunet trumm gant brammerezh ar moto o treiñ hag o skarzhañ gant ar foeltr. An daou c'hedour a yeas da c'hervel ar re a oa o tiskuizhañ er pradeier... A-benn ar fin - kemer a rejont o amzer ! - e teurvezas d' an daouzek abostol diskouez beg o frioù hag ar peurrest ivez. Gwelet e voent o vont hag o tont etre ar c'hirri, war o fouez, o armoù gante e-pign ouzh o skoaz, o sellout en-dro dezhe evel touristed. Ne seblantent tamm ebet kaout c'hoant da vont da c'haloupat war-lerc'h paotred-ar-strouezh... Du-hont e oa bet roet urzhioù ha kregiñ a reas an tennoù da strakal... Hola 'vat, ne rae ket sin ar Fified da valañ dir !

Met ar gwashañ 'zo ne weled mallozhtouen Alaman ebet o kouezhañ, chom a raent bremañ difiñv en o sav, pep a sigaretenn en o beg... Evel ma ouzoc'h, en emgannoù e vez lavaret gerioù istorel. Setu amañ an hini a zeuas gant unan eus ar Fified, Job 'r Gwenneg, ur mignon bras din. Kaer en doa bukañ ha tennañ eus e wellañ, netra... Memes Doue tra evel staokañ en dour !... A-benn ar fin, eñ o tegemenn d' e amezeg Tomaz :

« Didiac'h, Yann, laka da zorn dirak ar mousked daonet-mañ evit gwelout hag-eñ e teu un dra bennak er-maez ! »

War an hent, ar soudarded-a-vicher a chome en o savioù en ur ober goap un disterañ ouzh o enebourien. Penaos ? Ac'hanta, sevel a rejont o brec'h hag o biz-meud evit diskouez e tremene an holl dennoù a-us d'o fennoù !

Tud evel ar Gwenneg a gomprenas buan ha gant ar vezh a izelaas beg o fuzuilhoù. Neuze e voe diouzhtu un abadenn all, klevet e voe prenestroù ar c'hirri-boutin o taouhanteriñ, o strinkal, hag an tammoù gwer da nijal ha da gouezhañ war an douar gant trouzigoù sklinton... An Alamaned en em ledas war an hent, darn all a c'hoarias en-dro d' ar gweturioù. Gant ar piz kras-se, e oa krog ar soubenn da drenkañ evite, lakeda, ha ret e oa dezhe en em zic'haouiñ pe,

marteze, derc'hel da c'hoari. Ar pezhioù ifrontet. Met na dit ket da grediñ en em lakajont da dennañ int war o enebourien. Ha koulskoude gwelout a-walc'h a raent du-hont ur beleg o vont hag o tont gant e bakad sigaretinier, ruz e gokenn. Hennezh, da vihanañ, ne seblante ket bezañ un den aonik. Anat e oa ne glaske ket bugale Hitler foraniñ o c'hartouchennoù, darn anezhe n' o doa hini ebet ken marteze. Un itrik all a ziwanas en o fennoù... An eil war-lerc'h egile e voe klevet ar c'hamionoù o n' em lakaat da vlejall evel chatal dianket : Un todilhon « Ouéé ! Ouéé ! » spontus ! Gant ur begad finesa ha tammoù fisel, ne oa ket bet diaes lakaat an holl gernioù-boud da drouzal, evel evit gervel tud d' o lein.

431

Naon a-walc'h o doa ar baotred en o glazadur. Job 'r Gweneg e oa kleuz spontus e gof ha ne rae nemet soñjal er paneradoù sandwichennoù a oa chomet er gweturioù, dreist-holl pa zamglevas anjelus kreisteiz o tintal er c'hloc'hdi nesañ, daoust da vlejadedg ar c'hirri. Ha neuze tremen skuizh e oa o terriñ gwer... Pa gouezhfe Loeiz 'r Gall war o c'hintern !... Seurt-se, eme Yann, aze 'vat e klevfe pep hini ar gousperoù war an ton bras, kabiten ha tout !

« Arsa, emezañ etre e sant hag eñ, Loeiz 'r Gall ! Just a-walc'h, pelec'h emañ an istrogell-se ? N' em eus ket gwelet liv anezhañ na klevet anezhañ o rac'hoanat abaoe ma 'z on skarzhet diouzh e garrigell... Me 'zo sur n' en deus ket gallet an traouilh-se heuilh ac'hanomp amañ gant e baour-kaezh tammoù divhar gweet ; ha den, evel just, n' en deus soñjet ennañ gant ar bres a oa war bep hini... Betek n' eo ket chomet kluchet etre bankoù e garr, rak neuze eo bet graet e jeu dezhañ gant ar Fritzed pe toullet-didoulet gant hon tennoù... Didiac'h, ret eo din mont da welout... Ma ne gavan ket ar c'hwiltouz fall, e c'hellin, da vihanañ, degas bara ganin... Aotrou Kure, n' ho peus ket gwelet Loeiz 'r Gall ?

- Dêz ! eme ar beleg o farsal gant an div blac'h adkavet o liv un tammig gante, me 'vat, Job, ne glaskan ket kalz warlerc'h ar chaker e revr-se, mat hepken d' ober goap ac'hanon hag eus ar veleien all.

- Ma ! me a ya da vont da gerc'hat anezhañ, ne welan " dorifor " ebet ken e tu all.

- Ma feiz, nann, seblant a zo warne da vezañ aet d' o zoull, met diwall na vefent war-c'hed memes tra. N' eus forzh penaos, goulenn aotre digant ar c'habiten.

- Bo ! n' em eus ket amzer da goll... »

Erru e traoñ ar c'hoad, a-raok treuziñ ar stêr, Job a sellas pizh ouzh an dachenn... E gwirionez, ne veze spurmantet soudard glas-louet ebet ken war vale. Eñ neuze 'vat, d' an daoulamm ruz betek karr Loeiz ar Gall. Disammet e voe o welout ne oa ket ar perc'henn ennañ. Dre holl, tammoù gwer... Ar paneroù bitaiih a oa bet graet un tamm diblasañ dezhe ha ne voe ket pell Job o kompren e oa aet unan bennak gant an enebourien : « Me 'zo sur, emezañ, ez eo distroet al loened vil-se d' o gwetur da lipañ o beg diwar hon c'houst ». Sammañ a reas div banerad boued ha goude bezañ lakaet daou garr Kerloa da devel, ne chomas ket da louediñ en izelenn.

432

E-pad ma oa o reiñ pep a damm d' ar re nesañ dezhañ, e klevas e oa nec'het bras an ofiserien, dreist-holl ar c'habiten Jouannig dre ma soñje dezhañ n' o doa kuitaet an Alamaned an hent nemet evit c'hoari an dro ha dont d' ober o stal d' ar Batrioted a-drek o c'hein. Kaset en doa Jouannig paotr e varc'h-dre-dan - kuzhet mat en doa e venveg dindan raden puilh ur c'hleuz - da gamp Amerikaned Kerloa da zegemenn e oant... kelc'hiet, hag e oa dav dont d' o sikour.

A bep seurt a voe graet evit gortoz an Amerikaned. An daou ofiser yaouank, ar c'hloreg hag ar skolaer, a oa aet pep hini d' e du e donder ar c'hoad evit gouzout ar wirionez, hag-eñ e oa an enebourien o tont a dro kein.

An div blac'h o doa tapet pep a fallaenn all.

Tri pe bevar baotr, dispont ha blev dezhe war o jave evel Job, a oa diskennet da gerc'hat paneradoù bitailh.

An aluzener e oa krog e sigaretinier da goazhañ hag erru e oa ôg o vont hag o tont a-hed an talbenn.

Klevet e voe ar marc'h-dre-dan o tistreiñ, ne oa ket bet re-re bell, ne oa ket da larout... An " Amerloked " ne zeufent nemet war-dro pemp eur en ur vont da zieubiñ Kistin...

« Ar mallozhtoueoù-se, eme Jouannig fuloret, o devez ordinal amzer... Ha ma vefemp lazhet tout amañ 'benn neuze !... O ya, ne zeu an aotrounez-se nemet war o zrankilite, evel Jan-Mari Doustadig du-mañ. Ober a rin dezhe va c'homplimañchoù... »

Distreiñ a reas Loeiz Denez ha Manuel an Touz. Diskennet e oant betek an draonienn all ha goulennataet o doa tud ar vro ; abaoe meur a zeiz, den n' en doa gwelet an disterañ liv eus un Alaman."

Ha dres d' an ampoent, n'ouzoc'h ket petra pe gentoc'h piv a voe adwelet ? Ac'hanta, Loeiz ar Gall a oa du-hont, en traoñ, ouzh toull-dor e garr, ruz e gokenn, oc'h ober jestroù gant e zivrec'h a droe evel ur vilin-avel. Ne baoueze nemet evit skeiñ gant e viz-yod wat e dal, sklaer eoa e roe da gompren d' e genvroiz e oant sot da bennaskañ... Job ar Gweneg ha meur a hini all ne badent ket gant ar fent !

« Diouzh peseurt ifern tousegi emañ ar sac'h toaz piltosek-se o tiflukañ ?» eme ar c'habiten.

Ne oa ket da dortal, ober a rae sin ar blenier d' ar baotred da ziskenn.

« Ar jilgamm-se a zo paotr fin, a gendalc'has Jouannig ; peogwir emañ hennezh aze, n' eus riskl ebet, hag evel n' eus Boch ebet ken na dirazomp na drekomp emaint e-sell, hep mar na marteze, da stouvañ hent Kistin d' an Amerikaned. Fidam, aze e vo ur c'hrogad avat ha ret e vo dimp degemenn se d' hor c'henstourmerien. Deomp war hor c'hiz da Landremel da c'hortoz anezhe.

433

Reiñ a reas urzh da bep hini da ziskenn, pezh a oa krog dija an darn vrasañ da ober.

Ur wech degouezhet Jouannig gant e dud er c'harr, e voe un abadenn all... N' eo ket droug e oa e Loeiz ar Gall, fuloret ruz eo an hini e oa, ken e oa dare da dagañ :

« Ne doc'h nemet ur bagad genaouerien, aon dezhe lavarout ez eo o reor dezhe. Hag ar re goshañ a zo sotoc'h c'hoazh eget ar re yaouank. Noudedistag, hir e oa ho kar evit krapañ war ar grec'henn, ar re-mañ a skarzhe, seurt-se ! Met n' eo deut e soñj den n' hellen ket me redek... P' am eus gwelet ac'hanoc'h tout, tud kalonek a zo ac'hanoc'h, o vont gant ar mil mallozh ma Doue a-dreuz ar Pradoù, me, lakeda - petra am befe graet a-hend-all ? - a zo aet trankil ha brav war ma fouez da c'hourvezañ er parkad ed a zo aze en tu all d' an hent. Ha ne vefen ket bet ken fall-se aze ma n' ho pefe ket tennet warnon, moc'h a zo ac'hanoc'h ! Ma n' on ket bet toullet evel ur ridell ha lazhet dek kwech, ne vin jamez biken ken... Tchok ! Tchok ! Kouezhañ a rae plom en-dro din evel dornadoù kerc'h skoet d' ar yer war al leur... Ha ne greden ket fiñval gant aon da vezañ gwelet gant ar Voched daonet-se a oa o farsal diwar ho penn etre dek hag ugent metr pelloc'h, war an hent. N' ouzon ket penaos n' o deus ket kreuvet o c'hofoù o c'hoarzhin : tennet ho peus tost d' un eur hep kompren e oac'h kalz re uhel, hag evel-se e tremene ar boledoù a-us d' an aotrounez hag e teuent a-rez din... Pa soñjan ! Ne dan ket alies d' an iliz, met betek Santez Anna Wened e vo ret

din mont, rak me a dlefe bezañ bet lazhet-moust amañ e emgann bras Goleron, emezañ, goapaer.

Goude, neuze ho peus komprenet evelkent e oa ret izelaat begoù ho fuzuilhoù... Me 'zo ganet gant divhar berr, eus ec'h on, met c'hwi a zo deut tout war an douar gant daoulagad luch... Gant ar vezh ! E-lec'h tennañ e sac'h-yod unan eus ar re se oc'h ober goap ac'hanoc'h, n' ho peus graet nemet terriñ gwer war va c'harr, daonet 'vo kroc'hen ma ene ! Tud nay, pa laran ! Unan bennaket a vo ret dezhañ paeañ...

- Darn eo kousket ker dezhe ivez, eme ar c'habiten... Soñj, Loeiz hon eus kaset d' an ifern daou-ugent Boch bennak... Ne vez gwelet netra, avat, dre m' eo deut ar re all d' o dastum...

434

- Ya, pe gaoc'h, eme ar Gall, o c'hoarzhin e-leizh e gorzailhenn, Jouannig gaezh, ne dont nemet ur poufer, marteze ec'h eus gwelet ar Fritzed o ledañ o c'horf pa 'z oc'h kroget da dennañ un tamm gwelloc'h, met ar re-se ne dint ket marvet da viken, rak me am eus gwelet mat anezhe o sevel a varv da vev, evel ma welan ac'hanoc'h aze dirazon. Ma Doue ie 'ta, Jouannig, me 'zo estonet ganit, penaos e vefe bet daou-ugent lazhet, peogwir ne oa nemet daouzek bev !... Ya, daouzek den, met daouzek gwir soudard enep da zaouzek garrad bugale skol o c'hoari brezel ! ! »

En ur sklokal diaoulek ez eas ar c'hornandon fall da gregiñ en e rod-vleniañ, deut e oa e dro da vont war souz. Dre c'hras Doue, tarzhañ a reas diouzhtu e geflusker. Darn all e oa bet dav reiñ lañs dezhe gant an dornikell, dre ma oa goullo ar podoù-tredan. Ret e voe lezel tri garr e-lec'h ma oant ; mut ha difiñv e oa deut da vezañ o milinoù. N' eus ket bet gouvezet, pe me, da vihanañ, n' eus ket bet lavaret din, hag-eñ o doa itriket an Alamaned un dra bennak enne pe betra... Teodoù fall o deus kontet o doa paket un tenn bennak e-pad an emgann. Ar re a oa deut er gweturioù-se a gavas plas er re all, ha peoc'h dre eno. Grozmolat a-walc'h a reas adarre Loeiz, ar c'hwiltouz, o tremen dirak an tri garr sac'het, dre ma oa hanter stouvet an hent gante, met sederaat a reas pa welas ez ae e garr-boutin war-raok kerkoulz ha kent, goude un enkadenn a c'hellfe bezañ bet ken fall evite o-daou.

*

Imor Loeiz 'r Gall ne deas nemet war wellaat, dreist-holl ur wech degouezhet e Landremel... Krog e oa dija brud Emgann Goleron hag holl dud ar gêr vihan a oa o c'hortoz ar vrezelourien dispont. Bodet e oa Landremeliz war an daou gostez d' an hent, o divrec'h savet gante, o huchal hag o tihopal en enor d' ar Batrioted ken kalonek. Ar merc'hed yaouank e oa gante bokedoù e-leizh, hag evel ouzoc'h, adalek ma voe hartet ar c'hirri war blas 'kêr, e voe ivez pokadeg e-leizh, ma Doue ya 'vat, evel-se e vez kont. Goude e voe ur pred e sal ar gouelioù, gwarniset gant ur bern trilivioù bet gwriet warne bep a Groaz Loren. Ouzh an daol-a-enor, ez eas ar C'habiten Jouannig, klogoret gant al lorc'h, da azezañ e-kichen an aotrou Bozeg, maer ha kuzulier kanton war ar marc'had. An eontr en doa lakaet e nizez en e gichen hag ar glañvdiourez a gentañ klas a oa aet en tu all d' ar maer. Hag ar boued da ziskenn hag ivez lapad, 'vel just. Mat ha frank e oa ar sistr ha pep hini a evas e-leizh e jave. Prezegenn an Aotrou Kuzulier-Meur a zegasas dour war an daoulagad, dreist-holl pa zeuas gantañ er fin, ar gerioù-mañ eus ar " Chant du Départ " :

435

« Un Français doit vivre pour Elle,
Pour Elle, un Français doit mourir... »

O didiac'h ! Gant a dan a oa en e galon, ar c'habiten Jouannig en em gavas en e sav, bannañ a reas e vrec'h evit goulenn peoc'h :

« Ya, ma vez ret mervel, ni a varvo. Deut ez omp evit dieubiñ Kistin, ac'hanta, pe vin daonet, dieubiñ a raimp Kistin. Bezomp pare-holl da vont a-

gevret gant an Amerikaned bremaik. Da bemp eur nemet kard, e tleo pep hini bezañ e-kichen e gamion. Ar Voched er-maez ! Bro-C'hall da viken ! »

Div huchadenn Jouannig a voe youc'het teir gwech, stlaket e voe ivez an daouarn ha goude e voe klevet un akordeoñs hag e krogas un taol-dañs da c'hortoz an Amerikaned. Ha joaus spontus an dud, ha pokadeg adarre hag ivez - ma Doue, se 'zo sklaer - kazi kemend-all a herlinkadeg... Ar Fified a oa aze, lakeda, evel armead Annibal e Kapou !

Kement ha ken bihan, ma ne soñje ken nag ofiser na soudard - gwir eo, ne oa den evit adlavarout gwech an amzer : " delenda " kêr g-Kistin - nag en Amerikaned nag er Gistiniz.

A-greiz-holl - pemp eur e oa ! - e traoñ ar c'hrav du-hont e voe gwelet un dra iskis, ur seurt tuellenn zu o tont buan war-grec'h. Da gentañ, ne veze gwelet ha ne veze sellet nemet eus an duellenn-se ha na rae nemet kreskiñ, ur pezh klankouer spontus dezhi. Komprenet e voe e oa ur pikol kanon pe " bazouka " war ur seurt traktor... Spurmantet e voe neuze togoù-houarn soudarded amerikan hag ur renkennad kamionoù d' o heul.

Jouannig a huchas da unan yaouank kregiñ en un triliv, eñ a zastumas ur boked-bleunioù chomet war varlenn ur prenestr ha da vont evel-se da greiz an hent.

Un ofiser, e c'hevellunedenn gantañ e-pign ouzh e c'houzoug, dic'hoarzh, ur fas koad zoken dezhañ, a savas a-dreñv ar c'hanon... N' heller ket lavarout a reas kalz cher d' ar bleunioù, met tavomp.

436

« N' hon eus ket ur vunutenn da goll, emezañ, fellout a ra din bezañ e koulz e Kistin.

- Diwallit, o kuitaat traonienn Goleron e kavot Alamaned ha poan ho po marteze o tremen.

- Na rit ket blev melen gant se, eme an Amerikan, en ur flourañ fust e ganon.

- Ez eomp da vont ganeoc'h...

- Kazi sur ! Ezhomm ebet... It d' ar gêr, pe ma ra se plijadur deoc'h, chomit amañ da c'hortoz ac'hanomp, a-benn div eur e vimp distro. »

Kabiten Kerloa a soñjas dezhañ bezañ tapet un taol troad e-lec'h ma lavaran deoc'h, met, gant ur bannac'hig all war-benn ar re all, e voe ankounac'haet buan e zismegañs gantañ. Kendalc'het e voe gant ar cholori evit an holl, hegaset e voe ur " c'hollabo " bennak ha troc'het blev un toulladig paour keizh merc'hed tamallet da vezañ faoutet o botez gant an Alamaned. Unan anezhe zoken, goude bezañ bet touzet vil, a voe baleet war gein ur marc'h... Met traoù garz evel-se eo gwelloc'h chom hep komz anezhe, muioc'h e vez meret ur fankigell, muioc'h-a-se a sav diwarni c'hwez flaerius. E gwirionez, meur a Fifi a zalc'has d' en em ziduiñ hep ober droug da zen, daoust ma ne veze ket kavet kalz tra da evañ en tu-hont d' ar sistr. Ar pezh a rae diouer ivez a oa ar butun, sigaretinier Kure Kerloa n' o doa ket padet.

Da seizh eur just, e voe klevet kamionoù an Amerikaned... Gorrekaat a rejont ha diskouez ur pezh banniel gant kroaz kamm Hitler, kement ha reiñ da gompren e oa deut da vat o zaol. Ha stlakadeg daouarn ! Met raktal goude e voe taolet pled ouzh daou gamion dizoloet leun a brizonidi alaman, ha neuze avat e voe goapaet ar " Frigolined ", met ar re-mañ, pep a sigaretenn amerikan en o beg, ne raent ket kalz a van. « Ma, eme Job ar Gweneg, a blije e damm butun dezhañ, propoc'h e vefe bet d' an Amerloked reiñ o sigaretinier dimp... »

Met a-greiz-holl, e sachas Loeiz 'r Gall war e vañch :

« Sell ouzh ar pikol feldjañdarm blev ruz-se, gant e golier-ki, harpet ouzh aspled ar c'hentañ kamion gant e aer glorius, hennezh a oa e Gleron. Amzer a-walc'h am eus bet da welout e galite...

Bet eo paket eta hon enebourien, ha gwell-a-se, didiac'h. »

Tommañ a reas ivez d' ar c'halonoù pa voe gwelet an tri garr-boutin sac'het e Gleron oc'h erruout sachet gant pep a gamion amerikan.

437

Ar Fified a lammas en o gweturioù hag int war-lerc'h... Pebezh degemer a voe graet d' ar c'habiten ha d' e harozed e Kerloa ! Tremen a rejont etre div renkennad paotred, merc'hed ha bugale o kanañ meuleudi d' o c'henvroiz dieubet gante kêr g-Kistin ! Ur bajenn gaer, lakeda, evit istor ur vroig !

Chomet eo Emgann Gleron ha Seziz Kistin en eñvor Kerloaiz, ha ne vez fin ebet d' an danevelloù a gont ar Fified aet war an oad d' o bugale-vihan, hag ar re yaouank-mañ a vez lorc'h enne, o soñjal e oa o zad-kozh unan eus harozed miz Eost 1944.

" AR SEIZH AVEL "

(Ur pennad-skrid e brezhoneg bemdeiz !)

WAR ROUDOU LAN HAG HERVE

Ra bardono din Per Denez an dislavar-mañ : ur faziadenn en deus graet en e bennad fromus diwar-benn e geneil Arzel Even, o skrivañ e oa Alan ar Berr en doa prestet e anv-badez da unan eus an daou gomper a save ar pennadoù SEIZH AVEL moulet bemdeiz war ar gazetenn " La Bretagne " eus 1941 ha 1944, hag a veze sinet, evel ma ouzoc'h, LAN HAG HERVE.

Setu dres ar pezh a skriv din Alan ar Berr e-unan, da heul ar pennad-se :
« LA BRETAGNE a zo krouet e 1941 ha me n' on degouezhet e Roazhon nemet d' an 2 a viz Genver 1943 (1). N'eo ket ma anv bihan eta hag a zo bet kiriek eus anv LAN HAG HERVE. Un enor e vije din, hogen, siwazh ! n' eo ket ar wirionez. Un nebeut tre a " Laniged " am eus skrivet ; daouzek d' ar muiañ. »

Gant piv an diaoul e voe ijinet eta al lesanvioù a c'helled lenn e dibenn kement Seizh Avel a veze moulet war " La Bretagne " ?

Respont a rin didroidell : n' ouzon ket. Un dra hepken a zo asur : Youenn Drezen hag Abeozen (Yan-Fransez-Mari Eliez) e voe a savas, mar em eus soñj mat, ar Seizh Avelioù kentañ. Hogen nag an eil nag egile n' o doa, war a seblant, an disterañ sigur da sinañ Lan hag Herve. Perak LAN ha perak HERVE ?

(1) Evit pleustriñ war dachenn " Brezhoneg ar Skol ".

439

Piv a implijas ar muiañ al lesanvioù-se ?

Evel just, ar skrivagner a savas ar muiañ a Seizh Avelioù, da lavarout eo, hep fougeal tamm, a gredan, Langleiz, ho servijer... a skrivas, d' an nebeutañ, kant hanter-kant pennad sinet LAN HAG HERVE.

Pa voe krouet ar gelaouenn bemdeziek " La Bretagne ", Roperzh Aodig an hini eo a zlee pleustriñ war gement tra a selle ouzh ar yezh. Kalz labour en doa avat gant e vicher sekretour, ken e voe ret dezhañ, a-benn un nebeut mizvezhioù, lezel da unan all renerezh " Kornad ar brezhoneg ". Disammet Aodig eus ar garg-se, e voe soñjet ennon evit kemer e lec'h (1).

Ha, koulskoude, kalz a labour am boa ivez, diouzh va zu, gant " La Bretagne ".

Da gentañ, e tleen sevel un dresadenn pe ziv bemdeiz evit ar romant-da-heuliañ embannet e galleg war ar gelaouenn (dindan ar stumm dic'hortozet-se eo e voe moulet " Tristan ", romant brudet Joseph Bedier ; un oberenn " uhel " ma 'z eus unan, hag a blijas kalz memestra d' an holl lennerien). Tresañ talbennoù, skrivañ pennadoù-barn diwar-benn levrioù nevez, diskouezadegoù hag all, a ranken ober ouzhpenn. Hep kontañ e veze c'hoazh em c'hefridi koll, pep mintin, meur a eurvezh dirak taol-varmor ar mouler (2), evit reizhañ pajennoù a oa. A-raok ar ruzell-veure, koulz lavarout, peogwir e tlee bezañ prest ar gelaouenn evit 6 eur.

Pegoulz e voen anvet da rener " Kornad ar brezhoneg " ar gelaouenn ? N' ouzon mui ez-resis. E dibenn 1941, pe (d'an diwezhatañ) e derou ar bloavezh 1942 ?

N' eus forzh penaos (hel lavaret em eus dija) : e-pad mizvezhioù kentañ buhez " La Bretagne ", an darn vuiañ eus ar pennadoù moulet a veze skrivet gant Drezen hag Abeozen. Ha pa chome a-sav ar re-se, dre vurzjud, Roperzh Aodig, pe Langleiz (pe unan all bennak eus kenlabourerion ar gazetenn) a groge en e bluenn hag a sine, ken hardizh all : LAN HAG HERVE. Na petra 'ta !

(1) Un tammig diwezhatoc'h, e rankis kemer ivez lec'h Jean Merrien (Doue d' e bardono !), evel rener pajenn lennegel " La Bretagne ", e galleg. Hogen evit un abeg disheñvel : pa guitaas ar gelaouenn " La Bretagne " evit prenañ ul levr di. E-pad daou vloavezh bennak e oa bet renet pajenn lennegel ar gelaouenn gant Merrien, hag en un doare efedus kenañ, rak ur mailh e oa evit reiñ lañs d' ur soñj pe d' ur menoz. Deuet e huñvreenn da wir, avat, e oa dedennet gant un huñvreenn all... Evel meur a hini ac'hanomp.

(2) " Ouest-Eclair " an hini eo a voule "La Bretagne ".

440

Na lontek ur gazetenn bemdeziek avat ! Na diaes he boueta ! Diaes ha skuizhus. A-feur hag a gentizh ma tremene an devezhioù, ar sizhunvezhioù, ar mizvezhioù, ar bloavezhioù zoken, e teue " paperennoù " hon daou gomper da vezañ roueshoc'h-roueshañ. Ha ret embann memestra ur pennad e brezhoneg bemdeiz...

Adal neuze, e tremenis ar pep sklaerañ eus va amzer o pediñ hemañ, oc'h aspediñ hennezh, da sevel un danevell bennak evit "Kornad ar brezhoneg ". Ha pa vefe bet ut wechig an amzer.

Kavet e vo amañ, da heul, roll ar skrivagnerion a gasas pennadoù-skrid da " La Bretagne ", e-maez Abeozen, Ar Berr, Aodig, Drezen ha Langleiz, meneget uheloc'h :

Arzel Even (Piette), Berthou-Kerverziou, Jezekel, Jakez Konan, Youenn Olier, Roperzh Steven hag Erwan Tranvouez. Loeiz Herriou hag an Aotrou Yann Vari Perrot a gasas ivez, diouzh o zu, daou pe dri fennad, war an diwezhadoù, da lavarout eo e 1943 (1).

Daoust ha klok eo ar roll-se ? N' on ket sur tamm ebet. Damglok eo d' an nebeutañ, hag hiraet e c'hello bezañ diouzh ret, o lakaat em bije ankounac'haet ul Lan pe un Herve bennak, daoust d' am youl vat. Rak, siwazh ! n' em eus miret em dielloù nemet an danevelloù savet ganin.

Arabat kontañ warnon, eta, evit lakaat un anv e traoñ ar Seizh-Avelioù all, bet embannet war " La Bretagne ".

A-walc'h e vo, koulskoude, gant ur sellad taolet war roll va fennadoù-me evit meizañ pegen ledan e oa an dachenn darempredet gant ar Seizh Avel.

(1) Unan eus ar " Seizh-Avelioù " savet gant an Aotrou Perrot " Ar Galleg en hor pardonioù " a voe embannet, zoken, un nebeut mizvezhioù war-lerc'h e varv : d' ar 25 a viz C'hwevrer 1944.

441

ROLL AR 137 SEIZH AVEL

savet gant Langleiz etre 1941 ha 1944 ha strobet hervez o ster pe o danvez

LENNEGEZH :

- Kontadennoù, fentigelloù, eñvorennoù 68
- Barnskridoù, diwar-benn levrioù nevez, hag all 36

KELEIER :

- Ar stourm evit ar vro. A-du pe a-enep 22
- Diaesterioù gouzañvet en abeg d' ar brezel 7
- Buhez diabarzh an Emsav 4

Ar 137 pennad meneget amañ a zo bet embannet dreist-holl e 1942 hag e 1943. 5 hepken am eus adkavet evit ar bloavezh 1941, hag unan e 1944. Ha, neoazh, sur on em boa savet un toullad mat a Seizh-Avelioù e derou ar bloavezh-se, ker rouez e oa deuet da vezañ pourvezerion " Kornad ar brezhoneg " e-pad mizioù diwezhañ " La Bretagne ".

Ne vern penaos, 137 pennad-skrid savet gant an hevelep skrivagner a zo dija un testeni ! Neketa ? Daoust ha ne dalvezfe ket ar boan advoulañ lod anezho e stumm ul levr ? Setu dres ar pezh a zo bet kinniget din gant rener AL LIAMM. Spi am eus ne zaleo ket re mouladur an teskad-se. E dalbenn a c'hellan diskuliañ dija : « Skignet d' ar Seizh-Avel ».

An danevelloùigoù a vo kavet ennañ (kant bennak « hepken » emichañs...) ne greskint ket kalz va brud evel « skrivagner ha barzh », marteze. Savet int bet diwar-benn sigurioù moan a-walc'h a-wechoù, war an tomm, hag a-herr. Hogen bev-buezek int, en eskemm, ha skrivet en un doare skañv. Ha mar ne glotont ket mui gant temz-spered hor c'houlz-amzer, ken disheñvel diouzh koulz-amzer ar brezel, ne vo nemet un abeg ouzhpenn, evit ar re n' o deus ket anavezet an darvoudoù a zanevellan, pe a venegan en ur dremen, da gemer plijadur gant ur seurt lennadenn.

Diaes e oa ar vuhez a renemp - ha risklus evit lod ac'hanomp - hogen ne c'hellfe den lavarout e oa disaour. Rak biskoazh ne voe graet kement a labour efedus evit saveteiñ hor yezh - abaoe ma 'z eus anv anezhi marteze - ha ma voe graet e-korf ar pevar bloavezh-se.

442

Ar pajennoù da heul, tennet diwar va « eñvorennoù yaouankiz », a roio un tañva eus an aergelc'h a anale Lan hag Herve, e Roazhon - kêrbenn an Emsav - p' en em zichadenne da vat... ar seizh avel.

*

LAN A GARE AL LABOUR DIFISTUR !

Chom a raen, er mare-hont, gant va ziegezh - va gwreg ha va bugale - 7 straed Victor-Hugo. Kludet edo hor ranndi er pevare solieradur, 120 pazenn evit pignat betek enomp, mar plij ! gant diri a-serzh, war ar marc'had. Peadra da zigalonekaat gweladourion a zo. N' edo ket Lan, avat, eus ar re-se ha pep gwech m' en doa c'hoant da varvailhat ganin, war un digarez pe un digarez all, ne gile ket rak un diaesamant ken dister.

Ne oamp ket gwall-binvidik, hag ar brezel e oa, gouzout a rit... E-giz benveg-seniñ - pe sonerezh, ma fell deoc'h - e tremenemp gant ur c'hloc'hig ma istribilhe dioutañ un troad heizez en ari ur gordenn. Gant aon na vefe torret ar gordenn, e terede unan ac'hanomp a-herr bras, da zigeriñ an nor, kerkent ha ma stirlinke ar c'hloc'hig.

Setu dres ar pezh am boa graet, an deiz-se. Edo Lan dirazon, war an treuzoù, teñval e benn, ha dichek a-walc'h e zoareoù.

- Deuit-tre e-barzh, emeve. Petra 'zo nevez ganeoc'h, Lan gaezh ?

- Petra 'zo nevez ? Netra nevez ! Peogwir n'eo ket ar wech kentañ m' em eus abeg da sevel klemm ouzhoc'h.

- Da sevel klemm ouzhin ?... a respontis sabatuet.

A-vec'h peurechuet va frazenn, setu ma krogas da vlejal c'hwitellerez-tro

soudard an tan. Taolioù c'hwitell-da-ziwall a glevemp bemdeiz ha bemnoz, koulz lavarout, er maerad-se. Ne voemp ket souezhet eta, tamm ebet. Da betra en dije servijet dimp diskenn pa ne oa goudor asur ebet e kêr Roazhon. Na kav privez, na kav boutin. Ur wech bennak, hon doa en em dolpet en ul lod gant hon amezeion dostañ, e sol ur riboul bolzek a oa bet kleuziet gwechall, den ne ouie mui na pegours na perak, etre porzh hon ti ha porzh an ti nesañ ; hogen n' em boa ket kalz muioc'h a fiziañs en ur seurt « goudor » damzismantret eget en hor c'havni.

443

Evit ar wech, koulskoude, e seblante an traoù bezañ gwashoc'h eget kustum.

Hirbadout a rae galvadenn ar c'hwitell daonet-se ; klemmus da gentañ, skiltr da c'houde, ha klemmus adarre. Ha setu ma save en-dro he sutadenn, pe gentoc'h he blejadenn, a gaouadoù bouzarusoc'h-bouzarusañ. Dek gwech, ugent gwech marteze... Kle-e-em-mus, skiltru-u-us, kle-e-em-musoc'h, skiltru-u-soc'h, ha kle-e-em-u-u-so-o-oc'h c'hoazh a-raok treiñ, a-benn ar fin, d' ur fraoñverezh gwesped, o vont, goustadik, a nebeut da nebeudig, hag nebeudig da netra.

Peadra da lakaat da bennfolliñ da vat unan ne vije ket bet re yac'h, a-ziagent, e nervennoù.

- Setu tavet an avel, emeve. A-barzh nemeur e vo arnev !

- Diskennomp er c'hav, ha pa ne vefe nemet evit ar vugale, a aspedas va gwreg, na oa ket aonik koulskoude.

- Bo ! Bo ! Bo ! a droc'has Lan, ne dalvez ket ar boan fiñval ac'halemañ. Amzer en em lakaat er goudor hag e vo echu ar bombezadeg. Ar furañ d' ober e seurt enkadennoù, eo en em fiziout en e blanedenn. Lakeomp e kouezhfe ur vi-koukou bennak war an ti, ne chomfe mui tres ebet anezhañ... nag ac'hanomp. Ha neuze ! Ar brezel pevarzek am eus « graet ». Un afer all e oa, m' hel lavar deoc'h. Komzomp kentoc'h eus hor c'hudenn !

Ur fraoñvadeg all o tont eus ar pelloù, ar wech-mañ, a savas d' an ampoent : saoz pe amerikan, e terede bremañ kirri-nij brezel a denn-askell, mar geller lavarout, gwagenn war-lerc'h gwagenn, d' hor saveteiñ a asure tud 'zo ; d' hor saveteiñ marteze, a enebe tud all, met goude o devout hol lazhet.

O gwelout a raemp splann tre, a-ziwar-lein hor pontalez-diavaez : o c'hofoù metal liv arc'hant o lintrañ ken e lintrent, dindan skinoù an heol. Rak brav dispar e oa an amzer. Soñj am eus. Un abardaez a viz Meurzh e oa, hep an disterañ koabrenn el lijor. An 8 a viz Meurzh 1943, evit bezañ resis, war-dro div eur ha kard goude kreisteiz... Ya ! un abardaez dispar e oa, e gwirionez ! Unan eus an abardaezioù goañv-se a ziougan an nevez-amzer, hag a laka da advleuniañ, e kalon pep krouadur, ur garantez divent e-keñver ar vuhez.

444

Evit ar wech avat n' en em soursie ket kalz hon « dieubourion » eus c'hoant bevañ Roazhoniz. O bombezennoù a laoskent, a steudadoù, p' en em gavent - d' o soñj - dres a-us d' an ti-hent-houarn, hep teurel kont, emichañs, nag eus lusk o c'hirri-nij, nag eus tizh an avel... kement ha ken bihan ma kouezhent, bep gwech, pell tre diouzh ar pal buket.

Unan n' en dije taolet nemet ur sellad prim ha dievezh ouzh ar bombezennoù daonet-se, en dije gellet soñjal e tennent da gemend-all a vouloù-piti dinoaz ; hogen kerkent ha ma tizhent gorre an douar, e tarzhent gant ur safar spontus, trec'h da hini un taol kurun. Hag a gentizh ma tarzhent, amañ hag a-hont, e sailhe atredoù d' an nec'h : treustoù prenn, treustoù houarn, mein-greun, mein glas, tammoù plastr pe simant ; hag ouzhpenn-se koumoul ha koumoul poultrenn, a chome pell, en ebr, a-raok adkouezhañ.

A-daol-trumm, e savas flammennoù. Tizhet e oa bet an " Ekonomik ". Hag e staliad-marc'hadourezh an hini e oa a zeve bremañ : barrikennadoù gwin-ardant,

mesk-ha-mesk gant fustadoù eoul hag ezañs, hag ivez gant sac'hadoù sukr, troet da sukr-teuz gant ar wrez.

Ne badas, troiad ar c'hirri-nij a-us d' hor pennoù nemet un nebeudig amzer. Hir a-walc'h en doa seblantet dimp ar maread-se, memestra.

Lezet hon doa ar prenestri digor bras, gant aon na vefe bet torret o gwerennoù gant aezhenn an tarzhoù, ha bremañ e klevemp - degaset gant an avel a c'hwezhe diouzh ar c'hreisteiz - ur frond iskis, c'hwek ha trenk war un dro, o tont eus an tantad a gendalc'he da flammañ, da elfenniñ ha da zivogediñ gwashoc'h gwazh : frond ar sukr-teuz displeberet gant ur frond all... Ur frond, pe, kentoc'h, ur vlaz ne zleen ket ankounac'haat ac'han da bell : ur bern tud, ken gwazed ken maouezed, o doa en em repuget e kavioù an " Ekonomik ", d' an abardaez-se - implijidi dreist-holl, war a voe displeget antronoz gant ar c'helaouennoù - ; ha diouzh o c'horfoù laosket, hag a-wechoù laosket ez-vev, e oa e teue ar c'hwezh-an-dev heugus am lakae da hursuniñ.

En aner e atersis Lan, koulskoude. Nann ! ne gleve netra. Ur butuner touet e oa anezhañ, gwir eo ; ha ne rae mui, abaoe pell, diforc'h ebet etre ur frond hag ur frond all. N' eus forzh penaos, e tlee kenderc'hel ar vuhez. Setu dres ar pezh a soñje Lan.

445

Kerkent ha tavet mouezh ar c'hwitellerez-tro a embanne bremañ diwezh ar riskl, ec'h adkrogas eta gant e ziviz.

« Me 'ouie mat n' he dije ket padet an abadenn ! emezañ. A-walc'h a amzer hon eus kollet neoazh gant seurt disterachoù. Distroomp d' hor c'hudenn ! »

Hor c'hudenn ? E gudenn kentoc'h... Hag eñ ha tennañ eus foñs unan eus e c'hodelloù ur follennig paper ma c'hellis lenn warni :

« TAMALLOU d'ober da Langleiz : faziadennoù-mouladur em fennad " SEIZH AVEL " diwezhañ.

LANGLEIZ.

*

SKREV AR C'HOMANDANT CHARCOT

Setu amañ - da skouer - unan eus ar 150 " SEIZH AVEL " skrivet gant Langleiz evit ar gelaouenn " La Bretagne ", etre 1941 ha 1944, ha sinet gantañ " LAN HAG HERVE ".

Un nebeut deizioù kent na voe gouledet ar " Perak Nann ", lestr Charcot, e kouezhas war e vourzh ur skrevig gouliet.

Ken tener e oa karantez ar c'homandant Charcot evit pep tra krouet gant Doue ma ne c'hellas ket tremen hep klask gwellaat al loenig klañv. Hepdale e voe pareet groñs. Kement a anaoudegezh-vat a vagas neuze " Rita " e-keñver e vestr ma chomas war vourzh ar "Perak Nann " eus e benn e-unan.

Mont ha dont a rae dre ar vag, evel ma plije dezhañ, nemet e kouske bemnoz en ur gavedell, e kambr an ofiserion.

446

D' ar 16 a viz Gwengolo 1936, e-pad an nozvezh spontus-se a zlee kas ar vag d' ar sol, pa welas ne c'hellfe hini ebet eus e vartoloded, (e « vugale », evel ma lavare) en em dennañ eus an taol-arnev-se, nemet ur burzhud e vefe, e

soñjas Charcot gant truez en e skrevig, an draig vev-se na oa mui nemeti er vag a c'helle talañ d' ar gorventenn. Ne fellas ket dezhañ lezel an evnig mor da vervel. Edo en e gaouedell, d' ar mare. Diskenn a reas ar c'homandant d' e glask ha, dirak an holl, e tigoras frank dorikell e doull-bac'h.

Tec'hout a reas ar skrev a-denn-askell. Salvete e oa.

Prestig war-lerc'h, e oa lonket al lestr gant ar mor.

Pevar devezh warn-ugent goude, beuzet holl voraerion ar " Perak Nann " nemet unan (ar mestr-levier ar Gonideg) e voe kaset ar c'horfoù da Sant-Malo.

Ha setu ar pezh a c'heller lenn war ar " Goeland " (niverenn Gouere-Eost 1943) dindan bluenn Theophile Briand :

« Pa erruas er porzh al lestr a zouge korfoù Charcot hag e 21 martolod, edo ouzh e ambroug un niver spontus a vrini-mor, nemet e pell ajont kerkent ha tizhet an douar gant ar vag.

« Antronoz avat, e-pad al lidoù-kañv, souezhet holl e chomas an dud o welout ur skrevig (unan hepken) o plavañ a-us d' an archedoù renket stok-ouzh-stok war al leurenn, evel p' en dije karet kemer perzh ivez en obidoù. Hag, e gwirionez, tra ma ne voe ket lamet an arched diwezhañ, ne bellaas ket diouzh an dachenn.

« Pa voe echu pep tra, e voe goulennet ouzh Martine Charcot, merc'h ar C'homandant, ha spurmantet he doa ivez ar skrevig ?

« - E verzet am eus, eme Vartine Charcot, nemet n' em bije ket kredet menegiñ anezhañ, da gentañ. »

« Ha, goude bezañ tavet e-pad ur pennadig amzer, e lavaras a vouezh uhel ar pezh a soñje an holl en o c'halonoù : « Rita, skrevig ar " Perak Nann " e oa ! »

.

Skrevig Charcot deuet da lavarout d' e salver ur c'henavo diwezhañ, kent distreiñ en-dro d' ar morioù pell.

Perak nann ?

Ker kevrinus eo, pe e seblant bezañ, d'an nebeutañ, war ali mab-den doareoù-bevañ loened a zo !

LAN HAG HERVE (Langeiz), 29 XI 1943.

Ar ramz Kolevran

Selaouet hag e klevfet
 Mar karet e kredfet
 Mar karet na gredfet ket
 Setu ar pezh 'm eus da laret.

Ur wech e oa ur roue er gêr a Is hag a oa marvet e wreg. N' en devoa nemet ur bugel, ur verc'h anvet Enori, a oa koant meurbet.

Ma laras un deiz Enori d' he zad penaos e tleje az-dimeziñ.

« Da betra az-dimeziñ, ma merc'h ? Na gavin biken en nep lec'h unan da dalvezout da vamm, siwazh !

- Grit ma zad, pa laran deoc'h. »

Mont a ra ar roue da vale war ar maez, war gement-se, hag e kav war e hent ur plac'hig koant-kaer, ha leun a feson vat, ha fur, hervez doare. Ma c'houlennas diganti :

« Ma c'hemer a rafec'h da bried, merc'hig ? Me am eus peadra da vagañ ur wreg.

- Ha me ivez da vagañ ur pried, a laras ar plac'hig dezhañ.

- Ma ! Gwelet e vo. »

Hag ec'h ejont neuze pep hini gant e hent.

Pa erruas ar roue kozh er gêr, e laras d' e verc'h ar pezh a oa c'hoarvezet.

« Kemerit anezhi, ma zad, pa blij deoc'h. »

Eus an tu all, ar plac'hig, a oa hec'h anv Fantig, he devoa laret d' he zad ha d' he mamm, ha d' an holl, penaos ez oa bet goulennet da eurediñ gant ar roue. Dre-holl e veze lare dezhi :

~ Jezuz, pebezh da fortun ! Kemerit anezhañ ! Kemerit anezhañ ! »

Koulskoude unan bennak a laras dezhi ivez :

« Diwallit, merc'hig ; ar roue en deus ur verc'h, ha pa zimezo hounnezh, he fried a vo roue, en lec'h ar roue kozh, ha c'hwi a vo kaset kuit, mar ne c'hoarvez gwashoc'h c'hoazh. Larit eta d' ar roue penaos ne gemerfet ket anezhañ, nemet lazhañ a rafe e verc'h a-raok. »

Mont a ra ar roue da welet Fantig da di he zad hag he mamm, ha d' he goulenn digante da bried. Ar re-mañ, e c'hallit mat krediñ, a laras « ya » diouzhtu.

« Deut ganen d' am lez, da c'hortoz an eured, a laras neuze ar roue da Fantig.

- Nann, emezi, n' in ket ganeoc'h d' ho lez, ken ho po lazhet ho merc'h

Enori.

- Doue, petra a larit-c'hwi aze ! Lazhañ ma merc'h Enori a garan a-greiz ma c'halon !

- Ya, ret e vo deoc'h ober evel-se, pe n' ho kemerin ket da bried.

- Ha perak ivez eta, ma Doue ?

- Atav ho merc'h a zimezo hep dale, me oar 'vat, ha pa deufet da vervel, he fried a vo laket da roue en ho lec'h, hag e vin kaset kuit eus ho lez neuze, mar ne ve graet din gwashoc'h c'hoazh. »

Distreiñ a rae ar roue kozh d' ar gêr war gement-se, ha leun e galon a dristidigezh.

« Petra a zo c'hoarvezet ganeoc'h, ma zadig kaezh ? A c'houlennas digantañ Enori, p' hen gwelas evel-se.

- Netra ebet, ma merc'hig Enori, a laras dezhi.

- Eo, ma zad, un dra bennak a zo ouzh hoc'h ankeniañ; eomp da vale d' ar jardin, hag e larfet din petra eo. » Hag e krogas en brec'h he zad, hag ec'h eas gantañ d' ar jardin.

« Ac'hanta, ma zad, petra 'deus laret Fantig koant, danvez ho pried ?

- Allas ! Ma merc'hig kaezh, ma ouifec'h, ne larfec'h ken din dimeziñ.

- Ret eo laret din, ma zadig kaezh, laret din diouzhtu. »

Hag e laras holl dezhi.

« Ma, ma zad, grit evel m' o deus laret deoc'h ; me a varvo hep keuz evidoc'h.

- O ! Nann avat, biken ne rin kement-se, ma merc'hig kaezh, biken, biken !.. »

Hag e stardas anezhi etre a zivrec'h, gant daeroù.

449

« Ma ! Ma zad, a laras dezhañ neuze ; setu penaos e vo ret ober : ma c'hasit d' ul leandi, pell ac'han, lazhit neuze ur c'hi, ha kasit e galon war ur plad da Fantig koant, ha larit dezhi e vo honnezh ma c'halon-me... »

Ma vo graet holl evel-se, kaset Enori d' ul leandi, lazhet neuze ur c'hi, ha diskouezet e galon war ur plad da Fantig koant, a gredas e oa hini Enori e oa.

Neuze kerkent e voe graet an eured, hag e voe gouelioù ha festoù kaer.

Ur roue a oa ivez d' ar c'houlz-se en Frañs, hag en devoa pevar mab, paotred ar c'haerañ. Ma c'houlennjont digant o zad o leuskel da vont da vale bro, e-pad un deiz hag ur bloaz. Ar roue kozh o leuskas da vont, hag a laras dezhe :

« Gwelet e vo, ma bugale, pehini ac'hanoc'h en devo graet an taol kaerañ, pe desket ar muiañ, a-benn un deiz hag ur bloaz. »

Hag e pokas dezhe, hag ec'h ejont neuze en hent. En em gavout a rejont hep dale en ur c'hroazhent, ha ne ouient ket kaer pe hent heuilh.

« Eomp dre amañ, a lare unan.

- Nann, dre amañ eme un all.

- Gwelloc'h a ve dimp dre amañ, a lare un trivet.

- Setu, paotred, petra a zo da ober, a laras ar pevare : eomp unan dre bep hini ar pevar hent, ha tennomp plouzennig verr, da c'hoût dre be tu ec'h aio pep hini ac'hanomp ; hag a-benn un deiz hag ur bloaz en em gavfomp arre hon fevar er c'hroazhent-mañ, hag e vo gwelet neuze petra en devo desket ha graet pep hini.

- Se a zo mat, » a laras an tri all.

Hag e voe tennet plouzennig verr, hag e kimiadas ar pevar breur an eil diouzh egile, betek un deiz hag ur bloaz, hag ec'h ejont neuze pep hini en e hent.

Evit diverrañ, setu tremenet an deiz hag ar bloaz, hag en em gav arre ar pevar breur er c'hroazhent, hag e c'houlennont an eil digant egile, petra o deus graet ha desket.

« Me, eme ar mab henañ, am eus desket tennañ gant ma biz, hag e c'hellan lazhañ evel-se gedon, bleizi, sarpanted, tud, ramzed hag holl kement a garan.

- Kement-se a zo kaer, a laras an tri all.

- Me, eme an eil, am eus amañ ur violoñs (hag e tiskouezas e violoñs), ha pa sonan ganti, holl kement a glev a rank dañsal : kaeroc'h a zo, ar re varv zoken a zasorc'han ganti, pa garan.

450

- Kement-se a zo gwall-gaer, a laras an tri all.

- Me, eme an trivet, am eus desket pignat uhel, ha diskenn izel.

- Mat ivez, a laras e vreudeur. Ha te, breur bihan ? a c'houlennjont digant ar yaouankañ.

- Me, a laras hemañ, am eus desket dougen hep poan ar sammoù ar pounnerañ.

- Setu ni pevar faotr avat ! a laras neuze ar mab henañ e-keit ha ma vefomp hon fevar asambles e refomp holl evel ma karfomp : netra ne harzo ouzhimp war an douar. Me 'gavfe mat eta, e-lec'h mont bremañ d' ar gêr, ez afemp hon fevar asambles da vale bro.

- Eomp hon fevar da vale bro, a laras an tri all. »

Ha setu int da vont en hent o-fevar, evel pevar ha n' o deus aon a netra.

M' en em gavjont, hep dale, dirak ur c'hastell hag a oa en-dro dezhañ mogerioù uhel-uhel.

« Sav war ar voger, te, kraper, da welet petra a zo aze. »

Hag ar c'hraper da sevel war ar voger, kement-se ne badas ket pell.

« Petra a welez aze ? a c'houlennas digantañ an tri all.

- Ur pikol sarpant rodillet warnañ e-unan ha kousket en kreiz ar porzh ; hag en ur prenestr ar c'hastell, ur briñsez ha n' am eus gwelet biskoazh ken kaer ha ken koant ha hi.

- Digor dimp an nor, ha me a lazho ar sarpant, ne vin ket pell, a laras an

tenner. »

Ar c'hramer a ziskennas er porzh hag a zigoras an nor, hag e vreudeur a zeuas e-barzh neuze.

Ar sarpant a gouske bepred. An tenner a dostaas dezhañ ha, gant e viz, a leuskas un tenn en pep lagad d' al loen lous, ha setu-eñ marv-mik.

Ar briñsez a oa o sellet en ur prenestr ar c'hastell, ha pa glevas trouz an tennoù, e voe ken spontet, ma kouezhas d' an traoñ, er porzh, ha setu-hi ivez marv-mik. Ar pevar breur a zeredas.

- Allas ! Marv eo ! a laras ar mab henañ.

- Ya, siwazh, eme an eil.

- Kaerañ da briñsez, eme an trivet.

- Gortozit, paotred, eme ar soner, bremaik e welfet petra a ouzon-me ober ! »

Hag eñ da son gant e violoñs. Ma fiñvas ar briñsez un tammig : « N' eo ket marv a-walc'h ! » a laras an tri all. Ar soner a sone bepred, eus e wellañ, hag e tigoras he daoulagad neuze, hag e savas en he sav, hag en em lakaas da zañsal. Ar soner a baouezas neuze da son.

451

Met setu c'hoari-gaer etre ar pevar breur, da c'hoût da biv e vije ar briñsez.

Homañ, pa welas se, a laras :

« Ma c'hasit betek ma zad, ar roue Naplez, hag e larfet dezhañ petra en deus graet pep hini ac'hanoc'h evidon, hag eñ a laro neuze da biv e vin.

- Hag a zo mat, a laras ar pevar breur.

- Met ret e vo deoc'h ma dougen, a laras c'hoazh ar briñsez, hag ouzhpenn dougen ma diamantoù ha ma braverioù, hag a zo kalz anezhe.

- Kement-se a sell ac'hanon, ha bezit hep nec'hamant war-se, a laras an douger. »

Hag e voe karget ur sac'h bras a diamantoù hag a bep seurt braverioù, ha sammet war gein an douger. Ar briñsez a bignas war-c'horre gant an tri breur, hag ec'h ejont neuze etrezek Naplez.

Ar roue Naplez en devoa ur joa vras ouzh e verc'h, a oa bet laeret digantañ, ne ouie penaos, hag a soñje bezañ marv, pe kollet 'vit biken. Ma laras roiñ ar briñsez d' an hini en devoa dieubet anezhi. Met pep hini eus ar pevar breur a lare bezañ hennezh, hag e oa nec'het bras ar roue kozh gante.

Ma laras neuze :

« Ret e vo da bep hini ac'hanoc'h laret din petra en deus graet evit ma merc'h, hag evel-se e welin da biv ez eo ar muiañ dleet. »

Hag e laras neuze pep hini petra en devoa graet.

Ar roue kozh, goude m' en devoe o c'hlevet o fevar, a laras penaos ez oa ar soner en devoa graet an taol kaerañ, o tasorc'hiñ ar briñsez, hag ez oa dleet dezhañ, evit e boan.

Ma voe graet neuze an eured diouzhtu, hag e voe gouelioù ha festoù kaer.

Paotr e violoñs a chomas en Naplez gant e wreg, ha lezomp anezhañ eno, pa emañ mat, ha heuliomp e dri vreur.

Ar re-mañ, pa voe fin d' an eured, a en em lakaas arre en hent, evit klask ivez pep a briñsez, evel o breur. Met allas ! n' ejont ket a-bell.

452

Tremenet a oa an deiz hag ar bloaz, ur pennad amzer a oa, abaoe ma oant aet eus ar gêr, hag o zad, o welet na zistroent ket, ha na zegasent keloù ebet dezhañ, a oa droug mat ennañ. Ma o roas d' ar ramz Kolevran. Ar ramz a en em lakaas kerkent d' o c'hlas hag o c'havas hep dale. Tapout a eure anezhe dindan e ziv gazel hag o c'hasas gantañ d' e gastell, a oa dindan an douar. Allas, kollet o devoa o holl galloud, dre ma ne oant ket deut d' ar gêr, e-penn an deiz hag ar bloaz, evel m'o devoa laret d' o zad. Pa zegouezhas gante en e gastell, ar ramz a blantat ur vazh sec'h pell a oa en-kreiz e borzh, hag a laras dezhe e vijent dieubet pa deuje ar vazh-se da zougen delioù glas. Ha neuze o lakaas en ur c'hav don ha teñval, dindan e gastell. Bemdez e vije taolet o boued dezhe eno, dre un toull, evel da loened gouez. E-pad un eur bemdez e vijent leusket da vale en ur porzh-kloz, gant mogerioù uhel-uhel tro-dro. Er porzh-se ez oa plantet ar vazh sec'h a dlee dougen delioù a-raok ma vijent dieubet. Hag en em lakaent war o daoulin dirak ar vazh, hag e pedent Doue ma teuje da zougen delioù.

Met lezomp anezhe ur pennadig ha komzomp eus merc'h roue Is en he leandi. Mont a eure ar Roue a Is hag ar rouanez da welet al leandi-se. Pedet e voent da bredeñ eno, hag e voe lakaet Enori d' o servijañ ouzh taol. Ar rouanez a oa he daoulagad warnezhi atav, ha goude ar pred e c'houlennas digant al leanez kentañ piv a oa al leanez yaouank-se ken koant ha ken fur.

« Petra, a laras al leanez kozh, souezhet, ne anavezit ket eta merc'h ar roue eus e wreg kentañ, Enori ?

- Nann avat, dianavezet em boa anezhi dindan an dilhad-se. »

Ha setu-hi souezhet-bras : met ne eure ket a van muioc'h. Pa voe degouezhet er gêr, e laras d' ar roue :

« Ret eo ober da Enori dont d' ar gêr eus al leandi.

- Ober da Enori dont d' ar gêr ?... a laras ar roue, nec'het bras.

- Ya, anavezet mat em eus anezhi el leandi... Mat hoc'h eus graet, dre ma n' hoc'h eus ket sentet ouzh ar pezh am boa laret deoc'h, a-raok hoc'h eurediñ.
»

Ar roue a gredas e oa deut keuz d' e wreg eus ar pezh he devoa laret dezhañ diwar-benn Enori, hag e hastas ober d' e verc'h dont d' ar gêr. Ma veze bepred ganti neuze en he c'hambr, pe o vale el liorzhoù. Ar rouanez a zeuas da soñjal en em glevant evit ober un droug bennak dezhi, marteze he lakaat d' ar marv, hag ec'h eas un noz, en kuzh, da welet ur sorserez kozh a oa o chom en ur c'hoad hag a laras dezhi klask un tu da lakaat Enori da vervel. Ar sorserez a laras dezhi bezañ hep nec'hamant, penaos kement-se ne vije ket diaes.

453

Ha setu, hi neuze da sellet he levrioù, re ar sarpanted, re ar ramzed, ha re all. Ma welas e-barzh penaos tri a vibien ar roue a Frañs a oa dindan veli ar ramz Kolevran, en devoa laret ne vijent ket dieubet ken na deuje da zougen delioù ur vazh sec'h en devoa plantet en kreiz porzh e gastell. Ne youle droug ebet da vibien ar roue. Ne youle dezhe nemet pep vad. Ma laras d' al lezvamm trubardez :

« Pa vefet distro d' ar gêr, it da vale, gant Enori en-dro da gastell ar ramz Kolevran. Gwelet a refet un toull don dindan ar c'hastell ; sellit barzh an

toull-se, ha larit : « Sell, sell amañ avat a zo traoù kaer ! ». Enori a zeredo, ha pa vo o sellet en toull, roit dezhi un taol skoaz, 'vit ma kouezho e-barzh, ha distroit d' ar gêr neuze, hep nec'hamant. »

Distreiñ a ra ar rouanez d' ar gêr, hag e lar da Enori :

« An amzer a zo kaer, eomp da vale, ma c'halonig, war-du kastell ar ramz Kolevran. »

Enori a voe eürus o klevet he lezvamm o komz outi evel-se. Mont a reont o-div etrezek kastell Kolevran. Ur mevel bihan, anvet Yannig, ac'h eas ivez gante. Setu int da ober an dro d'ar c'hastell, ar rouanez a-raok. Pa voe degouezhet war vord an toull don, e laras :

« O ! Koantañ da draoù a zo amañ ! Hastit dont da welet. »

Hag Enori ha Yannig a oa war-lerc'h a zeredas. Pa oa Enori o sellet a-us d' an toull, an diaoulez a roas un taol skoaz dezhi, hag a zeredas neuze d'ar gêr. Yannig kaezh a ouele o tont war he lerc'h, hag e laras dezhañ mar larje netra d'ar roue, na da den ebet zoken eus ar pezh en devoa gwelet e vije graet kemend-all dezhañ, ha taolet ivez en toull.

Oc'h erruout er palez, ar rouanez en em lakaas da ouelañ ha da estlammiñ :

« O ! Ma Doue, gwashañ walleur ! O ! Enori gaezh !... » Ar roue a zeredas, pa glevas, hag a c'houlennas :

« Petra a zo ? Pelec'h emañ Enori ?... »

- O ! Gwashañ glac'har ! Pa oamp o vont gant an hent, ur goumoulenn a zo diskennet en hon betek, ur ramz en deus astennet e vrec'h er-maez ar goumoulenn hag en deus tapet Enori gaezh, ha neuze ez eo savet ganti uhel-uhel, hag em eus kollet ar gwel anezhi. »

454

Setu glac'haret ar roue, ha da ouelañ, ha da sachañ ar blev eus e benn.

An deiz war-lerc'h, Yannig ac'h eas e-unan betek kastell Kolevran (ar ramz a oa aet da duta), ha pa voe en bord an toull, e c'halvas a vouezh uhel :

« Enori !... Enori !... Komzit ouzhin, mar oc'h c'hoazh en buhez, ha mar am c'hlevet... Me eo Yannig, ho mevel bihan ho kar... »

Ma komzas Enori outañ, hag e laras penaos ez oa en buhez, hag hep droug, met ne c'halle ket dont er-maez an toull, ez oa eno gant tri mab ar roue Frañs, a oa dalc'het dindan veli ar ramz, hag ec'h aoze dezhe tammoù boued, hag e wrie o dilhad a oa holl en pilhoù, ha ne zeuje ac'hane nemet pa vije dieubet an tri friñs, da laret eo pa zeuje da zougen delioù ur vazh sec'h en devoa plantet ar ramz en-kreiz e borzh. Adalek neuze, Yannig ac'h ae bemdez d' ar c'hastell, a-wechoù div teir gwech bemdez, ha bep tro e kase gantañ bara gwenn, kig, dilhad, hag o zaole holl en toull. Un deiz ar rouanez a c'hedas anezhañ, ha pa hen gwelas o teurel boued ha dilhad en toull, e teredas hag e laras dezhañ, o kregiñ start en e vrec'h :

« Da biv e taolez-te an traoù-se aze ? »

Ar paotrig kaezh a grenas en e holl izili, hag a laras :

« Da Enori a zo c'hoazh en buhez... »

- Penaos e ouzout te se ?

- Komzet he deus ouzhin.

- A ! Enori a zo c'hoazh en buhez !... »

Hag e redas kerkent betek ar sorserez, hag e laras dezhi, ha droug enni :

« Pezh sorserez ez oc'h c'hwi eta ! Graet em eus evel ho poa laret, hag Enori a zo c'hoazh en buhez !

- Ha gwir ? a laras ar sorserez, evel pa vije souezhet, ha koulskoude e ouie mat ar wirionez. Ma ! Ec'h an da roiñ deoc'h un dra bennak hag a zeuio a-benn anezhi, bezit hep nec'hamant war gement-se : setu amañ un hiviz da roiñ dezhi, ha pa wisko an hiviz-se, e skorno he holl izili, he c'horf a zeuo da vezañ reut evel ur peul-maen ha biken ne zistroio ken en buhez. »

Ar sorserez a ouie mat ne c'hoarvezje netra a gement-se hag e rae pep tra evit mad Enori ha tri mab ar roue Frañs.

Distreiñ a ra ar rouanez d' ar gêr gant an hiviz, hag e ro anezhi da Yannig, hag e lar dezhañ :

455

« Dalit, Yannig, setu amañ un hiviz nevez-flamm da gas da Enori, ar plac'hig kaezh !... »

Redek a ra kerkent Yannig war-du kastell Kolevran, gant an hiviz, ha stad ennañ. Pa voe e-tal an toull, e c'halvas :

« Enori ! Enori !

- Petra, Yannig kaezh, te a zo aze ?

- Ya, ha deut ganen evidoc'h un hiviz fresk, ha nevez... dalit !... »

Hag e taolas an hiviz en toull.

« Trugarez dit, Yannig kaezh ! Ezhomm a-walc'h am boa... »

Gwiskañ a ra Enori an hiviz, ha kerkent setu-hi yen evel ar skorn, ha reut evel ur peul-maen. Kouezhañ a ra harp ouzh ar voger, hag e chom eno evel un delwenn. Setu glac'haret tri mab ar roue pa weljont kement-se.

« Marv eo, siwazh ! a larjont. Petra ober outi ? a laras unan. Ret e vo he douariñ er porzh, e troad ar vazh 'lec'h ma pedomp bemdeiz, hag evel-se e pedfomp ivez eviti.

- Nann, a laras un all, gant aon e teufe ar ramz da doullañ eno, pa welo an douar fresk, evel war ur bez. »

War vord ar mor e oa ar c'hastell, hag an trivet a laras neuze :

« Lakaomp anezhi en un arched koad, hag he leuskomp da vont neuze war ar mor, en gras Doue. Ul lizher a vo lakaet ganti ivez en arched, da reiñ da c'houzout ez eo merc'h d' ar Roue a Is, ha da bediñ an hini he c'havo da lakaat he douariñ war an aod, 'lec'h ma vo kavet.

- Kement-se a zo mat, » a laras an daou all.

Graet e voe eta un arched koad ha lakaet Enori e-barzh, gant ul lizher, hag a voe neuze leusket da vont war ar mor, en gras Doue.

Mab ar roue Spagn a oa kousket un noz en e wele, hag en devoe un huñvre. Ma klevas dre e hun ur vouezh hag a lare dezhañ mont an deiz war-lerc'h ar beure da vale war aod ar mor, hag e kavje eno e fortun. An deiz war-lerc'h ar beure e laras d' e c'hoarezed petra en devoa huñvreet.

« Ret eo dit mont da vale war aod ar mor, a larjont dezhañ, da welet.

- Ba ! emezañ, kement-se n' eo nemet un huñvre, ha me ne gredan ket d' an huñvreoù. »

456

Ha n' ec'h eas ket da vale war aod ar mor. Met an noz war-lerc'h, pa oa kousket en e wele, ec'h huñvreas arre evel an noz diagent. An dro-mañ ne laras netra d' e c'hoarezed, met sevel a eure beure, hag ec'h eas da vale war aod ar mor. Pa oa o vont a-hed an aod, e welas un arched war an traezh. Ma voe spontet un tammig, hag e laras :

« Sin fall, kavout un arched eus (diouzh) ar heure. »

Tostaat a ra koulskoude, hag e tigor an arched, hag e wel astennet e-barzh ur briñsez, ar c'haerañ en devoa gwelet biskoazh. Kouezhañ a ra d' an daoulin dirazi, ha ne skuizhe ket ouzh he sellet :

« A ! Mar ne vijes-te ket marv ! » a lare, gant glac'har.

Ma welas neuze al lizher, hag e krogas ennañ hag hen lennas.

« Ya, emezañ, me a lakao da zouariñ evel pa vijes bet ma fried ! »

Mont a ra neuze d' ar gêr, ha distreiñ kerkent, gant tud, ha beleien, evit ma vije douaret ar c'horf-marv war aod ar mor, 'lec'h ma oa bet kavet, evel ma oa merket war al lizher. E c'hoarezed a oa deut ivez, ha gante dilhad kaer da wiskañ d' an hini marv, pa oa merc'h ar roue. Pa voe lamet dezhi he hiviz skornet, ha gwisket un all, e fiñvas un tammig.

« N' eo ket marv ! » a grias kerkent ar merc'hed a oa ouzh he gwiskañ.

Ar priñs a bokas neuze dezhi, hag e tigoras he daoulagad, hag e savas eus hec'h arched. Setu souezhet bras an holl. Ma tistrojont neuze d' ar palez, gant levez vras, hag ar briñsez a laras holl kement a oa c'hoarvezet ganti.

Ar priñs yaouank a oa ken troet e benn gant Enori, ma rankas e dad hen leuskel da zimeziñ dezhi diouzhtu. Kaset e voe neuze lizheroù a bep tu, en rouantelezh ar Spagn hag er rouantelezhioù all evit pediñ da zont d' an eured.

Tad Enori hag e lezvamm a voe pedet ivez. Pa lennas houmañ al lizher, ec'h eas kement a zroug enni, ma voe darbet dezhi foeltriñ.

« Daoust hag hi a vefe bev c'hoazh !... »

Hag e redas arre da gavout he mignonez ar sorserez.

« Enori a zo o vont da eureujiñ mab roue Spagn ! a yudas, o vont en lochennig ar sorserezh, evel ur giez kounnaret.

- Kement-se ne c'hall ket bezañ gwir ! a laras ar sorserez, oc'h ober van da vezañ hep gouzout netra, eviti da c'hoût mat pep tra.

- Sellit al lizher-mañ, mar ne gredit, azenez kozh ! Ne ouzoc'h netra !... »

457

Hag e taolas dezhi al lizher degaset dezhi 'vit he fediñ da vont d' an eured. Ar sorserez a lennas anezhañ, a reas van da vezañ souezhet-bras, hag a laras neuze :

« N' eus ket a forzh ! Unan bennak a zo oc'h ober eviti, met n' on ket c'hoazh en penn ma ardoù, ha gwelet e vo piv a drec'ho !... Ret e vo deoc'h mont

d' an eured, ha setu amañ un traet glas hag a zeuo a-benn eus ar goantig-se, ha pa vefe teir badeziant war he fenn. »

Hag e roas ur podad traet d' ar rouanez, hag e laras dezhi c'hoazh :

« Pa vefet ouzh taol e-kichen ar wreg a eured - rak en he c'hichen e vefet lakaet - tennit an traet-se eus ho kodell, frotit un tamm anezhañ ouzh he zavañjer, ha kerkent e vo troet en un evn bihan glas, hag ec'h aio er-maez a sal ar pred, oc'h ober « driik !... driik !... ». Ha bezit neuze hep nec'hamant, biken den ne welo ken Enori goant ! »

Dont a ra al lezvamm d' ar gêr gant he fodad traet. Degouezhet ar c'houlz, ec'h a d' an eured, gant ar roue kozh. Lakaet eo ouzh taol e-kichen ar wreg a eured hag e ra mil stad anezhi, hag e tiskouez kalz a garantez eviti, an drubardez milliget.

War-dro hanter ar pred, pa oa an holl laouen, ha pep hini gant e gaoz, e tenn ar podad traet eus he godell, dindan an daol, hag e frot un tamm ouzh tavañjer Enori. Ha kerkent, setu-hi troet en un evn bihan glas, ha da zarnijal en-dro d' an daol, oc'h ober « driik !... driik !... ». Mont a ra er-maez dre ur prenestr a oa digor, hag an holl da sevel diouzh taol, ha da vont war-lerc'h an evn glas. Kludañ a ra ur pennadig war lein ar c'hastell, hag e teu holl da c'hlazañ en-dro dezhañ. Ar priñs a oa glac'haret o welet ez oa kollet e bried. Pep hini a c'hoanta tapout an evnig. Pignat a reer war ar mogerioù, war ar gwez ; met pa vez unan bennak o vont da lakaat e zorn warnañ, an evnig a nij pelloc'h, oc'h ober bepred « driik !... driik !... »

Mont a ra evel-se betek kastell ar ramz Kolevran, hag holl dud an eured war e lerc'h. Met a-benn kuzh-heol ez oa ar priñs e-unan ; ar re all a oa skuizhet ha distroet d' ar gêr. Tri mab ar roue Frañs a oa daoulinet dirak ar vazh, o pediñ Doue 'vit ma teuje da c'hlazañ. Nijal a ra an evn war ar vazh, ha kerkent e teu ivez da c'hlazañ, ha da zougen delioù. Unan eus an tri friñs a savas e zaoulagad da sellet ouzh penn ar vazh, pa glevas « driik !... driik !... », hag e krias kerkent :

458

« Sellet, breudeur, glas eo ar vazh !... »

An daou all a savas ivez o daoulagad, a selle an douar, hag a estlammas :

« O ! Doue ra vezo meulet ! Deut eo an amzer !... »

Ar vazh a oa goloet a zelioù glas, hag e-touez an delioù e oa un evnig glas ar c'hoantañ, a gane gae. Unan eus an tri breur a dapas an evn gant e zorn ha kerkent, o tra burzhudus ! e teuas da vezañ ur briñsez...

« Enori ! a estlammjont neuze o zri.

- Dieubet oc'h bremañ eus ar ramz Kolevran, mibien ar roue Frañs, ha distroit d' ar gêr pa garfet ! » a laras dezhe.

Kerkent e tigoras an nor-borzh anezhi hec'h-unan, hag ec'h ejont er-maez.

Mab ar roue Spagn a oa eno ivez, deut war-lerc'h an evn, ha pa welas e wreg distroet d' he stumm gentañ, e lammas en he c'herc'henn da boket dezhi, gant kalz daeroù a joa.

A-boan e oa dezhe bezañ aet ur pennadig eus ar c'hastell, ma klevjont un drouz spontus war o lerc'h, hag e tistrojont holl o fennoù. Kastell ar ramz Kolevran a oa kouezhet war e vestr !

Neuze ec'h ejont da gentañ da balez ar roue Spagn, da echuiñ eured Enori. Ar roue Spagn en devoa ivez teir merc'h ar c'haerañ, hag a blijas da vibien ar roue Frañs, kerkent ha m' o gweljont.

E-pad pemzek deiz e voe gouelioù, festoù, ha c'hoarioù a bep seurt, hag e teujont neuze holl da Bariz, da balez ar roue Frañs. Ar roue kozh a oa bev bepred, hag en devoa joa vras o welet e vugale distro d' ar gêr, evitañ d' o bezañ roet d' ar ramz Kolevran. Ma voe eureujet neuze an tri friñs d'an teir friñsez merc'hed ar roue Spagn, hag e voe a-nevez gouelioù, festoù, ha c'hoarioù.

Pa voe fin d' an holl cholori, ec'h eas ar gompagnurezh holl da ambroug Enori hag he fried betek ar gêr a Is. Ar roue kozh a oa bev bepred, hag en devoe mil joa o welet e verc'h distro. Al lezvamm diaoulez a voe darbet dezhi foeltriñ gant an droug a oa enni, met ober a eure koulskoude un degemer vat da Enori, ha d' ar re a oa ganti, dre m' he devoa aon outi bremañ. Graet e voe ur pred kaer, hag ar sorserez kozh a voe pedet ivez.

En defin ar pred, ar roue kozh a bedas e verc'h da laret holl ar pezh a oa c'hoarvezet ganti, abaoe ma oa az-dimezet.

459

Enori a laras holl, hep kuzhat netra. Ar roue kozh, pa glevas, ac'h eas kement a zroug ennañ, ma krias d' e vevelien :

« Gorit ar forn diouzhtu, ma vo taolet e-barzh an div ziaoulez !

- Hola ! Ma zad, a laras neuze Enori, ne vo ket graet evel ma larit, rak pep tra a zo troet evit ar gwellañ. Ar rouanez hag ar sorserez a ranke ober eeun evel m' o deus graet, evit ma teuje pep tra da vat : 'vit ma vije dieubet tri mab ar roue Frañs eus a gastell ar ramz Kolevran, hag e vijen me eureujet da vab ar roue ! »

Ha setu a-nevez festoù, c'hoarioù ha kaniri, ha plijadur evel ma larent e vije er gêr a Is !

FIAKR BRIAND, mañsoner, a barrouz Kaouan.
dastumet gant FANCH AN UHEL e 1872.
(eilskrivet en doare-skrivañ a-vremañ gant Y. E. ABALAN
skriverezet evit " Al Liamm " gant MAKOTO NOGUTI.)

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

Warlerc'hidi Yann Rous

**AN DUG YANN II
(1286-1305)**

Yann Rous a renas e-pad un hantergantved, hag e dri warlerc'hiad e-pad un hantergantved c'hoazh. E vab Yann II (1286-1305), e zouaren Arzhur II (1305-1312), hag e c'hourdouaren Yann III (1312-1341) a gerzhas feal war e roudoù.

N' eus hogos netra heverk e personelezh an tri friñs-se. Disked e voe o zri ren, hep darvoudoù brudet, hep bezañ goullo koulskoude. Ne gaver ket a daolioù-kleze bras, rak an duged-se a espernas gwad o fobl, a vanas dalc'hmat leal d' an unvaniezh gant Frañs, a reas nebeut a vrezelioù. Klask a rejont dreist-holl gwellaat stad o sujidi dre emglevioù halezennoù, en ur greñvaat, sioul ha difrap, pezh a oa bet gounezet gant Yann Rous e-keñver ar veli dugel.

" Trederannadur " ha " Pred-Eured "

Ren Yann II a zeraouas mat.

« Er bloaz-se (1286), Yann kont Richmond, mab henañ Yann Rous, a vodas e kêr Roazhon holl breladed ha baroned Vreizh, hag a voe degemeret laouen ganto evel o dug. Graet e voe gant lid al leoù boas etrezo holl, dre hanterezh Gwilherm, a oa neuze eskob kêr. Ha gouel bras a reas an noblañs hag ar bobl, rak a bell amzer e c'hoantaent kaout ar Yann-se da zug, hag eñ habaskoc'h ha madelezhusoc'h eget e dad. » (Ar Baod).

461

Nebeut karet e oa Yann Rous, dreist-holl en abeg d' an aotreadurioù re largentezus en doa graet d' ar gloer en e feur-skrid eus 1256, o doa lakaet ar varoned hag ar bobl da enebañ, hag i kounnaret a-raok pep tra gant adsavidigezh an « trederannadur » hag ar « pred-eured ».

An eneberezh a greskas pa zeuas Yann II da zug. N' eo ket grozmat a rejont hepken, hogen ivez ober klemmoù trouzus. An dug en doa bodet « e Stadoù » e 1288 evit kadarnaat lidek gwirioù e sujidi ha sellout ouzh mad ar vro. Lakaet e voe ar gudenn dirak ar vodadeg, ha da heul ar guzuliadenn e voe torret ar gwaskadurioù-se.

Evel ma c'haller krediñ, ar gloer ne blegjont ket hep stourm. Gant harp an eskibien, dreist-holl eskob Dol, Tepot Mourieg, e fellas dezho kenderc'hel da zastum an taosoù. E 1290, un nebeut tud-a-iliz a voe « grevet » gant kargidi an dug, - gwallgaset marteze, pe da vihanañ rediet da baeañ telloù-kastiz.

Dre se e voe bodet e 1291, e Teurgn war ar hañval, un doare kuzul-iliz, renet gant ar penneskob, holl eskibien Vreizh hag eskob Ar Mañs o kemer perzh ennañ. Divizet e voe goulenn hanterezh ar Sez Santel evit ma vije miret an « trederannadur » hag ar « pred-eured ». Tepot Mourieg a voe kaset da Roma evit harpañ ar goulenn. An dug hag ar varoned avat o doa kaset kannaded diagent evit diskleriañ o abegoù, o lavarout e plegjont da youl ar Pab.

Ar Pab Nikolaz IV (1288-1292), sachel warnañ eus an daou du, a zaleas e

varnedigezh en ur brometiñ studiañ ar gudenn.

Meneg a vo anezhi diwezhatoc'h.

Darempredoù gant Bro-Saoz ha Frañs

Yann II a-du gant ar Saozon.

E 1294 e tarzhas brezel etre Frañs ha Bro-Saoz. Ma teuas bec'h war dug Breizh : gwazonier da roue Frañs e oa evit Breizh, da roue Bro-Saoz evit kontelezh Richmond, hag ouzhpenn e oa breur-kaer da hemañ, rak e wreg an dugez Beatriz a oa e c'hoar.

462

Dre lizheroù eus ar 1-añ a viz Gouere 1294, roue Bro-Saoz, Edouarzh I, a anvas an dug Yann II da bennvlenier e arme hag e gostezenn. Ne oa avat nemet ur garg dre anv : evit skoazellañ an dug, da lavarout eo evit bleniañ en e lec'h, e lakae tri c'huzulier-brezel, Yann Sant-Yann, senesal Akitania, Roperzh Tybetot, hag Amanieu Albret.

Yann II a c'halvas e Plouarzel-Breizh-Uhel, d' an 19 a viz Eost, an holl aotrounez dalc'herien-douaroù a dlee pourchas soudarded d' e arme. Mont a reas d' ar weladeg-se, a voe merket ar gont anezhi e " Levr an Armeoù ", ennañ ar roll eus ar servijoù-brezel dleet d' an dug. Nebeut a dud en em gavas eno koulskoude, rak ar Vrezhoned ne oant ket e chal da stourm evit ar Saozon.

Padal, e dibenn miz Gwengolo, an armead saoz, anezhi 500 marc'heger armet hag 20.000 den-war-droad, a lestras e Portsmouth hag en em ziskouezas dirak Lokmaze d' an 10 Here. Ac'hano e loc'has d' ar 26 gant dug Breizh evit mont er Jirond da zilestrañ hag ober brezel e Gwaskogn.

An dug, gronnet gant ar Frañsizien e kêr Ar Reol, a gilas dirazo dre ar Jirond, gant Tybetot, unan eus e guzulieren. Goude ar c'hwitadenn-se, ne seblant ket bezañ kemeret kalz perzh e-unan en ergerzhadenn-vrezel. A zo muioc'h, ne chomas ket pell a-du gant ar Saozon. O dilezel a reas e 1296.

Gwastidigezh Lokmaze.

Setu amañ penaos.

D' ar 14 Genver er bloaz-se, antronoz gouel sant Hilari, Edmont kont Leicester, breur roue Bro-Saoz Edouarzh I, hag Herri Lacy kont Lincoln, a guitaas Plymouth gant un armead vras, a gasjont da Waskogn evit kreñvaat an armead kentañ, gwallaozet gant ar Frañsizien.

Al listri, gant ar soudarded en o bourzh, a chomas a-sav dirak Lokmaze, a oa neuze, n' eo ket un abati hepken, hogen ur gêr, poblet-stank ha kenwerzhus. Fellout a rae d' ar Saozon kaout bitailh. Kêriz, spontet gant an armead-se, na ouient ket petra a glaske, ha douget da zisfiziout diouzh ar Saozon, a dec'has, o tilezel kêr hag o kas ganto o feadra war ar maez.

Urzh strizh a voe roet dezho da skoazellañ soudarded roue Bro-Saoz. Goulenn a rejont un dale evit en em soñjal, hag e-keit-se e kendalc'hjont da lemell o zraoù evit o lakaat e surentez.

463

War se, ar Saozon a zilestra, a yeas e Lokmaze, a wastas a-grenn kêr, koulz hag an abati, o laerezh an ed, ar gwin, ar golc'hedoù, al liñselioù, ar c'hroazioù, ar c'haliroù, al levrioù, houarnadurioù an dorioù hag ar prenester, ha zoken ur releg enoret dindan an anv a benn sant Mazhe. Neuze ez ejont er porzh-mor da leskiñ ur gale bras, hag e redjont war-hed ul lev en douaroù, o lakaat an tan e pep lec'h.

Tra heverk ha mantrus : ar re eus an armead saoz a reas ar muiañ droug da Vrezhoned Arvorig en abadenn-se oa o breudeur tramor, Brezhoned Kembre.

Gwastidigezh Landerne.

Neuze ez eas ar strollad-listri e morlenn Vrest. Ouzh ar gêr-se, diwallet-mat gant he lec'hiadur kreñv hag he c'hastell, ne c'hallas ar Saozon ober mann. Sevel a rejont gant red an Elorn avat, ha dre ziv wech e wastjont Landerne. Eno ivez e laerjont kalz ed, gwin, hollen, ha kement tra a gavent, « o freuzañ an dorioù hag ar prenester evit diframmañ an houarnadurioù diouto ».

Gwastidigezh Sant-Gwenole-ar-C'hoad.

Dindan warez abati Landevenneg e oa bet savet ur gêr, a rae berzh gant ar c'henwerzh, anvet Sant-Gwenole-ar-C'hoad. Div wech ivez e kouezhas ar Saozon war ar gêr-se, oc'h ober gwashoc'h c'hoazh eget e Landerne. Taget o doa an abati, a oa mogeriet-mat, hag o holl strivadennoù n' o doa talvezet dezho da netra, rak difennet e oa bet start gant ar venec'h. Kounnaret gant o c'hwitadenn, o doa, evit en em zigoll, lakaet an tan e kêr hag en holl listri eoriet er porzh.

Yann II a-du gant Frañs.

Setu penaos en em zalc'has ar Saozon e-keñver ar Vrezhoned o c'hevredidi. An taol-trubarderezh-se, ken vil ha ken digalon, a voe paeet dezho hep dale. Pa glevas an dug ar pezh a oa c'hoarvezet, e tilezas kostezenn Vro-Saoz, e tistroas da Vreizh, hag e tigoras an harzoù d' ar gannaded karget gant roue Frañs d' ober enklask war an darempredoù etre tud ar vro hag ar Saozon.

464

Enklask beskont Avrañchez.

Kavet e voe e oa direbech ar Vrezhoned, hogen beskont Avrañchez, a rae an enklask, a zastumas flatradennoù, gwir pe faos, a-enep un nebeut estrenien, Baioniz hag Italianed diazezet e Breizh, dreist-holl a-enep unan eus ar re-mañ, Banguel Malclavel pe Machiavel, en doa lakaet ul lestr breizhat karget a win etre daouarn ar Saozon.

Beskont Avrañchez a gavas ivez e veze preizhet bemdez kalz listri breizhat karget a hollen, a win, a ed pe a varc'hadourezhioù all gant rederien-vor a Vro-Saoz, a laere hep mezh ar Vrezhoned, kevredidi ar Saozon. Armet-kreñv oa ar vorlaeron-se, o vont e strolladoù listri peurliesañ. Ar Vrezhoned, kerkent ha ma welent anezho, oc'h en em santout re wan, a yae, evit saveteiñ o buhez, en o bagoù bihan, hag a dec'he, o lezel o lestr hag e gargad war o lerc'h d' ar vorlaeron da gemer. A-wechoù zoken e teue listri saoz e porzhioù Breizh, hag ar vartoloded a zilestre hag a gemere bitailh hep e vije enebet outo.

Ar beskont, evit lakaat harz d' ar preizhadegoù-se, a roas urzh en anv ar roue da lakaat tud armet da ziwall ar porzhioù, hag a alias ar voaerien da virout na daje ul lestr er-maez hep bezañ gant « ur strollad listri pe dud armet » kreñv a-walc'h d' e wareziñ ma vije taget.

Yann II e servij roue Frañs.

Ar roue a c'houlennas digant an dug reiñ skoazell, ha Yann II a skoazellas start. Lakaat a reas sevel galeoù, - pe marteze o feurmiñ a reas hepken, - listri bras da ziwall ar porzhioù-mor hag al listri-kenwerzh a oa eno, d' o ambroug ha d' o difenn. Evit paeañ an dispign e reas d' ar genwerzherien ha da dud an arvor paeañ un taos ; hogen dastumet e veze a-wechoù gant kargidi re c'hredus e kêrioù pell-bras diouzh an aod.

Yann II, a seblant bezañ bet douget d' ar sevel-tiez, a zalc'has e-ratre kreñvlec'hioù dugel Breizh. Adsevel a reas un darn vras eus murioù-tro Gwened,

kastell Susinio, hag ober adaozadurioù bras e difennoù Alre, Roazhon, Kerhazou, Lehon, Lambal, Gwengamp, Ar Roc'h-Derrien, h.a.

Kounnaret gant ar gwastadegoù graet e Breizh gant ar Saozon e 1296, e oa evit gwir trubarderezh, Yann II a zilezas kostezenn Vro-Saoz evit mat, hag a chomas atav kevredad Frañs. E 1297, e tiskouezas splann e oa a-du gant Frañs, o kemer perzh er brezel graet gant ar roue Fulub Kaer a-enep kont Flandrez evit e gastizañ eus an harp en doa roet d' ar Saozon.

465

Ar roue saoz Edouarzh I, evel ma oa da c'hortoz, e lamas kontelezh Richmond digant Yann II.

Er c'hontrol, evel gopr eus ar skoazell en doa roet hemañ d' ar gostezenn c'hall, ar roue Fulub Kaer, dre un akta lidel eus miz Gwengolo 1297, a roas da Vreizh an titl a « zugiezhpariezh Frañs », un titl enorus hepken, na greskas tamm ebet galloud duged Vreizh. Ne reas nemet diskar an amreizhder-mañ : rener gladdalc'hel Breizh, anvet « dug » gant e holl sujidi hag an estrenien, n' en doa dirak kañsellerezh Frañs nemet an anv a « gont Breizh », - pezh a oa un tammig dismegañsus ; diwar neuze, dug Breizh a dlee bezañ anavezet evel dug e pep lec'h.

Peoc'h etre Frañs ha Bro-Saoz.

E 1298 e voe skoulmet un arsav-brezel a zaou vloaz etre Frañs ha Bro-Saoz, hag e strivjod a-zevri, dindan warez ar Pab, da sevel ur feur-emglev a beoc'h evit mat. Al labour-se a gemeras hir amzer, rak ne voe kaset da benn nemet e 1302. Hon dug a skoazellas kalz, en un doare enorus, evel unan eus ar gannaded dibabet gant roue Frañs evit tizhout ar peoc'h-se.

Er bloaz-se, 1302, d' an 11 a viz Gouere, armead roue Frañs Fulub Kaer, o stourm ouzh Flandreziz emsavet, a voe flastret en emgann Kortrijk. Dug Breizh ne oa ket eno. Daou vloaz goude, avat, d' an 18 a viz Eost 1304, Yann II a stourmas kalonek pa c'hounezas Frañs trec'h bras Mons-en-Pévèle, o flastrañ ar Flandreziz d' o zro.

Er bloaz-se ivez, dre lizheroù eus ar 1-añ a viz Mae, roue Bro-Saoz a zaskoras kontelezh Richmond da zug Breizh, oc'h ober anezhañ zoken « hor breur karet ».

466

Kenwerzh ha labourioù boutin

Enklask beskont Avrañchez, graet e 1296, ha meneget uheloc'h ganimp, a ro dimp a-zivout ar c'henwerzh e Breizh en amzer-se sklaeridigezhioù mat da zastum.

Hervez divizoù e garg, skrivet a-berzh ar roue Fulub Kaer, deiziadet 17 Mae 1296, e tlee an den-a-lezenn-se klask an annezerien eus Breizh o dije, en desped da ordrenañs ar roue, pourchaset da enebourien ar rouantelezh, da lavarout eo ar Saozon, bitailh ha pourvezioù all.

Ret e oa eta mont en holl lec'hioù ma veze graet kenwerzh gant Bro-Saoz d'ar mareoù ordinal, lec'hioù aod an hanternoz, anat eo, rak ac'hano hepken e c'halled kaout darempred boas gant ar Saozon. En un ugent bennak a lec'hioù e voe graet enklask beskont Avrañchez :

Dol, Gwiniav, Konkaven, Sant-Malo, Dinan, Yugon, Lambal, Sant-Brieg, Kastell-Aodren, Gwengamp, Landreger, Lanuon, Montroulez, Ar Releg, Kemper, Sant-Gwenole-ar-C'hoad (da lavarout eo Landevenneg), Brest, Lokmaza, Lesneven, Kastell-Paol.

Da Gemper, pell diouzh aod an hanternoz, e rankas an enklasker mont, rak

diskleriadurioù grevus a oa bet graet. Mar lezer Kemper a-gostez, e weler ez eus war ar roll-mañ ugent lec'h ma veze graet kenwerzh a-walc'h gant Bro-Saoz evit ma c'halled krediñ e veze kaset armoù ha bitailh d' ar Saozon gant an annezerien. Seurt kredenn, avat, ne voe ket gwiriekæet, nemet evit pezh a sell ouzh un nebeut kenwerzherien italian diazezet e Kemper.

Kenwerzh dre vor.

Diouzh an enklask-se avat, e verzer pegen pouezus oa ar c'henwerzh dre vor en darn vuiañ eus al lec'hioù meneget a-us.

E Dinan, un den anvet Gwilherm James a zisklerias « bezañ bet karget da vont war vor e-pad ar brezel gant kalz danvez-marc'hadourezh », a oa bet kaset da Frañs. Ernaut Bidon, ur Baionad diazezet e Sant-Brieg, a rae kenwerzh bras betek e Spagn. Un annezer all eus ar gêr-se, Gwilherm Marc'hadour, a yae da gerc'hat e Normandia sammadoù bras a houarn, a gase hag a werzhe e Breizh. Mikael Kostentin, eus Gwengamp, a brene hag a werzhe e Frañs hag e Spagn marc'hadourezh a bep seurt, ed, houarn, pesked sec'h h.a., Sant-Gwenole-ar-C'hoad, meneget war ar roll am eus roet, gwastet gant ar Saozon e 1296, ne oa ket ur vourc'hig dister. Evel Landerne ha Lokmæze, e oa ur gêr, « enni pinvidigezh e-leizh ».

467

An enklask a ziskouez c'hoazh e veze un niver bras a listri, karget a holer, e ed, a win hag a draoù all, o kuitaat porzhioù Breizh. Dre ziouer a warez, e veze alies kroget enno pe breizhet warno gant al listri saoz a rede ar mor. Beskont Avrañchez a c'houlennas digant an dug, eskob Leon hag ar voraerien o-unan ober en doare ma vije lakaet harz d' ar preizherezh-se.

Kement-se a laka anat e oa kalz kenwerzh o vont en-dro, e dibenn an 13-vet kantved, en hanternoz Breizh. Hag er c'henwerzh-se, n' eo ket hepken porzhioù an aod a gemere perzh, hogen ivez kêrioù an diabarzhvro, evel Lambal, Gwengamp, Lesneven. Krediñ a c'haller e oa heñvel er peurrest eus al ledenez, hag ar pezh a skriver en enklask a-zivout Kemper a brou an dra-se.

Douget e oa Yann II dre natur da vroudañ al luskad kenwerzhel-se a oa o tiwanañ e Breizh. Da gentañ, karout a rae ar peoc'h, diazez ar surentez n' hell kenwerzh ebet kreskiñ hepzi. Neuze, bourrañ a rae el labourioù graet evit ar mad boutin.

Domaniou an dug.

Yann Roue a blije dezhañ ivez ar mañsonat, hogen netra nemet evit pezh a denne da wellaat e zomani prevez, evel un tad mat a familh na sav tiez nemet war e zouaroù. Yann II ivez a bleustras kalz gant e zomaniou. War a hañval e oa sot gant ar milinoù, a rae gant mein-benerezh kaer ha start, e-touez re all milinoù ar Pont-Nevez e-kichen Sant-Brieg, milinoù Menez-ar-C'hont, Gwengamp, Bubri, Ruiz (milinoù avel amañ), milinoù Groutel e-kichen Gwened, Kastellin, Joue e-kichen Roazhon.

Ha ne lezas ket a-gostez ar c'hlozioù bet lakaet gant e dad en-dro d' an darn vuiañ eus e zomaniou, evel Duod, Ruiz pe Susinio, Karnoed e-kichen Kemper, Kastellin, h.a. En hini kentañ e oa hoc'hed-gouez hepken, er re all e vaged kezeg.

468

Savadurioù relijiel.

Yann Rous en doa savet abati Itron Varia ar Pedennoù, ha roet madoù dezhañ. E-doug ren Yann II, e-lec'h abatioù, e saved kouentoù relijiuzed-kesterien. Eus ar Sav-Heol e tegasas gentañ e 1273 daou vanac'h eus Urzh Karmez, a zeue, a lavared, eus Menez Karmel end-eeun. O lojañ a reas, evit gortoz, war hent Josilin, el lec'h anvet « Ospital an Traoñ » abaoe. Ar gumuniezh a greskas prim. An diazezer, deuet e 1286 da vezañ dug, a lakaas sevel, harp ouzh murioù

kêr, ur c'haer a vanati gant ur c'hlozadur ec'hon, hag un iliz kinklet gant gwer livet skedus, graet gant un arzour brezhon, Laorañs ar Gwerenner eus Redon, hag e roas pep tra d' ar venec'h, dre un akta eus an 19 Meurzh 1304, daoust na oa ket echuet an iliz hag ar savadurioù all. En e destamant, eus an 9 Gouere en hevelep bloaz, e laesas 1.000 lur evit o feurechuiñ, ha reiñ urzh d' an efederien da bourchas c'hoazh kement a vije ret « evit klokaat an traoù-se ken mat ha ken buan ha ma vo tu ».

Tiez boutin.

Ouzhpenn e savadurioù domaniel ha relijiel, Yann II a gemeras dudi o sevel er c'hêrioù un niver a diez talvoudus d' an holl. Nebeut a zielloù a zo deuet betek ennomp, ha padal e c'hellomp menegiñ moneizlec'h Naoned, - ha lakaas micherourien, teuzerien hag amproerien da zont eus Italia, - koc'hu Roazhon, lez-varn Gonk-Kernev, prizon Kastellin, pont Alre, darn eus pontoù Naoned, rak, daoust ma oa bet adsavet ar pont pennañ, hini Pirmil, e 1260 gant Yann Rous, e ranked adsevel c'hoazh ar re a dreuze brec'hioù all al Liger. E kêrig An Uhelgoad, an dug a aozas ur ru nevez. E Dinan, a blije dezhañ ar gweledvaou kaer anezhi, e vennas kaout ul lojeiz dugel, gant tachennoù leddek tro-war-dro, e fabourz ar Roueri. Prenañ a reas gant e arc'hant an douar ret d' ober er gêr-se Park ar Roñseed, a voe kempennet gantañ.

Kement-se a ziskouez sklaer e teuas Breizh, renet sioul gant Yann Rous hag e warlerc'hiad, e-doug ur marevezh peoc'h n' he doa ket anavezet abaoe 1150, da bareañ ar goulioù don ha gwadek graet en he c'horf a-bezh gant mac'homerezh argarzhus ar briñsed Plantagenet, hag ad-digoret gant taerded strafuilhus Brizhkloareg. Dre ar peoc'h-se, adkavet ganti an hevoud hag ar yec'hed, e oa tost da vezañ e stad vat.

NOTENNOÙ

gant V. de Bellaing, Y. Souffes, Andrev Latimier, Herve Latimier, Per ar Bihan, R. hag H. Huon, Ronan Huon.

Hor Mignoned

Yann-Erwan PLOURIN ha Mireille CADIC a zo laouen da gemenn deoc'h ez int bet euredet e iliz-parrez Langoned, d' ar 24 a viz Kerzu.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' hor mignoned.

Profoù

Degouezhet eo ganeomp ar profoù-mañ e-kerz an daou viz diwezhañ :

Miz GWENGOLO : R. Ansquer, 15 lur ; J. Page, 10 ; P. Le Gouaille, 50.
- War un dro : 75 lur.

MIZ HERE : K. Giraudon, 5 lur ; J. Pichon, 20 lur ; Y. Bouessel du Bourg, 20.
- War un dro : 45 lur.

4 154,56 lur hon eus bet abaoe penn kentañ ar bloaz. Bennozh Doue d' an holl.

Hol lennerien a skriv

Setu amañ ul lizher a zo bet kaset deomp gant ur c'houmananter eus Ceylan.
- « Mar plij deoc'h teurvezit lakaat en ho notennoù un dra bennak eus an darvoudoù-mañ. Naon o deus an dud amañ. Ar gouarnamant ne venn ket prenañ boued eus ar broioù all. Setu ma 'z eus diouer a riz, a vleud hag e vez lodennet (ration-book). D' ar beorien eo kriz an amzer. D' ar Meurzh ha d' ar Gwener eo deiz ar maniok (n' eus ket a riz nag a vara en ostalerioù) pe patatez dous. Pa 'z an da breñañ bara ez erruan diwezhat hag e tebran kouignoù sec'h.

Holl droidigezhioù ar Bibl liesskrivet gant an Ao. ar Gall (Iviaz) am eus lennet. Damdost bemdez e lavaran ar Salmoù o lenn va brevial. An Emglev Nevez troet gant Maodez Glanndour am eus peurlennet, va chapeled a lavaran bemdez e brezhoneg. Goude bezañ desket kemend-all a yezhoù pebezh DIDU HA DUDI lenn brezhoneg dreist-holl ho TREIST (super) - KELAOUENN.

Ha ma vijen e Penn-ar-Bed me a gasfe diouzhtu hervez pouez va yalc'h arc'hant koumanant-skoazell evit 5 pe 6 keneil-beleg a oar gwelloc'h egedon brezhoneg, nemet ne lennont ket " Al Liamm ", d' am soñj.

470

Bennozh Doue war Al Liamm. Teurvezit, Aotrou Rener, degemer va gwellañ gourc'hemennoù. » - Rev. Fr. A. Pleiber, O.M.I. St Anthony's Church. Nittambuwa. Sri Lanka (Ceylan).

Trugarez d' hor c'houmananter a-bell-vro.

Digant hor mignon ha skoazeller Abel Omnes. - « Ne gonter el Liamm nemet 1 c'houmananter abaoe va galvadenn. An dra-se n' eo ket gwir, peogwir em eus graet-me 2, ar pezh a ra, gant 2 all meneget gant lennerien, 4, d' an nebeutañ. N' eo ket diaes ober koumananterien nevez, hogen, ret mat eo mont da welout an dud hag ober un tammig skol dezho ! »

Trugarez ivez da Abel Omnes ha spi hon eus e vo tud all o klevout e c'halvadenn hag o kas dimp koumananterien nevez.

Digant Y. H. - « ... A-du gant ho kalv diwar-benn 1 000 koumananter a-raok fin ar bloaz. Setu ur prof 30 lur evit ur c'houmanant-bloaz da gas d' ur studierez eus skol vrezhonek Nansi. »

Digant G. R. - « Setu aman 30 lur evit " Al Liamm " gant ma kendalc'ho ken plijus atav ! »

Digant T. L. hon eus resevet al lizher hir ha dedennus-mat diwar-benn hon niverenn diwezhañ. - « Emaon o paouez echuiñ lenn niverenn 160 " Al Liamm " em harlu e Bro-Elzaz. Plijet on bet ganti. Ne lennan ket " Al Liamm " en un doare ken aketus bepred, met bremañ ma rankan ober « va » c'hoñje pell diouzh Breizh dindan an triliv gall e kavan an amzer d' hen ober. E darempred gant va yezh ha gant Breizh e c'hellan chom evel-se. Un nebeut evezhiadennoù a rin eta diwar-benn ar pezh am eus lennet.

Me gav din eo mat e vefe div lodenn er gelaouenn : un darn lennegel rik hag un darn all liesseurtoc'h gant darvoudoù ar mare ha zoken ur studiadenn bennak. Marteze n' eo ket plijet an holl gant ar meskaj-se, met neuze e vefe ret kaout div gelaouenn n' eus ket anezho evit ar mare, pep hini o plediñ gant un dachenn ha gant nebeutoc'h a lennerien pep hini ivez. Ha marteze ne vefe ket peadra da vagañ ur gelaouenn lennegel nemetken gant skridoù a dalvoudegezh. Setu, evit ar mare, hag o vezañ m' eo steuziet " Ar Bed Keltiek " eo un diskoulm mat a-walc'h da c'hortoz lennerien ha skrivagnerien niverusoc'h.

Plijet-tre on bet gant an notennoù hag ar studiadenn savet gant Per Pennek diwar-benn broadoù gwasket Europa ha levr Sergio Salvi, rak sklaer eo ar yezh ha displeget resis ar menozioù hag an darvoudoù. Ur sell hollek hon eus e-giz-se war stad ar broioù gwasket en Europa hag o stourmoù. Evel-se e teu " Al Liamm " da vezañ un ere e gwirionez etre an dud hag ar broioù.

" An darvoudoù e Breizh " a gavan mat a-walc'h ivez. Dizingal int avat a-wechoù, met reiñ a reont tro da dud nevez da embregiñ war ar yezh. Rebech a rafen, evit darn anezho an doare re ziresis o deus da ginnig an darvoudoù hag ar barnadennoù war ar prim ha reiñ tro d' al lenner da c'houzout perak. Gwelloc'h e ve diskouez ar fedoù en un doare resis. Al lenner a varno e-unan hep na ve lakaet ali ar skrivagner bep hanter linenn. Met darn vrasañ ar pennadoùigoù-se a gavan mat hag arouezius eus emroadur ar Vro evel dezrevelladenn labour annezidi ennezenn Houad evit diorren o enezenn, da skouer.

471

Spi am eus e vo tu da genderc'hel gant an notennoù war Breizh hag ar broioù all o stourm, ha da greskiñ marteze lec'h as studiadennoù liesseurt, o virout ul lodenn vras d' al lennegezh evel just (ar pennadoù am eus kavet dudius kenañ en niverenn-mañ). Me gav din eo al liesseurtiezh-se an doare gwellañ da dizhout un niver bras a dud, rak ma fell din lennegezh hepken e prenin kentoc'h ul levr (digant embannadurioù " Al Liamm " evel just). »

Niverennoù kozh " Al Liamm " da werzhañ

An niverennoù-mañ a c'heller c'hoazh prenañ : 1, 2, 4, 5, 6, 7, 25, 29, 30, 32-33, 36, 37, 43, 53, 58, 59, 60, 62, 63, 64, 65, 67, 69 betek 160 (nemet an niverennoù 98 ha 100 hag a zo diviet).

Priz an niverennoù a zo :

- 1, 2, 4, 5 : 4 lur ar pezh ;
- an niverennoù all : 6 lur ar pezh (nemet an niverennoù 32-33, 62, 65, 126, 151 hag a goust 8 lur ar pezh).

Tu a zo da gaout neuze ar bloavezhioù klok-mañ :

- 1959 (72-77) ; 60 (78-83) ; 61 (84-89) ; 62 (90-95) ; 64 (102-107) ; 65 (108-113) ; 66 (114-119) ; 67 (120-125) ; 68 (126-131) ; 69 (132-137) ; 70 (138-143) ; 71 (144-149) ; 72 (150-155).

Ma sellit mat ouzh ar roll-mañ en ur geñveriañ anezhañ ouzh hini an niverenn 159, e welor emañ warnañ ar skouerennoù 58, 59, 60 ha n' hor boa ket 4 miz 'zo. Ur skouerenn hepken anezho o chom Hastit eta.

Ar rummad klok eus Al Llamn (niv. 1 betek 160) a chom c'hoazh da werzhañ : priz, 1.500 lur.

Prenit niverennoù kozh evit ho Kalanna !

Ar goulennoù a zo d' ober da : P. Le Bihan, 16, rue des Fours-à-Chaux, 35400 Saint-Malo - c.c.p. 5349-06 Paris. An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù-post.

Deziadur godell Al Liamm 1974

Chom a ra c'hoazh un nebeut deziadurioù-godell da werzhañ. Dek lur an dek. Distaol 1/3 adalek 50 skouerenn.

Kasit ho chekenn gant ho koulenn da R. Huon, c.c.p. 1629-14 Rennes.

472

Levrioù Al Liamm da rakprenañ

- Trede levr " Skol-louarn Veig Trebern " gant Youenn Drezen a zeuio er-maez dizale. Gallout a reer e rakprenañ azalek bremañ betek ar c'hentañ a viz Ebrel : war baper Lafuma, 25 lur e-lec'h 30 ; war baper all, 20 lur e-lec'h 25.

- " Nenn Jani ", romant nevez Roparz Hemon, a zo ivez da rakprenañ betek ar c'hentañ a viz Ebrel : war Vergé Arches, 24 lur e-lec'h 30 ; war baper all, 18 lur e-lec'h 23.

- Ar geriadurioù brezhonek-gallek ha gallek-brezhonek a zo bet adembannet ivez. 500 skouerenn a zo bet koublet asambles dindan ur golo plastik ruz, ar paper a zo simili-bibl. Priz : 42 lur.

" Kan an Douar "

Ar priz Yann-Ber Kalloc'h (1.000 lur) a zo bet roet da Anjela Duval evit an dastumadenn barzhonegoù " Kan an Douar ". Hor gweilañ gourc'hemennoù d' hor mignonez.

Anjela Duval a gemenn dimp ez eus ur werzenn da reizhañ pajenn 114 :

Ret eo lenn : O tistreiñ davet **hec'h eal**

e-lec'h : davet **he stal**. -

Eal a dalvez ebeul.

Un Agenda evit ar bloavezh 1974

Skol an Emsav he deus embannet er bloaz-mañ un agenda a vo gwerzhet 5 lur ar skouerenn pe 40 lur an dek. Skol an Emsav, 30, place des Lices, 35000 Rennes.

" Romant ar Roue Arzhur "

Langleiz a skriv dimp en deus troet bremañ e brezhoneg (evel m' en doa grataet hen ober) lodenn gentañ e oberenn veur " Romant ar Roue Arzhur ". Da lavarout eo al levr kentañ (" Marzhin ha Yaouankiz Arzhur ") penn-da-benn. War-dro 250 pajenn. Spi en deus e c'hello bezañ embannet gant Al Liamm e stumm un levr kaer a vent gant e " Dristan hag Izold ".

Pevar levr all a chom c'hoazh dezhan da dreiñ. En holl : war-dro 1.500 pajenn. A-walc'h evit dislavarout ar re eus e « vignoned » a soñje ne skrivfe ket mui e brezhoneg !...

Lodennoùigoù eus istor Marzhin gant Langleiz hon eus embannet dija war " Al Liamm ". Reoù all a embannimp c'hoazh a-raok moulañ al levr en e bezh. Er pennad diwezhañ avat hon eus lezet da dremen ur faziadenn a-berzh ar mouler (pajenn 201 eus Niv. 158, " Al Liamm ", linenn 20).

E-lec'h lenn « Echu **an danvez** ha lamet listri... », e vefe bet reizh lenn, evel just : « Echu **ar banvez** ha lamet listri... »

473

Skol " Ober " - Bloavezh 1972-1973

E 1932 - ouzhpenn 40 vloaz 'zo eta - e kroge Marc'harid GOURLAOUEN e Douarnenez, da reiñ kentelioù brezhoneg dre lizher, dindan paeroniezh " OBER "

Kreskiñ a reas, a vloaz da vloaz, niver ar skolidi, betek tizhout 744 den enskrivet er bloaz-mañ 1972-1973.

Eus pelec'h e teu ar skolidi ? Pe oad int ? Peseurt micher o deus ? Penaos int deut da Skol OBER ?

Kavet e vo amañ taolennoù a respont d' ar goulennoù-se.

Perak e fell d' ar skolidi deskiñ brezhoneg ? An darn vrasañ anezho a lavar o deus komprenet ne vint gwir Vreizhiz nemet pa gomzint yezh ar vro.

Da betra e servijo dezho deskiñ ar yezh ? Evit ar re yaouank e servijo da dremen an amprouennoù e brezhoneg er vachelouriezh, ha goude - evit lod - da dremen un Testeni Studioù Keltiek er Skol-veur.

Ouzhpenn-se e c'hello ar vrezhonegerien nevez lakaat da dalvezout e doare pe zoare ar pezh o devo desket ha, dreist-holl, ne vint ket mui estrenien en o bro.

Skol OBER, ar skol goshañ a gelenn ar brezhoneg dre lizher, he deus 40 bloavezh a skiantprenet, kelennerien ganto testenioù ofisiel. Stummet he deus meur a gelenner uhel hag a skrivagner, hag ivez kantadoù a vrezhonegerien ampart bremañ da gomz o gwir yezh.

OAD AR SKOLIDI :

Dindan 20 vloaz 133
Etre 20 ha 30 vloaz 431

Etre 30 ha 40 vloaz	99
Ouzhpenn 40 vloaz	81
	744

Merc'hed : 349
 Paotred : 395
 744

LEC'H ORIN AR SKOLIDI :

Penn-ar-Bed	220	
Aodoù-an-Hanternoz	42	
Il-ha-Gwilun	93	
Mor-Bihan	48	
Liger-Atlantel	33	
Pariz	50	
Trowardroioù Pariz	95	
Departamantoù Bro-C'hall	140	
Estrenvro	23	
Hollad	744	

474

MICHER AR SKOLIDI :

Studierien ha skolidi	315
Kelennerien	84
Implijidi burev	66
Micherourien	21
" Frammerien " uhel	43
Retredidi	10
Medisined	27
Tud en arme	18
Hep micher	44
A bep seurt	116
Hollad	744

DEUET EO HOR SKOLIDI DA SKOL "OBER" DRE :

- Zarempredoù gant mignoned, kerent, h.a. . . . 36 %
- Bruderezh (kelaouennoù, skritelloù, traktoù) .. 20 %
- Kreizennoù sevenadurel, kelc'hioù keltiek 12 %
- Méthode Rapide de Breton, R. Hemon 10 %
- Skol-veur Roazhon, kelennerien a bep lec'h 6 %
- Emsavioù politikel 4 %
- Skol an Emsav 2 %
- A bep seurt (Stalioù (Ti-Jaouen), Syndicats d'Initiative, h.a.) (Kemper) 11 %

Hollad niver ar re enskrivet : 774
 - 707 er skol izet,
 - 37 e skol an " Trec'h kentañ ".

SKOL OBER, Mme de Bellaing, 28, rue des Trois Frères Le Goff, 22000 Saint-Brieuc.

Emvod Kamp ar Vrezhonegerien ha Skol an Emsav

Kavet e vo amañ ur rentañ-kont savet buan ha buan eus an Emvod bet graet e Sant-Brieg diwar-benn ar c'hampoù hañv. Evel ma chom ur bern traoù da resisaat, degemeret e vo an holl ginnlgoù hag a c'hellfe gwellaat kamp an hañv a zeu. An degemer gwellañ a vo, evel just, evit ar re a ginnigo sammañ ul labour evit aozañ ar c'hamp pe evit reiñ skoazell e-pad ar c'hamp.

Setu, neuze an danevell savet gant kengor SAE an devezhioù studi.

Goude kampoù SAE an hañv-mañ eo bet merzet gant ar re o deus graet war-dro e oa un niver bras a gudennoù ne oa ket tu da ziskoulmañ, gant nerzhoù SAE nemetken. Evit gwelout an dra-se, n' eus nemet lenn rentañ-kont devezhioù studi Landi hag hini re an Enez Veur embannet e niverenn 5 kelaouenn diabarzh SAE.

Evel ma oa kudennoù heñvel, en un doare, gant KEAV hon eus soñjet e vefe mat en em gavout evit studiañ a-gevret hor c'hudennoù.

475

Goude bezañ kenskrivet ha komzet diwar-benn an traoù-se eo bet graet, a-benn ar fin, un emvod e Sant-Brieg d' an 28 a viz Here 73. Pedet oa bet war-dro 30 a dud, 14 a zo deuet, 5 pe 6 o devoa roet o all dre skrid pe dre gomz.

Evit tremen hep kouezhañ e pech ar " spered strollad " eo bet divizet, evel ma oa bet kinniget er pedadennoù, gwelout an ezhommoù a oa da vezañ sevenet ha da c'houde penaos e oa tu d' hen ober.

Rannet eo bet, neuze, ar " c'houlennerien stummadur " evel-hen :

- Ar vugale hag an tiegezhioù oc'h ober gant ar brezhoneg.
- Bugale nannbrezhoneger, o zud o teskiñ brezhoneg er c'hamp.
- Deraouidi wirion.
- Tud hag o deus heuliet ur bloavezh kentelioù, c'hoant ganto kaout tu da gomz.
- Ar re hag a oar madig a-walc'h ar yezh hag o deus c'hoant mont pelloc'h (rannet eo bet goude ar rummad-se e daou live).
- Ar re hag a oar mat brezhoneg " lennegel " hag o deus c'hoant deskiñ un tamm brezhoneg " bev " en ur vont da labourat war ar maez.

Gwelet eo bet diouzhtu ne oa ket tu d' ober war-dro ar vugale nannbrezhoneger hag an deraouidi wirion.

Evit ar stajoù war ar maez, studiet eo bet ar gudenn gant kengor SAE an devezhioù studi. Tu 'vo, spi hon eus, da aozañ er bloaz-mañ ur sizhunvezh e tiez feurm e derou miz Gouere e Bro-Dreger ha, marteze, e Bro-Leon. Keleier a vo roet diwezhatoc'h.

Ne chome mui nemet bugale ha tiegezhioù brezhoneger, deraouidi gant ur bloavezh studi hag an eil derez.

Ret e oa gouzout, neuze, ha graet e vefe ur c'hamp pe veur a hini. Ar pezh a zo fall er c'hampoù evel ma 'z vezont graet bremañ eo ez int re arbennik evit gellout bodañ a-gevret nevezvrezhonegerien ha brezhonegerien. N' eus nemet se, koulskoude, a c'hell sikour ar re gentañ d' ober gant ar yezh. Ne chom nemet un diskoulm : ober ur c'hamp nemetken gant an tri rummad pe veur a gamp gant an tri rummad e pep hini, ar pezh n' eus ket tu d' ober c'hoazh.

En hañv 74 ne vo, eta, nemet ur c'hamp : KEAV gant skoazell SAE. Kenderc'hel a ra evel just, SAE da aozañ eus he zu kampoù da Bask hag e-pad miz Gwengolo, kampoù hag a c'hello, int, bezañ arbennik.

Al labour graet a-gevret a c'hello marteze, bezañ ur c'hammed evit ma vefe gwelet tamm-ha-tamm reoù " yaouank " oc'h ober war-dro KEAV.

Ar c'hamp a vo dalc'het etre ar 14 hag ar 28 a viz Gouere.

Al labour prientiñ a zo bet rannet evel-hen :

- ur c'hengor evit an deraouidi,
- ur c'hengor evit ar vugale,
- ur c'hengor evit an eil derez, rannet e daou live : unan e doare ul lise (mui pe vui labour SAE warlene), unan e doare un " trede kelc'hiad ",
- ur c'hengor evit ober war-dro ar c'hamp a-bezh ha plediñ gant ar c'hudennoù hollek (amzer dieub, abadennoù...).

477

Kalz a draoù a chom da resisaat : divizet eo bet, eta, adober un emvod d' ar Sadorn 29 a viz Kerzu da 10 eur diouzh ar beure e Skol Sant-Josef e Plistin (Bro-Dreger), lec'h ma vo dalc'het devezhioù studi Nedeleg SAE.

An holl re a fell dezho kenlabourat evit prientiñ ar c'hamp n' o deus nemet skrivañ pe d' an Itron de Bellaing (28, rue des Trois Frères Le Goff, 22.000 Saint-Brieuc) pe da Skol an Emsav, Kengor an Devezhioù Studi (30, place des Lices, 35000 Rennes) en ur lavarout e petore kengor e fell dezho labourat. Trugarez dezho en a-raok.

H. L.

" Skol an Emsav "

E gwerzh emañ niverenn 6 kelaouenn diabarzh " Skol an Emsav ", diwar-benn ar sevenadur eo. Evit kement-se ez eus bet goulennet digant un torkad emsaverien displegañ ar soñjoù a vagont war gudennoù ar Sevenadur e Breizh ; en o zouez : skridoù Fanch Elegoet, Y. Erwan Broudig, Paotr Skrignag, Youenn Olier, Yann Talbot, Makoto Noguchi, Herve Latimier, Fanch Kerrain, Fransez Favro. Da vo deoc'h, avat, merzout n' eo ket bet savet niverenn 6 " Skol an Emsav " gant pennadoù hec'h izili nemetken, hogen ne vo ken 'met fonnusoc'h a-se an danvez, ha spletusoc'h ar vreuradenn.

Ar bolc'h kentañ d' ul labour padus hag a stroll ez eo. Derc'hel a raio Skol an Emsav da vont gant an hent-se, o toullañ irvi nevez pa vo diouer a dachenn fraost. Da lakaat da dalvout kement-se e oa ret mat d' hec'h izili adc'hoveliañ o c'helaouenn. He fal ur wech ledanaet, e vo skoulmet dre he hantererezh darempredoù nevez gant an diavaez. Kemenn a reomp eta en a-raok da gement den en defe menzioù war an Armerzh, e stad e Breizh, e roll er gevredigezh vrezhon, hag all... reiñ da c'houzout d' ar c'houch-kelaouenniñ, " Skol an Emsav ", kelaouenn diabarzh, 30 place des Lices, 35000 Rennes, ha stagañ da reiñ korf d' e bennad, evit ma vefe prest a-benn hanter miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 4 lur (5 dre ar post) - c. c. p. 2844-17

Evit ar gelaouenn-diabarzh :

Ar C'houch-kelaouenniñ,

Bernez Rouz ha Yann Gwilhamot.

Kemennadur digant F. L. B.

An deiz m' hon eus lennet war ar c'helaouennoù keloù tarzhadennoù Gwengamp ha St-Brieg eo degouezhet ar c'hemenn-mañ ganeomp :

477

« Roazhon Gwener 7-12-73.

- An FLB-ARB. hag a stourm evit adsevel ur bobl nevez e Breizh ha rentañ d' ar Vretoned o gwirioù broadel,
- a gas e wellañ gourc'hemenoù d' an holl labourerien a ra " grève " (*) hirie evit kaout ur vuhez muioc'h dereat.

- Merzout a ra koulakoude ez a dismegañs ar Stad gall war wasaat e-keñver ar Vretoned. Merzout a ra ivez pegen dic'halloud ha pegen gwan eo ar Stad-se hag hec'h urzhioù da renkañ netra evito.

- Lavarout-groñs a ra n' en deus mann-ebet da ober gant ar politikerezh koustus-se n' en deus nemet ur pal : kas da get Pobl ar Vretoned !

- Diwar an abegoù-se skeiñ a ray en noz-mañ ha skeiñ a ranko c'hoazh ken na vo dieubet ar Vro. »

(*) harz-labour.

Pladennoù " Droug "

Setu amañ ur pennad kaset gant Lama Meur ha krennet ganimp :

« Ar pladennoù a zo ur " mass media " eus an amzer-vremañ hag a vez implijet peurvuiañ gant ar re o deus galloud hag arc'hant. Met d' ar re-se ne blij ket ar ganerien emsavel ha klask a reont o flastrañ. Setu perak eo bet savet " Droug " gant tud hag a labour asambles hag a skign dre hentoù all o fladennoù o-unan. N' omp ket un ti-embann pladennoù eta met ur strollad kanerien a n' em vod an aliesañ posupl. E pep lec'h ma 'z eomp da ganañ e werzhomp hor pladennoù, o c'has a reomp ivez d' ar re a fell dezho o skignañ o-unan.

Daou seurt pladennoù a embannomp :

- re ar ganerien ;

- an " Discocanar " un dastumadenn-da-heul ma kaver bep gwech un danvez resis (ar c'han nevez e Breizh, ar re zivroet, ar merc'hed) gant ur golo dek pajenn, warno luc'hskeudennoù, displegadennnoù, tresadennoù, tonioù, komzoù, troidigezh.

Skrivit deomp ha skignit hor pladennoù : " Droug " La Mare Morin, Parignac, 44130 Fay-de-Bretagne.

Eil pladenn Diaouled ar Menez

Degouezhet eo ganeomp pladenn diwezhañ Diaouled ar Menez, unan 33 tro, embannet e ti Arfolk. N' eo ket o fladenn gentañ. Un nebeut mizioù 'zo e oa deut er-maez unan 45 tro. Meuleudi hor boa graet dezho. Soñjal a reomp ez eo c'hoazh gwelloc'h homañ. A-hend- all, n' eo ket alies hon eus ar blijadur da gaout pladennoù e brezhoneg penn-da-benn : war ar golo e kaver, en tu-hont da skeudennoù ar sonerien, ur pennad gant Per Denez hag an holl displegadurioù diwar-benn ar sonerien hag ar binvioù e yezh ar vro.

Kemmet en deus un tammig ar strollad abaoe o fladenn gentañ. C'hwec'h emaint bremañ ha binvioù nevez gante : un violoñs, ur vandolinen hag ur fleüt iwerzhonat.

479

Boas e oamp da glevout Diaouled ar Menez o c'hoari tonioù buan ha diaoulek. Er bladenn-mañ ez eus kemm : kan ha diskan, tonioù buan hag ivez tonioù gorrek. Ar wech kentañ eo ivez e klevomp an Diaouled o kanañ : « Ton ar Pichon bihan » (ur gavotenn savet gant Iffig Pichon, labourer-douar e Poullaouen diwar-benn an adlodennañ), « Merc'hed Plouie » (komzoù tennet eus a bagad ar CRS-ed) hag « Ar Soudard maleürus ». Kavet e vez ivez tonioù gant Etienne Riwallan, dañs Plinn, bal Plinn « E kostez an Henbont » (hanter dro) ha re all c'hoazh ken mat an eil hag egile.

Ma vefe goulennet diganeomp peseurt ton a gavomp ar gwellañ e vefemp nec'het evit respont. « Gwezenn an avaloù » (ton eus Mael-Karaez) en deus plijet kalz deomp avat, un ton gorrek, sioul ha heson ez eo. Klasket o deus an aozerien diskouez ne oa ket ret mont de da Iwerzhon evit knout seurt tonioù.

Hetiñ ar reomp d' an Diaouled kenderc'hel gant an hent-se.

Ur bladenn vras Arfolk ez eo, e gwerzh e pep ti-sonerezh hag e ti Yann Gwazdoue, Menez Kamm, Spezet.

Herve ha Riwal HUON.

Ur rapsodienn gant Per-Iv Moign

E-kerz un abadenn sonerezh gant strollad kerdin Skol sonerezh Brest hon eus bet ar blijadur da glevout e-touesk sonadegoù gant Haendel ha Mozart ur rapsodienn bet savet gant hor mignon Per-Iv Moign, « Dason Breizh ». Oc'h en em servij eus un nebeut kanaouennoù anavezet en deus savet ur rapsodienn glasel en ur dennañ implij eus ur strollad binvioù dre gerdin. Kasomp da soñj ez eo eñ a zo pennabeg azginivelezh ar sonerezh e Breizh, rak an hini kentañ eo bet o c'hoari tonioù eus ar vro gant binvioù a-vremañ p' en doa savet ar strollad " Ar gabalerien ".

Brezhoneg er c'helaouennoù

Setu amañ ur pennadig a zo bet embannet e brezhoneg er gelaouenn sizhuniek " L'Echo Breton " eus Kemperle war-lerc'h gweladenn Messmer :

« Biskoazh kemend-all ! ! !

Arsa gast, a bep seurt 'ma dav klevout memestra. Biskoazh kemend-all ! Gwechall paotred ar gouarnamant e Paris ne raent foutre-kaer gant ar brezhoneg. Evite ne oa brezhoneg ebet, pe neuze, pa oa ret mat dezhe larout un dra bennak war boent ar brezhoneg ne oa ar yezh-se evite nemet un trefodach gouezh, ur yezh " réactionnaire ", fidamdoustik, mat evit ar moc'h.

Ha setu digoueeet an Aotrou Messmer 'barzh ar Vro, an Aotrou a zo kentañ ministr Bro-C'hall goude bezañ bet kabiten 'barzh al " Légion Etrangère ", hag an Aotrou-se en deus diskleriet deomp e oa hor yezh, ar brezhoneg, un " arm politikel ". Setu pep hini ac'hanomp o skopañ plom ! Ar spont a ren e Paris : delwenn Bécassine a gemer plas hini Jeanne d'Arc en ilizoù ar Vro !

479

Biskoazh kemend-all, ma faour-kaezh mamm-gozh, Doue d' he fardono, ha na ouie poz gallek ebet a vije bet souezhet-mik ma vije bet laret dezhi e oa ur " vitrailletenn " 'barzh he beg. »

Ul levr skol evit bugaligoù

Niverenn 53-54 ar gelaouenn Skol a zo ul levr-skol evit bugale vihan. Savet eo bet gant Deneza Mager. Implijet eo bet penn-da-benn gant an oberourez peogwir ez eo he micher soursial ouzh ar vugale-se. Skeudennet eo gant Malo Louarn, Tudual Huon ha Divi Kervella, hag en dibenn e kaver kanaouennoù ma 'z eo bet savet an tonioù anezho gant Yann Desbordes hag a zo ives ur mestr war ar sonerezh.

Priz : 12 lur. Moulet dre offset. Goulenn digant Yola Chariou, Skol, 16, rue Berlioz, Saint-Brieuc - c. c. p. 2616-33 Rennes.

Da rakpreñañ

Emeur oc'h embann dre rakprenadur levrenn gentañ buhez Debauvais. Al levrenn gentañ-se a zo anvet " Fransez Debauvais de Breiz Atao et les siens " (1903-1932). Eñvorennoù Debauvais a zo bet savet gant e wreg Anna Youenou.

Priz rakpren : 33 lur e-lec'h 37 lur. Mme Debauvais, 20, place des Lices, Rennes - c. c. p. Rennes 2656-42 N

Koumananterien d' ar c'helaouennoù brezhonek

War ar c'hannadig " Keleier Naoned" ez eus bet ur roll kelaouennoù brezhonek gant niver o c'houmananterien. Ar skrivagner en deus lakaet e oa kement-se an niver a skouerennoù gwerzhet. Ar pezh a zo direizh, da vihanañ evit pezh a sell " Al Liamm ".

Gwerzhet e vez ouzhpenn 750 skouerenn peogwir e vez tennet mil skouerenn. Setu amañ ar roll embannet war ar c'hannadig :

- Al Liamm : 750 ; Hor Yezh : 245 ; Wanig ha Wenig : 140 ; Imbourc'h : 130 ; Skol : 100 ; Barr-Heol ? ; Preder ? ; Emsav : 75 ; Yod-Kerc'h ? ; Ar Gevnidenn ? ; Pobl Vreizh ?

Kelaouennoù

Niverenn 76 Wanlg ha Wenlg a zo bet aozet gant Alan Durand. Ur studiadenn eo diwar-benn an amprevaned gant tresadennoù. Dedennus eo evit an holl, da skouer, deskiñ a reomp ez eus 500 000 amprevan evit un den. - " Wanig ha Wenig ", kelaouenn miziek evit ar vugale. Priz an niverenn 1,00 lur - c.c.p. Abbé Troal, 140-10 Rennes.

481

Degouezhet eo ganeomp div levrenn diwezhañ Preder. Ar c'haier 155-156 a zo kendalc'h Geriadur Istorel ar Brezhoneg gant Roparz Hemon, rann 21 (Lavarout-louzus). Mont a ra eta war-raok an embannadur pouezus-se peogwir ez eo boulc'het al lizherenn L.

Ar c'haier all, 157-158, a zo Dafar Geriadur ar yezh arnevez, kendalc'h ar geriaoueg galleg-brezhonek ha brezhonek-gallek dre fichenoù, ar seizhvet strobad eo.

Koumanant 12 niverenn. : 60,00 lur. 30, place des Lices, 35000 Rennes. - Preder c.c.p. 16 093-13 Paris.

Brezhonegerien yaouank eus Naoned a zo krog da embann ur c'hannadig " Keleier Naoned " evit krouiñ liammoù etre brezhonegerien ar gêr vras-se. Ar re a fell dezho kaout ar follenn-gelaouiñ-se a c'hell skrivañ da B. Le Nail 927, 9 rue F. Albert, 44200 Nantes.

Skritelloù-heñchañ e Brest

Skritelloù-heñchañ brezhonek a zo bet lakaet e Brest gant " Oaled Sant Erwan " e

derou miz Eost. Div anezho a oa skrivet warno « Porzh kenwerzh », war unan all « Renkañ untuek dibaouez » hag unan all « Renkañ daouduiek aotreet » (Tud 'zo o deus bet kavet, gant gwir abeg, e vije bet tu da implij troioù-lavar brezhonek'h, da skouer : « Renkañ a bep tu » ha « Renkañ diouzh un tu »). Lakaet e oa bet ar skritelloù brezhonek e-kichen ar re c'hallek hep na ve diverket na kuzhet lizherenn ebet war ar re-mañ, ha livet brav ha splann e oant.

D' ar 15 a viz Gwengolo e chome div skritell, d' an 20 a viz Here ne chome mui hini ebet.

Piv 'ta en deus o lamet ? Daoust ha ne oa ket bet votet gant ar c'huzul departamant ur mennad a-du gant implij hor yezh war ar skritelloù-heñchañ ha diskleriet kemend-all gant kengor sevenadurel ar C.E.L.I.B. ?

Ar brezhoneg er vuhez pemdeziek

Da geñver an dilenadegoù diwezhañ (kuzulierien ganton), ez eus bet graet implij eus ar brezhoneg en un doare foran. Ha n' eo ket hepken dre gomz, hogen ivez war ar skritelloù. Daou emsaver da skouer, aet war ar renk en anv strolladoù breizhek o deus evel-se graet enor d' ar yezh en ur zaskoriñ dezhi ur plas dereat : Lukian Raoul, danvez kuzulier e Sant-Brieg (SAV), ha Steven Sant-Laorañs, danvez kuzulier e Plistin (UDB). Warlene eoa bet graet heñvel gant G. Nicoud, « sekretour meur ar CID-UNATI », da geñver dibab dileuridi ar c'hefioù retred. An Ao. Penseg, kannad (PS) Penn-ar-Bed, a ra ivez a-wechoù gant ar brezhoneg, hag a-gevret gant E. Ollivro en deus savet e vouezh e Pariz da c'houlenn divizoù efedus e-keñver kelennadurezh ar brezhoneg. Laouen vefemp o tegemer keloù resis war bep taol-arnod graet evit toullañ he hent d' ar yezh er vuhez foran.

481

En e bennad diwar-benn hor sevenadurezh en " Télégramme " en deus Rojer Laouenan embannet skritell vrezhonek ur supermarc'had eus Lanuon. Ar skrid-mañ a oa e-kichen unan e galleg. Setu amañ ar skrid e brezhoneg ; « Evit mirout e vlaz mat d' ar c'hig, tennit diwarnañ ar paper-kelofan a-raok lakaat ar pladad e-barzh ar yenez » (hep kemm ebet).

Hor gourc'hemenoù da genwerzhour Lanuon.

Ar Broioù Kataloniat

Degemeret hon eus ur c'haierig moulet o reiñ displegadenoù diwar-benn douaroniezh, poblañs, arboellerezh, ijinerezh, labour-douar, ergerzh broioù Katalonia. Un dielfennadur politikel a vez damskeudennet e dibenn ar skrid, a zispleg efedoù drastus rannidigezh Gatalonia e div lodenn, unan dindan beli Bro-Spagn hag eben dindan hini Bro-C'hall ha c'hoant ar vro-mañ (ha n' eo ket dister a-hend-all, peogwir e kont 7 milion a annezidi) da vezañ dieub hag unvan evit kemer perzh da vat e buhez Europa. Ur gartenn eus ar vro e liv a gaver ivez el levrig, a-vent gant ur gartenn-bost ha warni ur chomlec'h : Jean Ballester Canals, Conseil de Cent, 281, Barcelona (II).

Sed un doare d' ober bruderezh a c'hell bezañ efedus.

A Saint-Malo, les Magon

An talbenn-se a zo hini ul levr savet gant hor c'henlabourer, ar skrivagner

Ernest Ar Barzhig, o kontañ istor ur familh vrudet a baramantourien-listri eus Sant-Malo. N' eo ket deut er-maez al levr c'hoazh, hogen rakprenañ a c'heller anezhañ en ur gas 25 lur d' an oberour : E. Le Barzic, 26, Av. Mgr-Mouézy, 35000 Rennes - c.c.p. 1025-85 Rennes.

RELIJION

Diskleriadur a feiz ar Pab.

Moulet ez eus bet 3.000 skouerenn eus " Diskleriadur a feiz Paol VI " a oa bet troet war-eeun diwar al latin hag embannet e niverenn 14 " Studi hag Ober ".

En diskleriadur-se eo displeget gant ar Pab pep artikl eus ar Gredo. Ur skrid pouezus meurbet eo hag e c'hell talvoud koulz da vezañ studiet gant tud a-unanoù pe gant kelc'hioù-studi.

Neb a gar a c'hell goulenn ar skouerennoù en deus ezhomm digant an Dll J. Corre, 5 Plasenn Keruscun, 29200 Brest. Kas timbroù evit ar mizoù-kas.

Maz eus tud hag a garfe kemer perzh e dispignoù ar vouladenn, e c'hellont kas arc'hant ivez : 0,40 lur en deus koustet pep skouerenn.

482

Doujañs da vuhez an dud.

Pedet omp da embann ar mennad-mañ bet divizet gant Emglev an Tiegezhioù en emvod Bulien d' ar Yaou Bask 1973 :

Tud " Emglev an Tiegezhioù " bodet e Bulien,

o verzout ar bruderezh diroll ha mac'hom a vez graet a-du gant an diforc'hañ-bugale,

o terc'hel kont e tegemer an Emglev Kelennadurezh an Iliz Katolik,

a ziskleri a-wel d' an holl e rank pep den kaout doujañs da vuhez e nesañ adalek ar poent ma krog betek ar poent ma varv ez-natur, hag ez eo un torfed lazhañ ur c'hrouadur e kof e vamm,

a ziskleri ez eo un dever-rik evit an dud a-hiniennoù hag evit ar c'humuniezhoù, ar pennadurezhioù relijiel ha laik, an dud o c'houarn ar broioù, pep hini hervez e c'halloud, reiñ tu da vevañ en un doare dereat d' ar mammoù gwasket gant enkadennoù ar vuhez hag e riskl da lakaat d' ar marv ar bugel a zougont (lojeiz, labour, sikourioù, arc'hant, medisinerzh,

a zegas da soñj ez eo kefridi pep stad gwareziñ buhez an dud ha n' eo ket reiñ aesamantoù d' o lazhañ, ha, diouzh ret, kemer en he c'harg ar vugale-dinac'het gant o mammoù,

a c'houlenn ma vo diwallet da reiñ ton d' ar bornografiezh.

Emglev an Tiegezhioù, 30, place des Lices, 35000 Rennes.

Levrioù Barr-Heol.

Levr-ofenn evit Gouelioù ar Sent. - Ur pikol levr o reiñ gouelioù an holl Sent a-hed ar bloaz hag an ofisoù boutin. Liesskrivet eo al labour. Priz : 25,00 lur, 26,00 lur dre ar Post.

Rituel ar Vadeziant (dre offset). - Aozet gant Komision al Liderezh evit Eskopti Sant-Brieg hag embannet gant Barr-Heol. Priz : 5,00 lur hep mizoù all. Goulenn

an daou levr dre chekenn. Revue Barr-Heol, 22300 Lannion - c.c.p. 2454-53
Rennes.

AR BROIOU BIHAN

KELTIA.

Marv Douglas Young.

Emañ o paouez mervel er Stadoù-Unanet d' ar 24 a viz Here 1973 an Doktor Douglas Young, unan eus ar skrivagnerien hag emsaverien vrudetañ Bro-Skos. Ne oa nemet 59 bloaz.

E-pad tregont vloaz e voe Douglas Young unan eus pennoù bras ar Strollad Broadel Skosat. Kadoriad anezhañ a voe eus 1942 da 1945 ha stourm a reas taer ouzh gouarnamant London oc'h embann n' en doa ket ar gwir da c'hervel Skosiz d'an arme en abeg da feur-emglev 1707. En abeg da se e voe bac'het e-pad ur bloavezh gant ar Saozon.

483

Douglas Young en doa graet e studioù e Skol-veur Saint-Andrews ha diwezhatoc'h en Oxford. Kelenner war ar gresianeg e voe en Obair Dheathain (Aberdeen) hag e-pad 20 vloaz e Skol-veur Saint-Andrews. Komz a rae mat ar gouezeleg ha skrivañ a reas meur a levr diwar-benn al lennegezh c'hresianek, Istor Bro-Skos hag al lennegezh c'houezelek.

Digalonekaet e voe siwazh un nebeut bloavezhioù 'zo gant emdroadur an traoù en e vro. Reiñ a reas e zilez eus ar Strollad Broadel evit mont e Strollad al Labour, dre ma kavas dezhañ ne c'helle an traoù mont war-raok nemet dre ar strolladoù bras. N' en em gave ket en e aez moarvat en degouezh nevez-se hag e 1968 e tivroas d'ar C'hanada evit mont da gelenn e Skol-veur Mac Master ha diwezhatoc'h d' ar Stadoù-Unanet, e Skol-veur North Carolina, e-lec'h m' eo marvet...

Trec'h nevez ar vroadelourien skosat.

Dilennadegoù rannel a zo bet aozet en Alba (Bro-Skos) d' ar Yaou 8 a viz Du, e Dinedin (Edinburgh) hag e Glascha (Glasgow). E Dinedin en deus dastumet an Ao. W. Woolfe, danvez-kannad ar Strollad Broadel 18,9 % eus ar mouezhioù, hag e Glascha ez eo aet an trec'h gant danvez-kannad ar Strollad Broadel, an Itron Margo Mac Donald, dezhi 29 bloaz ha div verc'h. Daou gannad broadelour skosat a zo bremañ e Parlamant Westminster eta. Goude dilennadeg rannel Dun Déagh (Dundee), e-lec'h ma voe tost tre ivez ar Strollad Broadel d' an trec'h e miz C'hwevrer 1973, e tiskouez an disoc'h-se pegen kreñv eo ar mennoz broadel hiziv en Alba.

Dilennet eo bet an Itron Mac Donald en ur rangêr baour-tre eus Glasc'ho, enni kalz lastez-tiez hag ur bern tud dilabour. O reiñ o mouezhioù d' ar Strollad Broadel eus bet fellet dezho moarvat enebañ ar gouarnamant mirour e London hag ouzh kuzul-kêr Glascha a zo eus Strollad al Labour. Chalet eo ivez ar Skosiz gant kudenn an tireoul, ur binvidigezh eus kondon o bro, hag a vez implijet hiziv gant Kompagnunezhioù bras saoz pe etrevroadel, hep gounid ebet evit Skosiz, e-pad m' emañ an dilabour oc'h ober e reuz en o bro.

Diskleriet he deus Margo Mac Donald : « Aet eo ganeomp ar sez diaesañ ha gwellañ difennet eus Strollad al Labour e Bro-Skos ». Ha dellezet eo bet e gwirionez an trec'h-se gant al labour sebezus a zo bet kaset da benn ganti ha gant ur bern emsaverien all er sizhunvezhioù kent. Emvodoù diniver o deus graet hag aet int da welout ur bern tud en o ziez. Gant Margo Mac Donald ne voe morse nebeutoc'h eget 50 emsaver o labourat war an dachenn evit prientiñ trec'h ar Strollad Broadel. Ur skouer eo evit ar c'hostezennoù breizhek.

Dinedin (Dun Eideann, Edinburgh).

	e 1970	e 1973
Mirour	13.005 (52,9 %)	7.208 (38,7 %)
Labour	9.127 (37,1 %)	4.467 (24 %)
Frankizour	2.475 (10 %)	3.431 (18,4 %)
Strollad Broadel	- -	3.526 (18,9 %)
Niver a vouezhierien	35.128 (70 %)	34.131 (54,6 %)

Govan-Glasc'ho (Glasgow).

	e 1970	e 1973
Strollad Broadel	2.294 (10,2 %)	6.360 (41,9 %)
Labour	13.443 (60,1 %)	5.789 (38,2 %)
Mirour	6.301 (28,1 %)	1.780 (11,7 %)
Franklzour	- -	1.239 (8,2 %)
Komunour	326 (1,5 %)	- -
Niver a vouezhierien	35.378 (63 %)	29.348 (51,7 %)

Roll ar Pennadoù

embannet gant AL LIAMM Bloavezh 1973 (Niv. 156-161)
 Anvioù an oberourien renket hervez urzh al lizherenneg
 (160/377 a dalvez : niverenn 160 pajenn 377)
 Savet gant Ronan Huon

ABGRALL (Giza) Ar ribouladenn	158/190
ANDOUARD (L.) C'hoariva	160/377
AN TOUSEG Diaspora	156/5
An Emzivadeg	158/180
Pedenn	160/328
AR BARZHIG (E.) Goleron	161 /426
AR MENN (H.) Du-mañ gwechall	159/268
BELZ (J.) Sonenn ar " Jowised "	161/418
BROHAN (Yann-Vari) Marvnad	160/324
DENEZ (Gwendal) Mentadur ar vuhez	160/358
Ar glizh	161/415
E-kichen an noz	161/416
DENEZ (Per) Arzel Even	156/5
DIDROUZ Un den a urzh vat	160/351
DIOLIER (Per) Kanevedenn	156/3
Va zad	158/179
An divroad	159/243
Ar foeter-hent	160/323
Kest	161/411
Ar rener bras	161/412
FAVEREAU (Fransez) Du-mañ, hiziv	161/420
GLANNDOUR (Maodez) Ar Suis Bras	159/293
Tangi Malmanche	160/362
GWEGEN (Andrev) Treiñ da wir huñvre ur bed marzhus	157/103
HEMON (Roparz)	

Nenn Jani	156/44	
Nenn Jani	157/114	
Istar Breizh La Borderie	157/140	
Nenn Jani	158/181	
Istor Breizh La Borderie	158/203	
Istor Breizh La Borderie	159/301	
Eñvorennoù eus Breizh-Veur	160/330	
Istor Breizh La Borderie	160/370	
Istor Breizh La Borderie	161/460	
HUON (Tudual)		
Skeudenn	159/311	
KALVEZ (Tudual)		
Doue-galleger	160/329	
KAPLINSKI (J.)		
Ha Verkingetorix a lavar	157/108	
KEINEG (Paol)		
Ha Verkingetorix a lavar, gant J. Kaplinski (tr.)		157/108
KEREMBELLEG (Ani)		
An tri oan, gant Liam O'Flaherty (tr.)		159/288
KERRAIN (M.)		
Kanaouenn, gant Manuel Maria (tr.)	160/326	
KERVELLA (Erwan)		
Yud	157/107	
Teñzor	159/245	
KERVELLA (Riwanon)		
Gwerz ar Guardia Civil Española, gant Lorca (tr.)		157/110
Ma soudardez, gant Retamar (tr.)		161/413
KIVIJER		
Tourist dre heg, 1945	159/251	
KLER (Jord)		
Ar prizoniad	159/274	
KONAN (Jakez)		
Kevrin Lord Pennejen (tr.)	157/124	
Penaos gounid ur milion a zollared (tr.)		157/131
LANGLEIZ		
Feunteun Varanton	158/196	
Ar Seizh Avel	161/438	
LEACOCK (S. B.)		
Kevrin Lord Pennejen	157/124	
Penaos gounid ur milion a zollared	157/131	
LORCA (F. G.)		
Gwerz ar Guardia Civil Española	157/110	
MARIA (Manuel)		
Kanaouenn	160/326	
MALMANCHE (Tangi)		
Gwregan Toer	157/84	
Bezomp « ni hon-unan »	160/364	

NOGUCHI (Makoto)	
Peder mogedenn	159/247
O'FLAHERTY (Liam)	
An tri oan	157/288
OLIER (Youenn)	
A-hed an deizioù	157/146
PENNEG (Per)	
Un Alarc'h, un Alarc'h tre mor	157/136
Ur Bobl dizouar	158/207
Dek vroad « berzet» e Kornog Europa	160/380
PIRIOU (Yann-Ber)	
Ha Verkingetorix a lavar .	157/108
RETAMAR (R. F.)	
Ma soudardez	161/413
TRELLU (A. M.)	
Daeroù	161/414
UHEL (Fanch an)	
Ar ramz Kolevran	161/447